

AL LIAMM 54

AL LIAMM

Tir na n-òg

NIVERENN 54

Genver - C'hwevrer 1956

12 ved BLOAVEZH

NIVERENN 54

Genver-C'hwevrer 1956

PROFOU

1950 : 150.201 lur

1951 : 114.980 lur

1952 : 147.396 lur

1953 : 130.733 lur

1954 : 189.148 lur

1955 : 121.770 lur

KOUMANANTERIEU :

1948 : 175

1950 : 314

1952 : 354

1953 : 385

1954 : 456

1955 : 465

TAOLENN

Diwar-benn ar Referendum gant R. Huon	3
Peder Amzer Vreizh gant F. R. Tangi	4
D' am Barzhonegoù gant Abanna	6
Ar Gousper gant Fañch Elies	7
Spered o tont da Jaketa gant Roparz Hemon	15
Klod ar Bed-mañ gant Youenn Olier	34
Martoloded ar Roue Melkior troet gant Yeun ar Gow	38
Strollad Broadel Kembre (1925-1955) troet gant P. Denez	44
Istor lennegezh vrezhonek an amzer-vremañ (kendalc'h) gant Abeozen	53
Yezh ar C'hendalc'h Etrekeltiek gant Per Even	64
Al levrioù	70
Notennoù	72

DIWAR-BENN AR REFERENDUM

Kaset ez eus bet muioc'h a respontoù d' ar referendum eget ne vije bet kredet. C'hwec'h den warn-ugent o deus kemeret perzh ennañ, ar pezh a zo dereat pa vez keñveriet ouzh an niver a dud a ro ali pa vez graet hevelep goulennoù e kelaouennoù bras. Ra vo trugarekaet amañ an holl re o deus skrivet deomp.

An oberennoù o deus bet ar muiañ a vouezhioù a zo, evit ar varzhoniezh IMRAM gant Maodez Glanndour (7 mouezh) ha PIRC'HIRIN AR MOR gant Roparz Hemon (6 mouezh) hag evit ar c'homz-plaen NOMENOE-OE gant Jakez Riou (6 mouezh). En notennoù e vo kavet roll an oberennoù all a zo bet meneget hag anv an daou lenner o deus gonezet.

Evel ma weler, dizarbennet eo bet ar varzhed a vez sellet gant ar wask ofisiel evel hor barzhed nemeto. E gwirionez an abegoù he laka da devel war anvioù evel re v-Maodez Glanndour pe Roparz Hemon eo m' o deus menozioù hag ez int bev.

Plijet-bras ez on bet gant an dibab-se, rak krediñ a ran ez eo mat ha reizh. Kompren a ran e vije lakaet Maodez Glanndour ha Roparz Hemon a-raok Kalloc'h. Brasoc'h int, d' am soñj da vihanañ. Soñjal a ran avat en dije dleet pezh-c'hoari Tangi Mallemanche, Gurvan, kaout muioc'h a vouezhioù. Gwir eo ne vez ket kavet al levr ha n' eo ket bet lennet gant an holl.

Nomenoe-oe e penn kentañ ar c'homz-plaen a zo reizh-tre ivez. Danevelloù Jakez Riou « Geotenn ar Werc'hez » a zeu d'an eil. Moarvat ez eo ar strollad gwellañ hon eus dre e unander hag e gempouez. Ur perzh all : an hini kentañ eo bet, savet e stumm-se. Krediñ a ran, koulskoude, ez eus bet skrivet danevelloù gwelloc'h abaoe. Karet am bije ober un dibab personel eus re Roparz Hemon, ennañ Beajour ar Goañv, An tri Goulenn, An alouber ha re all. Soñjal a ran ivez e Youenn Drezen hag an div danevell gaer « Sizhun ar breur Arturo » hag « An dour en-dro d' an Inizi »...

Ur gudenn a galon...

Ronan HUON.

PEDER AMZER VREIZH

gant F. R. TANGI

NEVEZ-AMZER

Ar paotr o tiwall ar saout
 en deus tennet ur c'horn-boud
 digant rusk ar gistinenn
 hag e voud a-leizh skevent
 hag er prad ar saout goustad
 a c'hornzigor 'n ur chaokat
 ul lagad leun a gelien.

HAÑV

Rak da skeud 'tec'h al lized
 war da benn 'kri ar skreved
 dourner fru e vruched aour
 mestr an dour
 mestr ar bed.

DISKAR-AMZER

Ar c'hi du dre parkeier mut
 ne ouel ken d' al loar.
 Chas an dud a gousk gant an dud
 ar gaouan gant ar wrac'h.
 'Mañ an douar tapet gant e hud.

GOÑV

Krenañ 'ra 'r vran war he brank
 'krec'h al lann kann
 'kreiz barr erc'h fu.
 Warc'hoazh, warc'hoazh, eme ar vran
 'n ur flapañ war he c'halon du.
 Hag e chom mut al lann.

D'AM BARZHONEGOU

gant ABANNA

Kiet em eus warnoc'h betek an heug,
 betek ar seim da sevel endro gant ar beure,
 â gerioù ur gonnar ho tilenn.
 Petra ac'hanoc'h ? Petra ac'hanon ? N' ouzon,
 Diskenn ra va buhez
 sachet e kelc'hioù enk un trezer braouac'hus
 ha tarzhañ rit da c'houleier din.
 N'em eus ket ho klasket
 N'em eus ket ho c'hoantaet
 N' hoc'h eus ket disamm et va anken,
 N' hoc'h eus ket va leuniet, a, tamm ebet !

Aze emac'h, vel m' emañ va blev
o kouezhañ puilh ouzh puilh siwazh !
aze emac'h, evel emañ, netra ken.

AR GOUSPER

gant Fañch ELIES

- Ac'hanta, Marivon ! Pase-poent eo demp loc'hañ pe ne vimp ket e Landi da boent lein. Re ziwezhat, evit doare, out savet eus da wele er mintin-mañ, eme Fin Rozeg d' he mignonez Marivon Abgrall pa save homañ da azezañ en he c'hichen e karr-dre-dan Cheun ar Miliner war blasenn Sizhun.

Fichet-krañ e oa an div blac'h yaouank. Koef sparl tanav war o blev du, chal sklaer fleñchet war o divskoaz, tavañjer broudet en dro d'o dargreiz ha botoù izel ler lufurus war o zreid gwisket gant loeroù seiz, du ivez evel o brozh.

Foar ar Gousper a oa e Landi hag holl yaouankizoù maezioù Bro-Leon a vije sur eno er bloaz-mañ, kaer evel m'oa an amzer. Kestell gwenn ar c'houmoul a vernie uhel en oabl glas, gouloù drant an heol o c'hoari warno.

Kerkent ha savet Marivon er c'harr, Olier, mevel Cheun ar Miliner, en doa lakaet boud en e geflusker ha dav en hent dre draonienn ar stêr Elorn. Staget oa endeo deil ar gwez-pupli da veleniñ. Liv an diskar-amzer a zeue war ar maezioù dizolo, touzet pell a oa eus o eost kerc'h ha gwinizh.

An div blac'h yaouank a selle pizh an eil ouzh eben. Ar spilhenn-mañ e koef Fin a vefe gwelloc'h amañ pelloc'h. Chal Marivon a oa bet staget re vuhan war he choug. Fin a reizhas ar pleg.

- Re a labour am eus bet abaoe ar mintin-mañ ivez, Fin gaezh, eme Varivon. Soñj 'ta. Re ziwezhat eo degouezhet ar sac'had butun dec'h da noz gant ar c'hourier hag em eus ranket gortoz ar mintin-mañ evit renkañ ar pakadoù butun ha sigarettenoù en o lec'h war an aspledoù. Ar butun malet da lakaat er podoù. Butun-karot ha butun-roll da drouc'hañ ha da bouezañ en a-raok evit mamm na blij tamm ebet dezhi ober al labour-se. Dek eur oa a-raok ma 'm eus gallet sevel em c'hamb d' en em fichañ.

- Ya, Marivon hag hiziv ez eo ret bezañ ken faro evit plijout d' ar paotr figus a zeu ingal da brenañ boestadoù ninaz diganez div wech ar sizhun pa n'eo ket aliesoc'h.

- Va Doue ! eme Varivon en ur ruziañ un tamm, hag ar chal glas-gwan a lakae flammoc'h he divjod livrin. Ne vije ket eus an hini a larez em bije karet bezañ propik memes tra.

- Ur pennad 'zo em eus gwelet Per Roparz o vont e-biou d'ar blasenn war e varc'h houarn. En hor raok e vo e Landi.

8

- Mat, amzer en do bet d' ober tro ar staliou a-raok e lein ha da lipat ur banne pe zaou gant e gamaraded, eme Varivon. Ni 'zo furoc'h demp mont war eeun d' al Leon Aour. Tost e vo da greisteiz pa erruimp.

Mont a rae dalc'hmat ar c'harr-dre-dan e-biou da gezek-houarn o skeiñ a steudadoù etrezek pont Troc'h Yalc'h. Adtapout a rae ivez gweturioù leun a dud yaouank en o dilhad kaer, livioù flamm ar chaliou o tennañ ar selloù e-keñver mezher du porpantoù ar justineien, aotennet kempenn o dremmoù a-us d' o bruchedoù-roched gwenn-kann.

- Sell 'ta er wetur-mañ, Marivon, Lena Fichou pegen krañ eo ! eme Fin pa zegouezhent tost da Vilin Greiz. Neket d'ar Gousper emañ-hi o vont, evit doare, d'he friko dezhi hec'h unan ne lavaran ket.

Kollet o doa divjod Marivon un nebeud eus o liv flamm kerkent ha klevet an anv-se o tont eus genou he mignonez. Gwarizi a flemme he c'halon. War a lavared, aliezik e veze gwelet, abaoe ur pennad, Per Roparz o vont war-dro Roznivinenn, tiegezh pinvidik Juluan Pichon. N' oa nemet Lena a vugel en ti ha dezhi eta e tlee dont war e lerc'h an daouzek loen korn, ar pevar loen gezeg hag an daou-ugent devezh arat dindan gerc'h, gwinizh, boued chatal ha foenn, hep menegiñ ar gwaremmeier hag ar brouskoadoù. Ur fortun vat a dra sur, a rafe eus Per Roparz, ken ha ken pinvidik all eus e du, unan eus brasañ perc'henned douar ar barrez. Met perak selaou randonnerezh ar frioù-butun a zeue da zibunañ o c'haozioù dirak he c'hontouer en ur silañ taolioù lagad dre zindan ouzh Marivon o leuniañ dezho o zabatierenn ? Ken hegarat hag a-raok e veze bepred Per Roparz outi pa zeue d' ar burev butun ha n' en doa ket ezhomm eus douar ar Fichou evit bezañ start war e dreid. Mat, peogwir ez oa hiziv ar Gousper, a-benn ar pardaez e vije gwelet piv, eus plac'h yaouank ar burev-butun pe eus pennehéz Roznivinenn a oa an dostañ da galon Per Roparz.

- Ken ha ken lorc'hus an dilhad hag ar plac'h, eme Varivon en ur droñsañ he zavañjer war he daoulin d' e virout da rodellañ. N' ouzon ket, avat, perak e fell dezhi dougen bepred chaliou ruz ken flamm gant he dremm vorlivet.

- Gwir eo, eme Fin Rozeg. Muioc'h e taol evezh ouzh priz an traoù eget ouzh o livioù, a gred din. Ar c'herañ ar gwellañ eviti.

- Ar fouge a zo ouzhpenn an hanter eus o buhez dezhi ha d' he zad. Hag e Per Roparz e welont muioc'h ar perc'henn douar par dezho eget ar paotr seven ha start ouzh al labour.

- Mat, da Ber Roparz eo da ziskouez neuze ha tanav a-walc'h eo e fri d' ober ar c'hemm etre ur plac'h lorc'hus hag un all diardoù, eme Fin Rozeg.

9

Pignet e krec'h sav sonn ar Gar e ruilhe bremañ ar c'harr etrezek ar Vioc'h Wenn. Parañ a rae selloù an div vignonez war draonienn ar C'hillivere o tont da gember gant hini an Elorn en tu all d' an hent houarn. Ne soñjent ket, avat, e kened meurdeuzus ar c'hoadoù o wiskañ dilhad aour ha moug an Diskar-Amzer. Edont o div, dre ar spered, e straedoù kêr, leuniet bremaik gant ur froud yaouankizoù en o dilhad kaerañ da c'hortoz ar mare ma krogfe ar c'houbladoù da ziskenn ha oa sevel ar Ru Nevez etre tachenn ar c'hezeg koad war hent Montroulez ha tachenn ar stalioù madigoù, an tennadegoù, ar sirkoù hag all war blasenn ar marc'had.

Aet e oant bremañ e-biou da Sant-Gwenal, hag, ur pennad diwezharoc'h e chome ar c'harr en e sav e porzh an Helou, stok er plas-foar. Da nav eur e vije ar poent d' an div blac'h da vezañ eno evit distreiñ d' ar gêr.

- Pe neuze e rankot dont da Sizhun war ho troad gant ho ponamioù, eme Olier en ur c'hoarzhin laouen. Me ' barife ne vefec'h ket inouet memes tra daoust ma vefe hiroc'h an hent.

- Posubl eo, eme Fin, diskuizhoc'h, avat, e vo mont en dro ganez, Olier, ha marteze zoken e vo plas da zaou all er c'harr.

- Ya, en ur voustrañ un tammik war ar re a vo e-barzh, ma vez ret, eme Olier. Chañs vat deoc'h, merc'hed ! Arabat deoc'h, memes tra, dibab paotred re derrubl !

- Nann, Olier, tud, eus hor ment, eme Fin. Ni n' omp ket douget d' ar ramzed Hugo, te ' oar.

- Kenavo emberr, Olier, emezo o-div.

* * *

E sal vras al Leon Aour e oa safar mouezhioù ha tintadeg listriañ kegin.

Berr oa war ar plac'hed o vont eus ar gegin d' ar sal gant ar pladadoù stripoù, ar c'hig rostet ar patatez fritet hag ar fars-forn. Boutailhadoù gwin ruz a zegasent fonnus war an taolioù. Neket bep sizhun e vez ar Gousper anezhi.

Kavet o doa Fin ha Marivon lec'h da azezañ ouzh un daol vihan e penn pellañ ar sal, ha, digor o c'halon, e tebrent o fred gant plijadur hag hep mall, daoust ma oa un tammik antellet o nervennoù, re Varivon dreist-holl. N' edo ket Per Roparz er sal hag en ti-mañ eo e tiskenne koulskoude bep tro ma teue da Landi. Moarvat e oa bet sachet d' un ostaliri all gant ur c'hamarad bennak.

Paotred Kastell gant o forpantoù berr hag o c'hourizoù glas-oabl a zistage farsadennoù laouen ouzh merc'hed an Arvor, chikolodennoù skañv pintet war o fennadoù blev, sklaeroc'h peurvuañ o liv eget re duardezed bro ar justineien. Dasseniñ a rae o brezhoneg ledanoc'h war froud reutoc'h ha berroc'h hini Lambaoliz ha Sant-Tegonegiz.

10

Lipet ar banne kafe gant ur werennadig rom pe odivi, ne nac'he ket ar merc'hed kemer unan hini dous, madêr pe valaga, ez ae an dud prim er-maez, mall ganto ober o dibab pe bezañ dibabet ; gwazh a se d' ar re a vije re ziwedhat ! Ne chomas ket Fin ha Marivon da ranellat kennebeut dirak o asied ha dizale e voent ivez lonket er froud tud o tifreta da vont lod ouzh krec'h ha lod all ouzh traoñ.

Ur Gousper dispar hini ar bloavezh trizek. Kaer an amzer. Gwiskamantoù ar vro en o brasañ sked. Den ebet o soñjal er brezel a zeufe, bloaz diwezhatoc'h da skignañ an holl baotred vagol da seizh avel ar C'hornog tangwallet ha d' ober kement a intañvezed e-touesk ar plac'hed drant gant ar c'hoant fortunañ.

E-traoñ ar Ru Nevez, Marianna Riwall, he fakadoù kanaouennoù war ar riblenn-straed, ur maen warno gant aon rak un taol avel, a zibune pennek pozioù re anavezet gwerz Kez-Iz pe son Julig ar Ververo. Diaes dezhi avat, ober penn da gonkurañz ar ganerez c'hallek a vleje, hanter kant metr pelloc'h, eilet he mouezh gant ur violoñs skiltr.

C'est la valse nouvel-le

Mademoiselle...

ha kanaouennoù'all degaset war eeun eus Pariz.

Stank ivez ar merc'hed yaouank en dro d' an tennerezed kartoù evit anaout ar blanedenn a oa da vezañ o hini... pe hini un all. C'hoarzhin a raent, un tammig diaes o fenn evelato; p' en deveze ar jipsianez roet dezho keloù eus muioc'h a vugale eget a leve, eus ur reuz padusoc'h ha nebeutoc'h arvarus eget an eurvad a c'hoantaent.

Korollerezed ar sirk a heje mibin o divesker lijer, gwisket e ruz-gwan, a-us da bennoù ar voused, digor ganto o genou dirak ar priñsez o brozhioù berr broudet gant metal ha perlez lufus, n' anavezent mui antronoz vintin pa welent o tiblouzañ eus o ziez war rod merc'hed, disparbuilhet o blev du ha lostennoù laosk digempenn en dro d' o c'horf teñval e groc'hen.

Ar furlukined, ruz-gwad o divoc'h ha beg o fri, a zistage o farsadennoù reut bepred heñvel ha bepred gouest da lakaat an arvesterien da zirollañ da c'hoarzhin.

Bouzaret an holl gant ar sonerezh skiltr a zic'hlanne a bep tu eus ar binvioù kouevr war an engroez sabatuet. Ret d' un den huchal e pleg skouarn e amezeg evit bezañ klevet.

11

Ar c'honfettioù a nije en aer, a spege, ruz ha glas-sklaer, e blev ar merc'hed, a glaske eus o gwellañ difenn o brennid hag o choung ouzh ar baotred difeson. Birvilh er re-mañ a gave dezho bezañ evit un devezh mistri war o dazont hag a glaske, hep ober an neuz, lakaat emglev da sevel etre o interest hag o flijadur.

Koubladoù niverusoc'h-niverus a weled bremañ dre ma save Fin ha Marivon gant ar Ru Nevez. N' oa ket stank, avat, ar re n' oa ket an daou anezho eus an hevelep kornig bro. Sparlenned a zeue kazel-ha-kazel gant justineien ha chikolodenoù ouzh brec'h Arvoriz.

- Alato ! eme Fin souezhet ha feuket war un dro.

Per Roparz eo a oa o paouez mont e-biou dezho kazel-ha-kazel gant Lena Fichou hag o kuzulikat dezhi e pleg he skouarn komzoù a lakae ar gwad da sevel un netra d' he divjod re zisliv.

Marivon n' oa ket dall kennebeut ha gwelet he doa an dra ken buan hag he c'hamaradez, nemet n' he doa rannet grik. En un taol krenn ez oa deut pep tra da vezañ louet dirak he daoulagad. Ne fenne mui an heol war an engroez lies-liv nemet ur sklerijenn wan par da hini ar pardaez-noz hag un dorn yen-sklas a oa deut da serriñ war he c'halon en he c'hreiz.

Merzet he doa Fin diouzhtu estrenvan he c'heneilez.

- Re domm eo demp e-touesk ar veskadeg didermen-mañ, Marivon. Mar kerez ez aimp d' ober un droig d' ar plas-foar. Peadra a zo d' un den da semplañ amañ.

Marivon ne respontas ket, met erruet e-tal al Leon Aour e troas gant Fin er straed war zehou etrezek leur foar ar c'hezeg.

- Petra 'ri, merc'h kaezh-me ? eme Fin dezhi pa voent deut er-maez eus an engroez. Ne deo ket ar wech kentañ ma weler ar peadra o c'hounit war ar galon.

- Moarvat oan deut re vuan da grediñ en doa karantez ouzhin, eme Varivon a-benn ur pennadig. N' en doa nemet plijadur o varvailhat ouzhin. Douget e oa e galon d' un all. Hag, e gwir, n' en doa graet promesa ebet din.

- Nann, roet da grediñ e oa prest d' ober nemet ken, eme Fin, imor enni. Ar baotred a zo koad-tro enno alies, plac'h kaezh, ha ne deo ket distag o c'halon diouzh madoù fetis ar bed-mañ.

- Mat, chañs vat dezhañ gant e bennherez ! eme Varivon, gounezet ganti war he strafuih. Met, peogwir omp deut betek amañ deomp da di an Helou da evañ ur banne kafe. Sec'hed am eus paket.

E ti an Helou n' oa ket kalz a dud d' an ampoent. Azezañ a reas an div vignonez ouzh un daol-grenn ha gras e kavas Marivon bezañ war he c'hador. Gwall-skoet e oa bet, daoust dezhi da voustrañ war he disouezhenn.

12

- Hopala, merc'hed koant, eme Jañmar ar Bras o tont-tre en ostaleri gant e gamarad Loeiz Rollant. Setu c'hwi deut ken pell-mañ da glask fred ! Pebezh chañs evidomp-ni hon daou deut gwall-ziwezhat d' ar Gousper ! Me ' grede din n' hor bije ken kavet da zibab nemet etre restachoù ar baotred dillovis ha merc'hed yaouank kozh kintus ar barrez-mañ, ha padal, lezet o deus ganeomp div goantenn. Bennozh Doue dezho, avat !

- O Jañmar, eme Fin, laouen e don he c'halon, gwall vuan e kasez da afer en dro, a gav din. Ne c'houlennez ket zoken ha klañv omp gant ar c'hoant fortunañ. Me, paourkaezh paotr, a zo o soñjal muioc'h-mui mont da seurez.

- Da seurez ? Farsal a rez, Fin Rozeg pe ez in-me da gurust dilostet ! Da c'hortoz, pep a vanne hini dous d' ar merc'hed-mañ, Jani, ha demp-ni pep a vanne layout, emezañ d' ar vatezh, ha da c'houde ez aimp d' ober un dro war ar c'hezeg-koad.

Loeiz, lent un tammik, a oa deut da azezañ e-kichen Marivon. Mousc'hoarzhin a reas ar plac'h yaouank outañ, c'hoant dezhi ober plijadur d' he mignonez a ouie douget da Jañmar, pell a oa. Peogwir e oa kaset da get he huñvre dezhi, divalo e vije evelkent bezañ ur skoilh gant he fenn trist da levenez he

mignonez hag en abeg da se e ranke bezañ hegarat ouzh ar paotr-mañ, doare seven dezhañ a-hend-all. N' oa ket ret dezho o daou fortunañ da c'houde, na petra 'ta.

* * *

Graet ganta daou dro kezeg-koad, e oa aet an daou goublad betek ur stal madigoù hag ar baotred o doa prenet ur sac'hadig berliñgoioù, pep hini d' e blac'h yaouank.

Nac'het o doa ar re-mañ sevel er bigi branskelladik hag e oant deut neuze d' ar Voull Aour. Kavet o doa lec'h en ur gambr, he frenestr o tigeñ war ar straed hag ac'hane e sellent ouzh ar c'houbladoù a dremene dibaouez dirazo. Fin Rozeg ha Jañmar ar Bras da nebeutañ a selle ha ne skuizhent ket o tistagañ teodadoù goapaus pe flemmus diwar-benn an daou-mañ pe ar re-hont.

Marivon, hi, ne selle ket er-maez. Re a aon he doa da welout o tremen ur c'houblad, ur chal ruz-moug gant ar plac'h he blev melen. Loeiz Rollant a chome azezet en he c'hichen ha, torret un tamm war e lentegezh, e komze ouzh Marivon a vommoù rouez, c'hoant dezhañ chom hep terriñ dezhi he fenn ha, war un dro, aon d' he lezel da gavout hir hec'h amzer e-keñver ur peul dilavar.

13

Hep displijadur e selle Marivon outañ. Anaout a rae ar paotr yaouank pell ' oa. D' ar burev-butun e teue bep sul. Mab e oa d' un intañvez a zalc'he un tammig atant a zek devezh arat, e Kermaveza, war hent an Dre.

- Ne deo ket e ve fall hon tachennoù, eme Loeiz outi gant e vouezh sioul o tistagañ fraez e gomzoù war safar troidellus ar Gousper, nemet ne dint ket a-walc'h evit va breur ha me. Setu ma 'm eus staget da vagañ kezeg. Foenneier mat hon eus hag ur park leton. Ur gazeg nemet ken em eus betek-hen, nemet dalc'het em eus an ebeulez he deus roet demp er bloaz-mañ ha tamm-ha-tamm e savimp e-giz-se aesoc'h hor c'hein.

- Perak ne glaskez ket mont da varc'hadour kezeg ? eme Varivon o teurel ple ouzh dremm digor ha daoulagad bev ar paotr.

- Ya, soñjet em eus en dra-se meur a dro, eme Loeiz. Ret e vefe din bezañ er bourk, avat, kaout marchosi ha porzh hag ur vaouez a benn da zerc'hel ar c'hontoù.

- Ne deo ket dic'hallus kaout kement-se, eme Varivon en ur vouc'hoarzhin, ken sklaer e lenne e soñj diwidre ar paotr.

- Dic'hallus da gaout ne deo ket sur, eme Loeiz en ur sellout eeun en he daoulagad. Nemet e vefe lavaret ya din e c'houzon mat war be zor mont da skeiñ... Nemet...

- Nemet petra, Loeiz ? eme Marivon.

- Nemet em eus aon na ve roet din va sac'h. Mar don paotr start ouzh al labour, war a gredan, ne deo ket bras va feadra.

- Ouzhpenn an danvez a zo Loeiz. Gounez kalon ar plac'h ha plij d' he zud hag e vo, pe dost, kaset an afer da vat, mar dout gouest da gaout un tamm pasiañted.

- Pasiañted a c'hellan da gaout, Marivon, gant na c'hortozin ket en aner.

- Kaout pasiañted, Loeiz, ha degouezhout e poent. N' out ket dispered. Santout a ri peur e vo da dit diskleriañ da soñj.

- Aon am eus da zont re abred ha muioc'h c'hoazh da c'hedal re ziwezhat.

- Ne gred ket din e vefes re ziwezhat, Loeiz.

- Mat, neuze e c'hellan kaout kalon d' al labour hag e taolin evezh mat peur e vo deut an eur evidon.

- Ha mar tostafemp ouzh koan ? eme Jañmar en ur bellaat diouzh ar prenestr. Fin amañ a zo o hegasiñ din va divskouarn gant ar mall he deus da vont d' ar gêr abred evel ma n' he dije ket c'hoazh graet he faskoù.

- Imobil ma 'z out ! eme Fin. Marivon amañ eo a zo re skuizh. Re a labour, kompren a rez. He mamm a zo deut war an oad ha n' eus nemeto o div d' ober war dro an ti peogwir e chom he breur d' ober e amzer war vor bremañ p' eo deut da eil-vestr kanolier.

14

- Mat, n' he deus Marivon nemet fortunañ neuze ma vo ur gwaz adarre en ti, eme Jañmar en ur lakaat e dog war e benn. Paotred a zoare a zo e Sizhun estreget ar re a vez o troidellat war dro Roznivinenn.

- Ya, deomp da goaniañ, eme Loeiz en ur ruziañ. Me ivez a ranko bezañ er gêr abred.

Hag e tiskennas an dud yaouank da vezañ lonket e froud bouzarus ar Gousper, leun a c'hoarzh hag a sonerezh kezeg-koad.

Lakaet he doa Marivon he brec'h dindan kazel Loeiz. Hemañ a bare warni a vare da vare ur sell hir leun a zudi sioul.

- Emañ erru warnomp an Diskar-Amzer, Loeiz, eme Varivon, evel pa respontfe d' ur goulenn digomz. Mont a raio buan ar mizioù goañv e-biou hag e kellido adarre an Nevez-Amzer. Ne vo ket keit-se da c'hedal.

Merc'her 6 Kerzu 1944.

Spered o tont da Jaketa

gant Roparz HEMON

« Ta ta ta ta. »
 « Koantik koantik. »
 « O, aotrou! »

Edont o-zeir en-dro da garrig ar bugel. Ar Sadorn e oa. Ar gêr vihan a oa beuzet e peoc'h an endervezh. Beuzet en heol ivez. Miz Gouere. An oabl glas ec'hon digoumoul troc'het ar vevenn anezhañ gant toennoù an tiez naet ha kempenn diouzh un tu, gant sav-douar ha peulioù ha linennoù an hent-houarn diouzh an tu all. Ne oa den er straed nemeto. Trouz ebet, nemet a vare da vare stokadenn ur vagon ouzh ur vagon a-bell.

« Ta ta ta ta, » eme Lusi adarre, o hejañ dirak dremm ar poupig he bizied kuilh o tont er-maez eus ur vaneg veudek.

« O ! » eme Herried.

Ar c'harrig a droas hag a vranskellas war e winterelloù e-giz ur vag paket trumm en ur bouilh-dour. Disheolier Lusi, a-ispilh ouzh he arzorn, a lammas dirak he fri. Anna a voe poulzet ouzh Herried, hag Herried, en ur gilañ, a voe skrabet he c'hein gant delioù kelenn garzh al liorzhañ war vord ar straed.

« Hennezh zo un den gouez avat ! » eme Anna, fuloret.

Ar bugelig a reas ur wic'hadenn.

« La la, va aelig, n' eus droug ebet, » emezi pelloc'h. « Memes tra ! »

An teir maouez a selle ouzh an den gouez, a oa o sachañ e skasoù. Bremaik ne voe mui gwelet.

« Jakou ! » eme Lusi.

Ar gounnar a oa bet o parañ en o daoulagad a habaskaas un disterig. Jakou a oa ur paotr ugent vloaz, a laboure e stal ar c'higer. Ur paotr mat, ur c'haer a baotr, hegarat atav e-keñver ar merc'hed, kozh ha yaouank. Servijet mat e vezent gantañ, servijet gwelloc'h eget gant ar c'higer pe ar gigerez.

« Da belec'h emañ o redek evel-se ? » eme Herried.

« Pres a zo warnañ sur, » eme Anna.

N' he doa ket lavaret mat ma voe bountet ar c'harrig adarre. En dro-man an den a chomas krenn a-sav. Darbet oa bet dezhañ kouezhañ a-blad war ar bugel.

Un archer e oa.

16

« N' hoc'h eus ket gwelet unan bennak o tremen ? » emezañ.

An teir maouez a sellas an eil ouzh an div all, ha neuze ouzh an archer.

« Emaoc'h o klask unan bennak ? » a c'houlennas Herried.

« N' hoc'h eus gwelet nikun ? » eme an archer, rust.

« Nann, » eme Herried.

An archer a gendalc'has gant e hent, goustatoc'h. Sevel a reas e galabousenn ha sec'hañ ar c'hwezenn diouzh e dal gant e vouchouer.

« Mat, » eme Lusi a vouezh izel pa voe pell a-walc'h, « petra a raimp-ni bremañ. »

« Herried, » eme Anna, « gwelloc'h e vije bet lavarout ar wirionez. »

Herried a oa ruz he fenn hag o tennañ hec'h anal, evel pa vije bet oc'h ober embregerezh-korf. Ur sell faeüs a reas ouzh he c'hoar Anna.

« O te, » emezi, « ac'h eus atav aon ! Jakou n' eo ket ul laer. A dra sur n'eo ket war e lerc'h emañ an archer o redek. »

« Piv oar ? » eme Lusi.

« Forzh penaos, dimezell Lusi, » eme Herried, « an archer-se n' eo ket bet seven. » Ur menoz all a zeuas en he fenn. « Ha neuze, » emezi, « kas anezhañ war-lerc'h Jakou, ha lakaat anezhañ da grediñ e oa Jakou al laer, a vije bet lavarout gaou. »

Gant an dro bec'hedoniez-se e klaske Herried sioulaat morc'hed an teir askre.

* * *

Anna hag Herried a gimiadas diouzh an dimezell Lusi. Houmañ a chomas ur pennad o sellout outo : Anna a boulze karrig ar bugelig, o niz ; Herried a gerzhe e-kichen en ur jestraouiñ. Anat eo e oa tabut etre an div c'hoar, Herried o sarmonal hag Anna o troc'hañ he c'homz gant ur ger berr etre he dent a vare da vare.

A-raok distreiñ d' ar gêr e tremenas Lusi dre stal ar pasteour. He boaz e oa prenañ gwestell sec'h ha makaroñsoù d' ar Sadorn. Ne oa er stal nemet an itron Hu, gwreg an noter, hag ar bastezourez. Houmañ, kroaziet he divrec'h war he divronn lart, a-dreñv he zaol-gont, a ruilhe daoulagad ront :

« Skrijus ! skrijus ! » emezi da Lusi.

An noterez, ur vaouez treut, a heje he fenn e-giz ur yar.

« Skrijus ! » a sklokas.

17

Lusi, a oa un tog nevez war he blev, a soñjas : « Daoust ha va zog eo a zo skrijus ? » Ha neuze : « Nann, ne vijent ket ken diseven evelato... »

« Klevet hoc'h eus ar c'heloù ? » eme ar bastezourez.

« Petore keloù ? » eme Lusi.

An div all a eskemmas ur sell da c'houzout pe hini anezho he dije ar blijadur da gontañ ar c'heloù. Ar bastezourez, kenwerzherez vat, a lezas an enor gant an noterez.

« Arc'hant a zo bet laeret digant an doktor Martin, » a goagas.

« Ya, » eme ar bastezourez, a c'helle bremañ reiñ herr d' he zeod, « kalz arc'hant, ur bern bilhedoù, millurioù ha millurioù. Ur paotr a zo aet en ti dre ar prenestr. N'eus bet gwelet nemet e gein, pa oa o tec'hout dre al liorz. E-kichen ti an archerien, pa soñjer ! »

Lusi ne reas he gwad nemet un dro. Ranket e voe dezhi en em harpañ war unan eus ar c'hadorioù aozilh lakaet en-dro d' un daolig houarn e-pad an hañv evit an Anglizien pa zeuent da gemer an te.

« Pegoulz ? » a c'houlennas.

He mouezh a grene hag al liv a oa aet diouzh he divjod. An div all a verzas he from, hep divinout, avat, an abeg.

« N' eus ket un eur, » eme ar bastezourez. « Ar paotr a zo bet gwelet gant Enora, ha gant paotr e c'har goad hag e wreg. Gwelet e gein hepken, evel a lavaran. Amzer da c'hervel an archerien, ha difloupet e oa ! »

« Piv e oa ? » eme Lusi.

« Den ne oar piv e oa, » eme ar bastezourez. « N' eo ket bet anavezet. Ha neuze, ne dle ket bezañ un den eus ar vro. »

An noterez a c'houlennas perak ne vije ket al laer eus ar vro. E-pad an diviz a heulias a-zivout onestiz ha dizonestiz tud ar c'harter e chomas Lusi dilavar, o prederiañ. A-dreñv ti an doktor Martin e oa ul liorz, hag a-dreñv al liorz ur straedig-dall o kas d' ar straed ma edo, tri c'hard eur a-raok, gant Anna hag Herried. A-hed ar straedig ne oa nemet liorzhoù, ur park bras, ha porzh an archerdi.

« ...ne gav ket deoc'h, dimezell Lusi ? » a glevas ar bastezourez o c'houlenn.

« Eo, eo, » eme Lusi, ha na ouie ket petra a oa bet lavaret a-raok. « Hag an doktor Martin, gwelet en deus an den ivez ? »

« An doktor Martin, soñjit 'ta, a oa er gêr. Ne oa ket bet kalz a dud klañv o vont d' e welout hiziv. Bez' e oa en em dennet en e gambr d' ober ur pennad-kousket. Ken tomm eo an amzer ! E gambr a zo en eil estaj diouzh tu ar ru vras. N'en doa gwelet na klevet netra pa 'z eo aet Enora d' e zihuniñ. »

18

Lusi a oa tost da guitaat ar stal hep prenañ he makaroñsoù. Hogen ar bastezourez ne ankounac'haas ket.

P' en em gavas Lusi dirak he zi e vije bet diaes dezhi gouzout pe hent he doa kemeret, ken beuzet e oa bet en he soñjoù.

* * *

Ugent munud goude, Lusi, azezet e-kichen ur prenestr, ne voe ket souezhet o welout Anna hag Herried o tont. He matezhig Jaketa a yeas da zigeriñ an nor.

« Klevet hoc'h eus ? » eme Anna.

« Klevet em eus, » eme Lusi, oc'h ober dezho antren er sal-degemer.

Ar pezh o doa klevet an div c'hoar a oa dres ar pezh he doa klevet. Ar brud a oa en em skignet dre gêr, evel ma lavarere, buanoc'h eget an tan-red.

« Ni a oar piv en deus graet an taol, » eme Anna.

« Ne ouzomp netra, » eme Herried.

Anat eo e oa bet tabut etre an div c'hoar. Ruz oa o fennoù. Imoret-fall e oant.

« Dimezell Lusi... » emezo a-gevret.

An dimezell Lusi a vouc'hoarzas gant un aer a furnezh, dereat ouzh ur vaouez koshoc'h egeto.

« Ur banne te a gemerot, » emezi. Hag hep gortoz ar respont, e c'hourc'hemennas da Jaketa ober te.

« Arabat koll hor penn, » emezi. « Sellomp ouzh an traoù evel m' emaint. Ha neuze klaskomp pezh a dleomp ober. »

« Al laer, » eme Anna, « a zo Jakou, paotr ar c'higer. E welet hon eus o tont eus ar straedig-dall a-dreñv ti an doktor Martin. Edo o redek, ha darbet eo bet dezhañ lazhañ hon niz. »

« Ne oa ket o tont eus ar straedig, » eme Herried.

« N' hon eus ket taolet pled eus pelec'h e oa o tont, a gredan, » eme Lusi.

« Jakou eo a zo al laer ! » eme Anna.

Jaketa a oa deuet didrouz da lakaat tasoù, loaioù hag asiedoùigoù war an daol.

Herried a savas ur biz d' he muzell.

Pa voe aet Jaketa er-maez, e lavaras d' he c'hoar :

« Ezhomm az poa da gaozeal dirak ar vatezh ? »

« O, n' eo nemet Jaketa ! » eme Lusi.

19

Jaketa a oa un emzivadez deuet nebeut amzer a-raok eus ar gouent ma oa bet desavet. Ne oa nemet seitek vloaz. Gwisket oa atav evel an emzivadezed, gant ur boned lien iskis skoulmet strizh dindan he groñj, hag un davañjer gotoñs gwenn war ur vroz du. He dremmig a oa koant. Lentik oa, ha dispered. A-boan ma ouie lenn, ha ne ouie tamm ebet kontañ. Pa 'z ae da ober kefridioù e oa ret skrivañ dezhi war ur baperenn roll an traoù da brenañ, anez he dije disoñjet an hanter. An dimezell Lusi, goude trubuilhoù diniver gant mitizhien a bep oad hag a bep doare, a oa aet da glask unan e ti al leanezed. N' he doa ket bet da glemm eus Jaketa.

Komzet e voe koulskoude eus traoù all e-keit ha ma oa Jaketa o tegas ar podad-te hag ar gwestelligoù. Jaketa a guitaas ar gambr o serriñ an nor war he lerc'h.

« Mat, » eme Lusi, « ret eo anzav ez omp kablus, kablus dirak al lezenn, bezañ lavaret gaou d' un archer. »

« An archer a zo bet re rust, » eme Herried.

« Te ac'h eus lavaret gaou dezhañ, » eme Anna.

« Tromplañ kannad al lezenn pa vez oc'h ober e vicher, » eme Lusi o sevel he zasenn d' he gweuz, he biz bihan er vann, mistr-kenañ. Ur gridienn a redas dre he divskoaz, bourrus-tre.

« Piv a oar hon eus gwelet Jakou ? » eme Herried.

« Piv a oar, » eme Lusi, « ha n' eo ket bet gwelet Jakou gant unan bennak all ? Piv a oar ha n' eo ket bet gwelet o stekiñ ouzh karrig ho niz, ha ni hon-teir e-kichen ? Bez' ez eus prenester en tiez, ha tud a-wechoù a-dreñv ar ridezioù. Ha neuze, mar bez paket Jakou; daoust hag eñ ne lavaro ket en deus kejet ganimp... marteze evit en em zifenn, en em zigareziñ... me oar-me ? »

An div c'hoar n' o doa ket soñjet en dra-se.

« Petra vo graet neuze ? » eme Anna.

« Gwellañ tra d' ober, » eme Lusi war un ton poellek, « eo anzav ar

wirionez diouzhtu. Me a anavez ar c'homiser. Afer am eus bet outañ da reiñ testeni e prosez ar vaouez-hont, Madalen n' ouzon-mui-pe-anv, a oa bet ganin matezh e-pad ur sizhun. Un den hegarat eo. »

« Ya, » eme Herried, « mes... »

Ret e voe dezho kaozeal c'hoazh e-pad un eur a-raok en em glevout da vad. Divizet e voe ez aje Lusi da vurev ar c'homiser da ziskuliañ dezhañ pezh o doa gwelet. Lavaret e vije n' o doa ket komprenet mat goulenn an archer.

* * *

A-vec'h aet an div c'hoar er-maez ma wiskas Lusi he zog da vont er-maez ivez.

« Mar deu unan bennak, » emezi da Jaketa, « lavarit ne vin ket pell. »

Re leun oa he spered dezhi da verzout ar sell spontet a daolas he matezhig outi.

20

Lusi a gavas buan e oa disheñvel beza dirak ar c'homiser-polis evel test ha bezañ dirazañ, koulz lavaret, evel torfedour. Ar c'homiser, un den war-dro hanter-kant vloaz, gwenn e vlev, dezhañ doare ur markiz a c'hiz kozh, a voe seven a dra sur. Lezel a reas Lusi da zibuna hec'h istor. Neuze e c'halvas e sekretour hag en em lakaas d' ober un aridennad c'houlennoù. Ar gaou bihan ijinet ganti a-zivout an archer a deuzas evel koar. Ar plac'h kaezh, ul lagad buket war dremm ar c'homiser hag he lagad all buket war bluenn ar sekretour, a chome sioul war he c'hador, hogen jahinet he c'hof evel gant gwentloù. Ar bluenn a verke didruez he holl respontoù. Neuze e voe ret dezhi selaou lennadenn ar pezh he doa diskleriet ha sinañ an danevellskrid.

Ar c'homiser a voe trugarezus a-benn ar fin. Pediñ a reas e sekretour da vont kuit. Neuze, o sevel da ambroug anezhi betek an nor, e lavaras dezhi, gant ur mousc'hoarzh, ne oa ket brav touellañ an dud a justiz ; koulskoude, n' he doa ket d' ober gwad fall, kompezet e vije gantañ an afer.

Ar c'homiser, e gwirionez, a oa laouen-bras : an archerien o doa graet tro wenn ; eñ, avat, en doa dizoloet al laer.

* * *

Jaketa he doa serret dor an ti war gein he mestrez. Neuze e oa aet er gegin. Eno he doa ranket azezañ, un dorn war he c'halon, a lamme evel ul loen foll, egile o vresañ traoñ he zavañjer.

Graet he doa un dra n'he doa morse graet a-raok : chom a-dreñv dor ar saldegemer o selaou pezh a lavare an dud e-barzh. Tanav oa he skouarn. Klevet he doa. Gouzout a rae e oa aet he mestrez da flatrañ Jakou.

Jaketa a gare Jakou, a gare anezhañ diwar an deiz kentañ ma oa aet d' ober ar marc'had. Aet e oa e stal ar c'higer, ha servijet oa bet gantañ. Servijet mat, peogwir e oa « eviti », en doa lavaret, daoust n'hec'h anaveze ket : ar ger hegarat kentañ he doa klevet digant ur paotr yaouank. Goulennet he doa outañ pelec'h oa ti ar varc'hadourez viou, ha Jakou a oa aet ganti er-maez eus ar stal da ziskouez dezhi. Diwar neuze e oant bet mignoned. Un devezh foar e oant en em gavet war ar blasenn, ha Jakou en doa prenet madigoù ha goulonderet ar c'hornedad e godell he zavañjer. Ur sulvezh en doa pedet anezhi da zont gantañ d' ar sinema, hogen n'he doa ket kredet asantiñ. Ur sulvezh all e oa aet Jaketa, hec'h-unan-penn, d' an dachenn-sportoù, da welout anezhañ o c'hoari pellenn-droad. Ne oa ket kalz a dra. A-walc'h koulskoude da vagañ soñjezonù ar vatezhig deiz-noz.

21

Ha bremañ, Jakou a oa tamallet ! Jaketa a ouie ervat ne oa ket ul laer. He mestrez hag an div-se a c'helle lavarout hag ober pezh a garent. Jakou ne oa ket

laer. Ar soñj-se hepken a oa sklaer e penn ar plac'hig paour. Ar bed a-bezh a droelle hag a drabidelle en he spered, ha n' en doa biskoazh labouret kement. Ne oa ket laer, ne oa ket laer. Bremañ e vije an holl a-enep dezhañ. Bremañ n' en doa mui d' e zifenn nemet Jaketa. Ha Jaketa, siwazh, - se he doa klevet meur a wech, - ne oa nemet un inosantez.

* * *

En abardaez-se e oa e sal ar patronaj bodadeg ar mitizhien kristen. Jaketa a c'houlennas aotre da vont, evel boaz. An aotre a voe roet dre ur stouadenn benn. An dimezell Lusi a oa bet araous e-pad koan. Bremañ edo o lenn ul levr, krizet he zal, azezet war ur gador-vrec'h, he daoudroad astennet etrezek ar siminal, e-giz pa vije bet ar goañv, ha tan en oaled.

Abred e oa. Ar beleg a dlee ober ur gaozeadenn ne oa ket erruet c'hoazh. An holl vitizhien a rae ur c'helc'h e traoñ ar sal en-dro da Enora, matezh an doktor Martin.

Seul ma tegouezhe plac'hed all e ranke Enora adkontañ an istor.

« Teir eur e oa. Me a oa er gegin o purañ ar c'hastelodennoù evel ma ran bep Sadorn, ha Simon hag e wreg a oa en ti bihan. Klevet em eus Simon o huchal, ha neuze trouz e c'har goad war ar simant. Deuet on el liorz, ha neuze hon eus gwelet kein un den o tec'hout dre doull ar gloued. Ar gloued a oa digor. »

« Pe gloued ? »

« Kloued al liorz ! Me ne ouien ket petra oa c'hoarvezet, ha distroet on d' ar gegin. Neuze Simon hag e wreg a zo deuet da lavarout din e oa ul laer marteze. Aet oant da serriñ ar gloued. Pignet omp hon-tri betek kambr-studi an aotrou, hag eno... »

« Petra hoc'h eus gwelet ? »

« Holl diretennoù ar burev digoret ! Gwreg Simon a zo aet da c'hervel an doktor Martin, a oa en e gambr. Me a zo en em lakaet e prenestr an diri, a sko war borzh an archerien. Gwelet em eus gwreg un archer oc'h astenn dilhad da sec'hañ. Huchet em eus dezhi. »

« Kalz arc'hant a zo bet laeret ? »

« An doktor Martin ne oar ket, mes kalz arc'hant sur : ur bern bilhedoù ! »

« Mes penaos oa deuet al laer ? »

22

« Dre ar prenestr, a oa digor. Deuet eo dre al liorz, sailhet e-barzh ar gambr-studi, daoust m' emañ er c'hentañ estaj. N' eo ket uhel diouzh tu al liorz, c'hwi oar. Netra evit un den yaouank. Ha sailhet er-maez dre ar memes hent. »

« Ne oa ket alc'houezet an tiretennoù ? »

« Ne oant ket. Piv en dije soñjet ivez, e-kreiz an deiz, ken tost ouzh ti an archerien ! »

« Hag al laer n' en deus lezet tres ebet war e lerc'h ? »

« Tres ebet ! Roud ebet ! Nag er gambr, na war ar prenestr, nag el liorz. Eo, ur merkig e traoñ ar prenestr, graet gant ur votez marteze. Mes ar boliserien a zo deuet da welout a gav dezho e oa sandalennoù en e dreid. »

« Sur a-walc'h e oa manegoù kaoutchoug en e zaou zorn, » eme ur plac'h yaouank, a lenne ar c'hazetennoù pe ar romantou-polis.

« Marteze, » eme Enora.

« Daoust hag e vo paket ? »

« Diaes gouzout, » eme Enora. « N' hon eus gwelet nemet e gein, ha c'hoazh a-boan. Ur chupenn liv gris a oa gantañ a gredomp. Mes ne vijemp ket evit touiñ. »

Enora a oa matezh e ti an doktor Martin abaoe daouzek vloaz. Ur vaouez e barr he oad, treut, askornek, kreñv, kramennek he dremm, gant he daoulagad du hag he blev du kribet tenn dindan he c'hoefig plat, heñvel un tamm mat ouzh ur vran. Labourerez dispar, ret dezhi bezañ ivez, hag hi matezh gra-pep-tra. An ti a oa bras. Un adti el liorzha a oa bet roet da annez d' ur martolod kozh, bet kollet gantañ ur c'har e Bizert, pa oa chomet peg etre ur vag hag ur pont-dilestrañ. Simon oa e anv. Deuet e oa, pemp bloaz a-raok an darvoud-mañ, da ober war-dro al liorzha ha da vezañ porzhier, eme ar medisin. Enora n' he doa ket ezhomm skoazell, a lavaras. Lezel a rae Simon da labourat al liorzha kement ha ma kare. Hogen evit an ti, nann. Gwreg Simon n' he doa aotre d' ober netra, nemet da zigeriñ an nor d' ar glañvourien goude kreisteiz, pa veze kalz a bres en devezhioù foar.

En ur gontañ hec'h istor, Enora a jestraoue hag a droe he divrec'h sec'h-korn, e-giz bannoù ur vilin-avel. Ne davas nemet pa zeuas ar beleg. Kaozeadenn hemañ ne voe ket selaouet, am eus aon, gant kement a evezh ha danevell Enora.

* * *

Jaketa a dremenas an noz o treiñ-distreiñ he fenn war he goubenner. Bep kardeur e tiskenne dre an aer taolioù boud, gorrek, horolaj an iliz, ha raktal goude e save eus ar sal-debriñ en traoñ taolioù prim, sklintin, an horolaj-moger, evel mezh gantañ bezañ war zilerc'h. Trouz all ebet ne zeue eus kêr nag eus an ti. Skeudenn ar prenestr, taolet er gambr gant al loar, a yae goustadik eus ur c'hogn d' ar gambrig d'egile, o lufrañ, bremañ war ar sailh hag ar brok dindan an daol-emwalc'hiñ, bremañ war dorn kouevr ar nor, bremañ war ur votez e traoñ ar rideoz a guzhe an dilhad e pign en o c'hombod.

23

Emziviz he mestrez gant an div c'hoar, koulz hag istor Enora, a valee dre he spered, gwech an eil, gwech egile, gwech an daou mesk-ha-mesk. Klask a rae prederiañ, lakaat urzh en he menozioù, pezh n' he doa graet biskoazh en he buhez. Al laer a oa ur chupenn liv gris war e gein ha sandalenoù en e dreid : se a oa sklaer a-walc'h. Morse n' he doa gwelet Jakou gwisket evel-se. Da vihanañ, ne grede ket. Pebezh truez na oa ket bet gwelet gwelloc'h gant an tri ! Dre belec'h ivez e oa tec'het ? P' en dije troet a-gleiz, en dije kejet gant ar merc'hed en-dro da garrig ar bugel, evel m' o doa graet Jakou hag an archer. P' en dije troet a-zehou... siwazh, ne c'helle ket tremen... nemet chom kuzhet er park e-kichen ar straedig-dall. Eno e oa un ti kozh hanter zismantret ha goulllo. Daoust hag e oa bet an archerien da furchal en ti-se ?... Neuze, pelec'h edo Jakou ? Da belec'h e oa bet o redek evel-se ? Sur e vije aes dezhañ lavarout, diskouez n' en doa netra d' ober gant al laeroñsi...

Jaketa a droe, a huanade, a boulze he blev diwar he zal, a yae war he c'hoazez, a c'hourveze adarre, a zibune un dizenez chapelad ur wech an amzer. Ne grede ket sevel, aon da ober trouz ha da zihuniñ he mestrez.

Gant skleur ar mintin ha kan ar c'hilhog e vanas kousket. Ur c'housked moustret, dastroc'het a hurlinkoù espar. Skuizh oa hec'h empenn, skuizh hec'h izili. An derzhienn a lakae perlezennoù c'hwez war he gouzoug hag he dremm. Ur wech e welas ki ar c'higer o lammat, bilhedoù mil lur en e c'heol, ur c'harrig-bugel stag ouzh e lost, hag an doktor Martin er c'harrig. Ur wech e welas Enora o c'hoari pellenn-droad hec'h-unan-penn a-enep unnek paotr holl heñvel-poch ouzh Jakou. Ur wech, an dimezell Lusi oa al laer, hag ur ramz gwisket en archer, gant un tog daou veg ha mourroù hir, o lopañ warni gant gar goad Simon gozh.

* * *

Da c'hwec'h eur hanter, Jaketa a savas evel kustum, hag evel kustum d' ar Sul, a yeas d' an oferenn seizh eur. Ne oa koulz lavaret en oferenn-se nemet mitizhien evelti, hag un nebeut tud a felle dezho komunian abred. Jaketa ne gomzas ouzh nikun anezho hag a zistroas d' ar gêr da aozañ an dijuni.

24

Dijuniñ mat a reas. Neuze ez eas da skeiñ war dor kambr he mestrez, da gas dezhi an tasad te a gemere bep beure. An dimezell Lusi, a welas diouzh ar sell kentañ, n'he doa ket kousket kalz gwelloc'h egeti. « Chakodoù » a oa dindan he daoulagad. Koeñvet oa he divjod, ha ruz-gwin. Gant he muzelloù, a-ispilh, flak ha dinerzh, dirak toull he genou, - he rezad dent faos a oa en ur werenn war an daol-noz, - e seblante bezañ koshaet a zek vloaz. Damsevel a reas, harpet war un ilin.

« Poan-benn am eus, » emezi. « Tapit din ar voestad kachedoù. »

Arvestiñ a reas he matezh, fresk ha koant evel ur vroñsenn. « Houmañ » a soñjas, « a zo dibreder da vihanañ ; kousket he deus evel ur broc'h, me bari. »

Tra iskis: ar skuizhder a oa aet en un taol diouzh korf Jaketa. Tra iskisoc'h : sklaer e oa deuet he menozioù, a oa bet pounner ha luziet a-viskoazh. Al lusenn a oa bet atav etre he spered hag ar bed a oa steuziet a-grenn evel dre vurzud.

« Gwellaat a ray deoc'h buan, dimezell, » emezi, o tigeriñ ar stalafioù. « Ha mont a reot d' an oferenn ? »

« Klask a rin mont, » eme Lusi gant ur vouezh toc'hor.

* * *

E ti an dimezell Lusi e veze graet ar marc'had d' ar Sadorn evit ar Sul. Bep sulvezh vintin, avat, e vanke tra pe dra : sukr, holen, sezo, kafe, bleud. Souezhus penaos ez aent da hesk, evel a-ratozh e vije, d' ar Sadorn da noz. Ha hep sulvezh vintin e veze kaset Jaketa da brenañ, « ma 'z eus staliou digor ».

Ar mintin-se e vanke holen, pebr hag alumetez. An dimezell Lusi a skrivas ar roll hag a roas an tamm paper da Jaketa.

Ur stal a veze digor atav : burev-butun Plasenn an Traoñ, a oa war un dro burev-butun, ispisiri ha tavarn. Ha Jaketa di, ur pikol paner war goubl he brec'h.

Ne oa nemet eizh eur hanter. Koulskoude e oa tud leizh an ti. Ouzh an daol e oa paotred, en o zouez Simon gozh, azezet war ur gador, e c'har goad harpet war ur skabell e-kichen. En ur sachañ war e gorn e konte istor al laeroñsi. An holl er stal a selaoue. Ar merc'hed oc'h ober al lost dirak an daol-gont ne oa ket mall warno, evit ur wech, bezañ servijet.

« Me ha va gwreg a oa oc'h evañ kafe, » a lavare. « A-greiz-holl hon eus klevet unan bennak o redek el liorz. Sellet hon eus dre ar prenestr ha gwelet hon eus kein un den o tec'hout. Aet omp er-maez. Galvet em eus Enora, a oa er gegin. »

« N' hoc'h eus ket gwelet piv oa ? »

25

« N' hon eus gwelet nemet e gein. Enora he deus bet nebeutoc'h amzer c'hoazh da welout. Me, c'hwi oar, n' eo ket koulz va daoulagad ha gwechall pa oan martolod, ha va gwreg a zo berrwelet. Gwelet hon eus an den, hag Enora ivez, dres pa edo o tremen dre ar gloued. Domaj eo ne ve ket deuet Enora a-raok, rak hi a wel sklaer, me lavar deoc'h ! »

Simon a yeas en e sav. Un den a ginnigas dezhañ ur werennad c'hoazh.

« Nann, nann, a-walc'h, » eme Simon, o sec'hañ beg e vourroù gant kil e zorn. « Poent eo din mont. »

En ur dremen dirak an daol-gont e prenas ur pakad butun, o tennañ ur bilhed ugent lur eus e c'hodell. (An istor-mañ a c'hoarveze un toulladig mat a vloavezhioù 'zo.)

Moneiz a voe rentet dezhañ, hag ez eas er-maez. An dud a chomas c'hoazh er stal da gaozeal.

« Ur banne mat a zo dija dindan e fri ! » a lavaras unan.

« Ya, brav e vo fenozh ! » eme ar varc'hadourez.

Jaketa a selaoue gwelloc'h eget nikun. Pa zeuas he zro da brenañ, e soñjas e vanke ivez soavon : biskoazh n' oa bet ken dihun he spered.

* * *

Ouzhpenn un eur e oa bet oc'h ober he zro ! En ti e kavas he mestrez o paouez distreiñ eus an oferenn nav eur gant Anna hag Herried. Keloù nevez a oa : Jakou a oa bet harzet en ur vourc'h e-kichen gant an archerien e-pad an noz, ha lakaet en toull-bac'h.

En derc'hent, Jaketa a vije bet sabatuet, spontet, pennfollet pe abafet gant ar c'heloù-se. Hiziv e voe fromet hepken. A zo muioc'h, nerzh-youl a gavas da guzhat he fromadenn. Gwir eo, ne voe ket taolet pled outi. An teir all a gomze bremañ a vouezh uhel, hep serriñ an nor. Ma tregerne an ti a-bezh ganto.

« An archerien o deus paket krog ennañ, » a lavare Anna, « en ur sal-dañs, war-dro hanternoz. »

« An arc'hant a oa gantañ ? » eme Lusi.

« Nann. Mes damvezv e oa, ha dispignet en doa kalz: prenet daou vouchouer-godell-porpant, div gravatenn, ur gouriz-ler, paeet banneoù da hemañ ha da henhont, roet madigoù d' ar merc'hed. »

« Evelato, » eme Lusi, « m' en dije laeret millurioù ha miliurioù... »

« Kollet oant bet gantañ, kuzhet en un tu bennak marteze... »

« Gant piv hoc'h eus klevet kement-se ? » eme Lusi.

26

« Gant ur gward-kêr, » eme Herried ; « ha ne felle ket dezhañ kaozeal. »

« Piv ? ar gward-kêr ? »

« Nann, Jakou. Ne felle ket dezhañ anzav netra. »

« Marteze, » eme Anna, « e rae an neuz da vezañ mezv. Morse n' hor boa klevet e oa mezvier. Merc'hetaer, ya, mes mezvier... »

« N' hor boa ket klevet ivez e oa laer, » eme Herried, « ha koulskoude... »

« N' eus netra betek bremañ da brouiñ ez eo eñ al laer, » eme Lusi.

« O, dimezell Lusi, » eme Herried « goude ar pezh hon eus gwelet ! »

Herried an hini eo a damalle Jakou ar muiañ, hag hi an hini he doa e zifennet da gentañ-holl.

Jaketa ne golle ger ebet eus o fistilh. Edo o vont da lakaat kig da rostañ

er forn, pa glevas Anna hag Herried o pediñ Lusi da gaout merenn ganto. Lusi, goude kalz a ismodoù, a asantas.

« Mont a ran, Jaketa, » emezi. « Prennit mat an nor war ho lerc'h ma 'z it er-maez, ha na zistroit ket re ziwezhat. »

Jaketa a aozas ar pred a blije dezhi : patatez dre laezh ha vioù war-c'horre, hag a reas ur banne kafe kreñv. Petra, en em c'houlennas, en deus Jakou da zebriñ en e brizon ? Kaol ha kig bervet moarvat. N' he doa ket kalz amzer da soñjal e Jakou, neoazh. E traoù all e soñje. En ur skaotañ al listri hag al loaioù, en ur skubañ ar gegin, en ur lemel he zavañjer, en ur reiñ un taol broust d' he dilhad Sul, e traoù all e soñje.

* * *

Jaketa a yeas raktal da di an doktor Martin. Pa zegouezhas, ne oa ket hec'h-unan-penn. Biskoazh ne oa bet kement a dud o riboulat er straedig a-dreñv an ti. An tadoù, mammoù ha bugale, na ouient morse da belec'h mont da bourmen goude merenn d' ar Sul, ne oant ket nec'het evit ur wech. Holl e oant o tremen dre eno. Kouerien ha koueriadezed yaouank a ziwarr-dro a oa deuet ivez gant o marc'hoù-houarn. Bez' e oa tud a bep seurt, tudjentil ha kumun. Ar c'hazetennoù, - en amzer-se e oa kazetennoù d' ar sul, - o doa moulet luc'hskendennoù eus an ti, ha prenestr ar gambr-studi merket gant ut groaz.

Tud ha n' en em anavezent ket a gomze kenetrezo. Bez' e oa strolladoù bihan amañ ahont. Darn token a oa helmoet ouzh ar gloued, hag a vije aet a-walc'h el liorz, nemet ar gloued a oa kadranaset. Ne weled nikun eus tud an ti. Prenestr al laeroñsi a oa serret-kloz.

27

Nag an ti nag al liorz ne oant nemeur disheñvel diouzh an tiez hag al liorzhoù all. Adti Simon a oa a-gleiz, kegin Enora a-zehou pa selled eus ar straedig. Ar gambr-studi a oa e-kreiz. Ha feiz, ne oa ket diaes d' un den yaouank tizhout ar prenestr en ul lamm. Un alez ledan a-dreuz al liorz a gase war-eeun eus ar gloued d' ar prenestr-se. Un alez, ken ledan all, a rae tro al liorz. Diouzh tu ar straedig e oa ur gael-houarn. Bevennet e oa an alezioù bras hag ar gael hed-ha-hed gant gwezigoù stank o deil ha dezho un daou vetr bennak a uhelder, en doare ma weled a-boan al leton etrezo, gant kelc'hiennoù bleunioù glas, ruz ha melen en o c'hreiz.

A bep seurt a veze lavaret gant an arvesterien. Tamallet e veze d' an doktor Martin bezañ lezet arc'hant dizifenn en ul lec'h ken diraezus.

« Koulz e vije bet dezhañ lezel e arc'hant war ar gloued, » eme unan.

« Ya, mes piv en dije soñjet e oa arc'hant er gambr-se ? »

Jaketa a selle pizh, hag a selaoue ivez. Souezhet oa. Souezhet, dre na gleve ket ar pezh a oa anat.

« Daoust, » a soñje, « hag an holl dud-mañ a zo dall ? Daoust hag ar bolised a zo deuet dec'h a oa dall ivez ? Daoust ha tud an ti a zo dall-poch pe sot-pitilh ? Sklaer eo pep tra. Istor al laeroñsi a zo merket amañ ken splann ha pa vije skrivet e lizherennoù bras war ur skritell. Tri den o deus gwelet al laer. Ha n' o deus ket anavezet anezhañ ! Mes me, hep bezañ gwelet, a oar e anv ! me a oar dre belec'h eo tec'het ! Me a oar petra en deus graet gant an arc'hant ! Pa vijen bet speredek n'em bije ket bet ezhomm zoken dont betek amañ. A-walc'h em eus klevet dec'h hag er mintin-mañ da zivinout ! Ha soñjal ez eo bet toullbac'het ar paour kaezh Jakou ! »

Un aotrou kofek, bourbell e zaoulagad, a oa o tiskouez d' un aotrou all ha da ziv itron ur bann eus ar gloued a oa torret ; sebezet oa, emezañ, ne vije ket bet meneget an dra-se gant ar c'hazetennoù.

C'hoant he doa Jaketa da grial outañ :

« Ar gwezigoù, genaoueg, a rankit sellout outo ! ar gwezigoù ! »

Hogen ne lavaras grik. Diskenn a reas etrezek ar stêr, war he fouez, da zivizout, pell diouzh safar an dioded-se, petra a dlee ober.

* * *

28

Dre chañs, Enora a oa en iliz evit bennozh ar Sakramant. Jaketa, goude hir dermal, he doa graet he menoz lavarout dezhi. « Ya, » he doe soñjet en diwezh, « komz a rankan ouzh Enora. »

Echu an ofis, Enora, a oa aet er-maez dre zor ar groazenn, a voe buan ur guchennad tud en-dro dezhi. Ne chomas ket da gaozeal koulskoude.

« C'hwi holl a oar bremañ kement ha ma ouzon-me, » he doa lavaret o vountañ ar gonoc'herien a-gostez gant he divrec'h bazh-ribod, « ha n' eus netra nevez. »

Kemer a reas ur ruig distro. Skuizh e oa, anat, ha n' eo ket souezh. Den ne gredas mont war he lerc'h. Den ebet, nemet Jaketa.

Enora a gerzhe prim, sonn evel ur greunadour, hep treiñ he fenn. Jaketa en em lakaas da redek.

« Dimezell Enora ! » emezi.

Enora ha Jaketa en em anavezent a-boan. E strollad ar mitizhien er patronaj, Enora, matezh an doktor Martin, a oa un ezel a bouez ha doujet. Jaketa ne oa netra.

Kas an tammig pezh divergont diwar he zro e voe kentañ lusk Enora. Jaketa hen lennas er sell kounnaret a reas outi.

« Dimezell Enora..., » emezi adarre.

Sell Enora a gemmas en un taol : un dra bennak iskis e mouezh ha war dremm an emzivadez.

« Dimezell Enora, lavaret hoc'h eus bremaik ne oa netra nevez. Mes un dra nevez a zo, ha ret eo deoc'h gouzout. »

« Me oar, » eme Enora, « un den a zo bet paket. »

« Ya, Jakou. Ha c'hwi gav deoc'h eo-eñ al laer ? »

« Ne ouzon ket, » eme Enora ; « ne gredan ket. » En he c'halon, Jaketa a lavaras « bennozh Doue » da Enora evit ar menoz mat-se. Kenderc'hel a reas a vouezh uhel :

« Muioc'h a zo, dimezell Enora. Ha ne ouzon ket hag-eñ e tlean lavarout deoc'h. »

« Lavarit atav » eme Enora.

« Va lezit da ober ur goulenn da gentañ, » eme Jaketa. « Klevet em eus ne vez ket paeet Simon gant an doktor Martin, nemet en doa an ti bihan hag un tamm eus al liorzha evit netra. Ha gwir eo ? »

« Gwir eo, » eme Enora. « Petra a ra se deoc'h ? »

« Simon a zo gantañ bilhedoù-bank a zo bet paeet d'an doktor Martin. »

Enora a chomas a-sav, he daouarn war he divgroazell.

« Er mintin-mañ, » eme Jaketa, « e oan er burev-butun, ha Simon a oa ivez. Roet en deus d'ar varc'hadourez ur bilhed ugent lur, ha neuze eo aet er-maez eus ar stal. Un nebeut tud a oa eno. Bez' e oa un den diwar ar maez, hag a fellas dezhañ sellout ouzh ar bilhed. Sellet en deus a-dost, ha neuze en deus lavaret e oa ur bilhed en doa roet ar sizhun a-raok d' an doktor Martin : korn ar bilhed a oa bet diroget hag aozet gantañ, gant an den-se, gant paper-peg distaget diouzh ur follennad-timbrou. Anavezout a raje, emezañ ar bilhed-se etre mil. »

29

« N' eus ken ? » eme Enora. « Roet oa bet ar bilhed-se da Simon gant an doktor Martin marteze da brenañ un dra bennak evit al liorz. Ne oa nemet ur bilhed ? C'hwi a lavar bilhedoù. »

« Nann, ur fazi eo am eus graet. Ne oa nemet ur bilhed hepken. Mes an dud, dimezell Enora, an dud a oa er stal a zo en em lakaet da gaozeal ha da lavarout droug diwar-benn Simon. Darn a lavare, ma ne oa ket eñ al laer, e oa en em glevet gant al laer, ha traoù all evel-se. Berr-ha-berr, e kave dezho e oa ret mont da gontañ pep tra d' ar c'homiser. Ha graet o deus ivez. En endervezh, me a zo aet da welout an ti. An den diwar ar maez, paotr ar bilhed, a oa eno. Ar bolised, a lavare, a gred emañ an arc'hant, pe darn eus an arc'hant, e ti an doktor Martin, kuzhet en un tu bennak. Ha warc'hoazh vintin, abred-mat, e vo graet ar furch. Me am eus soñjet e oa koulz deoc'h gouzout. »

Enora a selle pizh ouzh Jaketa. Jaketa a verze splann pezh a dremene en he spered : bez' e oa etre krediñ ha diskrediñ. Krediñ un istor ken luziet a oa diaes. Diskrediñ a-grenn a oa ken diaes all. Jaketane oa ket gwall fin. Hogen tud sot a-wechoù a oar sellout ha selaou gwelloc'h eget tud skiantek.

« Mat, mat, » eme Enora, « graent ar furch mar karont. Me zo sur ne gavint netra. Hag an doktor Martin a vo feuket. Mantrus eo evelato ne c'heller ket kaout peoc'h ! »

Hag hep trugarekaat na lavarout kenavo e pellaas diouzh ar vatezhig.

* * *

An dimezell Lusi a oa aet abred da gousket. Na tomnder an abardaez, na garmoù ha kanaouennoù tremenidi bet o ruilhal en tavarnioù ne oant evit he direnkañ. Roc'hal a rae, astennet war he c'hein.

Marteze n' he dije ket roc'het ken flour m'he dije gouezet e oa hec'h-unan-penn en he zi, ha divorailhet dor an traoñ.

Kambrig he matezh a oa goullo. Jaketa he doa graet an neuz da vont da gousket ivez. Ha neuze, sioul-sibouroun, e oa diskennet war solioù he loeroù, he botoù stardet ganti e pleg he c'hazel.

D' an eur-se, tost unnek eur, Jaketa a oa e-harz ur bod-drez, er park e-kichen ar straedig a-dreñv ti an doktor Martin.

30

Al loar a oa savet. Jaketa a chome tamolodet er skeud. Tud a oa bet o vont a-hed ar straedig, tud o tont c'hoazh da welout an ti. Bremañ ne oa mui nikun. Ur c'hazh o viaoual. Un askell-groc'hen o c'hournijal. Hanternoz o tintal a-bell.

Jaketa a grene. Pezh a oa c'hoarvezet ha pezh a oa o vont da c'hoarvezout a oa dirazi ken resis ha raktres un ijiner o kas da benn un arnodenn. Aon he doa. N' he doa ket aon rak traoù na ouie ket. Ne oa tamm ebet an doare aon e sav diouzh an noz, an digenvez, hud al loar, ar galloudoù kevrinus a hañval kantren d' ar c'houlz-se dre ar bed. Bez' e oa aon rak un dra resis, jedet ha muzuliet ha pouezet ha bindedet gant ar poell nevez c'hanet en he spered, pe gentoc'h, nevez dishualet diouzh kondon hec'h isemskiant. Riskl a oa, riskl bras. En abeg da se e krene.

Tanav oa he skouarn, hon eus lavaret. Klevout a reas un trouzig, gwigour metal rimiet evezhiek ouzh metal. Diouzhtu e ouezas e oa unan bennak o c'hoari gant kadranas kloued liorz h an doktor Martin. Ur chadenn a gouezhas, mell ouzh mell o stirlinkat trumm. E-pad ur vunutenn ne voe mui netra. Neuze, goustadik-goustadik, ar gloued a gornzigoras. Eus he zoull-kuzh e spurmantas ur silouetenn oc'h en em silañ er-maez eus al liorz h, o treuziñ ar straedig, hag o vont da deuziñ er skeud er c'harzh en tu all.

Unan bennak a oa er straedig. Ne rae trouz ebet. Hogen o kerzhout edo, o kerzhout war ar geot a-hed ar wrimenn, o chom muiañ ma c'helle er skeud, nemet dizoloet a-wechoù pe ranke tremen e-biou d' un ode. Edo o tont etrezek ar park, o tostaat, kammed-ha-kammed. Jaketa a gluche, en em zastume stattoe'h-startañ, harp ouzh ar bod-drez.

* * *

Ur griadenn a rogas sioulder an noz :

« Forzh... forzh... forzh va buhez ! »

Mouezh Jaketa.

Ar bod-drez a hejas, a strakas. Toumpadennoù wat an douar. Tourni un emgann. Ul leñvadenn hir evel hini un aneval gloazet. Ar garm adarre :

« Forzh va buhez ! »

Neuze ur ronkell, evel diouzh ur gorzailhenn etre daouarn un tager.

Daou archer, a oa o tistreiñ d' ar c'hazarn diwezhat en nozvezh Sul-se, a lammas er park. Er c'hazarn, ur renkennad prenester a c'houlouas.

An daou archer a redas betek ar bod-drez. E skleur ar gleuzeurig-tredan buket warni gant unan anezho, edo Jaketa, koazezet, o c'hoarzhin leizh he gargadenn e-giz ur follez.

« Buan ! » emezi o sailhañ wat-raok, « buan, ahont ! »

31

Ambroug a reas an daou archer trema an ti dismantret a oar er park. Antren a rejont o-zri.

Ur pakad a oa e-kreiz al leur : un tamm kotoñs du, skoulmet ar c'hornioù anezhañ daou-ha-daou. Jaketa a zisc'hreas an daou skoulm. Bez' e oa ur bragoù rollet en-dro d' ur chupenn ; e-barzh ar chupenn, ur gasketenn ha strobadoù bilhedoù mil lur, pemp kant lur, kant lur, hanter-kant lur, ugent lur.

« Ha setu amañ al laer ! » eme Jaketa.

E-tal ur bern mein a oa bet ar siminal, sonn, diflach, e oa ur vaouez, kroaziet he divrec'h : Enora. En em lakaat a reas hep ur ger, etre an daou archer.

* * *

E burev ar c'homiser-polis, Jaketa a zibunas hec'h istor.

Ne oa ket diaes, emezi. Ar re all o dije gwelet pezh he doa gwelet, ma vijent sur evelti ne oa ket Jakou al laer. Gwelet o dije gwezigoù al liorz h, ha komprenet he doa Enora kontet gevier. Enora he doa lavaret edo er gegin p' he doa klevet Simon o huchal. Deuet e oa el liorz h, ha neuze he doa gwelet, evel Simon hag e wreg, kein un den o tec'hout dre ar gloued. Se ne oa ket gwir : eus al liorz h ne c'helle gwelout netra ; ar gwezigoù a oa kalz re stank ha re uhel. Da welout kein an den e vije bet ret mont betek penn an alez, dindan brenestr ar gambr-studi, ha n' he doa ket amzer d' hen ober. Simon hag e wreg a oa bet re

strafuilhet da verzout an dra-se.

Simon hag e wreg o doa lavaret ar wirionez. An den o doa gwelet a oa aze. An den a oa Enora, gwisket ganti ar bragoù hag ar chupenn a oa er pakad.

An doktor Martin a oa aet d' e gambr d' ober hun-kreisteiz. Ne oa nikun er gambr-studi. Enora a oa aet di. Kemeret he doa ar bilhedoù, a ouie a oa eno, ha lezet an tiretennoù digor. Serret he doa an arc'hant en armel ar gegin. Neuze he doa gwisket dilhad gwaz he doa degaset en ti un nebeut devezhioù a-raok. Treut evel ma oa, ne oa ket tenn dezhi tremen a-bell evit ur gwaz. Aet e oa sioulik dre al liorz, kuzhet gant ar gwezigoù, betek an alez kreiz. Eno he doa graet trouz, ha dedennet Simon hag e wreg.

Ar gloued a oa bet digoret ganti diaraok. Simon hag e wreg o doa gwelet an den, emezo, o vont kuit dre ar gloued. Evit gwir, kredet o doa e oa aet kuit evel-se. Fall oa o daoulagad. An den, pe gentoc'h Enora, a oa distroet a-gleiz dre an alez a-hed ar gael en tu diabarzh. Eno he doa diwisket ar chupenn, tennet ar gasketenn a-ziwar he c'hoef plat, lakaet ur vroz he doa kuzhet en ur vodenn, kuzhet chupenn ha kasketenn en he lec'h, graet tro al liorz hag en em gavet a-dreñv Simon hag e wreg.

32

Daoust d' ar fazi bihan he doa graet o lavarout he doa spurmantet kein an den, Enora a oa bet ijinet brav he zro ganti. Jaketa a oa bet ijinet he zro ganti bravoc'h c'hoazh. D'ar Sul d' endervezh he doa dirouestlet en un taol, en ul luc'hedenn-spered korvigelloù matezh ar medisin. Ret e oa bremañ he fakañ, stegnañ un antell.

Kement he doa kontet Jaketa da Enora diwar-benn ar bilhed ugent lur aozet, an den diwar ar maez, ar furch da vezañ graet gant ar bolised, hag all, ne oa nemet faltazi. Simon gozh en doa paeet ar varc'hadourez gant ur bilhed ugent lur, e gwirionez. Setu holl. Jaketa a felle dezhi rediañ al laerez da guzhat an arc'hant en un tu bennak er-maez. Mont pell ne c'helle ket. Mont er-maez eus an ti diouzh tu ar ru vras ne c'helle ket : tud a dremene er ru vras a-hed an noz etre ar sul hag al lun. Ne c'helle ober nemet un dra : kuzhat an arc'hant en ti dirapar er park, ha marteze kuzhat he dilhad gwaz war un dro.

An dagadenn e-tal ar bod-drez ne oa nemet ur pezh-c'hoari. Jaketa ne oa bet taget gant nikun. Gwelet he doa Enora o vont el lastez ti, ha graet safar e spi da zedennañ archerien pe dud all. N' he dije ket Enora kredet diskoachañ ken na vije echu an trouz. Riskl bras a oa koulskoude, riskl bras da fasiañ a-grenn.

* * *

Hogen ne oa fazi ebet. Enora he doa ur c'henderv e Sant-Brieg, ur foeter-arc'hant, a veze atav o c'houlenn skoazell digant e geniterv, o kinnig, ma nac'hje, « brudañ traoù diwar he fenn », - traoù gwir, siwazh, - hag e-giz-se, hec'h esperadennoù bihan a oa teuzet. Neuze, a vare da vare, he doa laeret digant he mestr : ugent lur ur sizhun, tregont lur ar sizhun goude. An doktor Martin a oa pinvidik. Ne selle ket pizh hag e oa dievezh e-keñver an arc'hant. Nevez oa, ar c'henderv en doa goulennet ur somm vras a-greiz-holl, da vont d' ar Stadoù-Unanet, emezañ. Ha setu eno penn-abeg al laeroñsi.

Evit Jakou, kaer en doa bet lavarout e oa o redek en endervezh ar Sadorn da dapout ur c'harr-beajourien, touiñ ne oa ket tremenet dre ar straedig a-dreñv ti ar medisin, diskleriañ n'en doa dispignet nemet arc'hant e c'hopr, dalc'het e vije bet er vac'h e-pad meur a viz marteze, panevet taol-gwidre Jaketa.

33

Kriz eo ar bed. Jakou ne oa ket kablus. Padal e kavas gwell kuitaat stal ar c'higer ha klask labour en ur gêr all. Neuze e reas e servij. Distreiñ a reas koulskoude, meur a wech zoken. Ar wech diwezhañ da gas gantañ, ouzh e vrec'h, un emzivadezig ruz he dremm gant al levnez, ur bizaoued aour ouzh he biz hag un tog mod nevez war he blev.

An dimezell Lusi a chomas e toull an nor o sellout outo o pellaat.

Mousc'hoarzhin a rae, teneraet, un daeraouenn e korn he lagad.

KLOD AR BED-MAÑ

gant Youenn OLIER

Per Madeg n' en doa ket bet a chañs. D' e bemzek vloaz en doa kollet e vamm, sammet gant an droug-skevent. C'hwec'h miz goude e varve e dad, beuzet er porzh : da vare an tre e oa bet kavet e gorf e-tal ar c'hal, dirak ar maerdi. Betek neuze e oa chomet ar paotr er skol : c'hoant en doa tremen ar « Brevet » ha mont da vartolod dindan ar stad : Radio a felle dezhañ bezañ, a lavare. Adal ar mare-se avat e rankas Per labourat e-giz an holl. Pesketour e voe eta, evel ma oa bet e dad, mous gant ar C'hefeleg, mestr ar « Steredenn vor », ur vag-c'hriheta eus ar c'haerañ holl. Ul labour galet e oa honnezh. Ar vag a chome er-maez e-doug ur sizhun. Nemeur a gousk, loustoni, boued goular : torzhioù bara kraz dek lur, kig-sal ha dour da evañ. (D' ar c'houlz-se n'oa ket deut c'hoazh ar c'hiz da gas gwin er-maez.) Hag arabat e oa kaout daouarn dimezell d' ober al labour-se etre Beg ar Raz hag Enez Sun, pa veze losket ar c'hroc'hen gant an dour mor, hep tamm ebat na gour diskuizh ebet e gouelec'h an houlennoù : rak ar morveoted, goût a ouzoc'h, n' int ket kompagnunezh. Ha bez' e oa anezhañ ar mous nemetañ war ar vag.

Pa zistroe da sadorn, ned ae ket mui da lojeiz e dud. Laosket e oa bet an arrebeuri ennañ met feurmet e oa bet an ti d' un den all (ur voereb dezhañ he doa graet war-dro se ha Per n' en doa ket klasket herzel : ingal e oa dezhañ). Krapat a rae betek ti e dad kozh a veve diwar e leve martolod hag a chome er ru Doub, nepell diouzh iliz kozh Sant Rumon ; un ti izel a-walc'h e oa, evitañ da gaout ur solier, sko ouzh an hanternoz ha teñval tre : daou zerez a ranked diskenn a-benn dont e-barzh kambr an traoñ hag a oa hañval un tammig ouzh ur c'hav. En amc'houlou e tiverzed, e-tal ar siminal, uhel ha louet gant ar greunvaen poultrennek, un armel ledan, kazi a-stok ouzh al lein, e prenn kistin, damzu ha lufurus. Luc'h alaouret an tachoù kouevr war he stalafioù a roe dezhi un doare buhez seder ha sioul. Pelloc'h, harp ouzh ar voger, e oa daou wele bras, kromm ha simudet, gwerniset mouk, hañval poch ha stok ha stok, pep a blueg ruz flamm war o gorre : gweleoù Per hag an tad kozh. El laez e oa ar solier, sklerijennet gant ur werenn-doenn : rouantelezh al logod hag ar c'hwen. Eno e oa berniet rouedoù glas krignet holl gant al logod pe gant garouchouennoù ar c'heloù mat (an tad kozh a besketae sardined paz ae d' ar mor gwechall : perc'henn e oa bet d' e vag zoken). Eno e oa bet sañket ivez higennoù torret, sailhoù maligornet, darbodoù a bep seurt, dilhad martolod, ruz ha paseadennet kant gwech, boteier kinoù e-tal an diri; ouzhpenn-se, dindan ar werenn-doenn, ur vatarazenn divouzellet, ur c'holc'hed leun a boucher ha lennoù toullet-didoulet. Hag e save en aer vac'h ur c'hwezh klouar dam-heugus, hini ar boultrenn hag ar glebor mesket gant ar gozhni.

35

Per n' en em glevet ket mat gant e dad kozh. Ne oa ket souezhus : ne zegase gwenneg ebet d' ar gêr. Echu gantañ e sizhunvezh pesketa e rene abardaevezh ar sadorn o vont eus un ostaleri d' eben war ar c'hae : gwin ruz amañ, gwin ruz aze, gwin ruz ahont, boutailhadoù. Da serr-noz e tistroe d' ar gêr, ruz e glipenn ; e gasketenn a oa a-dreuz, e benn stouet gantañ, ha trabidellat a rae, dilavar krenn e-giz ul loen mut.

« Mezh eo deoc'h dont endro d'ar gêr er stad-se, » a c'hroz mole an tad kozh, azezet war e gador o tanañ e gorniad butun e-kichen an oaled ». A-boan ma selle outañ. Hejañ a rae e zivskoaz. « Boeson a zo en e gorf adarre, » a lavare en ur dreiñ ouzh an devezhourez, deut en deiz-se d'ober war-dro an ti ha prest da ziskenn betek ar porzh da skarzhañ ar sailh. « Pebezh planedenn drist, » a responte ar vaouez, truez enni. Per avat a oa bouzar. Pignat a rae war-eeun gant ar skalier ha mont da gouezhañ war-c'horre ar c'holc'hed, mezv-dall. Roc'hal a rae eno betek nav eur mintin antronoz. Fur e oa neuze : goude lonkañ, rankles, un nebeut bolennadoù dour fresk, e troc'he e varv, ha gwisket gantañ e zilhad sul ez ae d' an oferenn. D' abardaez avat e oa mezv-dall adarre. Hag adarre, war

yun, ez ae da gousket er grignol, e-tal Negus, ar c'hazh du treut eskern, a c'hourveze e-harzh e dreid. Sevel a rae da deir eur beure da vare al lanv. Ne veze gwelet liv anezhañ kent ar sadorn goude. N' oa ket kalz labour gantañ er gêr.

Kement-se a badas meur a vloavezh : buhez biskoazh reoliekoc'h. Nemet d'ur sul viz Mezheven gwrizias e kouezhas Per klañv gant alfo an alkol. Tec'hout a reas betek Kêriann en tu all d' an aber war ar maez, o lammat dreist d' ar mogerioù mein izel : soñjal a rae dezhañ e oa un toullad diaouled war e lerc'h o klask e lazhañ. N' oa ket drouk avat, hag ar vugale o doa plijadur o sellout outañ pa rae lammoù bras a-dreuz al lannegi. Klask a voe warnañ d' abardaez. Kaset e voe betek ti an tad kozh. Hemañ a oa gourvezet en e wele d'an eur-se. » E p'lec'h e' bet ar mê'viar-se e tifoultri e voni' ?» a c'hrougnas-eñ en ur dreiñ ouzh ar voger. Ha ne savas ket. Dav e voe d' un amezeg a labourer war ar vag gantañ dont da intent outañ. Per a c'hwezas, a randonas, a chouas, a yudas, a zispac'has war e golc'hed er grignol betek hanternoz ha bec'h a voe war e gamarad da virout outañ da dec'hout kuit adarre. Kousket a reas avat. Pa zihunas e oa torret d' ar barrad : Per a savas, en em wiskas hag a yeas d' ar mor e-giz pa ne vije bet netra. Eus ur ouenn galet e oa. Dienkrezet e voe an tad kozh : an dizenor a vije bet war an tiegezh ma vije bet dav e gas da Gemper, ha kalz arc'hant a vije bet ret dispign. Ha paour e oa.

36

Un taol chañs e voe evit Per ar brezel a darzhas e 1939; rankout a reas mont da zifenn ar « vammvro » e merdeadurezh ar stad. Eno avat e oa dalc'hmat war vor hag amzer en devoe da zilorañ e wad. Ur martolod mat e oa ivez, sioul hag habask, aketus e oa d' ober e labour ha notet mat e oa. Padal, kement-se ne vije ket bet a-walc'h evit dellezout an enor bras a voe graet dezhañ e 1940. E miz Gouere en em gavas e Mers el-Kebir. Hag eñ d' ober e labour ervat evel m' en doa graet betek neuze. Un toullad a vartoloded a gollas o buhez en deiz-se. Per avat, hag eñ kanolier war unan eus al listri a voe tizhet ar muiañ gant tennoù an eneber, ne voe ket e-touez ar re-se. Da c'hoprañ e chañs e voe roet dezhañ ar Groaz-vrezel. (Evit anzav ouzhoc'h ar wirionez, n'oa ket nemetañ : an hanter eus ar vartoloded a oa bet medalennet, met n' eus forzh, me' respont deoc'h e fogase Per goude. Ha penaos ! Pet ac'hanoc'h, lennerien ger, a zo bet medalennet ?)

Disoudardet e voe Per ur miz war-lerc'h. Pa erruas er gêr avat e voe un abadenn all. Ne c'hellas ket padout hep komz eus ar vedalenn en doa gonezet hogen, siwazh, n' eo ket gourc'hemennoù a voe graet dezhañ, reuz ne lavaran ket.

- 'Peus ke' mezh, » a lavare an devezhourez, « lac'ha gwella mignoned ar Frañs ! »

- Piou en eus kroget da denna ? » a argue Per, hegaset, « ar Zôzed o deus gret, me joñj dign. »

- An dra-he ' zo koñchennou tout, » a eilgerie ar varc'hadourez pesked war ar c'hae en ur zastum he c'hasedoù gludek.

- F' oar gwellac'h evidon 'mechañs, » a responte Per diseblant, e zaouarn en e chakodoù, en ur skopañ a-gostez, hep teurvezout sellout outi.

- N'é ke' gwir, » a adlavare ar C'hefeleg, mestr ar « Steredenn-vor ». « Klevet em eus ar Radio dec'h da noz. »

- O ! Ar re-ze a c'hall prêchi : gwest ign da lavart gear e-giz ar re all. »

- Biskoazh kemendall ! » a groze an holl, « heme a zo gwerzet d' ar Voched ! Gêtoz 'ta, gwelt a ri. »

37

Ur Fur e oa Per avat. Pa welas follentez an dud e tavas, pe e lavaras evelto, ar pezh a oa gwell. Rannet e galon e serras pizh e vedalenn e don un

diretenn. Hag e adkrogas ar vuhez kozh : mont d' ar mor, en em vezviñ, roc'hal war-c'horre e golc'hed er grignol. Nebeutoc'h en em vezve evelato. Ha petra 'fell deoc'h ! n' en deus nemet ar si fall-se : ur paotr seder eo a-hend-all, seven, hegarat, prest da rentañ servij bepred, ned a ket war-dro ar merc'hed, n' eo ket gouest da laerezh, ha n' eo ket drouk tamm ebet ; ne dabut nepred gant den diwar-benn politikerezh (re zañjerus eo) ; nag a-zivout relijion (n' en deus menoz ebet). Rak-se n' en deus nemet mignoned. Ha pa vez mezv, ne ra ket reuz : randoniñ a ra hepken, pe aesoc'h deoc'h, ne rann grik. Menel a ra e-giz un tamm koad e korn an oaled, kollet en un huñvre difiñv evel ar saout.

E gwirionez, Per Madeg, gant da fri tougn, da zremm ruz talfasek, da zaoulagad bobos, da zent aour; da gasketenn lor war da skouarn, da zaouarn skejvrizellet e-barzh chakodoù da vragoù glas takonet, da chupenn ruz kailharet, ne vefe ket lavaret out bet un haroz un deiz e Mers-el-Kebir !

Pariz, miz C'hwevrer, 1951.

MARTOLODED AR ROUE MELKIOR

troet gant Yeun ar GOW

Ar re-all n' o devoa bet nemet heuliañ ar roudenn e oa boas ar c'haravanennoù da gemerout ; hogen ar roue Melkior, an trede, a oa deuet, dre vor, da zouarañ war aodoù Bro-Siria. Ken diflach e oa chomet an aezenn, o c'hwezhañ dalc'hmat war-du ar Sterenn, ma ne oa ket bet ret d' al levier, sabatuet, diroudennañ ur wech hepken diwar sribourzh na babourzh e-pad sizhunvezhioù hir, ha, paneve d' ur steredenn difiñv e bolz an neñv, deuet da lakaat reustl en evezhiadennoù o devoa kefridi an ofisourien yaouank d' ober diwar-benn an oabl, ne oa bet darvoud-all ebet e-pad an treizh.

Kerkent ha ma voe bet diskennet ar c'hasedadoù aour war ar c'hae, ez eas ar roue Melkior d' an douar hag, oc'h heuliañ ar Sterenn bepred, e kerzhas, gant ar strollad kañvaled edo o paouez feurmiñ, war benn hent d' e zaou genvreur. Ekeit ha ma chomje al lestr da c'hortoz distro ar veajourien, e oa bet laosket da vont da greiz an douarou, da heul o zreizhad brudet, Pilven, ar c'harter-mestr gwernier, Ar Greun, martobd gouelier, ha Bourc'hiz, kalvez ar bourzh, ran o-zri gant ar c'hoant da welout bro. Pep hini eus ar re-mañ a oa gantañ war e skoaz ar sac'h leien louet a vez oc'h ober malizenn gant ar baotred aotreet da zivourzhañ, rak gourc'hemennet e oa bet dezo, gant kabiten-archer al lestr, bezañ kempenn war o dilhad, evel ma tere ouzh martoloded oc'h ambroug ur c'hannad hag e dud er broioù estren.

Pilven, boazet da vale diarc'henn war gerdin ar gwernioù, a zalc'he ouzhpenn, en e zorn, e voutoù ler stag o-div gant un tamm poell, ha war dorn sarret Ar Greun, e oa kludet ur peroked, flamm e liv, deuet gantañ war-lerc'h un droiad hir en devoa graet en tu-all da Beulvanioù Herkulez.

Ha, pa veze un ehan etre pep pennad-hent, e chome ar vlenierien-gañvaled, tavedek bepred an tamm anezho, ha soudarded gward ar roue Melkior, klañv-diglañv c'hoazh gant an droug-mor, sebezet-holl o klevout ar vartoloded o kanañ hag o c'hoarzhin, e-giz ma vije bet gouelec'hioù Bro-Siria bleuñvek ha leun a c'hlasvez.

* * *

39

Goude bezañ bet en em vodet holl a-gevret, edo ambrougerien an tri roue o vont da guitaat Jeruzalem, ar gêr-benn, pa voe gwelet, da heul an engalv graet anezho dre o anv, e oa dianket ar vartoloded. Hep chom d' o gortoz, e kemeras an tri Fur penn an hent da Vetleem, goude bezañ kemennet d' o zud edont o vont da welout Mab Doue.

P' en em gavas ar vartoloded el lec'h dibabet evit an emvod, e oa dreoik mat dezho, rak daleañ o devoa graet da evañ gwin-palmez. O kavout goullou an dachenn, e skarjont kuit ac'hane, e-giz ma vije bet an tan war o lerc'h, goude bezañ goulennet ouzh ur polis roman war be du e oa aet ar rouaned hag o zroen.

En ur dremen dre zor kêr, e vuntjont, a-daolioù skoaz, un nebeud Juzevien diwar o hent hag e kollas Ar Greun e beroked e-kreiz ar biladeg. E kêr Vetleem e voe darbet dezho bezañ dastumet en abeg d' an trouz a oa ganto diouzh an noz ; a-benn ar fin, pa gavjont an tri Fur, e oa krog an azeuladeg ouzhpenn un eur a oa.

« Petra eo an trouz-se ? » a c'houlennas Mari.

- Itron, » eme Velkior, « ar re-se a zo tri martolod emañ va gwardoù o virout outo da dostaat ouzh ar c'hraou, gant aon e rofent skouer fall, ken drev,

ez eo dezho abaoe m' o deus kuitaet o lestr. »

- Ra vint laosket da dostaat ! » a lavaras Mari.

Hag ar renkoù da zigeriñ d' ober hent d' ar verdeidi da dostaat d' o zro ouzh ar Bugel-Doue.

War o daoulin ha souezhet, e selle an tri roue fur outo o tont tostoc'h. War an tu dehou, e starde ar vesaerien o daouarn war o fennoù-baz, dare da zilammat ma vije bec'h hag, er c'hraou didrouz, e pare ur sklerijenn leun a vister, heñvel ouzh hini ur glaouierad preñved-tan.

Pilven, Ar Greun ha Bourc'hiz a ziwiskas o bonedoù, o veizañ, dre o anien-natur, e oa dleet ober muioc'h a lid d' an ampoent-se eget pa vezer o saludiñ ar banniel war ar bourzh, a zo ar mare nemetañ, war an deiz, ma rank ar vartoloded bezañ diskabell.

« Paotred, » eme Vari, « ha krediñ a rit e tere ar gwall-skouer a roit e Betleem ouzh kristenien deuet d' ober ur gwel d o Salver ? »

- Itron, » a respontas Pilven, maraonik, « kemennet eo bet ginivelezh ho mab d' ar vesaerien ha da dud an douar dre vouezh an aelez. Ar roue Melkior hag a zo desket bras en deus bet anaoudegezh anezhi dre ar jedoù en deus graet, hogen ar vartoloded war ar mor n' o deus bet keloù ebet, ha ne ouimp ket etrezek pe du hon heñche ar steredenn. Rak-se ez omp sammet gant ar vez oc'h en em gavout dirazoc'h gant daouarnoù goullo, » eme Bilven c'hoazh, e zaoulagad o parañ war ar profoù deuet gant ar rouaned hag ar vesaerien.

40

- Arabat deoc'h en em chalañ gant ken nebeut, » eme Vari, seven-tre, « hag ho lec'h a zo amañ en hon touez, pa 'z eo gwir eo diskennet va mab eus an neñv evit ar re baour a spered. »

Mezhek an tamm anezho, e taoulinas Pilven, Ar Greun ha Bourc'hiz.

« Petra a c'hellfemp kinnig d' ar bugelig ? » a c'houlenne Pilven outañ e-unan.

« Kemer ar c'harter evit an Azeuladeg, » eme dezhañ, a vouezh izel, Ar Greun ha Bourc'hiz, prederiet gant an hevelep soñjoù, hag, o vezañ aet en distro e korn ar c'hraou, tostik d' an ejen, e tispakjont eus o godelloù, ar gouelier e nadozioù hag ar c'halvez e gontell, hag e krogjont da labourat.

Bep ur mare e teue Jozeb, tad ar bugel, eñ ivez kalvez eus e vicher, da azezañ en o c'hichen, hag e tivizent kenetrezo diwar-benn an doareoù disheñvel a zo da frammañ ar c'hoad-prenn war zouar ha war vor.

An aelez a voe da gentañ o vont kuit pa darzhas an deiz, war-lerc'h ur « Gloria » kanet war an ton bras ; goude e varvas a-nebeudoù, penn-da-benn ar gwenodennoù, kanoù ar vesaerien o tistreiñ davet o loened ; da ziwezhañ e savas ar rouaned diwar o daoulin, e-kreiz un trouz bras a armoù o stekiñ, e-keit ha ma lakae ar servijerien ar basoù war ar c'hañvaled, hag e teuas an deiz da barañ.

Neuze e tostaas an tri martolod ouzh al laouer m' edo ar c'hrouadurig enni. Gant Ar Greun e oa un tammig gwele- brañsell leien, troc'het diouzh an danvez a oa aet d'ober e sac'h, ha, gant Bourc'hiz, ur patrom brig kilviziet en ur geuneudenn sedrez ; ha Pilven a zisplegas da Vari penaos lakaat en-istribilh, ouzh daou dach sanket mat, rilhojennoù ar gwele-brañsell, evit ma vije tommoc'h eno d' ar Mabig Jezuz eget e-barzh al laouer ; lavarout a reas ivez e oa ar brig ar c'hoariell a blije ar muiañ da vugale e vro hag e c'helle bezañ diskaret e wernioù evit ma vije aesoc'h da geñklañ ne vern e pe lec'h.

« Ha sut oc'h na gouezho ket ? » eme Vari d' ar vartoloded, en ur lakaat he mab er c'havell leien.

Met ar Mabig Jezuz hag en devoa mousc'hoarzhed d' e azeulerien e-pad an noz, daoust d' ar yenijenn, a serras e zaoulagad kerkent ha ma voe er gwele-brañsell hag ec'h en em roas da gousket.

« Setu aze, » eme Jozeb hag a oa tostaet ivez, « un dra hag a vo aes-tre deomp e-kerz ar beajoù a raimp diwezhatoc'h. Hag e chomas bamet dirak ar brig fichet gant drapelloù bihan, met, o sellout ivez ouzh an aour, an ezañs hag ar mir, hag ouzh an oanig hag ar fourmaj kinniget gant ar vesaerien, e soñjas e vije diaes dezhañ sammañ al lestr da gas ac'hane da heul kement a draouerez-all.

41

Mari neuze, o tivinout gant petra e oa prederiet, a droas ouzh ar verdeidi.

« Aotroned martoloded, » emezi gant anaoudegezh-vat, « va mab, e goueled e galon, a vo atav troetoc'h ganeoc'h ha gant ar vesaerien eget gant ne vern piv a-hend-all. Evit ur pennad-amzer e fizian ennoc'h ar patrom brig-se hoc'h eus roet d' am mab, ha c'hoant am eus hen mirfec'h ganeoc'h e-pad an holl nozvezhioù a dremenoc'h o tiwall ho pandennadoù houlennoù niverus ha teñval. »

* * *

Pilven, Ar Greun ha Bourc'hiz a zistroas, gant ar Roue Melkior, war-du aod Bro-Siria, hep tremen dre Jeruzalem. Ken trellet e oa o spered ma ne verzjont ket en devoa un dorn dianav bennak peñseliet dezho, gant leien nevez, ar seier a oa bet implijet darn eus an danvez anezho da aozañ ar gwele-brañsell. Degas a rejont Melkior d' e vro hag eno e weljont, o kouezhañ er mor, ar steredenn he devoa diskouezet dezho o hent (1). Goude kalz beajoù all, p'o devoe echu o c'houmanant war vor hag o vezañ ma oant eus an hevelep porzh, e prenjont ur vag ha rouedoù da c'hounit o boued gant ar pesketerezh.

Evel ma oa bet gourc'hemennet dezho gant an Itron-se a Vro-Jude a gomzent alies anezhi, o devoa lakaet brig Betleem en-istribilh ouzh ar solioù dindan pont o bag, ha, pa laoske ganto o gwall-vicher un tamm amzer vak, e sellent outañ o treiñ gant an avel-sil pe gant lusk ar mor, e-keit ha ma teue eñvor dezho eus an darvoud kevrinus.

Pevar devezh a oa edont en noz-se war vor hep bezañ deuet a-benn da dapout pesked. Daoust d' o forpantoù eoliet ha d' o boutoù-euzoù, e oant morzhed gant ar yenijenn hag o devoa poan o terc'hel digor o daoulagad ruziet, e-keit ha ma oa foetet o dremmoù gant pluennoù erc'h na welent ket. Didrouz e oa goloet pont o bag kozh gant ur pallenn e-lec'h ma sanke o divesker betek o c'hof-gar, ha, kerkent ha ma vzent chomet hep fiñval e-pad ur pennadig, e pounnerae o forpantoù eoliet gant an erc'h-se a lakaent da gouezhañ en ur hejañ o divrec'h.

(1) Gouzout a raer e torras ar steredenn dre dammoù en ur gouezañ, hag he c'havout a reomp bremañ c'hoazh dindan furm ar stered-mor.

42

Eno edont, kollet en noz du-dall, pell bras diouzh kement douar, pa gredas d' Ar Greun, hag a oa peg er vaol, klevout ur c'han, hogen ken dister ma c'houlennas ouzh e zaou genseurt astenn o skouarn d' o zro.

« An dra-se, » eme Vourc'hiz oc'h ober ur c'hruz d' e zivskoaz; « a zo ur c'hoari hag a ray deomp mont war-saouzan. »

- Ar wirionez a zo gant Ar Greun, » eme Bilven, « ha tostaat a ra ar mouezhioù. Lavaret e vefe ur c'han heñvel ouzh an hini hon eus klevet a-us da Vro-Jude bremañ 'z eus tri bloaz ha tregont. »

Ar c'hanoù, evit gwir, a oa fraezhoc'h da glevout. An tri martolod o krenañ a spurmantas d' an ampoent, en oabl ken teñval ha ken teñval betek neuze eus an eil penn d'egile, lostennadoù sklaeroc'h e-giz ma vije bet dispennet ar volz koumoul dre ma tostae tarzhe an deiz. Hogen tarzhe an deiz n' her gweljont

morse, ne c'houlaouje ket a-raok seizh eur.

A-hend-all, ar pezh o spourone ar muiañ a oa santout o bag o tiskenn dindan o zreid, evel ma vije bet re-sammet gant an erc'h pe ma vije dour o tont enni, dre un toull bennak, a-dreuz he bourselloñ uzet. E-keit-se e kane mouezhioù o vont niverusoc'h-niverusañ : « Peoc'h war ar mor d' an dud a youl vat ! »

Skeudoù iskis en em vode en dro d' ar vag. Pilven a welas anat ur mell renkennad listri bras a deir gwern dispak o gouelioù warno hag a guzulike kenetrezo : « Setu al lec'h ma tleomp en em gavout evit hor c'hentañ gouel Nedeleg war vor... Roit da c'houzout war-du Eusa... War-du Land's End ». Hag ar boeoù zoken (livirit din, mar plij, hag hen edo eno o lec'h), ar boeoù en em ripe goustadik ha brav, renk-oc'h-renk, etrezek an tri martolod, ar re c'hlas diouzh un tu, ar re ruz diouzh unan-all hag, er c'hreiz, kement hini hag a oar c'hwitellat pa vez morlusenn hag a vleje holl par ma c'hellent.

Ma ne vije ket bet an tourioù-tan kerkoulz staget ha ma 'z int ouzh o diazezoù kerreg, e kredan e vijent deuet, int-i ivez, da sklerijennañ Pilven hag e genseurted gant o bannoù. Gwir eo na vijent ket bet talvezet kalz ken splann e oa deuet sklaerded an neñv da vezañ.

E-kreiz ar vodadeg-se eo en em lakaas bag kozh an tri martolod da deuziñ ha da steuziañ. E lec'h bezañ stlapet er mor, ec'h en em gavas Pilven, Bourc'hiz hag Ar Greun war bourzh ur brig heñvel-mil, hogen kalz brasoc'h koulskoude, ouzh an hini o devoa fardet er c'hraou. Met e ouelioù a oa seiz gwenn ha koad prizius an danvez aet d' ober e bont, hag ar brig-se, dre ur mister brasoc'h c'hoazh, a savas war e bouezig en noz, evel ur c'harr-nij mor gorrek, hag a skoas war-eeun etrezek digor an neñv.

23

N' eo ket ret deoc'h, a dra sur, kaout kredenn er pezh emañ o paouez lavarout. Met, a drugarez Doue, eo bet gwelet an darvoudoù-se gant testoù a-walc'h evit ma vefe ret din kaout aon da vezañ dislavaret.

Pell en donvor, da noz ar Pellgent, ec'h en em gav an holl destoù-se. Ha, ma tegouezh deoc'h dont betek ribl ar mor war-dro mare Nedeleg, e vo trawalc'h deoc'h treiñ ne vern e pe chapel : war-bouez sevel ho taoulagad e weloc'h eno, en-istribilh dirak ar c'hraou, ur patrom brig, sloup pe bag teir gwern evit degas soñj eus ar profoù a ginnigas an tri martolod e kraou Betleem.

Tennet eus « Listri paper » Loeiz Guichard.

Strollad Broadel Kembre 1925-1955

troet gant Per DENEZ diwar levrig kembraek J. E. JONES « Cychwyn Plaid Cymru » embannet da geñver tregontvet deiz-ha-bloaz ar strollad

PENAOES EO SET SAVET STROLLAD BROADDEL KEMBRE

« An eurvezh teñvalañ 'vez an tostañ da c'houlou-deiz. » Gwall-zu e oa an traoù e Kembre goude ar brezel-bed kentañ, hogen deut eo tarzhan-deiz evit ar vro p' eo bet savet ar strollad broadel.

E 1923 ha 1924 e oa kouezhet izel-mezhus ar spered broadel. E miz Meurzh 1923 e c'helle rener ar Welsh Outlook skrivañ kement-mañ : « E-keñver broadelouriezh, emamp bremañ e don ar puñs », ha goude votadeg vras 1924 e c'helle lavarout c'hoazh : « N' eus bet morse, kement ha ma c'heller kaout soñj, votadeg ebet a vije bet taolet nebeutotc'h a bled enni ouzh kudennoù Kembre. »

D'ar mare-se e voe krouet Plaid Cymru, Strollad Kembre. Diazezet e voe a-wel d' an holl e-pad Eistezvod Vroadel Pwllheli, e 1925, diwar unanidigezh tri strolladig hag a oa bet savet ergentaou e Bangor, Caernarfon ha Kêrdiz.

Eus ar skol-veur hag eus ar vengleuz.

E meur a vro, gounezet ganti abaoe he frankiz, eo er skolioù-meur eo bet ganet an emsav broadel. An dra-se ivez a zo c'hoarvezet e Kembre : e skolajoù-meur Bangor hag Aberystwyth e voe ganet daou eus an tri froud a yeas d' ober Strollad Kembre. E-touez mengleuzierien ha micherourien Arvon e tarzhas ar froud all.

Gwall-c'horrek e voe dihun ar spered broadel e Kembre goude brezel 1914-1918. « Ur brezel evit gwirioù ha frankiz ar broioù bihan » e oa bet hennezh, diouzh klevout abostolerien ar gouarnamant saoz. Ha d' ar mare-se ivez e oa bet meur a vro vihan o tihuniñ hag o c'hounit he frankiz : Tchec'hoslovakia, Finland, lod eus ar broioù skandinaviat ha, dreist-holl, Iwerzhon.

45

« M' o devez ar broioù all ar gwir d' en em ren o-un, perak n' he defe ket hor bro-ni ? » Setu ar pezh a zeuas kalz Kembreiz yaouank da soñjal.

An Tri G e Bangor.

E Bangor, e Skolaj ar Skol-Veur, e oa bet un nebeut broadelourien yaouank o sevel, diouzhtu goude ar brezel, strollad an Tri G (Y Gymdeithas Genedlaethol Gymreig - ar Gevredigezh Vroadel Gembreat). Studiañ kudennoù Kembre ha komz eus brezelioù broadel Iwerzhon hag ar pobloù bihan all a veze graet eno, gant dudi ; hag ivez tagañ Caradog Evans pa lavare, ar pezh a oa re wir d' an ampoent, « na oa ket en Europa ur boblad izeloc'h eget Kembreiz ». Ma ne oa ket a roll-labour politikel gant an Tri G, e oa koulskoude ganto ur menoz politikel broadel.

E-touez izili an Tri G e oa Lewis Valentine, Moses Gruffydd, R. Williams Parry, Tom Parry, Roger Hughes, John Gwilym Jones, Ceiriog Williams, John Lewellyn Hughes, O. M. Roberts ha R. E. Jones.

« Arme an Emrenerien Gembreat » en Arvon.

An eil froud a yeas d' ober Plaid Cymru a ziskennas eus kêriadennoù Arvon. Stag eo ouzh ano H. R. Jones, eus Deiniolen, hag an den-se an hini eo a zeuas da

vezañ kentañ sekretour ar strollad broadel. Mengleuzier e oa ; diwezhatoc'h, en abeg d' e yec'hed fall, ez eas da veajour-kenwerzh e kontelezhioù an hanternoz.

E miz Mae 1924 e reas H. R. Jones ur c'halvadenn da gaout, tud da emezelañ en Arme an Emrenerien Gembreat. Setu ar wech kentañ ma oa lakaet an emrenerzh da bal politikel d' ur stroilad kembreat ; ha n' eo ket hep abeg mat e oa bet dibabet an ano « arme » evit ar stroilad-se, un ano hag a feukas buan meur a hini.

Renner an Arme a oa Walter S. Jones ; an teñzorier Evan Alwyn Owen, ur marc'hadour yaouank ; ar sekretour H. R. Jones. Yaouank-flamm e varvas an tri-se gant an dorzhellegezh. E-barzh an emsav e oa c'hoazh Gwilym R. Jones, a zo bremañ pennskrivagner Y Faner ; D. Edmund Williams, breur Morris Williams, hag a zeuas da vezañ perc'henn Y Faner ; an Dr. Lloyd Owen.

Ar Strollad Broadel.

E miz Here 1924 e teuas Evan Alwyn Owen, ar paotr yaouank klañv eus Rhyddu, da soñjal e vije ret cheñch ano an Arme hag envel anezhañ Strollad Broadel Kembre. En e lizher da H. R. Jones, ouzhpenn kinnig kement-se, e tisplege petra e tlefe beze pal ha labour ar strollad broadel. Degemeret e voe kinnig Alwyn Owen ha savet Strollad Broadel Kembre.

46

A-benn neuze e oa unvanet emsavioù Bangor ha Caernarfon evit ober emsav an hanternoz : paotred an Tri G, echuet o studioù ganto hag aet da labourat amañ hag ahont, o doa lakaet o ano er Strollad Broadel. Lewis Valentine, neuze pastor e Llandudno, a oa bet anvet da renner ; an Dr. Lloyd Owen a voe dibabet da deñzorier hag H. R. Jones da sekretour.

Eus miz Here 1924 betek miz Eost 1925 e c'hounezas paotred Caernarfon brud hag izili. Buan e voe klevet ganto e oa ur strollad all o paouez bezañ savet er c'hreisteiz ha klask a rejont en em gavout gant an dud a oa e penn.

« Emaon o paouez dont en-dro eus ar c'hreisteiz, » a skrive Lewis Valentine da H. R. Jones d' an deiz kentañ a viz Mae 1925 ; « e-pad va beaj em eus gwelet lod eus mignoned Saunders Lewis, hag emaint o c'hortoz keloù pelloc'h diouzhomp. Me a gred e vezo pouezus-tre ar pezh a vo graet e Pwllheli ; rak goude-se e c'hellimp komz en ano ar bobl a-bezh. »

Emsav Kêrdiz.

E Kêrdiz e oa kreizenn an emsav er c'hreisteiz, hogen n' eo ket e Kêrdiz e oa bet savet an emsav da gentañ. En Aberystwyth e oa bet ganet, e Skolaj ar Skol-Veur : rak eno, e-pad brezel 1914-18, e oa bet krouet ar gelaouenn Y Wawr, dindan renerezh Griffith John Williams hag Ambrose Bebb, da studiañ kudennoù hag ezhommoù Kembre.

E 1923 e oa en em gavet Griffith John Williams gant ur paotr yaouank eus Liverpool, hag a labourer en unan eus levraouegoù Morgannwg, John Saunders Lewis e ano, hag a oa ivez ur broadelour. Kement-se a voe skrivet da Ambrose Bebb, hag a oa neuze o labourat e Pariz, hag e-pad ar vakañsoù en em gavas an tri asamblez e ti Griffith John Williams, e Penarth, e-kichen Kêrdiz. Eno, d' ar 7 a viz Genver 1924, e oa bet divizet sevel an Emsav Kembreat.

Pal an emsav a oa treiñ Kembre d' ur vro hollgembraek hag ober eus Kembre e dachenn-labour nemeti. Da lavarout eo e vefe politikel an emsav hag e klaskfe dreist-holl gounit ar c'huzulioù-kêr pe kontelezh. Renet e oa an emsav gant ur c'huzul, ha ret e oa touiñ bezañ feal d' ar c'huzul-se. Kuzh e chomfe an emsav keit ha na vefe ket dastumet arc'hant a-walc'h da reiñ lañs dezhañ.

Dibabet e voe Ambrose Bebb da renner ar Mudiad Gymreig ; Griffith John Williams da deñzorier ; ha Saunders Lewis da sekretour. Prestik goude e voe degemeret en emsav D. J. Williams, Ben Bowen Thomas hag ar Rev. Fred Jones. Ar merc'hed kentañ o reiñ o ano a voe Mrs. G. J. Williams ha Miss Mai Roberts.

An unanidigezh.

E derou 1925 e teuas an darempredoù etre emsav an hanternoz hag hini ar c'hreisteiz da vezañ startoc'h. Anvet e voe Ambrose Bebb da gelenner e Skol-Vistri Bangor ha pedet da emezelañ e Strollad Broadel Kembre. D' ar 25 a viz C'hwevrer e voe goulennet gant Saunders Lewis bezañ is-rener ar Strollad ; asantiñ a reas, war an diviz e vefe dibabet evit ar strollad palioù resis hag un doare sklaer da labourat ; asantet e voe gant ar Strollad d' e c'houlennoù ha neuze e voe divodet ar Mudiad Gymreig.

Prest e oa pep tra a-benn neuze evit embann an unanidigezh da geñver Eistevod Pwllheli, e miz Eost 1925.

Daoust m' am eus komzet eus tri froud en istor kentañ an emsav, e ranker soñjal ez eus bet ivez andonioù all. Bez ez eus bet tud vrudet evel ar Penngelenner Thomas Rees, eus Skol-Veur Bala-Bangor, an M. E. T. John, perc'henn labouradegoù-dir, hag ar c'helenner Miall Edwards, o skrivañ hag o prezegenniñ a-du gant an emrenerezh ; ivez ar Rev. Gwylfa Roberts ha re all. Tud evel John Arthur Price, an alvokad eus London, Dyfnallt ha Tywi Jones, o doa graet embann e-pad bloavezhioù da venoz ar frankiz broadel. Ken e c'helle Dyfnallt skrivañ gant gwir abeg, e-barzh Y Faner, e miz Mae 1925, na oa an emsav nevez « nemet frouezh an ugent bloavezh diwezhañ ».

Ar Strollad Broadel savet e Pwllheli.

E Pwllheli, en endervezh ar Merc'her 5 a viz Eost, e voe graet bodadeg an unanidigezh.

Ur vodadeg vihan ne voe ken, ha gwell a se. C'hwec'h den a oa enni, hervez an dihelloù : Lewis Valentine, Moses Gruffydd, Saunders Lewis, D. E. Williams, ar Rev. Fred Jones hag H. R. Jones.

Ne voe ket lakaet, er vodadeg-se, bannieloù da stlakal, ha ne voe ket graet prezegenoù bras ; ne reas an dud-se nemet ar pezh o doa divizet ober - en un doare eeun, sioul ha parfet. Hag an deiz-se a voe an deiz pouezusañ an istor Kembre abaoe amzer Owen Glyndwr.

Dibabet e voe renerien gentañ ar strollad : Lewis Valentine da rener ; Moses Gruffydd da deñzorier hag H. R. Jones da sekretour. Ur c'huzul labour a voe savet ; ouzhpenn an tri den e karg e oa er c'huzul Saunders Lewis, Fred Jones ha D. J. Williams.

Ar Skol Hañv.

« Divizet eo bet kaout ur Skol-Hañv e miz Eost 1926 » : setu petra zo skrivet e dihelloù ar vodadeg kentañ. Ar Skolioù-Hañv, dalc'het bep bloaz abaoe 1926 - nemet div wech e-pad ar brezel a viras ouzh ar Strollad a gouezhañ en daou riskl bras a zo d' ar strolladoù yaouank : ar riskl da zibab ur politikerezh trivliadel ha diboell hag ar riskl d' en em zisrannañ da heul ur bern tabutoù.

E bodadeg Pwllheli ne voe divizet nemet un dra all c'hoazh ez afe Lewis Valentine, Fred Jones ha D. J. Williams « d'ober ur brezegenn dirak an holl ; an deiz war-lerc'h, e chapel ar Vadezourien, e Pwllheli », hag e vefe Meuryn, pennskrivagner an Herald Gymraeg o ren. Graet e voe ar vodadeg. Un niver mat a dud a oa deut da selaou, dreist-holl tud desket, a lavaras un notenn en Herald. En ul lizher e skrivas Saunders Lewis diwezhatoc'h : « soñj hon eus pegen nebeut e oamp er vodadeg kentañ e Pwllheli ».

Un derou kalonek.

Un derou sioul, un derou bihan, a voe da Strollad Kembre. Ha gwell a se.

Aze e oa anat tro-spered an dud a grouas ar Strollad. Fellout a rae dezho diazezañ mat pep tra, zoken pa rankent mont goustad. Tud all o dije gallet taerañ ha gouestlañ ober traoù re vras, hag e vije marv o strollad a-benn nemeur amzer, evel ma oa c'hoarvezet dija e Kembre. Ur bennozh eo bet evidomp kaout tud pennkalet da sevel Plaid Cymru.

Goustad e kreskas ar strollad da gentañ. E dibenn 1930 n' en doa nemet 15 Skourr ha nebeutoc'h eget 500 ezel. Hogen derc'hel a reas da c'hounit tachenn a-hed ar bloavezhioù, ken ez eus bremañ tost da 11.000 ezel ennañ hag ouzhpenn 100.000 den a-du gantañ.

Ret eo soñjal koulskoude n' eo ket bet ken gorrek-se kresk ar strollad pa geñverier anezhañ gant kresk al Labour Party e Breizh-Veur pe kresk ar Brotestantiezh Dieub e Kembre. Re aes eo deomp, a zo o labourat, klemm emañ hir an deiz o tont. Ur c'hantved a zo bet ret da sujañ Kembre ; kantvedoù a zo bet ret da gas anezhi war vord he bez ; he adsevel a c'houlenno amzer.

Nerzh nevez ar strollad.

Ur seurt burzhud eo, e gwirionez, e vefe deut ar strollad-se, daoust da nerzh-kreizennañ ar strolladoù saoz, daoust d'ar c'helaouennoù ha d'ar radio saoz, d'en em ziazezañ ha da greskiñ. N' eus bet, e Bro-Saoz, er c'hantved-mañ strollad ebet gouest da ober kemend-all.

49

Aes a-walc'h - daoust pegen digar - e oa d' an Ao. D. Lloyd George lavarout e Bethesda, e-pad votadeg 1929 : « Bez ez eus ur strollad nevez er votadeg-mañ, Strollad Broadel Kembre, ur strollad a zo kresket e-pad an noz evel ma kresk ar c'hibilli-touseg, hag a yelo da get ken buan all. » Hag an holl a c'hoarzas. Met n' eo ket ar Strollad Broadel an hini eo a zo aet da get.

N' en doa ket merzet an den-se e oa un nerzh nevez er Blaid hag er remziad yaouank en doa savet anezhañ, un nerzh na oa ket bet gwelet he far er vro abaoe pell pell amzer. Rak n' eus ket a emsav a vefe bravoc'h bezañ ennañ ha labourat evitañ eget un emsav da zieubiñ ur vro ha da saveteiñ ur bobl.

* * *

UN NEBEUT DARVOUDOU POUZUS EN ISTOR PLAID CYMRU

1925, 5 a viz Eost : Savet eo Strollad Broadel Kembre gant c'hwec'h den bodet er Maes Gwyn, Pwllheli.

1926, Mezheven : Dont a ra er-maez niverenn gentañ kazetenn gembraek ar strollad Y Ddraig Goch. Ar rener a zo Ambrose Bebb. Pep miz eo bet embannet ar gazetenn abaoe.

1926, miz Eost : An Ysgol Haf kentañ e Machynlleth. Saunders Lewis a zo dibabet da rener ar Strollad. Chom a raio e penn betek 1939. Divizout a reer reiñ da H. R. Jones ur gopr-sekretour.

1926, miz Kerzu : Pañfled kentañ ar Strollad a zo embannet, « Uhelvennadoù ar vroadelouriezh », prezegenn Saunders Lewis e Skol-Hañv Machynlleth.

1927, miz Ebrel : Embann a reer e-barzh Y Ddraig Goch an hini gentañ eus studiadennoù arboellerezhel an Dr. D. J. Davies.

1929, miz Mae : Evit ar wech kentañ en istor Kembre ez eus tu broadelour kembreat oc'h en em ginnig er mouezhiadegoù evit ar Parlamant : Lewis Valentine, e kelc'h-votañ Arfon. 609 mouezh en deus. « Ar c'hwec'h kant den kadarn, » eme ar Rev. Fred Jones.

1930, Mezheven : Mary H. R. Jones. « Gant H. R. Jones eo bet diazezet Strollad

Broadel Kembre, » a skriv Saunders Lewis.

1930, miz Du : Dibab a reer J. E. Jones da sekretour ; 24 bloaz en deus.

1931, miz Here : Goude bloavezhioù a studi ez embanner palioù politikel ar strollad. « Aozet eo bet ur reolennadur evit Kembre... Goulenn a reomp ma vo Kembre un ezel dieub, emren ha kevatal e Kevredad ar Broioù Breizhveurek... »
50

1931, miz Here : Er mouezhiadegoù en deus J. E. Daniel 1.136 mouezh e Caernarfon ha Saunders Lewis 914 er Skol-Veur.

1932, miz Genver : Niverenn gentañ ar gazetenn (e saozneg) The Welsh Nationalist. Embannet eo bet pep miz abaoe.

1932, Gouel Sent Dewi : Da geñver Gouel Broadel Kembre ez a un nebeut paotred yaouank da deurel an Union Jack en traoñ diwar lein Tour an Erer e Kastell Caernarfon.

1932, miz Ebrel : Gounezet eo ar stourm evit ar radio. Rediet eo ar BBC da ober eus Kembre ur bastell-vro diouti hec'h-un, gant ur skinva dezhi hec'h-un. Gant Saunders Lewis eo bet renet ar stourm.

1932, miz Eost : Dibab a reer an demokratelezh kenobererel da ziazez evit politikerezh arboellerezhel ar Strollad.

1933, miz Ebrel ; an Triban a zo degemeret da arouez ar Strollad.

1934, miz C'hwevrer : Digeriñ a reer Kef Sant Dewi : bep bloaz, da geñver ar gouel broadel, e tastumer arc'hant evit kas en-dro labour ar Strollad e-pad ar bloaz. E 1934 e tastumer 250 lur sterling, e 1954 e tastumer 3.700 (da lavarout eo 3.700.000 lur gall).

1935, miz Kerzu : Votadeg e Caernarfon. Ar c'helenner J. E. Daniel en deus 2.534 mouezh.

1935-36 : Ar Saozon a fell dezho digeriñ ur Skol-vombezañ e Llyn ; ouzhpenn 100 bodadeg a ra ar Strollad er c'horn-bro lakaat a ra 10.600 den da sinañ e c'houlenn ; gounit a ra skoazell 600 kevredigezh.

1936, miz Gouere : Dilabour a zo e Kembre (30 % eus ar vicherourien dilabour). War ginnig Saunders Lewis e tibab kantadoù eus izili ar Strollad tremen hep debriñ o lein d' ar Yaou evit reiñ anezhañ d' ar vicherourien.

1936, 7 a viz Gwengolo : Saunders Lewis, Lewis Valentine ha D. J. Williams, skoazellet gant 4 den all na voent ket aotreet d' en em ziskleriañ, a beg an tan e kazarnoù ar Skol-vombezañ.

1936, miz Here : An tri broadelour a zo degaset dirak Lez-varn Caernarfon. Nac'h a ra ar jureed kondaoniñ anezho.

1936, miz Kerzu 7 : Kaset eo ar prosez dirak ul lez-varn e London.

1937, 19 a viz Genver : Barnet eo an tri broadelour da 9 miz toull-bac'h. Nac'het o doa anavezout gwir al Lez ha komz saozneg.

1937, 27 a viz Eost hag 11 a viz Gwengolo : Dieubet eo an tri broadelour eus karc'har Wormwood Scrubs, e London. Dont a ra 17.000 den da g-Caernarfon, d' ar gouel graet d' o degemer.

51

1938-39 : Dastum a ra ar Strollad 400.000 sinatur evit ma vo anavezet ar c'hembraeg evel eil yezh ofisiel ar vro. Ar brezel a lak fin d' al labour. Trubardet eo ar sinerien gant an deputeed kembreat.

1939, miz Eost : Da heul dilez Saunders Lewis e tibaber ar c'helenner J. E.

Daniel da rener ar Strollad.

1939 : Stourm a ra ar Strollad a-enep ar servij-soudard. 1939 : Goulenn a ra ar Strollad ma chomo Kembre nep-tu er brezel. Sevel a ra Undeb Cymru Fydd.

1941, miz Genver : Evit ar wech kentañ ez a ur paotr yaouank eus ar Strollad d' an toull-bac'h evit bezañ nac'het mont da soudard : Gwyn Jones eo anv ar paotr. Meur a hini all a vo toullbac'het goude-se.

1943 : Votadeg er Skol-Veur : Saunders Lewis en deus 1.330 mouezh.

1943, miz Eost : Abi Williams a zo dibabet da rener ar Strollad.

1945, Mae ha Mezheven : Votadegoù. J. E. Daniel en deus 6.844 mouezh en Arfon ha Wynne Samuel 6.290 e Castell Nedd.

1945, miz Gouere : Ar Strollad a ginnig c'hwec'h den er mouezhiadegoù bras. Gounit a reont 13.638 mouezh, 24,5 % eus ar mouezhioù er Skol-Veur ha 6,5 % er c'helc'hioù-votañ all.

1945, miz Eost : Gwynfor Evans a zo dibabet da rener ; 32 vloaz en deus.

1946, Mezheven ha Kerzu : Votadegoù en Ogwr hag en Aberdir. Trefor Morgan en deus 5.685 mouezh ha Wynne Samuel 7.090.

1946, miz Here : Evit ar wech kentañ e ouestler da Gembre un devezh-labour a-bezh e Ti ar C'humunoù.

1947, miz Ebrel : Ar servij-soudard en amzer a beoc'h : 20 depute kembreat o deus votet a-enep, 12 a-du.

1947-1950 : Brezel evit difenn douar Kembre a-enep ar Gouarnamant saoz (kemer a reer mereurioù a-bezh d'ober kampoù-soudarded, da blantañ gwez, h.a.).

1949 : Mouezhiadeg evit ar c'huzulioù-kêr ; 14 ezel eus ar Strollad a zo anvet.

1949, miz Here : Rali bras e Machynlleth da c'houlenn ur Parlamant evit Kembre.

1950, miz C'hewrer: ar Strollad a ginnig 7 den et mouezhiadegoù ; 17.580 mouezh, 6,15 % eus ar voterien.

1950, miz Ebrel : Goulenn a ra ar Strollad m' he devo Kembre ur renerezh distag evit he skingomz.

52

1950, miz Gwengolo : Rali e Rhandirmwyn evit difenn douar Kembre.

1951, miz Mae : Rali e Llanbryn Mair evit difenn ar sevenadur hag an douar.

1951, 30 a viz Eost, 29 a viz Gwengolo : Kantadoù eus izili ar Strollad a ya da azezañ war an hent dirak kamp-soudarded Trawsfynydd evit mirout ouzh an arme d' ober he labour.

1951, miz Here : Er votadegoù-mañ, ne stourm ket ar strollad a-enep an deputeed hag a zo a-du gant an emrenerezh. Ne ginnig nemet 4 den e kelc'hioù diaes : 10.920 mouezh, 5,86 % eus ar voterien.

1952, miz Ebrel ha miz Mae : 100 ezel eus ar Strollad a zo anvet e kuzulioù-kêr, ha 15 e kuzulioù-meur.

1952, miz Gwengolo : Rali « Ar Bobl hag ar Yezh » e Pencader.

1952, miz Here : Gounit brezel an douar e Llyn, a-enep Sekretourva ar Brezel.

1953, miz Eost : Goulennadeg « Ur Parlamant evit Kembre ».

1953, miz Gwengolo : Rali e Kêrdiz da c'houlenn ur Parlamant.

1954, miz Eost : Diskleriañ a reer er Skol-Hañv ez eus bremañ 10.000 den e-barzh ar Strollad.

1954, miz Gwengolo : Rali e Cil Meri.

1954, miz Here : Votadeg en Aberdâr, Gwinfor Evans en deus 5.671 mouezh.

1955, miz Meurzh : Votadeg e Wreksam, D. Elystan Morgan en deus 4.572 mouezh.

1955, Ebrel ha Mae : Ar Strollad a c'hounez 34 gador er c'huzulioù-kontelezh.

1955, miz Ebrel : Chris Rees a zo kondaonet da 12 miz toull-bac'h evit bezañ nac'het mont en arme saoz.

1955, miz Mae : Votadegoù bras. Plaid Cymru a ginnig tud en 11 kelc'h-votañ. Ouzhpenn 45.000 mouezh. 13,6 % eus ar mouezhioù e-lec'h ma oa bet broadelourien oc'h en em ginnig dija, 7,8 % er c'helc'hioù all.

1955, miz Gouere : Embann a reer 100vet pañfled ar Strollad. 500.000 a zo bet gwerzhet en holl.

1955, miz Eost : Plaid Cymru a lid e dregontvet deiz-ha-bloaz.

Istor lennegezh vrezhonek an amzer-vremañ

gant ABEOZEN

(Kendalc'h)

78) Evit kement a sell ouzh rannyezh Gwened ez eo eeun-tre studi lennegezh Vreizh betek diwezh an naontekvet kantved. Pa vo bet meneget anvioù GUYOT-JOMARD, oberour ur « Manuel breton-français », e 1867, ennañ daou bennad e brezhoneg, moarvat diwar e bluenn, ha NIKOLAZ, a barrez Mendon, oberour ul levr a zevosion troet diwar ar galleg, an holl skrivagnerien all a zo beleien. Levrioù a zevosion, peurlviziañ anezho troidigezhioù diwar ar galleg, ha kantikoù niverus, e-touesk ar re-mañ bleunioù ar varzhoniezh relijiel, setu dre vras lennegezh rannyezh Gwened. Komzet hon eus endeo, e pempvet pennad al lodenn gentañ, a-zivout an Aotrounez GWILHOM ha JOUBIOUZ. E c'hellomp bremañ lavarout ar pep retañ diwar-benn un nebeud re all.

79) An Aotrou Iehann MARION a voe ganet en Aradon, e 1759. Anvet e voe da berson en Heudig e 1789. Menel a eure en enezenn e-pad amzer an Dispac'h. Kenderc'hel a rae, daoust ma ranke chom kuzhet alies, da sevel levrioù a zevosion a veze moulet didrouz-kaer e ti Galles, e Gwened. Reiñ a reas an Aotrou MARION e zilez e 1820 hag e varvas en Aradon e 1824.

A-dre e droidigezh niverus e c'heller menegiñ *Magasin Spirituel er Beurerion*, diwar c'halleg en Itron DE BEAUMONT ; *Histoëriou ag en eu Testamand*, anezho un diverra eus La Bible de Royaumont ; *En Or ag er Vuhé Devot*, diwar Sant Frañsez de SALES ; hag e oberenn vrudetañ, *Voyage Misterius de Inis er Vertu*, troet ivez diwar ar galleg. E vrezhoneg, evit kement a sell ouzh ar geriadur, a zo dezhañ an hevelep si fall hag hon eus kavet da vrezhoneg an dud a iliz en diavaez eus Gwened : kousiet eo gant ur bern gerioù gallek hep ezhomm anezho. Setu perak an Aotrou Chaloni PRIELLEG, p' en deus e 1925, kempennet evit ti Galles, un advouladur eus *Inis er Vertu*, en deus kaset da benn war ar skrid ul labour par d' an hini erbedet gant an Aotrou Yann-Wilhou HERRI en e raok. C'hwennet en deus dioutañ ar gerioù gallek ha lakaet en o lec'h gerioù brezhonek-rik, implijet gant an holl. Rak en diavaez eus ar gerioù ur brezhoneg yac'h hag aes a zeu dindan pluenn an Aotrou MARION.

54

80) An Aotrou Matelin SANSON a zo c'hoazh unan eus ar veleien gredus a renas buhez diaes ha risklus amzer an Dispac'h. Ganet war-dro 1736 e Gregam, e teuas da berson e Meukon e 1779. Chom a reas en e barrez, gwisket evel ur mevel, e-pad an Dispac'h. Mervel a reas d'an 20 a viz Gwengolo 1811.

Un den donezonet-kaer e oa an Aotrou SANSON. Skulter, labourer-douar, sonour, barzh, ul levezon badus en deus bet war e barrez. Kempennet en deus un *Drajedenn ar Basion* ne deo bet embannet nemet goude e varv. Lakaat a rae moulañ war follennoù distag kantikoù savet gantañ pe droet diwar ar galleg, hag ar c'hantikou-se a zo aet d' ober an daou zastumad, anavezet dindan an anv, *Kantikoù Meukon*.

81) An Aotrou Pier NOURI a voe ganet e Lozac'h e 1743. Person oa e Begnen abaoe 1770, pa rankas mont war dec'h da Vro-Spagn, e miz Here 1792. Goude an Emglev etre ar Stad hag an Iliz e tistroas d' e barrez, d' an 21 a viz Kerzu 1801. Anvet da berson en Iliz-Veur, e varvas e 1804.

Gant an Aotrou NOURI eo ez eo bet savet gwerz *Ar Beleg Forbannet*, a gaver e Barzaz Breiz, p. 367. Un doare all eus an hevelep gwerz a gaver e *Choes a Ganenneu*, Galles, Gwened, 1835, p. 210-212, moulet diwar un dornskrid moarvat ha nann dastumet e-touesk ar bobl, evel hini Barzaz-Breiz.

Dornskridoù a zo chomet war-lerc'h an Aotrou NOURI, daou gaiserad *Sarmonioù ; An Testamant Koz hag an Testamant Nevez ;* un drajedienn diwar an italianeg, Isaac. E levr, *Science er Salvedigueah* a zo bet moulet e 1821. E-touesk ar c'hanennoù kaer savet gantañ e c'heller menegiñ, ouzhpenn an hini hon eus lavaret uheloc'h, *Peh trous zou ar en douar*, evit amzer Nedeleg, hag *O na huret en noz*, a oa c'hoazh e dastumad an Tad ARBOULED.

82) An Aotrou BELEG a voe ganet e Pluniav d' ar 26 a viz Mezheven 1799. Kure en e barrez c'henidik e 1823, e teuas da berson e Kerfourn e 1838 hag e tistroas da Bluniav e 1846. Chaloni a enor e 1874, e roas e zilez e miz Du 1877. Marvet eo d' an 30 a viz Mae 1878.

55

Brokus e-keñver ar beorien, e tispignas e holl zanvez, a oa bras koulskoude evit an ampoent, en aluzennoù hag e profoù da skol ar merc'hed en e barrez.

Eñ eo a lakaas e gwenedeg ar c'hentañ Mis Mari, diwar c'halleg an Ao. DE BUSSY. An hevelep patrom a zo bet d' an Aotrou Gwilhom al LEZ da sevel e brezhoneg Leon, e 1836, *Mis Mae, Mis ar Verc'hes Vari*, e ti Lefournier, e Brest. Troet en deus ivez an Aotrou BELEG, e 1845, *Guirioneeu ag er relijion ha deverieu ur hrechen*, diwar c'halleg an Tad HUMBERT.

Yac'h kenañ ha spis eo brezhoneg an Aotrou BELEG ha plijout a rae kalz da Hersart KERVARKER.

83) An Tad ARBOULED a voe ganet e Pleheneg e 1805. Beleget e 1835, e voe anvet da gure en Enez Arzh. Mont a eure da di ar Jezuisted e 1840. Marvet eo d'ar 26 a viz Genver 1892, d' e 86 vloaz.

Ne oa ket hepken anezhañ ur prezeger dispar, hogen ivez ur barzh donezonet-kaer. En dastumad kantikoù, embannet gantañ e 1856, *Guerzenneu eid ol er blai*, ar re wellañ anezho, un 31 bennak, a zo diwar e zorn.

84) An Aotrou Iehann-Vatelin KADIG a voe ganet e Kerfourn e 1843. Bet eo kure e Baden, e Plouharnel hag en Alre. Stagañ a reas da zastum kanaouennoù-pobl ha, dizale, da sevel e-unan gwerzennoù diwar-benn al labour-douar. Anvet e voe da berson e Bieuzhi e 1892. Lakaat a eure sevel en e barrez ur c'hloc'hdi ha div skol. E-pad brezel 1914-18, e chomas e-unan d' ober war-dro e barrezioniz ha marvet eo e 1917, diwar re-labour.

Savet en deus un drajedienn *Sant Bihui*, chomet hep bezañ moulet. Ur barzhoneg hir, *An Est*, embannet da gentañ er « *Revue de Bretagne* », a zo bet moulet da c'houde e ti Lafolye, e Gwened. Soñj an Aotrou KADIG a oa klokaat *Livr el Labourer* an Aotrou GWILHOM. Pep unan eus lodennoù e varzhoneg a bled gant ar Foenn, ar Sistr, ar Gwinizh, ar C'hanab, an Avaloù-douar. Er pevare mouladur, kempennet gant DIHUNAMB, e 1927, ez eus ur c'hwec'hvet lodenn, ar *Gwinizh Du* hag ur barzhoneg distag, er *Sauzoned*. Ne deo ket par e werzennoù da re *Livr el Labourer*, na ken start e bluenn hag hini an Aotrou GWILHOM. Taolennet mat-kenañ ez eo koulskoude al labourioù war-dro an eost.

85) Ur breur de Iehann-Vatelin KADIG, Frañsez KADIG a embannas kanaouennoù-pobl en e gannadig « *La Paroisse Bretonne* », e Pariz, abaoe 1899. Dastumet en deus ivez kalz a gontadennoù-pobl hag o embann en deus graet, e galleg hepken, siwazh e meur a levrenn, 6 pe 7 anezho ; an hini ziwezhañ, « *Contes sur Douze Métiers* », a zo o paouez dont er-maez e 1943, e Paris, « *Librairie Celtique* ».

56

86) An Aotrou Iehann-Vari MARY a voe ganet e Kergouillard, e parrez

Karnag, d' ar 25 a viz Ebrel 1858. Ur wech beleget, e reas, ur pennad, skol d' ar baotred en Alre. Kaset e voe da Reims, gant ur strolladig beleien yaouank all, d' ur skolaj bras, da gemer lec'h ar Jezuisted, skarzhet kuit gant lezennoù Combes. Dont a rankas en dro da Vro-Wened, en abeg d' e yec'hed. Kure e voe e-pad tri bloaz en Ardeven ha da c'houde e Plunered, ma chomas betek e varv e 1902, d' ar 26 a viz Ebrel. Savet en deus ur barzhoneg hir, e peder lodenn, *Foér Vériadeg*. E werzennoù a zo aes da lenn ha skeudenniñ a reont en un doare bevkenañ unan eus foarioù brudetañ Bro-wened. Un eil mouladur eus e oberenn a zo bet kempennet gant DIHUNAMB e 1932, kinklet gant engravadurioù war goad diwar zorn A. MARZIN.

87) An Aotrou MAE a voe ganet e Gwiskriv d' an 22 a viz Here 1852. Beleget e 1876, e voe kure er Faoued hag e Pondivi. Anvet e voe da berson Sant-Inan-Klegereg, e 1899. Marvet eo eno e 1916.

« Ganet e Kerne-Uhel, war harzoù Bro-Wened, **Meliaf**, evel ma sine e bennadoù, en deus graet e vad eus perzhioù dreist an div eilvezh-se, » a lavar deomp Fraisez VALLEE.

E rannyezh Gwened en deus savet un dornad mat a gantikoù hag, e komz-plaen, *Buhé Santel en Etru Charles Gouandour*, e 1909.

E oberoù e rannyezh Kerne a zo niverusoc'h. Kavout a reer daou bezh barzhoniezh gantañ e Bleunioù Breiz-Izel, Plihon, Roazhon, 1902 : *Lilienn* ha *Pardon Santez Barban*. E KROAZ ar VRETONEZ en deus embannet pezhioù all : *D' an Alc'houeder*, 18-5-1902 ; *Lutun Pontouar*, 24-4-1904 ; *Son ar Gevier*, 20-3-1910. Ur pezh-c'hoari e gwerzennoù, *Bue ha Merzerinti Santez Barbon*, a zo bet moulet e ti Sant-Gwilherm, e Sant-Brieg, e 1904. Pezhioù-c'hoari all, e komz-plaen a zo c'hoazh diwar e bluenn : *Jili Breiz*, Sant-Brieg, 1910 ; *Sant Moris* ha *Buhez Santez Barbon*.

An Aotrou Pièr er GO, e « *Petite Histoire Littéraire du Dialecte Breton de Vannes* », ; p. 44, a ra meneg eus barzhonegoù all gant MELIAF : *Kleier va Farrez* ; *Fantig* ; *Buez Barzonius Sant Herve* ; *Barzaz Bleunioù Brug* ; *Distro Jezuz* ; *Distro Marzin ouz Doue* hag all. En HERMINIG e kaver un dornad mat anezho.

57

88) An Aotrou Frañsez-Vari FALKERHEU, ganet e Kervignag e 1854, a voe beleget e 1873, Person e Pleren e 1902, ez eo marvet d' ar 6 a viz Meurzh 1917.

Hervez an Aotrou Pièr er GO, ez eo unan eus gwellañ barzhed Bro-Wened. « En e oberoù, emezañ, koulz eo an danvez hag ar stumm disi. » Savet en deus dreist-holl kantikoù. E oberenn, *Gouil er ré tremenet*, a stagas gant ar skrivadur degemeret gant skrivagnerien Bro-Wened, dindan levezon an Aotrou JEGOUZEU, e 1893. Menegomp kantikoù : *Intron Varia Kelùen, Mari Guerhiéz Santel* hag all hag ivez barzhonegoù : *E Groé*, « *Croix de Groix* », 1895 ; *Jobig*, er « *Revue Morbihannaise* » ; *Er Gomunion devehan* ; Mem Bro, « *Croix de Groix* ». E DIHUNAMB, e anv-pluenn a oa *Fañch Bobelan*.

89) An Aotrou LAMOUR, ganet e Logunec'h e 1841, marvet e 1927, a zo bet person e Moustervenn. Savet en deus un niver mat a gantikoù hag ivez un dastumad pezhioù fentus, *Bim-Bim, Mizér ha guerzenneu deverrus aral*. Ar pevare mouladur gant DIHUNAMB a zo eus 1907.

90) An Aotrou Jerom BULEON, ganet e Pluergad, e 1854, a zo bet person an Iliz-Veur e Gwened. Savet en deus, e 1896, un *Histoér Santel* a zo bet troet abaoe e galleg, en eskuara, yezh ar Vasked, hag e rannyezhoù Treger ha Kerne. Embannet en deus ivez kontadennoù e DIHUNAMB. E anv-pluenn a oa Teriliz. E brezegenn gaer e Bleun-Brug Keranna, e 1926, a zo bet embannet gant Emglev Sant Iltud. Marvet eo an Ao. Jerom BULEON e 1934.

91) An Tad BELEG, ganet e Melran e 1860 ha marvet e 1932, en deus graet ur c'hempenn da *Livr Kañenneu eit er Misioneu*, e 1902, hogen e labour pennañ a zo bet *Imitasion Jezus-Krist*, Normand, Hennebont, 1905. Kalz gwelloc'h eo labour an Tad BELEG eget an troidigezhioù graet en e raok eus an hevelep levr. An Aotrou JEGOUZEU (1837-1908) Vikel-Vras, tad skrivadur bremañ ar gwenedeg, en deus evezhiet pizh ouzh amrouennoù al levr-se, daoust dezhañ da vezañ bet rediet d' an ampoent da reiñ e zilez diwar gleñved evit mont da vevañ e Kermaria.

92) An Aotrou Jelvest SEVENEU a voe ganet e Mourieg e 1864. Marvet eo e 1925. Bet eo kelenner e Skolaj Sant-Frañsez-Zavier e Gwened, betek ma klaskas mont da visioner. Re fall ez oa deut e yec'hed da vezañ, avat, ha n' hellas ket chom e Kloerdi ar Misionoù e Pariz, « Rue du Bac ». Distreiñ e rankas da Wened ha dont da gelenner adarre. An amzer vak a leze gantañ e vicher a implijas o sevel levrioù a zevosion, en ur brezhoneg eeun ha yac'h, hogen un tammig laosk. 58

C'hwec'h oberenn war-nugent diwar e zorn a zo meneget e levrig an Aotrou Pièr er GO, « *Petite Histoire Littéraire du Dialecte de Vannes* », p. 55. Menegomp en o zouesk, *Histoér er perhinded a Santéz Anna*, 1907 ; *Miz Mari er Vretoned*, 1911 ; *Histoér er Vretoned*, 1913 ; *Er Salett ha Pontmain*, 1916 ; *En Nor ag er vuhé devot*, 1917 ; *Histoér Inron Varia Kelùen*, 1921.

93) An Aotrou Kristof JEZEGOU a zo ganet e Gwineventer d'an 19 a viz Mae 1864. Bet eo kure e Kastellin en amzer ma oa an Aotrou Yann KERE person eno. Eñ eo a embannas rimadelloù hemañ, en o zouesk moarvat pezhioù ne dint ket bet savet gantañ daoust dezhañ da vezañ o adskrivet, el levr en deus da anv *Kanaouennoù Kerne*, hag ivez daou zastumad eus sarmonioù e berson.

Dedennet gant istor e barrez ez embannas da gantañ e galleg « *Histoire de Châteaulin* ». Ne zaleas ket, avat, da skeiñ war du ar brezhoneg.

Un abeg a vadobererezh a zo bet d' e skridoù lennegezh, ken evit *Kontadennou*, moulet e ti Paillart, Abbeville, 1909, ken evit *E Korn An Oaled*, Straed ar C'hastell, Brest, 1923. An dastumad marvailhoù-mañ a zo bet savet evit harpañ parrez yaouank Leskonil, nevez distaget diouzh Pornaleg, m' eo person enni an Aotrou JEZEGOU abaoe 1907. Menegiñ a c'heller c'hoazh gantañ *Marvailhou an Tonton Koz*, pezhioù-c'hoari, *Ar Barver tenner dent*, *Ar C'hoari Kartoù*, *Mezarnou* hag ul levr istor, *Hor bro e-pad ar Revolusion*.

Savet en deus a-hend-all levrioù a zevosion : *Buhez Santez Tereza ar Mabig Jezus*, Brest 1924, ha lod all hep anv oberour evel *Kelennadurez diwar-benn ar Sakramanchou*, l. I ha II, Moulerez Arvor, Gwengamp, 1935 ; *Levr ar Priejou*, « *Courrier* », Brest, 1936. Eñ eo ivez en deus savet *Miz Mari Itron Varia Pontmean*, « *Courrier* », Brest, 1934. Prezeger helavar evel e berson e Kastellin, an Aotrou Kristof JEZEGOU en deus embannet *Prezegennou diwar-benn ar Binijenn hag ar Briedelez*.

94) An Aotrou Yann UGEN a voe ganet e Gwiseni d' ar 14 a viz Kerzu 1868. Skoliet eo bet e skolaj Lesneven. Beleget e Kemper e 1893, e teuas evel kelenner e Lesneven e-pad 10 vloaz. Pevar bloaz all ez eo bet kelenner e skolaj Sant-Eozen Kemper, kent bezañ anvet e miz Here 1907 da rener Kloerdi Bihan an eskopti, deut da chom e Likez Kemper. E 1919 e tistroas gant e Gloerdi da Bont-e-Kroaz. Person eo bet diwezhatoc'h e Plougastell-Daoulaz. Rediet gant e yec'hed da reiñ e zilez a-benn 9 vloaz, ne vevas ket pell e Kerodren-Lambazelleg. D' an 13 a viz Genver 1938 ez eo bet kaset d' ar bez. 59

Levrioù a zevosion hepken en deus savet an Aotrou Yann UGEN. Menegiñ a c'hellomp *Buhez Janed Ark*, *Buhez an Tad Maner*, *Buhez Mikael an Nobletz* ; *Buhez Viktoria Konan a Zant Luk*, Brest 1926 ; *Heuliomp Jezus-Krist* ; *Aviel ar Zul*, Brest, 1937 ; *Leor Neves an Oferen hag ar Gousperou*, ar Goaziou, Kemper, 1922 ; *Buhez H. S. Jezus-Krist*, Kemper hag an Oriant, 1930. Ar c'hentelioù da heul

pennadoù al levr-mañ a zo bet savet gant an Tad Eujen, misioner kapusin.

Liv Bro-Leon a zo betek re gant brezhoneg an Aotrou Yann UGEN, hogen yac'h eo ha digemmesk. E-touesk aketusañ kenlabourerien FEIZ ha BREIZ ez eo bet ha diniver ar pennadoù a gaver er gelaouenn gant e sinadur J. U. Skol vrezhoneg a rae er C'hloerdi Bihan d' an danvezioù-beleien n' ouient grik eus o yezh. Setu moarvat holl ar pezh en doa aotre d' ober war an dachenn-se hag, hep mar, en dije karet dont ivez war-dro ar re all, ar vrezhonegerien a-vihanik dizesk-krenn daoust da se war o yezh, e-keit ha ma pleustrent dibaouez war hini Vergilios ha Sophoklès.

II. - AR SARMONERIEN

An Aotrou Pièr er GO a lavar, p. 25 eus, e *Istor Bihan al Lennegezh e Rannyezh Gwened*:

« N' hellomp ket mirout a dennañ an evezh war un dra : klevet e vez alies en hor bro sarmonioù kaer, n' o lenner, avat, koulz lavarout morse. »

Neb en deus bevet e bro ar vrezhonegerien n' hell ket chom hep ober stad eus al levezon bouezus a zo bet hini beleien a voe, brudet dre o helavarded en un eskopti a-bezh. Da goulz ar misionoù a lakaet da virviñ, e-pad sizhunioù penna-da-benn, speredoù tud ar maezioù, ar bourc'hioù hag ar c'hêrioù bihan, e tere de an holl, gant esmae, spont ha dudi, da sarmonioù ar prezeger-mañ-prezeger brudet, a ouie, ur mailh evel m' edo war e vrezhoneg, lakaat e selaonerien da drefuiñ gant ur spont diroll, pa zisplege deoc'h, war an ton bras, tourmantoù euzhus an Ifern, pe da ziroll da c'hoarzhin, pa gonte deoc'h, en un doare birvidik-dreist, an troioù kamm c'hoariet da Baol Gorniek gant ar sant-mañ-sant. 60

Ne soñje ar brezegegerien-se nemet e mad an eneoù. Kement-se a oa o labour a veleien. O sarmonioù, avat, a zo bet, e gwirionez, evit ul lod, lennegezh dre c'henou ur bobl na zesker ket dezhi lenn he yezh. Lakaomp e vefent embannet, ar pajennadoù-se a rafe diouer dezho ar pezh a oa o ferzh gwellañ : feiz ha gred ar prezeger, buhezekaet c'hoazh gant un doare-distagañ trajediennel ha poblet. Hogen, en ur seveniñ o c'hefridi a relijion, prezegerien veur Breizh-Izel o deus, war un dro, labouret evit brasañ mad ar brezhoneg.

Hep klask o niveriñ holl, e c'hellomp amañ lavarout ur gerig bennak a-zivout lod eus ar sarmonerien vrudetañ.

Komz a reomp e lec'h all diwar-benn an Aotrou NOURI, person Begnen. E-touesk an dornskridoù manet a-ziwar e lerc'h e virer e Levraoueg Kermaria, e Bro-Wened, kaieradoù sarmonioù savet gantañ.

Komzet hon eus ivez (sell. 62) eus an Ao. Yann-Vari al LAE. Hervez « Bulletin Diocésain » Kemper, 1825, ez oa person Perroz-Gireg ur prezeger dispar peogwir ez oa lesanvet *Teod Aour*.

95) An Aotrou Frañsez-Mari KLEC'H, eñ, a zo eus hanternoz ar vro. Ganet e voe e parrez Sant-Melen Montroulez d' an eil a viz Genver 1788. E dad a oa noter-roue. Er C'hloerdi Bras e voe ar mab kloareg mignon d' an Aotrou GRAVERAN, an hini a zeuio diwezhatoc'h da vezañ eskob Kemper hag a zo bet lesanvet an « eskob gwenn ». Beleget e 1812, e voe an Aotrou KLEC'H kure e Kemperle. Ur prezeger helavar a oa anezhañ hag e sarmon kentañ er barrez a lakaas sebezet ar speredoù. Kaset e voe da c'houde da Sant-Vaze Kemper, da Blouigneo, da Lanmeur. Lakaet e voe da berson e Plougasnou e 1842. Reiñ a eure e zilez e 1847, evit mont da Gastell, da di Sant-Jozef, ti ar veleien kozh. Mont a ra kuit ac'hane, avat, ha ne zeuio en dro nemet e 1870. Mervel a reas eno d' ar 7 a viz C'hwevrer 1872, d' e 84 bloaz.

E Plougasnou e raed anezhañ *Klec'h Bihan* ha brud en doa da vezañ sorser,

moarvat dre m' oa anezhañ un orin a zen. Skrivet en deus en « Echo de Morlaix » dindan an anv-pluenn « Le Glaneur Celtomane ». Ur c'hwec'h kanaouenn bennak gantañ a zo bet moulet war follennoù distag e ti Guilmer, Montroulez, E *Bleuniou Breiz*, 1862 ha 1888, e kaver un darn, 620 gwerzenn anezhi, eus ur varzhoneg hir, *Emgann Alre*, m' emañ an dornskrid en e bezh e kerz JAFFRENNOU-Taldir.

96) An Aotrou DIOT a zo ur Gwenedour. Ganet e Karnag e 1797, e voe desavet e ti e eontr a-berzh-tad, an Aotrou GO, person Bieuzhi. Beleget e 1821, e voe kure e parrez e eontr e-pad c'hwec'h vloaz, person e Lokmalo etre 1827-1829 ha da c'houde en Izenac'h betek dibenn e vuhez, e 1862.

60

Bez' en doa holl berzhioù ar sarmoner-dreist, neuz, kalon, mouezh ha jestroù. « Eus an holl sarmonerien am eus selaouet, eme an Aotrou JOUBIOUZ, eñ eo a oa an helavarañ... Sarmoner a oa, skrivagner nann. » Niverus e skridoù koulskoude, nemet troet holl koulz lavarout, diwar ar galleg, ha troet ger evit ger, en un doare ponner ha luziet. Menegiñ a c'heller *Livric dourne ar rosaer bihue*, e 1836 ; *Perhinded devot Santès Anna*, 1842 ; *Alhué er Baraouis*, 1845 ; *Mis caer Mari*, 1851. E-pad ugent vloaz e voe anezhañ troer pennañ **Brediah er Fé**. Pevar eus e sarmonioù a zo bet moulet war gelaouenn Trivet Urzh Sant-Fransez, e 1895, 1896, 1907.

97) An Tad ARBOULED (1805-1892) a zo chomet brudet dre helavarded dudius e sarmonioù. Ne gredomp ket e ve bet moulet hini anezho.

98) An Aotrou Olier DREANEU, ganet e Begnen d' an 11 a viz Mae 1814, a voe beleget e 1838. Kure e voe lerc'h-ouzh-lerc'h e Gwidel hag en Iliz-Veur ha person e Moreag eus 1855 da 1865 ha, goude ur bloavezhiaed e Roma, person e Kistinig betek dibenn e vuhez e 1869.

Brudet dispar e oa evel prezeget. Savet en deus a-hend-all ul levr *Officeu*, e 1850, ha *Catechim historik an Abad Fleuri*.

99) Gant an Aotrou LEZELEUG e teuomp da Vro-Leon. Meneg a reomp e lec'h all eus e lod e krouidigezh FEIZ ha BREIZ kozh, e 1865. N' en deus ket lezet a skridoù, a gredomp, hogen lod eus e brezegenoù a zo chomet brudet. D' ar 25 a viz Genver 1868, da skouer, e reas ur brezegenn diwar-benn an Ao. Urban KELEN, lazhet e Roma o tifenn gwirioù ar Pab. D' ar 4 a viz Mae 1871, da zeiz ur pirc'hirinaj en Itron Varia Gerdevod, e reas ur sarmon all dispar.

100) An Aotrou KERE en deus bet an eurvad da gaout da gure e Kastellin an Aotrou JEZEGOU. Hemañ en deus embannet sarmonioù e berson e ti Kaigre, e Brest, war-dro 1906.

101) An Tad MIKAEL a oa ur breur d' an Aotrou Yann-Vari MARY, oberour *Foér Veriadeg*. Ganet e voe Juluan-Vari MARY e Karnag, e 1849. Beleget e 1872, e voe kure en Alre a-raok mont da di an Tadoù Kapusined er Mans. Marvet eo e Plunered e 1909.

62

Daoust m' en deus prezeget misionoù ha retredoù dibaouez dre Vro-Wened a-bezh, an Tad MIKAEL en deus kavet an tu da sevel levrioù niverus e brezhoneg.

E 1884, en deus embannet *Mis Calon Sacret Jesus*. Ne deo ket al levr-se un droidigezh evel ar seurt labourioù peurvuiañ, hogen un oberenn diwar e zorn e-unan, boulc'het adal an amzer m' edo kure en Alre. Lakaet en deus ivez e brezhoneg ar *Fioretti*, ma oa bet ar pevarzek pennad kentañ anezho troet gant an Aotrou JOUBIOUZ e **Brediah er Fé**, e 1848-1849. Savet en deus a-hend-all skridoù evit an *Trivet Urzh*, kantikoù ha Buhezioù Sent niverus.

102) An Aotrou Yann-Vari GWAZDOUE a voe ganet e Rospez, d' ar 15 a viz Genver 1871. Kelenner e voe war ar sonerezh e Landreger a-raok bezañ beleget e 1897. Kure e voe e Gwengamp e 1900, person e Koadou e 1910, e Logivi e 1915, chaloni a enor eus Roazhon e 1918, person Plistin e 1930, chaloni a enor eus Sant-Brieg e 1937. Marvet eo d' an 19 a viz Meurzh 1939.

Embannet en deus un dastumad *Kanaouenno en iez Treger*, e 1909, e ti-moulerez Sant-Gwilherm, Sant-Brieg.

E sarmonioù a zo dezho ar brud da vezañ mestr-oberennoù war an dachenn-se hag enor ar yezh vrezhonek. N' ouzomp ket hag embannet int bet.

103) Hervez FEIZ ha BREIZ Mezheven 1922, p. 166, an Aotrou J. FAVE, ganet e Plouzeniel d' an 31 a viz Mae 1828 ha marvet person e Plougernev d' an 11 a viz Ebrel 1905, a zo dellezek ma ve graet anezhañ « prezeger bras an naontekvet kantved ».

104) Un all a rankomp c'hoazh menegiñ, an Aotrou Frañsez-Mari MADEG an hini eo. Soñj hon eus dalc'het eus ur brezegenn gaer graet gantañ da zigeriñ Bleun-Brug Lesneven e 1923. Brezhoneg flour hag uhel a zeue gantañ ha n'hellomp nemet kaout kerse e ve bet plaouiet oberiantiz ar spered uhel-se gant an abostolerezh e galleg, e-pad al lodenn vrasañ eus e vuhez.

Ganet e 1879 e Plouneour-Menez, graet en deus an Aotrou Fraisez-Mari MADEG e studi e Kloerdi Bihan Pont-e-Kroaz. Ur wech beleget e 1902, ez eas da evezhier e Pariz. E 1905 e teuas da gure er Releg-Keruo. Bet eo aluzenner an eil Rejumant Troadeien an Trevadennoù e-pad brezel 1914-18. E 1920 e voe anvet person e Goulc'hen. E 1925 e teu da aluzenner e Brest. Marvet eo d' an 19 a viz Kerzu 1936, e Brest, d' an oad a 57 vloaz.

63

Graet en deus war-dro kelaouennoù. Rener oa e 1909 d'ar gazetenn « La Quinzaine Ouvrière », deut da vezañ « Le Militant », sizhuniek. Kaset en deus en dro « La Patrie Bretonne », eus an 10 a viz Gwengolo 1927 da zibenn ar bloavezh 1929, hag ar gelaouenn ADSAO eus 1931 da 1936.

Er gelaouenn-mañ, dindan an anv-pluenn Brug-Are, en deus moulet un dornadig kanaouennoù ha pezhioù barzhoniezh.

Un nebeut anvioù hepken, e-touesk kalz re all, a zo bet meneget amañ. Kent klozañ, avat, e fell deomp degas da soñj div brezegenn gant an Ao. Yann-Vari PERROT, skignet gant Roazhon-Breizh : *Kentelioù ar Vered*, da bardaez Gouel an Holl-Sent e 1941 : *Ar Stourm etre ar Maro hag ar Vuhez*, da Sadorn Fask 1942. O lenn a c'heller e FEIZ ar BREIZ, Du-Kerzu 1941 ha Meurzh-Ebrel 1942. Ibid., Gwengolo-Here 1941, e kaver *Pedenn da Santez Anna*, prezegenn an Ao. MOENNER, vikel-vras Kemper da goulz pardon Santez Anna ar Palud, 31 a viz Eost 1941, bet enskrivet ivez evit, Roazhon-Breizh (1).

(Da genderc'hel.)

(1) Ne deo ket, avat, ar sarmon kentañ bet enskrivet gant Roazhon-Breizh evit kavout lec'h en un abadenn. Da goulz pardon Rumengol 6, 7, 8 a Vezheven 1941 e voe enskrivet ur sarmon brezhonek. Ne gaver meneg anezhañ en ARVOR, nag en n. 24, da vare ar pardon, nag en n. 29 da boent an abadenn.

YEZH AR C'HENDALC'H ETREKELTIEK

gant Per EVEN

N' eus ket bet tizhet c'hoazh betek-hen reiñ un diskoulm da gudenn ar yezh etrekeltiek. Koulskoude penaos kompren obererezh ar C'hendalc'h Etrekeltiek hep an elfenn-se ken pouezus, petra lavararan, ken ret-holl ?

Evit gwir, ne weler ket mat penaos e c'hallfed diraez hon uhelvennad na seveniñ ul labour keltiek don o talvezout d' an holl vroioù keltiek hep skoazell ur genyezh implijet da gentañ e-sell mererezh diabarzh ar C'hendalc'h ha d' an eil evit diazezañ menoz ar C'hensevenadur Keltiek.

Arabat, avat, c'hoantaat ober labour keltiek gant ur benveg-displegañ nann-keltiek. Rak, mar fell d' ar C'hendalc'h ober berzh, ma venn e teufe e vouezh da vezañ selaouet gant ar bed, e ranko diskouez ez eus un ene kenunvan d' an holl Gelted emskiantek.

Hep mar, n' eus nemet ur yezh keltiek bennak a c'hell dont da vezañ melezeour ha kannad an ene-se. N' eo ket ar saozneg, da skouer nag ur yezh estren all eo a vez oc'h ober al liamm etre pobloù-ezel ar Strollad Hollarabat : an arabeg an hini eo. Siwazh dimp, n'hon eus ket ni Kelted, an doare «Koinê»-se, pe, mar kerit, ar genyezh c'hresianek a dalve gwechall da bobloù ar bed kreizdouarel da bleustriñ kenetrezo ; seurt benveg a ra diouer bras dimp en hon darempredoù evit diazezañ sichenn ar sevenadur etrekeltiek. Ha n' hallomp ket kennebeut lakaat hor yezhoù broadel diforc'h da gendeuziñ evit sevel ur yezh voutin. Ret dimp, eta, dibab unan anezho hag he deskiñ gant gwir galonegezh. Ne fell ket din lavarout e tle kement den he deskiñ. Oberiantiñ gant skoazell ar yezh etrekeltiek a vo dalc'hmat kefridi an dibab ha neket hini ar werin.

Hogen dre ma vo se labour ar frammataerion ha marteze ivez, dre ma vo ur seurt benveg ar gwellañ hini a oufe ar broadelezhioù-suj da gaout, rankout ha ma reont muioc'h-mui bremañ kas pep hini he stourm prevez war-raok, dre liammañ kenetrezo tonkadurioù pobloù all kar dezho, bez' e c'heller, bez' e tleer goulenn d' an nebeutañ gant an dud a ra war-dro ar C'hendalc'h dilenn ha degemer ur genyezh keltiek, a-barzh ren an emgann etrekeltiek.

65

Ne gav ket din e vefe diaesterioù bras da se, rak, pa sellomp ervat, piv a welomp o kemer perzh e bodadegoù ar seurt **kevredigezh** mar n' eo ket tud troet kenañ war ar yezhoù hag o c'houzout tammoù kembraeg ac'han, tammoù brezhoneg pe iwerzhoneg alesont, pa ne gaver ket, an hini eo, lod en o mesk o vestroniañ zoken yezhioù digeltiek evel an alamaneg pe ar spagnoleg, bet desket ganto evelse peurliesañ dre blijadur ha netra ken ?

Rak-se an intrudu a gav ar Gelted-se da studiañ pizh a-wechoù meur a yezh all a c'hellfent hen kaout kenkoulz all, mar karfent, da zeskiñ komz ur yezh keltiek c'hoar, unan hepken, dibabet, ganto dre genyoul, e stem ar C'hendalc'h, evit talvezout da venveg kreñv ha dereat d' o menozioù.

An darn vuiañ ac'hanomp hon eus ranket deskiñ pe beurzeskiñ ar brezhoneg, rediet ma oamp d' hen ober gant hon emskiant vreizhek. Da hetañ e ve ivez e vemp poulzet gant hon emskiant etrekeltiek da zeskiñ komz ur yezh keltiek all evit mad ar bed keltiek ha mad hor broadelezh war ar marc'had.

* * *

Un tech bras am eus me evit ar c'hembraeg hag un nebeut abegoù a fell din kinnig amañ da ziskouez dreistelezh ar yezh a gomzan diwar he fenn e-keñver ar studi anezhi, e-keñver he stad, hag ivez e-keñver he lec'h hag he rann en darempredoù keltiek.

* * *

Bez' e c'hell an holl Gelted deskiñ ar c'hembraeg buan hag aes a-walc'h. Evel ouzer, ouzh ar Skourr predenek eo stag ar yezh-se ha mar deo kar-nes d' hor brezhoneg-ni ha d'ar c'herneveg, pell a-walc'h evelkent e chom hi diouzh ar yezhoù gouezelek. Hogen mar deo gwir e ra diouer dimp-ni amañ e Breizh levrioù gallek (n' eus ket unan boutin zoken da zeskiñ kembraeg) en Iwerzhon, avat, hag e Skos n'eo ket levrioù saoznek, reoù da zeskiñ e gwirionez, a vankfe ma vefe c'hoant deskiñ kembraeg. Hag hervez am eus klevet, akuit-kaer e tiskouez Skosiz hag Iwerzhoniz bezañ da zistagañ lavar o c'hendirvi. Levezon an amezegiezh moarvat.

66

Hogen ni Brezhoned, daoust hag e ve ken tenn-se dimp-ni ivez dont da vestroniañ yezh Kembre ? Gant levrioù gallek aozet mat, evel reizh, e c'hallfed buan-buan, en hor skolioù eil-derez da vihanañ, kelenn ar c'hembraeg d' ar Vrezhonegerion yaouank en un doare normal-kenañ. Kent gortoz ur seurt largentez, avat, digant hor renerion, bez' e c'hall kement Brezhon emskiantek, deut da vout barrek war ar brezhoneg, boulc'hañ raktal studi yezh e vreudeur dramor gant skoazell levrioù giz « Skol Vihan ar C'hembraeg » Abeozen, pe c'hoazh gant troidigezh vrezhonek levr Caradar, diwar zorn P. Loisel : un oberenn glok ha nevezdoare, graet da zeskiñ komz zoken en ur ober nebeut amzer. Goude kemer an avel evelse gant harp Caradar e vefe mat en em lakaat da selaou abadennoù skingomzet e kembraeg, dreist-holl ar prezegennoù a vez distaget en ur yezh klasel hag unvan a-walc'h, bep sul veure, war niverenn ar « Welsh Regional ». Evit deskiñ e ranker klevout komz goustad. Radio Kembre a vez klevet mat e Breizh dre vras, ha gant an darn vuiañ eus ar prezegennoù-mañ, pe mar kerit ar sarmonioù distaget da geñver an ofisoù lidet dre skingomz, e viot barrek, ur wech m' ho po kemeret an tu.

N'oc'h ket hep gouzout penaos ar gwellañ doare da zeskiñ ur yezh a zo pleustriñ warni dre lenn ar Bibl. Hag ar wirionez-se a zo gwiroc'h c'hoazh evit ar c'hembraeg lennegel, deut buhez dezhañ, a drugarez da droidigezh ar skridoù santel. Buan-tre e teuer da lenn hep diaester ebet ar Bibl e kembraeg. Setu d' am meno ar c'hentañ labour d' ober ur wech aet war studi ar yezh-se. Kent pell, ne gavot mui nemet ur skoilh, hini an distagadur. Setu neuze ma vo deut ar mare evidoc'h da selaou an ofisoù skingomzet, rak e penn kentañ an abadenn, e glevot ar pastor o lenn pennadoù an Testamantoù Kozh pe Nevez anavezet ganeoc'h endev evit bezañ bet o lennet hag adlennet lies a wech. Un dudi e vo deoc'h merzout penaos e teu ar gerioù kembraek gant ar prezeger. Ha tamm ha tamm, oc'h astenn ervat ho skouarn, e viot gouest da gompren ar sarmon a vez graet da heul, o vezañ ma 'z implijer, e-kerz an ofis, kalz eus ar gerioù a gaver el levrioù santel.

Graet em eus me an taol arnod-se hag en ur ober ur bloaz e c'hallen meizañ ster ar frazennoù dre vras, pezh a zo bet ur frealz evidon e gwirionez.

Anaoudegezh donoc'h am eus klasket goude se emichañs, dre lenn kelaouennoù evel « Y Cymro » pe « Y Faner », o vont evelse eus an aesañ d' an diaesañ.

En em c'houlenn a reot, marteze, perak e ran me seurt rak-dibab war ar c'hembraeg. Da gentañ, dre ma 'z eo ar binvidikañ e-touez ar yezhoù keltiek.

67

Darev eo, evel m' emañ, hiziv an deiz, da dalvezout da yezh vererezh binvidik keñver-ha-keñver gant ar galleg hag ar saozneg. Ken darev all eo war dachenn ar c'helaouennerezh. Sellit un tamm ouzh neuz kaer « Y Faner » pe « Y Cymro » hag e kavot peadra d' estlammiñ evit gwir. Ec'hon spontus eo geriadurezh ar c'hembraeg, da lavarout eo pinvidik a-walc'h ivez da servijout ar Skiant en un doare kehelus ha trec'hus, hag un druez eo gwelout kalz re a skrivagnerion gembraek o vont ken fonnus war c'heriadurezh ar saozneg, pa c'hellfent tremen hepzi, naontek gwech war ugent. Seurt darvoud a c'hoarvez, gwir eo, gant kement yezh emdroet deut d' hec'h oad-gour, pinvidik a-walc'h ha ma seblant neuze o benveg bezañ d' an oberourion a ra gantañ.

E-keit-se, avat, e weler skrivagnerion c'houezelek pe vrezhonek o klask, evel diwar varrad-kreskañs, gwellaat stad o yezh dre ledanaat ha stankaat o geriadurioù gant termenou nevez, forzh pegement, dre ma verzont, moarvat, gwanded ar benveg a bleustront warnañ da verat o menzioù.

O sellout, avat, ouzh frammadur ar c'hembraeg, hep mar n' eur ket evit mirout a lavarout ez eo luzietoc'h he frazennadurezh eget hini ar brezhoneg, ha kalz re a dro a gemerer e Kembre evit displegañ an traoù eeunañ, un tamm evel e Bro-Spagn. Hogen ma vefe degemeret evel yezh etrekeltiek ha dreist-holl ma rafe Breizhiz ar C'hendalc'h Keltiek ganti, raktal ha dre ret e teufe da simplaat, ha lies a wech da resisaat he zroiennoù.

Diaesterioù all a c'hellfed ivez treiñ diwarno, da lavarout eo perzhioù o tennañ d' an distagadur ma teufed tamm-ha-tamm da sellout outo evel ouzh gorou bihan hegus da vezañ lamet diwar groc'hen ar c'hembraeg, adal ma servijfe da gen-yezh d' ar Gelted all. Kemeromp da skouer, kudennoù evel hini an « ll », hini an « y » a vez distaget « i » pe « eu » e korf gerioù evel : « dyn » (din), « dynion » (deunion) « den » ; hervez an unander pe al liester ; goude ma vefe ken aes distilhañ « dinion » hep noazout ouzh sklaerder ar c'heal. A-hend-all son ar « y » (eu) e gerioù evel « cylllell » (kon- tell) a c'hellfe bezañ aroueziet « ö », da lavarout eo en un doare europeat hag a vefe war ar marc'had kalz tostoc'h ouzh ar wirionez e-keñver ar yezhoniezh. Seurt reveulzi ne vefe ket unan evit Kembreiz desket, boazet ha ma 'z int goude holl ouzh distagadur ken hedro ha ken landrammus ar saozneg. Ur burzhud a vefe kentoc'h evito dizoleiñ pezh a zo eeun ha reizh e gwirionez evit kement yezh europeek.

Kemmadurioù evel hini al lizherenn « g » o kouezhañ pa vez blotaet, da skouer « genau, ei enau » - « genou, e c'henou » ; treuzfurmadennoù ar vogalenn e korf gerioù 'zo, evel « glendid » e-lec'h « glandid » - « glanded », « glesni » e-lec'h « glasni » - « glaster », daoust ma talc'her da zistagañ « glan », pe « glas » en anvioù all o teverañ diouzh an hevelep gwirizienn.

68

En hor yezh-ni, gwir eo e kaver skoilhoù evelse ivez, hogen nebeutoc'h kalz, ken nemet el liesterioù direizh, koulz lavaret evel « karr, kirri », « gad », « gedon », hag eveljust en un toullad verboù direizh. Perak neuze ne vefe ket lakaet ar c'hembraeg da dostaat muioc'h c'hoazh ouzh ar brezhoneg, anezhañ an eeunañ hag an aesañ e-mesk an holl yezhoù keltiek ? Tostaat dre vras ouzh hon distagadur, ha, pa vo gallet ouzh an ereadurezh vrezhonek, eo a fell din lavarout, rak re levezonet eo bet ar c'hembraeg gant ar saozneg evit ma c'hoantafed, diouzhtu da vihanañ peurhañvalaat neuz-displegañ an div yezh keltiek. Ur seurt levezon saoznek a weler ivez o pouezañ war ar gouezeleg, pezh n' eo ket ken fall-se, evit bremañ d' an nebeutañ, rak muioc'h douget e vez diwar se bommoù Iwerzhon pe Skos da glotañ gant re Gembre war dachenn ar frazenañ ha, da heul, muioc'h troet Gelted all tramor da vestroniañ, war an taol, ur bern lavarennoù saoznek-kembraek hag a chom dianav dimp-ni Breizhiz. Bez' e rankfemp-ni o deskiñ penn-da-benn ; pe neuze o distroadañ a-wechoù gant reoù gwelloc'h pe vravoc'h, berroc'h pe sklaeroc'h o tont ganimp-ni. Eno e gwirionez e vefe al labour tennañ da gas da benn a-barzh sevel ar genyezh, rak war an dachenn-mañ eo e rankfe ar Vrezhonegerion stourm dreist-holl ha neket war hini ar geriadur nag an distagadur.

Kroazhent ar yezhoù keltiek hag al liamm kenetrezo, sed eta rann ha roll ar c'hembraeg e buhez ar sevenadur etrekeltiek. Arabat neuze chom da brederiañ hiroc'h war ar c'hraf na goulenn ha gounit a rafe ar yezhoù all pe ne rafent ket diwar ma vefe degemeret ar c'hembraeg evel kenyezh. Ar patrom e teufe di da vezañ, ar yezh-vamm o talvout d'ar sevenadur hollgeltiek, pezh en deus talvet al latin d' ar sevenadur gall pe saoz.

* * *

O chom eta war dachenn mererezh diabarzh ar C'hendalc'h Keltiek, pa n'omp ket evit ober kaeroc'h evit bremañ, e vefe da hetañ gwelout ar mennad da heul degemeret gant an holl :

- Ober gant ar c'hembraeg ar yezh etrekeltiek.

- Lakaat ar yezh etrekeltiek e-skoaz gant ar yezhoù all war gement kelc'hlizher a vo kaset da Skourroù ar C'hendalc'h.

69

Ra vo taolet evelse ar c'hentañ ar gwellañ dreist da vorioù Keltia diazezoù ar pont meur a ray an ere etre breudeur an hevelep gouenn : un doare esperanto sevenadurel a c'hellfed reiñ dezhañ da anv : kengembraeg, hep bezañ koulskoude un tasmant bennak evel ar yezh etrevroadel... anavezet ganimp, hogen ul lavar gwirion gwriziennet e park hon hêrezh poblel, ur melezour d' hon ene, ur benveg gwevn a-walc'h ha digorfrank d' ar bommoù ha diouzh ret d' ar gerioù gwellañ bet diwanet e Douar ar Yaouankiz.

Daoust hag e lennit

AR VRO

ar gelaouenn nemeti a zifenn gwirioù ar Vro hag he arboellerezh

Koumanantit diouzhtu en ur gas 350 pe 500 lur da :

P. LEMOINE, Mael-Carhaix - C.C.P. 17-994 Rennes

AL LEVRIOU

« LAENNEC, MEDECIN BRETON » gant Roger KERVRAN

An Aotrou Kervran a zo medisin evel Laenneg ha Breizhad eveltañ. Pa lavaran Breizhad, ne fell ket din lavarout ez eo hepken ganet e Breizh pe eus kerent a oa Breizhiz, met dre ma 'z eo brezhoneger ha brogarour. Moarvat ez eo ar wech kentañ ez eo bet skrivet buhez Laenneg gant un den a gare Breizh hag he yezh hag en doa ivez studiet eveltañ. Gant karantez eo bet skrivet al levr, ur garantez hag a seblant bezañ un adskeud eus karantez Laenneg evit e dud hag e vro. Diskouez a ra ul Laenneg hael ha kalonek dirak diaesterioù ha poanioù ar vuhez. Kavet en doa war e hent meur a zen gwarizius evel Dupuytren. Gouzanvet en deus avat gant habaskted.

Ur perzh bras en deus al levr-mañ : aes eo da lenn ha savet mat. Ur spered sklaer a zo bet ouzh e urzhiañ. Ur perzh all : ur wech ma 'z oc'h krog da lenn n' eus ket mui tu da ziskregiñ ha ret eo mont betek ar penn.

Meur a dra dedennus a zo ivez evit brezhonegerien ha muioc'h a vije bet c'hoazh m' en dije ti Hachette embannet war un dro gant an droidigezh al lizhiri a oa bet skrivet e brezhoneg gant ar mezeg bras. Meur a lizher hir en doa skrivet d'e dad e brezhoneg. O c'havout a c'heller war « Bulletin de la Société Archéologique ».

En ur ger ul leur dudius ha breizhek o servij memor un den ken dudius-all hag en deus degaset d' an denezh muioc'h eget re all a zo bet kalz brudetoc'h egetañ : « muioc'h c'hoazh marteze eget Claude Bernard pe Pasteur en deus eilpennet ar vedisinerezh, o rein d' e vro ul lec'h kentañ en dispac'h-se », (p. 192).

Ronan HUON.

« Laennec, médecin breton » e ti Hachette, Paris. 675 lur.

* * *

YANN POUPINOT, LA BRETAGNE CONTEMPORAINE

(levrenn 2 : Depuis 1914)

71

N' em eus aon ebet o lavarout hon eus aze al levr gwellañ ha pouezusañ embannet diwar-benn Breizh abaoe ar brezel. Ha n'ouzon ket gant petra e tleer bezañ sebezet ar muiañ : pe gant gouiziegezh Yann Poupinot, pe gant ledander e spered, pe gant e c'halloud da gendastum an darvoudoù evit reiñ diouto ur skeudenn hollek. Setu aze ul levr hag a zegas fedoù ha menozioù, ha n' eo ket bevnet e zremmwell gant harzoù ar barrez, pe an eskopti pe, d' an hirañ-tout, Breizh-Izel.

Zoken ar re a anavez mat istor o bro, hag istor an emsav, a gavo da levr Yann Poupinot un dalvoudegezh dispar : evit ar wech kentañ eo strollet ur bern fedoù, ur bern diskleriadurioù hag a oa, en a-raok, a-strew en holl gazetenoù breizhat embannet abaoe ar brezel-bed kentañ. Ur benvez studi e vo al levr-se evit an emsaverien, hag ivez un oberenn dreist evit an abostolerezh.

Bez hon eus bet, a-raok, levrioù mat diwar-benn an emsav, pe sevenadurel (evel La Langue Bretonne et ses Combats) pe bolitikel (evel Breton Nationalism pe Galerie Bretonne). Bez hon eus bet ivez levrioù mat diwar-benn arboellerezh Breizh (re an Ao. Gauthier pe Chombart de Lauwe, da skouer). Roll avat e oant lodennek, strizh pe strisoc'h. Dellid pennañ Yann Poupinot eo bezañ gouezet kenstagañ, e Breizh, an arboellenezh ouzh ar politikerezh hag ar sevenadurezh, hag ivez bezañ gouezet diskouez kudenn Vreizh en he c'hendestenn istorel - diskouez stourm ar vroadelourien en enkadenoù ur stourm all n' o doa int pouez

ebet warno met en deus bet eñ kemend-all a bouez warno, hini galloudoù bras ar bed.

Evit un dra all c'hoazh e fell din meuliñ Y. P. : dizaon ez eo bet. Evitañ an darvoud a zo bet an darvoud, da vezañ barnet a-dra-sur, met dreist-holl da vezañ doujet evel darvoud, da lavarout eo da gentañ da vezañ meneget. Gantañ n' eus ket mui eus an tabou-se en deus ampoezonet kement an emsav ha kammet ke lies barnadenn.

Savet eo bet al levr gant un den dieub e spered. Gant un den gouiziek ivez. Met arabat eo e vefen treuzkomprenet : gouiziegezh Y. P. n' eo ket an dra displijus-se a zisec'h ar galon hag a lazh pep from. Ur broadelour eo Y. P. : karout a ra an dud en deus dibabet displegañ o istor hag alies ne vez ket kuzhet e denerded. Un istor kig ha gwad eo a ginnig deomp, ha n' eo ket istor un diboultrenner levrioù kozh.

Rebechoù bihan a c'hellfed ober diwar-benn un nebeut poentoù : a nebeut a bouez e vefent e-skoaz talvoudegezhioù ur seurt oberenn. An tamall pennañ a rafen eo bezañ chomet hep reiñ, e dibenn al levr, ur roll eus an anvioù meneget: aesoc'h a galz e vefe bet an oberenn da embreger ma vije bet heuliet ar boaz-se.

Evel m' emañ avat ez eo La Bretagne Contemporaine ul levr a zle pep brogarour prenañ, studiañ, gwerzhañ ha lakaat lenn.


Per DENEZ.

NOTENNOU

KAÑV. -

Gant glac'har hon desket e oa marvet Dahud Pennaod e Casablanca. Ra gredo an tad hag ar vamm glac'haret e kemeromp perzh en o foan.

GANEDIGEZH. -

Tangi, Malo, Lena, Nolwenn ha Riwall Al Louarn a zo laouen da gemenn deoc'h ganedigezh  breur Goulven, d' an 21 a viz Here, e Yerres.

PROFOU. -

E miz Kerzu 1955 hon eus degemeret ar profoù-mañ :
P. Peneg, 1.000 lur ; A. Fleury, 1.000 ; J. Poulichet, 300 ; Dr Rousseau, 1.000 ; Frañsez Kemener, 500 ; Rojer Vaillant, 400.
War un dro : 4.200 lur.

Trugarez d' an holl brofourien en anv Breizh hag ar brezhoneg. E-doug ar bloaz hon eus bet 121.770 lur, da lavarout 67.378 lur nebeutoc'h eget warlene. Ret eo mont en-dro betek 1951 evit kavout ken nebeut a brofoù.

Ar goumananterien ez eus 465 anezho, n' eus bet gounezet nemet 9 eta er bloaz-mañ.

AR GOULENNADEG LENNEGEL. -

Priz kentañ ar referendum a zo aet gant an Dr Gwilhou eus Lanvollon ha Per Peneg o deus votet o daou evit « Imram » ha « Nomenoe ». Unan en deus gounezet ur c'houmanant d'Al Liamm; egile « Va Buhez e Rusia » war Rives. Setu en un doare resis penaos ez eo bet lodennet ar mouezhioù :

Barzhoniezh :

- 1) « Imram » gant Maodez Glanndour, 7 mouezh.
- 2) « Pirc'hirin ar mor » gant Roparz Hemon, 6 mouezh.
- 3) « Barzaz Breiz » gant Kervarker, 3 mouezh.
- 4) « Gurvan » gant Mallemanche, 2 vouezh.

Eizh oberenn all o deus bet ur vouezh pephini, setu. int : Ar an Deulin, Barzhonegoù Kerverziou, Milc'hwid ar Serr-Noz, Kanoù en Noz, Lazhadenn Unvab Aife, Kanenn Vrezel, Disul da noz hag Evidon va Unan.

Komz-plaen :

- 1) « Nomenoe-oe » gant Jakez Riou, 6 mouezh.
- 2) « Geotenn ar Werc'hez » gant Jakez Riou, 4 mouezh.
- 3) « Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh », 2 vouezh.
- 4) « Evit ket a netra » gant Roperzh ar Mason, 2 vouezh.
- 5) « An Aotrou Bimbochet e Breizh » gant Roparz Hemon, 2 vouezh.
- 6) « Va Zammig Buhez » gant Jarl. Priel, 2 vouezh.

Eizh oberenn all a zo bet meneget ur wech, setu int : Emgann Kergidu, Enez ar Rod, En ur Rambreal, Pipi Gonto, Ar c'hoar henañ, Danevelloù Kerverziou, Anna Tregidi, An dour en-dro d' an Inizi.

« HOR YEZH » N° 6. -

Niverenn 6 « Hor Yezh » a zo deut er-maez. Enni e kaver ar pennadoù-mañ : O kavout ar poent, pennad-digeriñ ; Enskrivadurioù brezhonek ; Marc'heger « ar » Gergoad, Yeun ar Gow ; Dre ; selaou (ouzh), klevout (ouzh), Roparz Hemon ; Al lavarenn « an hevelep », F. Elies ; Diazezoù ar geriaoua boutin, Kerlann, Per Even, Arzel Even ; Elfennoù ar soniadouriezh, Arzel Even ; Treluskerioù kemegel, Abanna ; Levrlennadurezh, Arzel Even ; Buhez Moizez (Kendalc'h). En holl 40 pajenn. Daleet eo bet an niverenn-mañ gant kleñved ar rener, Arzel Even, hag en deus ranket mont zoken en ur c'hlañvdi.

Kaset eo bet an niv. 5 d' un nebeut tud ha n' o doa ket paeet o adkoumanant : ne vo kaset an niv. 6 nemet d' an dud a vo bet paeet ganto 500 lur da P. Denis, Le Ris, Ploare, Douarnenez. C.C.P. 1499-51 Rennes.

Adalek an niverenn 7 e krogo ar gelaouenn da embann ul labour a-bouez,

graet gant ur gouizieg mat diwar-benn ar yezhoù keltiek, Arzel Even. Al labour-se a zisplego, e brezhoneg, Istor an holl Yezhoù Keltiek abaoe an derou betek ar mare a-vremañ. Un oberenn eo hag a raio enor d' ar vro koulz ha d' ar yezh.

A-hend-all e krogo ivez a Hor Yezh » da labourat war un dachenn all : krouiñ ar gerioù a zo ezhomm evit envel an traoù mui pe vui nevez a implijer bemdez.

Kenlabour an holl a zo goulennet evit kas da benn al labour-se, bag a vo pouezus evit dazont ar yezh.

AR VRO. -

« Ar Vro », ar gelaouenn nemeti o tifenn gwirioù Breizh a zeu bremañ er-maez bep miz. Peder bajenn a zo enni, reiñ a reont keleier diwar-benn ar vro, an holl gevredigezhioù breizhek, an arboellerezh, ar sportoù hag al lennegezh. Skeudennoù kaer a vez war bep niverenn. Al lodenn vrasañ a zo skrivet e galleg. Setu pennadoù a c'heller lenn en niverenn 7 (miz Genver) : Après les élections, Le Conseil de l'Europe et les droits de l'homme, L'U.D.C.A. et les intérêts bretons, La Presse et la Bretagne, Kandalc'h, Statistiques électorales de la Bretagne, En écoutant des chants populaires bretons, Château en mer de Michelle Lorraine, Livres et Revues ha pennadoù e brezhoneg aes. Koumanant 350 lur, koumanant skoazell- 500 lur. P. Lemoine, Mael-Carhaix. C.C.P. 17-994 Rennes. -

KEMMET EO CHOMLEC'H HOR SEKRETOUR. -

Teurel pled ez eo kemmet chomlec'h hor sekretour Per ar Bihan, emañ o chom bremañ : 6, Domaine des Hocquettes, Suresnes (Seine).

GWERZH AL LEVRIOU BREZHONEK. -

Setu amañ niver al levrioù brezhonek gwerzhet e stalioù an Itron Kemere e 1955. E-lec'h 483 e 1954, n' eus bet gwerzhet nemet 371 er bloaz-mañ, en o zouez 313 da zeskiñ ar yezh hag 58 all. Setu ar roll :

Breton par l'image gant V. Seite	95
Mots Usuels gant Roparz Hemon	73
Grammaire bretonne gant Roparz Hemon	52
Méthode rapide gant Roparz Hemon	31
Cours élémentaire gant Roparz Hemon	31
Geriadur brezhoneg-galleg gant Roparz Hemon	13
Geriadur gallek-brezhonek gant Roparz Hemon	16
Yezh hon Tadoù gant V. Seite	2

Al levrioù all a zo :

- 13 « Va Zammig Buhez » gant Jarl Priel ;
- 5 Digor an abadenn ;
- 2 Hervalina Geraouell ;
- 2 Istor Breizh e brezhoneg
- 2 Ar c'horf dindan dreid va zad kozh ;

An ti Satanazet,

hag ur skouerenn eus pep oberenn a zeu da heul :

Kanenn hini Languenau, Kleier Eured, Yezhadur bras ar brezhoneg, Telenn Arvor, Buhez Jezus Krist, Labous ar wirionez, Levr an amprevaned, Per ar c'honikl, Diskleriadur St Yann, Barzazh al Liamm, Merc'hig ar Rozenn, Robinson Kruzo, Barzhonegoù J. Riou, Gaovan, Alanig al Louarn, Biskoazh Kemend-all, Toull al Lakez, An Aotrou Bimbochet e Breizh, Aviel St Yann, Koheleth, Aviel St Mazhe, Marvailh al loened, Bleunioù St Fransez, Marvailhoù ar Vretoned, An Antekrist, Buhez St Fransez, Korf an den, Aquis Submersus, Ali Baba, Rimadelloù ar Gloud, Komzoù bev, Kleñved an Togn.

74

DISKOUEZADEG. -

Un diskouezadeg levrioù gant labour Kerlann diwar-benn anvioù tud e Breizh a zo bet graet gant an Itron Kemere en he stal eus bali Kergelen. Bemdeiz e vez lakaet anvioù nevez dirak daoulagad an dud.

BREIZ HOR BRO. -

Gant KENDALC'H eo bet embannet nevez zo ul levrig, e galleg, diwar-benn Breizh : Breiz, hor bro. Savet mat eo al levrig hag embannet en un doare kempenn-meurbet. Marteze e vije bet tu da chom hep ober, el lodenn istorel, gant

gerioù zo, da gomz eus ar skrivagnerien vrezhonek vev, ha da lavarout ur gerig diwar-benn Al Liamm. Daoust d' ar pec'hedoù bihan-se, e talvez al levr ar boan bezañ prenet, lennet ha brudet.

Ennañ hon eus lennet, evit ar wech kentañ, komzoù ar c'han (broadel ?) nevez : Bro goz hon tadou. E-keñver barzhoniezh eo ken fall hag egile. Epuret eo bet avat : ne c'houlenner ket mui ennañ ma vezo « digabestr ma bro ». Evel-se n' eus ket mui riskl ebet o kanañ anezhañ!

KONOMOR. -

Klevet hon eus ez eus bet savet gant hor c'henvroad mat, an Ao. Beranger, drouiz Tal-Houarn, ur studiadenn diwar-benn Konomor. Ur blijadur eo gwelout an Ao. Beranger o kenderc'hel da labourat daoust d' e oad. Spi hon eus e vo gwelet un deiz bennak e Gonomor o tont er-maez eus ar wask.

NIVERENN 3 AR GELAUENN SKOL. -

Setu un niverenn bouezus ma kaver enni lodenn gentañ Douaroniezh A. Guilcher, kelenner e Skol Veur Nancy. Al labour a zo bet lakaet e brezhoneg gant F. Kervella. Ur roll gerioù fonnus a zeu da heul ar studiadenn-mañ. Koumanant 400 lur. Rener abbé Le Calvez, Directeur Skol Sant Erwan (sic) PLOUEZEC (Côtes-du-Nord).

EVIT C'HOARZHIN. -

E-barzh niverenn miz Here « Pax », kelaouenn abati Kerbeneat, e konter deomp doareoù ur brezhoneger brudet er mare-se, an Tad Korantin. Enebour touet e oa hennezh da zoare-skrivañ ar Gonideg : en abeg d' allizherenn **K**, dreist-holl. Ranket e vije bet, a lavare, implijout ar **C**. Setu ar pezh a skriv ken-labourer « Pax » : « Mais, dira-t-on, pourquoi en avait-il tant après cette lettre **K** ? Il la trouvait désagréable à l'oeil et surtout il se plaignait de « ce vêtement germano-prussien que l'on avait mis à notre langue ». L'abus de l'emploi du **K** et du **T** s'expliquait, d'après lui, par le séjour prolongé de Le Gonidec en Allemagne. Quant dit le bon Père s'il avait su que Le Gonidec avait épousé une Allemande, et dans quelles conditions ? »

75

DEVEZHIOU-STUDI « SKOL ». -

Pedet omp da embann ar skrid da heul : Gant aotre renerezh ar Skolioù Kristen en Eskopti Sant-Brieg e vo aozet, e Skol Sant-Erwan, Plouezeg, e-pad vakañsoù Pask, devezhioù-studi evit ar vistri-skol dreist-holl, hag evit kement hini a garfe dont.

1. - Kregiñ a raint d' ar yaou 5 a viz Ebrel, gant pred an noz, evit echuiñ ar sadorn beure.

2. - Evel tachenn-studi ez eo bet dibabet Kudennoù ar Sevenadurezh hag ar skolioù. An Ao. L. ar Floc'h en deus asantet ober ur brezegenn diwar-benn an darempredoù a zo etre ar Sevenadurezh, ar C'hultur hag ar Relijion. Kelc'hioù-studi ha divizoù a vo aozet diwar-benn deverioù ha gallusteroù ar skolioù e-keñver ar c'hudennoù-se.

3. - Ar baotred hag ar merc'hed a vezo lojet ha bevet evit 500 lur. Kasit keloù an abretañ ar gwellañ, da vihanañ a-raok sul ar Beuz, 25 a viz Meurzh, da M. l'abbé Le Calvez, Skol Sant-Erwan, Plouezec (Côtes-du-Nord).

UR C'HALVAR EVIT AN AO. PERROT. -

UNVANIEZH KOAD-KEV, ar strollad en deus krouet, daoust d' ar skoilhoù, d' an difennoù ha d' an trubuilhoù, ar Pirc'hirinaj Broadel da geñver deiz-ha-bloaz marv an Ao. Perrot, a zo o vont da sevel ur groaz el lec'h m' en deus roet Y. V. Perrot e vuhez evit ar vro. Pedet eo ar vroadelourien da gas o skodenn d' an deñzorierez : Mlle M. Gourlaouen, rue Victor-Hugo, Douarnenez. C.C.P. 1941-06 Nantes.

BRUDEREZH E BREZHONEG. -

Setu amañ un embannadur a zistagomp eus ur baperenn roll-c'hoari sinema evit « Le Celtic » e Gwengamp. Peurrest an embannadurioù a zo e galleg, met evit Bank Breizh, hanter hag hanter eo galleg ha brezhoneg, ur brezhoneg mat-kenañ skrivet gant zh, mar plij !

A-hend-all, ur gartenn Nedeleg a zo bet kaset gant an hevelep bank, er

bloaz-mañ, warni skeudenn Palez Breujoù Breizh, e Roazhon.

Setu bruderezh ar Bank war hec'h hed :

BANQUE DE BRETAGNE

Siège Social à Rennes

- Capital : 140 millions -

Agence de Guingamp

Rayon : Cantons de BEGARD - BELLE-ISLE - BOURBRIAC - CALLAC - LANVOLLON - PLOUAGAT - PONTRIEUX

BANK BREIZH BUREO GWENGAMP

Ar bank ar gwellan diazezet

e kroazhent an Arvor hag en Argoat.

Evit ho tiez-labour, evit ho kenwerzh, evit interest hoc'h arc'hant, evit gouzout hiroc'h, goulennit ali digant

AR BANK BREIZH

90vet DEIZ-HA-BLOAZ SIBELIUS. -

Dres p' edo Breizh e kañv, gant marv Gwion Roparz, e lide Bro Suomi 90vet deiz-ha-bloaz ur sonour bras all, Yann Sibelius. Kenoad e oant pe dost an eil gant egile ; ganet eo bet Sibelius, d' an 8 a viz Kerzu tost d' al lenn **Vanajavesi**. Ha Roparz hag eñ n' o deus bet nemet un hevelep awen, e-doug o buhez hir ha hael, an hini a strinke eus mammenn diheskus o c'harantez-bro.

76

Petra a gan meurdeuz a-hed seizh kensonadeg Sibelius, savet etre 1898 ha 1924 ? Petra a voutan dousik dre vouezh ar pevarbenveg eus Voces Intimae (1909) ? Petra a gantren, dre hentchoù an huñvre, gant Rakastava (an Amourous), tri fezhig evit ul laz-kerdin (1911) ? Petra a youc'h, ac'hoarzh, a leñv, er pezhioù barzhoniel niverus, en deus savet diwar doueedoniezh meur ar C'hlevala, hemañ bet skrivet e 22.800 a werzennoù gant ar medisin-barzh brudet Elias Lönnrot e 1835 ? Petra, nemet Bro Suomi ?

Luonnotar (1913) a zo, moarvat, gwerc'hez an oabl, a grouas ar bed o terriñ ur vi houadez war he glin. Ha Kullervo (1893) ur mesaer, par e donkadur da hini Oedipos. Ha Tapiola (1825), ur c'hoad bras achantet. Padal, n' int nemet Bro-Suomi bepred, Suomi : ar vrumenn a sav, kevrinus, a-us d' al lennoù diniver, hag ar c'hoadoù don ha divent. Suomi, gant he yezh dreist-holl, a ginnige bezañ mouget gant hini an amezeion, ruseg pe svedeg : Vapautettu Kuningatar, ar Roueriez chadennet (1906). Suomi gant he broadelezh bepred war-nes bezañ taget gant pobloù all kalz brasoc'h : Finlandis (1889), deut da vezañ kan entanet ar vroadelourion o stourm a-enep mac'homerezh Bro-Rusia.

N'omp ket evit barn amañ ar sonour, met fellout a ra dimp stouiñ doujus dirak ar c'hozhiad en deus karet a-walc'h e vro vihan evit gouestlañ dezhi e holl vuhez. Ha deuet eo Yann Sibelius da vezañ evit Bro-Suomi un heklev ken gwirion anezhi hec'h-unan, ma n' hellimp mui distagav ken en hor soñj ar mab diouzh e Vamm-Vro.

BENEAD.

UR GENSTRIVADEG TROIDIGEZH SALMOU. -

Ar pezh a c'houlenner :

1° Un droidigezh rimet gant klotennoù-dibenn o rimañ daou ha daou, pe gentoc'h c'hoazh kroaziet (da lavarout eo en ur poz, ar werzenn 1 a rim gant ar werzenn 3, ar werzenn 2 gant 4). Da vihanañ, evit ar gwerzennoù berr, en ur poz 4 gwerzenn, e tle rimañ an eil gwerzenn gant ar bevare.

2° En em harpañ, pe war an droidigezh latin nevez, pe war droidigezh Bibl Jeruzalem (houmañ a ro gwelloc'h stumm evit troc'h ar pozioù). N' eo ket ret treiñ ger evit ger, met ret eo evelkent mirout mat ar ster, hep re astenn, pe re grennañ.

3° Mirout lusk ar pozioù evel m' emaint peurliesañ e stumm hebreeg ar salm, hervez an notennoù hon eus merket izeloc'h evit pep salm. A-wechoù a vo gwelloc'h pep eilañ gwerzennoù hiroc'h ha berroc'h, lakaat da skouer a bep eil gwerzennoù 10 sillabenn da vont gant gwerzennoù 8 sillabenn, pe 12 sillabenn gant 9, hag all.

4° Bezañ troet da vihanañ 5 salm eus ar roll kinniget amañ war-lerc'h. Muioc'h eget pemp a c'heller ober evel just : dalc'het e vo kont eus ampled al labour kaset evit diforc'hañ kenstriverien a c'hellfe bezañ par a-hend-all.

5° Setu aman roll ar salmoù kinniget (an niverennoù eo re ar Vulgate, pe an droidigezh latin nevez) : 15 (pozioù 2 werzenn) ; 16 (pozioù 4 gwerzenn rimoù kroaziet) ; 18 A (pozioù 4 gwerzenn rimoù kroaziet) ; 18 B (pozioù 4 gwerzenn rimoù kroaziet) ; 22 (pozioù 4 gwerzenn) ; 23 (pozioù 2 werzenn ha 3 gwerzenn goude ar gwerzad 7) ; 24 (pozioù 2 werzenn) ; 33 (pozioù 2 werzenn) ; 41-42 (pozioù 4 gwerzenn) ; 47 (pozioù 4 gwerzenn) ; 50 (pozioù 4 gwerzenn) ; 53 (pozioù 4 gwerzenn) ; 65, gwerzadoù 1-8 hepken (pozioù 2 werzenn) ; 79, gwerzadoù 2-8 hepken (pozioù 2 werzenn pe 4) ; 84 (pozioù 2 werzenn) ; 85 (pozioù 4 gwerzenn) ; 87 (pozioù 4 gwerzenn) ; 90 (pozioù 4 gwerzenn) ; 93 (pozioù 3 gwerzenn) ; 94 (pozioù 4 gwerzenn) ; 96 (pozioù 4 gwerzenn) ; 97 (pozioù 4 gwerzenn) ; 99 (pozioù 3 gwerzenn) ; 109 (pozioù 2 werzenn) ; 116 (pozioù 2 werzenn pe 4) ; 117 ; 120 (pozioù peder gwerzenn) ; 121 (pozioù 4 gwerzenn) ; 122 ; 136 ; 137 (pozioù 2 werzenn) ; 140 (pozioù 4 gwerzenn) ; 144 (pozioù 4 gwerzenn).

77

Lec'h n' hon eus notet netra e chom frankiz d' ober ar pozioù evit ar gwellañ.

Evel just, ur wech kemeret en ur salm ur stumm-rimañ, n' heller ken kemmañ evit ar salm-se.

6° Al labourioù a ranko bezañ kaset da : Ao. Beleg Loeiz ar Floc'h, 5, rue des Capucins, Saint-Brieuc, a-raok ar lañ a viz Mezheven.

Setu amañ ar prizioù kinniget dre vadelezh an Itron Sant Pêr : Priz kentañ : 5.000 lur ; eil priz : 2.000 lur ; trede priz : 1.000 lur. Hervez niver al labourioù resevet e c'hellfe bezañ astennet roll ar prizioù.

YEZH AR C'HENDALC'H KELTIEK. -

Setu al lizher kaset gant Per Even da heul e bennad :

Keneil ker,

Kas a ran dit gant al lizher-mañ ur pennad diwar-benn ar yezh etrekeltiek.

Va soñj eo e rankomp dibab ur yezh keltiek vev. Neuze an hini esañ koulz evit ar c'houezelegerion hag evit ar bredenegerion a vefe, d' am meno, ar c'hembraeg. Aes eo d' an eil re ha d' ar re all hen deskiñ, evit abegoù disheñvel koulskoude. Diouzh savboent ar c'houezelegerion e teu an aester diwar niver bras ar bommoù hag an troiennoù-displegañ boutin d' ar saozneg ha d' ar yezhoù keltiek tramor, tra ma 'z eo dreist-holl kerentiezh an idiomoù a skañva studi ar c'hembraeg evit ar vrezhonegerion. Lakaet ar c'herneveg diouzh e du (ha goude holl ne welan ket penaos e c'hallfe dasorc'hiñ), kudenn ar yezh etrekeltiek a zo dreist-holl ur gudenn vrezhonek ; setu perak e tlefe tud ar C'hendalc'h Keltiek en em glevout evit degemer, evel kenyezh, ar c'hembraeg, idiom predenek bev c'hoazh ha kar tost a-walc'h d' ar brezhoneg.

Ret e vefe, da gentañ, sevel ur c'hengembraeg eeun o talvezout evit an darempredoù dre skrid etre izili ar C'hendalc'h Keltiek. Skoazh-ouzh-skoazh gant notennoù, embannoù, kemennadurioù, kaset e kement yezh keltiek a zo, e vefe lakaet an droidigezh « kengembraek » gant frazennoù eeun-tre ha sklaer.

Diwar ur seurt doare, e c'hallfed tamm-ha-tamm boazañ an izili da zistagañ frazennoù kembraek etrezo, da vare ar bodadegoù etrevroadel, rak tu a zo ivez da dizhout buanik ar palioù kentañ ret war dachenn ar gomz, dre eeunaat distagadur ar c'hembraeg. Se, n' e ket, a gav din, goulenn digant an etregeltiegourion ober burzhudoù rak da geñver ar C'hendalc'hioù etrevroadel n' omp etrezomp, goude holl, nemet un dibab, da lavaret eo, un nebeut a dud troet holl pe dost gant studi ar yezhoù ha, dre se barrek ivez da drec'hiñ war ar « warizi » e-keñver an idiom keltiek a vefe dilennet evel benveg-daremprediñ.

78

O lakaat, evelkent, e vouzfe tamm pe damm ar c'houezelegerion, me a gav din e vefe tu da reiñ dezho da gompren ervat n' eo ket war o diskoaz-int e pouezfe ar samm ponnerañ, hogen war re ar vrezhonegerion c'hoazh, daoust da gerentiezh ar brezhoneg gant ar c'hembraeg, rak skoazell ar saozneg, levrioù hag all a ra diouer bras d' ar vrezhonegerion dre vras, endra ma talv da « blankenn-lammat » d' an holl Gelted tramor, dezho gallout deskiñ buan-buan ar c'hembraeg, zoken evel m' emañ e-keñver distagadur hag a drugarez d' ur « c'hendisplegerezhañ », koulz lavaret, « breizhveurek » dianav-krenn d' ar vrezhonegerion.

Dre va skrid, e roan d' anaout an abegoù d' ar rakdibab a ran-me war ar c'hembraeg evel kenyezh keltiek.

Ali on gant Arzel Even ha gant kalz ac'hanomp moarvat, pa laver emañ ar

c'hembraeg ar muiañ diouzh doare ar bed bremañ, rak, daoust ma 'z eo pinvidikoc'h marteze an iwerzhoneg ha dreist-holl miret gwelloc'h e-keñver yezhoniezh, kement-se ne dalv ket nemeur e-sell eus an Talvoudober. Ur yezh kresket eo ar c'hembraeg peogwir e tiskouez bezañ diouzh spered boutin ar renkad-tud anvet « bourc'hizion », ha pegen kreñv bennak e c'hall bezañ lanv ar saozneg, ur gwarant eo evit ar c'hembraeg emzalc'h ar vourc'hizion en e geñver.

Ne gredan ket, ouzhpenn-se, e vefe drastusoc'h biken en Europa levezon ar yezhoù mac'hom eget n' eo d' ar mare-mañ.

Ma talc'h mat eta bourc'hizion Gembre, n' eus ket da gaout aon evit dazoned o yezh chomet sujet betek-hen.

Reiñ lusk d'ar c'hembraeg, yezh ur vro wasket, eo a zo dimp d'ober neuze, kentoc'h eget sellout war-du an iwerzhoneg pe ur c'houezeleg bennak all na oar ket ha na ouezfe ket marteze ober e vad eus e frankiz, rak evidomp da gaout doujañs vras e-keñver izili ar C'hendalc'h en Iwerzhon hag e Skos, re anat e welomp siwazh ! n' eus ket da gontañ war ar vroadelourion eno a-barzh saveteiñ ar yezhoù keltiek.

Kent klozañ va studiaden war divout ar yezh etrekeltiek, em bije ranket ober ur c'hinnig all : Mat e vefe sevel, e stern ar C'hendalc'h Keltiek, ur Strollad-labour padus a c'hellfed reiñ dezhañ da anv « Kevrenn ar c'hengembraeg ». Marteze e vefe dedennet kalz broadelourion Gembre gant ar menoz, pezh a vefe un dra vat evit ar C'hendalc'h pa soñjomp pegen bras lec'h a roont d' o yezh vroadel en o stourm, ha pegen diseblant e vanont a-wechoù war dachenn al labour etrekeltiek.

Hadañ menoz ar c'hembraeg eeun evel kenyezh keltiek dre ar wask e Kembre, setu pezh a vefe da seveniñ e-kerzh ar bloavezh-mañ.

Karout a rafen e vefe roet va menozioù diwar-benn ar yezh etrekeltiek d' anaout da lennerion « AL LIAMM » ha war un dro da boell-goriz ar « Skourr », peogwir ez int lennerion ivez d' az kelaouenn.

Ouzhpenn embann va fennad eta e korf al lodenn gouestlet gant Al Liamm d' al lennegezh, e karfen gwelout al lizher-mañ ivez e-mesk an « Notennoù ». Per EVEN.

Va soñj diwar-benn yezh an darempredoù etrekeltiek a zo eeun-tre ha gwall voutin. Ar saozneg eo a vo ar yezh-se, siwazh ! Ne gredan tamm ebet, avat, e vije tu da vont a-enep. Daoust ma c'hellan komz kembraeg pemdeziek e kavan aesoc'h mont e saozneg pa 'z eus kel eus displegañ menozioù 'zo, hep kaout amzer d' o aozañ en a-raok.

D' am soñj eta ar gudenn a zo diskoulmet, siwazh dre implij ur yezh n' eo ket keltiek met hini ar gwasker.

Ronan HUON.

79

A-HED HAG A-DREUZ

Emeur o prientiñ ur film diwar-benn ar freskoù savet gant Langleiz e La Richardais e-kichen Dinarzh. Ar film-mañ a vezo savet gant an Aotrounez Vallée ha de Beaumont.

Ha gouzout a rit ?

...eo bet roet priz Kevredigezh Skrivagnerien Gornog da Vikaela Lorraine (Mikaela Certain, 29 bloaz, eus Roazhon) evit he levr « Kestell er Mor ». Kerkent ha moulet e oa bet kinniget da lennerion Al Liamm un tañvañ eus al levr-se, troet e brezhoneg gant Benead. Laouen omp o welout eo bet ar varnerion dedennet ivez gant oberenn fresk ha hoalus hor c'henvroadez.

...ez eo beuzet marc'had priaj giz Kemper gant traoù deut eus Bro-Japan, Amerika, Italia ha Bro-Spagn ? Al livioù, an tresadennoù a zo ken tost d' ar re a vez graet e Kemper, ma c'heller krediñ aes-tre e teuont ac'hano. Met n' eus merk ebet dindano eveljust. N' eo ket er broioù estren nag e Bro-C'hall hepken e vez gwerzhet seurt priaj, met e Breizh ivez. Gwelet hon eus kalz anezho e Gwengamp da skouer.

Ar Gevredigezh F. C. B. he deus dastumet er bloaz-mañ 2.700.000 lur, e-kerz devezh ar brezhoneg. An arc'hant-se a servije betek-hen da skoazellañ kevredigezhioù ar Bleun-Brug hag ar Falz evit embann o levrioù kelenn hag ar

prizioù da rein d' ar vugale.

E-kerz ar vodadeg diwezhañ, bet dalc'hat d' ar 4 a viz Kerzu, ez eo bet divizet reiñ 50.000 lur d' an Dll Gourlaouen evit ar Skol dre lizher « Ober ».

KASET ez eus bet deomp ur gazetenn eus Fryslan. Ar gazetenn-se a zo skrivet en hollandeg. Un hanter-bajenn e pep niverenn avat a zo skrivet e frizeg. Ha n' eo ket evit an dud kozh, met evit AR VUGALE. Un istor bihan a zo, un divunadenn bennak, hag ul lizher a-berzh ur voereb kozh madelezhus. Respontoù ar vugale a vez embannet, ha plijout a ra d' ar ganfarded vihan gwelout o anv e skritur-moul. Daoust ha n' eus ket unan bennak a c'hellfe ober kemend-all en unan eus kazetennoù bras pemdeziek Breizh ?

« Le Pays Malouin » a embann (niv. 508 ha 509) ur studiadenn blijus gant hor mignon Paol Kentel diwar-benn anvioù-lec'h korn-bro Sant-Malo : ar « Poulet ». Diskouez a ra P. K. e teu an anv Poulet eus al latin Pagus Alet dre ar brezhoneg : **pagus** en deus roet **Pou, paou**, e brezhoneg, evel m' en deus **fagus** roet **faou, fou**. Setu aze ur brouenn ouzhpenn ez eus bet komzet brezhoneg e-pad pell e korn-bro Sant-Malo, evel m' eo diskouezet c'hoazh gant un niver anvioù-lec'h all.

AL LIAMM 55

AL LIAMM
Tir na n-òg

NIVERENN 55

Meurzh – Ebrel 1956

TAOLENN

Korrig ar Menez, gant Maodez Glanndour	3
Trec'h ar Barzh, gant Abanna	4
Ar Jonkenn Borselen, gant Gawain	5
Eñvorennoù Hanter-Oad (1900-1919), gant Taldir	9
Ar Breur hag ar C'hoar, gant Klerg	22
Gweladennourien e Corca Duibhne, gant A. Heussaff	39
Prederiadennoù e sigur un nebeut skrivagnerion vrezhonek, gant Youenn Olier	46
Istor lennegezh vrezhoneg an amzer-vremañ (Kendalc'h), gant Abeozen	58
Al Levrioù	65
Pladennoù breizhat	68
Notennoù	71

KORRIG AR MENEZ

gant Maodez GLANNDOUR

D' an eur ma kousk ar fraved er gwez
 Dindan sked al loar,
 Gwechall, e tañse Korrig ar Menez
 Ur ganenn espar...

Bremañ, war gribell al lanneg didrouz,
 Eo marv an huñvre !
 Nemet skeud ar geot, a bazioù voulouz.
 A zañs o rambre...

TREC'H AR BARZH

gant ABANNA

Piv a vanas un hañvezh pad
 en he c'hoazez ouzh dor va zi ?
 Ha piv a gasis-me a-guzh d' ar gambr vatezh ?

Piv a bakas bloñsoù ouzh stok va c'halon vaen ?
 Perak hen diuz avat
 da vaengelc'h d'az planedenn ?
 Perak dont d'estreanaat
 edan c'hwezh an awen ?

Padal dre forzh rivañ e lein va zi
 e tarzhe da vrennid,
 e tiglorfes â varzhoneg,
 maouez faezhet ha gwelevus.

Ar Jonkenn Borselen

gant GAWAIN

AR SKALIEROU

Dereziou bras a ziskenne eus dor av palez d' al lenn.
 An nor, evel ur grib du pintet war blev gell an dorgenn,
 O tidammañ an oabl melen.
 Dereziou bras marmor gwenn : ur pondalez, ugent derez, ur pondalez, ugent derez,
 ur pondalez, ugent derez, hag al lenn.
 Melen an oabl e dour al lenn, ha marmor gwenn an dereziou melezeuret penn d' an
 traoñ e dour al lenn.
 Ledan ha pounner o sankañ hag o sankañ e-barzh an dour.
 O sankañ betek skeudenn an nor du.
 Ha ken boull e oa dour al lenn, ho piye kredet e oa fetis ar skeudenn, ha na oa
 ar skalieroù hag an nor wirion nemet un huñvre o sevel en oabl, prest da deuziñ
 ouzh c'hwezhadenn hoc'h anal.

AN ITRON

Bep abardaez, e pigne an itron eus al lenn.
 En he sae c'hlas, etre postoù an nor e teue mat wel.
 He sae c'hlas a save uheloc'h eget he zreid, hag he dremm velen-gwenn hag he
 zorkad blev du a-ispilh dindan he sae, evel ul letern.
 Hec'h aveler, douget ganti en he dorn kleiz, o tiskenn betek he dremm.
 Pignat a rae goustadik gant an dereziou, krec'h he sae o flourañ ar maen.
 He c'horf a oa sonn, ha sellout a rae ez evezhiek d' an nec'h, da welout pelec'h
 lakaat he zreid.
 Bihan, ken bihan dindan ar skalieroù ledan.
 Skañv evel ur glogorenn o sevel betek gorre an dour.

AR JONKENN

Ha trumm, e weled div itron e-lec'h unan, difiñv, o c'hedal.
 Hogen itron an aer ne oa nemet tasmant itron an dour.
 Hag e oa div jonkenn ivez.
 Pa risklent davet an div itron, ne oa mui na dour nag aer : div jonkenn o
 risklañ e-kreiz ec'honder ar stered, stered e traoñ, stered e krec'h, bolz an
 oabl e traoñ, bolz an oabl e krec'h, stag evel daou damm ur gloenn.
 6
 Div jonkenn borselen.
 Itron an dour o pignat en he jonkenn, itron an aer o tiskenn en he jonkenn.
 Ha kement jestr a veze graet gant itron an dour marmouzet gant itron an aer.

AR BAGEER

Bageer ar jonkenn,
 Gwech ebet ne veze gwelet.
 Ne veze gwelet nemet div vrec'h nerzhus, o c'higennoù treset flamm dindan ar
 c'hroc'hen, ur vrec'h kleiz e traoñ, ur vrec'h dehou e krec'h, etrezo ur roeñv-
 bouleñv kamm.
 Kuzhet eo Mestr an Tonkadur.

AR C'HLEDOUR

Ar c'hledour a oa en enezenn.
 Netra nemet ur pont koad, moan ha bresk, da vont dezhañ eus an douar.
 Ar c'hledour a oa graet e koad ruz.
 Un doenn bikernek, ruz, douget gant eizh peul kizellet, ruz, un aerouant

askellek alaouret o widilañ hed-ha-hed.
Kerniel erevent alaouret evel ur gurunenn tro-dro d'ar rizenn.
Pallennoù plañsonet ruz war al leur.
Hag un aspled ruz tro-war-dro.

AR BREZELIAD

Bep abardaez, e teue ar brezeliad yaouank d' ar c'hledour da gavout an itron.
Dre ar c'hoad e veze klevet stirlink e sabrenn,
E veze gwelet dameuc'h e dokarn hag e hobregon,
E veze spurmantet e gorf gwevn evel un demm a-dreuz ar geoteier.
E veze spiet an tan dindan e vargurennoù tev e skarr e zaoulagad.
Ha merzet e vouzsc'hoarzh krennbaotr dindan e varbustell c'hour.
Klevet, gwelet, spurmantet, spiet, merzet gant piv ?
Gant an erer, gant ar skrilh, gant an dluzh, gant itron al lenn.

7

BONZ AR BAGODENN

Hag ivez gant bonz ar bagodenn.
Bonz ar bagodenn, en e gluch, e zaouarn juntet o terc'hel e gof dindan e vegel.
Ar bagodenn e lein ar run evel togoù farouell a-us d'e benn.
Togoù farouell an eil war c'horre egile, o vihanaat betek en em goll er c'hoabr.
Ar bonz pounner, e dreid pounner, e gof pounner, e galon bounner, e ene pounner
peget ouzh an douar.

AN IMPALAER

Dindan an daez, war e dron, an impalaer melkonius.
Melkonius, a zeiz da zeiz, oc'h ober hag o tizober buhez an dud.
O hejan e benn, o stouiñ e benn, ha kaset hemañ d' ar chafod, ha karget henhont
a enorioù.

AN IMPALAEREZ

Azezet e-tal an impalaer.
He blev lakennet, he dremm livet, hec'h ivinoù livet, inkazet he c'horf e plegoù
reut he mantel seiz, inkazet he zreid munut en he botoùigoù seiz.
Diloc'h, dilusk, ur c'hoariell dibriz ha dibrizet.

AN AMBROUGEREZ

An ambrougerez en he sae c'hlas, puchet e-harz treid he mestrez.
Unan hepken en engroez an ambrougerezed.
Ur vleunienn hepken en ur bokedad.
Ur berlezenn hepken en ur rezad.
Un evnig hepken en ur gaouedad.
Heñvel, heñvel-marv ouzh itron al lenn.

AN MANDARIN

A-dorimell, a-dorodell, e kerzhe evel ur garz melen.
E zaoulagad ront evel ur garz.
E vousklenn blat evel beg ur garz.
E zaouzorn golvazhek o flapañ evel divaskell ur garz.
E galon lorc'hus evel ur garz.
E empenn goullo evel ur garz.
Hag e gof-garz stambouc'het gant ur soñj orgedus :
Piaouañ ha plaouiañ an ambrougerez he sae c'hlas.

8

EURED AR PALEZ

An impalaer en deus stouet e benn.

An impalaerez a zo chomet diflach.
Ha graet eo bet an eured : ar mandarin hag an itron c'hlas.
Ar mandarin melen en deus astennet e zorn,
Da gregiñ e dorn an itron c'hlas.
E veud a zo kouezhet en e zorn melen.
An itron c'hlas a zo tec'het.

AR FLATRER

Nann, n' eo ket an erer, n' eo ket ar skrilh, n' eo ket an dluzh.
Ar re-se n'o deus ket flatret.
Ar flatrer a zo en e gluch dindan doenn ar bagodenn.
E zaouzorn juntet o terc'hel e gof dindan e vegel.
Sac'had aour ar mandarin ouzh e dreid.

AR SKLAV

Kuzhet e-mesk ar raoskl dindan bont an enezenn,
Lintrus e zaoulagad en e benn moal.
Lintrus laonenn ar c'hleze, e bommell stardet en e zaouarn ramz.
Sklav ar mandarin o c'hedal.

AR PENN TROC'HET

Kammedoù drant ar brezeliad o sourral war ar geot.
Stirlink e sabrenn ouzh kelfioù ar gwez.
Dameuc'h e dokarn hag e hobregon en amc'houlou.
E droad war bont an enezenn.
Ar sklav war api.
Luc'hedenn ul laonenn.
Ur c'horf yaouank a spluj en dour.
Ur penn yaouank a nij er c'hledour, hag, e vousec'hoarzh krennbaotr dindan e
varbustell c'hour, an tan dindan e vargurennoù tev e skarr e zaoulagad, a lamm e
barlenn an itron.

EURED AL LENN

Savet he deus an itron ar penn gwadek etre he divrec'h.
Hag e stardet war he bronn.
Tener, evel ur vamm o tougen he bugel, he deus kerzhet,
E-maez a'r c'hledour ruz betek ribl an enezenn.
Hag ez eo diskennet el lenn davit ar c'horf yaouank gwevn.
Itron an aer a zo teuzet.
Ar jonkenn borselen a riskl goullo en ec'honder teñvalaet ar stered.

ENVORENNOU HANTER-OAD

(1900-1919)

gant TALDIR

Fañch Jaffrennou a zo marvet e Bergerac (Bro-Chall) d'an 27 a viz Meurzh, d'e 77 vloaz. Anavezet-tre e oa en Emsav hag er-maez an Emsav. Krouet en doa ar c'helaouennoù « An Oaled » hag « Ar Bobl ». Skrivet en deus pezhioù-c'hoari, barzhonegoù, un dezenn e brezhoneg hag e Eñvorennoù. A-hed e vuhez en deus graet war-dro ar Gorsedd.

Ne blije ket Jaffrennou d' an holl evit meur a abeg. Karout a rae un tammig re an enorioù ha tamallet e vije dezhañ kaout menozioù laosk.

Ne vez ket graet anezhañ ur skrivagner dreist, daoust ma vez prizet e Eñvorennoù Yaouankiz gant meur a hini. Pa gemere poan a-walc'h e skrive mat-tre. Gouzout a rae mat ar yezh ha troioù-lavar saourus a gaver en e skridoù.

Anaoudek e rankomp bezañ e-keñver Taldir evit bout fiziet ennomp e eñvorennoù diwezhañ. Kavet e vint dedennus evit ar yezh, un tammig blaz ar c'hozh ganti, ha dreist-holl evel un testeni istor.

Keuz hon eus avat n' en deus ket bet ar blijadur d' o gweiout moulet.

Al lodenn diembann eus Eñvorennoù Taldir a oa bet kaset deomp gant al lizher-mañ :

« Kenvroidi,

War c'houlenn unan ac'hanoc'h, an hini a anavezan nemetken, evit bout gwelet anezhañ eur wech e Paris e ti eur c'henvroad, me gomz eus Per ar Bihan, e kasan d' eoc'h da varn eur vriad follennou eus ma ENVORENNOU HANTER-OAD pe marteze KRENN-OAD, a vije gwell, gant aotreadur da ober ganto ar sort a gerfot, zoken d' o strêsa e skrivadur Z-H-cheg, mar talvez ar boan diouz ho meno moula pe embann ar c'hozh ravodachou-ze war ho kelaouengalc'h.

D' am soñj, n' o deus ket blas na frond ma ENVORENNOU-YAOUANKIZ, m' en anzaw dichipot. Ouspenn, n' int ket achu. Boulc'hou so, ret o c'harga pa vo tu. Mes n' eo ket bet fellet d' in en em gemerout ouz ar peurzorn a barz gouzout bije bet kavet lec'h da c'hronna an eost.

10

A bep fêson, lennadur an Eñvorennoù-ze a c'hallow marteze ho sklerijenna war bez a zo bet esaet ober « guerso » vel ma lavar Gwenediz, evit dieuba Breiz, hag ar c'hwitadenn a zo bet finnvez diveza ar « jeu ».

Setu amañ derou an eñvorennoù-se a vije bet moulet diwezhatoc'h panevet marv ar skrivagner.

Ronan Huon.

EN-DRO DA GENDALC'HIOU KEVREDIGEZH VREIZH A-GEVRET GANT GORSEDD AR VARZHED

LESNEVEN HA BRIGNOGAN (1903)

E-pad bloavezhioù kentañ ar c'hantved, an div Vreuriezh krouet ha ganet en hevelep kawel : Kevredigezh Vroadel Breizh (1898) ha Skol-Veur ar Varzhed (1899)

a gerzhas « dorn ouzh dorn, kalon ouzh kalon » evel div c'hoar ma oant. Memes tadou, memes mammoù, memes breudeur, memes kerent.

Kontet am eus em Eñvorennoù Yaouankiz danevelloù kendalc'hioù Gwened (1899), Gwengamp (1900), Kemperle (1901) hag an Alre (1902).

Setu ni degouezhet er bloavezh 1903.

E Les-Neven, e-kerz gouelioù an Hañv evel boaz, e voe lakaet ar « rendez-vous ».

Penntre Leon-Uhel a oa maer warni neuze an depute noter Soubigou, a ouenn goueriad pinvidik (ar Julioed) an eil-maer a oa an Aotrou Nicol, marc'hadour gwinn. Daou zen tre anezho, brezhonegerien gouest, degemerus ha frank.

Tost da Les-Neven e oa o chom Visant Inizan, maer Ker-Nouez, a oa ezel eus ar C'homite Renkañ. « Visant » a oa un tog peisant war e benn atav. Diwezhatoc'h, pa 'z eas da Bariz da zepute, goude da senedour, n' e guitaas morse.

An holl Varzhed a oa neuze dizemez, nemet an daou vestr bras : Yann ar Fusteg (Ab Gwilherm Lemenik), hag Erwan Berthou (Alc'houeder Treger Kaledvoulc'h) pere o devoa ugent vloaz warnomp. Nag an eil nag egile anezho n' o doa bugale, ar pezh a zo kiriek marteze e rojont o holl amzer, o holl arc'hant, e-pad o bev, d' ar pezh a blije ar muiañ d' o c'halon : Breizh, an Drouizigezh, an Awen, an Huñvre...

11

O spered ne guitaas biskoazh an aroudenn-se.

A-benn neuze e oamp war-dro tregont a Varzhed, ar peurvuañ oc'h ober o studi, pe nevez echuet gante ober. Ur C'hendalc'h a oa evite ur barti blijadur, un digarez d' en em gaout asamblez, da zougen o dilhad breizhek, da dennañ plañioù, da aozañ war o meno, « ur gwele nevez » da Vreizh, en ur Palez dezhi hec'h unan, lec'h ne vije nemet

UR FEIZ, UR YEZH, UR GALON,
AR C'HIZ KOZH, AR C'HIZ WIRION.

En tu-hont d' ar graouenn Varzhed-se, gward-a-enor ar Markiz Estourbeillon (Hoel Bro-Wereg) ne oa a gendalc'herien feal nemet un dousenn bennak a dudchentil erru oadet mat, daou pe dri veleg gouiziek, un Itron gozh Amerikanek, Anjel Mosher, ha teir blac'h yaouank a Wened, disklibezed d' ar Markiz, an dimezelled Rozenn, Gwenola ha Yaned Riou.

Abaoe daou pe dri bloaz, Bretoned Pariz (krogerien Kevredigezh Vreizh) a oa en em dennet war zigarez e oa bet gonezet ar renerezh gant « ar Chouanted ».

Koulskoude, div c'hazetenn bemdeziek Breizh, an Ouest-Eclair a Roazhon hag an Dépêche a Vrest, a oa a du ganeomp. Bep a reporter a gasent atav d' hon C'hendalc'hioù, ha kement tra a dremene a veze kontet war e hed. An disterrañ « seañs-labour » a veze warni ur regennad. Ar journalisted a oa yaouank eveldomp, ha berr a-walc'h war o moni. Se 'zo kaoz e veze ret dezho « tennañ d' al linenn », a veze paeet ur gweneg, mizoù beaj hag ostaleri en tu all.

Talvoudus bras eo bet harp an div c'hazetenn-se, a-raok m' hon devoa krouet hon re dimp hon-unan.

Ar Varzhed a oa diskennet er memes ostaleri, hini an Trois Piliers a raed anezhi, e kornig ar blasenn vras, a skede war he c'hreiz delwenn arem ar jeneral Ar Flo.

Diwar-benn hennezh e konted penaos pa oa degouezhet e Les-Neven, Lesneveniz a gavas un tammig rouz ar metal anezhi : rouzante an arem, *la patine du bronze*, a oa disanvez dezho. Ar metal a ranke luc'hañ. Hag int eta d' en em lakaat holl gant paper-sabr da frotañ ha da frotañ delwenn ar jeneral, ken e

skedaz evel an heol.

Ur bern bloavezhioù a dremenas a-benn m'he doa adkavet he liv rouzard. C'hoarzhet a-walc'h e oa gant an dra-se.

Bezañ oamp ouzh taol en ostaleri war-dro daou-ugent predour, ma oa bet ret hon lakaat en ur c'hrañj eus ar porzh, sal an Ti o vezañ re enk.
12

Drouiz-Meur ar Gorsedd a oa Yann ar Fusteg, eus Rostren eo bet skrivet e vuhez gant e genvreur ha warlerc'her Erwan Berthou (1). Me ma-unan am eus displeget er c'hazetenn bemdeziek *La Bretagne* (2) doareoù emzougen Ar Fusteg.

Yann ar Fusteg a oa ur « gweledour »; e empenn a oa un ardivink tredanel a skigne luc'hed dre an daou brenestr a oa e zaoulagad glas a selle ouzhoc'h evel evit ho treuziñ gant biroù. Kontet am eus dija em levr kentañ eñvorennoù e oa tuet ar Fusteg da gaout kred er seblantoù, en tasmantoù, en treuz-tremenidigezh an eneoù, e dasorc'hidigezh Arzhur, e gwirionez ar gredenn Drouizek a oa, gouez dezhañ, mammenn an holl relijionoù. Bezañ Drouiz ne oa ket evitañ ur garg skañv ; fellout a rae dezhañ ober ganimp Ebestel ar Gredenn Drouizek ha nann Ebestel ar Gredenn Vroadel. Pa welas ne oa ket ennomp an danvez en doa hetet, e roas e zilez, e 1904.

Un degouezhadenn drol a souezhas kalz an dud a brede er c'hrañj, un nozvezh. Chomet e oamp da gontañ ha da vutunat goude koan. Ar Fusteg a veze ar muiañ selaouet. Ur c'honter a zibab e oa, un teod distagellet dreist, e galleg hag e brezhoneg. E oad just a-walc'h war sujed an Dasorc'hidigezh.

« Kredit ac'hanon, a warante an Drouiz-Meur, Arzhur n' eo ket marv. Dont a raio war e giz, gwazh a vo d'ar re n' hen anavezint ket. Un anv nevez a gemero... Ar bed holl a vo hejet gant e vrud. Unvaniezh ar Gelted a vo e labour gentañ ha dre ennomp-ni, ar Varzhed, e vo sevenet an diouganou... »

An noz a oa sioul.

Hag en un taol-kont, ur c'haouad awel a savas ne oar den a belec'h, unan berr, ma sklokas mein an doenn, ha ma serras ur stalaf a-frap war ur prenestr gant un drouz spontus. An holl gompagnunezh a chomas abaf, troet ar pennoù etrezek an drouz, hep soñjal netra nemet e oa arne marteze.

Mes Yann ar Fusteg a oa savet en e sav, evel bountet gant un nerzh dreist-naturel. E zaoulagad dipoupet, e vrec'h astennet hag e viz o tikouez ar prenestr a strake he stalafou diskroget eus e c'hoch, e krias :

- «Aze 'ma.»

- « Piv ? » a c'houlennas ur genaoueg.

- « Lemenik, » emezañ. « Le-Mênig, al le war ar maen bihan, le, le serment, menig, an dolven, Arzhur a zo adbevet hag ar Gorsedd eo e venveg. Lemenik a zo ouzh hon selaou, ha Lemenik a zo Arzhur... »

(1) Lemenik, skouer ar Varzhed (1914).

(2) Un Barde visionnaire : Le Fustee-Léménik (1944).

13

Hini 'bet ac'hanomp na gredas nac'h girioù an Drouiz-Meur. C'hoarzhin a raemp en hon diabarzh, nemet Erwan Berthou, a oa ken kredik hag ar Fusteg war gement a selle eus ar « bed all ».

An deiz war-lerc'h, e oa dalc'het ur gorsedd digor e Brignogan, war un nebeut reier plat, e ribl an hent bras, stok d' ur menhir. Ur bobl a dud a oa diredet diwar dro da sellet ha da glevet prezegiñ ha kanañ brezhoneg.

Hiniennou ac'hanomp o doa gwisket saeoù gwenn, glas, ha gwer. Ar re all gourizoù glas. E touesk ar re nevez a oa digemeret da Varzhed, e oa ur

C'hernevad Saoz, Herri Jenner: merour ar British Museum, oberour levrioù evit ad-deskiñ ar c'herneveg. Diwezhatoc'h, kemeret e retred gantañ, ha deut da chom, gant e wreg, en ti anvet Bos-Powes, bourk Hayles, e savas ur « Gorsedd » evit Bro-Gernev, hag e voe lakaet da Rener. Marvet eo Jenner (Gwas Mikael) er bloavezh 1933, d' an oad a 85 bloaz.

Daou Varzh nevez a zo da envel. Unan a oa anvet Per Pronost, genidik a Dreflez (Barzh Treflez). E oa o chom e Brest. Kazetenner e oa a vicher. Rener e oa d' un tamm kazetenn vihan, *L'Espérance Bretonne*, sizhuniek, krouet gant ar Re Wenn da glask distroadañ *Le Courrier du Finistère*, a oa, war veno ar re-mañ, re zaoulinet dirak Marianna. O daou e oant katolik ; nemet war ar politik bras o doa menozioù disheñvel. Per Pronost a oa ur skrivagner brezhonek par a-walc'h d' e gevareg Kaou an Ours, eus ar C'hourrier. Nemet e oa barzh ouzhpenn. Graet en doa ul levr barzhoniezh, e anv Anaik, Lili ha Roz Gouez.

Per Pronost a zeuas war an dolvaen da resev e vadeziant varzhek gant ul livitenn lost-pik hag un tok-ribot, evel evit un eured. Ne oa ket ur fars an dra-mañ evit ar gwir Leoniad-mañ. Leoniz a ra kement tra a reont gant siriusedd.

GWIRION LEONIZ
BEPRED TUCHENTIL
E STIL AN ILIZ,

evel ma lavar un Nouel kozh eus ar XVvet kantved.

Karout a ris raktal an den-mañ hag a zalek neuze, hon boe darempredoù rekis. Pa savis ar *Bobl*, Per Pronost a voe unan eus ma gwellañ kenlabourerien e brezhoneg Leon.

Skoet gant kleñved al langiz, e varvas e 1910. Degaset e voe din gant e wreg un orjalenn-lizher, ha mont a ris da Vrest d' e interamant. E bered Sant-Martin e voe douaret. Ur salud diwezhañ a gasis dezhañ war e vez, er yezh a garas ar muiañ.

Pa oamp distro d' e di (d' e gampr kentoc'h), an Itron Pronost a lavaras din en doa lesket un testamant hag a c'hourc'hemenne reiñ din e levraoueg vrezhonek hag e zornskridoù. Al levrioù a oa daou pe dri gasedad bras anezho. E touesk e zornskridoù a oa unan e galleg e werzioù gallek. Barzh Treflez a rae ivez barzhaz gallek, nemet ne fellas ket gantañ o embann en e vev. Din-me en doa fiziet ar garg d' o moulañ war-lerc'h e varv.

14

Evel ma oan mouler, e sentis ouzh e vennad, hag al levr a zeuas er-maez ar Wask e 1911, dindan an anv ŒUVRES POSTHUMES. Nemet un nebeut a viris, ar re all a gasis d' e intañvez ha d' e vugale, d' o gwerzhañ war o c'hont, hag evit o gounid o-unan. Ne raen nemet paeañ ma dle dezhañ evit donezon e levraoueg.

Ur Barzh all a oa degemeret en hon Skol-Veur e Brignogan a veze graet Gaston Esnault anezhañ. Eus a Vrest e oa, ha studier war al Lennegezh e oa e Pariz evit bout Kelenner. Gouzout a rae brezhoneg. Krouet en doa e Pariz ur Vreuriezh Studierien Vreton, a-gevret gant Jos ar C'harget, eus Gwaien, mab d'ur perseptour, troet gant ar c'haskerezh henoniezh. Anv o Breuriezh a oa ar Jabadao. Gaston Esnault a oa en em anvet « Kistinenn vor ». Perak, emon-me, an anv-se ? - Abalamour, emezañ din, am eus ur c'harakter fall. Nep a frot ouzhin en em bik. Kregiñ ennon n' haller ket, me 'n em lak vel ur voul. Un huruson vor.

Pell-pell goude-se, am boe digarez da amprouiñ gwirionez komzoù Kistinenn Vor... Betek 1914, e chomas feal d' al le en doa graet d' ar Gorsedd e 1903.

E teuas ar Brezel. An troc'h.

E 1920, Gaston Esnault a embannas un dezenn : BUHEZ HAG OBEROU AL LAE, gant oberoù brezhonek ar skrivagner-mañ, troet e galleg, en o fenn MICHEL MORIN, ur sort dezrevel eus LE LUTRIN, gant Boileau, nemet e tremen ar c'hoari e Bro Leon.

War-lerc'h ar mestr-taol-mañ, ne voe mui klevet komz eus Gaston Esnault en Emsav Broadel. Petra oa kiriek ? N' ouzon netra.

Trist eo soñjal pet a gensorted hon eus lezet evelse war vord an hent. Aet e oant a-raok leun a herrder. Skañv a gavent ar sac'h war o c'hein. Kanañ raent. Goude un nebeut arsavioù, hiniennoù skuizh a chomas hep heuilh. A-raok diskar an deiz, e vanke kalz.

D' ar c'halvadenn noz, e voent douget « ezvezant ».

N' o deus ket roet eus o c'heloù.

Evit lavarout ar wirionez hep troidell, war gant partiet da c'houloù-deiz ar c'hantved-mañ, an drederenn a oa c'hwitet a-benn 1914 ; a-benn 1939, ne vane mui an dekvet lodenn. Ar re a oa marv a zo digarezet. Ar re all eo ret pardonñ dezho. Ar vuhez a zo ur c'hreur.

15

KENDALC'H HOLLGELTIEK KERNAVON

Kontet am eus el levr kentañ Kendalc'h Hollgeltiek Dulen, ar bloavezh 1901.

Ar c'hendalc'hioù a oa da vezañ aozet bep tri bloaz, er renk-mañ : Iwerzhon, Kembre, Skos, Enez Manav, Kerne Veur, Breizh, hag adkregiñ gant Iwerzhon, da adkomañs an dro.

N' ejont ket en tu-hont da Skos. Kendalc'h Edinbourg e 1907 a oa an diwezhañ, da vihanañ evit ar *Celtic Association* niverenn Unan : rak e 1919, unan all a voe krouet gant an Ao. Edward-Thomas John, depute Bro Gembre, hag an dimezell Agnès O'Farrelly, kelenner e Skol-Uhel al Lizhiri e Dulen.

An eil Gendalc'h Hollgeltiek a voe graet e Kernarvon, penntre Bro Gembre an Hanternoz. Kavet e vo an dipign anezhañ e kelaouennoù an amzer-se, ispisial e Keltia, a oa kelc'hgelaouenn viziek ar Geltiegerien a neuze.

Ne dal ket ar boan eta adober amañ an taolennoù bras.

Ne gomzin 'ta nemet ouzhimp-ni, ar gannaded a Vreizh : e oant : ar markiz Estourbeillon ; me ; Fañch Even (Karevro a Landreger) ; Theodor Botrel hag e wreg ; Emil Hamonic ; an Abad Henry, hag an Itron Mosher, lesanvet *l'Américaine bretonnante*, un itron gozh blev gwenn a zouge bepred gwiskamant Kastellin, hag a felle ganti bezañ sellet evel Bretonez, « adoptet » ma voe bet, emezi, gant Kevredigezh Vreizh, da behini e roe kalz arc'hant.

Fañch Even, an Abad Louis Henry ha me, a oa lojet asamblez e ti an Aotrou hag an Itron Edwards, Castle Street, e bep a gambr. An Abad Henry, a gaver e anv amañ evel Kannad, a oa neuze kelenner saozneg e Kloerdi Bihan Plougernevel. Ezel e oa eus Kevredigezh Vreizh, brezhonegour, ha mignon bras d' ar Varzhed ha din. (E ouenn-diegezh a oa tarzhet eus Karnoet.) Ur beleg lirzhin ha frank e oa an Aotrou Henry. Ledan e oa e venozioù : - « Komzomp ma kerit, emezañ, eus n' eus forzh petra nemet a relijion. Trawalc'h eo din komz a se hed ar bloaz. Amañ, lakaomp on deut ur « sivil » ha grit ganin evel pa ne vefen ket beleg ». Setu ni en hon aes eta gant hon c'hamarad beaj. Seul aesoc'h, ma oa 'n em wisket an Ao. Henry e « sivil », evit nempas bezañ remerket er ruioù.

Dor Botrel, e wreg, ha Hamonic, a oa en hotel : an Ao. Estourbeillon a oa e ti un den a renk uhel eveltañ. En em vodañ a raemp asamblez en Ti-Kêr, er C'hastell, en Teatr, pe e kement lec'h ma veze ret.

16

Enez Eire a oa niverus bras he c'hannaded hag he c'hannadezed. A Skos, e oa noblañsoù bras gant o dilhad broadel, en o zouez an dimezell Ella Carmichael hag he breur Eogan.

Lord Casteltown of Upper Ossory a rene, skoaziet gant Edmond Fournier d'Albe, sekretour-meur, a zouge war e ziskoazh samm an Unvaniezh Hollgeltiek. Pa vankas hennezh, an ti a gouezas en e boull. Evelse e c'hoarvez atav : un den hepken a zo a-walc'h da gas an traoù en dro, mar zo kred dezhañ.

En tu hont d' ar bodadegoù labour en Ti-Kêr, e oa bep sort diduamantou : ambrougadegoù ; c'hoariadegoù er « Pavillon » ; ha lidadegoù Barzhek e porzh meur ar C'hastell.

Sal ar « Pavillon » a oa frank a-walc'h da zastum dek mil a dud. Leun kouch e oa, an noz ma teuas David Lloyd George, depute ar rannvro, da brezegiñ. Ar wech kentañ oa din gwelet ha klevet an den-mañ, a zeuje hepdale da gargañ ar Bed gant e anv. Tost tre e oan dezhañ, er rengennoù diaraok an teatr. Komz a reas e kembraeg nemetken, en un doare kaozeadenn etre mignoned, nann en un doare sarmon. Ha kredit mat, ne oa ket stumm saoz warnañ tamm ebet. Mont a rae e deod en dro evel ur rod vilin, ha da heul ar gomz, e rae arouezioù gant e zremm, gant e zaouarn ; ne chome ket en e blas ; kerzhout a rae hed ha led al leurenn bleñch ; farsal a rae da lakaat an dud da c'hoarzhin ; strakadegoù daouarn a groze evel kurun... Un takad paotr e oa, a grenn ment, blev hir melegan, daoulagad glas, un tamm barv kazh dindan e fri. Raktal e dro echuet, e tisparisaz, moarvat evit tec'hout eus ar ravoderien.

Ne oa ket brav da Votrel tremen just war-lerc'h Lloyd George. E Frañs e vez lezet ar meuz bras da ziwezhañ, amañ e oa servijet da gentañ.

Du-mañ, Botrel a veze youc'het dezhañ, douget, adgalvet, evel Lloyd George amañ. Mes penaos dalc'hen evezh ar bobl outañ goude Lloyd George ? Klouar e voe e zigemer. Ne gavas ket an trec'h a oa boazet ; Botrel ne viras ket ur soñj vat eus Bro Gembre (din-me e lavaras se pell goude). N' eo ket evel Beljika ha Kanada. Ne dave ket a ober meuleudi ar vroioù-mañ.

Teuler a ris pled da se goude ar seañs. Mont a ris gant daou pe dri Gembread da ambroug an Ao. hag an Itron Botrel betek o hotel. Erruet eno, e pedjomp anezho da azezañ ganimp evit evañ ur bannac'h te.

« A zo mat, » a respontas ar Barzh, « azezomp. »

- « Theo, a lavaras e gwreg, ne c'houlan ket e talefez. Tapout a ri anoued. Poent eo dit dont d' az kwele... »

Hag hen a sentas... Me hag a anaveze mat an Itron, a oa aes din gwelet e oa imoret fall. Botrel a ouie golo e vennozioù. Lena a oa ur plac'h taer. He gwaz a oa he doue, hag an disterañ skoilh war hent e drec'hadennoù a lake kas enni.

17

Ur Gorsedd digor en devoe lec'h e porzh-meur Kastell Kozh Kernarvon, a oa ennañ Lez ar Roue Saoz goude stagadenn Bro Gembre ouzh ar Gurunenn. Dalc'het eo en ur stad vat. En tu all d' al lidoù kustum, a anavez an holl, e voe impentet unan gant Fournier d'Albe, hag a dlee, gouez dezhañ, chom da viken merket evel un taol souezhus. Lakaet en doa tennañ diouzh ur vengleuz benerez c'hwec'h mell maen a boueze pephini un hanter-tonn, hag a oa kizellet a feson ma c'hellent, ur wech savet an eil war c'horre egile, bout ur menhir a dri metrad uhelder. Al lizherennoù-mañ a oa garanet war ar vein, a zalek an traoñ da vont war grec'h.

E-A-M-C-K-B.

Da lavaret eo : EIRE - ALBAN - MANA - CYMRU - KERNEV - BREIZH.

Bep ma pozed ur maen war unan all, ur c'hannad a bep bro geltiek a rae ur brezegenn hag ul le-douet. An Estourbeillon a reas evidomp.

Mennad Fournier d'Albe a oa ma chomje ar Menhir-se savet e porzh-meur Kastell Kernarvon betek fin ar Bed. Mes evel ma oa aes divontañ anezhañ e c'hwec'h tamm, e teuje ur c'hamion d' e gerc'hat eno da sevel er gêr ma vije bodet ar C'hendalc'h Hollgeltiek. Achu da hemañ, ar peulvaen a adkemerje hent

Kastell Kernarvon.

Siwazh. An den a ra mennadoù bras, an amzer o c'has da gras. Ne 'm eus ket klevet keloù goude-se a vaen-hir Fournier d'Albe. Marteze eo aet an tammoù anezhañ da veinañ an hentoù.

Chom a raio neoazh e skeud. Ti Vickers, Bangor, en doa tennet div zousenn luc'hskeudennoù bras eus gouel ar C'hastell. Ar poltrejoù-se a voe gwriet en un Albom 30 X 25 ne voe lakaet en gwerzh nemet un nebeudik bihan anezho, o vezañ ma oant ker dirañj. Ella Carmichael a brenas unan da rei din. Emañ ganin bepred, n' eus nemetañ en Breizh, kement-rak-se eo un test prizius eus ar c'haerañ Kendalc'h Hollgeltiek bet biskoazh.

* * *

Daou bried Edwards, Castle Street, 'lec'h e oamp lojet, an Abad Henry, Even ha me, o doa ur verc'h anvet Lizzie, 20 vloaz, hag a voe ma mestrez e-pad sunvezh ar C'hendalc'h. Reiñ a reas he foltred din en ur gimiadiñ, hag e-pad tri pe bevar bloaz e skrivjomp an eil d' egile. Neuze, tav. An eil hag egile ac'hanomp a oa fortuniet. Hi a yeas da chom da Londrez gant he gwaz. N' ouzon ket petra eo deut da vezañ.

18

* * *

Diouzh Kernarvon, kendalc'herien niverus a yeas da welet Eisteddvod Rhyl, a heuilhe diouzhtu (dibenn Eost 1904).

Evel ma oa berr war ma moni, Fournier d'Albe a roas din daou louiz aour, evit ma c'hallfen chom ur sunvezh ouzhpenn e Bro Gembre, asamblez gant Fañch Even. An Abad en doa dilezet ac'hanomp evit mont da vale kostez Londrez. Al liver John Kelt Edwards a chomas ganimp d' hon bleiniañ dre ar vro. Kas a reas ac'hanomp betek Llanroust, da welet ur Gouent Kabusined a oa eno, hag hi renet gant ur Breizhad a Leon, an Tad Goulven Trebaol.

Degemeret laouen e voemp gant an Tad hag e venec'h.

Un nebeut eurvezhioù tremenet o kontañ, o reiñ keleier an eil d' egile. E-kerzh ar gont, an Tad Trebaol ne guzhas ket ouzhimp e oa diaes bras e gefridi. Ne oa ket posubl « konvertisa » tud Bro Gembre. Flour e oant e-keñver ar Mision Gatolik, mes ne oa mann d' ober evit o digas da cheñch kredenn. An Tadoù a sell e tlejent mont kuit.

E-pad Eisteddvod Rhyl, - a zo ur gêr kichen ar mor, gant un draezenn vras evel Dinarz pe Ar Baol, leun a douristed en hañv, Ella Carmichael a renkas en he c'hamb eus an Hotel ur veilhadeg etre un nebeut mignoned dezhi, a Vro-Skos, a Vreizh-Izel, a Gembre, hag a Alamagn... Rak un Alaman, e anv Zimmer, dezhañ 30 vloaz pe war-dro, den desket bras war ar yezhoù, dreist-holl war ar re geltiek, a heuilhe hon roudoù abaoe Kernarvon, hag a seblante ober lagad da Ella, war zigarez komz dezhi a Lennegezh. Ne nac'hin ket e sellen a gorn eus an Alaman-se, gant ma oan nay a-walc'h da soñjal am boa un droet bennak war galon ar Skosez.

Ella hag a wele e oan mouzhet, a rae espres-kaer skuilhañ eol war an tan. En nozvezh diwezhañ a dremeniz ganti, oc'h evañ te, hag o tibuniñ kaozioù mont neblec'h, Even ha Kelt a oa pedet ivez, ne daole pled nemet eus Zimmer.

Mar ne ouien ket a-raok, e teskis da vihanañ kement-mañ : a seul bellañ ma teuit, seul estren ma 'z oc'h, seul aesoc'h eo deoc'h bezañ deut mat gant ar merc'hed.

Evit ma frealziñ, em boe ur pok diganti war ar skalier en ur gimiadiñ... evit tri-bloaz-warn-ugent.

Ar wech kentañ en em gavis ganti goude se, a oa e maner New Hailes da Lord

Cassilis, eus Edinbourg, da viz Mezheven 1927. An dimezell Carmichael a oa neuze pried ar C'helenner Watson. Louet e oa hon blev hon daou. Mirout a rejomp pell dorn an eil en dorn egile. Evit gallout komz ganin liproc'h, Ella he doa lezet he gwaz er gêr, war zigarez « ma oa bouzar un tamm », emezi. Skeud an Amzer dremenet a dremenas dirak hon selloù. Ella na rae nemet klemm e oa « kozh », e oa « skuizh ». Peseurt sekred a guzhe ouzhin ? Daou vloaz goude, e varvas.

19

Tad an Dud d' he c'haso d' ar Gwennved.

Rouez eo an tiegezhioù o deus labouret evit o yezh e-pad tri remzi. He zad, Carmichael gozh, a zo bet Kermarker an Uhel-Dir. Dastumet en deus en ul levr anvet e latin *Carmina Gaedelica*, gwerzioù a chome diembann en eñvor ar gouerien. E verc'h Ella a grouas ur gelc'hgelaouenn divyezhek e 1905, he anv *The Celtic Review*, a badas betek ar Brezel Vedel niverenn I. Ar mab he doa diouzh he dimezi gant ar C'helenner Watson, a labouras ivez war ar gwezeleg a-vihanik. D' an oad a 25 bloaz e voe anvet kelenner e Skol-Uhel Edinbourg. Embann a reas evel Tezenn Oberoù Mary Mac Leod, kutuilhet gantañ en enezenn Skye, 'lec'h e vevas gwechall ar Varzhez poblus-se. James Watson a yeas d' an eil brezel-bed evel Aernijer. Lazet eo bet. A-raok-añ e eontr Eogan e 1914, a skuilhas ivez e wad evit « ar Reizh hag ar Frankiz ». Gant gerioù toull evel-se e vez touellet ar Gelter. Mes dre natur e plij dezho gouren, da lavaret eo diskouez int Goured.

GOURIN HA KOAT KONVO

Da viz Gwengolo 1904, en em vodas ar Rannvroaderien e Gourin, a zo hanter Gerne ha hanter Wened.

Ar Maer a oa ar C'hont de Lescoët. E vab-kaer, an Ao. de Boissieu, ur Gall, a oa depute.

Degemer mat a voe graet gant ar vourc'hizien hag ar bobl da Embannerien ar Vrogarantez. Ar c'hendalc'h a zegouezhe ar memes pred gant Pardon Sant-Herve, patrom Gouriniz, emañ e chapel ul lev bennak eus kêr.

Mont a reas ar Varzhed di da ober un « Ti Kaniri Breiz », evel ma raed eus ar gompagnunezh kanañ hon doa savet e Lok-Mikael-an-Trez e 1900, hag am eus kontet em levr kentañ Eñvorennoù, he ganidigezh eno, hag he badiziant gant an Aotrou Lucas, person ar barrez.

Bandenn ar Varzhed a oa diskennet en Hôtel de la Croix-Verte, dalc'het gant an Aotrou Barbey, un arzour Parizian, a oa deut di ez yaouank da dremen e vakañsoù, a oa 'n em dommet eus merc'h an Hotel, en doa he c'hemeret da bried, ha feiz, a oa chomet eno. E wreg a oa ur c'hoef ganti, hag a rae ar gegin. An Aotrou Barbey n' en doa mann d' ober nemet degemer an dremenidi, c'hoari ar c'hartoù ganto, chaseal, pesketa.

20

Ouzhpenn, an Aotrou De Lescoet, maer, a oa bet laouen eus e gaout da vezañ Sekretour-Teñzorer ar Sindicad Labour-Douar. Erfin, an Aotrou Barbey a oa kenresponter ar c'hazetennoù pemdeziek. Un den desket bras e oa, dougen a rae evel ma oa ar mod gant an Artisted neuze, ur barv hir, un tog ledan, hag ur gravatenn Lavallière. Ur gavadenn e oa d' ar Varzhed dizolo ul lapous ken rouez en ur gêrig evel Gourin. An holl a viras ar soñj gwellañ eus an Aotrou Barbey, hag ivez eus e c'hoar, an dimezell Jeanne-Marie, a oa Livourez e Pariz, un arzoerez ijinet anezhi, hag e oa bet priziet meur a wech he zaolennoù er « Salon ». Damantus ne oa ket Bretonez. Anaoudegezh a reas kalz a Varzhed ganti, rak speredet ha hegarat e oa. Leon ar Ber, Loeiz Ar Menn, Yann Lettry, a oa tri gilliek mat da ober war dro ar bolez. Etrezo o zri, piv e tibabo ?... Gwelet e vo diwezhatoc'h.

An Aotrounez de Lescoet ha de Boissieu o doa lavaret d' an Aotrou de l'Estourbeillon, pa oa deut da zarbariñ ar C'hendalc'h o doa klevet e vije bet « seremonioù pagan » e-doug ar sizhun. An Aotrou de l'Estourbeillon a nac'has e oa paganiz ar Varzhed. An daou zenjentil a zalc'he d' o meno.

Reiñ e rojent dorn ha skoazell da Gevredigezh Vreizh, met gant ma ne vije ket ifamet Kêr gant restachoù eus ar Baganiezh, ne vijent gouest nemet da dennañ dezho drougiezh ar Veleien hag ar Gristenien. Ne oa nemet plegañ.

Ar Markiz a reas ar c'hefridi da Erwan Berthou, mestr ar Varzhed.

- « Ne fell ket d' ar Maer e ve graet lidoù ar Gorsedd en e barrez, » setu aze ar gourc'hemenn.

Ar Varzhed en em vodas, droug bras enno, aes eo krediñ. Penaos en em denn ha treiñ an difenn-se ?

Ac'hanta, graet e vije al lidoù un tu bennak war ar maez, e-pad ar valeadenn e oad boaz da ober evit klozañ ar C'hendalc'h. Ar valeadenn a dlee mont da Sant Mikael Langoned. Koad Konvo a oa war an hent. Izili ar Gorsedd a chomfe er c'hoad hag a rafe eno o zammig lod, en diavaez da C'hourin ha d' he Mistri.

Evelse voe graet. Ar wech kentañ hag ar wech diwezhañ eo bet da Skol-Veur Barzhed Breizh en em zastum e kuzh, e deun ur c'hoad, evel gwechall, en amzer mac'hom ar Romaned... Ne oa ket ur c'hristen war dro e sellet, nemet lapoused er gwez, ha marteze ur c'honifl, ur gaerel, ur broc'h bennak, direñket e-kreiz o feoc'h.

Kavet hon boa ur roc'hell ha krapet e oa an Drouiz Alc'hweder-Treger-Kaledvoulc'h warni, e sae wenn gwisket gantañ. Ne oa ket nemeur a Varzhed : eizh bennak. Mab an Argoat, Ab Alor, Tangwall, Loeiz Herrieu (Barzh Labourer), Yann Lettry, Andreo Mellag, Moris an Dault, Taldir...

21

Un Diskibl hepken a voe degemeret : Iwan Sébillot, ur paotr yaouank 20 vloaz, mab d' an Istorier brudet Paul Sébillot, rener *La Revue des Traditions Populaires*, Gallo-Breizhad anezhañ. E vab Iwan en doa desket brezhoneg a-walc'h evit kompren ha skrivañ. Tremena a rae e vakañsoù e Gwerliskin, e tiegezh Bruant, kerent dezhañ. Ur paotr dous, flour, jentil tre, stumm plac'h dezhañ. Lakaet en doa ober ur wiskamant giz Kemper, gant ur bragoù-bras lien gwenn : koant tre e oa ganti.

Iwan a oa douget war ma zu : war-lerc'h Kendalc'h Gourin, e teuas d' am gweladenniñ da Gerahez, lec'h am boa nevez savet ur Voulerezh. Chom a reas ganin tri pe bevar devezh.

- « Mar ' teus ezhom ur romant evit da c'hazetenn Ar Bobl, emezañ, me gaso unan dit ma kerez.

- Te ' teus graet ur romant ?

- Ya, ur romant « kap ha kleze » a dremen da goulz stagidigezh Breizh ouzh Bro-C'hall.

- Mat tre, Iwan. Trugarez bras. Embannet e vo... »

Prestik goude, Ar Bobl a voule e traoñ ar bajenn gentañ, bep sadorn, *Le Dernier Duc de Bretagne, grand roman d'aventures*, par Yves Sébillot (Lagad Don). Unan all ouzhpenn kollet ganimp, Yves Sébillot.

Perak n' em eus biskoazh mui gwelet war ma hent ar paotr yaouank bragoù-bras a ris ur mignon gantañ e Gourin hag e Kerahez e miz Gwengolo 1904 ?

Piv a c'hallfe respont, nemetañ e-unan ?

Mes chomet eo mut, da vihanañ em c'heñver.

E-pad pemp bloaz ha tregont.

Rak pa voen bet anvet Marc'heg ar Strollad a Enor e 1938, e kavis e mesk ar c'hartennoù a c'hourc'hemennoù unan evel-hen : *Paul-Yves Sébillot, Chevalier de la Légion d'Honneur, Château de..., par Verneil-le-Chétif, Sarthe, avec ses félicitations.*

Goude-se, tavidigezh adarre.

Sébillot en deus embannet « Histoire du Peuple Breton » war-dro 1910.

Goude brezel 1914-19, am eus klevet lavaret e oa penniservij en ur Minister.

Merchañs e oa kemeret e retred gantañ e 1938, pa soñjas digas din e gartenn.

Gouzout a ran c'hoazh en deus embannet un nebeut romantoù e Pariz, hep nemeur a vrud. Setu holl ar pezh a ouezan diwar e vuhez.

(Da genderc'hel.)

AR BREUR HAG AR C'HOAR

(kontadenn-bobl dastumet gant KLERG)

Jobig hag Anna a oa daou vugalig koant hag a veve eürus e ti o zud. Netra ne vanke dezho ; en em garout a raent evel ma tle ur breur hag ur c'hoar en em garout ha ken fur ha ken karantezus e oant ma oa sot o zud ganto. Allaz ! n' eo ket an eürusted un dra badus war an douar. Jobig a oa nav bloaz bennak hag Anna eizh vloaz bennak pa varvas o zud diganto : ur gwall ziouer evit an daou gaezhig paour. Daou eontr dezho, breudeur d' o zad, a oa bev c'hoazh hag a gemeras an daou emzivad bihan en o zi ganto. Daou gozh paotr yaouank e oant, tud vat, met disoursi ha troet da roulañ ha d'ober chervad. War-bouez roulañ hag ober chervad e oa koazhet-mat o feadra dija pa 'z eas Jobig hag Anna daveto, met kement ha ken bihan a refont ken a-benn ar fin e voe peurzebret o feadra ha traoù ar vugale ouzhpenn. Ne oant ket tud fall met ne oant evit o zech, ha pa varvjont poazh gant o buheziad-dizurzhiou e oant glac'haret o soñjal en emzivad a lezent war o lerc'h. Jobig a c'helle kaout pevarzek vloaz bennak hag Anna trizek vloaz bennak. M' en em gavjont eta dibourvez-a-grenn, gwashoc'h eget pa oa marvet o zud diganto.

* * *

Pa n' o doa mann ebet ken war o anv, ha pa ne oant ket barrek da c'honit o bara o labourat, setu ma rejont o soñj da vont eus an eil ti d' egile da glask o boued. Mont a raent evel-se dalc'hmat an eil gant egile, hag an dud o deveze truez outo hag a roe tammoù bara dezho... Un deiz bennak ez errujont war bord ur c'hoad bras. Erru e oa an abardaez ha poent e oa dezho kaout lojeiz un tu bennak, da dremen an noz. War vord ar c'hoad eno, e weljont ul lochenn hag a oa bet d'ur botaouer-koad.

- Sell 'ta, Anna, eme Jobig, ma vije ni hor bije dastumet ur bern delioù sec'h, hor bije graet moaien da lojañ er foukenn-se.

- Gwir a lavarez, eme Anna d' he breur. Mar kerez, ez an da zastum delioù sec'h d' ober bep a wele dimp.

- Ma ! eus ar c'hentañ, Anna, eme Jobig. Kae 'ta da zastum delioù sec'h, hag e-pad ar c'heit-se, me 'raio un nor-valan war al lochenn, rak kouezhet eo an nor a oa warni a-raok.

23

Evel-se e rejont. Neuze e tebrjont ar bara o doa bet en aluzen, en deiz-se, digant an dud vat, hag evel daou vugelig mat, a-raok mont da gousket, e lavarjont o fater, ha ne ankouajont ket pediñ evit o zad hag o mamm, na zoken evit o eontred, petra bennak ma oant bet lakaet war an noazh gant ar re-mañ. En em lakaat a refont kichen-ha-kichen war o gwele delioù sec'h ha menel kousket raktal.

E-kreiz an noz avat, setu an nor-valan o tigeriñ, hag un dañvad bihan gwenn a voe gwelet oc'h antren. Un dañvad bihan koant-koant e oa. Sioul ha didrouz, ez eas war-du ar vugale ha goude bezañ chomet da sellout outo ur pennadig, ez eas da c'hourvez e-harz o zreid. Biskoazh n' o doa kousket ar breur hag ar c'hoar ken c'hwek, evel ma refont en noz-se, ha m' o doa bet riv ur wech bennak, evit an noz-se avat, e oa bet tomm ha brav dezho, eston !

Pa zihunjont an deiz war-lerc'h ar beure, e voe souezhet Jobig hag Anna o welout an dañvad bihan gwenn-se ; met an dañvad bihan e-lec'h bezañ spontet, a reas a bep seurt pecheroù dezho gant e bennig : - Damañ un dañvad bihan koant, a zalc'he Anna da lavarout, en ur flourañ e benn dezhañ, gant palv he dorn.

- Ya ! sur, a lavare Jobig. Moarvat ez eo bet dianket diouzh ur vandenn-

deñved, dec'h da noz, hag ez eo deuet da glask repu amañ. Bremaik e teuio ar mesaer da gerc'hat anezhañ... Met peogwir n' hon eus tamm boued ebet ken, ez an da vont d' ar c'hoad, ha mar bez bolontez Doue, ne vin ket pell o pakañ peadra da leinañ. » Hag eñ er-maez d' ar c'hoad da chaseal, tra ma chome Anna el lochenn ; ha da c'hortoz he breur, p' he n' he doa mann all d' ober, e stagas da c'hoari gant an dañvad bihan. Hep gouzout dezhi e sante he c'halon o tommañ en he c'hreiz ouzh al loenig gwenn, ha p' en em lakae an dañvad da lavarout. « Be' ! bê ! » e kave dezhi he doa bet klevet ur vouezh heñvel en un tu bennak ; met soñjoù souezhus a sav moarvat anezho o-unan, e kalon un emzivadez trizek vloaz o redek ar bed gant he breur, ur bloavezh koshoc'h egeti ! ! !...

Ne oa ket bet pell Jobig gant e dro-chase : ur pennadig goude bezañ aet d' ar c'hoad, e tistroas gant ur pezh gad tapet gantañ war he ched. Evel-se ne vankas ket a voued dezho o-daou an deiz-se, nag an deizioù war-lerc'h kennebeut, rak bemdeiz e tape Jobig tra pe dra, ha kuit e voent da glask an aluzon. Pell 'zo, e gwirionez, ne oant ket bet eürus evel-se. Evel pa vije deuet ar joa hag an eürusted da heul an dañvad bihan gwenn. Ne oa bet den ebet o klask an dañvadig, ha sot e oa aet Jobig hag Anna gantañ, hag en noz ez ae al loen da c'hourvez e-tal o zreid d' o zommañ gant tommder e gorf hag e c'hloan tev.

24

* * *

Un eizh deiz pe bemzek deiz bennak goude ma oa deut ar vugale da chom e lochenn ar botaouer-koad, edont un deiz o zri : Jobig, Anna hag an dañvad, o c'hoari war ar c'hlazenn war bord ar c'hoad, pa weljont un Aotrou o tont eus ar penn all eus ar c'hoad, gantañ ouzh e heul, daou bezh ki ken bras hag onnerezed-bloaz. Spontet e voe ar vugale ouzh o gwelout : - « Deomp buan d' en em glenkañ el lochenn gant an dañvad bihan, » eme Anna d' he breur. Hag i ha hastañ buan mont el lochenn ha serriñ an nor-valan war o lerc'h, hag en em glenkañ sioul-sioul en ur c'horn eus al lochenn. An Aotrou avat, a zalc'he da dostaat, ha p' erruas e-tal al lochenn e roas un taol-bount d' an nor hag ez eas e-barzh gant e zaou gi war e lerc'h. Ne grede ket ar vugale fiñval, met an Aotrou ouzh o gwelout a lavaras dezho : - « N' it ket da spontañ, bugaligoù, n' em eus ket c'hoant d' ober droug deoc'h ; ha n' it ket da gaout doan dirak va chas, rak ar re-se a zo dous ha jentil ha ne raint ket poan deoc'h na d' ho tañvad bihan... Met ho tañvadig bihan a blij din da vat, ha mar kirit e raimp marc'had : c'hwi a roio din ho tañvad gwenn ha me a lezo ganeoc'h va daou gi ».

- « O ! nann ! eme Jobig, re e plij an dañvad bihan dimp. Keuz hor bije ouzh en em zispartiañ dioutañ !

- Nann, nann ! a lavare Anna d' he breur, n' ez ket da reiñ an dañvad d' an Aotrou. Koant eo ha neuze ne blij ket ar chas din, aon am eus dirazo !

- Lavaret em eus deoc'h n' eo ket drouk va chas, eme an Aotrou dezho gant douster ; roit din eta ho tañvad bihan ha kemerit va chas. Ar re-se a rento servij deoc'h, hag ho tifenno diouzh an dud fall, dreist-holl en ul lec'h ken digonsortiaj hag hemañ. »

Kement ha ken bihan a reas an Aotrou derc'hel warno ma plegjont a-benn ar fin da drokañ an dañvad ouzh an daou gi. « - Ya ! ya ! kemerit anezho hardizh, eme an Aotrou. Ar re-se a dapou gedon ha traoù deoc'h hag aesoc'h e vo deoc'h bevañ. Unan anezho a vez graet « Brise-Fer » anezhañ hag egile « Fil-de-Paille ». Hag an Aotrou kuit en ur gas gantañ an dañvad hag o lezel Brise-Fer ha Fil-de-Paille gant Jobig hag Anna.

* * *

25

Jentil e oa an daou gi, e gwirionez, evel m' en doa lavaret an Aotrou, ha diouzh an noz pa 'z ae Jobig hag Anna da gousket e veze ar chas a bep a du dezho en o gourvez, hag e-skeud ar chas e veze tomm dezho. Mont a rae Jobig da chaseal ganto ha tapout a rae ar pezh a gare a loened : gedon, konikled ha klujiri, kalz muioc'h eget n' o doa ezhomm heñ hag e c'hoar evit bevañ. Ha petra 'reas Jobig

neuze ? Mont da werzhañ e jiboez hag evel-se ne voe ket ret dezho mont eus en eil ti d' egile da c'houlenn an aluzon ha gallout a raent zoken espern meur a wenneg... Chaseourion ar vro avat, a yeas droug enno, rak abaoe ma oa deuet Jobig da vevañ e lochenn ar botaouer ha ma oa krog da chaseal, ne dapent ket nemeur a dra. Neuze e voe graet ur vodadeg ganto ha divizet kas klemm da Roue Frañs, ha karget e voe unan anezho da gas ar c'heloù d' ar Roue. Pan erruas e palez ar Roue e voe kaset ar chaseour davetañ : - « Deuet on amañ, va Roue, emezañ, a-berzh chaseourion Vreizh-Izel. Betek-hen e c'hellemp-ni, chaseourion, bevañ diwar hor micher ; met bremañ abaoe m' eo deuet Jobig da chom war vord ar c'hoad bras eus du-mañ, n' omp ket mui evit tapout koulz lavarout loen ebet. Me 'zo deuet amañ, va Roue, da c'houlenn diganeoc'h justis ha lealded, rak dleet eo da bep den bevañ diwar e vicher.

- Hola 'vat ! eme ar Roue. Gwir ez eo ar pezh a livirit din aze, va den mat ?

- Ya ! gwir-mat, va Roue. Tapout a ra Jobig ar pezh a gar a loened-blev hag loened-plu ha ni a zeu alies en-goullo d' ar gêr. N' hell ket an traoù padout evel-se. O, va Roue, ho pet truez ouzh chaseourion Vreizh-Izel.

- Ac'hanta ! eme ar Roue, me ' ya da reiñ ul lizher deoc'h evit Jobig ha ret-mat e vo dezhañ dont betek amañ da gaozeal ganin. »

Roet e voe ul lizher d' ar chaseour, gant siell ar Roue warnañ, evit Jobig. Pa lennas Jobig lizher ar Roue, e voe nec'het, rak biskoazh n'en doa soñjet e renkje kuitaat e c'hoar, met n' helle evel just, mont enep bolontez ar Roue, ha ret e voe dezhañ ober e soñj da vont betek Pariz : - « Ma ! emezañ d' e c'hoar. Ne servij ket din. Ret eo din mont da gaout ar Roue. Un toullad gwenneien a zo amañ c'hoazh hag e c'helli implijañ anezho, e-keit ha ma vin oc'h ober va zro. Fiziañs am eus e tremeno mat an traoù ganin hag e c'hellin distreiñ d' ar gêr a-raok pell. Kenavo eta, Anna, emezañ, en ur bokad d' e c'hoar. » - « Kenavo eta, Jobig, eme Anna hag a oa prest da ouelañ. Plijet gant Doue ober ma vo mat da veaj ha ma c'helli distreiñ hepdale d' ar gêr, rak hir e kavin an amzer va-unan. »

26

Ha Jobig war-raok e bolontez Doue, gantañ ouzh e heul e zaou gi Brisefer ha Fil-de-Paille... Dre forzh bale, e reas hent dizale. Met war e droad e renke mont evel just, rak d' ar c'houlz-se ne oa ket kalz a weturioù na kador-bost ebet. Jobig avat, ne oa ket ur paotr da zamantiñ d' e dreid ha ne voe ket kalz en tu-hont da eizh deiz o vont betek palez ar Roue e Pariz. Pan erruas e-tal dor ar palez, e skoas war an nor ha kerkent e teuas ur vatezh da zigeriñ ar rakled. - « Petra a zo evit da servij, va faotr, emezi da Jobig.

- Feiz. eme Jobig, degaset ez eus bet din ul lizher a-berzh ar Roue da lavaret din dont da gaozeal gantañ. Lavarit dezhañ, mar plij ez on erru, hag am bije c'hoant d'hen gwelout ar c'hentañ ar gwellañ, rak va c'hoar a zo o c'hortoz ac'hanon er gêr.

- Gortoz amañ ur pennadig ma 'z in da gaout ar Roue da c'houlenn digantañ petra da ober, » eme ar vatezh o serriñ ar rakled.

Pa en em gavas ar vatezh dirak ar Roue e lavaras dezhañ : - « Va Roue, emezi, amañ ez eus ur paotr yaouank hag a lavar en deus bet ul lizher eus ho perzh da lavarout dezhañ dont amañ da gaozeal ganeoc'h.

- Mat eo ! eme ar Roue. Henezh a dle bezañ Jobig. Lavarit dezhañ dont raktal ha digorit an nor dezhañ. » Hag ar vatezh war he c'hiz.

- « Lavaret ez eus bet deoc'h, emezi, dont er palez ha mont da gaozeal gant ar Roue.

- Kontant-a-walc'h ez on da vont, eme Jobig, met n' hellan ket mont hep va daou gi, ha mar dan ganto e vo louzet ar pleñchod hag an traoù, gant o favioù

lous.

- Ma ! peogwir emañ kont evel-se, eme ar vatezh, ez an da vont adarre da gaout ar Roue. » Ne voe ket pell oc'h ober he zro hag e tistroas o lavarout da Jobig : « Lavaret ez eus bet deoc'h gant ar Roue dont bepred gant ho chas, ha mar bez louzet an traoù ganto, e vo naetaet goude ».

Ha Jobig neuze e porzh ar c'hastell hag en diabarzh anezhañ. Biskoazh en e vuhez n' en doa bet gwelet traoù ken kaer. Met n' en doa ket bet amzer da chom da sellout, rak diouzhtu e voe kaset dirak ar Roue, heñ hag e zaou gi :

- « Demat deoc'h, Sir, eme Jobig d' ar Roue. Deuet on amañ eus va Bro Breizh-Izel, dre m' hoc'h eus degemennet din dont d' ho kaout. Setu amañ al lizher hoc'h eus bet degaset din.

- Ac'hañ ! eme ar Roue. Te eo Jobig ? Te eo, hervez a glevan, a vez o tinodiñ an holl jibier e koadeier Breizh-Izel, hag ar chaseourion all a glemm dre n' hellont mui tapout netra !

27

- Feiz ! va Roue, eme Jobig. Gwir eo e tapan jibier-a-walc'h, met n' hellan ket lavarout e tapan anezho holl, ha sur-mat e chom kalz war va lerc'h, ha n' eo ket dre va faot ma ne bak ar re-all mann ebet pe dost.

- Selaou 'ta neuze, Jobig, eme ar Roue. Me 'garje gouzout hag-eñ ez out mat evit gwir, da chaseal. Amañ ez eus ur chaseour kozh em falez ha na dap netra pe gazi netra. Lavarout a ra n' eus ket a jibier er c'hoadeier ken dre amañ : chom amañ eta ur pennad, ha gwelet e vo penaos e vo kont.

- Mat eo, eme Jobig, prest on da stagañ ganti diouzhtu.

- 'Ri ket, laouen, evit hiziv ! eme ar Roue. Warc'hoazh vintin e vo abred a-walc'h. Evit hiziv n' az po netra d' ober nemet diskuizhañ, ha warc'hoazh neuze ez i da chaseal gant ar chaseour kozh. »

* * *

An deiz war-lerc'h ar beure, e reas ar Roue gervel ar chaseour kozh : - « Amañ, emezañ, ez eus en em gavet ur paotr yaouank a Vreizh-Izel, hag a zo ur gwall-chaseour, hervez ar vrud. Hiziv, e-lec'h mont da-unan da chaseal, e kasi anezhañ ganit, etrezek ar roud a gari, ha gwelet e vo pehini ac'hanoc'h a bako ar muiañ a jibier.

- Mat eo, va Roue, ra vo graet ho polontez, eme ar chaseour kozh ; met evel ma ouzoc'h n' omp ket risklet da zegas kalz a dra ganeomp, rak dinodet ez eo ar jibier er vro-mañ. »

Har ar chaseour kozh war-raok gant Jobig hag e zaou gi. Ar chaseour kozh avat, ne ziskouezas ket da Jobig ar roud gwellañ. Hen kas a reas d' un toull fall, hag ez ejont pep hini d' e du. Met a-benn kreisteiz e oa bec'hiet Jobig a c'hedon hag a gonikled hag e soñjas mont d' ar gêr da ziskargañ e loened. Lakaat a reas gedon ha konikled war gein Brisefer ha Fil-de-Paille hag e tistroas etrezek palez ar Roue gant ur samm loened war e chouk dezhañ e-unan. A-benn koulz lein e oa erru en-dro.

- « Hola ! eme ar Roue, erru 'oas dija ? Hag egile pelec'h emañ ?

- N' ouzon dare, eme Jobig, da belec'h ez eo aet ar chaseour kozh. Ne oa ket chomet ganin. Met soñjal a rae din em boa tapet trawalc'h a jibier evit dont d' ar gêr, rak evel ma welit, ez on bec'hiet va-unan ha bec'hiet ez eo ivez va daou gi. Ret e oa din dont en-dro da ziskargañ.

- Te 'zo ur gwall chaseour, 'm eus aon, Jobig, eme ar Roue dezhañ. Ma ! kae bepred da zebriñ da lein, da c'hortoz egile d' erruout. Met emberr ne di ket

da chaseal ; trawalc'h ac'h eus tapet evel-se hiziv, ha goude lein e chomi da ziskuizhañ. »

28

Diwezhat e oa ar chaseour kozh p' en em gavas er gêr. Erru e oa serr-noz 'benn ma teuas da c'houlenn digor digant ar borzhier, hag izel-a-walc'h e oa e benn, rak e-pad an deiz n' en doa tapet nemet ur voualc'h. Ha pa voe diskouezet dezhañ petra en doa tapet Jobig, ez en em gavas nec'het gant aon e kollje e garg er palez, ha ma vije lakaet Jobig en e lec'h. - « Ret e vo din diwall, emezañ, gant aon da vezañ skubet ac'han. »

An deiz war-lerc'h ar beure, goude bezañ debret o dijuniñ, ez eas ar chaseour kozh ha Jobig en hent adarre. Met ne gemerjont ket an hevelep hent hag an deiz a-raok. - « Ma ! a lavare ar chaseour kozh outañ e-unan, hemañ gant e zaou gi ne bako ket nemeur a dra hiziv, rak me 'zo o vont d' her c'has d' an toull fallañ a zo ! » Met a-benn kreisteiz e oa bec'hiet Jobig adarre hag e zaou gi ivez, hag e tistroas d' ar palez da zisammañ e jibier.

- « Erru 'out adarre ? eme ar Roue dezhañ ? Fidedoulle ! te 'zo ur mailh da chaseal, war a welan, ha n' eo ket gaou ar pezh a zo bet lavaret diwar da benn ! Kae 'ta da gas da loened d' ar gegin ha chom eno gant va mevelion ha va mitizhion da zebriñ da lein. Goude kreisteiz ne di ket da chaseal ; chom a ri amañ da ziskuizhañ da c'hortoz da gamarad d' en em gaout ! »

Erru 'oa an deñvalijenn 'benn m' en em gavas ar chaseour kozh : - « Petra ac'h eus tapet hiziv ? » eme ar Roue dezhañ.

- « O ! nebeut-kaer a dra, va Roue, emezañ. Gouzout a-walc'h a rit penaos n' eus ket a jibier ken er vro-mañ. » Hag e tiskouezas d' ar Roue ar pezh en doa tapet : ur bik !

- « Ma ! eme ar Roue, n' ouzon ket pe ez eus jibier dre amañ pe ne deus ket. Met ar pezh a ouzon bremañ eo ne dout ket evit ar Breizhad yaouank. Kae da welout petra en deus tapet er beure-mañ, ha deus da lavarout din c'hoazh ez eo dinodet ar jibier er vro-mañ ! »

Mezh en doe ar chaseour kozh o welout ar bern konikled ha klujiri ha gedon bet tapet gant Jobig ; ha ma oa bet nec'het an deiz a-raok, an dro-mañ avat, a stagas d' ober gwad fall da vat, hag evitañ da vezañ skuizh ne zebras ket kalz a dra d'e goan ha ne gavas ket aezet e wele !

Antronoz vintin e lavaras ar Roue d'ar chaseour kozh ha da Jobig e renkjent mont c'hoazh an deiz-se da chaseal. Mab ar Roue hag a oa damoad gant Jobig, a lavaras en doa c'hoant eñ ivez da vont da chaseal. - « Te ? eme a dad dezhañ. Te 'vo skuizh rak n' out ket kustum da vont evel-se : biskoazh n' out bet o chaseal !

- Evit skuizh, ne vin ket, sur, va zad, eme ar Priñs yaouank ; me 'zo erru paotr yaouank. Va lezit da vont, me ho ped.

29

- Ma ! eme e dad, p' ac'h eus c'hoant kaer da vont, ne virin ket ouzhit. »

Hag i o vont neuze Mab ar Roue, ar chaseour kozh, Jobig hag e zaou gi... An deiz-se e tapas Jobig kemend-all a loened ha muioc'h zoken, rak a-benn kreisteiz e oa bec'hiet e-unan hag e zaou gi ha Mab ar Roue ouzhpenn.

Pan erruas Jobig ha Mab ar Roue er gêr gant o samm, e teredas holl dud ar palez da welout petra a oa deuet ganto. Ha me 'lavar deoc'h e oa lorc'h e Mab ar Roue, evit ar wech kentañ ma oa bet o chaseal, ha koulskoude n' eo ket eñ en doa tapet ar gedon, pe ar c'honikled pe ar c'hlujiri, met chas Jobig : Brisefer ha Fil-de-Paille.

Goude lein e chomas adarre Jobig da ziskuizhañ da c'hortoz ar chaseour kozh. Hemañ e oa erru an noz ur pennad brav a oa, p' en em gavas er gêr ha n' en doa tapet seurt ebet !

* * *

Bez' e oa er palez ur vatez kozh. Hag ar chaseour kozh hag ar vatezh kozh-se en en gaozee. Mont a reas ar chaseour kozh da gontañ e drubuilhoù dezhi. - « Ma ! eme ar vatezh, ma vije ijinet un dra bennak d' ar Roue da gas ar c'hozh Vreizhad-se kuit ?

- Ya a-walc'h ! eme ar chaseour kozh, met petra ?

- Evel ma ouzout, ez eus e Koad Boulogn tri Ramz o chom, ha bet eo ar Roue meur a wech o kas tapout anezho, met goude koll e-leizh a soudarded, n' eo ket deuet a-benn. Lavar 'ta d' ar Roue penaos Jobig en deus lavaret bezañ den a-walc'h e-unan, d' o zrec'hiñ. »

Hag ar chaseour kozh da gaout ar Roue : « - Ac'hanta ! chaseour kozh, eme ar Roue, petra 'lavarez eus Jobig ?

- Feiz ! va Roue, eme ar chaseour kozh, ur gwell chaseour ez eo a dra sur, ha peogwir emañ aze c'hoazh, me, en ho lec'h, a oufe tennañ ampled anezhañ. Rak n' ouzoc'h ket petra en deus lavaret ?

- Feiz ! nann sur ! eme ar Roue.

- Lavaret en deus bezañ den a-walc'h e-unan, da drec'hiñ an tri Ramz a zo e Koad Boulogn.

- Lavaret en deus se ? eme ar Roue. Me am eus kollet n' ouzon ket pegement a soudarded oc'h esa donet a-benn anezho. Ma ! lavar dezhañ donet amañ raktal da gaozeal ganin. »

Ha Jobig da vont da gaout ar Roue : « - Te, eme ar Roue dezhañ, ac'h eus lavaret bezañ den a-walc'h da-unan, da bakañ an tri Ramz a zo e Koad Boulogn ?

30
- Me ? va Roue, eme Jobig. Biskoazh n'em eus lavaret se ; biskoazh n' em eus klevet komz eus ar ramzed-se ha n' ouzon ket zoken e pelec'h emañ Koad Boulogn !

- Eo ! eo ! eme ar Roue, hel lavaret ac'h eus, ha ma ne rez ket n' eus nemet ar marv evidout.

- Neuze ! eme Jobig, ingal eo din pelec'h mervel, pe amañ eus ho perzh, pe a-hont eus perzh ar Ramzed. Un taol-esa a rin bepred ! »

* * *

Antronoz vintin eta, setu Jobig o kuitaat palez ar Roue evit mont da glask ar Ramzed. E zaou gi « Brisefer » ha « Fil-de-Paille » a oa gantañ, evel just !

- « Ma ! a lavare Jobig outañ e-unan, nan ouzon ket tamm ebet e pelec'h emañ Koad Boulogn, met mont a rin bepred e bolontez Doue ! » Dre forzh bale e tostae da Goad Boulogn, hep gouzout dezhañ. En em gaout a reas war bord ar c'hoad hag eno e welas tud oc'h ober un devezh bras : - « Hola ! paotred, mar plij, emezañ, ha kontant e vijec'h da lavarout din e pelec'h emañ Koad Boulogn ha pelec'h emañ an tri Ramz o chom ? »

E-touez ar baotred a oa eno o labourat, e oa daou baotr a foeltr-forzh, hag a oa skuizh oc'h ober o lod war-lerc'h an alar. Hag an daou-mañ da respont : « - Mar kerez, ez aimp hon-daou ganit hag evel-se e tiskouezimp an hent dit.

- Mat eo, eme Jobig, deut 'ta ! » P' en em gavjont gant ar c'hastell, ez ejont da skeiñ war an nor da c'houlenn digor. Kaer o doa skeiñ avat, ne responte den. Hag an daou baotr oc'h antren ha Jobig war o lerc'h. Ne oa den ebet nep lec'h ebet. Er gegin, war an daol, e oa tri bezh pentoniad-soub hag un ejen en e

bezh rostet ha tout... Mont a rejont d' ober tro ar c'hambrou hag ar c'hrevier, ha ne welent dre-holl nemet gweleoù kaer, hag er marchosi e oa eizh a gezeg houarnet en aour ha pavezet en arc'hant dindano, hag ar bridou e-pign o lugerniñ. Er c'harrdi e oa tri pe bevar c'harrez eus ar re gaerañ. Met kaer o doa hon tud dont ha mont dre an ti, ar c'hambrou, ar marchosiou hag ar jardinoù, ne welent ha ne glevent den ebet : « - Ma ! emezo, petra 'raimp ? Deomp bepred d' ar gegin da zebriñ hor c'hoan : n' eo ket traoù a vank eno ». Distreiñ a rejont d' ar gegin ha mont ouzh taol da zebriñ. Kaer o doa kaout naon, n' o doa ket debret an tri bentoniad-soub, evel just, nag an ejen en e bezh. Pa voe echu o c'hoan ha pa voe leun o c'hof, setu an daou gi o lammat war an daol da zebriñ ar pezh a vane : riñset o doa ar pentonioù, peurzebret an ejen, darc'havet ar pentonioù d'an traoñ diwar an daol ha graet o louz war an daol.

31

Jobig a chomas souezhet-bras o welout e zaou gi oc'h ober kement-se, rak abaoe ma oa deuet an Aotrou da reiñ dezhañ Brisefer ha Fil-de-Paille en-trok ouzh an dañvad bihan gwenn, biskoazh n' en doa gwelet anezho o tebriñ c'hoazh, ha ne gomprens ket penaos e c'hellent chom bev evel-se... Ne lavaras netra koulskoude hag e roas peoc'h d' e chas...

Pa voe deuet ar c'houlz da vont da gousket, ha pa ne welent den ebet o tostaat, petra 'rejont, nemet mont d' ur gambr da glask gweleoù. Mont a rejont o-zri da gousket er memes kambr : « - Me, eme Jobig, a gemero ar gwele an nesañ d' an nor, hag e chomo va daou gi a bep a du din ; ha mar erru den ebet amañ e vo prest Brisefer ha Fil-de-Paille da c'hoari ». Met a-hed an noz na glevjont seurt ebet hag e c'helljont kousket e peoc'h.

An deiz war-lerc'h ar beure avat, pa oant er gegin, e weljont ur pezh ramz o tiflukañ eus un trepas ledan : « - Preñved-douar, emezañ, paour-kaezh kristenien. C'hwi an hini a zo bet o tebriñ hor soub ? Tostait amañ hag e tebrin ac'hanoc'h !

- Alo ! Brisefer, Fil-de-Paille, eme Jobig. Dramañ hennezh din ! » Hag an daou gi evel daou leon konnaret o lammat gant ar ramz hag o komañs drailhañ anezhañ gant o dent. Fontet o doa anezhañ naet ! Ha ret e voe da Jobig ha d'an daou baotr a oa gantañ, kas an tammoù anezhañ er-maez, ha labour a-walc'h o doa bet gant se betek koulz lein...

Goude lein ec'h en em lakajont c'hoazh da furchal dre-holl, da welout hag-heñ ne gavjent den ebet. Met kaer o doa bet klask e-pad an deiz, dont ha mont dre ar c'hastell penn-da-benn, ne gavjont den ebet. Pa voe erru koulz koan, e teujont neuze d' ar gegin da welout ha prest e oa un tamm boued... War an daol e oa daou bezh bentoniad-soub ; ne oa ket kement a gig, kreñv d'un hanter-ejen hepken :

- « Ma ! emezo, koulz eo debriñ evel dec'h ha kargañ hor c'hof ! » Debriñ a rejont eta soub, bara, ha kig 'leizh o c'hof ha pa o doe echu gant o fred, e lammas an daou gi war an daol, evel an deiz a-raok, peurzebriñ ar soub, ar bara hag ar c'hig, darc'hav ar pentonioù d'an traoñ hag ober o louz war an daol...

Souezhet e oa Jobig evel just, ouzh o gwelout oc'h ober kement-se, met ne lavaras netra hag e lezas e chas d' ober o bolontez.

32

Goude koan, ez ejont da gousket ha ne zeuas den ebet d' o direnkañ na d' o dihuniñ a-hed an noz. Antronoz vintin avat, pa savjont, setu i o welout ur ramz o tont dre an trepas. Ma oa bras ar ramz kentañ, e oa hemañ tost an hanter brasoc'h c'hoazh.

- « Preñved-douar, emezañ, c'hwi an hini hoc'h eus lazhet va breur din ha debret ar soub hag ar c'hig ha skoet ar pentonioù d' an traoñ ? Tostait amañ, ma tebrin ac'hanoc'h !

- Hola ! eme Jobig, gortoz un tamm ! Brisefer, Fil-de-Paille, dramañ hennezh din buan ha buan ! » Hag an daou gi evel daou leon konnaret ha lammat gant ar ramz ha fontañ anezhañ a-dammoù, evel m' o doa graet d' e vreur, an

deiz- a-raok. »

Met kalz muioc'h a labour o doa bet ar baotred o kas an tammou er-maez eus an ti : betek koulz merenn o doa renket poanial an dro-mañ ! Pa voe skarzhet restadoù ar ramz, ez eas adarre hor paotred da glask roud unan bennak ; met kaer o doa klask, ne welent den. Er marchosi e oa boued gant ar c'hezeg, evel ma oa ivez an deiz a-raok. Ha koulskoude e soñje e renke bezañ ur ramz all, peogwir e oa tri benton war an daol an deiz kentañ ha daou hepken an deiz a-raok. « Ma ! emezo, erru eo koulz koan ; deomp d' ar gegin da welout penaos emañ kont eno ! » War daol ar gegin ne oa nemet ur pentoniad-soub hag ur palefarzh-ejen : « Hola ! emezo, koazhañ a ra an traoù an taol-mañ ! » Met trawalc'h o doa bepred da derriñ o naon, hag ar pezh a vanas en o dilerc'h, a yeas e kof ar chas hag ar re-mañ, evel m' o doa graet an daou zevvezh a-raok, a eilpennas ar penton d' an traoñ hag a reas o louz war an daol.

* * *

Sioul ha didrouz e tremenas adarre an noz. Antronoz vintin, p' edont o sevel, setu i o welout ur pezh ramz o tont d'o c'haout ; kalz brasoc'h e oa eget e vreudeur :

- « C'hwi 'zo amañ, va bugaligoù ? emezañ. C'hwi hoc'h eus rikouret ac'hanon o lazhañ va daou vreur, rak daou c'harn ne oant ken, daou hailhon eus ar re fallañ-tout. Bremañ e chomot amañ ganin. Brav-tre e vo deoc'h, ha n' eo ket traoù a vanko deoc'h ! »

Kontant-bras e voe ar baotred o klevout komzoù ar Ramz, ha prest e oant d' ober kement a lavarje dezho : « Ma ! eme ar Ramz, p' hon eus amzer bremañ, deuit ganin da welout va zraoù, rak me 'zo sur n' hoc'h eus ket gwelet pep tra ! » Hag e kasas anezho da welout ar c'hambrou. Eno e oa kambradoù-dilhad, aour hag arc'hant ha pep tra o lugerniñ dre-holl.

33

- « Ur gambr all am eus, eme ar Ramz, kaeroc'h c'hoazh eget kement hoc'h eus gwelet, met n' am eus ket c'hoant da welout ar chas o tont war hol lerc'h, gant aon da louzañ an traoù, eme ar Ramz ouzh Jobig. Amañ ez eus nav dor-houarn da zigeriñ. Me 'yelo ez raok, hag a zigoro an dorioù ha te a serro anezho war va lerc'h !

- Mat eo, eme Jobig. Ac'hanta ! Brisefer ha Fil-de-Paille, chomit aze gant an daou all, e-keit ha ma vin-me o vont da welout ar gambr ! » Ar chas avat, a oa an dour o ruilhal eus o daoulagad ; met Jobig ne gompene ket.

Ar Ramz a zigoras an nor gentañ ha Jobig war e lerc'h. Dre ma tigore ar Ramz an dorioù, e serre Jobig anezho war e lerc'h. Pa voe digoret ha serret an nor diwezhañ avat, e vanas Jobig spontet. Bez' e oa er gambr ur pezh potouarniad-dour o virviñ, ur pevar-c'hant litrad bennak emañ.

- « Hañ ! eme ar Ramz dezhañ. Amañ em eus kavet ac'hanout. Ez ez da vezañ skoet war da benn er potouarniad-dour-se da boazhat !

- Ya ! gwelout a ran, e renkin mervel amañ, eme jobig. Met mar bije ho polontez, e c'houlennfen ur c'hras diganeoc'h a-raok mervel... Va lezit da c'hwitellat evit kimiadiñ diouzh va chas.

- Ya ! ya ! eme ar Ramz, c'hwitell hardizh d' az kozh chas, ar re-se ne glevint ket ac'hanout ! »

Ha Jobig ha leuskel ur c'hwitelladenn, ha kerkent an daou gi o skeiñ o favioù a-raok war an nor gentañ hag o pladañ anezhi hag o chom eno da c'hortoz. Ha Jobig ha leuskel ur c'hwitelladenn all... Blao ! blao ! blao ha blao ! eme ar chas, dre ma tiskarent an dorioù a-blad, ha ne voent ket pell ouzh en em gaout er gambr m' edo Jobig.

- Ar Ramz avat, a voe e dro da spontañ : « Damañ ! Brisefer, Fil-de-

Paille, eme Jobig, drammit hemañ din ! » Ne chomas ket Brisefer na Fil-de-Paille da dortal evit dramañ ar Ramz ha didammañ anezhañ... Ur wech lazhet, e voe skoet an tammou anezhañ da boazhat er potouarniad-dour.

- « Ma ! eme Jobig, bremañ bepred ez omp sur ez eo ar c'hastell dimp-ni ha kement a zo ennañ hag an holl loened. Bremañ e c'hellimp bevañ didrubuilh hep kaout aon da vezañ lonket gant ar ramzed fall-se. »

En em glevout a rejont eta o-zri da chom er c'hastell. N' o doa netra d' ober nemet reiñ boued d' al loened a oa er marchosi ha monet da chaseal. Ha gant Brisefer ha Fil-de-Paille e c'hellent bezañ sur n' eo ket kig a vankje dezho.

* * *

34

Jobig avat, a oa bepred e spered gant e c'hoar Anna. N' en doa bet keloù ebet diganti abaoe ma oa deuet eus ar gêr ; hag heñ e-unan n'en doa ket gallet reiñ eus e geloù dezhi. Hirc'h e oa padet e dro eget na soñje gantañ ; ha setu perak un deiz bennak, e lavaras d' an daou all :

- « arc'hoazh vintin, emezañ, kerkent ha gouloù-deiz, e kemerin penn va hent etrezek va bro Breizh-Izel...

- Penaos ? eme an daou all. Memes tra, ne lezi ket ac'hanomp hon-unan amañ ?

- Nann, nann ! N' it ket da vezañ nec'het, eme Jobig. Met ret eo din monet da welout penaos emañ ar bed gant va c'hoar Anna. Rak ur c'hoar am eus. Ha marteze he deus ezhomm arc'hant ; hag ez an da gas dezhi lod eus ar pezh hon eus kavet amañ en dilerc'h eus ar ramzed.

- Ac'hanta ! eme an daou all. Pa levez ac'h eus ur c'hoar, kae 'ta da gerc'het anezhi. Degas-hi amañ ganit, rak amañ ez eus ezhomm ur plac'h da fichañ boued ha da ingaliñ an traoù !

- Mat eo, eme Jobig. Stagit eta ar c'hezeg, an eizh a gezeg a zo er marchosi ouzh kaerañ karreoz a zo dindan ar c'harrdi ma 'z in da Vreizh-Izel da gerc'hat va c'hoar Anna. »

Evel-se e voe graet. Ha gant e eizh a gezeg ne voe ket pell Jobig oc'h ober an hent a zo etre Koad Boulogn ha Breizh-Izel.

E c'hoar a oa e-tal-kichen dor al lochenn oc'h ober stamm. pa glevas trouz ar c'hezeg hag ar c'harreoz. Hastañ a eure buan pakañ he stamm ha redek d' al lochenn d' en em glenkañ, evit na vije ket gwelet... Ar c'harreoz avat, a chomas dirak dor al lochenn hag Anna a oa erru nec'het o soñjal piv a oa en em gavet eno, pa glevas ur vouezh laouen o lavarout hec'h anv dezhi : he breur Jobig a oa ouzh he gervel... Anavezout a reas e vouezh raktal, ha ne voe ket pell o tonet er-maez eus al lochenn. Chom a reas sebezet-mik o welout he breur gwisket evel ur priñs o tiskenn eus ur c'harreoz kaer-meurbet hag o tont d' ar red da boket dezhi : « O ! Jobig, emezi. Pegen kaer ez out gwisket ha pegen brav eo ar c'harreoz a zo ganit ! Penaos eo bet tremenet eta da dro-Bariz ?

- Bremaik, eme Jobig, e kontin pep tra dit. Met lavar din penaos emañ kont ganit da gentañ, ha penaos ac'h eus gallet bevañ da unanik-penn amañ ? Moarvat ez eo erru pare an arc'hant ganit ?

- Feiz ! Jobig, eme Anna, alies em eus kavet hir an amzer, pa ne oas ganin. Met gwelout a rez ez on chomet bev hag e c'hellan lavarout n' em eus bet diouer a netra. Evit bevañ e raen stamm, hag oc'h ober stamm e oan adarre pa 'z out en em gavet amañ... Met deus bepred en ti ma c'helli kemerout un tamm boued.

»

35

Goude bezañ distaget e gezeg hag o lakaet da beuriñ war ribl ar c'hoar, e teuas Jobig d' al lochenn ; hag e-pad ma fiche e c'hoar un tamm boued dezhañ, e

kontas dezhi e veaj, e droiou-chase gant ar chaseour kozh ha mab ar roue, ha neuze ar gwall-grogad en doa bet e Koad Boulogn, e kastell ar Ramzed.

- « Mil-rikouret on bet gant Brisefer ha Fil-de-Paille, emezañ. Paneveto n' ouzont ket pelec'h e vijen bremañ: ar pezh a zo sur biken n' am bije bet ar joa d' az adkwelout. Kalz a anaoudegezh vat a zlean d' an Aotrou a oa deuet amañ d' o degas amañ en-trok ouzh hon dañvad bihan gwenn... Met selaou 'ta, Anna. Ne chomi ket amañ e lochenn ar botaouer-koad, bremañ p' am eus kavet ur palez kaer da lojañ. Dont a ri ganin da Gastell Koad-Boulogn, hag eno e vi eürus. N' az po netra d' ober nemet fichañ boued dimp hon-tri, ha diwall ar c'hastell e-keit ha ma vezimp-ni o chaseal... »

Pa voe prest koan gant Anna, e stagjont da zebriñ hag abred ez ejont oa gousket, rak fellout a rae dezho sevel mintin-vat an deiz war-lerc'h, evit mont en-dro da Gastell Koad-Boulogn... Anna a oa stad enni o vezañ m' he doa adkavet he breur Jobig ; ha moarvat e oa un tamm lorc'h enni ivez o vezañ azezet en ur c'harrez eus ar c'haerañ, sterniet outañ eizh a gezeg bleunius a rede evel an avel.

Pan errujont e Kastell Koad-Boulogn edo an daou all ouzh o gortoz ha kalz a joa a rejont da Jobig ha da Anna : - « Bremañ, emezo, e c'hellimp mont hon-tri da chaseal ar pezh a garimp, e-keit ha ma vo an Dimezell Anna o fichañ boued dimp ! »

* * *

E gwirionez e vevjont un toullad devezhioù asamblez e-kreiz ar peoc'h hag an eürusted. Jobig hag Anna a oa kontant-bras o vezañ unanet adarre hag an daou baotr all a rae ivez diouzh o gwellañ evit m' en em blijfe ar plac'h yaouank ganto.

Un nozvezh avat, a-raok mont da gousket e lavaras Jobig d' an daou all : - « Warc'hoazh, paotred, mar kirit ez aimp da chaseal hag e chomo Anna hec'h-unan er gêr da eveshaat ar c'hastell ha da fichañ boued dimp. Bremañ, evel ma ouzoc'h, ez eo diriskl an ti, pa 'z eo lazhet an tri Ramz divalav a oa amañ en hor raok.

- Mat eo, eme an daou all. Warc'hoazh neuze ez aimp ganit da redek ar c'hoad hag e chomo an Dimezell amañ wardro ar gegin ! »

36

Abred eta antronoz vintin, ez ejont en hent gant ar soñj da vezañ distro a-benn kreisteiz... Stagañ a eure Anna gant he labour, hag erru e oa kreisteiz pe dost, hag edo o vont da drempañ ar soub p' en em gavas en ti ur pezh hini gozh bras-euzhus (honnezh e oa mamm ar Ramzed). Tennañ a reas diouzh godell he zavañcher ur voest vihan heñvel a-walc'h ouzh ur voest-vutun, hag e krogas da lakaat prizennou war ar soub : - « Selaou 'ta, va flac'h, eme ar Ramzez kozh da Anna hag a oa eno spontet-kloz, mar levez d' az preur ez on bet o prizenniñ ar soub, neuze e lazhin ac'hanout...

- O ! eme Anna dre he spont - ha c'hoazh he doa mil boan o komz, ken strafuilhet evel ma oa - ne lavarinn netra da zen ebet ; bezit sur e roinn peoc'h war se.

- Mat eo neuze, eme an hini gozh. Met diwall, mar kerez ! ! ! » Hag hi kuit evel ma oa deuet.

Kerkent ha m' en em gavas Jobig er gêr gant an daou all, e lavaras Anna dezho : - « Me ne chomin ket amañ va-unan-penn

- Daoust petra a zo kaoz ? eme Jobig.

- Feiz ! eme Anna. Amañ ez eus bet bremaik ur pezh plac'h kozh hag he deus skoet prizennou er soub d' hen ampoezoniñ, ha c'hoazh he deus va berzet mat ne

lavarjen netra deoc'h, peotramant e lazho ac'hanon.

- Ma ! eme Jobig, me 'gredfe a-walc'h ez eo honnezh mamm ar Ramzed het drammet gant Brisefer ha Fil-de-Pailje, met honnezh ne bado ket pell kennebeut. Warc'hoazh e vo gwelet petra d' ober dezhi ! »

An deiz war-lerc'h, pa oa deuet ar c'houlz da Anna da drempañ ar soub, sede an hini gozh o tiflukañ eus a-drek he c'hein : - « Hañ ! va flac'h, emezi. Lavaret az poa din e rofes peoc'h war ar prizennou, met komzet ac'h eus ha diskuilhet an traoù d' az preur. Peogwir emañ kont evel-se, emeon o vont d' az tebriñ !

- Hola ! gortozit ur pennad ! Ne vo ket debret va c'hoar evel-se ! » Jobig a oa kuzhet a-dreñv an nor gant e chas, hag heñ an hini en doa respontet an hini gozh : « Alo ! Brisefer ha Fil-de-Paille ! drammit honnezh din nemet he fenn ! » Ha Brisefer ha Fil-de-Paille oc'h ober ul lamm war an hini gozh. Ne oant ket bet pell ouzh he fontañ, evel m' o doa graet d' ar Ramzed, he mibien.

Kerkent e teuas an daou baotr an en ti : - « Hañ ! emezo, bet ac'h eus an hini gozh ivez ! Mat a-walc'h 'zo bet graet d' al loen lous-se !

- Gwellañ hon eus d' ober bremañ, eme Jobig, eo lakaat penn an hini gozh war ar bern-keuneud da sec'hañ, ha pa vo sec'h, e vo kaset d' ar roue da welout. » Holl e kavjont mat an ali-se. Hogen, me 'zo sur deoc'h e oa aesoc'h da lavarout eget d' ober, rak penn ar Ramzed a oa un tamm mat a bouez ennañ. Gant kalz a boan e teujont a-benn da sevel anezhañ war lein ar bern keuneud, ha neuze ec'h en em lakajont da gas er-maez an dilerc'hioù eus ar Ramzed. Eizh deiz e voent o kas an tammou anezhi er-maez eus an ti, ha poent-bras e oa echuiñ gant al labour-se, gant ar c'hwez ponner a save eus restadoù ar Ramzed.

37

* * *

Un dro bennak e voe sec'h penn an hini gozh hag e voe divizet lakaat anezhañ war c'horre ar c'harreoz kaerañ ha mont evel-se betek palez ar Roue d' hen diskouez dezhañ. Skañvoc'h e oa evel just eget pa oa savet war lein ar bern-keuneud, met ponner a-walc'h e oa c'hoazh da reiñ bec'h d' ar baotred da sevel anezhañ war c'horre ar c'harreoz. Pa voe prest an traoù ha stag-mat ar penn, hag i neuze o stagañ an eizh a gezeg war ar c'harreoz hag i o-fevar e-barzh Jobig, Anna, hag an daou baotr, ha tius hag a-raok war-du Pariz !

Mont a rae ar vrud en o raok e oa bet lazhet ar Ramzed hag e terede an dud a bep tu evit o saludiñ, met 'dal ma welent penn ar Ramzed kozh, e spontent kement ma 'z aent kerkent d' en em glenkañ en o ziez en ur alc'hweziñ an nor war o lerc'h ! A-benn ar fin ec'h en em gavjont e-kichen ti ar Roue hag e redas unan bennak eus ar vevelion da zegemenn ar c'heloù d' ar Roue : - « Sir ! deuit buan da welout. Erru eo ar Breizhad yaouank en ur c'harreoz eus ar re gaerañ, ha war-benn ar c'harreoz ez eus ur pezh penn-den euzhus da welout. Moarvat ez eo deuet a-benn eus ar Ramzed ! »

Hag ar Roue o tont er-maez eus e halez : - « Biskoazh, emezañ, n' em eus bet gwelet penn den ebet kemend-all !

- Hennezh, eme Jobig, eo penn mamm an tri Ramz. Met ar Ramzed o-unan hon eus bet distrujet pell 'zo !

- Ma ! eme ar Roue. Rikouret ha mil-rikouret hoc'h eus ac'hanon, rak bet on meur a wech war-dro kastell ar Ramzed da esa tapout anezho, ha biskoazh n' on deuet a-benn anezho, goude koll soudarded e-leizh oc'h ober brezel dezho. » Graet e voe da Jobig ha d' e c'hoar Anna ha d' an daou baotr all antren er palez, ha graet e voe lein vras en o enor. Pedet e voe aotrounez vras hag itronezed bras da zont da leinañ asamblez ganto ha da glevout Jobig o kontañ e droioù e Kastell Koad-Boulogn. Pe voe echu pred, e savas ar Roue hag e lavaras : - « Ne welan ket kaer penaos digoll Jobig, ar Breizhad kalonek-se, eus ar pezh en deus graet evidomp. Dezhañ evel just, ez eo Kastell Koad-Boulogn, rak hen

gonezet a-walc'h en deus, ne gav ket deoc'h ? Met un dra all a ginnigan dezhañ, mar kar asantiñ. O klask un den a feson edon evel pried d' am merc'h henañ ; hen kavet am eus : Jobig an hini eo. Ha mar kar e c'hoar Anna e vo graet amañ a-raok pell un dimeziñ doubl, rak en oad emañ ivez va mab henañ da zimeziñ ! »

38

N' em eus ket ezhomm da lavarout deoc'h e voe erru-mat komzoù ar Roue gant an holl. Jobig hag Anna avat, a oa nec'het un tamm, met n' hellent ket mont enep d' ar Roue hag en doa komzet ken brav diwar o fenn...

Ha nebeut amzer goude e voe prientet an traoù evit an euredoù. Graet e voe an traoù war an ton bras, n' em eus ket ezhomm da lavarout deoc'h, en Iliz hag e palez ar Roue... Ar pred-eured a oa war echuiñ, pa voe gwelet daou gi Jobig o tostaat : Brisefer ha Fil-de-Paille hag e vanas an holl dud sebezetaet o klevout an daou gi o komz ouzh Jobig hag Anna : - « Kenavo Jobig hag Anna ! Ez eomp d' ho kuitaat... Echu eo hor pinijenn... Ni eo hoc'h eontred, ni hag a oa bet karget da ziwall ho traoù hag hor boa debret anezho holl. Abalamour da se ez omp bet degaset a-berzh an Aotrou Doue d' ho tiwall ha d' ho tifenn ha da adreiñ deoc'h hoc'h enor hag ho peadra... Echu eo hor poanioù hag emaomp o vont d' ar baradoz. »

Gouelañ a rae Jobig hag Anna o klevout Brisefer ha Fil-de-Paille pe gentoc'h o eontred o komz evel-se : « Soñj hoc'h eus eus an dañvadig bihan gwenn hag a blije deoc'h kement ? Hennezh e oa ho mamm ! Dre ma oac'h bet fidel da bediñ eviti hag evidomp en deus bet graet an Aotrou Doue an holl vurzhudoù-se en ho keñver ! Kenavo er baradoz ! » Ha kerkent ez eas Brisefer ha Fil-de-Paille diwar wel ha biskoazh n' int ket gwelet abaoe...

Jobig hag Anna m' o doa bet poan o vevañ ur wech bennak ne vankas mui netra dezho, goude ma oant deuet da vezañ mab-kaer ha merc'h-kaer Roue Frañs, met ren a rejont dalc'hmat o buhez en doare d' en em gaout goude o marv, el lec'h ma oa aet Brisefer ha Fil-de-Paille hag an Dañvad bihan gwenn.

Kontet gant Jobig 'n Herri,
Kerhued, Parrez ar Chouerc'hed
Sul 26 a viz Du 1955.

Gweladennourien e Corca Duibhne

gant A. HEUSSAFF

Hanter-kant kilometr diouzh kêr Traigh Li, e kornog ledenez veneziek an DAINGEAN, emañ gouzelva CORCA DUIBHNE. Di ez omp aet da dremen eistez. Kaer eo ar vro gant ar mor hag ar menez tal-ha-tal, heverk evit he hensavadurioù ivez, dinoù-aod ragistorel, klegen ruskennheñvel, mein-ogam ha penitioù milvloaziek.

Tremenet omp e-biou da lenn-vor vrav an Daingean, ul lec'h anavezet-mat, me 'soñj, da veur a besketaer e Breizh. Un nebeut meinhir a zo amañ hag ahont er parkeier. Gwez palmez a gresk el liorzhoù, glas o delioù ha tev o c'hevoù ur souezh !

En ur stal ispiserezh e bourc'h Fionntraigh e c'houlennomp diskleriadur diwar-benn Baile An Fheirtérigh, ur vourc'hadenn er walarn. Ar c'henwerzhour a oar iwerzhoneg mat. An tolead, emezañ, a zo leun a ziavaezidi. Met e meur a di estreget an ostalerioù e c'hellimp kavout lojeiz. Traezhennoù brav a zo du-hont ivez.

Pignet da benn ur grec'henn, e tizolomp ur c'hombod ec'hon bevennet gant mor ha menez : setu Corca Duibhne vrudet. Er reter emañ Menez Brennan, an eil en Iwerzhon gant e vil metr uhelder : du-hont en nec'h, a gonter, e teuas da Sant Brendan gweledigezh ag un tir nevez, hag e tivizas mont da verdeiñ war-du ar c'hornog, pell en donvor. Tostoc'h, e harz ur run manek emañ peniti Galliorus, miret-mat e vogerioù maen dibri hag a stou etrezek ar c'hreiz da ober bolz an doenn, ur savadur damheñvel ouzh ur pikol bag troet war he genou. Er c'hornog, e-kichen Beg-Douar Sibil e chom dismantrou ur c'hastell da zegas soñj eus Piarais Feirtérigh, ar barzh gouzelek a orin norman a vrezelias a-enep Cromwell betek ken e voe paket ha krouget. Er c'horn-bro-mañ, gwarezet gant an uhelennoù, eo chomet bev ar gouzeleg.

Kinnig a ran tremen hep komz saozneg keit ha ma vimp amañ. Ne ran-me c'hoazh nemet drailhañ gouzeleg, ha moarvat e vo diaes-tre din kompren tud ar vro. Met alies a-walc'h em eus lavaret e vije dleet mirant ouzh ar re na ouzont ket ar yezh da zont er Gouzelva. (Amañ e hucho an engroez warnon !) Eveljust ne hellfed ket kas un hevelep mennad da benn er stad iwerzhonat evel m' emañ.

40

Ur paotr yaouank a zo azezet e-unanik war ur vogleuzenn, e gasketenn velen-koaven sanket don gante war e zaoulagad.

« Ha gouzout a rez pelec'h e kavfemp lojeiz ? »

Diskouez a ra gant e viz :

« Sell, an ti-hont gant tri siminal ! - eno e tegemerer gweladennourien. »

Hag e hop war hol lerc'h evit bout sur m' hon eus komprenet.

An ti a zo e penn ur c'hentr-menez hag en deus kuzhet Baile An Fheirtérigh diouzh hor gweled betek hen. War an talbenn ez eus skrivet kempenn « Dun Ciomhan », hag indu ar voger, en-dro d' an nor ha d' ar prenester, a zo fichet gant kregin brennig ha meskl. Ur pikol maouez a zeu war hon arbenn. Degemer he deus evidomp, daoust ma 'z eo leun he zi gant herberc'hidi.

N' eus ket a zour-red. An tredan n' eo ket bet degaset c'hoazh betek amañ, rak re goustus e vije evit an niver a dud hag a vefe prest d' heñ kemer. Daoust da se e plij deomp al lec'h. Diouzh hor c'hamb e welomp ar menezier er reter, hag an tonnoù o strinkañ uhel war ar reier.

An darn vrasañ eus an herberc'hidi, anezho skolaerien ha skolidi, beleien ha kargidi, a zo deut amañ da wellaat o iwerzhoneg e-ser tremen o ehan-labour.

Ar plac'h a vez azezet en hor c'hichen ouzh taol, an Dim. H..., n' he deus ket nec'h gant dazoned ar yezh e Corca Duibhne. An holl vugale tro-war-dro, emezi, a gomz iwerzhoneg. Da skouer, bez' e oa teir merc'hig o lenn ur gelaouenn e saozneg, hag int oc'h addisplegañ ar c'heleier en o yezh an eil d' ar re all. Ha n' eo ket an dra-se un arouez a nerzh ? Koulskoude e vrouez an dimezell, pa n' eus kelaouenn bemdeziek ebet en iwerzhoneg. Tregont vloaz goude ma 'z eo bet dieubet ar vro, pe da vihanañ kemeret renerezh o aferioù gant Iwerzhoniz !

Hi a vez alies war-lerc'h he fredoù o terc'hel kaoz gant « gour an ti ». Ur c'harned a vez dalc'hmat ganti, ha raktal, pa gouezh ur poz divoas diwar e ziweuz e ra dezhañ displegañ ar ster hag e tastum notennoù, aketus. Eñ a zo anezhañ un den parfet. Ne dro ket war-du ennoc'h pa vez o komz : e selloù a bar eeun dirazañ, tra ma striv da daolennañ spis an darvoudennoù. Anaout a ra doareoù an dud hag ar vro. Ha mailh eo war rannyezh Corca Duibhne, pezh a laka muioc'h a weladennourien da zont d' e di. Me ' gav din e plij dezhañ diskouez d' an « dud desket » e oar muioc'h egeto war an dachenn-se.

41

Lavaret em eus ec'h anavez mat doareoù ar c'horn-bro. A-wechoù, koulskoude, e teu ar pour grizioù hag all gantañ.

« Sell, » emezañ, en ur ziskoachañ ur votailhad hanter-leun, « an dour-se a zo deut eus kern menez Brennan. Ur feunteun a zo eno ha ne da nepred d' an hesk.

- Daoust ma n' eus menez all ebet ken uhel war-hed ugent lev ? » emezon, diskredik. « Ar feunteun n' hall ket bout tre war ar c'hern !

- Eo, tre en nec'h.

- An dour-se ne ra ket kaer diouzh lezennoù an natur, neuze.

- Ur feunteun santel eo, ivez. »

« Gour an ti » n' eo pignet gwech war gern menez Brennan, se en deus anzavet.

Ouzh ar memes taol ganeomp e vez un den na gomz ket pa 'z eomp war an iwerzhoneg, daoust ma chom darev da vouc'hoarzhin. Rak hegarat e vez bepred. Ur mell pezh gwaz nerzhok, gwisket skañv, dic'houzougenn.

« Ne gompren ket iwerzhoneg, » eme an Dim. H..., « met galleg a oar. »

« Mar karit, neuze, » emezon, « n' eo ket dav komz saozneg amañ. »

Graet em eus ur riskladenn : an den a zo anezhañ ur pastor saoz ! Bep hañv e teu amañ da dremen ur mizvezh, e-mesk ar re a glask tro da gomz iwerzhoneg nemetken.

Un hevelep tra am eus gwelet o c'hoarvoud alies. Unan a veze en hon touez na ouie ket brezhoneg. Evit bout seven en e geñver ez aemp war ar galleg. A-walc'h e veze unan evit lakaat an holl da c'hallegañ. E seurt degouezh ez on bet tuet atav da vout diseven.

Amañ e « Dun Ciomhan » n' eur ket nec'het o komz iwerzhoneg dirak ar pastor. Ha ne daver ket kennebeut war an tabutoù a zo etre Iwerzhon ha Bro-Saoz. Dres d' an deiz ma 'z omp degouezhet ez eus deut keloù a-zivout taol-kaer an IRA war gazarn Arborfield. Den ebet ne zisklaer fraezh e soñj diwar-benn an IRA, met anat eo ez eus lorc'h en darn vrasañ gant kenvroiz ken dizaon. Pizh e selaoount ar skingomz evit gouzout ma teuy an argaderien a-benn d'en em dennañ. Ar pastor

a vousc'hoarzh. Evel ma ne vije kur Arborfield netra nemet ur c'hrog-gouren etre un Tommy hag ur Paddy, hag hemañ o paouez reiñ un taol biz-troad yac'hik d'egile. Kudenn ar Rannadur a vreutaont adarre - en un doare untuek, diglok. Ha c'hwi a gred deoc'h e lavarfe ar pastor ur ger bennak da ziskouez tu e genvreudeur brotestant ? Re seven eo. Gouzout a ra e c'hellfe aes-tre anoaziñ ar re all, rak ur gudenn relijiel, pe kentoc'h, ilizel, eo e gwirionez. Iwerzhoniz ne garont ket burutellañ seurt traoù.

42

Meur a droiad hon eus graet war ar maez hag en aod. E pep lec'h war ar c'hleuzioù e kresk stank-ha-stank ar bodennoù fuchsia gant o bleuñv ruz ha mouk kaset-degaset en avel feuls evel ar gwesped a zarnij dibaouez en-dro dezho.

Amañ hag ahont ez eus bet savet morgleuzennoù kempenn gant bili bras klenket a-renkennadoù war o c'hant, a-veskell an eil d'eben, en doare ma reont ur patrom « askorn-brezhell ». Meur a di a zo fichet e dalbenn gant kregin liesliv. An enskrivadurioù war stalioù ar vourc'h a zo en iwerzhoneg peurvuiañ. Iskriv eo lenn « National School » war an ti-skol, savet, gwir eo, er c'hantved all. Gorrek e kemm traoù 'zo en Iwerzhon.

Un endervezh emamp aet da ober tro « Penn ar Menez ». O pignat eus Fionntraigh war-du ar mervent e tizoloomp tamm-ha-tamm un aridennad menezioù en tu all da vae an Daingean. Tre er penn pellañ e spurmantomp tri bre : krugoù Mac Gilli Cuddi, e-kichen Cill Arne. An arvest war-du ar biz a zo ken meurdezus all gant Menez Brennan ha Beann Fhosciath, a seblant uhelaat dre ma pellaomp.

O tiraez penkêr Fathan, e penn ur grec'henn, e kavomp ar mor diouzhtu e traoñ ur park tirienn. War gleurenn ur post gwenn ha gwer eo skrivet : « Dun Beg ». Aze, war ur beg-douar tric'hornek ez eus miret-mat un din-aod bet savet n'ouzon pet milved 'zo, gwarezet diouzh tu an douar gant tri rakkleuz hag ur voger ramzel dibri, ha diouzh tu ar mor gant un torraod a ziskenn plomm ugent pe dregont metr. Merzout a ran ur meni fallijenn em divesker, o tizoleiñ, goude dont en diabarzh dre un toull dor-dal trapezek, a-daol-trumm an dour lusk-dilusk er c'hondon, war an dorn dehou.

Pell war an dremmwel e wint ar Skellig e dri bann, evel ur stivell liesstrilh, er-maez eus ar mor. **Ul** lec'h eus an dibab e oa ar roc'h-se d'ar venec'h a glaske gwechall bevañ ur vuhez c'harv digenvoud dirak an didermen.

A-ziadrefñ « Penn ar Menez » e tiskoach Inizi ar Blaskedi. Don war hon dorn dehou ec'h eonenn al lanv war ar reier, a-us d' an hent e valir ar c'herreg.

Ar Blasked Bras en em astenn en tu all d' ur strizh roc'hellek, nepell diouzh porzhig Dun Cinn. Ar pep brasañ eus an enezenn n' eo nemet douar divat, ha taouarc'hegi ouzh torioù ur c'hein-menez hir. Met er penn tostañ, ha gwaskedet diouzh an avel vervent, ez eus dek ti bennak bochadet, gant parkeier tirienn kosteziet en-dro dezho. Holl int didud bremañ warbouez unan. Daou vloaz 'zo e roas ar Gouarnamant mereurioù d' an enezidi war an douar-bras, goude an droukverzh o doa bet gant o chatal hag o feskerezh. Evelkent, un tiegezhiad a nac'has dont kuit. Hag an darn vuiañ eus an annezerien gozh, ivez, a vir o deñved war ar Blasked Bras hag an enezennoù all. Diouzh an hañv e tistro ar wazed di, evit legestreta.

43

Ma fell deoc'h lenn ul levr a vez taolennet buhezek-tre ennañ doare-bevañ tud ar Blasked ec'h erbedin deoc'h « *Fiche Blian Ag Fas* », gant Muiris O Suileabhain. Troet eo bet e saozneg, « *Twenty years a-growing* » (M. O' Sullivan). E gwirionez, gonezet en deus brud etrevroadel.

D' ar mare ma voe degaset an enezidi war an douar-bras e konted un tregont bennak anezho. E-leizh a dud dizimez, kendirvi an eil rummad d' ar re all. Ne oa mui nemet ur bugel en o zouez. Gwechall e teue yaouankizoù ar Blasked da zañsal betek **Baile** An Fheirtérigh. Met abaoe meur a vloavezh ne felle ket mui da zen mont du-hont da giañ a-gevret ganto.

E Beg Sibil, er walarn a v-Baile an Fheirtérigh, e sav an torraod daou c'hant metr a-us d' ar mor. Pignet omp d' an nec'h gant un tor a gresk warnañ lann korrik ha brug podet-kaer. En avel glouar hon eus azezet evezhiek war benn ur roc'h, hag arvestet evel diouzh ur c'harr-nij, ouzh an doureier du o koeñviñ war ar c'herreg kuzh, ar skreved o risklañ ingal a-dreuz ar chadennoù eon, ha pelloc'h skeudennoù ar c'hogus dispis e donder ar mor. Tre e penn ar beg-douar o deus kizellet an tonnoù ur stumm hañval ouzh ur vaouez troet war-du ar mor gant he daouarn juntet dirazi. Skeudenn ar Sibylla ?

O tont en-dro hon eus kejet gant un den azezet war an draezhenn, e sellou seder paret war ar menezier. Gouezet hon eus e oa ur skrivagner anezhañ - Bryan Mac Mahon. Bez' emañ bet e St-Malo ha Dinarzh.

« Eno, » emezañ, « e welis paotred o skignañ kelaouennoù. Setu ma teuas soñj din eus Emsav Breizh. Goulennet em eus petra a raed evit frankiz politikel ar vro. »

« Chtt ! » eme an den, « deuit a-gostez 'ta. ma tisplegin deoc'h ! »

Se a oa tri pe bevar bloaz goude ar brezel. War-lerc'h koan ez omp aet da v-«Brugh Na Graige », tri miltir diouzh ar vourc'h, d' ur c'héili. Un ti nevez a zo bet savet du-hont e-tal an aod, evit krennarded ha paotred yaouank a fell dezho boaziañ gwelloc'h ouzh an iwerzhoneg. En traoñ ez eus ur sal vras evit ar bodadennoù, hag en nec'h ur c'housklec'h.

Ur beleg a zo e toull an nor o reiñ degemer da bep hini hag e tiskouez e pelec'h azezañ. Ar c'horoll a ya en-dro diouzh sonerezh un akkordeon hag ur violon. Etre an dañsoù e vez kanet sonioù iwerzhonek. Goude m' en devez distaget un den e ganaouenn e c'houlenner outañ kanañ un eil. Se a ya da heul ar stlakadeg-douarn. Adarre e c'heller merkañ ez eo tuet ar Gelted dre vras da ganañ a-unanoù, tra ma kav gwelloc'h ar C'hermaned kanañ a-gevret.

44

Souezhet on bet o klevout ez eus un Islannad er sal, deut amañ da zeskiñ iwerzhoneg. Distaget en deus div sonenn verr goude reiñ o zroidigezh e saozneg. Me am eus komzet gantañ war-lerc'h. Studiañ a ra ar yezhoù en Oslo, dindan ar C'helenner Sommerfelt. Islanniz a zo douget kalz evit Iwerzhoniz. Derc'hel a reont koun e oa tud eus ar vro-mañ en Islann a-raok donedigezh ar Vikinged.

Bryan Mac Mahon a zo deut d' ar c'héili, ivez. Kinniget en deus ma kanfen ur sonenn vrezhonek. En em gavout a ran gwall-luget, rak ma c'hanaouennoù a zo peuz « verglet ». Roet em eus ur c'hrennad eus An Alarc'h, goude diskleriañ ster ar werzenn, en iwerzhoneg evel m' o deus goulennet ouzhin. Fellout a rae dezho gouzout c'hoazh penaos emañ kont gant Emsav Breizh, ar c'helaouennoù, ar yezh, ha keñveriañ gant stad an traoù en Iwerzhon. Emsav Breizh, daoust ha ne ouzont ket... ? Lavaret em eus emeur oc'h urzhiañ hag oc'h adsevel, oc'h embann kelaouennoù ha komzet eus an heskinerezh. Teurel ar garez war gein ar C'hallaoued a zo aes, anzav pegen rouez eo ar Vrezhoneg galonek ne garer ket ober, avat.

Un Dulennad yaouank, treut evel ur c'hilhog-bloaz, a zo ganeomp e « Dun Ciomhan ». Komz a ra iwerzhoneg gant ur « blas Bla Cliath » da droc'hañ gant ar gontell. E venoz en deus graet da bignat war Menez Brennan. Aet eo da neuñ diouzh ar mintin en ur mor rust, ha redet tri miltir war an draezhenn evit prientiñ e gigennoù. Da ziv eur ez eo diloc'het, ha da c'hwec'h eur e oa distro, an dour-c'hwez o pizenniñ war e zremm.

« Ha petra ac'h eus kavet war ar c'hern ? » emezon.

- « Ur groaz, hag ur seurt san-maen, n' eus banne dour ebet e-barzh. Ar feunteun n' em eus gwelet roud ebet anezhi. Latar a zo deut.

- Ma n' emañ ket du-hont, emañ war ur c'hern all marteze, » eme an Dim. H.

* * *

Berr eo bet hon amzer e Corca Duibhne. N' hon eus ket bet kalz darempred gant tud ar c'horn-bro, met ar re hon eus bet tro da gomz ganto a ziskouez bout eeun ha digor a spered. Ober a reont gant o gouezeleg hep kaout mezh. E rannoù all eus ar Gouzelva e troont alies da gomz saozneg ouzoc'h, war zigarez ez eo iskis ho pouez-mouezh pe ho kerriadur. E gwirionez e vezont feuket, pa soñjont e kav deoc'h ne ouzont ket saozneg. Hag e-lec'h ma 'z int peuz dibourvez e teuont deoc'h alies dre drut ha gwidre, evit gonit un dra bennak diganeoc'h. Amañ e Corca Duibhne o deus danvez a-walc'h evit mirout o lorc'h. O ziez a zo dalc'het e-ratre, ha kempenn an trowardroioù anezho. Ar vugale a vez dilhad naet warno, ar ouenn dre-vas a zo neuziet-mat. Souezhet on bet o welout pegen stank ar baotred yaouank a vod er vourc'h diouzh an abardaez, evidon da c'houzout ez eus darn anezho marteze ha n' emaint er gêr nemet evit o ehan-labour.

45

Rak, evel er peurrest eus Iwerzhon, n' eus ket labour a-walc'h evit an holl war an dachenn. En ur gouent e Baile an Fheirtérigh o deus savet seurezed ul labouradeg d'ober stamm ha broderezh hag a ro implij d' un dek pe bemzek plac'h. Traoù brav a reont, da skouer goleier-torchenoù gant bleuñioù brodet e livioù tomm dibabet ez vlizidik. Met n' eo ket a-walc'h. « Ret eo deomp deskiñ mat saozneg, anez-se ne c'hellimp ket kaout labour dereat pa rankimp mont kuit da c'honit hor buhez. » Ar vreutaenn anavezet-se am eus klevet e Baile an Fheirtérigh ivez.

Koulskoude, daoust d' an arvar a zeu d' ar gouezeleg gant ar vicherourien o vont-dont etre Corca Duibhne hag ar broioù saoznek pe saoznekaet, an aergelc'h a zo yac'h c'hoazh e-keñver poblañs ha yezh. Ne gav ket din ez eo deut amañ « an abardaez-noz keltiek ».

PREDERIADENNOU E SIGUR UN NEBEUT SKRIVAGNERION VREZHONEK

gant Youenn OLIER

Pennad XIV

Barzhed nevez ha skrivagnerion goude ar brezel 1939-1945

I

Er pennad-mañ e karfen komz eus skrivagnerion o deus kroget da embann o skridoù war-lerc'h ar brezel diwezhañ, hag a-ziarok eus un nebeut barzhed ha n' em eus ket bet tro da gomz diwar o fenn betek-hen. Ne vennegin ket ar re am eus savet pennadoù diwar o fenn.

Bez' ez eus un « Urien Riwallon » a embannas gwechall e-barzh « Barzhaz Gwalarn » daou bezh am eus karet kalz : « Nedeleg ar soudard » ha « Pedenn ar Varc'hegourion ». O eeunded lidel ha gredus war un dro a oa boemus. Bez' ez eus ivez Alan hag a embannas en teskad-se dres hag e-barzh « Sav » un nebeut pezhioù hag a oa koant petra bennak ma oa skors un disterañ ar stumm anezho. Siwazh a-hend-all, re voan eo oberenn an daou varzh-se evit ma c'hellfemp prizout da vat o ijin.

Pouezusoc'h eo oberenn ur varzhez e-giz Benead. Unnek barzhoneg bennak he deus embannet. En displegerezh anezho e kredan merzout tres levezon Langleiz ha Maodez Glanndour. A liv gant hini ar varzhed-se eo awen ar varzhez-mañ. Ar pezh a zo dezhi eo lusk dibar ar varzhoniezh-se hag a zo « diabarzheloc'h » eget hini ne vern pe varzh brezhonek all : n' eus enni nemet buhez ene hep plas ebet d' an diavaez. A dra sur e c'heller kavout eo gorrek a-wechoù an displegerezh, un tammig dizampart ur wech bennak peogwir eo anienek kentoc'h eget meizek. Met kejout a reer ivez gant tarzhadurioù brav ma verzer a-dreuz dezho flamm un trivlierezh don e-lec'h eo unanet kaerderioù ar ger hag ar c'hellusk evel :

Hag-eñ 'kavi dindan pep gwri, ar pok kuzhet
Gant daouarn krenus da vatezh...

pe

Anavezout a rez
dremm ar goañv el liorzha dilezet

En amzer-da-zont ne c'hellor ket sevel un teskad eus hor barzhoniezh hep menegiñ pezhioù ar skrivagnerezh-mañ.

Ret eo degas da goun he deus savet Benead un toullad pennadoù ha studiadennoù, buhez-skridoù sent vreizhat, dreist-holl e-barzh « Studi hag Ober » ha « Kaieroù kristen ». Taolet em boa evezh ivez ouzh ur studiadenn diwar-benn « Ar merc'hed el lennegezh brezhonek » deut er-maez e-barzh « Al Liamm ». Karet em befe lenn an eil lodenn anezhi.

Bez' ez eus barzhed all e-leizh en hol lennegezh abaoe ar brezel 1914-1918. Hogen, peurliesañ, goude m' o deus ijin, eo berr o awen. Lakaomp Yann Eozen Jarl. War-lerc'h bezañ chomet dilavar e-pad ugent vloaz bennak en deus embannet ur « vBarzhoneg » e 1943 e-lec'h e tiskouez perzhioù skrivagner heverk ; stumm nerzhus, tres ur striv arzel warnañ helavar, daoust m' eo rust ha diblaen a-wechoù. Perak n' en deus ket ar skrivagner-mañ kendalc'het da skrivañ ? Herve Konan en deus embannet ivez ur pemp barzhoneg bennak e-barzh « Studi hag Ober » ha « Tir-Na-Nog ». Livus ha diavaezel kentoc'h eo ar re a zo bet moulet er gelaouenn gentañ ; donoc'h ha ledanoc'h ar re a zo bet embannet e-

barzh eben, petra bennak m' eo un tammig re blaen an displegerezh anezho, a gav din. (Menegomp ivez ur studiaden diwar-benn Sant Padrig deut er-maez e-barzh « Kaieroù kristen » gant an hevelep skrivagner.)

Pezhioù koantik holl o tam-livañ an natur, o treuzneuziañ anezhi en un doare kaer kenañ en deus savet Reunan ar Mougn e-barzh « Kraksonennoù ». Un arouezelezh kuzh a bar a-wechoù, er werzenn-mañ da skouer :

Ludu fouet va flijadur...

Goude ar brezel diwezhañ he deus advleuniet ar varzhoniezh en hor bro. Un toullad barzhed nevez o deus staget da voulañ o labour.

Barzhonegoù Blerger o deus dedennet evezh al lennerion muioc'h eget re all marteze. Hag ur pezh evel « Davet ar Vro » (1) en deus, sur mat, ur gened iskis, hep netra meizel ennañ, merkit mat : ar barzh en deus adsavet ennañ un aergelc'h huñvreel gant tem an harlu ha kement doan a zo enklozet en harlu-se. Un oberenn arzel tre hon eus aze, e-lec'h e tiverzer a-hend-all koun « Karr Ahes » embannet gwechall e-barzh « Studi hag Ober ». « Tri fezh an toullbac'had » a zo disheñvel : sklaer eo an displegerezh. Amañ c'hoazh avat e santer labour un arzour hag a oar pouezañ ul lavarenn ha kenurzhañ ur c'hellusk, hag a chom bepred mestr war e oberenn.

(1) « Al Liamm » niv. 15.

48

Barzhonegoù F. R. embannet e-barzh « Al Liamm », a zo dibar ha digevatal. Merzadoù brezel er Reter Pellañ eo an danvez anezho, ar joa bezañ bev, ar joa bezañ trec'h ha yaouank ivez. Kement-se holl a zo diavaezet a-dreuz taolennadurioù ha notadurioù pinvidik kenañ o rentañ en un doare bev tre an natur pell-vro ha marzhus da sabatuiñ, gant ul lañs trivliek n' eus ket kalz par dezhañ : gouzout a ra ar barzh tennañ un implij efedus meurbet diouzh ur geriadur ledan ha livek, diouzh kengloterezh ar sonioù hag ar c'helluskoù o un. Spi a ranker kaout e kendalc'ho ur seurt barzh da skrivañ.

Gwionvarc'h a zo ur barzh yaouank all hag a zellez bezañ meneget. Soñj am eus ag ar pezhioù barzhoniezh a embannas gwechall war Arvor. Diskouez a rae bezañ gouest da skrivañ en ur yezh pinvidik ha skeudennek harpet gant un trivli gwirion. Ne gaver ket mui an hevelep entan er pezhioù moulet war « Al Liamm », evel « Ramzed Flandrez », h.a. Ur stumm nerzhusoc'h, ur werzenn asuroc'h, gant an hevelep geriadur skeudennek a zo dezho avat. Setu c'hoazh ur skrivagner a bado da sevel un oberenn, spi am eus.

N' eo ket bet Per Denez ur barzh a-raok pep tra. Padal en deus savet un nebeut pezhioù hag a ziskouez eo donezonet brav evit ar varzhoniezh : netra eeunoc'h eget stumm « Kanenn da Zahud », a-hend-all, e-lec'h eo diavaezet an trivliad dizolo kaer, kuit a glaskerezh gerioù na kelluskoù resis. O gwirionded a ra dreist-holl o zalvoudegezh, ha ne lez ket kalz a blas d' an arz. En un doare e plijfe din muioc'h « Daouzek a viz Kerzu » : eno en deus kavet ur stumm berr ha nerzhus o wiskañ dres an trivliad garv gant stokataerezh rust ar c'hellusk.

Kontadennoù en deus savet ivez Per Denez, lies a-walc'h o doare a-hend-all. « Rozenn diwezhañ an hañv », an hini gentañ a laka al lenner da gounañ « An dour endro d'an Inizi » hag a zo a-hend-all evelti ur gontadenn garantez, taolennadur peurwirion an trivliad-se a zo he ferzh pennañ ivez.

Gwelloc'h hag arzeloc'h eo « An den moal ». Ar stumm n' eo ket diakuit un disterañ evel ma oa hini « Rozenn diwezhañ an hañv ». Ur stennerezh a zo en dezrevell hag a zere mat tre ouzh dramaegezh visterius ar gontadenn. Paket eur gant an danevell, ha rediet da heuliañ betek ar penn an dibunadur anezhi. Gouezet en deus ar skrivagner rentañ mat tre ar from a zo er gouzout ho kortoz un tonkadur didec'hus. Eveljust ez eus aze levezon ur skrivagner evel Edgar

Poe : ho pezit soñj eus an troidigezhioù diwar ar skrivagner-mañ gant Per Denez e-barzh « An Avel ». Merkit avat ez eus ivez un arouezelezh a c'heller aes a-walc'h diverzout ar ster anezhi er gontadenn-mañ (a gav din da nebeutañ) : an den moal a zo ar bourc'hiz a zo e pep hini ac'hanomp hag a c'hortoz e dro da zistroadañ an Emsavour hag an Awenad a zo ennomp ivez. N' eo ket ar gontadenn-se eta netra nemet ur gontadenn bolis burzhodus.

49

Setu dres pezh ez eo an danevell hir embannet gant Per Denez dindan an talbenn « E peoc'h an nevez-hañ ». Petra lavarout a-hend-all diwar-benn ar romantig-se ? Ez eo klasek tre e frammadur da gentañ : lakaat a reer al lenner da ziankañ betek ar penn e-lec'h eo diskoulmet ar gudenn en diwezh... Seurt frammadur a zo ret holl : derc'hel a ra al lenner war evezh atav ; war var kousket e vije a-hend-all. Bez' e c'heller meuliñ meur a dra all ivez : treset mat eo tudennoù (1) ar romant ha diforc'h an eil diouzh egile. Kement-se a rofe a-walc'h da grediñ ez eus e Per Denez danvez ur romantour gwirion.

Taolennet mat eo ivez al lec'hiennoù ha prizet em eus livadurioù brav eus maezioù gorre Breizh, tro-dro da Blegastell ha Roazhon (evel e-barzh « En ur rambreal »). Aroueziañ a ra an dra-se e teu hol lennegezh da vezañ hini Breizh a-bezh. Meneget em eus romant Kerwerc'hez : en ur c'heñver all e tenn danevell Per Denez dezhañ. Anv a zo enni eus an emsav hag an dra-se a zo c'hoazh ur merk-anaout eus hol lennegezh abaoe 1925.

Kalz ledanoc'h eget se eo oberenn Per Denez. Skrivet en deus paot a bennadoù kelaouennerezh-stourm pe diskleriañ, lod anezho heverk gant o gred helavar; studiadennoù ivez e-giz an hini en deus savet diwar-benn De Valera ; un niver vras (re vras d' am soñj) a droidigezhioù a bep seurt. An hini gaerañ a zo, hep mar ebet, « Aquis submersus ». Ar stumm-skrivañ anezhi a zo ur c'hemmesk brav a boblelezh hag a lennegelezh. Evit echuiñ, kavout a ra din ez eo Per Denez ur gwir skrivagner, unan hag a zo bet galvet da skrivañ e gwirionez, ha na baouez ket a labourat. Hetiñ a ran e c'hellfe reiñ deomp en amzer-da-zont romantoù ma livfe enno korn-bro Douarnenez a anavez mat hep disoñjal evit se hini e gavell.

(1) « personnages ».

50

Ur skrivagner evel Klerg en deus embannet nevez 'zo div gontadenn hag a ro da soñjal ez eus ennañ danvez ur c'honter par d' ar re wellañ. E zoare a zo heñvel a-walc'h ouzh hini Kate Roberts e Kembre. Da gentañ e-keñver an danvez : dremm griz ar vuhez a zizolo er a-dreuz darvoudoù pemdeziek hag a c'hoarvez war ar maez gant tud eus ar bobl. En arz ivez : dibab a ra un degouezhenn a dremen e berr amzer en ul lec'h hepken hag he displegañ dre ar munud ken e hañvalo bezañ gwirvoudel rik. Salv ma kendalc'ho Klerg da sevel oberennoù all. Bez' e c'hellont dont da vezañ unan eus hor gwellañ konterion ha reiñ deomp, war-lerc'h Jakez Riou, un daolenn vev eus buhez hor pobl war ar maez e Breizh.

Ar saver pezhioù-c'hoari brasañ hon eus bet abaoe amzer Tangi Malmanche eo bet Jarl Priel. Un dra iskis a-walc'h hag a zo da verkañ diouzhtu a-hend-all eo en deus embannet nevez 'zo hepken e oberenn hag eñ deut war an oad endev. Kalz meuleudi a zleer da « Al Liamm » hag ar rener anezhañ, Ronan Huon da vezañ roet tro da Jarl Priel da voulañ ul labour a-bouez, ar wir « oberenn » nemeti a gement a vije bet embannet abaoe ar Brezel. Adal an « Dakenn dour » betek « Kleñved an Togn » en deus savet ar skrivagner-mañ c'hwec'h a bezhioù-c'hoari a bep doare : « Ar spontailh », « Tri devezhour evit an eost », « Endro da Vari Sent », « An Ankou », « Paotr e varv ruz », « Gwener ar Groaz ». Eizh eta en holl.

Da gentañ, berr a-walc'h eo darn vuiañ ar pezhioù-c'hoari-mañ. Peurliesañ n' o deus ket muioc'h eget ur gevrenn. An hini hirañ eo « Ar spontailh », teir c'hevrenn ennañ. Bez' e c'hellfed o c'heñveriañ ouzh re Roparz Hemon e-lec'h na gaver nemet nebeut a dudenoù ivez.

Perak eo ken berr o ment a-hend-all ? Ar respont a vo roet deomp gant Roparz Hemon en e bennad diwar-benn ar c'hoariva e-barzh « Ur Breizhad oc'h

adkavout Breizh ». Hemañ a erbede sklaereded ar reuzc'hoarioù gallek er XVIIvet kantved : netra evit an daoulagad, pep tra evit ar spered. Sed ar reolenn a zo bet miret amañ ivez : an darvoudoù a c'hoarvez e korf un devezh war-bouez nebeut nemet en « Tri devezhour » hag er « Spontailh » ; studioù ene a zo enno dreist pep tra daoust ma n' eus ket nemet se rak Jarl Priel a ro atav un stern resis d' e bezhioù-c'hoari.

Komz a ran dreist-holl eus e reuzc'hoarioù, an oberennoù lennegelañ. Er pezhioù-c'hoari-fentus eo miret ar reolenn-se ivez eveljust hogen kement-se ne dalv ket kalz a dra. Poblek tre eo o stumm koulz hag o danvez ha ne vefe ket diaes kavout pezhioù-c'hoari fentus savet gant skrivagnerion a-raok ar brezel 1914-1918 hag a dennfe da re Jarl Priel. Padal, ar pezh en deus klasket hemañ da gentañ penn, a gredan, eo tresañ tud ar bobl gant ar muiañ a wirionez ar gwellañ. An dra-se a zo diskouezet a-walc'h gant liesseurtiezh an dud a bar er pezhioù-c'hoari-se : martoloded ha kouerion a bep eil. Ouzhpenn-se eo diforc'h mat ha lies an holl dudenoù (kv. ar martolod enepkloerat e-barzh « Kleñved an Togn »). Un eil tra hen diskouez : ar yezh hec'h un a zo poblek rik, livek ha gros diouzh ret hag a zo melezour eneoù an dud-se, fraost gwirion ; implij ar galleg, e degouezhioù 'zo, a roio muioc'h a wirionez d' an daolenn (e-barzh « An Ankou » ivez a-hend-all). Eveljust eo divizel testennoù ha tud a-wechoù : kavout a reer ar vaouez dimezet fall ha konnarus e-barzh an « Dakenn dour », pe al latenn e-barzh « Kleñved an Togn ». Tem ar paotr da zimeziñ a zo unan poblek ha boutin ivez e-barzh « Mari Sent ». Ne vern, deut eo a-benn Jarl Priel da reiñ deomp ur soñj resis eus pezh ez oa tud ar bobl en Arvor Treger e-kreiz an XXvet kantved, ha pa ne vefe nemet gant ar c'hinkladur a zo diskleriet en un doare pervezh kenañ, hag ar yezh.

50

En hevelep doare en deus Jarl Priel roet liv ar wirionez, d' e zramoù breizhek : lec'hiañ a ra bepred ez spis an darvoudoù anezho hag a-hend-all ez eo poblek ar yezh implijet, dreist-holl er « Baleer-Bro », « An Ankou » ha « Tri devezhour evit an eost ».

Kalz kemm a zo evelato etre ar pezhioù-c'hoari fentus hag ar re reuzius, anat eo. Lennek koulz ha poblek eo ar yezh, da gentañ. Arnodet en deus Jarl Priel, evel pep gwir skrivagner, krouiñ dezhañ e un ur benveg dioutañ e unan, ha na ve ket re bell diouzh ar stumm boutin ha pemdeziek hogen a vefe dezhañ memestra : n' hall ket ur skrivagner bezañ ur sonskriver hepken. An dra-se a zo aes da verzout o lenn « Ar Baleer Bro », muioc'h e-barzh « Tri devezhour evit an eost » hogen dreist-holl e-barzh « Ar Spontailh ». Er pezh-c'hoari-mañ e kavit pennadoù sklerijennet gant ur varzhoniezh askellek ha sioul, e-lec'h e par gwerzennoù amañ ahont, hag un frazennadurezh lennek, pell diouzh an hini bemdeziek ken n'eo mui tregeriek rik ar yezh a-wechoù, da skouer : « E bodoù an halegenn e kane an aezenn... » (frazenn pemp linennad da heul). Pe : « Inizi stlabezet evel bleunioù damc'hlas a rez an dour... » Eneb-livet eo ar pennadoù-se ouzh ar re all ha na gavit enno nemet ar gwirvoud pemdeziek.

Tud wirion eo a-hend-all ar re a zeu dirazomp er pezhioù-c'hoari-se, kouerion hag a anavezet mat dre o yezh, koulz ha dre o emzoug. Garv int, prest da lazhañ pe da skeiñ evel kouerion Jakez Riou : Sellit ouzh emzalc'h an tad e-barzh « Ar Spontailh » pa glev emañ e verc'h o tougen goude bezañ bet touellet ; penaos e ra Erwan evit gwalc'hañ e c'hoantegezh ; gwelit e vennadoù lazherezh ha dialerezh ; gwelit ivez arfleu e vreur Gweltaz pa zeu da c'houzout pezh a fell d' egile e-barzh « Tri devezhour evit an eost » ; enfin, gwelit pegen taer eo kasoni Job ouzh e vreur d' ar mare dres m' emañ henneth o vervel. Aes eo krediñ omp ur ouenn galet, lavaromp zoken, ur ouenn griz.

52

Ar c'hrizder-se avat n' eo ket unan yac'h, evel ma c'hell c'hoarvezout e degouezhioù 'zo : an erez hag ar warizi a zo ar vammenn anezhañ. Gwir eo e-barzh « Ar Baleer-Bro » : Job a damall d' e vamm bezañ karet he mab all muioc'h egetañ. Gwir eo dreist-holl e-barzh « Tri devezhour evit an eost » : Erwan a verv gant ar gourvenn e kement doare a zo. E vreur a zo un den kaer ; eñ a zo ur c'horrig divalav ; hag ar breur-se a zo gwaz ar vaouez a gar-eñ (tem boutin moarvat hogen reuzius er pezh-c'hoari-mañ). Krizder an tudennoù all a zo ken

siet all. An tad, e-barzh « Ar Spontailh » a zo didruez hag emgar. Pezh a vern evitañ eo ez eo bet dispennet brud vat an ti hag e hini dreist-holl gant pec'hed e verc'h. Gweltaz a soñj da gentañ en e zouarou, er gonid, h.a. Kouerion galet, na petra 'ta.

Ne vijent ket denel avat n' o dije nemet sioù. An tad a zo gouest da bardoniñ ivez en diwezh « Ar Spontailh ». Gweltaz a harz ouzh ar gonnar, a ra e seizh gwellañ da sioulaat, da zont mestr warnañ e un, klask a ra teneraat e vreur e gasa gant soñj o mamm hag o bugaleerezh. Henezh a zo teneraet ivez ha bez' e c'heller krediñ d' ur mare e vo tennet diouzh krabanoù ar c'hoantegezhioù vil hag euzhus a dag anezhañ, koulz lavaret.

Un dudenn evel Yann a zo da ziforc'hañ diouzh ar re all : n' eus nemet madelezh ennañ : prest eo da huñvreal, sur mat, prest ivez da garout hep gortoz gopr ebet ha gwest d' en em aberzhañ dre garantez. A dra sur en deus Yann droukrañs a-wechoù : tennañ a ra un tammig da Erwan an « Tri devezhour » ha kar eo zoken da vab henañ « Fest al leue lart ». Met bez' e van ennañ un dinammed dreist-douarel hag a zere mat ouzh e orin marzhek.

Ar merc'hed o unan a zo livet gant kement a wirionez, dreist-holl ar mammoù : God da skouer, prest d' en em aberzhañ penn-da-benn evit he bugel ; pe ar vamm e pezh «An Ankou » a rafe a-walc'h kemend-all hogen a chom denel memestra peogwir ez eo direizh hag emgar en un doare ha dic'houest da vont betek penn hec'h aberzh. Mari a zo ur vaouez all, gwreg dimezet, karantezus ha feal. Erfin ez eus Marivonig hag a zo gouest da reiñ he buhez evit an hini a gar ; bez' ez eus anezhi ur galon dreistordinal, a c'hell muioc'h eget Yann, ar Spontailh, petra bennak m' eo damheñvel outañ, lakaat al lenner pe an arvester da deneraat peogwir eo gwirionoc'h egetañ hag hi skouerekaet un disterañ.

53

Komzet em eus a wirionez temzoù-spered an tudennoù a ziskouezer deomp : ar pezh a ra ar wirionez anezho, evit darn, eo al liested anezho. Nag Erwan na God na Job nag Herri n' int bolomoù graet en ur pezh. Hedro ha kemmus int evel an dud : lusk-dilusk dibaouez o ene zo rentet mat tre ; hini Erwan dreist-holl e-barzh an « Tri devezhour », hag a zo ur wir grouidigezh, par da re vravañ ar c'hoariva europat. En e spered e c'hoarvez ur stourm iskis m' emañ trec'het en diwezh ennañ, hogen a ro tro d' ar skrivagner da aozañ ur wir zrama e-lec'h eo kiriek an den (en diavaez da nebeutañ), d' e donkadur.

Gwirion tre eo an tudennoù eta. Dreistordinal ha marzhus eo an darvoudoù avat. Meizit kentoc'h : ur vamm o werzhañ hec'h ene d' an diaoul evit mirout ouzh he merc'h d' en em lazhañ, un ene ademzenet hag adenkorfet a asant da vervel adarre evit saveteiñ bugel an hini a gar. Damheñvel eo testenn ar « Baleer-Bro » (hini « Alkestis », drama ar barzh gresian kozh Euripides ez eo) : ur plac'h oc'h asantiñ da vervel evit an hini a gar. Ouzhpenn-se e teu dirazomp tudennoù mojennek ha marzhek : an Diaoul, e-barzh « Ar Spontailh », an « Tri devezhour », Kain, Judas hag an Ankou, deut war an douar ; erfin, bez' ez eus an Ankou adarre, e-barzh ar « Baleer-Bro ».

Perak ez eus ar marzherezh-se ? Marteze a-benn reiñ un eneb-efed d' ar gwirliverezh a gaver a-hend-all. Marteze ivez e c'heller diverzout amañ levezon c'hoariva Tangi Malmanche. Bez' ez eus c'hoazh, a gav din, en diazez anezhañ, ar menoz eo boaz ar Vretoned da vevañ gant soñj an tu-hont. (Ur merk-anaout eus an dra-se hon eus e divarzhegezh ar pezhioù-c'hoari n' int ket lec'hiet e Breizh.) Kounit a-hend-all mojenn an Ankou. Bez' ez eus ouzhpenn-se ar mennad da grouiñ un aergelc'h fromus ha reuzius : an tentadur hag ar marv o korfañ a sko muioc'h ar speredoù. Setu an dalc'h, rak an aergelc'h hud-se a zo lakaet da sevel e meur a zoare all : studiit er c'heñver-se implij ar « seblantoù » e-barzh « Ar Spontailh » pe « Tri devezhour evit an eost » (hini ar c'hi o yudal e diwezh ar pezh-c'hoari-se, da skouer).

Perzhioù mat en deus eta implij ar marzherezh am eus meneget diagent : reiñ a ra kig, da skouer, d' ar stourm a zo kaset da benn en ene Erwan, lakaat anat eo daouhanteret ar paour-kaezh den e gwirionez, ken ez eo un darn all

anezhañ, koulz lavaret, hag a ra an torfed en diwezh.

54

Perzhioù fall en deus ivez. Da gentañ, eveljust, e chom divizel an tudennoù-se : n' int ket dramaek drezo o unan. Petra ' fell deoc'h e lavarfe an Ankou diwar e benn e unan nemet ar pezh a zo bet lavaret kant gwech ? Roll an tri Devezhour a bonnera un tammig ar pezh-c'hoari peogwir emañ en o c'harg sklaeraat koustiañs Erwan ha diskouez dezhañ pezh a venn hep gouzout dezhañ, en e is-emskiant. Ouzh hen ober avat e teuont endro war pezh en doa kavet Erwan drezañ e unan. Setu pezh a gav din da nebeutañ. Tamalloù all a c'hellfed ober da varzherezh « Ar Spontailh » : klasket en deus Jarl Priel ennañ mont diouzh an divizelezh hag an arouzennelezh (arouzennoù eo dreist-holl an tri devezhour hag an Ankou) hogen kouezet eo en ur fankigell all : un diaoul folklorik, poblek evel m' eo poblek an Ankou, ez eo eontr Yann : un doare sigoter a zo anezhañ, dizrouk a-walc'h evel Mefisto, ha n' eo ket e lec'h en ur reuzc'hoari a seurt gant hemañ (hag a-hend-all ne gredomp ket kalz ennañ). Ne glot ket ar sigoter-se gant tudennoù all ar pezh-c'hoari gwasket gant an anken. Poan a zo ivez da grediñ en darvoudoù marzhek, hini marc'had God gant an diaoul da skouer (peogwir ez eo kristen God sañset) ha ne gomzan ket eus ar re all.

Setu penaos e c'hellfed burutellañ marzherezh ar pezhioù-c'hoari breizhek. Anzavomp evelato eo deut Jarl Priel brav a-benn da un aergelc'h hud dre ar marzherezh-se, e-barzh « An tri devezhour » hag « Ar Spontailh » da vihanañ.

Dramaoù istorel eo an daou bezh-c'hoari all, « Paotr e varv ruz » ha « Gwener ar Groaz ». Brezel etre ar re Wenn hag ar re Ruz eo testenn an hini kentañ. Gwirliverezh garv a seurt gant hini « An tri devezhour » a gavit amañ. Adarre en deus tennet ar skrivagner un implij brav diouzh ar yezh evit tresañ eneoù rust ha kriz ar soudarded. Merkomp amañ ur wech ouzhpenn pegen liesseurt ha lies eo temzoù-spered an dud a ziskouezer deomp, pegen disheñvel an eil diouzh egile, pegen bev en diwezh : gwirionez al liv a zo war ar vro hag an amzer a ro muioc'h a wirvoudelezh dezho c'hoazh.

Ur gwir reuzc'hoari klasel eo a-hend-all « Paotr e varv ruz » evel « An tri devezhour ». Homañ eo an destenn : un den kiriek penn-da-benn d' e donkadur en abeg d' e demzspered, an hini en deus asantet da gemer goude holl, hag a ra e walleur e unan, ar gwalleur-se a felle dezhañ a-greiz-kalon pellaat dioutañ. An destenn-se a zo e gwirionez hini an drama gresianek brudet, Oedipous-Roue, amañ evel aze e kavit an hevelep heuliad a zarvoudoù didec'hus ereet start etrezo.

Laoskoc'h steuet eo « Gwener ar Groaz » : ur steudad taolennoù staget etrezo gant brud ar C'hrist marv, hon eus amañ. Bez' ez eus un drama evelato. Simon a ra e soñj en diwezh, da heul darvoudoù an devezh da zilezel e stal gere ha da gemm buhez penn-da-benn.

55

Ar pezh en deus klasket ar skrivagner da gentañ, a gav din, eo reiñ deomp ur c'heal eus pezh a c'helle soñjal tud a bep seurt diwar-benn marv ar C'hrist : roet en deus dezho ha d' an amzer ma vevent enni al liv ar gwirheñvelañ ar gwellañ. Er pezh-c'hoari-mañ adarre e tleer meuliñ liesseurtiezh an tudennoù : kejout a reomp war un dro gant un den eus an bobl treuzfurmet gant gras Doue hag a respont a-greiz-holl d'ar galv n' en doa ket klevet betek-hen, Simon, gant an diskibl gredus Eleazar, gant ar soudard Kelt e servij ar Romaned heñvel a-walc'h ouzh « fayoted » a bep seurt ar Gelted a-vremañ, gant Barrabas, an emsaver kriz, war-nes lazhañ bepred, hogen eeun ha kadarn, gant ar Zadukead Zadok, bourc'hiz heugus ha divalav ; ne vank ket zoken ar geben na oar nemet klemm ha garmiñ.

Un dra all en deus klasket ar skrivagner diskouez : penaos n' eus nemet nebeut tre a dud a c'hell merzout talvoudegezh un darvoud meur. Soñjal a rit diouzhtu e pezh-c'hoari Roparz Hemon, « Ur bugel a zo ganet » ha gwir eo e c'heller keñveriañ : likoc'h eo avat aergelc'h pezh-c'hoari Roparz Hemon, hag a hañval a-wechoù ober eus an Aviel un implij a denn da hini ar skrivagner gall Gide : moarvat e soñj Roparz Hemon en darvoud e unan ; hogen soñjal a ra kement, a gredan, en Emsav hag en Emsaverion, en dud veur dianav a zo en hon touez, en

darvoudoù marzhus a zo o c'hoiñ e Breizh ha n' int anavezet gant den. Relijieloc'h eo avat awenadur « Gwener ar Groaz ». Ar pezh en deus dedennet evezh ar skrivagner eo kement-mañ : an enebadur a zo etre an hini a oar sellout pelloc'h eget ar gorre hag an hini na c'hell merzout nemet ar pezh a zo dirak e zaoulagad, evel ur pemoc'h o turiañ teil. Splann eo er frazenn a zo degaset a-ratozh da echuiñ ar pezh-c'hoari : « Soñj am bo eus ar gwener-mañ », a zo ken kriz ar goaperezh anezhi. En devezh muiañ en istor an denelezh n' he deus ar vaouez ken preder nemet gant ar saladenn na zebro ket da goan !

Kalz a vuhez hag a vevder a gaver er pezh-c'hoari-mañ evel er re all a-drugarez da roll ar geben ha da hini Barrabas. Goustad a-walc'h avat eo kaset an darvoudoù war-raok, harzet maz int gant ar pennadoù luraek brav hag helavar lakaet e genou Simon. Dre vras a-hend-all e chom an oberenn verr-mañ unan eus ar re gaerañ ha dudiusañ savet gant Jan Priel.

Ur menoz eo a zo e diazez « Gwener ar Groaz » evel m'hon eus gellet gwelout. Daoust avat hag e c'hellfed kaout krog e menozioù all er pezhioù-c'hoari am eus studiet a-gent. Ne gredan ket. Marteze e c'hellfed empennañ o lenn « An Tri devezhour » n' eo ket kiriek a-grenn an torfetour d'ar pezh a ra. Eus kudenn an tonkadur ez eus kont e-barzh « Paotr e varv ruz ». Honnezh avat ne glasker ket diskoulmañ. En em c'houlennet on ivez ha bez' e oa ur ster bennak gant ar vojenn faltaziet gant an oberour e-barzh « Ar Spontailh », hag anzav a ran on bet hegaset a-walc'h gant ar goulenn-se ha n' eus respont ebet da reiñ dezhañ a gav din bremañ, ma ne faziañ ket. Ar steuenn, er pezh-c'hoari-mañ, a zo bet nezet penn-da-benn e sell an dramaegzh. Ur saver pezhioù-c'hoari eo Jarl Priel, n' eo ket ur prederour.

56

Poent eo klozañ ar studiadenn-mañ. Diarvar eo ijin Jarl Priel : unan eus hor gwellañ skrivagnerion ez eo, unan eus an dibaotoc'h-dibaotañ skrivagnerion a c'hell c'hoazh tennañ implij diouzh ar yezh poblek evit sevel ar yezh lennek : hini eus hor skrivagnerion yaouank ne vev war ar maez, hini n' eo bet savet e brezhoneg er gêr. Pouez an aozer-mañ eo eta bezañ test ur marevezh tremenet hag aet da get a-ziwar vremañ en istor hor yezh hag hol lennegezh.

Evel saver pezhioù-c'hoari zoken ez eo dreist, a gredan da Dangi Malmanche (ne gomzan ket eus barzhoniezh, evel dres), peogwir eo tostoc'h d'ar vuhez : kefridi ar c'hoariva eo livañ ar vuhez. N' em eus bet tro da arvestiñ nemet ouzh « An dakenn dour » (ur wech) hag ouzh « An Ankou » (div wech) e Pariz hag e Landreger. Displeget gwelloc'h e oa bet d' ar wech kentañ a-hend-all. An arvestoù o tennañ d'ar vuhez war ar maez a oa deut mat tre gant ar c'hoarierion, a gav din. Roll an Ankou avat a oa kalz diaesoc'h da zerc'hel, anat e oa. Da wall an displeger e oa marteze hogen ned eo ket sur. Moarvat e oa skodegus efed ar maskl o para a-drumm war dremm ar Foeter-hent. Un ijinadur re ziavaezel ha re gorfel koulz lavaret e oa avat. Dav eo hetañ e vefe displeget an aliesañ ar gwellañ pezhioù-c'hoari Jarl Priel rak n' eus nemet en doare-se e c'hellor prizout da vat ijin ar skrivagner-mañ hag a chom, dreist pep tra, ur saver pezhioù-c'hoari daoust d' an dalvoudegezh a c'hell kaout hag o devo moarvat an oberennoù all a zo gantañ ar stern, ur romant hag e Eñvorennoù.

Sierck, miz Mezheven 1952.

NOTENN

Lennet em eus nevez 'zo gant gred al levr embannet e fin ar bloaz diwezhañ gant Jarl Priel, « Va Zammig Buhez ». Edon o c'hortoz un dra bennak nevez da gentañ diwar e bluenn, peogwir n'anavezomp ar skrivagner-mañ, tost da vat, nemet evel saver pezhioù-c'hoari. Ha ret eo din lavarout e vourran e kement a zoug testenñ hag a denn d' an envorennoù. Er c'heñver-se e komprenan mat tre doug Meven Mordiern d' an doare lennegezh-se daoust ma plij din an eñvorennoù en abeg d' ar pezh a zo denel enno : an traoù kentoc'h eget an dud eo a glaske M. M. enno, a gav din.

N' on ket bet kerseet gant al lennadur-mañ rak kavet em eus el levr ar pezh e oan o c'hortoz. Da gentañ, un daolenn vuhez eus ur c'horn-bro a Dreger e deroù ar c'hantved-mañ. Evidomp-ni hag a zo dispartiet, siwazh, diouzh hor pobl peurliesañ, e vez atav un dudi lenn al levrioù na c'hellfemp ket sevel hon unan : ar re a ziskouez hor pobl evel maz eo, pe evel ma oa da vihanañ, d' ur mare ma n' oa ket distummet c'hoazh gant an estrenekaat, re anat ar gwall zisoc'hoù anezhañ hiziv. Evit adkemer amañ un dro-lavar anavezet : tu ar c'hreisteiz eus spered Jarl Priel a gavomp amañ, an hini a zo da gavout er pezhioù-c'hoari fentus. Petra farsusoc'h eget ar gontadenn en deus skrivet Jarl Priel a-zivout an istrogell souezhus ma komz anezhañ er pennad kentañ eus e levr. Tamall a rafen a-walc'h zoken da Jarl Priel bezañ kaset re bell ar brastresañ : ne vern, rak ar skeudenn-lu-se a zo plijus kenañ, buhez e a-walc'h evit hañvalout bezañ gwirion. Ken deverrus all eo ar pennadoù ma tezrevell enno e veajoù war vor ha Jarl Priel a oar ervat dic'hwezhañ meur a stambouc'herezh, hini kargidi uhel m' eo o berzh alies diouzh galloud ha stultenn hini pe hini.

Anat eo n' eo ket an dra-se a zo an dudiusañ en oberenn. Ar pajennadoù a c'hellfe ober eus al levr-mañ ur benn-oberenn eo ar re ma tispieg Jarl Priel enno e vuhez, didro kaer, an eeunañ ma c'hell, ar poanioù en deus ranket andur er gêr, an diaesterioù en deus ranket trec'hiñ da ober e studioù. Bez' ez eus dreist-holl ar pennad a zo gouestlet da dremenvan ha da varv e vamm : ne c'heller ket hen lenn hep bezañ fromet meurbet. Seurt gwirionded c'hredus a zo gwall zibaot ha n' em eus ket soñj bezañ lennet e nep yezh ken trivlius un danevell. Keñveriit ouzh « Souvenirs d'enfance et de jeunesse » gant ur c'hengêriad da Jarl Priel, Ernest Renan : ne gavoc'h e nep lec'h hevelep didroidell.

Diouzh un tu all e vefe dreist « Va Zammig Buhez » da eñvorennoù Renan : Jarl Priel en deus roet deomp en e levr un testeni istorel a-bouez, dre livañ un daolenn resis, eus buhez ur c'horn a Dreger e derou ar c'hantved-mañ paz eo staget hor pobl da goll he yezh ha moarvat he feiz (o adkavout a ray un deiz, spi hon eus, hogen en ur stumm nevez e vo). Prizet em eus er c'heñver-se ar pezh a ziskleir Jarl Priel diwar-benn ar gouelioù en enor da Renan da skouer pe a-zivout micherioù ha gonidigezhioù tud e gorn-bro : gwalenn didec'hus an emengouestlañ er verdeadurezh-vrezel pe en arme war an aod.

Talvezout a rafe ar boan, a gredan, studiañ stumm-skrivañ Jarl Priel el levr-mañ. E-skoaz hini an oberennoù all e c'heller lavarout ez eo liesoc'h : plaen ha poblek, lennek ha pinvidik, digamambre ha groz zoken a bep eil : dereout a ra bepred ouzh danvez ar skrid. Rebec'h a rafen a-walc'h evelato ouzh Jarl Priel bezañ graet re implij eus ar yezh poblek pa na veze ket dav bepred (krediñ a ran ne c'heller ober gant ur stumm poblek nemet pa gomzer eus ar vuhez war ar maez dre skiant-prenet : a-hend-all e vez artifisiel bepred ar stumm-se). Da skouer n' on ket evit meuliñ implij stank an anv-gwan-verb « daonet » evit talvezout derez uhelañ an anv-gwan (e-giz ar galleg « sacrement »). Ne santomp ket atav e brezhoneg arsterioù gerioù zo, evit darn, a gav din, dre ma n' hon eus ket bet biskoazh a renkadoù uhel o komz hor yezh. (Ar bobl a vez memestra liv troioù-lavar 'zo.) Ouzhpenn-se e c'hellfed pismigat implij tregeriadurioù pounneroc'h eget an troiennoù ordinal ha n' eus enno arster ispisial ebet : lakaomp, hini « daoust ha ma » e-lec'h « daoust ma ». Erfin, war un dachenn all e kav din en deus ar skrivagner pouezet re war darvoudoù dister.

Kement-se, goude holl, a zo nebeut a dra. E-touez an « emgoun-levrioù » a zo bet savet en hor yezh er c'hantved-mañ ez eo hini Jarl Priel an hini dudiusañ ha marteze eo an oberenn-mañ a blijo ar muiañ d' al lennerion e Breizh en amzer-da-zont.

Istor lennegezh vrezhonek an amzer-vremañ

gant ABEOZEN
(Kendalc'h)

III. - AR C'HELAOUENNOU

Ar veleien eo o deus digoret da vat an hent war dachenn ar c'helaouennoù e brezhoneg (1).

E-kreiz an XIXvet kantved e stag Breuriez ar Feiz da embann Lizhiri e brezhoneg e tri eskopti Breizh-Izel. An Aotrou JOUBIOUZ eo a sav, e 1843, **Lihereu Brediah ar Fé** evit Bro-Wened. Niverenn gentañ **Lizeriou Breuriez ar Feiz** evit eskopti Kemper a zeuas er-maez e 1844. Renket oa bet an traoù gant HERSART KERVARKER, an Ao. Yann-Wilhou HERRI hag an Ao. ALEKSANDR, sekretour an eskob, an Ao. GRAVERAN.

105) Yann-Frañsez ALEKSANDR, ganet e Montroulez d' an 23 a viz Ebrel 1804 ha marvet chaloni e Kemper d' an 19 a viz Meurzh 1874, en deus ivez savet pennadoù evit FEIZ ha BREIZ kozh. Embannet en deus a-hend-all pezhioù Barzhoniezh er « Revue de l'Armorique et de l'Ouest », e 1845, hag er gelaouenn « L'Océan », Brest, 14 a viz Du 1855, Ar C'himiad.

Evit eskopti Treger, e 1865 eo e teu er-maez **Keloio Prezegerez ar Fe.**

(1) Ne deo nemet dereat evelkent ober meneg eus **Mignon al Labourer**, kentañ taol-esa war dachenn ar c'helaouennoù gallek-ha-brezhonek. An niv. gentañ a zo eus ar 15vet a Vae 1833. Daou vloaz e padas ar gazetenn viziek-se gant 300 koumananter. War zaou vann keñver-ouzh-keñver e veze embannet galleg ar pennskriver DU CHATELLIER ha brezhoneg an troer, a voe da gentañ KOMBOD hag, adal 1834, LEDAN eus Montroulez deut da vezañ mouler ar gazetenn. Buhezekañ kelaouenn div-yezhek Breizh-Izel a zo bet « Le Courrier du Finistère », savet e Brest e 1880 gant F. HALEGOUET. Da bennskrivagner pennañ en deus bet ar « C'hourrier » Kaourintin AN NOURZ na zilezas morse e wiskamant glazig hag a zo bet moarvat gwellañ kelaouenner brezhonek e amzer.

59

Hogen ar gelaouenn sizhuniek kentañ a zo bet FEIZ ha BREIZ.

An Ao, SERGENT a oa d' an ampoent eskob Kemper ha Leon. E vikel-bras end-eeun, Leopold LEZELEUG, eo a grouas ar gelaouenn e 1865.

106) Ganet e voe an Ao. LEZELEUG, e Kastell-Paol, d'an 30 a viz Mezheven 1814. Mervel a eure eskob Autun d'ar 16 a viz Kerzu 1873. Ma ne skrivas ket nemeur en e yezh, brud en deus da vezañ bet ur sarmoner dispar.

107) Kentañ rener FEIZ ha BREIZ a voe an Ao. Goulven MORVAN. E-touesk ar re a skrivas e FEIZ ha BREIZ kozh e c'hellomp menegiñ an Ao. Yann-Wilhou HERRI hag an Ao. GWILHOU, m' hor bezo tro da skrivañ hiroc'h diwar e benn pelloc'hik. FEIZ ha BREIZ kozh a badas triwec'h vloaz. He rener diwezhañ, eus Mae 1883 da Ebrel 1884, a voe Gab MILIN.

An Aotrou Goulven MORVAN a voe ganet er Forest-Landerne d'an 12 a viz Kerzu 1819. Beleget d' ar 16 a viz Mezheven, e voe kure e Kerrien, Brasparz, Plouigneo hag an Treou. Rener e voe da FEIZ ha BREIZ eus 1865 da 1875. Person e Penharz e 1869, e voe kaset da Gemper e 1870. Marvet eo Priol abati Timadeug d' ar 16 a viz C'hwevrer 1891.

Savet en deus levrioù a zevosion : **Scol ar Maro Mad**, Lefournier, Brest, 1865 ; **Miz Itron Varia ar Rozera**, 1871 **Buez Hor Salver Jesus-Christ**, diwar c'halleg an Tad GIRY, 1868 ; hag, e 1889, **Kentelioù hag Istorioù a scuer vad**, holl en hevelep ti. Savet en deus ivez ur barzhoneg ennañ 950 gwerzenn, Argad Aberwrac'h, embannet e ti Kerangal, Kemper, e 1868, hep anv oberour, adembannet gant an Ao. ABGRALL, e « Bulletin de la Société Archéologique du Finistère », 1916.

108) Ar Chaloni Gabriel MORVAN, breur da rener kentañ FEIZ ha BREIZ, a zo bet ivez eus kenlabourerien ar gelaouenn. Ganet e voe e Plabenneg, d'an trede deiz a viz Eost 1829. Beleg e 1852, e voe kure e Melven ha Ploumoger, person e Pluguen, e 1866, e Sizun e 1872, chaloni e 1874. Marvet eo d' ar 17 a viz Mae 1886.

Bez' e oa eus an droerien a lakae e brezhoneg Lizeroù Breuriez ar Feiz ha Lizeroù an Aotrou'n Eskob.

Embannet en deus ur Buez ar Sent, e ti Cattier, e 1869 ; Histor an Testamant Coz hag an Testamant Nevez, un droidigezh eus Bibl Vihan skeudennaouet BENZIGER, e 1869 ; **Ar Fals Doktored hag ho Lavarioù**, e ti Kerangal, Kemper, e 1885.

60

Kenlabouret en deus ivez gant an Aotrounez Yann WILHOU ha POULIKEN da zastumad Kantikoù an Aotrou 'n Eskob NOUVEL.

Gant niverenn ar 26 a viz Ebrel 1884 ez echuas buhez FEIZ ha BREIZ kozh. Adal neuze n' oa mui a gazetenn sizhuniek e brezhoneg penn-da-benn.

D' an eilvet a viz Gouere 1893 eo e stag Frañsez VALLEE da voulañ un nebeud linennoù brezhoneg war « La Croix des Côtes-du-Nord ». Tamm-ha-tamm e teuo ar brezhoneg da c'hounit daou vannad hag e miz Genver 1896 ez eo krouet KROAZ ar VRETONEZ, stagadenn vrezhonek « La Croix des Côtes-du-Nord », war div bajennad. E 1906 ez oa deut da vezañ ur gazetenn war beder pajennad.

109) Abred e teuas beleien da gemer o lec'h e-touez he skrivagnerien. An Aotrou HERI, person Kerfod, a embannas meur a bezh barzhoniezh war GROAZ. Eñ eo a lakaas e rannyezh Treger Histoer Santel an Aotrou J. BULEON.

110) An Aotrou LEC'HVIEN, marvet p' edo c'hoazh kloareg, a roas ivez barzhonegoù da GROAZ ar VRETONEZ, dindan an anv-pluenn An Tremener. E 1900, e teuas er-maez eus ar wask, e ti-moulerez Sant-Gwilherm, e Sant-Brieg, **E koun an Tremener : Gwerzioù ha Sonioù dibabet gant e vignoned diwar e baperoù.**

111) An Tad Jezuist BOURDOULOUS a voe ivez eus kenlabourerien gentañ KROAZ ar VRETONEZ. Pezhioù barzhoniezh kentelius en deus embannet enni. E Bleuniou Breiz-Izel, Plihon, Roazhon, 1902, p. 134, e kaver div vojenn gentañ : **Ar C'haz hag ar Bugel hag Ar Big, ar Goulmig hag ar Paün.** Embannet en deus ivez, e ti Kerangal, Kemper, ur skrid **Eneb d' ar Brotestanted**, hag ul levr all, **Skouerioù Kristen**, e 1904, e ti Salaun, Kemper, ma voe gwerzhet 6.000 skouerenn ar mouladur kentañ e tri miz.

An Tad BOURDOULOUS a zastume danvez un istor eus ar c'hantikoù brezhonek hag e veze lakaet diaes e benn gant ar c'hantikoù nevesaet embannet gant an Aotrou Erwan DURAND, person Tredrez, etre 1898 ha 1905, war GROAZ ar VRETONEZ. An Aotrou Erwan DURAND, niz d' an Aotrou Alan DURAND, oberour Ar Feiz hag ar Vro, ne roe ket dalc'hmat mammenn e gantikoù nevez.

112) « Pa lenner oberoù Gab LISKILDRI, eme Frañsez VALLEE en **Eñvorennoù ur Brezonegour**, p. 34, diaes e teufe war ar spered ez int bet savet gant ur beleg. N' eus enno netra a dennfe d' ar gelennadurezh kristen. »

61

Ur beleg oa koulskoude Gab LISKILDRI. An Aotrou LE FEBVRE a voe ganet e kêriadenn Liskildri, e parrez Goudelin, d' an trede dervezh a Wengolo 1863. Beleget e 1888, e voe kure e Tregom, person e Plian, e 1889, Pleraneg, e 1891,

Plouber, e 1896. Roet en deus e zilez en abeg d' e yec'hed e 1915. Dont a reas neuze da vevañ e Goudelin hag e varvas eno d' ar 17 a viz Meurzh 1927.

Ur brezhoneg yac'h ha pinvidik a skrive Gab LISKILDRI, ul liv tregegiek-rik dezhañ, hogen reizh war un dro. Savet en deus pezhioù barzhoniezh goapaus dreist-holl. Flemmañ a ouie hep deviñ avat.

E Bleunioù Breiz-Izel, 1902, p. 36-46, e kaver daou bezh barzhoniezh, savet gantañ, **E-tal ar waz** hag **O Pesketa**. E BUHEZ BREIZ, 1922, p. 19, ez eo bet advoulet **Fanch ar Beulbez**, embannet gant KROAZ d' an 11 a viz Here 1908. **Son ar Butuner**, moulet war GROAZ, d' an 22 a viz Genver 1905, a zo bet skignet ivez war follennoù distag gant ti-moulerez Sant-Gwilherm. Da veno Meven Mordiern, gwellañ pezhioù diwar bluenn Gab LISKILDRI a vefe ar re-mañ : **D' ar Falc'herien**, 21 Gouere 1901 ; **Perak ?**, 24 Du 1901 ; **Adela**, 30 Meurzh 1902 ; **An Nevez-Amzer**, 10 Ebrel 1904 ; **Kan ar Goukou**, 11 Mae 1913. Eus buhez-bemdez an dud e tenne Gab LISKILDRI danvez e oberennoù, anezho taolennoù gwirion ha birvidik. Savet en deus ivez pennadoù e komz-plaen diwar-benn an Tiegezh, er bloavezhioù 1906 ha 1907.

113) An Aotrou BESKOND a roas da GROAZ ar VRETONEZ pennadoù e komz-plaen dindan an anv-pluenn Ar Mignon. Ar re wellañ anezho, hervez Meven Mordiern, « eo ar re ma taolenn enno buhez an dud diwar ar maez, hep re soñjal ober kentel d' e lennerien. » ... « Pleustret en doa da vat yezh ar bobl. Anaout a rae gwelloc'h eget nikun ar gerioù micher hag ar c'hant ha kant doare-lavar ma ra ganto al labourerien da zisplegañ o menzioù. »

114) An Aotrou KAMM, dezhañ da anv-pluenn **An Eün**, a oa ur barzh ampart, hogen un tammig anoazus. Nebeud-tre eus e oberennoù en deus roet d' ar mouler. Koantañ pezh barzhoniezh digantañ war GROAZ a zo, bepred da veno Meven Mordiern, **Nij ha Kan al Lapoused**, 20 Here 1901.

115) An Aotrou Erwan ar GALL a zo ganet e Sant-Servez, e-kichen Kallag, e Kerne-Uhel e 1860. Bet eo person e Tredrez hag e Leskoad. E varzhonegoù a zo bet moulet war AR VRO etre 1904-1906 hag e KROAZ ar VRETONEZ. Menegiñ a c'heller diwar e bluenn **Maronad d' an Aotrou Gret de Helloc'h en Boulvriag**, ha **Hun ar Barzh**, ar pezh-mañ lakaet gant Taldir e Breiziz, p. 256.

62

116) An Aotrou Frañsez an DU a zo ganet e Kalanel, Bro-Dreger, d' an 30 a viz Meurzh 1888. Sinañ a rae Fanchig an Du pe Roc'hlann ar barzhonegoù embannet gantañ war AR VRO pe e KROAZ ar VRETONEZ.

Edo e 1897 e Skolaj Itron-Varia Wengamp, ma voe eus skolidi an Aotrou Le CLERC. Bachelour e 1906, ez eas da Gloerdi Bras Sant-Brieg hag, e 1910, e tistroas da skolaj Wengamp evel evezhier ha, daou vloaz goude, kelenner.

Savet en deus ur pezh-c'hoari e tri arvest, Tremeur, e gwerzh e ti an oberour e Santez-Trifina.

117) Pa zeu FEIZ ha BREIZH d' ar vuhez adarre e derou ar c'hantved-mañ, e miz Genver 1904, ez eo renet gant an Aotrou Yann-Vari NORMAND, person Ploneiz, oberour ul « Lexique Breton-Français », Kemper, Kerangal, 1903.

Goude marvet an Aotrou NORMAND, e voe anvet da rener ar gelaouenn an Aotrou Yann-Vari ar GALL, d' an 12 a viz Genver 1905. Chom a raio e penn ar gelaouenn betek 1907.

118) Ganet e voe an Aotrou Yann-Vari ar GALL e Lanveur. Beleget e 1880, e voe kure lerc'h-ouzh-lerc'h e Kameled, e Karmez Brest, e Retred Kemperle. Anvet e voe da berson e Folgoad e 1900 hag e Taole e 1909. E 1920 e voe graet chaloni. Goude paket gantañ ur gwall lamm e rankas reiñ e zilez hag e teuas da vevañ e Lanveur, ma varvas d' an 22 a viz Du 1936.

Savet en deus levrioù a zevosion : **Buez Victoire de Saint-Luc**, Brest,

Straed ar C'hastell, 1921 ; **Buez ar Persoun Ars ; Buez Santez Tereza ar Mabig Jezuz**. Ul **Leor Oferenn latin ha brezounek** a zo bet embannet gantañ e ti Tourmen Brest.

Lakaet en deus e brezhoneg Leon diwar skrid gwenedek an Aotrou Job er BAYON, ar pezh-c'hoari, **An Aotrou Keriolet**, Brest, Ti-Moulerezh Straed ar C'hastell, 1905.

119) War-lerc'h an Aotrou Yann-Vari ar GALL e teuas an Aotrou KARDINAL, person Sant-Nouga (1). A ziv-vizieki ma oa ar gelaouenn betek neuze e teuas, dindan e renerezh da vezañ miziek. E 1911 e kemeras Yann-Vari PERROT lec'h e berson e penn FEIZ ha BREIZ a reno, a-enep pep gwall avel, betek e varv e 1943.

(1) Ganet e Gwiklan e 1859, beleget e 1883, kure er Vourc'h-Wenn, rener skol Keroulas e Kastell-Paol, an Ao. Kardinal a voe person e Sant-Nouga eus 1901 da 1907. Mont a eure da ren ti ar veleien gozh e Kastell e 1907. Anvet e voe da berson e Plougastell e 1913 (chaloni e oa abaoe 1910), hag eno eo marvet e 1928.

63

War dachenn ar c'hannadedigoù-parrez ez eo bet c'hoazh brasoc'h eveljust labour ar veleien. Amañ n' eus ket anezho hepken harperien pe genlabourerien hogen renerien. Hervez o dalc'husted, o levezon war o farresioniz, e ra berzh mui pe vuic'h o c'helaouenigouigoù. Reiñ a reont ul lec'h bras pe vrasoc'h d' ar brezhoneg, pa vezont divyezhek. Lod anezho, avat, a zo e brezhoneg penn-da-benn.

Da vare an Disparti etre an Iliz hag ar Stad eo ez eo bet krouet an darnvuiañ eus ar c'helaouennoù-parrez. E Bro-Wened, kent 1905, n' oa nemet ur c'hannadig o vezañ div-yezhel, « La Clochette de Bignan » (Kloc'hig Begnen), savet e 1904 gant an Aotrou Jerom BULEON, neuze person Begnen. Unan eus ar c'hannadedigoù kentañ da vout e brezhoneg penn-da-benn a zo bet **Kloc'h Bras Gregam**, savet gant an Aotrou Moris GOURON, person Gregam abaoe 1895.

120) An Aotrou Moris GOURON a voe ganet e Groé d' ar 7 a viz Here 1844. Bet eo bet kure e Melran hag e Pleheneg, person en Enez Houad e 1883, en Arzhon e 1888, person e Gregam e 1895, chaloni a enor e 1901. Marvet eo e Keranna d' an 28 a viz Genver 1924.

E gannadig ne deo ket bet, avat, e oberenn nemeti e brezhoneg. Embannet en deus **Enezenn Groé** e « La Croix de Groix », e 1891 ; **Kañnenneu en inour d' er Huerhiez**, e 1898 ; **Kañnenneu Bugale Mari**, e 1899 ; **Breizh**, un drama e komz-plaen e 1905 ; **Miz Sant Jojob**, e 1910. Un harper gredus-dreist d' ar brezhoneg ez eo bet an Aotrou GOURON, anezhañ ur barzh donezonet, en dije tizhet aes ur stumm disi, ma ne vije ket bet chalet hepmuiken gant mad an eneoù.

Ar c'hannadedigoù all dudiusañ, e Bro-Wened, kent brezel 1914-18, a oa da veno an Aotrou Pièr er GO, re Aradon, Pleren, Nostang ha Krac'h.

Ar brezel eveljust a drubuilhas buhez ar c'hazetennoù-se, evel ma reas evit an oberennoù breizhek all. Hogen ma c'hoarvez gant lod plegañ, e oar lod all herzel. Da zeiz kentañ ar bloaz 1916 eo e sav an Aotrou Jakez KALVARIN Kannadig Treglonou.

121) Ganet e Treouergad e 1868, an Aotrou KALVARIN a zo bet kure e Gelleguarc'h, Lambaol-Wimilio ha Plougoulm. Anvet eo bet da berson e Treglonou e 1904. E yec'hed e redias, e dibenn 1941, da ziskenn e ti ar veleien kozh, e Kerodern, e-kichen Lambezleg. Deut da repuiñ gant e genvreudeur e Rumengol, ez eo marvet eno d' an 29 a viz Kerzu 1941.

64

Eus 1916 betek Mezheven 1941, en deus renet e gazetennig, tizhet ganti an Niverenn 301. An hanter eus pep niverenn viziek a zo diwar e bluenn. Ne deo ket didalvez levezon eur c'hannadig-parrez, pa soñjer e teue eus Kannadig Treglonou daou vil skouerenn ar miz eus ar wask.

N' oa ket chalet an Aotrou KALVARIN gant ar brezhoneg reizh. Ne felle ket dezhañ mont da skol ar c'hlaneyzhourien. Skrivañ a rae ar brezhoneg evel m' her c'homzer etre an Aber-Ac'h hag an Aber Iltud ha ne rae ket fall, peogwir ez oa savet e gannadig evit tud ar c'horn-bro-se. Un harper drant ha karadec d' ar brezhoneg, hag un orin a zen oa Jakig, evel ma sine e bennadoù. Tabutal a eure ouzh FEIZ ha BREIZ, e 1929, abalamour da zoare-skrivañ gerioù evel **graet, laez, maen** hag all, ma felle dezhañ mirout dezho ar furn a wiskont en Arvor Bro-Leon, **great, leaz, mean**. Hogen, ma ne gompren ket kudenn ar yezh unvan, argas a rae didruez ar gallegachoù, hag, evel ma lavar FEIZ ha BREIZ Genver 1942, peadra a vezo da bennaouiñ en e Gannadig evit ar saverien geriadurioù hag an dastumerien komzennoù brezhonek c'hwek.

Ret anzav, avat, ne deo ket bet direbech e zoare enebiñ ouzh Yann-Vari PERROT.

122) En ur c'hannadig divyezhek eo en deus skrivet an Aotrou Per MARTIN, marvet person e Gourin e 1935. Ganet e voe e Gwiskriv d' ar 7 a viz Ebrel 1868. Edo e Gourin abaoe 1925.

E gannadig « L'Echo des Montagnes Noires » (Heklev ar Menezioù Du) a zeue er-maez bep eil miz. En e niverenn naontekvet, e Gouere-Eost 1929, e kemenn d' e lennerien embannadur e levr **Mouez Kerne**, Le Bayon-Roger, An Oriant, 1929. Kavout a reer el levr-se **Pardon Skaer** hag **Eur Pegad etre Daou Gok**, daou varzhoneg bet moulet war ar gelaouenn e L'Hermine », ha graet ganto da c'houde ul levrig e ti Simon, Roazhon, e 1900. Lakaet en deus d'o heul un nebeut rimadelloù ha teir c'hontadenn, dezho saour ar brezhoneg etre Kerne ha Gwened, un dudi o lenn pe o c'hlevout, ken bev int, **Job Kerbos, Bit, me iar, Bit** ha **Glodig Mil Gerandraon**. Da glozañ al levr e teu un dibab a varzhonegoù berr, kempennet evit skolioù kristen kantonioù Gourin hag ar Faoued. A-walc'h ez eus eus al levr-se da c'hounit d' an Aotrou Per MARTIN ul lec'h enorus e-touesk skrivagnerien e amzer.

(Da genderc'hel.)

AL LEVRIOU

THE FLAG IN THE WIND, gant an Dr. John MACCORMICK
(Victor Gollanez, London, 13/6)

Eus 1928 betek 1942 ez eo bet an Dr. John MacCormick sekretour Strollad Broadel Bro-Skos ; abaoe ar mare-se ez eo sekretour ar Scottish Convention. Ken an daou dra-se a ziskouez pegen pouezus e c'hell bezañ e levr evit an neb a fell dezhañ studiañ istor Bro-Skos er mare a-vremañ.

Un dra koulskoude en deus va lakaet diaes : war golo al levr eo skrivet emeur o vont da lenn « the story of the National Movement in Scotland ». Kement-se n' eo ket gwir. An Dr. MacCormick e-unan a zispleg er rakskrid na gonto nemet an darvoudoù en deus kemeret perzh enno, evel m' en deus gwelet anezho, hep komz eus an darvoudoù all pe eus an emsavioù all, dreist-holl hep komz eus ar Strollad Broadel dilezet gantañ e 1942. Un istor personel eus an emsav skosat ne ro ken, setu ar pezh a lavar. Istalbenn touellus al levr ne vefe dleet neuze nemet da faltazi an embanner, c'hoant gantañ gounit kalz lennerien. An den dianav dezhañ istor an emsav skosat a zlefe mat neuze mirout ar menoz-se en e spered kent kregiñ da lenn al levr.

Kement-se displeget, e c'hellan lavarout na vezer ket kerseet o lenn **The Flag in the Wind** : ennañ ez eus munudoù diwar-benn ganedigezh ha stourmoù kentañ ar Strollad Broadel, diwar-benn votadeg Skol-Veur Glasgow, pa voe anvet MacCormick da Lord Rector a-enep d'ar virourien, d'ar sosialisted ha d'ar frankizourien, diwar-benn labour Scottish Convention en deus dastumet ouzhpenn daou vilion a sinaturioù a-du gant emrenerezh Bro-Skos, ha diwar-benn meur a dra all. Tri foent avat o deus va dedennet dreist-holl.

Displegañ a ra an Ao. MacCormick peseurt darempredoù en deus bet, evel sekretour ar Strollad Broadel, dreist-holl er bloavezh 1932, gant an hollvrudet Lord Beaverbrook, perc'henn nouspet kazetenn vras. Tomm e voe kalon al Lord, e-pad ur mare, ouzh Bro-Skos ha dindan e levezon e kemeras ar gazetenn vras (Scottish) **Daily Express** tu ar vroadelourien. Alies en em gave J. MacC. gant ar renerien evit dibab ar politikerezh gwellañ da heuliañ, ha war e ali eo e voe savet e Glasgow lochennoù e-lec'h ma c'hellfe an dud votañ pe a-du gant, pe a-enep an emrenerezh : 116.000 den a votas evel-se e lochennoù an Daily Express, 112.000 a-du gant frankiz Bro-Skos ha 4.000 a-enep.

An eil dra a gavan dedennus-dreist eo istor ar prosez a reas MacCormick ha Ian Hamilton (unan eus ar re a gemeras ar Maen e Westminster) d' al Lord Advocate (da lavarout eo kannad ar Rouanez e Bro-Skos). Daou dra dreist-holl a felle d' an Ao. MacCormick lakaat embann gant Lez-Varn Vras Bro-Skos (the Court of Session) : da gentañ n' he doa ket ar rouanez a gwir da vezañ anvet Elezbed II a Vreizh-Veur (an Elezbed kentañ a oa bet rouanez Bro-Saoz hepken, Bro-Skos he doa ur rouanez all), e oa didalvoud al lezenn embannet diwar-benn-se e 1952 gant Parlamant Breizh-Veur ha, dreist-holl, e oa pep galloud, e Bro-Skos, gant ar bobl (the Community of Scotland) ha n'eo ket gant ar Parlamant, forzh peseurt hini e vefe. Goude ur stourm hir e c'hounezas MacCormick e emgann hag e 1953 e tisklerie Lord Guthrie ur varnadenn a-du gantañ.

Erfin e tispleg J. MacC. an holl vunudoù diwar-benn afer Maen an Tonkadur, ar Maen Sakr a azeze warnañ Roueed Bro-Skos pa vzent kurunet, hag a oa bet laeret gant Edouarz I ha kaset gantañ da Westminster : penaos eo bet kemeret e London, penaos eo bet kuzhet e Bro-Skos ha penaos, da echuiñ, eo bet douget, paket e banniel Bro-Skos, gant tri den dianav, war aoter manati Arbroath, e-lec'h end-eeun ma oa bet embannet frankiz ar vro. Fromus eo ar pajennoù-se da lenn : fromus eo gwelout ul labourer-douar, estren a-grenn d' an emsav broadel, oc'h asantiñ diwall evel un teñzor ar maen-se a oa holl boliserien Vreizh-Veur o

klask anezhañ d' an ampoent, hag aze e weler mat petra a c'hell ijin, kalon hag emaberz un nebeut paotred yaouank ober da zihuniñ ur bobl.

Mat e vez atav d' ur Breizhad lenn ul levr evel **The Flag in the Wind** : diskouez a ra n' eus ket d'en em chalañ re gant ar menozioù du a c'hell dont er spered pa weler diventelezh ar stourm. Ar pezh o deus graet Skosiz a c'hellomp ober. Rak evelto en o bro, ni a zo an amzer-da-zont en hon hini.

P. D.

VENTS DE TERRE, VENTS DE MER, gant Jean MERRIEN

(Editions La Table Ronde, 40, rue du Bac, Paris)

67

Romant nevez Jean Merrien a zo istor ur familh eus arvor Breizh e-pad ar brezel. Unan eus ar vugale a zo a du gant Bro-Chall ha Pétain, unan ar Saozon hag ar Resistans hag egile a zo brogarour Breizhad. Evit an oberour pep hini en deus e uhel venoz hag en deus ar gwir da vezañ doujet. Zoken ar menoz Breizhek, ha setu ar pezh a ro un talvoudegezh dezhañ e unan d' al levr evidomp brogarourien. Un testeni eo hag amañ ez eo displeget doareoù ar Strollad Breizhat evel un dra he deus ar gwir da vezañ. N' omp ket boas da glevout kement-se. Kudenn Vreizh a zo lakaet amañ dirak an holl en un doare splann da dizaon.

Anaoudek e rankomp bezañ e-keñver Jean Merrien evit al levr kalonek-se.

* * *

Degemeret hon eus ul levrig mat-kenañ moulet e Ti-MouIerezh Breizh, Roazhon, ha skrivet gant hor mignon Ronan a Germene « Un Prieur Commendataire de Gahard au XVIII^e siècle : Joseph-René de Larlan du Cosquer. 1741-1778 ». Dom J. Duchauchix, Ronan a Germene, en deus skrivet ivez ur pennad istor relijiel diwar-benn Abati Hautecombe e niverennoù 13, 14, 15, 16 ha 17 kannadig an Abati-se m' emañ manac'h ennañ. En hevelep kelaouenn hon eus lennet div varzhoneg gantañ (400 lur evit ar 7 niverenn, C.C.P. Lyon 301-74. A. de Hautecombe, par St-Pierre-de-Curtille, Savoie.) Div oberenn all skeudennet en deus ivez skrivet diwar-benn an Abati-se (« L'Abbaye d'Hautecombe » ha « Les pleureuses de l'église abbatiale d'Hautecombe »).

PLADENNOU BREIZHAT

AN TEIER SEIEN, AN HINI A GARAN, kanet gant ZAIG MONJARRET. -

Mar deo brezelel sonerezh Bro-Skos, laouen hini Iwerzhon ha relijiel hini Kembre, sonerezh Breizh a zo kevrinadel : ha ton ar gevrinadelezh a zo, en un doare souezhus, gant an div ganaouenn-mañ, a zere ken brav outo mouezh Zaig Monjarret. Ur vouezh n' eo ket marteze kaer, na kennebeut embreget-mat, met ur vouezh a zo fromus-dreist gant he dason kigel, di-ficherezh, un tammig gouez. Setu aze ar sonerezh a vez graet fae warnañ gant an dud a zo o klask « sevenaat » - war o meno - ac'hanomp : paotred vihan Vreizh a gano « Malbrough s'en va-t-en guerre » ha, pa vezint brasoc'h hag un tammig muioc'h dilu, « Les trucs de mon grand-père », hag a zo folklor pobl speredekañ ar bed. Daoust hag e c'hell AN TEIER SEIEN hag AN HINI A GARAN trec'hiñ war seurt moc'haj ? Ma ne reont ket, neuze eo kollet pep spi evit ar gened e Breizh, rak diaes e vefe kavout kanaouennoù kaeroc'h ha kanet ken brav all.

KENDALC'HOMP, KOUSK BREIZ IZEL, kanet gant ZAIG MONJARRET. -

Ur c'han kaer-tre eo KENDALC'HOMP, dre e sonerezh muioc'h c'hoazh eget dre e gomzoù hag a zo dizingal un tammig, ha mouezh Zaig Monjarret, from an engroez enni, a oar tennañ dioutañ al luskoù donañ. Ar seurt kan eo hag a zo rust a-walc'h evit gounit kalon ar bobl ha bezañ huchet war al leurgêr. Tu all ar bladenn a ro deomp, siwazh, luskellerezh un tammig re anavezet ha re vrudet ur ganaouenn a zo intret gant aergelc'h ar bodadegoù barzhed eur a-raok ar brezel : zoken ur vouezh fromus ne c'hell ket saveteiñ anezhañ.

PE TROUZ ZO WAR AN DOUAR, NOZ NEDELEK, gant KANERIEN BRO-LEON LANDIVISIAU

Krediñ a ran o deus bet KANERIEN LANDI ur priz kentañ en ur Bleun-Brug bennak : en em c'houlenn a ran neuze petra dalaveze al lazoù-kanañ all ! Ton bamus PE TROUZ ZO WAR AN DOUAR a zo kollet ha beuzet gant un aozerezh iskis, hag an doare m' eo kanet a ziskouez pegen pell emañ ar Vretoned a vezañ gouest da genstrivañ gant lazoù-kanañ eus Kembre, eus Rusia pe eus Amerika Du. Evit an NOZ NEDELEK ne gomprenan ket zoken penaos ez eus bet gallet hen enskrivañ. Goude ar bladenn-se em eus selaouet daou gan relijiel all : « Stille Nacht, Heilige Nacht » kanet gant St. Gabriel Chor ha « Listen to the Lambs » kanet gant ar Golden Gate Quartet : diskouez a reont en un doare ken anat ken ez eo poanius pegement e ra diouer da Vreizh hengoun ar c'han a-stroll.

69

BAL A DEUX, GAVOTTE DE L'AVEN gant FRERES LE LOUET. -

Goude bezañ bet disprizet kalz e seblant ar c'houblad biniou ha bombard dont en-dro diouzh ar c'hiz. Ha gwell a se : diskouez a ra, kalz gwelloc'h eget ar bagpipe, dibarelezh ar sonerezh-dañs breizhat. Gant plijadur e vo selaouet daou du ar bladenn-se.

BALE KOAD SERC'HO, BALE RUZ HA GWER, BALE ROUANEZED KERNE, gant Bagad Koad Serc'ho. -

An daou don kentañ n' int ket fall, an doare m' int sonet n' eo ket fall ivez marteze.. evit Bretoned. Lakaet em eus e-keñver **The Road to the Isles**, sonet gant ar Scots Guards : awen kozh-kozh Skosiz hag o doare meurdezus da seniñ a lez ar Vretoned levioù ha levioù - pe marteze kantvedoù - war-lerc'h.

PLADENNOU NEVEZ. -

Gourc'hemennoù kalonek a zle bezañ da di WOLF (rue Astor, Kemper) evit an

enskrivadurioù-se : lakaat a reont Breizh en ur renk enorus e marc'had ar pladennoù ha diskouez a reont pebezh hent a zo bet graet abaoe an amzer ma enskrive Ar Moal, barzh, eilet gant an akordeoñs, e z-«Diwallit mat merc'hed ! » Emañ Mona Keris, war a glevan o paouez enskrivañ kanaouennoù kozh, hag ivez traoù nevez evel **Bisigoù-Mareñv** Renan ar Mougn ha **Klemmgan** Roparz Hemon. A-benn tri miz e vefe kavet ar pladennoù-se er c'hanwerzh : karourien ar sonerezh vreizhat a gavo sur plijadur ha dudi ganto.

KOMZ HA KAN, pladenn gentañ. -

Gant plijadur eo bet degemeret pladenn gentañ ar strollad KOMZ HA KAN : ur bladenn ervennoù munut 33 1/3 warni rimadelloù, kanaouennoù evit ar vugale hag ur gontadenn. Dedennet-meurbet e vez ar vugale ganti, ha bez e c'heller lakaat ar bladenn da dreiñ dezho hep ma skuizhfent : tud KOMZ HA KAN o deus toullet aze un hent nevez ha kavet un doare kaer da sikour ar vroadelourien a ra gant ar brezhoneg er gêr.

70

Spi am eus e vo gwerzhet mat hag e c'hello KOMZ HA KAN embann pladennoù all hepdale. Daoust ha ne vefe ket tu neuze da gaout barzhonegoù, kontadennoù displeget gant sonerezh - da skouer e rofen kontadenn vrav **Goldilocks and the Three Bears** displeget evit ar BBC gant Ann Stephen ha Franklin Engelmann - pe c'hoazh un aozadur brezhonek eus kontadenn hollvrudet Prokofief **Per hag ar Bleiz** ? Sur on e c'hello KOMZ HA KAN kas da benn vat meur a labour talvoudus : d'an holl d' o sikour dre brenañ o fladennoù. (1.500 lur, da c'houlenn digant an It. Galbrun, 78, rue de Fontenay, Vincennes).

P. D

NOTENNOU

KANVOU. -

D' an 19 a viz C'hwevrer ez eo aet da anaon, e Ploneour-Traezh an Ao. Saig ar Go.

D' e dud ha d' e vignoned e kasomp hor gourc'hemennou.

Gant glac'har hon eus gouezet e oa aet da anaon Janed Branchereau, gwreg hor mignon ha kenlabourer Jarl Priel, d' an 10 a viz Ebrel.

Pediñ a reomp hor c'heneil da grediñ e kemeromp perzh en e boan ha kas a reomp dezhañ ha d' e diegezh hor gourc'hemennou.

Pediñ a reomp tiegezh hor c'henlabourer all Frañsez Jaffrennou da zegemer hor gourc'hemennou a gengañv.

HOR MIGNONED. -

An Aotrou hag an Itron Quiniou a zo laouen da gemenn deoc'h ganedigezh o mab Gildas, d' an 29 a viz Genver, e Tamatave.

Anna-Vari ha Soazig ar Bihan a zo laouen da gemenn deoc'h o deus bet ur c'hoar vihan Berc'hed Mari-Jozefa, e Courbevoie, d' ar 6 a viz Meurzh.

Hor gwellañ gourc'hemennou d' an holl.

MARV SAIG AR GO. -

Goude ur vuhez kalonek ez eo marv ken kalonek all, o lavarout kenavo d' e barrezioniz ha d' e vignoned an Ao. Saig ar Go (J.-F. Le Goff). E meur a lec'h e vo komzet eus labour beleg an Ao. Saig ar Go. Amañ el LIAMM e fell deomp kounaat anezhañ dreist-holl evel brezhoneger ha breizhad. Meur a skrid en deus savet e brezhoneg, e kannadig parrez Plouneour-Traezh (e-lec'h na veze sarmonet gantañ, a lavare deomp un daou viz bennak zo, nemet brezhoneg) e veze atav ur pennad, ar pennad kentañ, e yezh ar vro, ha meur a skrid diembann a chom c'hoazh war e lerc'h. Met bras eo bet dreist-holl roll an entaner-eneoù-se e savidigezh Breiz Atao : spi am eus e vo displeget dre an hir, un deiz, ar perzh en deus kemeret e krouidigezh an emsav broadel, dreist-holl pa oa kure e Douarnenez, e-lec'h ma oa-eñ kreizenn ar vuhez vroadel hag e-lec'h m' eo meur a hini dleour dezhañ eus e feiz breizhat.

Tu hon eus bet da welout an den mat-se nebeut amzer a-raok e varv, pa ouie abaoe nebeut e oa tonket dezhañ tremen buan : sart ha kadarn e chome, evel m' en doa bevet. Hag eñ war vord ar bez e oa e breder gant Breizh, gant e vro hag e yezh. Salv ma vo dalc'het soñj anezhañ ha ma vo enoret en doare nemetañ a zo da enoriñ seurt tud : dre genderc'hel gant o stourm.

P. D.

AR BREZHONEG ER C'HENWERZH. -

Lennet war ur skritell nevez-flamm oc'h ober bruderezh evit « Le Bon Marché » e ru Jean-Jaurès, Brest, ar gerioù brezhonek-mañ : Tud an ti a gomz brezoneg.

Setu amañ ur pennad all tennet eus « Ouest-France » d' ar 17 a viz Meurzh 1956 : « Ho potou 'zo chic hein ! Barz p'lac'h 'peuz kaout ? (sic.) Ti « Dallic » deuz Rostren, eno kaout botou braou marc'had mad.

- Ma; me ' c'ha di rektal ! ! ! »

72

Prenit en tiez a ra implij eus ar brezhoneg ha lavarit dezho perak oc'h deut. Klevet hon eus e klemme tud 'zo da rener « Dilhad Labour St Michel » dre ma raent bruderezh e brezhoneg, ret e vije kas ivez gourc'hemennou dezhañ.

LIZHIRI. -

Setu amañ pennadoù tennet eus lizhiri a zo degouezhet ganeomp. Da gentañ unan e galleg gant ur skolaer :

« ...J'admire beaucoup votre oeuvre, votre apostolat sans doute pour une

cause qui est belle, votre travail inouï pour des résultats probablement médiocres.

Je n'ai pas trouvé dans « Al Liamm » ce que j'y attendais. J'ai été assez déçu. J'ai attendu plusieurs numéros avant de juger. Le gros reproche que je lui fais surtout, c'est que le breton que j'y trouve me déroute, et je ne le comprends pas. Il est peut-être un breton hautement littéraire et même néo-breton, mais il est un fait qu'il paralysera votre action auprès des « masses », si j'ose employer ce terme. En effet, tout ce que j'ai lu jusque là ou appris, tout en étant de qualité indiscutable, m'était accessible. J'ai comparé ce que je possède à ce que je trouve dans « Al Liamm », ou avec ce que je possède de mon pauvre cousin germain Fanch Abgrall... Je n'éprouve pas de difficultés chez lui, et je puis vous certifier une chose, c'est qu'à St-Thegonnec, Guimiliau, St-Sauveur et ailleurs on ne s'exprime pas comme « Al Liamm »... etc. Je ne pense pas que je reprenne « Al Liamm » à partir d'octobre. Je regrette de ne pouvoir vous suivre sur cette question... »

J. P.

« Laouen on o paeañ va c'houmanant d'ur gelaouenn ken pouezus. Plijet en deus kalz din e-touez kement a labour efedus an niverenn diwar-benn Israhel. Ret eo deoc'h, d' am menoz, labourat an hent-mañ. Va hetoù gwellañ evit 1956, d' Al Liamm ha d' ar re a ro buhez dezhañ. »

G. P.

« En deizioù-mañ hon eus resevet paper-brud evit levrioù kelc'houiziek « ar Pléiade », hag a vezo embannet gant Gallimard hepdale, dindan renerezh Raymond Queneau. E miz C'hwevrer 1956 e teuy eus ar wask kevrenn gentañ Istor al lennegezhioù hag e miz Du an eil gevrenn diwar-benn al lennegezhioù Europat. Kavet o deus plas enni evit al lennegezhioù katalonek, danek, finnek, flamankek, frizek, yiddish, islandek eveljust, evit lennegezh Iwerzhon ha Kembre ivez; Breizh a hañval bezañ dianav ur wech ouzhpenn ; marteze n' eus lennegezh ebet e Breizh dellezek da vezañ keñveriet gant hini ar Serbed, an Dalmated hag ar Groated ? Koulskoude, ma vije bet skrivet un dra bennak evel Barzhaz Breizh, Ar en Deulin, Komzoù Bev, Nomenoe, Ar Spontailh, h.a., e Bro Haldor Laxness, e vije bet diaes tevel war o fenn (1).

Pet oberenn a ziwano et Liamm e 1956 evit deskiñ d' ar Bed, pe d' ar Vretoned da nebeutañ, ez eus ul lennegezh, en o Bro, ul lennegezh bev, yaouank ha yac'h ? »

(1) G. S. - Marteze en deus desket R. Queneau lennegezh Breizh e levr Gourvil : Langue et Littérature bretonnes (« Que sais-je ? »)

73

« Niverenn 54 « Al Liamm » a zo en em gavet ganin. Karout a rajen displegañ deoc'h un nebeud soñjoù diwar-benn ar « Referendum », peogwir ez eus bet unan hag e roit an niveroù bet. Marteze e vije bet gwelloc'h en un doare reiñ niveroù da c'hortoz, kalz tud a gredan o vezañ techet da reiñ o ali goude anavezout ali re all, dres evel ma 'm eus-me hiziv c'hoant skrivañ deoc'h goude lenn ho pennad.

Koulskoude eo anat-tre eo deuet da gentañ an tri skrivagner brasañ a zo bet biskoazh e brezhoneg : Jakez Riou, Roparz Hemon ha Maodez Glanndour. Ar pevare o vezañ, anat eo, Tangi Malemanche, evel ma lavarit hoc'h unan.

Hogen diaes eo lakaat « Gurban » var ar roll. N' eo ket gwellañ pezh barzhoniezh a zo, peogwir eo ur c'hoariadeg a zo enni pezhioù kaer a varzhoniezh, a ra koulskoude unan eus oberoù brasañ ar brezhoneg... Rak e brezhoneg, muioc'h eget e yezh all ebet, an oberoù a zo bet embannet amañ hag ahont, kalz a zo bremañ diaes da gaout ha n' int ket bet lennet evel-se gant an holl. Ouzhpenn-se en un dastumad bras e vez alies pennadoù disteroc'h. Ha peogwir e vez meneget atav Yann-Bêr Kalloc'h, ma vije barnet war an dastumad « War an Daoulin » dre vras e vije kavet treut a-walc'h, ha koulskoude ez eus en dastumad-se div pe deir oberenn eus ar c'haerañ.

Al lec'h m' eo bet embannet ar skridoù en deus kontet ivez gwechoù 'zo, dreist-holl pa n' int ket bet dastumet goude. Piv a soñjfe menegiñ da skouer Efflam Koet Skaù e-touez ar varzhed vrasañ, ha koulskoude ! E gwenedeg da vihanañ e teu sur mat diouzhtu war-lerc'h Bleimor.

Un dra am eus kavet souezhus a-walc'h. Evit Roparz Hemon on techet

kentoc'h da garout e varzhonegoù savet e-pad ar brezel, pa oa en e oad kreiz, kentoc'h eget re e yaouankiz ha padal evit Maodez Glanndour e choman stag kentoc'h ouzh « Troellennoù glas » kentoc'h eget ouzh « Imram » pe a Milc'hwid ar Serr-noz ».

F. Kervella.

« Kinniget eo bet din levr Ronan Huon EVIDON VA-UNAN. Plijet on bet gantañ Un enep-lavar a zo avat etre an titl hag ar fed : an embannadur ; da lavarout eo : n' eo ket soñj Ronan skrivañ evitañ e-unan, pe da vihanañ evitañ e-unan-penn. Ne fell ket din lavarout ez eo an enep-lavar-se un tech, rak ennañ dres emañ ar wirionez : evidomp hon-unan evit ar re all war un dro. Rakskrid Maodez Glanndour em eus kavet dispar e-keñver ar yezh. Evit ar pezh a sell ouzh ar menozioù, me gav din e vefe dav o displegañ en ur c'hiz all. Re untu en em ziskouezont en o gwiskamant a-vremañ. Keal ar varzhoniezh gant Maodez Glanndour a zo ivez un enep-lavar e-keñver ar fedoù, peogwir ez embann eñ ivez e varzhonegoù. Rak-se e vefen plijet dreist, vad a rafe din, ma teuje M. G. da zisplegañ hiroc'h penaos e veiz an darempredoù hag a vez etre ar barzh hag al lenner. Rak-se n' on ket entanet gant frazennoù evel « kanañ pe vousekanañ, n' eus forzh, gant na vo ket evit en em lavarout d' ar re all ». Gwelloc'h eo eget sarmonañ, a dra sur. Hogen ret eo anzav ez eus tud hag a gred er varzhoniezh engouestlet, zoken e-touez re Vro-C'hall ma kouezh war o c'hein bep tro anoue Maodez Glanndour, ez eus barzhed hag a zo ken gwirion hag ar re all, an « eneoù kaer »... Sur on ivez hon eus, pe da nebeutañ e tlefemp kaout, ur publikum all eget ar stered hag hon ael-mirer. Bemdez e vennigan an Aotrou me ivez, met n' eo ket « evit an niver vihan a lennerien hon eus bet a-viskoazh en ur skrivañ brezhoneg ». Ne welan ket perak e vennigjen an Aotrou evit an toullad sioù-fall, ha n' int nemet heuliadurioù ar pec'hed, evel m' eo sotoni ha dizeskamant ar bobl vreizhat ha fallagriezh ar waskerien. Me anav tud hag o dije c'hoant skrivañ evit o breudeur, ha pa n' o deus ket a lennerien, ne skrivont ket, pe dost.

74

Keal ar varzhoniezh hervez Mandez Glanndour a zo ul liderezh sakr e-lec'h na vefe nemet Doue hag ar beleg, ul **laus perennis** beneadat, ha na bled ket gant ar bobl. Derc'hel a ra ar barzh d' e c'herioù divoutin, evel ma talc'h ar manac'h d' e latin. N' on ket a-du gant se. Ul liderezh sakr e c'hell ar varzhoniezh bezañ. Hogen bez ez eus liderezh ha liderezh. Marteze on bet levezonet gant Katoliged al liderezh reterel, ma 'm eus bevet pemp bloaz ganto, ha gant an emsav nevez e Bro-C'hall hag e Bro-C'herman, met me gred ez eus el liderezh sakr ur monedone diehan o vont eus Doue hag eus ar beleg d' ar bobl, hag eus ar bobl d' ar beleg ha da Zoue. Setu perak e vank un dra er varzhoniezh pa n' eus ket, ouzhpenn ar c'hanañ pe ar mouskanañ, an diskanañ : tra an holl gumuniezhezh... »

G.R.

HOR YEZH. -

Niverenn 7 « Yor Yezh » a zo deut er-maez. Enni e vo lennet un nebeut pennadoù berr : **An hevelep = le même**, gant Abeozen, **Gall pe saoz** (diwar-benn ur pennad embannet el LIAMM gant Heussaff), **Gauloiseries** gant Arzel Even ha **Ger an Teñzorier**. Lodenn vrasañ an niverenn avat (da lavarout eo 40 pajenn) a zo gouestlet da oberenn vras Arzel Even : **ISTOR AR YEZHOU KELTIEK**. Embannet eo ar wech-mañ : Pennad-digeriñ, Kerentiezh ar yezhoù indezeuropek ; Pennad II, Ar c'helt-edaleg ; Pennad III, Ar galianeg:

Evit koumanantiñ, kas 500 lur (4 niverenn) da Pierre Denis, Le Rie, Ploaré, Douarnenez. C.C.P. 1499-51 Rennes.

UR SKOUER A SPERED LEDAN. -

Niverus eo an divroidi rusian a erru er Brazil, e-lec'h ma vez roet degemer vat dezho. An Tad Bourgeois, ur Jezuist Gall a zo karget da ober war o zro. Ar yaouankiz a zo bodet e kêrig Itu e rann-vro Sao-Paolo. Daou-ugent paotr a zo anezho : daou diegezh rusian o veilhañ warno. Mont a reont da skolioù kêr, hervez o oad, met en o zi-lojan e krouer, pe gentoc'h e virer hag e zalc'her un emdro rusek. E-kichen ar portugaleg, a zeskont er skol, yezh an ti eo ar Rusianeg. Ar pedennoù mintin ha noz, ar grasoù a-raok ha goude ar predoù a vez lavaret e Rusianeg. Graet e vez dezho lennadennoù war istor hag amzer dremenet o Bro. Ur wech ar sizhun e kemeront perzh el liderezh slavek, o kanañ o

c'hanaouennoù sakr. Ortodoksed int, met o renerion katolik ne waskont tamm ebet warno ; leun a zoujañs int er c'hontrol evit an ortodokselezh a zo evit ar Rusianed-se o holl hengounioù sevenadurel, denel ha relijiel ha se strollet a-grenn. Abegoù e-leizh a oa d' o lakaat pe d' o lezel da deuziñ er bobl a vevont gantañ. Met en Iliz katolik ez eus hiziv renerion ledan a spered, aonik da flastrañ tra pe dra e personelezh an den, prederiet da zispakañ ha da binvikaat ar bersonelezh-se. Marteze n' hon eus ket bet atav seurt blenerion e Breizh (Hervez « La Croix », 21 Genver 1956.)

AR C'HELAOUENNOU. -

Trugarekaat a reomp ar gelaouenn « Le Pays Breton » a gendalc'h d' ober bruderezh evit « Al Liamm » en ur embann alies pennadoù tennet eus hor gelaouenn, Nevez 'zo ez eo bet embannet ur pennad eus « Bisousig » hag unan all diwarbenn Israhel.

« Le Pays Breton », 19, rue du Départ, Paris. C.C.P. 12.199.90.

75

Anaoudek-bras omp ivez e-keñver « Douar Breizh » a ra dalc'hmat bruderezh evit « Al Liamm » hag hon embannadurioù. Koumanant 700 lur, 152, Bd de la Gare, Paris (13°).

E niverenn miz Meurzh ar gelaouenn brotestant « L'Evangile en Bretagne » e kaver pevare pennad ar genstrivadeg evit brezhonegerien. Ur pennad eus ar Bibl eo hag e ranker lavarout resis a belec'h ez eo tennet. An hini a ra war dro eo hor mignon A. Omnes, « Breizh Nevez », Plougrescant (Côtes-du-Nord).

KANTOS. -

Resevet hon eus « Kantos » a zo ur gelaouenn drouizel renet gant ar skulptour breizhat R. Tullou. Kt bloaz 100 lur. Georges Vallée, 3, rue de Clisson, Rennes. C. C. P. 1750-22.

KENSTRIVADEG. -

Ur gevredigezh nevez, anvet « L'Entente Culturelle Bretonne », krouet evit lakaat da dalvezout ar sevenadurezh breizhek, dreist-holl e-touez divroidi tro-war-dro Paris a roio e miz Here 1956 ur priz.

Ar priz-se a c'hello bezañ roet d' un oberenn savet abaoe ar brezel e brezhoneg pe e galleg war un danvez skiantel pe lennegel. Ar priz a vo 50.000 lur.

Kas ur skouerenn eus an oberenn da « L'Entente Culturelle Bretonne », 3, rue Francis-Garnier, Paris (17,°), betek an 19 a viz Mae.

DEVEZH AR BREZHONEG. -

D' an 10 a viz Mae e vezo graet evel bep bloaz ar gest evit ar brezhoneg. Kas a reomp da soñj d' hol lennerien n' hon eus morse resevet arc'hant diwar ar gest-se nag evit Al Ltamm nag evit al levrioù-skol pe levrioù-lenn evit ar vugale hon eus embannet.

Ra soñjo ar vrogarourion en deiz-se hon eus ivez ezhommoù-arc'hant evit kenderc'hel da labourat evel ma reomp, derc'hel hol lennegezh bev ha sevel levrioù evit hor bugale. Spi hon eus e vo an devezh-se, devezh ar brezhoneg evit an holl.

DEVEZHIOU-STUDI E PLOUEG AR MOR. - Devezhioù-studi a zo bet aozet e Ploueg ar mer gant ar gelaouenn « Skol ». 34 den a oa deut da selaou an Ao. Floc'h hag an Ao. Kalvez. An hini kentañ a gomzas eus Talvoudegezh ar Sevenadurezh evit buhez an den hag e relijion, hag an Ao. Kalvez e zisplegas penaos e vije tu da zeskiñ da vugale Vreizh lenn, skrivañ ha kontañ dre ar Brezhoneg ha da zeskiñ dezho tamm-ha-tamm ur galleg resis ha c'hwek.

KONTADENNOU BERR. -

O lenn teir c'hontadenn nevez embannet war « Al Liamm », **O C'harzhata**, gant Klerg (niv. 53), **Ar Gousper**, gant Fañch Elies-Abeozen, ha **Klod ar Bed-mañ**, gant Youenn Olier (niv. 54), e verzer pegen uhel eo aet an doare arz-se en hol lennegezh (evel en hon amzer en darn vuiañ eus lennegezhioù ar broioù bras ha bihan). Hanter-kant vloaz 'zo edo c'hoazh ar gontadenn verr e Breizh aozet

diouzh ar marvailh-pobl, pa ne oa ket ur marvailh-pobl gwirion. Lennit kontadennoù Dir-na-Dor, da skouer. Etre brezel 1914 ha brezel 1939 e voe ganet en hor bro ar gontadenn stumm etrevroadel, dreist-holl gant Youenn Drezen, Jakez Riou, Abeozen ha Meavenn.

76

Kontadenn verr hon amzer a c'hell bezañ, a ouzon ervat, ken liesdoare hag ar romant. Peurliesañ koulskoude ez eo studi un darvoud-ene c'hoarvezet ur wech bennak e buhez un den. Diwar an darvoud-se, a c'hell bezañ dibouez ha dister evit an dud all, e kemer ar gontadenn he liv, he galloud hag he c'hened. **O C'harzhata** : ur yalc'had arc'hant kavet gant ur paotrig war an hent a zigor dezhañ dor e huñvre, mont e-barzh ostalerioù ha klevout ar fonograf hag ar piano ! **Ar Gousper** : plac'h ar burev-butun o koll he muiañ-karet un devezh foar, hag o kavout ur mignon all. **Klod ar Bed-mañ** : ur martolod tapet gantañ ar groaz-vrezel e Mers-el-Kebir a zo troet e enor da vezh gant sotoni an dud. Holl ampartiz ar skrivagner a ya, a frazenn da frazenn, hep morse lakaat re anat e bal, da reiñ pouez d' an darvoud a zo kreizenn ar gontadenn, ken na deu an darvoud a netra da vezañ evit ur mare fromusañ darvoud ar bed. Ha bras eo, me lavar, ampartiz an tri skrivagner-se.

Hogen da ober, pe gentoc'h da reiñ lañs d' ul lennegezh, n' eo ket a-walc'h kaout skrivagnerien. Ret eo ivez kaout ur strollad - ur strolladig da vihanañ - a lennerien gouest da gompren pezh a vez kinniget dezho. Kontadennoù e-giz ar re-mañ, pa vijent bet savet hanter-kant vloaz 'zo, o lakaat o dije kavet un den d' o moulañ, n'o dije ket kavet a lennerien. (Soñjit e c'hwitadenn SPERED AR VRO.) Zoken e-touez an dud a oa neuze e penn emsav ar yezh, dibaot ar re o dije meizet talvoudegezh seurt skridoù. (« N' eus netra e-barzh, » a lavare din Frañsez Vallee goude lenn troidigezh **An Intañvez** gant Kate Roberts !)

Ar strolladig lennerien-se a zo bet savet tamm-ha-tamm gant « Gwalarn » hag « Al Liamm ». Un druez eo avat ne ve ket ur wech an amzer dastumet kontadennoù ur skrivagner e stumm ul levr, evel **Geotenn ar Werc'hez** pe **Dremm an Ankou**. E Kembre hag en Iwerzhon ez eus e-leizh a levrioù seurt-se, marteze diwar skouer Bro-Saoz. E Breizh, marteze diwar skouer Bro-C'hall, hogen kentoc'h dre ziouer a lennerien, n' eus ket. Ha koulskoude, ne gredan ket ez omp war-lerc'h ar Gelted all en arz diaes ha blizidik-se.

Roparz HEMON.

(Tennet eus « Ar Bed Keltiek » Nnn 120.)

DEMOKRATELEZH. -

An « Inuit », dindan renerezh An Daniz eo gwelloc'h stad o yezh eget hini Breizhiz dindon renerezh ar C'hallaoued. Setu ar pezh a skriv an Dr R. Gessain e « Les Esquimaux du Groenland à l'Alaska » (Editions Bourrellier, Paris), en ul levr loreet gant Akademi Bro-C'hall :

P. 77 : « Les Danois ont fait une oeuvre magnifique en apprenant à lire à tous les Eskimo d'Ammassalik, non point la langue danoise ou une langue européenne, mais la propre langue eskimo phonétiquement transcrite à cet usage dans notre alphabet latin. L'eskimo est actuellement devenu une langue écrite. Il y a à côté du comptoir d'échange danois, un instituteur de la Côte Ouest et dans chaque maison isolée, jusqu'au plus lointain fjord des extrémités du territoire de ces tribus, des chasseurs apprenant à de jeunes enfants à déchiffrer la langue de leurs ancêtres dans les livres apportés par les Blancs. On peut dire sans exagération que la tribu des Eskimo d'Ammassalik (Côte Est) est actuellement la population du monde où il y a le moins d'illettrés. Le résident danois, administrant la tribu et dirigeant le comptoir d'échange, parle avec les chasseurs en eskimo ».

77

P. 88 : « Les Eskimo de La Côte Ouest ont des livres et même des journaux en eskimo, écrits phonétiquement en caractères latins. Il n'y a pas d'illettrés sur la Côte Ouest. Ces Eskimo civilisés, fiers de leur nationalité groenlandaise en voie de formation, ont donné naissance à un certain nombre d'individus métis de haute qualité intellectuelle et morale, des pasteurs par exemple. Le plus remarquable de ces Groenlandais était Knut Rasmussen, un des plus grands savants ethnologues européens, qui fit une expédition mémorable avec d'autres savants danois qui le porta du Groenland jusqu'au Pacifique en une randonnée de trois ans. Sa langue maternelle étant l'eskimo, il put recueillir de façon parfaite les légendes et étudier les croyances de nombreuses tribus où il a séjourné. Là

encore, les Danois ont donné au monde un beau modèle ».

P. 95 : « Les Eskimo polaires bénéficient aussi des excellentes méthodes coloniales danoises dans le domaine de l'instruction et de l'hygiène... »

E-pad an amzer-se, ministr an deskadurezh ur Republik ! sevenet bras ! hag a zo ivez Bro ar Frankiz ha kement 'zo a respont d' **ar** Vretoned a zeu da c'houlenn kelennadurezh o yezh : « N' anavezan ket ar gudenn ! »

UR BOBL DIWRIZIENNET : BREIZHIZ. -

Moulet ez eus bet en niverenn 90 « Bleun-Brug » ur pennad pouezus-tre gant an Ao. Bourdelles diwar-benn Al Labouradegoù e Breizh. Setu amañ klozadur ar studiadenne-se : « N' eus ket eta skoilhòu o herzel ouzh krouiñ labouradegoù e Breizh, hag a vefe dreist galloud an den. Savet e vo unanig bennak. Koulskoude e talc'ho an divroa, an diboblañ, ma ne saver ket da heul, e kalon Breizhiz c'hoant da labourat en o bro. Arabat troc'hañ gwrizioù ur wezenn ha, goulenn frouez puilh diganti : ne raio nemet dizeriañ.

P' edon bugel, edo lorc'h em c'henvroiz o vezañ kristenien, Breizhiz, labourerien-douar. Abaoe an deiz ma 'z is d' ar skol n' em eus klevet nemet ober goap ouzh ar gristenien, Breizhiz ha labourien-douar ! Lavarout mat a rae an tad Gabel e Nancy (Semaines Sociales) n' eo ket ret d' an den bremañ divroañ evit bezañ diswrizienet ! Ar skolioù o deus mouget ha distaget ar c'halonoù diouzh ar c'horn-douar. Ar park n' eo ken nemet ur relegenn divuhez. Chapelioù diniver a oa, ha feunteunioù ar sent o skuilhañ o dour evit sec'hed ar c'horf hag an ene ; ar veleien, bountet pennadoù enno, o deus lezet ar chapel da gouezhañ, ar feunteun da gargañ gant lec'hid. Bremañ eo kouezhet an tiez a oa war-dro. Tri bloaz 'zo on en em gavet en ur pred « friko » en un ti e-lec'h ma oa daou den oadet : ur miz bennak kent e oa distroet an daou-mañ en ur ouelañ eus mision ar barrez, ne gomprenent ken ger ebet et prezegennoù graet en o iliz parrez. E-pad ar pred ne voe komzet nemet eus se hag eus « ar veleien sot war ar galleg ».

« Hag e vezer zouezet o klevout goude « Amañ, a-benn dek vloaz, ne vo den ken ? » En e lizher-koraiz (ne vez ken troet e brezhoneg) en deus diskleriet Aotrou 'n Eskob Sant Brieg e oa hervez ar Sosiologerien, tonket da Vreizh divroañ. Pebezh komz fallgalonus o kouezhañ, en hevelep sul, eus holl gadorioù-prezeg an ilizcù war ar bobl a oa ankeniet a-walc'h dija ?... Goude bezañ lakaet va freder gant va fobl kaezh tregont vloaz zo d' an nebeutañ, e kredan-me a-greiz kalon e vo aes-tre ar gudenn da ziluziañ an deiz ma vo c'houezhet tan al lorc'h hag ar fiziañs e kalon Breizhiz e-lec'h an digalonegezh.

« ...Met ar pezh a ouzon eo : e vefe nebeutoc'h a zismantrou e Breizh, e kilfe al lanneier, e tivogedfe al labouradegoù, hag e kanfe Breizhiz evel gwechall ma vefe lakaet ar brezhoneg keñver-ha-keñver gant ar galleg er skol, banniel Breizh keñver-ha-keñver gant banniel Frañs er maerdioù, ha ma c'hellfe ar gristenien gwelout ivez gant lorc'h ar brezhoneg er plas a enor en ilizoù. Da c'hortoz eo aner goulenn frouez puilh digant ur wezenn goude bezañ troc'het e gwrizioù. »

78

SPERED LEDAN ADARRE. -

Frankiz ha herezh speredel ha sevenadurel Bro-Saoz a zo lakaet en arvar gant ar memes nerzhioù a laka en arvar buhez Bro-Skos ha Bro-Gembre. Setu perak izili ar Commonwealth deut da skol hañv Strollad Broadel Kembre en Aberteifi o deus kinniget embann ul levr o tiskouez penaos e c'helle an teir Vroad bevañ ha bleuniañ er frankiz hag er c'henlabour, en ur Vreudeuriezhañ pobloù dieub.

Ul levr a zo bet savet eta : « Our Three Nations » hag a zispleg kudennoù politikel, arboellerezhel ha sevenadurel pep Broad dirak mestroniezh ar strolladoù bras Saoz. Diskouez a ra ar gwellaennoù a vije tu d' ober dre an emrenerezh hag an digreizennañ.

« Our Three Nations » gant John Banks, Gwynfor Evans, Dr. Robert Macintyre, Don Bannister, Roy A. Lewis, Arthur Donaldson. Priz : 2/6. Common Wealth, 12 High Street, London, N. W. 3, England pe Plaid Cymru, 8 Queen Street, Cardiff Wales.

Ar skouer a spered ledan-se hor laka da soñjal en aferioù diabarzh hon Emsav. Evel ma ouzer ne zeu ket mui Barr-Heol er-maez. Gwall souezhet ha poaniet omp bet o klevout e oa echu gant kannadig ar Bleun-Brug e Bro-Dreger. Souezhetoc'h ha poaniet **toc'h** a se o klevout e oa renerien ar Bleun-Brug pennabeg

an diviz-se (1). Lavarout a reomp sklaer ha didro e oa ar gelaouenn kalonekañ ha breizhekañ e-touez kannadouigoù ar Bleun-Brug. Goude ar gerioù a beoc'h hag unvaniezh hor boa klevet diganto nevez 'zo hor boa kredet o dije paotred Bleun-Brug Leon diskouezet o spered ledan. Siwazh !

(1) Goulennet e oa, hervez, digant ar renerien dilezel ar skritur unvan (hini « Al Liamm » hag an darn vrasañ eus al levrioù embannet e brezhoneg) pe lemel diwar ar gannadig anv ar Bleun-Brug !

KAMP KELTIEK ETREVROADEL EVIT AR RE YAOUANK. -

Ar C'hamp kentañ-se a vo dalc'het e Castle Gotha, Porthpean, Kerne-Veur, eus sr 25 a viz Eost betek an 8 a viz Here. Graet eo gant skoazell ar C'hendalc'h etrekeltiek a vo e Truro er bloaz-mañ. Ar C'hendalc'h o kregiñ d' ar lañ a viz Here e c'hell ar gamperien mont di. Oad ar gamperien a rank bezañ etre 15 vloaz ha 23. Skrivañ da : The County Youth Organiser, County Hall, Truro, Cornwall.

KAMP AR VREZHONEGERIEN E PLOUEG AR MOR. -

Divizet eo bet e vije dalc'het kamp ar Vrezhonegerien e Ploueg ar Mor eus ar 16 a viz Gouere d' an 29. Priz an devezh a vo 500 lur dre zen, bevet ha lojet. E Kamp ar Vrezhonegerien, ne vez komzet nemet brezhoneg. An doare-se a zo sellet gant ar renerien evel an doare gwellañ da zeskiñ ar yezh. Zoken ar re a oar nebeut a vrezhoneg a zeu a-benn da lavarout o soñj en un nebeut deizioù ha pedet int da zont niverus. Evel boaz e vo skol diouzh ar beure ha c'hoarioù war an aod en endervezh. Skrivañ d' en Itron de Bellaing, Le Vally, Guingamp (Côtes-du-Nord).

79

AR GORSEDD E MOROKKO. -

Keloù hon eus bet digant Per Loisel eus beaj izili eus ar Gorsedd da vro Morokko evit pardon St Erwan e Marrakech. Setu amañ ar pezh emaint e soñj ober du-hont.

Kuitaat a reont Pariz dre un D. C. 6 d' ar 4 a viz Mae, da 9 eur, evit bout e Marrakech war-dro 13 eur. Bretoned Morroko a vezo ouzh o gortoz en aerborzh gant o sonerien. An deiz war-lerc'h ez eont da Varrakech dre an hent. D' ar sadorn da noz, goude bout enaouet tantadoù, hervez ar c'hiz kozh, ez aint d' un nozvezh laouen meur gant dañsoù giz ar Vro ha re etrevroadel. Da ziskuizhañ an dud e vo kanet ganto ha gant an holl ha c'hoariet war delennoù. D'ar sul e vo graet pardon St Erwan hag ur rak-gorsedd da zegemer un nebeudig izili nevez ha n' int ket evit dont da Vreizh. Da greisteiz e vo servijet ur pred bras da ouzhpenn 500 den. Erfin, d' an abardaez, e vezo graet ur gouel breizhek meur. Graet e vo ur stal ma vo gwerzhet ennañ levrioù brezhonek ha re c'hallek diwar-benn Breizh.

Gorsedd Breizh a vo lidet e Sant Brieg, d' an 28 ha 29 a viz Gouere. Gwerzhet e vo levrioù brezhonek ha graet un diskouezhadeg gant an Ao. Le Calvez, levrier, ru Le Gouino, St-Brieg.

AL LIAMM 56

AL LIAMM
Tir na n-òg

NIVERENN 56

Mae – Mezheven 1956

NIVERENN 56
Mae - Mezheven 1956

TAOLENN

Gouelec'h, gant Benead	3
'Vel ma plij dit, gant F. R. Tangi	4
Ar breur bihan, gant Fañch Dies	5
Menec'h, gant Youenn Olier	10
An degouezh mat, gant Vecchio Piemonte (tr. M. Klerg)	14
Eñvorennoù hanter-oad, gant Taldir	23
Serbiz Bro-Luzasia, gant W. Minarech (tr. Y. Thomas)	33
Istor lennegezh vrezhonek an amzer-vremañ (kendalc'h), gant Abeozen	53
Yezhoù ha lennegezhioù, gant R. Hemon	62
Iwerzhon hiziv an deiz, gant Heussaff	65
Al levrioù, gant Per Denez	68
Notennoù	71

GOUELEC'H

gant BENEAD

Labous mut ha morgousket en e gaoued merglet
 Stivell aet da hesk, tan aet da ludu distaolet en avel,
 Merc'h, ouzh petra hañvalout doan hag azrec'h da galon ?
 Gwerc'hez dilezet er gouelec'h.

Petra 'c'h eus da c'hortoz hiviziken ? Petra 'ta ?
 Nemet sec'hor ha sec'hed,
 Gwad ar goulioù na vint ket gwelc'het,
 Ha dindan da valvennoù,
 Holen an daeroù na vint ket skuilhet,
 Gwerc'hez dilezet er gouelec'h.

'VEL MA PLIJ DIT

gant F. R. TANGI

Ma kredez e teuio un ael,
 sell ouzh an neñv ha chom sioul :
 aeled e-leizh a nij en neñv
 evit ar re o deus pellwel !

Ma kredez ez eo ret mervel,
 kae d' az kwele ha chom sioul :
 ankou n' eo ket pell diouzh an ti
 pa ouel ar c'hi war blouz e doull !

Mes ma kredez emaut ur gwaz,
 krog ez pennbazh ha deus er-maez !

AR BREUR BIHAN

gant Fañch ELIES

- Frañsa Lapous, gortoz 'ta ! a huche ur c'hrennardig dialanet, e votoù prenn en e zaouarn, e sac'h ler o tarlammat ouzh e gein.

Frañsa Lapous, ur paotrig krog en e seizh vloaz, a chomas a-sav ken na voe egile en e gichen. Botoù lergoad a oa gantañ en e dreid, ur boned glas plat war e benn touzet hag ur saro du en-dro d' e gorf.

- Te 'zo chomet e pinijenn hiziv, Frañsa ? eme Jobig ar Berr. Neket alies koulskoude e vezez-te dalc'het da skubañ ar c'hlas. Petra 'c'hoarie gant Pintig 'ta ?

- Me eo ne selaouen ket, Jobig, hag ez eus savet droug ennañ.

- Me n' eo ket heñvel. Selaou pe chom hep selaou, evidon-me eo ar memes tra. Boas eo deut ar Skoul d' am derc'hel war-lerc'h ar chlas da skubañ. Ne vefe ket un afer, ma vijen-me o chom e kêr evel dout ha nann e Kroaz ar Vatouterien, tri c'hard eur vale diouzh Skol ar Frered... Met nag a vall a zo warnout, Frañsa !... Alato, neket abalamour m' out chomet e pinijenneo ken du da benn ?

- Nann, Jobig. Va breur bihan Gwilhomig a zo klañv.

- Añ ? Klañv eo ?... Bet eo ar medisin war e dro ?

- Ya, deut eo an Aotrou Merrien dec'h da noz. Louzoù en deus roet, nemet ne da ket gwelloc'h an traoù tamm ebet.

Jobig ar Berr a lakaas e dreid en e votoù hag a valeas dilavar e-kichen e gamarad.

- Dre zu-mañ, emezañ goustad ur pennadig goude, pa vez klañv ar re vihan ez eer da laret ur chapeled da Feunteun ar Werc'hez Zu... Gouzout mat a rez pelec'h emañ, war vord an hent kozh, en tu all da Groaz ar Vatouterien. Bet out o c'hoari ganemp en hañv-mañ er prad e-kichen p' edomp o tiwall ar saout, ' peus ket soñj ?

- Ya, gouzout a ran pelec'h emañ... Eno eo ne vez devet nemet gouloù rousin, neketa ?

- Ya, gouloù rousin, Frañsa. Hag arabat o frenañ en ispisirioù, te 'oar. Ret o goulenn en aluzen war an hent da vont di.

- Ha mar ne vez ket roet d'emp ?

6

- Morse ne vez nac'het ur c'houlouenn rousin ouzh unan o vont e pirc'hirinaj d' ar Werc'hez Zu, Frañsa. Pec'hed e vije. Da vamm n' he do nemet dont du-mañ. Te 'oar pelec'h emamp o chom, tost d' ar c'kroaz-hent.

- Ya, anaout mat a ran an ti, Jobig. Me 'laro d' am mamm.

Hag e kimiadas diouzh e gamarad e traoñ ar Ru Nevez. Jobig eñ a gendalc'has da vont etrezek hent Landerne, herr warnañ, rak noziñ a rafe dizale.

* * *

Pa zeuas Frañsa Lapous tre en ti, n' oa den en traoñ. Sevel a reas diouzhtu war laez evit kaout keloù eus kleñved e vreur.

Edo e vamm e-kichen ar gwele bihan e ridochoù gwenn. Treiñ a reas-hi ouzh e du he dremm ankeniet, en ur ober sin dezhañ da vale didrouz.

Ruz-tan e oa bizaj ar c'hlañvour bihan war ar penn-wele gwenn-kann. An derzhienn moarvat a lakae ar gwad da sevel d' e benn.

- Perak ne dafes ket da c'houlenn digant ar Werc'hez Zu pareañ Gwilhomig ? eme Frañsa d' e vamm a vouezh izel.

Katarin a reas ur sell ouzh he mab henañ ha ne respontas grik.

- Chom e-kichen ar gwele, emezi dezhañ a-benn ur pennad, ma' z in da lakaat koan war an tan. Mar tihun Gwilhomig, galv ac'hanon.

Hag e vanas Frañsa e-unan er gambr. Un tan mouded a skleure didrouz war oaled ar siminal vihan. Soñj a zeue d' ar paotrig eus e gleñved daou vloaz a-raok, ma oa chomet dinerzh da c'houde hag aonik e-pad meur a viz. Na pegen spontet e oa bet, ur beure, en ur welout diouzh prenestr ar gambr, e korn ar straed, e kichen ti ar boloñjer, ur pikol morian en e sav en ur sae roudennet ruz ha gwenn ! War a oa bet laret dezhañ abaoe, ez eo bet un toullad mat eus ar vorianed-se e Diskouezadeg Meur Pariz ar bloavezh 1900. N' oa ket bet tost da Frañsa mont er-maez eus an ti en deiz-se. Ar vorianed a zebr an dud evit doare. Koulskoude e lare e dad dezhañ da lein en ur ober goap :

- 'P eus ket ezhomme da gaout aon, Frañsa. Te 'zo treut evel un askell-groc'hen. Ma vije savet kof ouzhit evel ouzh an Aotrou Pab, ne laran ket. Ar seier glaou-se a zo tud lipous, war am eus klevet. Dougetoc'h int d' an druzoni eget d' an eskern.

Gwelloc'h en doa kavet Frañsa evelkent derc'hel er goudor e dammig korf, treutaet gant ar c'hleñved, keit ha ma voe e kêr eus an dud kroc'henet du.

Nemet e parefe Gwilhomig evel m' en doa graet e-unan...

7

Ur medisin mat e oa an Aotrou Merrien ha douget ouzhpenn d' ober eus e wellañ evito dre ma oa bet mamm Frañsa magerez e vab Herri... Met gwell e vefe memes tra mont da feunteun ar Werc'hez Zu. Mamm ar Mabig Jezuz a zo c'hoazh galloudusoc'h eget ar vedisined, sur a-walc'h.

Lakaet ar soubenn war an tan e savas ar vamm d' an nec'h adarre. Kenderc'hel a rae Gwilhomig gant e gousk strafuilhet.

- Ar Yaou eo warc'hoazh, Frañsa. Dont a ri ganen da Feunteun ar Werc'hez Zu ?... Tintin Mari-Louiz a chomo da veilhañ da vreur bihan.

- Ya, mamm, mont a rin... Jobig ar Berr en deus laret dit mont da di e gerent da c'houlenn ar c'houlouenn rousin... Me ziskouezo dit an ti.

- Mat ! Kae bremañ d' an traoñ d' ober da zeverioù, ma vi dizalc'h warc'hoazh da zont ganen... Ha taol evezh na zeufe ar soubenn en tan.

* * *

Teir eur d' abardaez e oa pa erruas ar mab hag ar vamm e-tal ar Feunteun. Enaouet e voe ar c'houlouenn rousin hag e tevas en ur vogediñ er c'hustod a-zehou da skeudenn ar Werc'hez Zu, a-zioc'h d' ar feunteun o skuilhañ goustad he dour sklaer er poull-kannañ e maen-benerezh. Geot ar prad e-kichen a sante endeo alan klouaraet an Nevez-Amzer hag a wiske ul liv glas teneroc'h, gant un tommheolig amañ hag ahont o tigeriñ e lagad dindan bannoù an heol nerzhusoch.

Gredus e pede an daou birc'hirin. Dizenez war-lerc'h dizenez, e rikle goustad o chapeled etre o bizied. Ar Werc'hez Zu hag he Mab, ken du hag hi, a

bare o selloù goullo war an dremmwell, evel pa vefent o selaoù ar voc'hruzic a richane er bod drein etre ar poull hag ar prad.

Strakata a rae ar rousin dre ma tigrske ar c'houlouenn. Pa voe tost da vervel ec'h evas Katarin hag he mab ul lommig eus dour ar feunteun e palv o dorn. Frañsa eo a lakaas daou wenneg er c'hef-houarn. Hag e kemerjont penn o hent etrezek ar gêr, dilavar evel ma oant deut.

* * *

Skignet o doa kleier Pask o boleoù lirazhin a-us d' ar vro digopret gant heol miz Ebrel. Levenez ar vuhez dasorc'het diouzh bez yen ar goañv a c'hoarzhe wat dremmoù an dud ha war glasvez ar maezhioù. Landivizioiz, en o dilhad sul a zeue a vandennoù divall etrezek Koad Mez. Pardon ar C'hilheien a oa anezhi hag ar voused a oa en o jeu.

8

Frañsa ha Gwilhomig gant o zad a oa oc'h erruont e-kichen ar Vali a gas da feunteun Sant Gwilithouarn, kluchet ouzh troad an dorgenn goadek rag-enep da Goad Meur, en tu all da brad an Ti-Gwenn.

Gwan e oa c'hoazh divesker Gwilhomig. Setu perak en doa graet an div drederenn eus an hent war vrec'h e dad. Bremañ, avat, p' oant erruet dirak ar stalioù bonbonioù ha kouignoù, e felle dezhañ baie evel unan bras. Daoust ha da bevar bloaz ne vezer ket tost da vezañ paotr yaouank ? Kregiñ a reas e dorn e vreur hag e skoas d' ur stal kouignoù :

- Va zad, emezañ, me 'fell din ur c'hilhog gant ur seizenn ruz.

- Ha me unan gant ur seizenn velen, eme Frañsa.

- Diouzhtu, bugale, eme Cheun Lapous ha paeet gantañ an div wastell e plantas o c'hilheien d' e baotred e beg pep a wialennig kelvez dirusket. Hag ez ajont war o fouez etrezek ar feunteun. Tud a zeue dija en dro, pa ziskennent gant an diribin a gase betek an eienenn. Sant Gwilithouarn a seblante c'hoarzhin ouzh an holl dindan e wiskad dour raz nevez-flamm. Ar bardonerien a dostae da evañ ur volennadig dour hag a daole o frof er feunteun. Met n' oa ket kollet an arc'hant evit-se, rak ul liñser a oa bet diskennet en dour daou vaen plat warnañ hag ar gwenneien hag an daou-wenneien a gouezhe ennañ er strad. Ur wech echu ar pardon n' o doa ar re a rae war-dro ar feunteun nemet sevel al liñser d' ar gorre hag e teue ganto profoù ar bardonerien.

Gwilhomig a dostaas, krog e dorn e dad, evit teurel e bezh moneiz en dour hag e teujont war o c'hiz.

- Petra 'vez graet gant an arc'hant-se, va zad ? eme Frañsa, en ur sikour e vreur da sevel ouzh torgenn.

- An arc'hant-se a zo da dud mereuri Koad Mez, amañ e-kichen evit derc'hel a ratre skeudenn ar sant ha naetaat e feunteun.

- Heñvel eo, moarvat, evit ar Werc'hez Zu, ma oamp bet o c'houlenn diganti ar pare evit Gwilhomig ?

- Heñvel eo, eme Cheun Lapous.

- Ar Werc'hez Zu eo he deus pareet ac'hanon-me ? a c'houlennas Gwilhomig gant e vouezhig sklinton, en ur sellout gant avi ouzh ar c'hilhog, div wech brasoc'h eget e hini, a oa e beg gwalenn ur julodig a ziskenne d' ar feunteun, krog e dorn e blac'h.

- Ya, da vamm a lavar eo ar Werc'hez, a respontas an tad. Met me gred din en deus ar medisin sikouret un tammig ivez, kompren a rez. Pa vez klañv unan bennak eo fur da gentañ gervel ar medisin war e dro. Pa ne zeu ket, avat, a-benn

eus ar c'hleñved, e klasker sikour unan galloudusoc'h egetañ.

9

- Mat, va zad, eme ar breur bihan, me 'ranko mont da reiñ ur pok d' ar Werc'hez Zu.

- Hag ez i, va mabig-me, pa vi kreñvoc'h war da zivesker. En hañv-mañ, sell, pa vo deut poent ar mouar du, ez aimp d' ober un droig betek eno.

Dindan ar gwez fao o tigeriñ o delioù glas tener, e tregerne ar Vali gant safar ar c'hwezhigelloù hag ar c'hwitelloù a bep seurt ma c'hoarie ganto ar vugale. Hailhoned vihan bilpous a rae o reuz e-touesk ar bardonerien. Hep ober van e tostaent ouzh ar bourmenerien zievezh hag e tarc'houent un taol gwialenn c'hidaz gant ar c'hilheien pintet e beg bizhier ar re vihan. Hag e tirolle ar bugel, dibennet 'dezhañ e wastell, da leñvañ ha da c'harmiñ, e keit ha ma skampe an hailhevod, leun e vouzelloù a blijadur, da ober kemend-all d' un all pelloc'hik.

Darbet e voe da gilhog Gwilhomig bezañ torret gant un taol treitour, nemet gwialenn ar marmouz fall, torrer kilheien, eo a chomas e dorn prim Cheun Lapous, war evezh abaoe ur pennadig.

- Gwelet a riz, mabig-me, emezañ d' an hini bihan strafuilhet, bez' ez eus e giz-se war an douar re vihan hag ivez re vras n' o deus plijadur nemet pa reont poan d' unan bennak.

- Ha va c'hilhogig-me a zo ken brav gant e seizenn ruz ! eme Wilhomig. Hag e zebriñ a c'hellin emberr, va zad ?

- Fur e vo dit ober, ya, a-raok ma vo re ziazez ar gouign. Me 'barife, Gwilhomig, ne roy ket un tammig din zoken ?

- O eo, va zad, ha da vammig ivez, eme an hini bihan dic'hoarzh ha lorc'h ennañ.

Erruet e oant e penn ar Vali, digor he c'hloued war an hent bras.

- Deus ma vi dougennet bremañ, mabig-me. Re skuizh e vefes o vale betek ar gêr.

Hag e pellañont o zri, en o c'halonoù levez don ur Sul Fask e bleuñv, leun a c'hoarzhoù bugale zrant hag a richan evned ar girzhier.

Yaou, 28 Kerzu 1944.

MENEC'H

Da Ronan Huon, e koun ur bloavezh tremenet e bro Dreger.

gant Youenn OLIER

« Cultivons notre jardin. »
VOLTAIRE.

Bez' e klevet neuze soniri an dihuner o tindirinat er gambrig, da c'houde, grumuzadennoù ha war-lerc'h, ur vazailhadenn. « Poent eo sevel ! » a c'hrougne ur vouezh raouliet. Dek munud goude e wigoure an diri dindan treid ur vaouez o tiskenn er gegin. Podoù ha bolennoù o stirlinkat. Richan an aezenn-leskiñ ; c'hwezh ar c'hafe e-barzh an ti. An diri a wigoure adarre : ur vaouezig lart, dezhi blev louet a-fuilh, roufennet he dremm, morlivet, kafunet en ur sae-gambr bet gwer gwechall a bigne goustad, o tougen d' he gwaz war ur plad hir ur volennad kafe du ha daou damm bara amanennet : lid al lein beure a zigore an devezh.

Nav eur a sone pa zegouezhe ar gwaz en traoñ : un denig divalav, un haroz eus ar brezel bed kentañ, moñs : e vrec'h zehou a horjelle a-hed e gorf. Mont a rae war e bouez betek an daol. « E pelec'h emañ ar gazetenn ? » a c'hourc'hemenne ar gwaz-mestr. Ar vatezh-wreg a zegase dezhañ diouzhtu. Neuze e chome Yann Korformat da lenn. Ha ne glevet mui betek nav eur hanter nemet soroc'h ar paper breset ha toumpi ar botoù-koad war pavez ar gegin.

Da nav eur ha kard e save an den diwar e gador, evel pa vije bet lusket gant nerzh ur winterell rak-reizhet. Mari a errue d' ar c'houlz-se, o sec'hañ he daouarn ruz ha gleb en he zavañjer lous teraset. « Pegement a rankez kaout feteiz ? » a c'houlenne ar paotr, rok. « Hama, » a responte ar vaouez prim-ha-prim, « krestet eo priz an amann abaoe dec'h, krampouezh a rankomp kaout da verenn hiziv, pemp kiload avaloù-douar a zo da brenañ ivez... hm, hm, mill lur am bo evit ar wech-mañ... » - « Ne droadez ket gevier din ? » a rambree ar paotr outañ e unan. Mari a wigne he daoulagad pers dislivet ; an denig a droe e benn bihan war e c'houzoug tort etrezek enni, liv an disfiziañs en e gerc'henn. Tennañ a rae neuze ur yalc'h kramennet diouzh e c'hodell hag e lakae gant evezh war an daol un nebeut bilhedoù lous. Kontañ a rae a vouezh izel o tiskouez anezho gant e viz. «- Mat eo ar gont ? » a aterse o sevel war-du enni e zaoulagad disell.

11

Roet an arc'hant gantañ ez ae da gerc'hat e chupenn kozh da vont da balat douar el liorz. Hen gwiskañ a rae sikouret gant e wreg. Hag eñ da glemm : an tarzhennoù daonet-se hag a zo chomet en e gig e laka c'hoazh da c'houzañv. Poent eo mont d' ober war-dro ar saladenn er jardrin a-drek an ti. N' eo ket druz ar geusteurenn er gêr ha legumaj a ranker kaout da werzhañ en hañv d' an tiez-degmer ; ar pañsion n' eo ket a-walc'h evit bevañ. Hag e pella, souchet, e rañv war e skoaz.

Da unnek eur eo distro Mari. Sederadet eo gant he zroiad. Mouskanañ a ra :
Annaig he deus daoulagadig
Evel div steredennig...

Faoz eo he mouezh, hogen laouen he c'halon. Tizhet he deus espern un nebeut arc'hant : gellout a ray prenañ gloan d' ober loeroù evit an nevez-amzer. Ur gaou bihan ne ra ket droug a-hed ar wech. Gervel a ra he gwaz : « Aiout, Yann ? » a glever e yezh flour bro-Dreger. Hemañ a zered gwellikañ ma c'hell. Rent-kont. Grougnerezh. Met ar vaouez a zo trec'h : ledanaat a ra ar mousc'hoarzh war

he dremm.

Da greisteiz rik e tivoged ar soubenn gaol war an daol. Frankaat a ra fronelloù Yann o klevout ar c'hwezh vat a leugn ar gegin, en em astenn a ra war an daol a-benn tañva gwelloc'h ar boued saourus-se. Aezenn-dour war ar gwerennoù ; flouperezh ha fleperezh a bep eil.

« Pegement e vo feurmet ar c'hambroù d' an douristed en hañv-mañ ? » a jagouilh Mari, leun he genou.

« Hañ ? Eizh kant lur an nozvezh, ne vo ket re ger, a gav din ? » a respont ar gwaz o sevel trumm e benn a-ziwar e soubenn.

« A gav dit ? » eme Vari. Jediñ a ra war-vouez he bizied lardet gant druzoni ar c'hig.

« Pevar mil lur warn-ugent a c'hellimp kaout e miz Eost a lavar en diwezh ha bihanaat a ra he daoulagad o saouriñ gweledigezh ar bilhedoù mil lur a gouezh er yalc'h, ha tevel a ra. »

Kanet he deus ar gougoug en he boestig c'hell e-tal ar prenestr, a-us d' ar fornigell. Un eur eo : pep hini a ya da c'hourvez. Ar gwaz a jilgamm betek kambr al laez ; ar vaouez a ziroc'ho-hi en traoñ er sal-debriñ, war ur sofa.

12

Div eur hanter : sentus ouzh ar reoliadur e sav ar vaouez un « Aiout » raouliet a glever c'hoazh. Yann a ziskenn en ur gammañ. Disleviñ gen a ra. Tortoc'h eget boaz ez eo ha leun a bikouz e zaoulagad : ar glaour a zever a bep tu d' e ziweuz. « Brav an amzer ? » a c'houlenn, en ur sellout dre ar prenestr. Mont a ray eta da labourat er jardrin, da blediñ gant e saladenn na ziwan ket mat er bloaz-mañ. Mari a chom en ti. Setu hi, lunedoù ganti war he fri helmoet ouzh an daol, he groñj harpet war vozioù he daouarn, o lenn, o studiañ, pa lavaran mat, an « Ouest-France ». Trouzig an horolaj e sioulded ar munudoù digenvez a dec'h d' ar Beurbadelezh. Grigoñserezh reoliek un dumporell o rampañ gorrek e penn all ar straed ; bourouell mouezhioù difraezh ar vugale o kanañ er prad en tu all d' ar jardrin, e-tal ar gwez fav uhel hag a hej goustad o broñsoù glas splann en aer klouar ; douster an nevez-hañv : morediñ a ra Mari ; he groñj a horjell a-blaen kaer a-zioc'h an daol...

Peder eur hanter : bolennadoù kafe, bara amanennet, ha kaotigell war al lien koaret ; pred dudiusañ an devezh. Ha war-lerc'h, setu etrezo ur c'hoari damez ken kramennet ha chupenn jardrin Yann. Dav eo kaout daoulagad lemm evit ober ar c'hemm etre ar c'harrez gwenn hag ar re zu. Met ne ra forzh, boazet eo Mari ha Yann. Luskañ a reont ar pionoù hep rannañ grik. Bep an amzer evelato e klever Yann o youc'hal : « Truchañ a rez. » Mari avat ne lavar netra. Hag eveljust e koll. Laouen eo ar gwaz : gouzout a ra eo ar mestr er gêr.

Emañ an noz o serriñ : ar gwez pupli en tu all da voger al liorz a zo spinet gant bannoù melen an heol, ha skleurioù arruz a c'hourvez e-barzh gwerennoù dargudet ar gegin. Mari a gempenn ar gweleoù. Eñ a zo o tanañ e gorn-butun en ur lenn ur romant polis. Glaour a zeu adarre a-ziwar e c'henou dam-seizhet da heul e c'hloaz kozh. Ne soñj ket en dra-se avat : ur c'horniad butun, ur banne gwin ruz, ur romant polis bennak da lenn, n' eus ket ezhomm muioc'h da veza evurus war an douar-mañ.

Seizh eur eo : emeur oc'h aozañ koan. Koaniet eo dezho da eizh eur. A ! ankounac'haat a raemp : ar partiou diouzh an noz. Kartennoù du gant ar gramenn hag ur pallen gwer dislivet a zo lakaet war an daol. Bazailhat a ra Mari : gouzout a ra e ranko koll. Plijout a rafe dezhi gonit marteze, hogen ne gar ket an tabut. Eizh eur hanter eo. Prennañ a reer an norioù. Ne glevit ket diroc'hadennoù o tregerniñ e didrouz an noz : nav eur eo ; an dra-se a zo aesoc'h da c'houzout eget gant horolaj an ti-kêr, tudoù !

Dilun, ...eizh eur, nav eur, kreisteiz, div eur, seizh eur. Dimeurzh, ...eizh eur, nav eur, kreisteiz... Dimerc'her, ...eizh eur, nav eur... Diriaou,

digwener, disadorn.

Disul : deiz bras ar sizhun. En deiz-se e laka Yann e wiskamant louet brav, kinklet gant lietennoù liesliv e vedalennoù hag e dog blot war e benn. Mont a ra d' ar vodadeg. Hini ar sosialisted. Nann, ne gar ket ar veleien, n' eo ket d' an iliz ez ay. Ha darvoud pouezusañ an devezh : c'hoari a ra boullou hag evañ an « aperitiv » gant e gamaladed eus an « Anciens Combattants » m' eo sekretour ar strollad anezho. Sevenet gantañ e zeverioù e tistro d' ar gêr. Drev eo : ar bed a gan en-dro dezhañ. Glaourin a ra gwashoc'h eget biskoazh met gant al levenez an hini eo.

Ha Mari a zo en he bleud ivez. He nizez a zeu d' he gwelout gant he bugale : tri a zo anezho, daou baotr hag ur babig dek miz. (Intañvez eo he nizez.) Aze emaint holl, an daou baotr gant o daouarn en o godelloù, o blev touzet, hag o aer dichek. Divjod livrin o deus rontoc'h c'hoazh hiziv gant ar madigoù a chaokont. (O moereb kozh a oar pezh a blij dezho.) Hag ar gwidoroc'h ivez : hemañ eo muiañ karet Mari. E gemer a ra war he barlenn, ober noilhig ha lazig dezhañ. Ha dav d' an divjod, plak, plak, plak... pokoù, pokoù, ha pokoù c'hoazh. Aze 'z eus kroc'hen fresk avat ! Ruz eo Mari gant ar joa, krak eo he daoulagad : deut **eo** en-dro da veure he buhez. Levenez a zo en ti en deiz-se, me ' lavar deoc'h : an aperitiv, ar boullou, ha n' eo ket ki pe gazh da flourañ, hogen ur gwir vabig !

Levenez bugale an Aotrou Doue.

Pariz, miz Meurzh 1951.

AN DEGOUEZH MAT

(diwar an Italianeg)

gant Vecchio PIEMONTE

brezhoneg M. KLERG

Gwechall an neb a ranke chom da dremen an noz e Priasko, ne gave repu nemet en Osteliri ar C'hoailhed. Ur sal a-rez-douar a dalveze da gegin ha da gambr-kousket d' an ostiz ha d' e wreg. Debriñ a raed en ur gozh sal deñval hag e kousked en estaj kentañ, en un toull mogedet a oa ennañ bern-war-vern un armel, div gador, ur gwele fall. Met ne veze ket gwelet ouzhpenn peder gwech ar bloaz, unan bennak o tont er gambr-se da gousket : ar chalboterien, ar vesaerien hag a ehane er vourc'h, a chome da gousket er marchosi pe war ar foenn ; ar diavaezourien a renk uhel a zalc'he gant o hent...

Gant ur barr-arnev spontus, dirollet a-greiz-holl d' ar 7 a viz Here 1833, d'abardaez-noz, e voe ret d' ur paotr yaouank hag a oa o tremen d' an drot vat, en ur brav a garreoz, mont da glask gwasked buan-ha-buan dindan ar porched. An ostiz, pres warnañ, a ziredas da sikour an estren da zistagañ e gazez, d' he c'has d' ar marchosi ha da voutañ ar wetur a zivere gant an dour dindan ur c'harrdi bihan. An ostizez a enaouas ar gouloù, a adc'hwezhas an tan hag a daolas ennañ ur vriad vleñchoù... Pa zeuas ar paotr yaouank en ti ha pa welas an tan o flamminañ uhel en ur strakal hag en ur frañval hag en ur gargañ an ti a sklerijenn hag ar siminal a elvad, e teredas da gaout an oaled, mall warnañ, evel ur bugel. En em lakaat a eure en e sav dirak an tan en ur dreiñ e gein d' an tommder ; hag en ur frotañ e zaouarn e selle gant daoulagad kurius da c'houzout e pelec'h e oa en em gavet...

An ostiz, un toupard a zen anezhañ, izel e dal, balirek e ziwabrant, a dostaas gant doareoù seven ; ha goude tevel ur pennadig e lavaras gant ur vouezh asur : - « Amañ e chomot da gousket, keta ?

- Ma ! a respontas egile : ...lakaomp em bije c'hoant...

- Neuze 'vat, ho pije ur gambr vat hag ur gwele eus ar c'hentañ.

- Liñselioù fresk ivez ?

15

- 'Velkent !!!

- Petra a root-hu din da zebriñ ?

- Amann, kig-sall, vioù fresk, eme an ostizez, ha div gioc'h rostet. »

Ha hi o tigeriñ ur voest hag o tennañ diouti daou labous hir ha moan o begoù ; hag e taolas anezho war an daol.

- « Meuzioù-beleg ! a droc'has an ostiz en ur bouezata an evned etre e zaouarn.

- Diskouezit-i din, a grias ar paotr yaouank. Piv en deus o faketa ?

- Me va-unan, er Pria.

- Petra eo ar Pria-se ?

- Kaerañ lec'h da chaseal eus ar vro-mañ a bezh.

- Pell emañ ac'halenn ?

- O ! mont a reer di en ur ober un hanter-eur. »

Ar paotr yaouank a sachas ur gador etrezek ennañ : azezañ a reas warni en ur astenn e zivc'har hag e chomas da sellout ouzh an tan. Ar flamm sklaer a sklerijenne e zivjod fresk, a zaoulagad splann ha difiñv, e dal dibreder.

- « Pec'hed eo, emezañ etre e zent n'em eus ket soñjet lakaat va fuzuilh er c'harreoz.

- Sell 'ta, a lavaras an ostiz a vouezh uhel, c'hwi a zo chaseer ivez ?

- Ya sort-se ! Met dre zu-mañ ez eus ken nebeud a draoù.

- Eus a belec'h e teuit, ma ne don ket re gurius ?

- Eus a Villarengo.

- Bet on eno. Ur gaer a vro, met hep koadoù na stankoù. Netra nemet parkeier ha pradeier : douaroù mat evit ar raskerig-melchon (koailhed) hepmuiken.

- Ha va zad am lez da vont ken dibaot a wech ! Bremañ ma 'z eo klañv, emañ war va c'hont plediñ gant an holl aferioù.

- Peseurt micher en deus ho tad ?

- Paotr-afelioù evit ar Markiz Debrío.

- An hini en deus ur palez ker bras e Torino ?

- Ya, hennezh ! Hag emañ o vont d' e gaout end-eeun. »

Mont ha dont a rae an ostiz a-dreuz hag a-hed an ti ; ober a reas ur sell war ar boued, ur sell all war an daol hag a oa dreset ha mont neuze betek toull an nor da sellout ouzh an oabl.

An dour-bil a oa troet bremañ, e glav fin, e glizhaj sioul munut, ingal ; ar c'houmoul uhel - nebeut anezho - en em lede evel ur ouel didroc'h c'hoazh, met sklaer ha tanav awalc'h evit ma weljed skeud al loar.

- Warc'hoazh e vo kaer an amzer, eme an ostiz en ur zont war e giz, ur brav a zevezh evit chaseal war ar Pria, rak goude ar glav, ar jiboez hag a zo er plasoù lec'h n'heller ket mont peurvuiañ, a zeu er-maez... Un dudi e vez !

16

Ar paotr yaouank atav en e goazez dindan mantell ar siminal, a hañvale kemerout plijadur oc'h ober hag o tispenn skeudennoù war al ludu gant ar biñsetez. E gwirionez, krog e oa e spered da labourat da vat hag ar soñjoù a save evel-se en e benn, a blije dezhañ. An tech da chaseal hag a zo bet un dra ret evit an dud kentañ a zo c'hoazh evit tud 'zo ur pleg kreñv-meurbet, didrec'hus, gouez zoken a-wechoù...

Ur pennadig goude e lavaras an ostizez e oa prest koan. C'hoantaat a reas Luigi Baralis ec'h en em lakje an ostiz, Moresko a-dal dezhañ. Hemañ pa gave blaz war ar gaoz a adstagas da zivizout diwar-benn ar Pria : - « Ul lec'h e oa, emezañ, hag a rae da galonoù ar chaseourien tridal netra nemet ouzh hen gwelout. Dav e oa mont di gwech pe wech. Neuze 'vat e welje a bep seurt jiboez : houidi, yer-dour, krak-houidi kioc'hed... D' ar goañv pe d' an diskar-amzer, e veze kavet eno ivez gwazi, garaned ha kerc'heized ; hag an hini a ouie an tu, ne oa ket diaes dezhañ tostaat dezho war hed-tenn... Ar bloaz a-raok, just d' ar c'houlz-mañ, e oa deuet gantañ d' ar gêr ur pezh labous-dour n' en doa ket gallet lakaat en e sac'h-chaseour : tapout a rae an douar gant beg un askell, e-

keit ha m' edo heñ en e sav war an daol, o sevel er vann beg an askell all... »
Luigi, digor e c'henou gantañ a selaoue egile o kontañ, ha birviñ a rae gant ar
warizi hag ar c'hoant d' ober kemend- all... Derc'hel a reas Moresko gant e gaoz
e-pad un eur bennak ; neuze e savas hag ez eas da gerc'hat ar gouloù da reiñ da
Varalis, hag e lavaras dezhañ gant madelezh :

- « Alo ! peoc'h bremañ, hag it da gousket, rak warc'hoazh e vo ret deomp
diblouzañ abred.

- Petra ? eme Luigi gant ur vouezh kreñv. Ret eo din mont da Dorino.

- Ya, evel just : met 'benn pegoulz hoc'h eus c'hoant da vezañ erru eno ?

- 'Benn warc'hoazh da noz.

- Perak ne vije ket 'benn an deiz war-lerc'h, abred diouzh ar beure ?
Diriskl ez eo an hentoù abaoe m' eo bet boutet en toull, Ravigna hag e
genseurted. N' hoc'h eus ket aon moarvat, o veajiñ en noz ?

- Aon ? Nann sur... Met evelkent, pa vin o tistreiñ d' ar gêr e vin
muioc'h dinec'h...

- A ! A ! a droc'has an ostiz en ur wignal. 'M eus aon hoc'h eus un draig
bennak da gas d' ho markiz ! ! !... Ma ! selaouit ! Ober a raimp diouzh bezañ
distro 'benn kreisteiz : amzer ho po da zebriñ ho lein en hoc'h aez, ha neuze ez
eot en hent gant ho kazeg diskuizh hag ec'h en em gavot en Ostaleri « ar Wrac'h
Kozh » a-raok ma vo elumet ar gouleier ! »
17

Chom a reas Luigi d' en em soñjal ur pennad ; gouzout a rae ne oa ket mat
dezhañ plegañ, met n' en doa ket nerzh a-walc'h da enebiñ.

- « M' am bije ur fuzuilh c'hoazh da vihanañ, emezañ en ur huanadiñ hag en
ur sevel e zaoulagad.

- Bez' ho po va hini, ha Borla gozh hag a zo o chom amañ e-kichen a bresto
din e hini... Lezit da gas ! Bremañ 'ta, sellit hag heñ ez eo va fuzuilh
diouzhoc'h. » Hag heñ da dapout krog en e fuzuilh a oa e-pign ouzh ar voger. Ar
paotr yaouank he c'hemerhas mall warnañ. Sellout a reas pizh outi, stardañ a reas
troad ar fust ouzh e-skoaz en ur vizañ ar gouloù.

- « Ac'hanta ? a c'houlennas an ostiz.

- 'Vel pa vije bet graet evidon-me !

- Dalc'hit mat dezhi, neuze ! »

Pignat a reas en e raok gant ar viñs-koad vihan, hag ec'h ambrougas
anezhañ betek ar c'hozh kambrig a oa bet aozet evitañ...

*

**

Pa zeuas Moresko d' an traoñ, e kavas e wreg diac'hubet an daol ganti,
oc'h ober rolladoù-gwenneien.

- N' eus ket nemeur 'm eus aon ! emezañ en ur vont etrezek e wele hag en
ur stagañ d' en em ziwiskañ.

An ostizez a stardas he muzelloù hag a valbouzas ur gerig bennak etre he
dent. Ar paotr kozh a hejas e benn hag a laoskas ul ledouet hanter-vouget.

- Bez soñj n' eus ket a win ken, eme ar vaouez.

- Gouzout a ran, emezañ.

- Prestik ne vo ket a foenn ken.

- Me 'oar se a-walc'h ! ! !

- Ret e vo goude soñjal mont da baeañ e ouelmikael d' an aotrou, kent diwezh ar miz.

An ostiz a savas e zaouarn en aer hag o hejas, droug bras ennañ.

- He, va faotr, a lavaras e wreg ken diseblant ha tra, dre da faot eo.

- Ia sur !

- Dalc'hmat o vale !

- Ma vije te da vihanañ hag a oufe gwerzhañ an traoù a zeu ganin d' ar gêr.

- He ! he ! va faotr estreget da logod-dall a zo ezhomm evit lakaat an ostaleri da vont en-dro... Sell Talpone hag a oa amañ en hor raok ; bremañ emañ perc'henn war ostaleri an « Tri Mul » e Taluzo.

18

- Talpone a denne arc'hant eus a bep tra, a verkas Moresko ouzh en em silañ etre al liñselioù...

Ar geben a savas diwar he c'hador hag o tostaat : - « N' eo ket se tamm ebet, emezi. Gouezet en deus Talpone ober e vad eus an degouezhioù a-du. Te avat, a zo en em gavet e plegioù dispar, ha bep tro ac'h eus nac'het ober seurt ebet, kozh didalvez ma 'z out. Ma karjes en noz-se ma oa deuet Ravigna da ginnig dit... »

An ostiz a savas a-daol en e goazez en ur ober gwallselloù outi hag en ur risignat e zent e lavaras : - « Reiñ a ri peoc'h ? Petra a zo erru ganit ? Aet out sot ? » Ha gant beg e viz e tiskoueze dezhi an doubl a zistone gant kammedoù ponner an estren o vont d' e wele... Ur c'hruz a reas ar vaouez d' he divskoaz ; ha neuze o sellout talarek ouzh he den e tarzhas war he diweuz prenet ur mousc'hoarzh ledan, leun a atizoù diaoulek.

Moresko en em lezas da vont adarre war lein e gein : - « Nann ! nann ! nann ! emezañ goude-se, a vouezh izel. Kozh koñchoù ! Serr da c'henou... Warc'hoazh e lakain anezhañ da baeañ e goan, e wele, an dro-chase, e lein ha c'hoazh e kavin an tu da werzhañ dezhañ ur briz vat ar pezh am bo tapet o chaseal. Lez ac'hanon e peoc'h bremañ, rak c'hoant am eus kousket. Hast buan dont d' az kwele ! O mil mallozh ! 'M eus aon mañ an diaoul ez korf henozh ».

Heñ e-unan avat, a santas Paul Gorneg war e dro nebeut goude. Pa voe lazhet ar gouloù, pa ne voe mui klevet nemet ar chas o terc'hel da harzhal amañ hag ahont dre ar bourk, an ostiz goude ur pennadig bihan a gousked, a zihunas hag a grogas da dreiñ ha da zistreiñ en e wele, imor fall ennañ. Ur bern soñjoù a zalc'he da dremen mesk-ha-mesk en e spered ; unan dreist-holl ne baouezze tamm d' hen heskinat : - « Me 'garje gouzout pegement a arc'hant a zo gant Baralis ha pelec'h en deus o c'huzhet ».

*

* *

Antronoz vintin, pa bignas Moresko d' an nec'h da zihuniñ an diavaeziad e kavas anezhañ war ar bale : - « Eus ar c'hentañ, emezañ, met amzer hon eus ; teñval eo c'hoazh.

- Benn kreisteiz e fell din bezañ distro.

- Bezit dinec'h... Bremañ 'ta esaeit ar binvioù-mañ ; rak emamp o vont d'

ur sitread (kornad) lec'h ez eus ezhomm eus ar seurt-mañ. » Hag heñ da ginnig ur re heuzoù-chase.

- « Lec'hioù glep ez int ? a c'houlennas ar paotr yaouank, en ur wiskañ an heuzoù buan-ha-buan.

- Livirit kentoc'h fankigellek.

19

- Neuze e vo ret bezañ skañv hag eskuit ha disamm ?

- Ya evel just ! Na gasit ganeoc'h nemet ar pezh a zo ezhomm hepken. »

Derc'hel a rae Baralis da sellout ouzh an douar ; tremen a rae e zorn war e c'hroñj hag e seblante bezañ nec'het ha trubuilhet.

- Petra 'c'hoare ganeoc'h ? a c'houlennas an ostiz a oa eno o sellout pizh outañ.

Ar paotr yaouank a voutas e zorn dindan ar goubenner hag a dennas ac'hano ur gouriz-ler, leun ha ponner.

- « Hola 'vat ! eme an ostiz digor-bras e c'henou hag e zaoulagad gantañ

- Ha soñjal a ra deoc'h e c'hellan kas an dra-mañ ganin ?

- Ya, m' hoc'h eus c'hoant, met diwallit na ve re landrammus evidoc'h.

- Daoust ha n' ho pije ket un arc'hig vihan bennak pe un toull-kuzh asur ?

- Amañ eo asur an ostaleri a-bezh ! Sellit ! Likit ho kokez da gousket amañ. Bravoc'h e vint eno eget en ilc'hier ur roue. » Hag en ur lavarout kement-se, e tigoras ar pres evit ma c'hellje Baralis lakaat e deñzor e-barzh, evel ma kavje ar gwellañ. Neuze e serras ar pres gant evezh, ha gant kalz a hegarated e roas an alc'houez d' ar paotr yaouank. Goude-se e tiskennjont ; kregiñ a rejont en o armoù ha Moresko a c'halvas e gi hag a roas un taol troad dezhañ en e gostezioù d' ober dezhañ bale.

* * *

Daoust ma oa seblant amzer vray, e oa ledet war an oabl ur goumoulenn arc'hlas, stignet evel ur ballenn, nemet koulskoude diouzh tu ar sav-heol e weled kornioù pellañ ar goumoulenn o wiskañ mil liv disheñvel. Dre an aer e oa ur c'hwez ponner a save diwar an douaroù moest ha fankek. Buan ez aent war-raok, mall warno o-daou. An hini koshañ a roe d' egile hag a oa evitañ un deskard, ur bern alioù ha kentelioù mat.

- « Taolit pled e sav ar gioc'h a-lammoù ? Gallout a reer tennañ pa vez o sevel, met diaes a-walc'h ez eo. Gwelloc'h gortoz ken m'en em lakaio da nijal eeun. Deoc'h e seblanto bezañ pell, met ho pet soñj ez eo trawalc'h he gloazañ an disterañ evit he diskar. Mar tennit pa vezo oc'h ober he c'hildroioù, neuze ez oc'h sur da c'hwitañ... Diwallit ivez pelec'h lakaat ho treid : un dachenn gwalldraiturez ez eo o vankout dindan an treid ; leun eo a wrizioù brein, a c'heot rouestlet, a doullou-kurun kuzhet. Na bellait ket diouzhin. Arabat deoc'h mont war-raok evel pa vije ho penn en ur sac'h. »

20

Sioul e chome Baralis hag e seblante selaou anezhañ gant kalz a evezh ; e gwirionez edo dija war ar Pria dre e soñj. Pezhioù-evned a soñje gantañ gwelout o sevel, o nijal hag o kouezhañ diskaret gant an tennoù...

War splannaat ez ae an deiz ; er penn all d' an hentig goloet a zourchag lec'h ma kerzhent, ec'h en em zigore ar vro dirak an daoulagad. Etre garennoù ar gwez ec'h en em ziskoueze ur blênenn vras goloet a c'heot hag a dachadoù ledan liv ar pri ; lostadoù hir a vrumenn liv al ludu a vane amañ hag ahont o verkañ

ar poulladoù-dour a weled a-wechoù o krizañ hag o lugerniñ. Tro-war-dro e oa evel stoufet an dremmwel gant bodadoù tev a wez-derv ha gant brouskoadoù teñval a wez-onn.

- « Erru omp, eme Voresko. Troomp war an tu dehou ha diouzhtu e kavimp ur poullad brudet. » Kemerout a rejont ur wenodenn hag a oa heñvel da vat ouzh ur wazhig-dour, ha goude treuziñ ur pennad diwezhañ a zouar-labour, e tegouezhjont er waremm. O selloù paret war ar c'hi hag a oa o vont hag o tont e fri d'an douar en ur furchal 'mesk ar geot, e chomjont dilavar. Gant un tammig esmae e c'hortoziert ar c'houlz da waskañ war ar bluenn. Un hanter- eur a yeas e-biou ? Derc'hel a rae Moresko da veskiñ, dic'hwezhañ a rae hag ec'h ise ar c'hi en ur leuskel mallozhioù ha gourdrouzoù. Ne welent mann ebet. Biskoazh kemend-all ! En em gaout a rejont war ribl un toull ledan lec'h ma oa bet tennet mouded gwechall : - « C'hoariomp an dro, eme Voresko ; ma ne savomp netra amañ e vo koulz deomp mont d' ar gêr... Ac'ha ! Drapo ! Kae e-barzh 'ta, pezh didalvez ! »

Ar c'hi a yeas e-barzh ; chom a reas da c'hwesa ha neuze lammat... Frrrr ! ur gioc h a zilmmas eus a-douez ar c'horz, hag a savas ouzh krec'h, herr warni. An ostiz a dennas hag a c'hwitas war e daol. Nebeut goude e vankas un all adarre ; met al labous, siwazh dezhañ, a zegouezhas dezhañ tremen dirak Baralis hag hemañ hen diskaras gant un tamm ampartiz : - « Tapet eo, tapet eo ! emezañ endra ma rede d' e zastum.

- Kaer eo an taol, a c'hrozmolas Moresko, met sellit pelec'h lakaat ho treid, ma n' hoc'h eus ket c'hoant da gaout ur gwall-drempañ ! »

Adalek neuze e troas mat an traoù gant ar paotr yaouank ; diwar bemp kioc'h a savas dirazañ an eil war-lerc'h eben, e tiskaras peder anezho. - « Evel pa n' en dije graet mann nemet se e-pad e vuhez ! » a c'hrogne an ostiz, droug ennañ.

21

E-keit se edo Drapo o klemmichat war-lerc'h un dra bennak ha n' houle ket sevel. Ur c'hozh-krak-houad a netra ne oa ken hag a voe tapet a-benn ar fin gant ar c'hi dindan ur vodenn... Ar mestr a reas d'e gi hen degas dezhañ : neuze e taolas anezhañ en e sac'h-chaseour hag e sellas pelec'h e oa egile. Hemañ a valee, dever bras ennañ, ur pennadig ac'hano. An ostiz a droas kein hag en ur leuskel gwech ha gwech all ur c'hrougnadenn bennak ez eas da azezañ war ur c'hleuz goloet a c'heot e-skeud ur wezenn-derv. Gervel a reas e gi hag ober dezhañ gourvez e-tal dezhañ en ur reiñ palfadoù skañv dezhañ : hag e lakaas tan war e gorn-butun.

Sachañ a rae war e gorn en ur zerc'hel da sellout ouzh Baralis gant daoulagad lugernus. Gwech ha gwech all e skrigne e zent hag e save e zorn, pa wele e geneil o tiskar ul loen bennak hag o terc'hel da vont war-raok en ur adkargañ e fuzuilh prim-ha-prim ? Petore soñj a oa deuet dezhañ war e spered evit degas an estren-se d' un dachenn-hemolc'h hag a oa e dra abaoe bloavezhioù ha bloavezhioù - d'ul lec'h a oa kustum da sellout evel e zomani, peogwir ne oa chaseour all ebet nemetañ er vourc'h ? Krediñ a rae en dije diskouezet e ampartiz ha tennet meuleudioù egile warnañ. Allas ! droug en doa ouzh e gompagnun, ouzh un tamm deskard fall n' en doa tapet nemet koailhed betek-hen. Un den chañsus e oa hennezh : kaer, ampart, pinvidik. Hola ! Graet en dije dezhañ paeañ ervat an diduamant-se ? C'hoant en doa da sunañ digantañ kement a oa bet roet dezhañ gant e dad evit e veaj, hag ivez un tamm eus ar voujedenn a oa bet lakaet da gousket en armel. Hañ, ya ! gwelout al liv anezhi da vihanañ, gwelout reoù velen, heñ ha ne dizhe ket gwelout netra nemet reoù wenn bep pell ha pell. O ! sankañ e zaouarn enno, kemerout diouto trawalc'h da baeañ e zle, trawalc'h da vevañ dinec'h, didrubuilh, dibreder da vihanañ e-pad daou vloaz ! Evel an neizheur e sante en e greiz an debron-gouzout : « Daoust pegement a zo gantañ ? Un tamm brav moarvat diouzh ar vent hag ar pouez. Ret eo krediñ ez eo pinvidik-bras ha genaouek ivez ar Baralis kozh evit lakaat e fiziañs en ur skañvbenn evel hemañ ! Sell ! aze emañ ken disoursi ha tra ! »

Sevel a reas e benn ha sellout ouzh an oabl, unnek eur bennak a c'helle bezañ. Edo ar paotr yaouank o tont war e giz, divall, neket dre al lec'h ma oa

aet, met dre an tu all. Moresko a yeas en e sav-sonn, c'hoant dezhañ mont da ziambroug anezhañ ha war un dro c'hoant fall dezhañ da dreiñ kein ha da lezel ar paotr d' en em zibab e-unan. Chom a reas da sellout evit gouzout dre belec'h ez aje. Grozmolat a rae : - « Da zehou, da zehou ! Chom en tu dehou, p' emañ puñs an ifern en tu kleiz dit ! Eno emañ ar grenegell... ur c'hraoù-moc'h du evel peg ; ma 'z ez di e vi fresk ! »

22

Derc'hel a rae Baralis da zont war-raok goustadik. A-greiz-holl e troas krenn : a-dal dezhañ un dachenn ledan, kelc'hiek, goloet a c'heot lufrus ha glas-meurbet hen dedenne. Moresko a dremenas ur gridienn dre e izili ; plegañ 'reas e chouk evel pa vije o vont da lammat a-ziwar ar c'hleuz ha da redek a-dizh war-du egile... Ha setu ma tremenas adarre dre e spered, evel ul luc'hedenn, soñj milliget an aour, an aour-se a garge ar pres kozh hag hel lakae da skediñ ! Luc'hañ a rae ar pezhioù-moneiz, birviñ a raent e-giz pa vijent bet bev. Santout a rae ar yender anezho etre e zaouarn hag o c'hlevout a rae o stirlinkat ouzh e zivskouarn. Ur soñj sklaer, resis, galloudus ha trec'h d' e spered gwan ha dinerzh a savas en e benn : - « Gouzout a ra tad Baralis hag e gerent all edo an arc'hant gantañ en e c'houriz ; n' eus nemedon-me o c'houzout pelec'h en deus o lakaet. Ma teu dezhañ en em goll, e soñjo ganto ez eo bet kollet an arc'hant war un dro gantañ.. ha neuze... »

Skoulmañ a reas e zivrec'h endro da gef ar wezenn a oa en e gichen ha gant ur c'hwezenn yen o pizenniñ war e dal, e galon o tarlammat en e greiz, e c'hortozas petra a yae da zegouezhout... Ne oa degouezhet netra c'hoazh. An den yaouank o santout an douar o krenañ dindanañ, hag o teurel evezh e oa aet en un toull fall, a oa chomet a-sav hag a dastorne gant e droad a-raok ober ur gammed. A-greiz-holl, pa soñje gantañ bezañ asur, pe marteze skuizh o vont ker gorrek-se, e reas ul lamm. Ne gavas ket ar voundenn galet a grede dezhañ tizhout hag e c'har a sankas er fank ; klask a reas he sache er-maez ha raktal ez eas er pri betek e groazell. Ar bluskenn danav a c'holoe ar fankigell a dorras tro-war-dro.

Moresko a glevas ur youc'hadenn spontus ; gwelout a reas Baralis o tarc'hav e fuzuilh en aer, ouzh en em zispac'hañ, o skeiñ e zivrec'h evel un den sot, hag oc'h astenn e zaouarn evit kregiñ en ur gwrizioù bennak ? Gallout a reas chom war varr ur pennadig, evel pa vije bet o neuial war ar fank, ha neuze ar spont, an anken ha marteze an aezenn fall a oa o tialaniñ a zilamas e nerzh digantañ. Soubañ a reas er fank goustadik-goustadik, e zivskoaz o hejañ gant ur gridienn vras.

Pa voe steuziet ar penn, an ostiz a droas e zaoulagad dispourbellet da sellout tro-war-dro. War ar gompezenn ledan ne oa den ebet war-wel ; er pellder war doenn ur vereuri e choarthe sklerijenn an heol. Skeiñ a eure war an tu-se da c'houlenn sikour.

ENVORENNOU HANTER-0AD

(1900-1919)
gant TALDIR
(kendalc'h)

KOMPLIDI AN TIMBROU-POST HAG ARSAILH WARNOMP

Rener Kevredigezh Vreizh, ar markiz Estourbeillon, depute Bro-Wened, en doa digaset gantañ da Gendalc'h Gourin ur vriad timbroù-post en doa lakaet moulañ e Pariz, - timbroù-post breizhek, - prim-patron timbroù-post ar Gouarnamant, nemet n' o doa nag ar memes liv nag ar memes girioù.

Daou sort a oa anezho : unan glas-moug, gant un delen en e greiz, hag herminigoù du er pevar c'horn, merket ar sifr 15 warnañ (tri gweneg) ; hag unan ruz-sklaer, gant Sant Herve bleinet gant e gi, ha merket 5 (ur gweneg). An timbroù-se a oa da vezañ peget war ar c'hlorennoù e-kichen timbroù ar Stad, aes eo kompren n'o doa talvoudegezh ebet dezho o-unan. Met e giz kabalerezh e oant ur gavadenn dreist, rak-se, mont a reas an timbroù breizhek er-maez dre vilieroù.

Kement-se a zeuas prestik betek divskouarn Ministr ar Postoù e Pariz. Sed ur maen e poull ar raniked, hag unan a bouez. Breizhiz oc'h embann timbroù-post heñvel ouzh re ar Republik. Petra oa dindan se ? Ministr an Diabarzh a c'hourc'hemennas d' ar Polis enklask eus a belec'h e teue an timbroù. Ne oa ket bet diaes dizolo roudoù ar c'had, peogwir ne oa netra kuzhet en nevezinti.

An Aotrou Estourbeillon a anzavas e oa eñ en doa lakaet moulañ anezho, e werzhe anezho da c'honid e gevredigezh, ha ne soñje ket ober « konkurañs » d' ar Postoù, rak an timbr breton a oa ur « faltazi ».

Paotred ar Gouarnamant a oa dizarmet dirak un « député » ; ne oa moien ebet da boursuiñ anezhañ hep goulenn aotreadur ar Gambr da sevel e « immunité ».

24

Mes an traoù ne chomfent ket eno, rak an timbroù breizhek a zisklerie un dro-spered dañjerus evit Frañs, mar bije aotreet ar Vretoned da stagañ o arouezioù hag o yezh war al lizheroù, ar Bosterien a c'hallje faziañ ha skeiñ o c'hached warnañ e lec'h war ar re vat. Setu 'ta Ministr ar Postoù da gemerout e bluenn lemman ha da skrivañ un ordrenañs damdost evelhen :

- « Taolet zo bet pled e stage un nebeud tud timbroù faltazius war ar c'hlorennoù, e riskl da douellañ ar fakteurien dre heñvelidigezh an timbroù-se gant ar re wir. A-vremañ, e vo difennet stagañ ar sort timbroù war du an adres. Koulskoude ne weler harzh ebet d' o stagañ war an tu dreñv. »

Setu eno un taol treuz evit ar Gronnerien (collectionneurs). Mar ne dape ket an timbr breizhek merk ar c'hached, anv ar gêr, an deiziata, e kolle e holl dalvoudegezh.

Paouez a reas Kevredigezh Vreizh d' o moulañ.

En o lec'h, e voe lakaet ober reoù nevez, brasoc'h, gant un diviz tro-war-dro evel

BREIZH DA VIRVIKEN
KOMZOMP, SKRIVOMP BREZHONEG

E-barzh ar c'hreiz e voe lezet ur c'harread gwenn evit pegañ ennañ timbr ar Republik.

Diwar-benn ar re-mañ, ne voe tregas ebet.

Betek 1914, holl goloioù lizheroù ar Vroadelerien a veze peget warne ur baperennig evel ur sin d' en em anaout.

Mar chomas peoc'h ar Gouarnamant, e selloù a oa warnomp evelato. Rak kement Gouarnamant en deus lakizien ouzh e servij, hag a zo gwasoc'h alies evit o mestroù.

Gazetennoù Pariz, evel **La Lanterne, L'Aurore**, h.a. ; ha gazetennoù bihan a Vreizh evel **Les Nouvelles Rennaises, Le Réveil des Côtes-du-Nord, L'Avenir de Morlaix, Le Réveil du Finistère, Le Progrès du Morbihan**, a skoas taolioù dent gant ar Varzhed, hag ispisial ganin-me, rak gwarizius e oant ouzhin, abalamour d' am c'hazetenn **Ar Bobl**, a zalc'he penn d' ar vagad chas, hag a ouie harzal a-wechoù kreñvoc'h evitañ.

Un dra avat a renker da lavaret evit rentiñ justis d' an Drede Republik.

Frankiz ho poa da skrivañ, da gomz, da ober bodadegoù, da sevel journalioù, da vont ha da zont hep bezañ pistiget gant lezenn ebet.

Frankiz ho poa da vont da redek ar bed, da vont war vor, da dreuziñ n' ouzon pet bro, hep ma voe ret deoc'h astenn ho torn da gaout un aotreadur (passeport), en ur ger, gant ma na noazec'h ket ouzh ho nesañ, e c'hellec'h difenn ho kostezenn en doare ma kevec'h mat.

25

N' omp ket prest da adwelet an amzer-se.

* * *

KASTELL-POL HA PENC'HARIDI

Kendalc'h Kastell-Pol e miz Gwengolo 1905 a voe merket gant un nebeud digwezadennoù maez-ordinal.

Da gentañ, kavout a rejomp war hon hent, evit an dro gentañ, «republikaned» lakaet ganto en o fenn e oamp o soñjal, war zigarez Brezhonekaat, diskar Marianna, war hanter gant an Nobl hag ar Veleien.

Hag e penntre Leon eo e oa diwanet an hadenn-se.

E gwirionez, ne oa ket un dornad eus ar « Ruien »-se, bodet en ur c'helc'h a raed « radikal » anezhañ, mes a-walc'h evelato da strafuilhañ ar Gouel ha da derriñ ar Peoc'h.

Er re a rene ar C'helc'h-se a oa mistri-skol ; en o fenn e oa ur c'helenner eus ar Golaj, e anv, ar Potremat (ya, evelse), genidik eus kostez an Oriant.

Un nozvezh ma oamp o tistreiñ eus ur Ganiri da gaout hon gweleoù en Hôtel du Centre, en em gavjomp en ur straed teñval gant un hanter-dousen aotronez, pere, ouzh hon anavezout diouzh hon dilhad broadel, a grias « A bas la Calotte ».

Ne oa ket o skrij peurechu, ma oa pal-dorn Loeiz ar Menn (Ar Pagan), war c'henou unan ; ar re-all a zalc'has penn, hag en ur munut, e oa ur gann war ar ru : kouezhañ rae pulh an taolioù dorn eus an eil hag egile, ouzh o heuilh, na petra 'ta, chapeledoù gerioù lemm...

An deiz war-lerc'h, kêr Gastell ne oa ken kaoz enni nemet eus Kann ar Varzhed ouzh ar Eneberien. Lavarout a raed e oa unan gwall dapet : ar Potremat, en despet d' e anv, a oa bet roget e zilhad ha kignet e fas.

Klemm o doa douget an Aotronez mistri-skol d' ar Polis, petra bennak ma oa int o doa digoret an abadenn dre o c'hriadenn, setu ma oa goulennataet an holl, hag a-benn ar fin, e oa klozet an enklask en ul lakaat an emgannerien kein ouzh kein.

Mes un dra vat e voe ar stok-se : ibilien Pariz a zeskas war o c'houst ne oa ket ar vroadelerien bugale aonik, mes e oant prest da rentiñ dant evit dant, war an dachenn.

* * *

26

Ar bloaz a-raok, e Gourin, ur plac'h yaouank, Janed-Mari Barbey, a oa en em dommet ouzh ar Varzhed yaouank; ha dont a reas adarre da Gastell-Pol da welet ar Gouel.

Abaoe arlene, he doa dalc'het da zaremprediñ ma mignon brasañ Leon ar Berr (Ab Alor), hag ar vrud a lavare e oant o vont da zimeziñ. Marteze e vije digouezet an taol, panevet un tamm skoilh a yenas an eil ouzh egile.

An dimezell Barbey he doa he c'hambr war an hevelep pondalez hag Ar Berr, Ar Menn, Diverres, Yann Lettry, h.a. Un nozvezh Loeiz Ar Menn, paotr a jolori, a zivizas c'hoari un dro da Janed-Mari, hag eñ ha tapout he boutoù-ler, ha poz anezho dirak dor Yann Lettry, just e-kichen re hemañ. Ar re a savas mintin-mat, hag a wele dirak an nor-se daou re voutoù-ler, ur re gwaz hag ur re maouez, a soñje : « Amañ zo ozhac'h ha gwreg ».

Leon ar Berr, hag a oa paotr abred peurvuiañ, a dremenas ivez war ar pondalez da vont d' ar prinveziou, hag e selloù a baras war ar c'houblad bouteier digor o beg ganto dirak dor kambr Yann Lettry. Chom a reas abaf. Petra ? Boutoù-ler Janed-Mari ? Trubardez ! Gant Yann Lettry e oa kousket. E piv fiziout ?

Ab Alor a zalc'has e gavadenn evitañ. Ne rannas ger da zen eus ar pezh en doa gwelet. Ar mintinvezh-se e voe torret an huñvre, ha torret ar bromesaou, dre fait ur fars c'hoariet hep soñjal da zrouk.

Ne glevas Ar Berr ar wirionez nemet pell goude-se. Nag a bet amorous a zo bet distroet diouzh ur vestrez gant flemm an Douetañs ? An Douetañs a zev, a boaz, evel an tan.

* * *

Pelec'h ober ur gorsedd digor e Kastell-Pol ?

Un daol-ven a oa war hent Rosko, en ur park en tu dehou.

Mes pa oa aet Erwan Berthou, an Doktor Charlez Picquenard (ar Barzh Melen ab Ronan) ha me, da welet ar perc'henn, en doa nac'het prestañ dimp e bark en askont ma oa betrabez ennañ hag e vijent bet flastret. Setu ni da vont betek Rosko, hag ober ur weladenn d' ar Maer, an Aotrou Per d'Herbais de Thun. E vamm ha ma hini a oa 'n em darempredet e Montroulez pa oant yaouank. Degemeret mat e voemp gant an Aotrou d'Herbais, a lavaras dimp e oa perc'henn d' ur gourenezenn e-keñver gant Rosko, anvet Penc'haridi, hag e roe aotre dimp da vont di d' ober hon lidoù ma keremp. Pa veze izel ar mor, e c'helled mont war droad da Benc'haridi. D' ar gourlann, e oa ret kaout bagoù.

27

Dont a reas eta ar Varzhed da Rosko, gant gweturioù, gant kasedoù leun a vanieloù, a saeoù ; ar c'horn olifant ; kleze Arzhur, h.a. Treuziñ a rejomp ar vrec'h mor en div vag, hag a dreuz d' al lann ha d' ar rec'hel, ec'h errujomp bete kreiz ar gourenezenn, lec'h e oa ur roc'h uhel ha plad, just a vod da gas al lidoù en dro.

Petra bennak ne oa ket bet embann, ar vrud he doa dedennet ouzh hon heul

un nebeut Roskoiz. Diouzh Kastell, e oa deut ivez hiniennou. Ne oa ket stank ar bobl. N' oamp ket c'hoazh gwall asur eus hon afer ; santout a-walc'h a raemp e oa disfi ouzh hon « geizou ».

Ne vern. Graet e voe an traoù hervez ar Reizhadur, ha gant solanelezh. A oa eno Erwan Berthou, drouiz-meur, Fañch Vallée (Ab Hervé) e eiler ; Ar Berr (Ab Alor) ; Dr. Picquenard ; Pol Diverrès (Tangwall) ; Alfred Lajat (Mab an Argoat) ; Loeiz Herrieu (Ar Barzh Labourer) ; Herri de la Guichardièr (Telen Aour) ; Olier Sagory (Barr-Avel).

E-touez ar Varzhed nevez degemeret e oa daou zen ijinnet bras, gouiziek, helavar, hag a gentañ renk : Louis Goblet ha Jean Choleau.

Ur ger berr diwar o fenn.

Jean Choleau a oa ganet e Vitre, Ill-ha-Vilen, e 1879. Pa voe krouet Kevredigezh Vroadel Breizh, e roas e anv. En un doare drol e rejomp anaoudegezh. E-pad manevrou bras an Dekvet Korf Arme en-dro da Bloermel ha da Gamp KoetKidán, da viz Gwengolo 1902, ar 48e a Wengamp, a oan soudard ennañ, hag ar 70e a Vitre, e oa Choleau soudard ennañ, en em gavas mesket un tu bennak e-pad un ehan. Choleau a c'houlenne digant hemañ ha henhont eus ar 48e mar ne oa ket unan anvet Jaffrennou er rejimant. A-benn ar fin, e oan dizoloet, hag e teuis da gontañ gant an hini am c'hlaske. Hon servij hon daou a echue goude ar manevr. En em gaout a rejomp eta asamblez e Kendalc'h Alre ; lec'h e voe dibabet Choleau da rener ar Gevrenn Esperniek.

Evit gwir un Esperniad (Economiste) dre natur a oa paotr Vitre. E dad, hag e dad-kozh a oa gwiaderien. Eñ e unan a sikoure e dad da gas en-dro al labourdi o doa e straed ar Boderezh. Ar mab a veaje evit ar c'henwerzh, prenañ gloan, lin ha kanab (kouarc'h) war ar maez, ha gwerzhañ danvez liñselioù, kreziou, mezher. Troet e oa da gemer notennoù eus kement a wele hag a gleve a-zivout stad al labourioù hag ar micherioù, ha diwezhatoc'h en deus embannet levrioù a bouez war ar sujed.

Kavout a raen Jean Choleau hep bloaz er C'hendalc'hioù hag er Gorsedd, digarez am bo c'hoazh da gomz diwar e benn. E anv Oved a oa « Yann Kerper ».

28

Louis Goblet an eil Oved degemeret e Rosko a oa o chom e Pariz e ti ur voereb dezhañ, e straed Lauriston. Studier e oa, emezañ, en Institut des Hautes Etudes Commerciales. E 1904 e oa bet lakaet da eiler da Choleau evit renadur ar Gevrenn Esperniek. Eus a belec'h e oa deut Louis Goblet ? Ne 'm eus biskoazh gallet gouzout just ha just ar wirionez. Ha Breizhad a ouenn e oa ? N' on ket evit lavaret ya na nann. Ur wech hepken am eus klevet digantañ e-unan un nebeudik komzoù a-zivout e orin. Ganet e oa e Trelazé, kichen Angers. E dad a oa mestr-skol eno. Din-me e lavaras c'hoazh e oa bet luskellet e yaouankiz gant kojou diwar-benn Breizh - rak Trelazé a zo ur barrez poblet gant Breizh-Izeliz (mangleuzerien) - mes ne yeas ket pelloc'h an diskleriadennoù. Louis Goblet a gemeras da anv-pluenn Yann Morvran, a-wechoù e sine Yann Morvran-Goblet. Dont a reas da vezañ anavezet e kelc'hioù speredel Pariz, ha da gaout dor digor er c'hazetennoù bras. Chom a reas feal d' ar Gorsedd betek 1914. Ur pried saoz a gemeras. Goude ar Brezel e tilezas ac'hanomp. Barzhed all bet anvet : Jos Albaret (Ar Bruger) eus Pont-e-Kroaz, Andrev Mellag (Gwenedour) eus an Oriant, ha Renan Degoul-Saib (An Hader), rener Kloc'h di Breiz.

* * *

Ur mintinvezh, etre div seañs-labour, ar Varzhed a yeas da stagañ ur plak marbr o doa lakaet ober war an ti ma oa ganet ennañ e 1825 ar Barzh brudet Gab Milin, oberour **Kenteliou a skuer vad ; Furnez ar Geiz ; Meuleudi Breiz**, marvet en Enez Vaz e 1895.

KROUIDIGEZH AR BLEUN-BRUG E SANT-VOUGA

D' an ampoent, e oa kure e parrez Sant-Vouga, nepell eus Kastell-Pol, ur

beleg yaouank disanvez, e anv Yann-Mari Perrot. Evel ma 'm eus lavaret, ar c'hiz a oa gant Kevredigez Vroadel Breiz klozañ he c'hendalc'h gant ur valeadenn bennak, kement ha bizita ilizoù kaer, kestell kozh, pe lec'hioù istorek. Ar bloaz-se e oa divizet gweladenniñ kestell Kerouze ha Keryann. Ur sulvez e oa. Kastell Keryann, brudetañ hini a zo e Bro Leon, hag heñ miret mat, a oa war derouer Sant-Vouga. An Abad Perrot a fellas dezhañ renkañ ur gouel parrez, da enoriñ ar gendalc'herien. Hag ar gouel a vije graet war al leton c'hlaz, dirak dor-dal ar Chastell, en-dro dezhi gwez uhel ha bodennek.

29

Bezañ oa e Sant-Vouga ur Patronaj paotred yaouank stummet gant ar c'hure. Deskiñ a reas dezho ur pezh-c'hoari brezhonek savet gantañ e-unan, ha d' an abardaevezh sul-se, kendalc'herien Kevredigezh Vreizh a oa holl dastumet dirak c'hoariva poblus Keryann. Mil ha mil a dud a oa diredet da welet ha da glevet.

Pa voe fin d' ar c'hoari ha d' ar ganiri, an Abad Perrot a bignas war al leurenn-bleñch da drugarekaat ar bobl, hag e lavaras e oa o vont da lodenniñ etre an holl bodigoù bleun-brug, evit ma talc'hjent eñvor eus ar gouel. Pediñ a reas ac'hanon-me da bignat d' am zro war ar pleñch ha da lavaret ur ger bennak a-zivout an taol.

Tapet berrek, en em dennis gwellañ ma c'hellis en ur ober meuleudi ar vluenn hollgeltiek a gresk kerkoulz war venezioù moal Bro-Skos, vel en douaroù touarc'h Iwerzhon, e lanneier Breizh-Izel, hag e oa dellidus da vezañ dibabet da vluenn vroadel. Neuze, merc'hed yaouank a dremenas e-touez an dud gant o fanerioù karget a vodigoù...

Setu aze penaos e voe krouet AR BLEUN BRUG a zeuas hepdale da vezañ ur Gouel bloaziek, hag a reas kement a labour vat evit « FEIZ HA BREIZ ».

* * *

KENDALC'H HOLLGELTIEK SANT-BRIEG

Er bloavezh 1867, e oa bet e Sant-Brieg ur C'hendalc'h Hollgeltiek renket gant an Association Bretonne (Breuriezh Breizh), a oa er penn anezhi Geslin de Bourgogne, Audren de Kerdrel, Theodor Hersart de la Villemarqué, Fañch Luzel. Ar Varzhed a neuze, o doa savet ur Vreuriezh etrezo gant Yann-Per ar Skour da Rener, a ziredas d' ar c'hendalc'h, Milin, Proux, Yann ar Yann, h.a. Labourioù ha digouezioù ar C'hendalc'h a voe moulet en ur mell levr tev **Le Congrès Celtique de 1867** dezhañ ur stagadenn Annexes, hag am eus kavet da brenañ gwechall en ur werzh bennak.

Er bloavezh a c'hras 1906, ne oa ket unan bev eus Kendalc'herien 1867. Mes alies hep gouzout doare dezhe, ar re vev na reont nemet adkomañs labourioù bet stummet araoke, adlavaret gerioù bet servijet kant gwech, tremen dre wenojennoù bet pleustret gant treid milieroù tud. Pep remzi a gred stard emañ o vont d' ober bruzhudoù berzh, ha mat eo ma kred se, rak anez, penaos e vije dalc'het ar flamm war elum ?

30

Tri den o doa taolet en douar an hadenn a savas ar C'hendalc'h Hollgeltiek 1906 diwarni : Emil Hamonic, ar poltrejer ; Gwill Gorfec, ar c'hazetenner ; ha Louis Aubert.

Klevet hon eus komz eus an daou gentañ. Piv a oa Louis Aubert ?

Ne oa ket ur Breton. Deut e oa da chom da Sant-Brieg e 1898, diouzh kostez Pariz. Yann ar Mil Micher, paour, met teodet mat hag ur bluenn lemm dezhañ - lakaet e voe da rener d' un tamm gazetenn republikan-ruz, L'Avenir - Etretant, e rae beajoù da werzhañ marc'hadourezh. E-kerz e veajoù dre Gostez-an-Nord, ec'h anavezaz Breizh. Soñjal a reas gonid arc'hant en ur ober ul levr-skol a vije ennañ pastelloù-da-lenn diwar-benn Breizh nemetken. Dastumet gantañ tamm dumañ, tamm duhont e skridoù ar brudetañ Skrivagnerien, e kavas ar mouler Per Gwaziou, a Wengamp, da embann e levr **Le Livre de la Bretagne**. Ar vouladenn gentañ a voe gwerzhet buan. Me oa neuze oc'h ober ma servij soudard (Peloton des E.O.R.) e

Sant-Brieg. Un tu bennak e welis al ievr-se, hag e yeas drouk ennon abalamour ne oa ket ur ger brezhonek e-barzh ul levr anvet **Le Livre de la Bretagne**. Goaperezh e oa ur seurt anv.

Ha me da vont hep marc'hata da weladenniñ an Ao. Louis Aubert en e vurev. Selaou a reas hep fachañ ar pezh a greden lavaret dezhañ « en anv ar vrezhonegerien », ha d' am souezh, Aubert a anzavas e oa ur mank en e levr ; mes, emezañ, un eil mouladenn e oad o vont da dennañ, ha sur a-walc'h e lakje ur bajennad vrezhonek e-barzh.

- « C'hwi hoc'h-unan, emezañ din, hag ho peus skrivet dija kement a werzioù e brezhoneg, perak ne rofec'h ket din ur skouerenn eus hoc'h oberoù, unan aes da lenn, rak ma levr a zo graet evit bugaligoù... » - « Un enor bras avat, evidon ! Ne glaskin ket digareoù. Kas a rin deoc'h tra pe dra. Ha trugarez en anv hon yezh kozh. »

En eil vouladenn **Le Livre de la Bretagne** (1903) ganin, e voe embannet **Son ar boutaouer-koat**, e brezhoneg, ha **La vie rurale en Montagne-Noire** e galleg. An anaoudegezh graet evelse etre Aubert ha me he deus padet betek bremañ. Louis Aubert a zo marv e 1950, da dremen 80 vloaz. Graet en deus e hent. N' eo ket gaou lavaret eo bet an den ar muiañ selaouet, ar muiañ brudet, ar muiañ enoret eus departamant Koste-an-Nord e-pad hanter-kant vloaz.

* * *
31

Kaout ur penn a-raok evel Louis Aubert da bleal ouzh ur Gouel Keltiek, a oa un asurañs a drec'h. Degas Saozon da Sant-Brieg a oa un ide da blijout dezhañ. Setu 'ta Aubert da gregiñ raktal gant ar gudenn, en ul lakaat ar Maer, an Aotrou Herri Servain, senedour, en afer, hag en ur grouiñ ur C'homite. Kêr Sant-Brieg a brometas reiñ arc'hent da warantiñ an dispignoù. Ar Prefed a gerzhas ivez en anv ar Gouarnamant, hag a brometas prestañ e bark-meur evit ober al lidoù barzhek.

Pazenn ha pazenn, ar « Gorsedd » a bigne ar c'hrav sonn a oa dirakañ a-benn ma tegwesje da c'hounit grasoù mat Pennoù-bras Bro-C'hall : (Perros, 1937 ; Kastellin, 1938, ha da ziwezhañ Gwened, 1939).

* * *

An dro gentañ oa dimp e Sant-Brieg aozañ an traoù hon-unan. Betek amañ, hon doa fiziet war Gevredigezh Vroadel Breizh, - a oa etre hon daouarn, - da brientiñ boued, lojeiz, salioù hag all.

Komite ar Gouelioù a bedas Erwan Berthou da bleal ouzh Barzhed Bro-Gembre, ha me ouzh Barzhed Breizh-Vihan. Berthou a c'houlennas digant Thomas Matthews, mestr-skol e Llandebia, rannvro Kervarzin, labourat du-hont evit bodañ ur gannadelezh a ugent a dud. Ar Matthews-mañ a gavimp c'hoazh diwezhatoc'h o labourat evel Sekretour-Renker ar Gannadelezhioù Kembreiz a zeuas da Vrest (1908) ha da Naoned (1910).

An Arc'hdrouiz neuze a oa Evan Rees, lesanvet Dyved o chom e Kerdiz, unan eus ar re skiantekañ bet e penn Gorsedd Breizh-Veur. Eilet mat e oa gant Edward Thomas (Coch-varv) alderman (maer a enor) ha douger Kleze Arzur, bet dija e Kendalc'h Gwened e miz Gwengolo 1899.

Eus ma zu, e kasis bep a lizher da Varzhed Breizh-Izel da bediñ anezho da zont hep mank da Sant-Brieg, amzer-da-zont ar Skol-Veur a vije ar pezh a vije Bodadeg Sant-Brieg.

Evit o isitañ da zont niverus, kuit da gaout re a frejoù, am boa bet koñje digant ar Prefed da zalc'hen un dortouer evito el Lise. (Ar vankañsoù bras a oa neuze.)

Al lodenn vuiañ a reas ar veaj, hag a lakaas o saeoù. (Ne oa d' an ampoent-se er Skol-Veur nemet tregont Barzh Oberiant, c'hwec'h anezho oc'h ober ar Poellgor e-lec'h daou c'hant e oant e 1939, ha daouzek er Poellgor. Ret e oa ober ur goulenn dre skrid, ar pezh a bellae meur a hini ouzhomp, rak ar Vretoned n' eus ket lorc'husoc'h evito pa 'z int skrivagnerien. An eil a gav dezhañ eo dellidusoc'h evit egile. Mont d' o c'hilask a renker.)

* * *

32

Ar C'hembreiz a oa holl lojet (evit netra) en Hotel Vras Bro-Saoz. Ugent e oant, al lodenn vuiañ eus Kreisteiz Bro-Gembre, rannvro Morgannog.

Al lidoù barzhek a voe kaset en-dro e Park ar Prefetti, dirak ur c'hruguilh sellerien. Ne lavaras ar Wask nemet vad eus ar Gouelioù. Ar re-mañ a voe un embann kaer evidomp.

Ar Gembreiz, deut dre Sant-Malo-Southampton, a zistroas d' ar gêr dre an hevelep hent, stad enno eus an degemer glorus o devoa bet, hag o soñjal dija penaos restaol dimp ar moni eus hon fezh.

Un dra avat ha ne rajont ket a vrud warnañ eo hemañ.

Komite ar Gouelioù en doa aozet ur « gwin a enor » evit ar Gannaded e sal vras an Hotel, derc'hent an disparti. Ne oa da evañ nemet champagn. Ar peurvuañ eus tud Bro-Gembre a zo teetotalers (dirwestourien) da lavaret eo o doa graet le da chom hep evañ hini kreñv hed o buhez. Ar gannaded kaezh n' o doa biskoazh tañvaet champagn a reas evel ar re all: evañ un dakenn vihan. Evel ma oa champagn dous, ec'h evjont un eil takenn, un deirvet, ha marteze ouzhpenn. Met ar boeson a reas efed buan war dud ha ne oant ket boazet outañ, hag an holl a oa mezv goude ar barti. Soñj am eus Jonathan Edwards, tad Johnny Kelt Edwards eus Blaenau-Festiniog, ur bourc'hiz oajet hag enoret, ha n' en doa evet biskoazh nemet dour. Un den a relijion strizh, evel ar Brotestanted Methodist.

Ar paour-kaezh aotrou kozh a oa mezhek eus e bec'hed, ha me e glev e rebechañ trist d' e vab nompas bezañ roet ali dezhañ « e oa ar champagn un evaj treitour ».

SERBIZ BRO-LUZASIA

gant W. MINARECH
(troet diwar ar germaneg gant Yann THOMAS)

RAKSKRID

E-kreiz kalon Europa, e Germania ar C'hreiz, emañ pobl vihan ar Serbiz (en o yezh : Serby) o vevañ. Gwechall-gozh e veze graet « Wenden » ivez anezho gant ar C'hermaned daoust ma oa anvet « Wenden », memes tra, meuriadoù Slavat all, en o zouez Sloveniz, Slaved ar C'hreisteiz, dindan ar stumm « Windische ».

Ar bobl Serbat hag he zonkadur a vez nebeut anavezet en Europa, hag e Germania zoken ne ouzer, koulz lavarout, netra all diwar he fenn nemet anv germanek he douar, da lavarout eo : « Der Lausitz ». Ar politikerezh eo, dreist-holl, a zo kiriek da gement-se rak gwelloc'h eo d' ur mestr tevel mik diwar-benn bezañs un isvroadelezh pa vez lakaet diaes e benn ganti.

Izili a-bouez da diegezh ar yezhoù Slavek eo Serbiz ha, ma fell din reiñ un alberz eus o zonkadur ez eo, da gentañ holl, abalamour ma c'heller reiñ da c'houzout, hag ur wir a blijadur eo evit ur wech, emañ Serbiz oc'h adsevel, goude kantvedadoù a warlerc'hiañ; gant peoc'hus ma vez bremañ o c'henvevañ gant ar C'hermaned.

Bro ar Serbed en em astenn, hiziv, war darn eus al Luzasia-Uhel e Bro-Saks ha war darn eus al Luzasia-Izel er Brandenburg ; ouzhpenn, emaint o vevañ en ur rann eus Silezia Izel ar C'hornog.

Evit pezh a sell ouzh ar yezh, en em lodenn Serbiz e daou rummad. Hini an Uhel Luzaseg en Uhel Luzasia gant kreizenn sevenadurel Budysin (Bautzen) hag hini an Izel Luzaseg en Izel Luzasia gant kreizenn sevenadurel Chocebus (Cottbus).

Evit ar gredenn, ez int darn katolik, darn protestant hogen ar gredenn gentañ eo a zo trec'h d' eben el Luzasia-Uhel.

Gwiskamantoù an Uhel Luzasia ha re an Izel Luzasia a zo disheñvel an eil, re diouzh ar re all ivez. En hini gentañ, e plij livioù flamm tra ma kav gwelloc'h an Izel Luzasiadez al livioù diflamm ha dous ganti.

Ar goueriadelezh eo a vez trec'h er vro. Gwechall, pa oa ar Serbad ur micherour, e oa en arvar da vezañ faezhet gant ar germanaat.

34

Bras eo ar mengleuzioù prenn glaou, dreist-holl e korn-bro Zly Komorow (Senftenberg) hag ijinerezh ar gwer.

Brudet eo ivez douar gwezegoù ar Spree, ma ro stêr Spree e anv dezhañ ha ma n' heller mont ennañ nemet dre vageal war ganolioùigoù strizh ha diniver. Ar c'horn-bro-mañ hag a c'houzañvas, a-holl-viskoazh, gant al liñvadoù koulz ha gant ar sec'hor, a zo war-nes dont da vezañ un douar a c'hounidegezhioù frouezhus dre ar gwelladennoù degaset bemdeiz.

BRO-LUZASIA ER RAGISTORVEZH

Douaroù reter Europa ar C'hreiz a stumme, e marevezh an arem, ul lec'h a gensevenadurezh. Hini Luzasia eo a veze graet houmañ. En em astenn a rae, avat, war un dachenn-emledañ kalz brasoc'h eget ar c'hornad-bro en hanternoz da stêr Danao, ennañ Aostria, Bohemia, Moravia, Silezia en o stummoù a-vremañ ha

larkoc'h an douar etre stêr Elbe ha Weichsel, o vont betek war-dro kelc'h Berlin hag oc'h engronnañ Thuringia ha Bro-Saks ivez. Ar C'hermaned, ar Gelted, an Thraked, hag ar Slaved a voe lakaet da zalc'hidi ar sevenadurezh-mañ. Hiziv e vez trec'h ar menoz e voe savet ar sevenadur-mañ gant an Illirianed a ouenn indezeuropat. Diaes-tre eo ivez lavarout pegoulz ez eas da get ar sevenadurezh-se.

Goude 900 kent J. K., pe war-dro, e krogas Germaniz, a oa o chom en hanternoz d' an douaroù-se, gant fall ma teue da vezañ an amzer ha, da heul, ar c'haout-boued en o lec'hioù-annez, da loc'hañ war-du ar c'hreisteiz ha da aloubiñ anezho. Dirazo, koulz ha dirak ar Gelted o tont eus ar C'hornog, e tec'has an Illirianed davet ar Gevred. Ha setu penaos, er marevezh etre 500 ha 300 kent J. K., e kouezhas douar Bro-Luzasia e dalc'h rummadoù germaniat ar c'huzh-heol.

An divroadegoù bras ha dalc'hus, hag a badas eus war-dro 100 kent J. K. betek 500 goude J. K., a gasas rummadoù germaniat ar c'hornog koulz ha re ar Reter betek Europa ar C'hreisteiz hag Afrika zoken. En abeg da se ne voe biskoazh poblet-stank an tachad-bro etre ar Mor Baltek hag ar Menezioù Karpas. Dilezet e voe kalz a zouareier zoken hag enno en em silas Slaved ar Reter, goustadik hogen dibaouez, o lonkañ an nebeut a C'hermaniz a oa chomet eno.

Menegiñ a ranker ur menoziad all ivez, an hini douget, da gentañ holl, gant furcherien Slavet a gav dezho e voe Slaviz e Bro-C'hermania ar Reter hag ivez e Luzasia, adalek marevezh an arem, hag e vije bet dalc'het sevenadurezh Luzasia gant Slaviz. N' heller ket, amañ, mont a-dugant hini pe hini eus ar menozioù-se, gant diaes-spontus ma vefe o gwiriañ, pa vez, ouzhpenn, doareoù gwelout broadel ha politik oc'h hanteriñ pounner.

35

ENBROADEG SLAVED AR C'HORN OG HA LEC'H AR SERBED EN O METOU

Evel m' hon eus lavaret endeo, er mare goude 500 kent J. K., e voe aloubet, tamm-ha-tamm, ar rann-vro poblet an darn vrasañ anezhi gant Germaniz gant rummad kornok ar Slaved. Trevadenn da Tchekiz ha Slovakiz e teuas da vezañ Bohemia, Moravia, ha Slovakia. Poloniz a loc'has eus ar Reter betek an Oder ha Pomeraniz, hag a oa o chom tost ouzh ar re gentañ, a anezas da vat a-hed Aodoù ar Mor Baltek, e Pomerania (an Arvor e Slaveg, Po = a-hed ; morje = ar mor). Ar rannvro etre stêrioù Elbe hag Oder a zegemeras Slaved an Elbe, Polabiz, ha Serbiz pe Sorabed. Slaved an Elbe, ma oa ar Wagried, an Obodrited, hag ar Wilzed, ar rummadoù brasañ, a yeas da get er c'hermanelezh, tra ma he deus un darn vihan eus pobl vras ar Sorabed miret, hiziv c'hoazh, e Bro-Luzasia, ur vuhez dezhi hec'h-unan.

Serbiz a biaoas, en eil hanterenn eus ar c'hentañ kantved goude J. K., tamm-ha-tamm, un ec'hon a dachenn-annezañ. En hanternoz e oa hec'h harzoù war al linenn Magdeburg-Frankfurt an der Oder (Slaved an Elbe), hag, er reter, a-hed an Oder, Bober ha Queiss ouzh Polonia. O amezien eus ar c'hreisteiz a oa Tchekiz ma oant rannet diouto dre ar menezioù « Erzgebirge ». Harzoù kornok an dachenn-annezañ-kenstag-se a oa, koulz lavarout, a-hed ar Solawa (stêr Saale), war al linenn Magdeburg, Halle, Merseburg, Iena, Saalfeld. An dachenn gant trevadennoù Serbat a-skign en em astenne, avat, larkoc'h war-du ar c'huzh-heol betek trowardroioù Fulda, Würzburg, Ausbach, ha betek stêr Danao e Donauwörth. Alese e heulie ar stêr-mañ betek Regensburg hag alese ez ae davet an hanternoz betek ar menezioù anvet « Fichtelgebirge ». An dachenn-emskignañ-se ne voe perc'hennet avat gant Serbiz nemet un nebeut kantvedoù.

En em lodenniñ a reas Serbiz e meur a rummad. Da gentañ holl, ne oa nemet ur strollad, en dro da gêr Serbiste (Zerbst), a oa anvet Serbiz. Diwezhatoc'h en em ledas an anv-mañ war dachenn ar rummadoù-kar-all ken ma teuas a-benn an diwezhañ da vezañ graet gantañ e Luzasia a-bezh.

36

E-touez ar rummadoù Serbat e tleomp menegiñ, da gentañ, an « Daleminzed » kalonek. Kar-nes eo al « Luzici » eus an lOvet kantved en Izel Luzasia a-vremañ

hag, er c'hreisteiz, ar « Miloaned » en Uhel Luzasia a-hiziv. An daou-anv-se a beursteuzias diwezhatoc'h. Anvidigezh tachenn-annezañ al « Luzici », hag a oa bet graet « Lusatia » anezhi e Latineg, a voe roet ivez da zouar ar « Miloaned », kement ha ken bihan ma voe peurunvanet an daou gorn-bro, e mareoù ar Grennamzer, dindan ar c'henanv a « Luzica ».

Gwall nebeut a dra a ouzer diwar-benn Serbiz an amzerioù-se. Koulskoude, Sant Bonifatius (741) a grouas eskopti Würzburg e tachenn-annezañ ar Serbed a veve ouzh stêr Main. Karl Vras a stourmas, n' eo ket hepken ouzh Tchekiz, hogen ivez ouzh rummadoù Serbat ar C'hornog ha sevel a reas ar « Mark ». Serbat dindan evezh ur « Markgraf » Kont ar Mark Frank (806).

ALOUBIDIGEZH BRO-SERBIZ GANT AN ALAMANED

Goude dismantr an Impalaeriezh Slavav-Moraviat gant ar Vagiared, pobl a varc'hegerien (906), e reas an Dug Saksat Otto e vad eus skignidigezh rummadoù Serbat an harzoù hag aloubiñ a reas an dachenn etre ar « Saale » hag ar « Weissen Elster ». Kreñvaat a reas an douar-mañ a-benn ober gantañ ul lec'h-loc'hañ evit embregadurioù all ha fiziañ a reas anezhañ en e vab Heinrich a dlefe deskiñ eno micher an armoù.

A-enep astennidigezh an aloubidigezh-se e stourmas dispont an Daleminzed e-kichen Meissen. Ha peogwir e oant re wan o-unan, ec'h en em unanjont gant ar Vagiared, ha mont a rejont e-barzh Bro-Saks.

Evel-se e oa an traoù pa varvas ar Roue gwan Alaman Konrad I. En e destamant e roas ar roueelezh d' an Dug Saksat yaouank Heinrich I (918). Evit dont a-benn eus diaesterioù an diabarzh, en Alamagn, e prenas Heinrich ar peoc'h evit nav bloavezh digant ar Vagiared. Lakaat a reas Heinrich ar mare-peoc'h-se da dalvezout da greñvaat e c'halloud ha da sevel ur varc'hegiezh. Al lu-nevez-mañ en em voaze d' ar brezel e krogadoù ouzh e amezeien Slavav. Evel-se ec'h aloubas, a-daol-trumm, e 928, an dachenn piaouet gant ar Wilzed. Nebeut goude ec'h arsailhe Bro an Daleminzed difennet mat gant kreñvlec'hioù harzoù ha, goude bezañ tremenet a-dreuz d' ar gouriz-kreñvlec'hioù-mañ en e gornioù gwanañ, e tiskennas davet ar c'hreisteiz dre draoñienn an Elbe. Eno e krouas, war ur roc'h, kastell-kreñv Meissen (serbeg : Misno). Alese e loc'has larkoc'h war-du Bohemia e-lec'h ma voe rediet an Dug Wenzel da anaout e aotrouniezh.

37

E 932, e teu Heinrich a-benn da vont-tre e Luzasia ar C'hornog e-lec'h ma voe faezh Lebusa dreist-holl. An darn vrasañ eus Bro-Luzasia avat a chom dieub.

E 933, pa zeue ar Vagiared a-nevez e-barzh Germania, e c'houlenne groñs ar re-mañ digant o c'henstourmerien-gent, an Daleminzed, da argadiñ a-gevret ouzh an Alamaned. Hogen pemp bloavezh a vestroniezh Saksat a oa bet a-walc'h da derriñ e vell-gein d' ar rummad Serbat-se. Ar Vagiared a voe trec'het en emgann gwadus a Unstrut.

Heinrich I a voe a-walc'h dezhañ lakaat Serbiz dindan evezhiadur ur c'homiser-gouarnamant anvet « Legatus ».

E warlerc'hiad, Otto I, her d' e dad e 936 a wele pell ha fellout a rae dezhañ strollañ an holl Slaved betek an Oder dindan e vestroniezh. E lec'h al « Legated » e lakaas «Markgrafed ». War Serbiz e laoskas-eñ Gero, un den korvigell ennañ ha taer, d' ober e reuz. E 933 e ped hemañ un tregont bennak a Bennrenerien Slavav d' ul lidadeg ha lakaat lazhadegañ anezho a ra en noz da heul.

E Bro ar Serbed e lak Gero ar c'hreñvlec'hioù da vezañ peurechuet hag aloubiñ a ra, e 956, an Elbe koulz hag an dachenn etre houmañ hag an Elster du. Alemañ e teu e-barzh Bro ar Milzed. Daoust d' ar re-mañ bezañ faezhet diouzhtu, ne c'hortozont ket pell kent kas da get adarre ar yeo Alaman.

Gero en em dro neuze ouzh amezeien hanternoz ar Milzed, al Luzici. D' ar

re-mañ da chom hep kaout skoazell digant o c'heneiled ar Boloned e lak Gero ar Milzed da aloubiñ Pomerania, pezh a zalc'h ar arme poloniat. En doare-se e teu Gero a-benn eus Luzici e 963.

Degouezh ar brezel a voe pell amzer, en arvar ha n' eo nemet goude kolloù bras ma teuas a-benn vat. Al Luzici, trec'het, a voe graet divalo dezho.

Ar Roue Otto I, bet anvet, e 962, eus Pab da Impalaer, a venne ivez, dindan an digarez-mañ, mestroniañ an holl vroioù nann-alaman. Betek diwezh e ren e suj, tamm-ha-tamm, holl Slaved ar C'hornog, evel-se, da skouer : 947-50 Tchekiz - 955 an Obodrited - 956-58 ar Milzed - 963 Luzasiz - 963-72 Poloniz.

Tchekiz, Obodritiz, Milziz ha Poloniz a vire o duged dezho o-unan tra ma oa Hevelleriz ha Luzasiz, koulz ha rummadoù Serbat all faezhet abretoc'h, dindan Priñsoù Alaman. E-giz-se e save Gero ur Mark divent, a dlefe, goude e varo hep bugale, bezañ rannet gant Otto e pemp Mark bihanoc'h.

Politik e dad a heulias Otto II. E ziaesterioù bras en Italia a roas tro d' ar Slaved da gregiñ da gas kuit an Alamaned. Deraouiñ a reas an Emzav gant an Obodrited, unanet outo ar Milzed ha Poloniz. Serbiz avat, Milziz lakaet er-maez, n' en em savjont ket rak warno e poueze kreñv-kenañ c'hoazh mestroniezh an Dalc'h alaman aozet ken mat.

38

Pa zeuas Otto III (983-1002) ne biaoue nemet ar « markou » annezet gant Serbiz ha tra ken. Hag an tachennoù-se zoken ne oant ket sioul ha peoc'hus en abeg d' an diaesterioù diabarzh en Alamagn ha, da heul, da Tchekiz ha da Boloniz da vezañ deut kreñvoc'h. En diwezh e teuas Otto III, koulskoude, a-benn eus e enebour en Alamagn hag a-benn eus ar Slaved adarre. « Markgraf » Meissen, Ekhard II a sujaz zoken rummad diwezhañ ar Serbed o terc'hel penn Milziz. E 990 e oa peurechu ar sujidigezh hag e teuas al lec'h-kenwerzh, kreñvaet-tre, Bautzen, da vezañ ar c'hastell-kreñv alaman war harzoù ar stad poloniat o vont bepred war greñvaat.

Ur beñveg-brezel dispar a oa bet levezon ideologiel an Iliz. Ne oa ket bet Heinrich I e chal da lakaat ar gristenbezh d' en em astenn. Otto I avat a oa prederiet endev gant ur politikerezh dre ar c'hleze ha gant ar groaz. E 948 e kroue e broioù an Hevellened eskobtioù Brandenburg hag Havelberg. Splann e tiskouez an darvoud-mañ e oa politik pennwriazienn ar gristenidigezh. Oberiantiz ar Misionoù en em lede, da gentañ, war dachennoù arvarus tra ma laosked Serbiz, trec'het da vat, gant ar Baganiezh evit c'hoazh. Merzout a reas Slaviz, dindan nebeut amzer, pal kuzh ar mision alaman ha sevel a rejont a-enep da ebarzhidigezh ar gristenaehz e tachennoù ar Reter a-hed daou gantved c'hoazh. Enebiezh Milziz a voe purveuzet en ur mor a wad.

Dalc'hidigezh Bro-Luzasia a oa ur genn ouzh Bro-Bolonia. Ar gourdrout-mañ a voe merzet gant an Dug Poloniat Mieszko I. Dont a reas a-benn da zerc'hel bev un arc'heskobti poloniat e Gniezno (Gnesen), o lemel, dre-se, digant an Alamaned, an digarez d' un hanterouriezh evit ar gristenaehz. Mab Mieszkos, hag e warlerc'hiad Boleslaw Chrobry, en em zisyeoas diouzh ar vestroniezh alaman ha dieubiñ a reas bro Serbiz betek ar Solowa (Ster Saale). Gounit a reas Bohemia, Moravia, hag ur rann eus Slovakia zoken. A-benn an diwezh e teuas an trec'h gant Heinrich II ha, dre emglev-peoc'h Bautzen, ne viras Boleslaw netra nemet Bro-Luzasia. War-lerc'hiad Boleslaw, Mieczyslaw II, a adkrogas gant ar brezel. Goude taolioù kaer en deraoù, e rankas, abalamour ma oa bet taget d' e dro gant ar Rusianed er Reter, dilezel a-grenn Bro-Luzasia e 1032.

Diwezhatoc'h, dindan an Impalaer Heinrich IV, e teuas, e-pad stourmoù diabarzh en Alamagn, « Mark » Meissen, da vezañ Impalaerad a-wechoù d' an Dug a Vohemia ha, goude, d' ar Roue Wratistaw. Tachenn an Uhel Luzasia a chomas evel-se betek 1112 e kerz Bohemia.

39

War-dro 1100 e teuas ar goueriaded alaman kentañ d' ober o annez e douaroù kornok bro Serbiz. Ar bloavezhioù brezel o doa lakaet niver ar boblañs da zigreskiñ hag e kave d' ar vistri e oa digresket seul vui, da heul, o leveoù a-

ziwar ar madoù. Dre an annezañ-mañ e voe argaset kouerien serbat diouzh lec'hioù 'zo ha ret e voe dezho bezañ laouen gant douareier nebeutoc'h strujus.

En hanterenn gentañ an daouzekvet kantved e teuas a-benn ar Priñsoù Alaman da greskiñ o galloud e-keñver da hini kreizek ar Roueed alaman hag, en abeg da se, o devoe muioc'h-mui da vrezelekaat ouzh tachennoù o amezeien Slavat.

En dachenn Serbat kreisteizel a-bezh, koulz lavarout, e taolas troad da vat rummad rouanez ar Wettiner goude mougidigezh an aotrouniezh Tchekat. Ren a reas ahont betek 1918. Lodenn ar Gevred, da gentañ holl tachenn Bautzen, a chomas pell amzer, adalek 1158, e dalc'h Tchekiz. E 1369 e kouezhe an darn vrasañ eus an Izel Luzasia dindan Vohemia. En tachennoù-se e oa deut da vezañ gwall dreut levezon Serbiz e-keñver o broadelezh ha war ar gouarnamant n' o devoa, evel just, dindan ar vestroniezh Techkat levezon ebet ken.

TREVADENNIGEZH BRO-SERBIZ DRE AR GOUERIEN ALAMAN

Pennabeg engouestlidigezh kouerien alaman diouzh kornog an Impalaeriezh c'herman a voe an tremen eus an natur arboellerezh d' an arc'hant arboellerezh e-pad an XIIvet hag an XIIIvet kantved. Da heul e kreskas ezhommoù ar Renerien ha douget e voent da drevadenniñ donoc'h o broioù gant maezidi alaman a-benn brasaat o gounidoù. Ne voe ket diaes lakaat plouezidi da asantiñ pa oa re niverus endeo ar boblañs e tachennoù alaman ar c'hornog.

An drevadennourien gentañ a zeuas eus Frankonia, Thuringia, Izel Saks, Holland, Westfalia, Friesland. Flamankiz a zeuas ivez hag, hiziv an deiz c'hoazh, e vez graet diouto, en Anhalt, evit envel ul linenn krec'hiennoù : « Fläming ».

An drevadennourien alaman a voe graet bravoc'h outo eget ouzh Serbiz ha germanekaet e voe buan an darn vrasañ eus bro Serbiz. El lec'hioù ma c'helle Serbiz mirout o broadelezh e teuas o stad da vezañ falloc'h-fallañ er c'hantvedoù warlerc'h, da vare an damsklavelezh peogwir e oa ar vaezidi alaman hepken o feuriañ gant ar renerien.

N' hellomp ket sellout pelloc'h ouzh istor politik Bro- Luzasia hag emaoomp bremañ o vont da bleustriñ war un dam-skeud eus he buhez sevenadurel.

40

KANTVED AN DISIVOUD MEUR DERAOU UL LENNEGEZH SERBEK

Da vare Luther e oa douar ar Serbegerien kalz brasoc'h eget hiziv. Tizhout a rae trowardroioù kêr Lütther, Wittenberg, ha mont a rae betek dirak Berlin. Lütther e-unan, ne grede ket e dazont Serbiz ha, d' e venoz, n' oa ket an disterañ ezhomm da dreiñ ar bibl e serbeg peogwir ne vefe Serbad ebet ken a-benn ur c'hantved. Souezh ebet neuze ne gavas an Disivoud-Meur nemet un nebeut a zalc'hidi e-touesk Serbiz en deraou.

E-mesk studierien gentañ an doueoniezh protestant e Wittenberg e oa Nikolaus Jakubica yaouank, genidik eus rann reterel Bro-Luzasia, a welas splann e rae diouer d' ar gouerien serbat skridoù en o yezh dezho o-unan, goude d' o mistri alaman bezañ enbroet ar brotestantiezh. En em zibab a raed gant bibl Kralic, un droidigezh Tchekek eus ar bibl skignet a-vil-vern. Jakubica a reas e venoz da dreiñ ar bibl e serbeg a-benn diskar an droidigezh alamanek gant Lütther. Ha, pa ne oa reizhskrivadur serbek ebet evit c'hoazh, e kemeras Jakubica hini ar bibl tchekek, oc'h amprestiñ diganti war un dro kalz a c'herioù na oant ket anezho e serbeg an amzer-se. N' eus ket ezhomm da lavarout ne gavas Jakubica skoazell ebet digant e vistri alaman. Koulskoude e peurechuas, a-benn 1548, troidigezh an Testamant Nevez. N' hellas ket avat he lakaat moulañ, pezh a c'hoarvezas da veur a droidigezh er prantad-se. N' eo nemet a-benn diwezhañ ar c'hwezekvet kantved ma teuas un den anvet Albin Mollerus a-benn da gas da voulañ ul levr-kanañ gant katekiz a-drugarez d' an arc'hant en devoe digant Beli Tchekat an Izel Luzasia, ar c'hont Kolowrat.

Er brezel a dregont vloavezh (1618-1648) e c'houzañvas kalz Bro-Luzasia. Dre emglev-peoc'h Praha (1635) e rankas Bohemia reiñ an div Luzasia d' ar Saksed, pezh a lakaas an darn vrasañ eus Serbiz da gouezhañ dindan yev ar Priñsoù saksat tra ma ez ae ar peurrest anezho dindan ar Brandenburg. Stad kevredigezhel ar gouerien serbat a zeue da vezañ gwashoc'h-gwashañ. Yaouankiz speredel ar vro ne oa ket mui evit mestroniañ he yezh c'henidik da vat. Diouer a levrioù-deskiñ serbek a oa. Seul vui pouezus e voe eta servij un nebeud speredien serbat a enebas ouzh peñse o fobl dre o labour da sevel ur yezh skrivet. Jan Chojnan, ha n' hellas lakaat moulañ nag e yezhadur, echu e 1650, nag e c'heriadur latineg-serbeg, a sevenas koulskoude un dispar a raklabour evit an dazont.

41

Michal Frencl, eus Bautzen, a groue an Uhel Luzaseg skrivet en e bezhioù-c'hoari speredek moulet e 1660.

War-dro 1700 en em astennas ar micherioù hag al labouradegoù brav a-walc'h ha, d' an hevelep mare e oa an deraou eus « Ar Sklerijenn », Uhelvennad araokaus Bourc'hizien an amzer. Ar menozioù-se a levezonas ivez meur a Serbad yaouank war o studioù er skolioù-meur german. An holl witibunan, koulz lavarout, a oa doueonourien, en o mesk an Izel Luzasiad Bozidar Krygar. An istorour serbat kentañ e voe ha sevel a reas, e 1675, « De Serbis, Venedorum Natione » hag « Origines Lusaticae ».

Tro gehelus an doueoniezh protestant alaman a voe tra ar Poloniad Bogumil Fabricius, hag a embannas, e 1709, un Testamant Nevez en Izel Luzaseg.

E skolioù-meur all ivez ec'h adsoñje ar studierien serbat en o bro dindan levezon ar « Sklerijenn » ha krouiñ a raent e Praha, e 1706, ur c'hloerdi serbat. E 1716 hag e 1749 e voe savet e Leipzig hag e Wittenburg kelc'hioù prezegennourien brotestant. An holl reoù-se n' o doa nemet ur pal war o spered : Difenn o yezh c'henidik.

Menegomp amañ an Alaman, Johann Gottlieb Hauptmann, a embannas, e 1761, ur yezhadur serbek ; ar gwerinour Abraham Frencl (1665-1740) ha Jan B. O. Rychtar ; an naturour (gwenaner) Hodan Bohuchval Serach, eus Bautzen, ma oa e levrioù da vezañ troet e rusianeg hag e galleg. Ar Person Jurij Mjen (marv e 1785) a droas barzhoneg-werz « Messias » ar c'hlaseler alaman Kloptock.

MARE AN DISPAC'H GALL HAG AR BREZELIOU NAPOLEONAT

Prederioù an Dispac'h Gall ne chomjont ket hep levezon hag en em ziskouezjont dre un nebeud emsavadennoù maezidi ha na oant nemet degouezh meur a vloavezh naon. Dre vras ne veze ket stad ar boblañs Serbat o vont war wellaat hag a-wechoù ne rae nemet fallaat. D' an dra-se e oa kiriek ivez an emgannoù war douaroù Bro-Luzasia, e 1813, e-pad brezelioù Napoleon.

A bobl a vannas morzet don he spered da gentañ. Un nebeud studierien araokaus en em roas da ziorroadur ar bobl hag, e 1790, e voe savet ha moulet ar gelaouenn serbek kentañ, hec'h anv « Kannadig-miziek evit an Deskadurezh hag an Diviz ». Trawalc'h e vo lavarout e voe difennet ar gelaouennig goude embannidigezh an niverenn gentañ evit diskouez pebezh aon en doa ar gouarnamant rak strivadennoù a-seurt gant ar re-se.

42

N' eo nemet naontek vloavezh diwezhatoc'h ma klaskas Jan Dejka, ar c'halvez aet da bell vro hag ar c'helaouenner serbat kentañ, adkregiñ gant ar strivadenn-se dre sevel, e 1809, ar « Post ha Danevellour evit Serbiz ». Tanfoeltrañ a rae-eñ ar germanekaer ha taer e tifenne yezh e gavell. Souezh ebet e voe berzet e gelaouenn e 1812.

SERBIZ GOUDE EMGLEV-PEOC'H WIEN (1815) BETEK 1844

An eskemm douar da heul Kendalc'h Wien a zegasas an degouezh-mañ : Tregont

dre gant eus Serbiz a chomas dindan Saksiz hag ar peurrest, ennañ an holl Izel Luzasiz, a yeas dindan Brusianiz. En Uhel Luzasia Saksat e padas damsklavelezh ar gouerien betek 1832. Er Prus avat e oa bet lamet krenn kerkent ha 1807. Ar reolenn ouzh he lakaat da dalvoud a redias kalz a vaezidi da werzhañ, evit un netraig, o madoù d' ar Berc'henned uhelwad tra ma ez aent-i da zevezhourien.

Da heul ar eskemm-mañ e kreskas an toueziañ etre an annezidi serbat hag alaman kement ha ken bihan ma kouezhas niver ar Serbegerien eus 245.000 da 164.000 en hanterenn gentañ an naontekvet kantved.

Pennoù ar stadvererezh a reas o fep gwellañ evit gwasaat an traoù. Evelhen e oa savet al lezenn saksat eus 1835 diwarbenn an skolioù-kentañ : Ar gelennadurezh a rank he fenn-reolenn bezañ : « Deskiñ an Alamaneg ». N' oa nemet ar gelennadurezh relijiel a c'helle ober gant ar serbeg ivez hag, el lec'hioù o kaout ar seurt kelennadurezh e oa graet, a-wechoù, ar servijoù relijiel e serbeg.

E-mesk brogarourien serbat ar mare e tleomp menegiñ, da gentañ holl, Handrij Lubjenski (1790-1840) a adsave, e 1814, pa oa studier e Leipzig, Strollad ar Studierien Serbat, hag a groue ur geriadur serbek-alamanek gant kenseurted. Goude e varv e voe kendalc'het al labour gant Handrij Zejler (1804-1872).

Jan Arnost Smoler (1816-1884) a embanne, e 1841 hag e 1843, kanaouennoù-pobl an Div Luzasia. Al lusk davet an dastum-se a oa bet roet, adalek diwezh an triwec'hvet kantved endev, gant ar barzh alaman brudet Johann Gottfried Herder a heñchas reoù all war-du teñzorioù ar c'hanaouennoù-pobl er pobloù nebeut anavezet.

Er mare-se e c'hoarvezas ganedigezh an Hollslaviadegezh ivez. Ar vourc'hizien tchekat, slovakat ha slovenat a glaskas skoazell digant Rusia, ar Stad Slavat dieub nemeti, evit o stourm ouzh ar germanekaat. Poloniz avat, o tont da vezañ mac'homet o-unan gant ar Rusianed, a chomas sur hep daremprediñ anezho.

43
DISPAC'H 1848

E-pad Dispac'h 1848 e voe dalc'het, e Praha, ar c'hendalc'h hollslaviat kentañ. Ennañ e kemeras perzh ar Serbad Dr Petr Jordan hag a oa lenner e skolveur Leipzig.

Ar vourc'hizien-vunut serbat ne veizjont ket ster dispac'h 1848 ha feal e chomjont d' ar Roueelezh. Un direizhder a voe ar skolaer yaouank Jan Wjela Radyserb (1822-1907) a yeas a-du gant ar Stad-pobl.

Kelc'hioù ar vourc'hizien-vunut serbat, ganto enskiant o broadelezh, o doa endev, adalek 1847, savet ur gevredigezh ouiziek evit saveteiñ ar serbeg hag e lennegezh, ar «Macizna Serbska » hec'h anv. E-touesk e graierien e oa : J. B. Mucink ; Jan Melda ; Jan Bartko ; Jan Radyserb-Wjela ; K. A. Jenc ha J. A. Smoler.

Diouzh ar werinoniezh e tarzhe ar varzhoniezh neuze. H. Zejler a groue ar varzhelezh serbek ha Radyserb-Wjela ar werz serbek.

War dachenn an Danevell e laboure J. B. Mucink (1821- 1904) hag adarre Radyserb-Wjela.

An holl skrivagnerien-mañ, koulz lavarout, a oa ker gouest all war ar skiantoù. War al lizheregouriezh e voe dreist an Dr. Krescan Pful (1825-1889) hag a embannas ar c'hentañ geriadur gouiziek serbek, mil daou c'hant dek enebenn ennañ.

Al lusk-mañ avat ne oa anezhañ nemet en Uhel Luzasia Saksat. Er Prus e oa

disheñvel krenn an traoù hag ar barzh Izel Luzasiat nemetañ, er prantad-se, ar Person Kito Stempel (1787-1867) a chomas e-unan-penn. E oberoù a voe ankounac'haet betek diwezh an eilvet brezel-bed.

AR SERBADELEZH (1850-1870)

Al lusk ijinerezhel en Alamagn, goude 1850, a zegasas e Bro-Luzasia ivez deraou an ijinerezh kapitalist. Perc'henned an douaroù nobl a welas, e savidigezh teolierezioù ha brikennerzioù, mamenoù a c'hounidoù nevez. Ar vourc'hizien alaman a grouas, e kêrioù Bro-Luzasia, labouradegoù gwiadenniñ ha nezañ, o lazhañ dre-se al labour-dorn. Gwerennerezioù a voe savet ivez.

44

An emdroad politik a redias gouarnantoù Bro-Brus ha Bro-Saks, da reiñ, a-skriñ-kalon evelato, darn eus o goulenoù sevenadurel da Serbiz. Evel-se e voe fiziet er Person bras Mudra, e 1865, gant gouarnant ar Prus, ar gefridi da sevel un nebeut levrioù en Izel Luzaseg evit ar skolioù. E 1860 e krogas ar gelaouenn sevenadurel « Luzican » (Al Luzasad) da zont er-maez. Etre 1597 ha 1848 e oa bet embannet 375 oberenn moulet en Uhel Luzaseg hag etre 1849 ha 1865 kement ha 282.

Bautzen a zeuas muioc'h-mui da vezañ kreizenn sevenadurel Serbiz.

Ar skolaer yaouank Kito Swjela (1836-1922) a zeuas a-benn, pa gemeras, e 1868, renerezh ar gelaouenn « Casnik », kilstourmus betek-hen, d' he leuniañ gant ur spered serbat araokaus.

En Uhel Luzasia e oa oberiant war meur a dachenn ar speredeg yaouank katolik Michat Hornik (1830-1894) a embanne levrioù ha kelaouenoù en ur stourm evit adunvanidigezh div rann ar bobl Serbat.

Al lusk-mañ en em ziskouezas ivez e kreskidigezh niver an annezidi, ma tremenas en o zouez niver ar Serbegerien eus 138.000 da 163.000 etre 1849 ha 1858.

DIBUN AN DARVOUDOU GOUDE 1870 BETEK DIWEZH AR BREZEL-BED KENTAN (1918)

Betek-hen e oa bet Bro-Luzasia e-mesk an tachennoù paourañ eus an Alamagn evit pezh a selle ouzh an ijinerezh. Goude ar brezel ouzh Bro-C'hall, e 1870-71, e voe lakaet an ijinerezhelañ d' ober ul lamm war-raok en Alamagn a-bezh, da lavarout eo e Bro-Luzasia ivez, pezh a lakaas labourerien alaman niverus da enbroañ enni, en ur chom avat hep kaout darempred gant poblañs serbat ar maezioù. Ha da drenkaat an traoù c'hoazh e selle al labourerien alaman a-gorn ouzh ur bern Serbiz hag a oa prest da labourat evit goprou izel. Dre vras e voe germanekaet buan at Serbed yaouank a yeas eus ar maezioù d' an ijinerezh.

E Bro-Brus e c'hourdrouze ar Gouarnant kilstourmus Stad ar Serbadelezh hag a oa hep difenn, en enep d' an isvroadelezhioù gall ha danat, pa n' he doa harp ebet en diavaez. Ar gourdrouz-se a oa gwelet ivez avat war dachenn sevenadurel pouezus an Iliz ha war hini ar Skol. Ha ne oa ket gwelloc'h an traoù e Bro-Saks.

Ar stourm evit Kendalc'h ar Serbadelezh a voe bleniet, dagentañ holl, gant « Serbiz Yaouank » ma oa o fennrenerien izili da yaouankiz ar studierien.

45

Daoust d' an holl ziaesterioù e save Izelserbiz, neuze, o « Masica » a glote ouzh « Masica » Uhelserbiz. Enni e labourer, e-mesk reoù all, hag ouzhpenn Kito Swjela, Bjedrich Tesnar (1829-1898) hag ar skolaer Haejndrich Jordan (1841-1910). Tesnar a c'hlanaas an Izel Luzaseg dre skarzhañ dioutañ ar germanekadurioù didalvoud ha krouiñ a reas diazezoù ar reizhskrivadur izelluzasek a-vremañ. D'ar gevredigezh-se e oa ezel ar barzh yaouank Mato Kosyk (1853-1944) a ginnige en e werz « Serbska Swajzbaw Btotoch » (Eured Serbat er

Spreewald) un daolenn arouezius eus buhez e vammvro.

Eus « Serbiz Yaouank » menegomp c'hoazh Jakub Bart Cisinski (1858-1909) hag a c'hellas, nebeut amzer sur, stourm e-touez Serbiz evel speredeg katolik daoust da zarvoudoù-enep a lakaas anezhañ e penn hent an harlu gourc'hemennet groñs gant Pennrenerien an Iliz.

Pouez bras en deus bet, en e gichen, an Dr. Arnost Muka (1854-1932) a lakaas a-wel d' an holl, en un doare gouiziek, en e oberenn vras « Statistika Luziskich Serbow » (Taolenn-feuriadañ Serbiz Bro-Luzasia), emzalc'h enep serbat hag oberiusted kenreizhadur ar mare-se en Alamagn.

En Dr. Juro Sauerwein, un Alaman eus Hanover, a zeuas da garout Bro-Luzasia dre ar beajoù a reas enni, e kavas Serbiz ur c'halet a genstourmer pa grede-eñ mont war-eeun a-enep da Bismarck. En em voazañ a reas ken mat ouzh ar yezh ma teuas a benn da sevel barzhonegoù izelserbek zoken.

An Emsav-broadel-mañ, e trederenn diwezhañ an naontekvet kantved, a zo dleet dezhañ kendalc'h ar boud broadel. E zegouezhioù ne dizhent avat nemet ar goueriadelezh ha tamm ebet ar micherour en ijinerezh hag a oa muioc'h c'hoazh en arvar da vezañ germanekaet. Nebeut hepken, evel Bogumit Swjela, a oa direizhderioù.

An Alamagn Impalaerel a rae gant pep tra evit distrujañ Serbiz evel Broadelezh. Harperien ar strivadennoù-se a oa dreist-holl er « Gevredigezh Hollalaman » a glaske lakaat ar bobl da soñjal ne oa Serbiz nemet estrenien.

Ar c'helc'hioù alaman impalaerat a rae o seizh gwellañ evit rannañ ar Serbadelezh, en diabarzh, dre ober gant Serbiz kilstourmus ha, da gentañ holl, gant un darn eus ar speredien hag a implije o gwall levezon e-kreiz kevredigezh vroadel ar « Masica Serbska » zoken, war-dro diwezh ar c'hantved.

46

E-touesk Serbiz hag a zifenne, hael ha taer, gwirioù o fobl er mare-se, e oa Bogumit Swjela, mab Kito Swjela, er penn kentañ. Da berson ez eas pa welas n' oa nemet an tu-se da c'hallout pouezañ war e genvroidi. N' hellas labourat e Luzasia ar Brandenburg avat nemet eus 1903 da 1908. Neuze e voe rediet da zilezel ar rannvro-se ha da glask e Luzasia Schlesien ur barrez nevez. Ne oa ket abegiñ a rae hepken hogen klask, dre dreutaat gant kargidi speredek, dont a-benn da c'hounit skañvaennoù gwirion war dachenn ar gwelladur-spered.

Enebiezh renerien alaman ar skolioù, hini ar bersoned serbat, mirourien an darn vrasañ anezho, ha digasted kalz a skolaerien serbat a donke an dezo da chom hep dont da wir.

Er bobl serbat hec'h-unan avat e oa ur youl greñv da gadarnaat he broadelezh. Anat eo an dra-se gant savidigezh « Ti Bro-Luzasia », e Bautzen, a grogas e 1897 hag a voe peurechuet e 1904, paet gant skodennoù diouzh ar bobl vunut.

Drouziwezh ar « Masica Serbska », kouezhet krenn dindan levezon kilstourmerien bolitik ha na felle dezho pleustriñ nemet war an dachenn ouiziek, a redias da sevel un Emsav broadel mui oberiant.

Endev o doa Jakub Bart Cisinski hag an Dr. Arnost Muka goulennet groñs an dra-se hag ar menoz-se a voe adkemeret da vat gant ar c'houer yaouank Arnost Bart e 1896. Da gentañ holl e c'hwitas war e daol. E strivadennoù dibaouez, a-unvan gant reoù Bogumit Swjela ha reoù ar skolaer yaouank Franc Kral, a vlenias da savidigezh an « Domowina », e 1913. Sez an Emsav-se a voe Budysin (Bautzen). Renerezh an « Domowina » a stourme, da gentañ holl, war an dachenn arboellerezhel ouzh ar gapitaliezh vras hag ouzh ar berc'henned douaroù bras. E 1913 e save Bart ur seurt bankti-pobl.

A-enep ar gevredigezh nevez krouet e savas buan Serbiz kilstourmus, dreist-holl er c'helc'hioù katolik. Daoust da se, e oa an « Domowina » un

araokadenn vras.

Mac'homidigezh ar skolioù a reas ma voe nebeutoc'h-nebeutañ a speredeien hag a skolaerien oc'h ober war-dro ar serbeg. Er c'hontrol, e oa saverien an « Domowina » o labourat, a-zevri, a-du gant ar bobl war an dachenn-mañ.

E berr e fell deomp menegiñ pennañ skrivagnerien ar mare- se :

Miklavs Andricki (1871-1908) a oa ur speredeg katolik. Skrivagner kelaouenn Serbiz Yaouank « Luzica » e kave abeg e skeul ar gevredigezh. Dres evel Winger (1872-1918), hag a oa person ivez, e voe kaset kuit, dindan nebeut, en un dachenn nann-serbek, en abeg d' e oberiantiz. Pinvidikaat a reas al lennegezh serbek gant troidigezhioù a-ziwar ar poloneg ha, dreist-holl, a-ziwar oberour Sienkiewicz.

47

Jakub Lorenc Zaleski (1874-1939) a dremenas an darn vrasañ eus e vuhez e Bro ar Roen hep liammoù eeun gant darvoudoù e vammvro. Danvez e gontoù a dennas diouzh bed ar mojennoù ha diouzh hini an amzer dremenet. E romant « Serbcy Rjekowje » (Kadarnidi Serbat), deut er-maez e 1900, a ziskoueze d' ar yaouankiz Serbat doare an dud a stourme evit o frankiz da vare an Daleminzed (10vet kantved), dezhi da vezañ kreñvaet e sell d' hec'h emgann evit Kendalc'h ar Vroad.

Er c'hontrol, e kemere ar skolaer izelluzasat Fryco Rocha (1863-1940) skouer war vuhez ar c'hêriadennoù serbat ha skrivañ a rae en ur yezh vev-buhezek.

Ar person evanjelik, Matej Urban (1846-1931) en em droas, dreist-holl, ouzh an Inteligencia Serbat, mezh ganti eus hec'h orin pobl dindan al levezon hollalaman.

Kenseurt Urban, Jan Walter (1860-1920), hag eñ Alaman, a vestronie ar Serbeg ha, dre se, a lakae an Inteligencia Serbat da gaout mezh.

Ne zleomp ket ankounac'haat amañ oberiantiz ar re anvet endev : Arnost Muka ha Bogumit Swjela. Hemañ a savas teir oberenn a-bouez war an izelluzaseg « Dolnoserbcki psawopis » (Reizhskrivadur an Izelluzaseg) ; « Grammatika Delnjeje Serbsciny » (Yezhadur an Izelluzaseg), ha « Zwucowanska Kniha Delnjeje Serbsciny » (Levr-deskiñ an Izel-luzaneg).

SERBIZ EUS 1918 DA ZIWEZH AN EILVET BREZEL-BED

Serbiz ivez en em droas ouzh o mac'homerien e diwezh ar brezel-bed kentañ. An Emsav Broadel Serbat a voe krennet en « Unvaniezh Serbat » hag a voe krouet d' an 20vet a viz Du 1918. Pal an Unvaniezh-mañ a oa sevel, e-mesk ar boblañs Serbat emskiantek, diazezoù ar Strollad-oberiañ Broadel Serbat (Serbski Marodny Wuberk), bet krouet endev, e Bautzen, d' an 13vet a viz Du 1918.

En e benn e oa Arnost Bart meneget endev evel unan eus gensaverien an « Domowina ». E uhelvennad a oa ur vourc'hizelezh serbat pinvidik o vleniañ ur goueriadelezh serbat pinvidik. Ne oa ket e soñj er micherour. Ne anaveze ket nerzh-stourm ar vicherourien ha, da heul, ne glaske ket kaout darempredoù ganto. A-ziwar ar strisadur-mañ e oa ganet faziou an Emsav broadel serbat. Strollad Broadel Bro-Luzasia a savas ur roll-labour hag a c'houlenne groñs adrannidigezh an Douareier ha mougidigezh holl embregerezhioù ar gapitaliezh vras (Banktiez, h.a.). A-hend-all e c'houlenne an dieubidigezh vroadel pe dre ar c'hevredañ gant Tchec'hoslovakia, pe dre savidigezh ur Stad serbat dishual. Ar goulenn-mañ a oa e ziazezoù e « 14 Poent ar Pennrener Amerikan Wilson ». En em dreiñ a raed ouzh Kendalc'h ar Peoc'h e Pariz, pezh a oa ar fazi brasañ.

48

Wilson a oa kannad ar c'hapital amerikan hag, e gwirionez, ne oa ket dedennet an disterañ gant diliammidigezh ar broadoù mac'homet. Pennrenerien an uhelvourc'hizelezh Tchekat, Masaryk, Benes, kouls ha Bankholc'halloudeien

Preiss ha Petschek, a salude, ez laouen, astennidigezh ar brud Tchekat e-touesk Serbiz, pa n' o doa ken c'hoant nemet piaouañ mengleuzioù prenglaou pinvidik Bro-Luzasia.

An Deleuriadur Serbat, ennañ Arnost Bart ha Jan Bryl a zeuas en-dro eus Pariz, e miz C'hwevrer 1919. Bart a reas, e Budycin, un dezrevell diwar-benn pellweladoù ur Stad Serbat, o tiskouez e oa ret en em harpañ ouzh ur stad kreñvoc'h e-keñver an arboellerezh (Tchec'hoslovakia !).

E-kreiz 1919, e voe gwelet splann ne rae forzh Wilson eus goulennoù broadel Serbiz. Strollad Broadel Bro-Luzasia a voe rediet da skoulmañ emzivizoù gant Stad-pobl Weimar. Diaes-kenañ e voe en deroù, avat. Kalz a genizili d' ar Strollad Broadel a voe taolet en toull-bac'h ha kondaonet da baeañ telloù-kastiz. Bart a dapas tri bloavezh kreñvlec'h. Gwall gorrek e tamzigore Stad-pobl Weimar dor ar skolioù d' ar Serbeg. Seul vuic'h e labourer Serbiz drezho o-unan. Ar gevredigezh gouiziek « Macica Serbska », nevez-adstummet, a grogas adarre gant al labour. Ar « Sokol » (Falc'huned), ur strollad-sport, a voe ganet. A-hed ar bloavezh en em ziskulie un niver bras a strolladoù nevez. Pouezusañ e teue an « Domowina » hag he c'hengevredigezhioù da vezañ. E Budycin e voe savet gouel pobl bras ar « Vogelhoc'hzeit ».

E-keñver ar Stad, ne c'hoarvezas netra, evelato, evit reiñ kalon da Serbiz. Unvaniezh ar pobloù-suj bihan, en Alamagn, en em droe davet Geneva, davet kenunvaniezh ar Pobloù, en aner avat. Prantad an enkadenn-genwerzh-bed (1929-1933) a lakaas ar Fachistiezh da gavout dalc'hidi er c'hêriadennoù serbat ivez. An Denjentil alaman hag ar c'houer Serbat pinvidik a voe e bennskoazellerien eno. Iliz Katolik Eskopti Bydycin a reas he seizh gwellañ evit dedennañ ar yaouankiz Serbat diouzh ar Sokol.

Ar vuhez vroadel a gavas he displegañ e oberoù al lennegezh Serbat. Ra vo anvet amañ he skrivagnerien bouezusañ : Josef Nowak, Jan Skala ha Martin Nowak-Njehornski.

Josef Nowak a oa ur mailh war ar Serbeg, ken evel lirenneg, ken evel dramaour.

E-touez kelaouennerien ha barzhed, e skrivas Jan Skala, e 1924, ur marvailh « Stary Symko » (Symko kozh). Diskouez a ra stourm dic'hoanag kouerien ar brugeier ouzh ar c'hospital bras a lam diganto diazez o bezañs.

49

Splann-kenañ e tiskouezas Martin Nowak-Njehornski techoù digar diskar buhezegezh ha sevenadurel an Impalaerelezh. Diskouez a reas penaos e veze laeret o yezh c'henidik digant bugale Bro-Luzasia ha penaos e oa distrujet ar c'hultur pobl yac'h. En e zanevell « Der Storch der Herr der Frösche » (1929) e tiougane sujidigezh ar pobloù dre ar Fachistiezh alaman ha, dreist-holl, gwaskerezh strisoc'h-strisañ ar bobl serbat.

Goude aloubidigezh ar Gouarnamant gant ar Fachistiezh alaman, e voe, e miz Meurzh 1933, divodet ar gevredigezh-sport « Sokol ». Kelaouenn an « Domowina », « Serbske Nowiny », a gemeras, e sizhunioù kentañ ar renerezh nevez, un emzalc'h gortozet en e geñver. Goude ma oa bet difennet: ar gelaouenn evit ur sizhunvezh, e klaskas an « Domowina », dre dreuzvarc'hadoù, da c'hounit aotreadurioù evit kendalc'h al labour sevenadurel Serbat. Kerse a voe kavet gant an holl avat.

Diwriziennidigezh ar Serbeg a grogas gant harluidigezh ar skolaerien hag ar speredien e tachennoù alaman-rik. E 1937 e voe goulennet groñs digant an « Domowina » asantiñ gant ur reizhenn nevez a dremene Serbiz da « Alamaned Wendischek ». Ha, pa en em savas an « Domowina » a-enep, e voe divodet ar gevredigezh-mañ. Neuze e teraouas politik diwriziennidigezh elfennoù broadel Serbiz. Difennet-krenn e voe ar c'helaouennoù serbek. Kastizet a-daolioù bizhier e voe ar vugale a gomze serbeg er skolioù. Stourmerien vroadel emskiantek a voe taolet evit bloavezhioù e-barzh kreizenn-gampoù e-lec'h ma voe drouklazhet darn anezho.

Goude diwezh an eil vrezel-bed e teuas ar galloud en-dro gant an Nerzhioù gwerinel hag a grogas da sevel un Alamagn nevez.

Er Stad-nevez-mañ e teue ar mare evit Serbiz, goude kalz a gantvedoù hir, d' ober, en diwezh war-dro o yezh hag o sevenadur gant an hevelep gwirioù ha da lakaat o goulennoù-a-bell 'oa da zont da wir.

Ne oa ket ken aes-se tizhout ar pal-mañ avat. Dre ezhommoù arboellerezhel ar mare goude ar brezel, e oa deut da vezañ fall darempredoù ar maezioù hag ar c'hêrioù dre eskemm ar marc'hadourezhioù deut da vezañ rouez. Hag e Bro-Luzasia e oa gwashoc'h c'hoazh ar stad-traoù-mañ pa oa Alaman dreist-holl poblañs ar c'hêrioù ha Serbat hini ar maezioù.

50

Dav e oa neuze gounit war Serbiz evit diskouez dezho e oa bet kemeret ar galloud, goude diskar ar Fachistiezh, gant nerzhioù demokratik araokaus, hag a soñje e oa o dever ivez da ziwall buhez vroadel ar bobl serbat.

Ret e voe, dreist-holl, skoazellañ ar gouerien serbat da adsevel o zropelladoù chatal bet distrujet kement er stourmoù hir a-hed ar bloavezh 1945. Brizh-karerien-vro ha keneiled fall eus Tchec'hoslovakia, hag a soñje e tennfent o mad diouzh rannidigezh arboellerezhel Bro-Luzasia evit diwall o gounidoù dezho o-unan, a roas o ger da werzhañ chatal a-vern ha kalz traoù all, nemet komzoù goullto ne oant ken. Gouarnamant Stad-pobl Bro-Alamagn, er c'hontrol, a rae e seizh gwellañ evit reiñ ur skoazell c'halloudus. Lakaat a rae da ruilhal war-du Bro-Luzasia treuzporzhiadoù chatal diouzh tachennoù alaman nebeut tizhet gant ar brezel a-benn gwellaat pourvezidigezh annezidi ar c'hêrioù. Sevenidigezh ar muzulioù gwirion-se a lakaas kalz a Serbiz da dreiñ kein ouzh Tchec'hoslovakia. Elfennoù tchekat oberiant ha fall gomzoù a lakae en arvar, dre geleier diwir, evel hini disrannidigezh Bro-Luzasia diouzh an Alamagn gant lu Tchec'hoslovakia, an darempredoù mat, dare d' en em skoulmañ etre Germaniz ha Serbiz pa he doa ar boblañs alaman aon rak ul lakaat er-maez goude un unaniñ gant Tchec'hoslovakia.

Er bloavezhioù 1945-1946-1947 e voe kroget, ar muiañ posubl, gant al labour ret da reiñ o goulennoù da Serbiz.

Adalek 1945 e teuas en-dro da Vro-Luzasia ar skolaerien serbat bet rediet da vont da gelenn e tachennoù alamanek-rik ha kregiñ a rejont gant ar gelennadurezh serbek kentañ er rannvroioù divyezhek.

Kastell-kozh Radwor (Radibor) a voe lakaet etre daouarn ar skolaerien serbek a-benn stummañ mistri serbek nevez.

Kalz a skolaerien, bet dilec'hiet e mare ar Fachistiezh, ne oant ket mui evit kelenn hag en o lec'h e teuas Serbiz yaouank.

E meslestridigezh ar pastelloù-bro hag en hini ar c'humunioù e voe degemeret Serbiz araokaus o spered.

An « Domowina » a c'hellas sevel un ti-moulañ adarre.

E 1947, endev, e teue er-maez eus ar wask an « Nowa Doba » (Amzer Nevez), kelaouenn an « Domowina ».

An degouezhadennoù-mat-se davet palioù Serbiz, dindan ar stad-pobl alaman, ne chomjont ket hep levezon. Tamm-ha-tamm e teuas niver ar re a-du gant Gouarnamant Benes, e Tchec'hoslovakia, da vezañ izeloc'h-izelañ.

51

War diazez ar c'hemm-mañ e teue da vezañ ret ha gallus da startaat gwirioù ar boblañs serbat dre ul lezenn. Houmañ a voe degemeret gant Dieta pe Kuzul-meur Bro-Saks d' an 23vet a viz Meurzh 1948. Evit ar wech kentañ en Istor Bro-Alamagn e oa anavezet Serbiz gant ur stad alaman.

E rannbennad kentañ al lezenn e kinniger d' ar boblañs serbat gwarez al lezenn ha diwall ar stad (n' eo ket mui ar gouzañv hepken !) evit he yezh hag he sevenadur.

En eil rannbennad e roer da c'houzout ez eo savet skolioù serbek, skolioù kentañ hag all, evit ar vugale serbat a rank, avat, deskiñ an alamaneg war un dro enno.

En drede rannbennad e roer aotre d' ar pennadurezhioù ha d' ar melestradur d' ober gant ar serbeg en tachennoù alaman-serbek.

Pelloc'h e c'houlenn al lezenn digant ar boblañs serbat kemer perzh er mererezh diouzh he niver hag he nerzhioù.

Ouzhpenn ez eo savet e Budycin un ti-deskiñ-pobl staget ouzh Minister ar Gelennadurezh-pobl.

Da heul e c'helle niver ar skolioù kentañ kelennet enno ar serbeg bezañ kresket da vat. Da vugale ar vicherourien ha da re al labourerien-douar da c'hellout daremprediñ liseoù serbek e voe savet skolioù-diabarzhidi enno.

Labourioù-diniver a zlee bezañ sevenet a-benn kreñvaat ar serbeg ha n' en deus, da heul ar germanaat, nemeur a c'herioù teknik.

A-benn stummañ nerzhioù o klotañ ouzh savidigezh al labourioù-enklask war dachenn ar yezh, al lennegezh, an istor, hag ar werinoniezh e voe krouet, e skol-veur Leipzig, ur gador-gelenn evit ar « Sorbistik ».

Evezh bras a ranke bezañ taolet ouzh kelenn ar re vras ha n' o doa bet, en amzer dremenet, tu ebet da zeskiñ o yezh er skolioù. En abeg da se ez eo ur rann vras eus poblañs Bro-Luzasia divarrek da lenn he yezh. E skolioù a-ratozh e tesk an den serbat lenn ha skrivañ e yezh ha studiañ a ra darvoudoù istorel e vro.

Dasorc'hidigezh ar vuhez vroadel a levezon al lennegezh serbek da vat ivez. Ganet eo bet ur c'helc'h a skrivagnerien serbek, ma c'hellomp menegiñ amañ en o zouez : Jurig Brezan, gounezer ar priz broadel ; Martin Nowak-Njechorviski ; Richard Iselt ; Maria Kubas ; Anton Nawka.

An azginivelezh-herr-mañ ne dizh avat nemet an Uhel Luzasia. An Domowina n' helle astenn hec'h oberiantiz war an dachenn yezhel nemet ez-diaes en Izel Luzasia, pa oa bet douaret donoc'h enni an emskiant vroadel dindan ar germanaat Prusiat pounneroc'h. Kouiskoude e roas Stad Brandenburg an hevelep gwirioù hag e Bro-Saks, un tammig diwezhatoc'h avat.

52

Al labour mirout hag astenn ar Serbeg ne vez komprenet nemet gant un niver re vihan a dud evit c'hoazh, siwazh. Darvoudoù an dremenet o deus krouet un disfiziañs ha n' eo ket tost da steuziañ kuit. Peogwir e oa graet goap war an ober gant e yezh-c'henidik gwechall, e kred meur a dad c'hoazh ez eo gwelloc'h d' e vab chom hep studiañ ar Serbeg.

An displegadenn-mañ a ziskouez da Vreizhiz e c'heller gortoz gant spi un dazont gwelloc'h goude kantvedoù a reuz. Ra dizho Pobl Breizh un trec'h didorrus !

Istor lennegezh vrezhonek an amzer-vremañ

gant ABEOZEN

(Kendalc'h)

Daoust pegen diaes ez eo deut da vezañ buhez ar c'hazetennoù, gant ken berr eo deut ar paper, e veneged c'hoazh seiz kannadig miziek e brezhoneg penn-da-benn en eskopti Kemper ha Leon, e derou 1941. E Kendalc'h kentañ Kenvreuriez ar Brezoneg e Landerne, d' an deiz kentañ a viz Gwengolo 1943, ez eo bet lavaret e teu bep miz eus ar wask, en eskopti Kemper nemetken, 28.000 niverenn eus ar c'hazetennoù kristen e brezhoneg penn-da-benn.

N' heller kaout nemet doujañs evit ar strivadennoù pennek a zo ret evit kenderc'hel gant ur seurt labour en hon amzer drubuilhet-dreist.

IV. - AR C'HOARIVA

123) Un darn vras eus ar skridoù deut betek ennomp eus hol lennegezh kozh a zo anezho pezhioù-c'hoari, kar-tost peurliesañ da « visterioù » ha da « virakloù » ar Grenn-Amzer e Bro-C'hall. Un destenn relijiel a zo peurvuiañ d' ar pezhioù-c'hoari-se ha, daoust ma 'z eo, hogos bep tro, dianav deomp anv ar re o deus o savet, ne deo ket mont re-bell degemer ez oa en o mesk meur a veleg. Gouzout a reomp, da skouer, en doa savet an Aotrou Fiakr MEZANSTOURM, beleg e Lanhouarne er c'hwezekvet kantved, un **Distruj Jerusalem** ma 'z eus darnoù anezhañ e dornskrid geriadur an Tad Le PELLETIER, adkavet gant Fañch GOURVIL e levraoueg Kastell Keromnes, e 1924. A-hend-all, Iwan an DIBERDER, e FEIZ ha BREIZ Meurzh-Ebrel 1941, a gomz deomp a-zivout an Aotrou Laurañs ar RICHOU, beleg ha kure e parrez Plounez, oberour ur **Basion**, e 1678.

54

E Bro-Dreger dreist-holl hag e Bro-Wened eo en deus graet berzh hor c'hoariva kozh. Ur fazi a vefe, avat, krediñ, evel ma ra Anatol ar BRAZ, n' eus bet eus ar c'hoariva-se nag e Kernev nag e Leon. Loeiz ar GWENNEG en deus kavet, e paperoù kozh, meneg eus un abadenn c'hoariva e Lambaol-Wimilio, e miz Mezheven 1576. D' e veno zoken levezon c'hoariva ar Grenn-Amzer a zo anat war Galvar brudet Wimilio. N' eus abeg ebet da grediñ e ve bet rouez seurt abadennoù e Breizh-Iliz a bezh, daoust dezho da vezañ bet stankoc'h e rannoù 'zo eus ar vro. Diwar abegoù a zizurzh eo e teuas ar veleien hag ivez an dud e karg a-berzh ar Stad d' ober brezel da c'hoariva ar bobl. Hogen pa vo deut ar c'hoariva-se da vezañ toc'hor, pa ne vano mui anezhañ, koulz lavarout, nemet an dornskridoù dastumet, gant Fañch an UHEL ha reoù all, war hor maezioù, e welimp ar veleien o reiñ dezhañ ar vuhez nevez diouzh doare hon amzer.

* * *

124) An Aotrou Yann ROUDOT a voe ganet e Sant-Wazeg, e 1871, hag a varvas e Penharz e 1921. E labour evel skrivagner ne deo ket bet hepken sevel gwerzennoù. Kure e Laniliz e-pad trizek vloaz, en deus bet tro da ziskouez pegen donezonet-mat e oa evel kelaouenner, flemmus ha farsus war un dro, e « Courrier du Finistère » hag en e gannadig « Le Petit Semeur de Lannilis ». A-douesk e varzhonegoù gwellañ e c'heller menegiñ **An Anaon**, ma rae Jozeb LOTH ur vras a stad anezhañ. Savet en deus ivez pezhioù-c'hoari: **Marv Sant Tremeur, An Aotrou Tromenec'h** pe **Chapel an Absolvenn**, Brest, Straed ar C'hastell, 1911 ; **Salaun ar Foll**, *ibid.*, 1913. Graet en deus kement en deus gallet war dro an dud yaouank hag, evit reiñ dezho peadra da zisplegañ eo en deus savet ar pezhioù-c'hoari-se. Bez' en doa da anvioù-pluenn Mel-oc'h-Dir ha Telenn-Iliz.

Rak diwar o abostolerezh war dachenn ar skol hag an oberoù goude-skol eo

ez eo bet poulzet beleien Vreizh-Izel da bleidiñ gant ar c'hoariva. Un tammik strizh eo dremmwel an teatr-se. An testennoù relijiel hepmuiken a zo an niverusañ eveljust. Peurvuiañ ne sav ket e bezhioù-c'hoari d' ur bazenn uheloc'h eget an hini a vez tizhet gant ar pezhioù patronaj. Ar strolladoù c'hoarierien, anezho gwazed ha merc'hed, a zo rouez, ha buan e vez sellet outo a-gorn gant pennoù bras an dud a iliz. Diwar se e teu da goazhañ c'hoazh muic'h niver an testennoù a c'heller da zisplegañ war al leurenn. Daoust da se, c'hoariva ar patronajoù eo en deus dalc'het buhez pe, mar kirit, en deus silet ur vuhez nevez e gwazhied uzet Teatr ar Bobl e Breizh. Toc'hor edo an Teatr-se, e gwirionez, e dibenn ar c'hantved diwezhañ. Unan eus e abadennoù diwezhañ a voe hini Buhez Sant Gwenole, diskleriet e Plouian gant Strollad C'hoarierien lik ar vro da goulz krouidigezh, Kevredigezh Broadel Breiz, d' ar 14 a viz Eost 1898.

55

125) Evel ur respont d'an abadenn-se e roas an Aotrou BRIGNOU, pa lakaas Paotred Sant-Varzhin Montroulez da ziskleriañ, d' ar 15 a viz Genver 1899, **Ar Mab Prodig**, ur pezh-c'hoari e tri arvest savet gantañ. Ganet e 1834, d' an 21 a viz C'hwevrer, e Sant-Vazhe Montroulez, an Aotrou F. BRIGNOU a varvas person e Lanefred d' ar 24 a Vezheven 1900. Ur pezh-c'hoari all, **Jozef gwerzet gant e vreudeur**, a anavezet diwar e bluenn. FEIZ ha BREIZ, Du-Kerzu 1940, en deus moulet un oberennig gantañ, **Al Letrin bev**, adaozet diwar c'hallez GRESSET.

Ar patronajoù eta o deus dalc'het buhez en ur voaz a oa war-nes mervel. E 1905 e konted ez oa e Breizh-Izel 25 pe 30 strollad c'hoarierien. Ar re, avat, a zo bet, e derou ar c'hantved-mañ, ur skouer vat evit kalz re all en o goude a voe strollad Paotred Lesneven hag hini Sant-Varzhin Montroulez.

126) Evit strollad Lesneven eo e labouras an Aotrou Gwilhom HELIES. Ganet e voe e Bodiliz e 1861 ha mervel a eure, e 1941, en ospital Lesneven m'edo aluzenner abaoe 1900. War a gred d' an Aotrou PERROT, savet en deus an Aotrou Gwilhom HELIES 6 pe 7 pezh-c'hoari. Tri hepken a zo bet moulet : **Heritourien Biel al Liardoù**, Brest, 1909 ; **Bugale Jakob**, ibid., 1910 ; **Trubuilhoù Jean Hiroux**, ibid., 1910. Amprestiañ a rae moarvat danvez e bezhioù diwar ar galleg, hogen, adaozadur ar pezh kentañ da nebeutañ en deus graet berzh e brezhoneg ha lakaet an dud da c'hoarzhin o gwalc'h. Gallout a c'hellomp lakaat hon testeni e-keñver hini an Aotrou PERROT. Rak n' hon eus ket disoñjet un abadenn gant ar pezh-se e Sant-Nouga, evit Gouelioù ar Bleun-Brug, kent ar brezel all. Bez' hor boa eno ur c'hoariva buhez ennañ ha tizhout a rae ar pal ma skoe dezhañ : « Diwar c'hoari kelenn ».

127) An Aotrou Jozef BRELIVED a voe ganet e Lokorn d' ar 4 a viz Meurzh 1849. Ur wech beleget, ez eas e-pad 25 bloaz d' ar Stadoù Unanet hag eno e renas ur gazetenn vihan, The Child (Ar Bugel) e-pad 5 bloaz.

E 1900 e teuas an Aotrou BRELIVED da gure e Saint-Germain-l'Auxerrois, e Pariz. Skrivet en deus er VRO, er BOBL, er « Revue de la Bretagne ». E 1912, Gorsez Barzed Breiz Vihan a roas ur priz d' e ganaouenn vrudet, **O Breiz-Izel, o kaerañ bro**. E 1913, e krouas e Pariz ur strollad c'hoarierien evit diskleriañ pezhioù brezhonek. Marvet eo an Ao. BRELIVED, e Pariz, d' ar 5 a viz Ebrel 1918.

56

128) An Aotrou Yann-Vari JOANNO a voe ganet e Rostren d' an 12 a viz Gouere 1857. Beleget e 1882, e voe kure e Plouillo, person e Tregrom e 1896, e Plijidi e 1903, e Benac'h e 1917, chaloni a enor e 1927. Reiñ a reas e zilez e 1935 en abeg d' e yec'hed ha marvet eo e Rostren d'an 18 a viz Kerzu 1935.

Ur pezh-c'hoari savet gantañ, Santez Trifina, embannet gant Emglev Sant Iltud, Brest, 1925, a voe displeget er bloaz-se end-eeun e Bleun-Brug Gwengamp gant strollad c'hoarierien Benac'h. Menegiñ a c'heller c'hoazh gantañ ur pezh-c'hoari all e 3 arvest, Santez Jermana, embannet e Ti-Moulerezh Sant-Gwilherm, Sant-Brieg, 1912.

129) An Aotrou KOHELEAC'H, ganet e Sarzhav e 1854, a zo bet person Gwenen. Dindan an anv-pluenn Kelen Glas en deus embannet e DIHUNAMB kanaouennoù,

rimadelloù farsus ha pezhioù-c'hoari. Menegiñ a c'hellomp **Kolaz ; En Deu Jiboésour ; Jozeb guerhet get e vréder**, An Oriant, DIHUNAMB, 1911 ; an hini kentañ dreist-holl en deus graet berzh. Marvet eo an Aotrou KOHELEAC'H e 1928.

130) Degouezhout a reomp bremañ gant anv brudetañ ar c'hoariva sujet da levezon ar veleien, Job er BAYON, a sinas alies e oberoù Job er Glean. Ganet e Pleuigner d' an 11 a viz Ebrel 1876, eñ eo en deus savet ha kaset en dro Teatr Poblel Brezhonek Santez-Anna Wened. Niverus eo e oberoù, pezhioù-c'hoari hag ivez kanaouennoù savet evit ar c'hoariva-se. Skignet int war ar steudad bloavezhioù etre 1902 ha 1926, gant un arzav e-pad brezel 1914-18 hag ar bloavezhioù da c'houde. Neuze a renas an Aotrou Job et BAYON buhez un aluzenner baleer-bro, o vont eus Saloniki da draonienn ar Roen, eus Bro-Silesia da Vourmania, evit distreiñ da Vreizh war-dro 1923. Marvet eo d' ar 27 a viz Gwengolo 1935.

Kar eo e oberoù da visterioù ar Grenn-Amzer hag ivez d' ar gomeidienn gant etrec'hoarioù kan ha koroll. Bez' ez eus anezho trajediennoù hag ouzhpenn un niver mat a bezhioù-c'hoari farsus, evel ma c'helled bezañ en gortoz a-berzh un den a sav c'hoarioù evit ar bobl.

57

Ar roll eus e oberoù, embannet gant GWALARN, Nn 140-3, 1941, a zo ennañ pemp anv war-nugent. Ne zibunimp ket ar roll penn-da-benn. Sed amañ ar re anavezetañ eus e bezhioù : **En Eutru Keriolet**, 3 arvest e gwerzennoù, Gwened, Lafolye, 1902 ; **Jozon el Lagouter**, 2 arvest e gwerzennoù, ibid., 1904 ; **Salaün er Foll**, 1904 ; **Sudarded Sant Korneli**, 1 arvest e gwerzennoù, Gwened, Lafolye, 1906 ; **Nikolazig**, 5 arvest e gwerzennoù, Roazhon, Simon, 1909 ; **Boeh er Goed** (Mouezh ar Gwad), Montroulez, Le Goaziou, 1912 ; an daou vister-se, moarvat, a zo ar re wellañ a-douesk holl oberoù Job er Glean. Menegomp c'hoazh **Ar en hent de Vetleem**, Gwened, Lafolye, 1912 ; **Ar hent en Hadour**, mister e 10 lodenn, Gwened, ibid., 1913 ; **Noluen**, 4 arvest e gwerzennoù, An Oriant, Cathrine, 1924 ; **Kado, Roué er Mor**, 3 arvest e gwerzennoù, sonerezh gant Dom HERVE, Gwened, Maheo, 1924 ; **Sant Izidor, labourer**, Gwened, ibid., 1925 ; **Goneri, Sudard breton**, 1927.

E-touesk e bezhioù farsus, peurvuiañ bev-buhezek, e kavomp **En Ozegañned** (Ar Gornandoned), 1 arvest gant sonerezh, Roazhon, Simon, 1905 ; **Er Hemener**, 1 arvest, sonerezh gant Th. DECKER, Roazhon, Simon, 1908 ; **Troieù kam Barnabé**, An Oriant, Le Bayon, 1911 ; **Fosfatinn er vateh fin**, 1 arvest, Gwened, Maheo, 1924.

Savet en deus ivez Job er Glean oberoù diouto o-unan evel **Le Mensonge de Corentin Lamour**, un drama ma reer ennañ gant ar galleg hag ar brezhoneg, hervez an dud a zo war al leuren. Ur pezhig-c'hoari all, **La Bosse Enchantée**, a zo ivez hanter-c'hallek, hanter-vrezhonek.

Diaes lavarout a-grenn peseurt talvoudegezh a zo d' ar c'hoariva-se. N' emañ ket e galloud n' eus forzh piv ober kenkoulz hag **Athalie**, mestr-oberenn an teatr relijiel. An Aotrou Job er BAYON, daoust ma n' oa ket n' eus forzh piv, a zo bet ouzhpenn hualet gant diaesterioù na zeuent ket eus ar c'hoariva end-eeun. Aes merzout kement-se pa lakaer keñver-ha-keñver **Nikolazig**, savet e 1909, ha **Goneri**, savet e 1927, ar pezh diwezhañ o plegañ re en holl da venozioù n' o deus tra da welout gant arz ar c'hoariva. E **Nikolazig** en enep en deus lakaet an oberour e holl ijin da daolenniñ dimp kavidigezh skeudenn Santez Anna Wened. Gant ar mister-se, relijiel hep muiken, eo ez a ar maout war dachenn al lennegezh.

Evit kement a sell ouzh buhez an arvest, en deus gouezet an Aotrou Job er BAYON ober e vad eus an dudi degaset gant ar sonerezh. Peurvuiañ eo digant Th. DECKER en deus goulennet al lodenn-se eus al labour. Ur soñj plijet meurbet hon eus dalc'het eus abadennoù evel re Mouezh ar Gwad, e Kastell-Paol, e 1920, ha Kado, Roué er Mor, e Kemper, e 1925, en abeg da se.

E-leizh eus pezhioù-c'hoari an Aotrou Job er BAYON a zo bet lakaet e brezhoneg Leon gant an Aotrou PERROT. Un hinienn bennak ivez gant Aotrounez Yann-Vari ar GALL ha KARDALIAGED.

131) Anv an Aotrou Yann-Vari PERROT a zo da lakaat e-kichen hini an Aotrou Job er BAYON. Lakaet en deus e brezhoneg Leon da nebeutañ pemp eus pezhioù-c'hoari ar Gwenedour evit strolladoù c'hoarierien Sant-Nouga ha Plougernev.

An Aotrou Yann-Vari PERROT a voe ganet e Plouarzel d' an 3 a viz Gwengolo 1877. Bet eo kure e Sant-Nouga e 1904 p' edo person eno an Aotrou KARDINAL.

FEIZ ha BREIZ, deut adarre d' ar vuhez evel kelaouenn daouviziek abaoe 1899, a oa renet d' an ampoent gant an Aotrou NORMAND, person Ploneiz. Goude marv hemañ an Aotrou Yann-Vari ar GALL, neuze person er Folgoad, a gemero e lec'h d' an 12 a viz Genver 1905. Pa c'houlennno diwar re labour ma vo lakaet un all en e lec'h e penn ar gelaouenn, person Sant-Nouga eo a zeuio da rener eus 1907 betek 1911. Gante e teu FEIZ ha BREIZ da vezañ miziek.

D' ar 7 a viz Meurzh 1905 e voe krouet da vat Bleun-Brug a raio kement a verz dindan lusk gredus an Aotrou PERROT e Bro-Leon da gentañ hag e Breizh-Izel a-bezh da c'houde. P' edo an Aotrou PERROT kure e Sant-Nouga e veze lidet ar gouelioù peurluviañ war-dro tachenn veurdezus Kastell Keryann. Eno eo e voe displeget evit ar wech kentañ **Alanig Al Louarn**, pezh-c'hoari plijadurus e daou arvest, anezhañ un adaozadur eus « L'Avocat Pathelin ».

Roll pezhioù-c'hoari an Aotrou Yann-Vari PERROT, hervez ar gelaouenn GWALARN, Nn 140-143, a zo anezhañ pevar anv war-nugent. An darn vrasañ anezho a zo adskrivet diwar ar gwenedeg, ar c'hembraeg, pe adaozet diwar ar galleg. **An Aotrou Kerlaban**, da skouer, a zo un adaozadur eus **Monsieur de Pourceaugnac** gant MOLIERE. **Nonig, ar Filouter Fin**, e 1911, a zo kemeret eus an hevelep skrivagner. **Salaün ar Foll, Mouezh ar Gwad, Nikolazig, Ar Gornandoned, Fosfatin, ar Vatezh Fin** a za adskrivadurioù eus pezhioù er BAYON. **Un Nozvezhiad Rev Gwenn**, 1928 ; **An Divroad, Ar Re C'hlan a Galon, Ar Vamm** a zo troet diwar ar c'hembraeg. **Roue ar Bed a-bezh** a zo aozet diwar saozneg Lady GREGORY. **Yann Landevenneg**, 1924, a zo bet lakaet e brezhoneg diwar c'halleg an Aotrou KORNOU ; **Un Abardaez e Kervarzin** diwar c'halleg Gweltas (KOROLLER) ; **War Roudou Hon Tadoù** diwar c'halleg C. DANIO, merc'h Eujen KOROLLER. **Ar Gasoni**, lakaet e brezhoneg Gwened gant an Aotrou Jak er MARICHAL, a zo bet adskrivet e brezhoneg Leon gant an Aotrou PERROT.

Diwar un danvez dezhañ e-unan, avat, en deus tennet **Dragon Sant Paol**, e 1907 ha pezhioù-c'hoari farsus evel **Ar Melen hag ar Gwenn** hag **Ar Blogorn**.

59

E oberiantiz war dachenn ar c'hoariva ne dle ket hol lakaat da zisoñjal en deus an Aotrou Yann-Vari PERROT, savet ur pikol levr **Buhez ar Sent**, 900 pajenn ennañ, embannet e ti ar Gwaziou, Montroulez, e 1910.

Rener FEIZ ha BREIZ abaoe 1911, buhez Yann-Vari PERROT a zo stag dalc'hmat ouzh e gelaouenn garet hag ouzh gouelioù ar Bleun-Brug. Beleg gredus, prezeger entanet e galon ouzh e feiz hag ouzh e vro, kenderc'hel a raio gant e stourm kalonek, pa vo kure e Plougernev evel pa vo kaset da berson e Skrignag, e lec'h m'eo bet lazhet d' an 12 a viz Kerzu 1943, hep mar ebet en abeg d'an div garantez a renas e vuhez, Doue hag ar Vro.

Bepred en deus bet an Aotrou PERROT ar brasañ doujañs evit e yezh. Skrivañ a rae ur brezhoneg yac'h, pinvidik-tre ha digemmesk e c'herioù hag e droioù-lavar, un drugar e lenn hag e glevout.

132) An Aotrou Jozeb-Mari en ARBOULED a voe ganet e Lannig-Larmor, en Pleheneg, Bro-Wened, d' ar 6 a Vae 1884. E vloavezhioù-skol a dremenas e skol Santez-Barba er Faoued hag e skolaj Sant-Frañsez-Zavier e Gwened, kent mont d' ar C'hloerdi Bras. Beleg e 1910, ez eas da vestr-skol ha da c'houde da rener skol libr Baod.

Gounezet e oa d' ar menozioù breizhek adal ar Faoued. Skrivañ a eure da gentañ. er VRO dindan an anv-pluenn Job en Drouz-Vor. Bez' ez eo ivez eus kenlabourerien DIHUNAMB ha poaniet en deus dreist-holl war dro ar c'hoariva. Ur

strollad c'hoarierien en deus bodet en e vro c'henidik hag evitañ en deus savet pezhioù-c'hoari niveruzik : **En Tri Kansort**, c'hoari farsus, DIHUNAMB, 1907 ; **Ki ha Kah**, c'hoari souezhus gant tonioù, savet evit ar vugale, DIHUNAMB, 1912 ; **Er Mesi**, c'hoari souezhus e gwerzennoù, e div lodenn, gant tonioù, DIHUNAMB, 1912 ; **Mab er Brezelour**, c'hoari souezhus, e gwerzennoù gant tonioù, e teir lodenn, DIHUNAMB, 1914 ; **Aveit Doué hag er Vro**, c'hoari souezhus e teir lodenn, gant tonioù, DIHUNAMB, 1914 ; advoulet gant ar Vuhez Kristen, 1935 ; div farsadenn verr : **Mab er Gleuaér**, **Er Filajerion**, DIHUNAMB, 1936.

133) Pevar a ARBOULEDED a zo e-touesk skrivagnerien Bro-Wened. Meneget hon eus endeo an Tad ARBOULED, oberour **Guerzenneu eid ol er Blai**, 1856. Oberour an drama e tri arvest **Sant Loeiz Prizoner**, embannet gant Lafolye, Gwened, 1901, a zo an Aotrou Jozeb en ARBOULED ganet e Pleheneg, e 1865. An Tad Jak en ARBOULED ganet e Pleheneg ivez, d' an 21 a viz Here 1846 ha marvet d' an 3 a viz Ebrel 1910, a zo oberour levrioù a zevosion : **Buhé Hun Salver Jesus-Krist**, e 1904 ; **Buhé ha Mistérieu er Huerhiéz Glorius Vari**, e 1907 ; **Buhé er Sent eit pep dé ag er Blé**, e div levrenn ; **Hent er Santeleh**, hervez RODRIGUEZ, e 1909.

60

134) An Aotrou KADOU, ganet e Noal-Pondivi e 1878 ha person Kroezañveg, en deus savet daou bezh-c'hoari : **Jezuz de zeuzek vlé**, trajeris é tér lodenn, DIHUNAMB, 1917 ; **Sant Goneri**, trajeris é tér lodenn, DIHUNAMB, 1933. Embannet en deus ivez a-hend-all pezhioù barzhoniezh e DIHUNAMB.

Rak, evel d' ar c'hoariva end-eeun, ar patronajoù o deus daskoret ur vuhez nevez d' ar c'hanaouennoù. Lavaret e vez alies ez eo aet da get ar ganaouenn-pobl e Breizh-Izel. Reishoc'h e ve lavarout he deus kemmet buhez. Eus levr ar foar pe ar pardon he deus dilojet d' al leurenn-c'hoari ha netra ken. Niverus ar veleien o deus savet kanaouennoù a bep seurt evit o strolladoù tud yaouank. An Aotrou Job er BAYON, da skouer, a zo bet ur mailh da sevel kanaouennoù. Menegomp hepken **Amzer er Heneu** (Amzer ar C'hraoñ-kelvez). Moulet eo bet ar c'hanaouennoù-se, e Bro-Wened, war DIHUNAMB dreist-holl, e Bro-Leon, war FEIZ ha BREIZ hag en he dastumadoù, **Kanaouennoù Feiz ha Breiz**, alies ivez war follennoù distag. Sed amañ ar re vrudet an e-touesk ar saverien kanaouennoù n' int ket bet meneget betek-hen.

135) An Aotrou Aogust KONK, Paotr Treoure, en deus graet e seizh gwellañ evit lakaat da c'hauiat ar vrud ne blij ket da Leoniz Kanañ. Ma vije bet embannet dastumad Pengwern ne vije ket bet moarvat eus ar vrud-se. Ganet eo an Aotrou KONK d' ar 16 a viz Here 1874 e kêriadenn Treoure, e Plougin. Mont a reas war e studi da skolaj Lesneven. Abred e tiskouezas bezañ donezonet evit ar sonerezh. Beleget e voe e 1898. Kure eo bet e Kastell, person e Lokenole hag, abaoe 1930, emañ person e Plouneour-Trez. Embannet en deus ul levrig, **Barzaz ha Sonioù**, « Presse Libérale », Brest, 1935. E-leizh eus e ganaouennoù, moulet ivez e FEIZ ha BREIZ hag en he dastumadoù, a zo brudet e Bro-Leon penn-da-benn hag o c'hlevout a reer kanet, koulz lavarout e pep gouel. Marvet eo an Ao. KONK e miz Kerzu 1952.

61

136) An Aotrou Jak er MARICHAL, Blei-Lann-Vauz, ganet e Moustoer-Logunec'h, e 1878, ha kure en Iliz-Veur Gwened, a zo anavezet dreist-holl dre e ganaouenn hollvrudet **Kousk Breizh-Izel**. Aes a-walc'h eaeafe an oberennig-se disoñjal en deus savet, hep menegiñ e gantikoù, kanaouennoù all kenkoulz pe welloc'h eget hounnezh : **Alhué en Eurusted**, **Kroez er Sudard** hag an holl ganaouennoù all strollet en **Ereden e Bro-Gwened**, sonerezh gant an Aotrou DANTEG, ha bet kanet ken brav, er c'hendalc'hioù breizhek gant laz-kanañ Sant-Yec'han-Brevele.

Savet en deus a-hend-all Blei-Lann-Vauz un danevell, **Jobig er Soñner** ; ur flemgan, **E ma er Simbol get er Person** ; barzhonegoù, **Keltia**, **er Soñner**, **er Beleg**, **er Labourer**, embannet e DIHUNAMB, KROAZ ar VRETONEG, ar VRO hag all.

Lakaet en deus ivez e brezhoneg Gwened drama an Aotrou KORVEN, **Er Has**, gwisket dezhañ da c'houde brezhoneg Leon gant an Aotrou PERROT, **Ar Gasoni**.

137) An Aotrou er STRAD, eus e anv-pluenn **Stevan Kerhoret**, ganet e Pluniav e 1865, person Ploue, en deus savet kantikoù, hogen ivez kanaouennoù embannet e DIHUNAMB. E **Bleunioù Breiz-Izel**, 1902, p. 192, e kaver daou bezh gantañ : **Penaus gobér eit choej ur pried** hag **En amzer a groédur e Breih**.

138) An Aotrou OLIEREU, ganet e Lokmariaker e 1856, aluzenner en Alre, en deus embannet pezhioù barzhoniezh niverus e DIHUNAMB. Dindan e anv-pluenn Golvannig, e kaver daou varzhoneg gantañ e **Bleunioù Breiz-Izel**, 1902, p. 214, **Pérag é kannan-mé** hag **En hani e garan**.

(Da genderc'hel.)

YEZHOU HA LENNEGEZHIOU

gant Roparz HEMON

A drugarez da Abeozen ha da Youenn Olier hon eus, en diwezh, skridoù sirius diwar-benn hol lennegezh. Labour Abeozen, « Istor Lennegezh vrezhonek an Amzer-vremañ », a vez embannet a dammoù war « Al Liamm », a vo moulet, spi am eus, e stumm ul levr. Un diazez hag ur stern e vo d' ar furchadennoù er bloavezhioù da zont. Diskouez a ra d' ar vrezhonegerien, dreist-holl d' ar re yaouank, ez eus bet tud e-leizh o poaniañ war dachenn ar yezh, skrivagnerien dister marteze, hogen skrivagnerien atav. Youenn Olier, diouzh e du, en deus choukataet karg ar skridvarnour, a glask dizoleiñ ar ster don en oberoù an deiz-mañ, arvestet a-hiniannoù pe a-stroll. Ur gefridi diaes hag arvarus, hogen ur gefridi ret. Ar skridvarnouriezh, zoken pa ne blij ket, a zo ur broud d' ar skrivagner. Gwelloc'h eget ar veuleudi a vez roet alies dreist penn-biz, - « dudius, talvoudus, dispar », - ha mil gwech gwelloc'h eget an dilavar.

Salv e ve kavet ivez tud da studiañ ha da vurutellañ hol lennegezh er marevezh etre ar pemzekvet kantved ha dibenn an triwec'hvet. Al labourioù embannet e galleg, evel « Ar C'hoariva keltiek », gant A. Ar Braz, ne dint nemet farserezh. Neuze e vo bet dastumet danvez un « Istor al Lennegezh vrezhonek », da lakaat e-kichen istorioù al lennegezhioù savet eyezhoù all.

Petra, avat, eo sevel istor lennegezh ur yezh ? N' eo ket hepken ober ur roll oberoù ha skrivagnerien, na displegañ doareoù pep oberenn ha kontañ buhez pep skrivagner. Bez' ez eo ivez lakaat a-wel an darempred etre an oberoù, etre ar skrivagnerien, al liammoù a bep seurt etre al lennegezh hag ar vuhez, diskouez penaos eo stag tonkadur ur bobl ouzh tonkadur he lennegezh.

An tamall bras a vez graet d' hol lennegezh eo bezañ bet levezonet gant al lennegezh c'hall. Kalz a boan a zo bet lakaet, da skouer, da ziskouez ne oa hor misterioù nemet un adsked eus misterioù gallek. Tro-spered ar vurutellerien e diwezh an naontekvet kantved hag e derou an ugentvet oa kemer an dibarelezh evel unan eus perzhioù gwellañ, marteze gwellañ perzh ur skrivagner. Pezh a brizent en ur skrid eo bezañ disheñvel diouzh ar skridoù all.

63

Se oa goulenn digant ar Vretoned un ijin dreist, na gaver e bro ebet, e Bro-C'hall nebeutoc'h c'hoazh eget er broioù all. Al lennegezh, evel an arz, ar gizioù, ar c'hredennoù, a zo bet etrevroadel a-viskoazh. Tachenn ur stumm lennegel n' eo ket ur vro peurliesañ, hogen ur c'helc'h sevenadur, evel kelc'h sevenadur ar C'hornog, pe an Islam, pe ar Reter Pellañ, gant darempredoù, war ar marc'had, ha kenlevezonoù etre ar c'helc'hioù. Awen hiniennel ar skrivagner a c'hell bezañ kreñv, hogen ar skrivagner, ha pa ve un oristal a zen, a bleg da nerzhioù kreñvoc'h eget e awen, hag an nerzhioù-se, e-giz an avel, a ya dreist bevennoù e vro.

Evit ar misterioù, n' int ket un dra c'hall drevezet gant ar Vretoned. (Gwan-meurbet, a-hend-all, pa seller outo a-dost, ar prouennoù dastumet gant A. Ar Braz da ziskouez ne oa hor misterioù nemet damdroidigezhioù diouzh ar galleg.) Ar misterioù a zo un doare c'hoariva relijiel skignet er C'hornog a-bezh er Grennamzer ha chomet bev e kornioù 'zo betek an deiz-mañ. Ar yezh hag un nebeut munudoù a ro dezho al liv broadel, hogen an andonioù hag ar stumm a zo etrevroadel. Fentus ar rebech graet d'hor misterioù brezhonek bezañ divroadel peurliesañ o danvez, e-lec'h tremen holl e Breizh, ha displegañ holl buhezioù sent hor bro. Eus an trajediennoù klasel gallek; pet a ziskouez darvoudoù tremenet e Bro C'hall ?

Da ober istor ul lennegezh e ranker lakaat pep stumm, - marvailhoù-pobl, kanaouennoù-pobl, barzhonegoù, skridoù komz-plaen, c'hoariva, - er stern

etrevroadel. Hol lennegezh, eus ar pemzekvet d' an naontekvet kantved, a zo heñvel ouzh re ar broioù bet estrenyezhekaet o renkadoù uhelañ, Okitania, Iwerzhon pe Flandrez. Hol lennegezh en ugentvet kantved a zo heñvel ivez ouzh re ar broioù bihan, enno strolladoùigoù brogarourien pe yezhkarourien o stourm da c'hounit ur bobl tost estrenyezhekaet, Okitania hag Iwerzhon adarre, Kembre, Katalonia, Bro-Friz, ha re all. Pezh a glask ar skrivagnerien, n' eo ket heuliañ henstummoù broadel n' eus ket anezho, na krouiñ stummoù broadel, hogen lakaat da dremen en o yezh stummoù etrevroadel evel ar c'hontadennoù berr, ar romantoù-polis, ar barzhonegoù hep ment strizh.

O komz eus barzhonegoù, istor hor gwerzaouriezh a rofe ur skouer splann eus ar pezh a lavaran : eus ar pemzekvet kantved betek dibenn ar seitekvet, e raed gant klotennoù-diabarzh ; er seitekvet kantved e vez dilezet ar re-se tamm-ha-tamm, ha ne reer mui en triwec'hvet hag en naontekvet kantved nemet gant klotennoù-dibenn ; en ugentvet kantved e teu ar c'hiz, tamm-ha-tamm ivez, da arnodiñ doareoù gwerziñ disheñvel, dreist-holl da implij ar werzenn dieub, hep ment na klotennoù resis.

64

N' eus netra breizhek, netra broadel amañ. Ar c'hlotennoù-diabarzh a dra sur, a gredomp alies ez int keltiek, dre m' o c'haver e kembraeg evel e brezhoneg. Hogen o c'havout a reer e yezhoù all. Darn a lavar ez int latin (darn zoken arabek !). E gwirionez, ne vern pelec'h e vo dizoloet o orin, etrevroadel int bet er Grennamzer. Ar c'hiz d' ober gant klotennoù-dibenn hepken a zo deuet da Vreizh dre hent Bro-C'hall, hep arvar ebet. Hogen gallek n'int ket. Implijet oant bet e latin - an Iliz hag e yezhoù all. Barzhoniezh ar C'hornog a zo bet en holl vroioù o klask en em zishualañ diouzh reolennoù re strizh. Ha gwerzenn dieub hon amzer n'eo nemet ar bazenn diwezhañ er striv-se.

Petra a zo broadel en ul lennegezh, ouzhpenn ar yezh ? Temz-spered ar bobl, hec'h ijin da ober he mad eus stummoù-arz degouezhet eus an diavaez. Munudoù hepken alies.

N' eo ket an elfennoù broadel-se a ra talvoudegezh ul lennegezh, hag int plijus da studiañ koulskoude. Ampartiz ar skrivagnerien eo a dalv ar muiañ. Ul lennegezh vat a zo an hini a gaver enni oberoù skrivagnerien vat. Ar skridvarnerien, an istorourien, goude o holl furchadennoù, o holl geñveriadennnoù, o holl ziskleriadennnoù, a chom c'hoazh dirazo an diaesañ kudenn : lakaat a-wel pezh a zo mat, dreist d' an andonioù, d' al levezonoù, d' ar stummoù, d' an danvez, d' ar vroadelezh pe d'an etrevroadelezh. Eno e c'hwitont peurliesañ. Al lenner a rank mont d' an oberenn. Teñzor an hini a oar ar yezh, setu petra eo ul lennegezh en diwezh.

Iwerzhon hiziv an deiz

gant HEUSSAFF

Er gelaouenn saoz « Spectator » ez eus bet embannet (20-4-56) ur rummad pennadoù anvet « Iwerzhon hiziv an deiz ». Aozet e oant gant un dousennad Iwerzhoniz, holl peuz yaouank (war-dro tregont vloaz) ha peuz dianav betek-hen : ma c'heller lavarout ez eus aze un taolennadur hervez ur remziad tud ha n' o doa ket mouezhiet c'hoazh o meno.

Peseurt arvest a welont en Iwerzhon ?

Ur vroad sioul dindan veli ar rumm etre, gant nebeut a gudennoù nemet en arboellerezh : ha d' ar re-mañ n' eus koulz lavaret dirouestl ebet.

Frankiz Iwerzhon ? Diskouezet eo bet e oa tra wir, pa 'z eo chomet ar vro neptu e-pad ar brezel diwezhañ, ha diskleriet ur Republik e 1948. Unvanidigezh Iwerzhon ? Ar gudenn-mañ ne c'hell bout diskoulmet nemet er feur ma tostay an div stad an eil ouzh eben gant an amzer. Un nebeut tud yaouank a gav difluk d' o c'harantez-vro dre oberiañ e kevredigezhioù kuzh. (Kondaonet int bet gant an eskibien, hag e seblantont bezañ abafaet.)

Advevañ an iwerzhoneg ? N' eus ket kalz tregaset gant ar mennad-se. Koulskoude, galloud a zo atav d' ar stourmerien evit ar yezh. N' eus ket bet meur a hini da gredout klask abeg er c'helennadur Sinn Fein a ro ur ster gouezelek da istor Iwerzhon. Ar re o deus klasket a zo chomet o fri war ar gloued. (Met an darn vrasañ a zo laosk pe diseblant.)

Ha penaos emañ kont gant al lennegezh saoz-iwerzhonat a reas kement a verzh (etrevroadel) gant skrivagnerien evel Yeats ha Synge ? Emañ bremañ en gwall stuz. Nebeut a dra a dalfe ar boan bout embannet. C'hoariva an Abati a zo aet war ziskar.

Kudennoù politikel ? War washaat ez a an disranniezh etre Katoliked ha Protestanted, ha bez' e kinnig kreskiñ ivez, e-touez ar Gatoliked, etre ar veleien hag an dud lik.

Evit petra e tellez Iwerzhoniz meuleudioù ? Evit an ijinerezhioù nevez o deus diazezet, evit bout diskouezet e oant barrek da gemer o lec'h er bed a-vremañ, gant kevredigezhioù evel Kevrennad an Tredan, Kevrennad an Taouarc'h, hag Aer Lingus. Met an diouer a gailhoù-metal, dietervez ar marc'had en diabarzh, an diouer a gapital hag enebiezh an unvaniezhoù-micherourien pa vez anv a zeskiñ micherioù d' ar rummadoù yaouank (nec'h ar re gozh rak kevezerion !), setu skoilhoù bras-meurbet a vir ouzh an ijinerezh da greskiñ evel ma tlefe.

66

Ar gudenn washañ en arboellerezh : morzadur al labour-douar. N' eo ket bet gwellaet an ampledoù abaoe 50 vloaz. Unan bennak a erbed ma vo kevredet labour-douar Breizh-Veur gant hini Iwerzhon. « Ra bresto ar Saozon darn eus an arc'hant, a fiziont el labour-douar, war-eeun da Iwerzhon ! » Kreskiñ a ray ampledoù ar vro-mañ, hag a werzh hec'h eostoù hag he chatal da Vreizh-Veur peurgetket. Ne c'houlenner ket ha gouest e vefe ar bolitikerien en div vro da zigeriñ an hent nevez-se.

Eveljust, hini ebet eus an daouzek kenskriver ne « ra politikerezh ». Ne weler ket kaer penaos e vije roet degemer dezho e-barzh hini pe hini eus ar c'hostezennoù politikel a zo er vro. N' eus netra estlammus na gwall-zispac'hus en o menoioù, met diaes e vije kavout er c'hostezennoù politikel daouzek den en

o oad gouest da lavarout kemend-all eus o fenn o-unan. Gwad nevez er politikerezh : setu marteze ar pezh a ra diouer ar muiañ en Iwerzhon hiziv an deiz.

Setu ar pezh zo bet embannet gant « Spectator », diverret. Da skeudennaouañ tro-spered ar bolitikerien e c'heller menegiñ un dilennadeg e Kerri n' eus ket pell. Ar c'hannad a-raok, un ezel eus Clann na Poblachta, a oa marvet. Setu ma voe dibabet e verc'h, ur plac'h yaouank a 25 vloaz, da zavez-kannad gant ar gostezenn-se, hag e voe goulennet ouzh an dilennerien reiñ o mouezh dezhi « evit dougen bri da eñvor he zad ». Ar plac'h a voe trec'h. An dra-se a vez graet gant ar c'hostezennoù all kenkoulz. E-lec'h kinnig da zavez-kannad un den yaouank barrek war dachennoù ar mererezh-stad e konter war « an azeulerezh tud-veur (!) » evit mirout pe c'honit ar muianiver er Gambr.

Ouzhpenn ur bempvedenn eus an Dail a zo anezhi kannaded dibabet evelse a-berzh o zud-nes, ha neket abalamour d' o galloudezhioù personel. Emañ Iwerzhon o treiñ da z-«Demokrasi» dre Herelezh. Piv zo da gareziñ ? Daoust ha n' eo ket deut ar bobl da gaout poell a-walc'h ? Renerien ar strolladoù eo ar re giriek. Gwazh a se evit o c'hostezenn, ma ne chom mui anezhi nemet ur vandennad didalvez. Met o kenderc'hel evel ma reont, o stankañ an hent d' an dud yaouank barrek, e vougont galvidigezh politikel ar re-mañ hag e tinerzhont ar vroad. Ur barad n' eo ken. Unan eus kannaded Fianna Fail, dizalc'h gwechall, met deut d' ar strollad-mañ abalamour ma krede e c'hellfe oberiañ en un doare efedusoc'h, en deus ranket anzav : « e-barzh hor strolladoù eo arabat deoc'h klask pleustriñ gant kudennoù difraeüsañ ar vro, ha kinnig diskoummadennoù nevez. Ret eo deoc'h tevel gant aon na gollfe ar strollad mouezhioù ».

AL LEVRIOU

BEN GOURION OF ISRAEL, gant Barnet LITVINOFF

embannet gant Weidenfeld and Nicolson, London. - Priz 18 shilling

Anzav a ran na skuizhan ket o lenn levrioù diwar-benn Israhel : setu aze ur bobl, kouezhet, kalz izeloc'h egedomp, he deus gouezet adsevel e ken nebeut amzer ma ranker chom bamet. Kentelioù hon eus da gemer, a-vil-vern, gant ar bobl-se ha gant he renerien.

Ben Gourion a zo bet ganet e 1886 e Plonsk, en unan eus ar c'hêrioù reter-europat o deus pourchaset d' an emsav yuzeviat e speredoù gwellañ. E dad, Avigdor Green, a oa ur Zionist eus ar rummad kentañ hag ar mab, o tegemer menozioù e dad, a gasas anezho betek ar penn pellañ dre vont kerkent hag echu e studioù, da labourat douar e bro e hendadoù, Palestina. Sosialist eus ar re wellañ, atav en deus kredet en adsavidigezh an den dre al labour-douar graet a-gevret ha pa zibabo, e Kerzu 1953, kuitaat ar politikerezh hag e gargoù er gouarnamant, ez eo d'ur c'hibboutz e fello dezhañ repuiñ, e-touez ar gouerien-soudarded o deus roet da Israhel he dremm dezhi hec'h-unan.

Prizañ labour Ben Gourion a zo un dra diaes : d' ar mareoù enkreuz evit Israhel en deus bet jestroù istorel. E derou holl an annezadur e Palestina, pa felle d'an darn vuiañ degemer ar yddisch da yezh voutin an « oaled » nevez ha mirout an hebreeg da yezh sakr, en deus gouezet lakaat an hebreeg da drec'hiñ hag en hebreeg en deus skrivet ar gelaouenn gentañ savet biskoazh er vro gant ar yuzevien. An eil dra a verk e vuhez eo bezañ embannet, d' ar 14 a viz Mae 1948, a-enep da ali Chaim Weizmann ha kalz re all, frankiz Israhel, d' ar vunutenn end-eeun ma echue mandad ar Saozon war ar vro ha d'ar mare ma kemere an armeadoù arab penn o hent war-du Israhel, difennet hepken gant 5.000 den an Irgoun, 3.000 den ar Palmach, ha 30.000 den (armet-fall) an Haganah. Erfin eo deut Ben Gourion a-benn da strollañ mat ar vro, hag hec'h armeoù, dindan galloud ar gouarnamant, daoust m' en dije gallet kemer, e-keñver bagadoù a zo, doareoù damantusoc'h d'o youl-vat ha d'o brogarantez.

69

E fazi brasañ, piv ne ra ket fazioù ? a zo bet e dabut didruez ha diziwezh gant an Irgoun. Ne gredan ket ez eo, dreist-holl, en abeg da venozioù kevredigezhel an Irgoun ez eus bet an tabut-se, rak eñ e-unan, Ben Gourion, a zo bet oc'h ober emglev gant rener ar Revizionerien, Jabotinsky, tad speredel an Irgoun, ha kuzul an Histadrout an hini eo a dorras an emglev, o tianzav Ben Gourion. An tabut a zeu, war a seblant, eus mare ar brezel, pa oa Ben Gourion, evit suraat dazont Israhel, o klask sevel rujumantoù yuzev e-barzh an arme saoz : David Raziel hag Abraham Stern, renerien an Irgoun, a oa int o stourm er vro evit frankiz ar vro, hag an dazont a ziskouezas e oa ganto e oa ar gwir ; ha n' eus tra a bardoner nebeutoc'h d' an dud eget berañ bet er gwir pa lavared e oant er gaou. Forzh penaos, afer an Altalena, pa lakaas Ben Gourion tennañ a daolioù kanol war ar vag a zegase soudarded (eus an Irgoun) hag armoù da zifenn Israhel a-enep an Arabed, a zo unan eus an traoù-se na c'heller ket digareziñ aes. Un dra evel hennezh an hini eo a zo bet ar penn-kaoz eus ar brezel-diabarzh en Iwerzhon. Ha ma n' eus bet brezel-diabarzh ebet en Israhel d'ar mare-se; an dellid a zo d'an Irgoun ha d' e rener Menachem Beigin.

Kement-se lakaet a-gostez, Ben Gourion en deus gouezet ren ar vro en un doare dispar : setu aze ur bobl a zo bet ouzhpenn daougementet he foblañs en ur ober dek vloaz, ur vro e-lec'h ma tigoror bep miz labouradegoù nevez, e-lec'h ma tiffraoster bemdez tachenoù douar nevez : n' eus bro all ebet hag a c'hell fogasiñ da vezañ graet kemend-all, daoust d'an tabutoù spontus, kalz gwashoc'h eget e Breizh (e-lec'h ma vezer koulskoude mistri war an arz-se) a zo etre ar vroadelourien (evit sevel ar gouarnamant e 1951 ez eus bet ret ober 55 bodadeg etre ar strolladoù a asante kenlabourat !) ha da Ben Gourion ez eo dleet, evit ul lodenn vras, klod an araokadenn-se.

P' en deus savet Barnet Litvinoff e levr, e oa Ben Gourion o paouez en em dennañ kuit eus ar vuhez politikel. Aet e oa skuizh, eme an oberour, gant an tabutoù etre ar strolladoù yuzev, ha gant an nebeut a skoazell a gave e-touez Yuzevien ar broioù estren. Gwir e oa an diskleriadurioù-se. Met un dra all a oa ouzhpenn. Goude bezañ bet rener ur bagad politikel, ur socialist kalet eus an Histadrout, e oa deut Ben Gourion, tammig ha tammig, da sevel a-us d' ar strolladoù, da vezañ ur seurt tredeog, jubennour etrezo, ur c'hompezer d' o zabutoù. C'hoant Ben Gourion a oa bet, a gredfen, paouez a vezañ ur rener politikel, evit dont da vezañ ur rener broadel : ha se ne c'helle tizhout nemet dre derriñ pep liamm gant ar politikerezh e-pad ur pennad-amzer.

70

Kuitaet gantañ e gibboutz ez eo deut en-dro Ben Gourion da chom e Tel Aviv, e-lec'h ma vev gant e wreg en un ti bihan, hep matezh ebet zoken da sikour ober labour an ti. Adarre emañ an den eeun-se e penn ar vro p' emañ Israhel en un enkadenn, gourdrouzet a bep tu gant enebourien kreñvoc'h-kreñvañ. N'eo ket Ben Gourion a glasko kaout brezel, istor e vuhez hen diskouez. Met istor e vuhez a ziskouez ivez e ouezo skeiñ kalet ha didruez ma vez ret. Sur-mat e ouezo Ben Gourion seveniñ c'hoant bras e vuhez : lakaat tri million a Yuzevien da vevañ en Israhel ha suraat evel-se da vat dazoned ar vro.

Per DENEZ

NOTENNOU

HOR MIGNONED. -

Gant levenez e kemenn deoc'h an Aotroù hag an Itron Loyant hag an Itron Morvan eured o bugale Madalen ha Job, e Naoned d' an 21 a viz Mae.
Hor gwellañ gourc'hemennoù d' ar priedoù nevez.

Kristian Brisson hag e wreg a zo laouen da gemenn deoe'n ganedigezh o mab Michel-Marie.

Gab Lambal hag e wreg a zo laouen da gemenn deoc'h ganedigezh ur mab, Ronan, e Kemper, d' an 10 a viz Meurzh.
Hor gwellañ hetoù d' an holl.

Ronan Huon hag Elen er Meliner a zo laouen da gemenn da lennerien « Al Liamm » ganedigezh o mab Herve Tremeur, e Brest, d' ar 16 a viz Mae.

KANV. -

Klevet hon eus keloù marv Alfred Gwazdoue, keneil mat d' hor yezh ha koumananter feal d'Al Liamm. Kentelioù brezhoneg en doa roet e Kêr-Vreizh e-pad ar brezel.
D' e diegezh ha d' e vignoned e kinnigomp hor gourc'hemennoù a gengañv.

HOR C'HEF EVIT AR BLOAZ 1955

FREJOU	lurioù	
Moulañ		580.008
Mizoù-post		14.527
Levrioù prenet		7.673
Skodenn da Emsav ar Broadoù Bihan		10.000
En holl		612.208
ENKEFIADURIOU	lurioù	
Koumanantoù		401.750
Niverennoù gwerzhet		7.071
Profoù		121.770
En holl		530.591
STAD AR C'HEF		
lurioù		
Koll ar bloavezhioù all		3.467
Roll 1955		81.017
Pezh a vank er c'hef		85.054

72

N' eo ket frealzus teurel ur sell war ar sifrennoù meneget uheloc'h.
Bloavezhioù mat a zo, ha re fall ivez. Sklaer eo e vije ret, evit paeañ ar moulañ, kaout 603 koumananter. Ha sklaer ivez a rankomp kaout skoazell an holl evit stankañ an toull a 85.084 lur...

470 KOUMANANTER. -

E dibenn miz Mae, e kontemp 470 koumananter, rannet evel-hen :
Aodoù an Hanternoz, 57 ; Penn ar Bed, 93 ; Il ha Gwinum, 44 ; Loar Izelañ, 31 ; Mor Bihan, 35 ; Pariz ha tro-war-droioù, 106 ; Departamantoù all 55 ;
Trevadennoù Bro-C'hall, 9 ; Iwerzhon, 11 ; Bro-Skos, 1 ; Kembre, 9 ; Bro-Saoz, 3 ; Bro-Sveden, 1 ; Helvetia, 1 ; Bro-Alamagn, 1 ; Stadoù-Unanet, 5 ; Kanada, 5 ; Arc'hantina, 1 ; Brazil,-1 ; Aostralia, 1.

PROFOU. -

Degemeret hon eus abaoe derou ar bloaz :
GENVER :

J. Penneq, 1.000 lur ; Dr Gwilhou, 500 ; J. Kergrene, 100 ; E. Koroller, 500 ; A. Merser, 500 ; F. Even, 1.000 ; G. Pijon, 1.500 ; L. Bothorel, 500 ; B. Assicot, 250 ; J. Abarnou, 1.000 ; dizanv, 2.000 ; Herri Kalvez, 200.

- War un dro, 9.050 lur.

C'HWEVRER :

A. Gwilcher, 4.000 lur ; E. Cormerais, 1.000 ; Y. ar Beg, 10.000.

- War un dro, 15.000 lur.

MEURZH :

Marc'harid Gourlaouen, 2.030 lur ; Abanna, 1.000 ; Kab. Y. Souffes, 500 ; dizanv, Bro-Alamagn, 850 ; K. Perez, 500 ; A. Gwilhou, 3.000 ; J. Abarnou, 500 ; It. a Sant-Per, 5.000 ; Chaloni P. Tangi, 500 ; J. Renault, 500.

- War un dro, 14.350 lnr.

EBREL :

Abanna, 1.000 lur ; C. Le Mercier d'Erm, 600 ; Entente Culturelle Bretonne, 10.000 ; Dr Tricoire, 100 ; Herve Maze, 500 ; J. er Meliner, 4.000. - War un dro, 16.200 lur.

MAE :

J. ar C'hozh, 1.000 lur ; Kristian Guyonvarc'h, 1000 ; Dr Y. Marcel, 1.000 ; Evit devezh ar brezhoneg, Dll I. Marzhin, 1.000 ; L. ar Minor, 200 ; It. de Bellaing, 1.000 ; Langleiz, devezh ar brezhoneg, 500 ; Dll O. Chevillotte, 1.000 ; Brighid ni Dhochartaigh, 1.900.

- War un dro, 7.700 lur.

Betek-hen neuze eo bet tizhet ar sifrenn a 62.300 lur. Trugarez d' an holl ! Evel ma weler « Al Liamm » he deus resevet betek-hen 1.500 lur da geñver devezh ar Brezhoneg a zo bet graet d' an 10 a viz Mae.

HOR SKRIVAGNERIEN O LABOURAT. -

Embannet gant Maodez Glanndour emañ war-nes dont a-zindan ar wask ul lodenn all eus ar Bibl : pevar profed bihan.

Emañ Roparz Hemon o labourat da vat war e « Yezhadur Istorel », al lodenn Morfologiezh a vezo echu a-raok an diskar-amzer.

Embannet gant « Al Liamm » e teuio er-maez hepdale ur romant nevez gant Roparz Hemon : « An ti a drizek siminal ». Dornskridoù pevar romant all a zo prest. Ne vank nemet ar c'hant-milurioù evit o moulañ, kerkoulz ha romant bras Jarl Priel « Al Lestr Pembroke ».

73

BARZHED HA LIVOURIEN BREIZHAT EN AKADEMI R. DUNCAN. -

Akademia Raymond Duncan he deus aozet war-lerc'h un diskouezadeg taolennoù un abadenn sonerezh ha barzhoniezh breizhat da geñver « Le Vendredi des Poètes », d'an 8 a viz Mezheven. Ar brezegenn a oa graet gant Alan J. Raude, gant skoazell Fanny Robiane, Tiarko Richepin hag an itron Galbrun ez eo bet displeget barzhonegoù gant Le Goffic, Le Braz, Malemanche, Angèle Vannier, Théophile Briand, Roparz Hemon, Ronan Huon, Louis Le Cunff, Charles Le Quintrec, Xavier de Langlais, Morvan, Jean Pierre Calloc'h, A. J. Raude hag Audais.

Lucile Avisse he deus kanet kanaouennoù gant R. Baton, Jef Le Penven, Guy Ropartz ha Pol Le Flem e galleg hag e brezhoneg. Ouzh ar piano edo F. Le Gonidec.

STUDIOU KELTIEK. -

Ar studierien a garfe heuliañ kentelioù lennegezh keltiek en ur Skol Veur estren e-kerz ar bloaz-skol 1956-1957 a zo pedet da skrivañ da : Entente Culturelle Bretonne, 3, rue F.-Garnier, Paris (17°).

Kas war un dro gant o goulenn diskleriadurioù diwar-benn o buhez, o anaoudegezhioù war an danvez-se hag ar studioù emaint e soñj ober.

Ur plac'h yaouank (war-dro 20 vloaz) eus Bro-Gembre a garfe bezañ degemeret en un tiegezh Breizhat (brezhonegerien) evit deskiñ ar yezh da vat ha degemer en eskemm ur plac'h yaouank all a garfe deskiñ Kembraeg en he familh. En he c'hêriadenn e komzer ar yezh er stalioù, er sinemaoù, er c'hirri hag e pep lec'h.

Skrivañ da Nancy Davies, Aberdar Hall, Cathays Park, Cardiff, Wales, pe da rener ar gelaouenn, ar gembreadez a vo e Breizh da vare Kamp ar Vrezhonegerion, e Plouezeg.

ESKEMM LIZHIRI. -

Ul lenner yaouank a skriv dimp : « E niverenn 50 « Al Liamm » am eus leanet e oa dek studier e-toue koumananterien ar gelaouenn. Ha gallout a rafec'h lakaat ar goulenn-mañ en notennoù « Al Liamm » ? C'hwezek bloaz am eus. Deskiñ a ran brezhoneg hag e fellfe din eskemmañ lizhiri gant Brezhoned yaouank a gar hor yezh. Setu va chomlec'h : Erwan Evenou, 64, boulevard Saint-Saëns, Aljer. Trugarez. »

Pa 'z eus c'hoazh tud yaouank c'hwezek vloaz o teskiñ hor yezh hag o lenn ur gelaouenn evel « Al Liamm » e c'hellomp holl bezañ kalonekaet ha soñjal n' eo ket aner hol labour. Spi hon eus e kavo ar c'houmananter-mañ unan all eus e oad pe zoken koshoc'h evit kenskrivañ gantañ.

HOR YEZH. -

Niverenn 8 « Hor Yezh » a zo deut er-maez. Enni e vo lennet :

Enskrivadurioù brezhonek (kendalc'h) ;

Gerioù dastumet e Sant Ivi, gant P. Heussaff ;

Dastumad Penvern, gant Abeozen ;

Ar geriaoua boutin, pennad gant Kerlann, lizheroù hag alioù gant P. Denez, R. Hemon, A. Even, Y. Kraff, P. Even, M. Klerg, J. L. Boucher ;

Hevelep, gant Raude; hag ul lizher gant Y. Kraff ;

Ar skiantoù hag ar brezhoneg :

Lezennoù Mendel, gant A. Even ;

Levrlennadurezh, gant A. Even ha P. Denez ;

Buhez Moizez, mister brezhonek miret e Levr di Aberystwyth (kendalc'h).

Ar c'houmanant a zo 500 lur (4 niverenn) da vezañ kaset da : P. Denis, Le Ris, Ploare, Douarnenez. C.C.P. 1499-51 Rennes.

74

UN NEBEUT SONJENNOU DIWAR-BENN DANEVELLSRRID KADORIAD AR C'HENDALC'H KELTIEK. -

Ar fedoù-mañ a denn evezh al lenner :

War c'horrekaat eo aet al labour abaoe bloaz pe zaou.

An aozadur bodañ an izili hervez ar rannvroioù ha sevel strolladoù-studi a zo kouezhet tamm-ha-tamm.

An darn vuiañ eus an dud ne gemeront ket ur perzh oberiant e buhez ar skourr.

Evidon-me, al labour aet war c'horrekaat, c'hwitadenn ar bodadegoù-rannvro hag ar strolladoù-studi, an diouer a oberiantiz a-berzh an darn vuiañ eus an dud e-keñver buhez ar skourr, kement-se holl en em ziskouez evel un arouez splann, ez eus un dra bennak sinus ha don o vont a-dreuz gant ar C'hendalc'h Keltiek. Ha neuze e kav din e vefe mat ha gounidus stagañ gant an « emvurutellerezh » hep koll amzer.

A. - Ar bodadegoù-rannvro

1) Kouezhet int el lagenn. Daoust ha ne ve ket un arouez eus kement-mañ : ne glot ken, pe ne glot ket c'hoazh ar framm roet d' ar skourr ?

2) Sellomp en dro dimp, da welout penaos eo bet framm et ar strolladoù modern hag a vez oc'h ober berzh. Da skouer, e-touez re-all, e welomp an Obererezh Katolik. Daoust ha pennañ diazez an Obererezh Katolik eo ar rannvro ? Ya ha nann. Me 'gav din eo dreist-holl ar renk-ad-tud, ar vicher. Brudet eo al lavarenn : « L'apostolat du milieu par le milieu ».

3) Ma teurvezomp prederiañ ur pennad, e teuomp da anaout ne vefe ket un dro-geginouriezh e tibabfed, ma rajad diwar skouer an O. Katolik ; rak diazezañ a ra an O. K. e labourerezh war ar gwirvoud fetis, war frammoù hag a zo e gwirionez re ar vuhez a-vremañ.

4) Rak-se e kredan aliañ ar pezh a zeu amañ war-lerc'h. Peogwir n' eo ket ar gendalc'hourion stank a-walc'h hiziv an deiz, evit stummañ e pep rannvro vreizhat ur greizenn hollgevrennek, e vefe frouezhusoc'h adkempenn ar skourr en ur stummañ kevrennoù micherel evit Breizh (ha Bro-C'hall) a-bezh. Da skouer : kevrenn ar re a vez o labourat en ijinerezh, war vor, war ar maez ; kevrenn ar

gevredonourion, ar vezeion hag an apotikerion, hag all, hag all...
Pep kevrenn he defe he rener, he labour dezhi hec'h-unan war dachenn resis buhez fetis an izili, hag he dileuriad d' ur poellgor uheloc'h.

B. - Ar strolladoù-studi

Neuze eo, me 'gav din, e c'hellfed sevel strolladoù-studi talvoudus. Mar 'd int kouezhet, - int ivez, - betek-hen, ez eo marteze dre na veze ket graet enno war-dro kudennoù hag a vefe kudennoù-buhez evit Brezhoned an amzer-vremañ, anezho Brezhoned eus an oadvezh atomek ha neket re marevezh (faltaziet) Arzhur ha Marzhin.

Ret e vefe d' an emsavouricn sellout da vat ouzh ar gwirvoud, hag emskiantañ n' he deus Breizh hon amzer hogos mann d' ober gant hini ar c'hantvedoù aet da get. An « Hini Gozh » n' eo mui an dous...

75

Taolioù-reveulzi estreget hini Sebastian Ar Balp a zo c'hoarvezet en hon Istor, hag e vefe ouzhpenn eget ret derc'hel kont anezho :

- An « Anschluss » ouzh Rouantelezh Bro-C'hall.

- Dispac'h 1789.

- Hini 1830.

- Hini 1848.

- En Iwerzhon, dispac'h 1916.

- E Rusia, dispac'h 1917, frouezhenn un emdroerezh hir ha n' eo ket echu c'hoazh.

- 1940. An trec'h o vont gant Hitler.

Ar « Résistance » (anezhi un dispac'h gwirion) ma kemer Pobl Vreizh ur perzh oberiant enni.

- 1944. An trec'h o vont gant ar re-unanet.

An emsav breizhat lakaet e-renk an drec'hidi.

- 1945. An trec'h o vont e Bro-C'hall ha Breizh gant ar Jakobined, ha tamm-ha-tamm endev, gant ar gapitalisted.

Emañ Brezel Indez-Sina o teraouiñ ha klod ar Frañs o vont war-zigresk er broioù tramor.

Taol-reveulzi Syria ha Libanon : ar C'hallaoued argaset.

Taol-reveulzi Madagaskar : ar C'hallaoued o chom da vistri, betek gouzout...

Ha goude betek hiziv an deiz :

- Ar gapitalourion o tont adarre da ren war Vro-C'hall, ha Bro-C'hall o vont d' ar strad.

Brezel Indez-Sina o vont war vreinañ betek D. Bien Phu. Ar C'hallaoued argaset adarre.

Hanternoz-Afrika o 'n em sevel.

Ar Gabon o 'n em sevel.

An trec'h o vont gant Marokko.

An trec'h o vont gant Tunisia.

Taol-reveulzi Aljeria o treiñ da vezañ ur brezel gwirion.

- Ar C'hallaoued dic'houstet gant o strolladoù politikel.

Dirollerezh ha polisouriezh war un dro.

Azginivelezh an nazistiezh (Piaggi).

Azginivelezh ar « Résistance » (Bourdet).

E-pad an amzer-se :

Pobl Vreizh o tispign he nerzhioù dre-holl en aner

Labouradegoù serret, emgannoù e St Nazer, kouerion o tivroañ, an dud o vont d' en em rollañ e-touez ar soudarded goloniad dre ziouer a labour en o bro.

Pobl Vreizh o klask a-dastorn he hent,

hag ar C'hendalc'h keltiek, empenn an Emsav Breizhat, O'N EM LAKAAT DA STUDIAÑ AN DAREMPREDOU A ZO BET GWECHALL GOZH ETRE BREIZH HA KERNEV-VEUR !!!

Setu, me 'gred, danvez fonnus evit ar prederi er strolladoù-studi. Rak bremañ e vo ret d' an Emsav Breizhat dibab a-barzh nemeur, ma ne fell ket dezhañ chom e stad ur « club » lenneion, ha treiñ, muioc'h-mui, d' ur strolladig gouestlet d' an hendraouriezh...

K. - Ur C'hatekiz

Kaer eo « mont d' ar Bobl ». Ken kaer-all eo gouzout petra 'venner lavarout d' ar Bobl-se. Ret e vefe 'ta en em glevout, - ar pezh a zo bet diaes-meurbet a-viskoazh e-touez ar Gelted, - da sevel ur gelennadurezh resis, kumun, ledan, hardis ha breizhek-rik.

An nep a ya d' ar Bobl gant ur varc'hadourez hepken da werzhañ, hini ar brezhoneg, - a c'hell bezañ sur e raio kaerañ tro-wenn an holl droioù-gwenn. Hag ar gwir a vo gant ar Bobl en ur mod...

Yezhouriezh, sevenadurezh, lennegezh, kultur, kement-se holl n' eo mat nemet evit an dud o deus amzer ha frankiz-spered da bleidiñ gantañ. E daoulagad proletaerion a zo ret dezho gounit o zamm bara tenn ha kriz, n' eo e gwirionez nemet ul « luxe » a c'hell prenañ ar vourc'hizion hag ar vourc'hizion hepken...
76

Ne soñjer en traoù c'hwek nemet da zibenn ar pred, p' eo bet debret ar soubenn, ar c'hig, an avaloù-douar, ar saladenn hag evet ar banne gwinn yac'h. Hep traoù c'hwek n' eus ket a bred gwirion, hep soubenn hag all n' eus ket kennebeut. Ur bloc'h eo ar pred.

Neuze, ma fell deoc'h e vefe breizhek ar Brezhon, diskouezit dezhañ da gentañ ez eo ar Vreizhegezh an hent-natur evitañ da dizhout un denelezh reizh. Hag evit se lakit anezhañ da gentañ da bleustriñ war hentoù an denelezh dre-vas. Pa welo ez eus un hevelep den eus an hini a bourchas dezhañ un ti dereat, ul labour gopret reizh, ha war un dro hentoù breizhek a sevenadurezh, e kemero an holl varc'hadourez war un dro, evel m' en deus kemeret pe resevet betek-hen ar galleg hag ar spered gall gant an nebeut dam-wellaennoù a zo bet degaset d' e stal gant ar c'hallegerion.

Hogen, evit-se eo ret d' an Emsav Breizhat (a zlefe ar C'hendalc'h Keltiek bezañ an empenn, ar « brain trust », anezhañ) gouzout da vat petra fell dezhañ. Anez-se e kendalc'ho ar re yaouank da skeiñ ouzh dorioù-all ; ha gant gwir abeg, pa'z eo o dazont int eo a vez lakaet en arvar gant ar bed a-vremañ, ha n' eo ket an dezenn-mañ-tezenn diwar-benn ar z, an h, ar zh, pe an hh...

Bremañ e respontor marteze : Ar C'hendalc'h Keltiek a zo ur savadur sevenadurel, ha n' eo ket troet da bleidiñ gant an arboellouriezh, ar gevredoniezh, ar bolitikouriezh. Respont a ran-me : sevenadur eo ivez an arboellouriezh hag all. Hag ouzhpenn-se ma fell d' ar C'hendalc'h chom enket e stal ar brezhoneg, kollet eo... hag ar brezhoneg gantañ.

Ne vern penaos, e vo ret sevel deiz pe zeiz ar « brain trust » am eus meneget uheloc'h, pe neuze kenderc'hel d' ober kañv da Vreizh, en ur verniañ (evel boas) pep kiriegezh war gein tud fallakr ar gouarnamant, ar Stad hag an Iliz (evel just !).

Met ME A OAR ez eus e Breizh tud (tud yaouank) gouest da brederiañ, da ober, da drec'hiñ. D' an dud-se avat eo ret komz en ur c'hiz a gomprenont.

Mar 'd eo gwir al lavarenn « Hep brezhoneg Breizh ebet », gwiroc'h eo hiziv an deiz lavarout : « Hep pobl vrezhon, Breizh ebet ; hag hep Breizh, brezhoneg ebet ! » Betek-bremañ eo bet dalc'hmat lakaet an alar a-raok an oc'hen.

T. O'SHENCO.

YEZHOU HA POBLOU E IOUGOSLAVIA HAG EN HUNGARIA. -

E Bro-Iougoslavia ez eus, pe kentoc'h e oa, kalzik Alamanted o chom, dreist-holl e Serbia, e korn-bro Vojvodina. Diskleriadurioù a zo bet kaset diwar o fenn, gant gouarnamant Belgrad, da sekretour Unvaniezh Kevredel Broadoù Europa, an Ao. Skadegaard. Setu amañ un nebeut notennoù tennet diouto :

« Da vare niveradeg 1953 e oa 35.100 Alaman (Souabed danubiat) o chom e tachenn-vro emren ar Vojvodina (Republik ar Bobl Serbiat), en o zouez 1.700 bugel en oad da vont d' ar skol gentañ. Evit ar vugale-se e oa bet krouet, e 1952/53, 27 kevrenn alaman, 14 er skolioù izel (etre 6 hag 8 vloaz) ha 13 er skolioù kentañ (ouzhpenn 8 vloaz). Enno e oa 27 skolaer ha 687 diskibl. Ar vugale alaman all, en holl 2.618 anezho, a oa strewet dre ar Republik en he fezh, hag a-se ne oa ket tu da gaout kevrennoù a-ratozh evito, mont a raent d' ar skolioù serbek pe hungarek. Erfin 1.600 bugale all, a yae d' al Liseoù pe d' ar skolioù etre.

A-feur ma ya kuit an tiegezhioù d' an Alamagn pe d' an Aostria; ez a niver ar vugale war goazhañ. E 1953/54 ne oa mui nemet 5 kevrenn alaman er skolioù izel ha 7 er skolioù kentañ, gant 12 skolaer ha 269 diskibl. En hevelep bloavezh ne oa nemet 2.166 diskibl strewet dre ar skolioù all. E 1954/55 e oa 4 gevrenn alaman gant 5 skolaer ha 111 diskibl. Erfin e 1955/56 ez eo aet ken bihan niver ar skolidi ma n' eus bet digoret nemet ur gevrenn, e kolkhoz Krikava, gant 8 diskibl.

En holl skolioù ar Vojvodina, a-hend-all, e vez desket ar germaneg. Er Republikoù all ivez e vez kenteliet ar germaneg war un dro gant ar saozneg, ar galleg pe ar ruseg. Er skolioù kentañ e ranker deskiñ ur yezh estren, el Liseoù div : evel-se e c'hell atav ar vugale alaman strewet dre ar vro deskiñ o yezh er skol. »

A-hend-all setu amañ notennoù tennet eus ar gazetenn **Freies Leben** embannet gant Kevredigezh Alamanted an Hungari :

« Abaoe 10 vloaz ez eus bet graet kalz evit rein d' ar poblañsoù nann-hungarek o chom er vro ur gelennadurezh en o yezh. Bez ez eus bremañ 382 skol hag a gelenn en ur yezh estreget an hungareg : 48 skol-babiged, 38 skol kentañ, 275 skol-etre, 7 skol-lojañ, 3 lise, 3 skol-vistri ha 4 ti-lojañ evit ar skolioù-meur. En ensavadurioù-se e vez kelennet alamaneg, slovakeg, kroateg ha roumaneg.

Ouzhpenn-se e vez pourchaset levrioù gant ar gouarnamant d' ar skolioù arallyezhek : abaoe savidigezh ar gouarnamant nevez ez eus bet embannet 194 levr en holl, en o zouez 88 e kroateg, 43 e roumaneg, 42 e slovakeg ha 3 e germaneg. »

Gwelout a reomp petra 'ra gouarnamantou Belgrad ha Buda-Pest evit poblañsoù o kontañ un nebeut miliadoù tud a-wechoù. Petra 'ra avat ar gouarnamant « demokratel » (?) a zo e Pariz evit an 3 milion a Vretoned ? Pet skol en deus savet, pet levr embannet, en hor yezh ?

An diskleridurioù roet amañ uheloc'h a zo tennet eus ar Bulletin embannet e galleg gant an Union Fédéraliste des Communautés Européennes. Ur bern traoù talvoudus a zo da gavout atav e-barzh. Evit koumanantiñ kas 300 lur da P. Lemoine, Mael-Carhaix - C.C.P. 17-994 Rennes, en ur venegiñ ez eo evit ar-Bulletin.

BRUD EVIT AR BREZHONEG E KEMPER. -

Bep bloaz e ra. an It. Kemere, en he stal war bali Kergelen, un diskouezadeg evit brudañ ar brezhoneg. Hevlene he deus dibabet evel-testenn « an anoioù-tud ». Diskleriet e vez orin ha ster an anoioù, e brezhoneg hag e galleg, hag alies e vez cheñchet an daolenn du. Berzh a ra an diskouezadeg, ur souezh. Setu ar pezh a skrive deomp an It. Kemere, pa oa ar gorventenn erc'h en he gwashañ : « Aon am boa na vije ket kalz tud da harpañ dirak ar werenn gant ar yenijenn a zo er miz-mañ dres. Met, mat an traoù : daoust pegen yen eo, ez eus atav tud dirak an diskouezadeg. Ober a ra berzh, anat eo ; dedennet eo tud Kemper gant orin o anoioù ha dont a reont niverus da lenn an daolenn zu cheñchet ganin bemdez. Ma n' eus den ebet harpet dirak stal ebet e Kemper (pres ma 'zo war bep hini da vont da glozañ en e lochenn), tud zo atav dirak ar stal nemeti e-lec'h ez eus brezhoneg da lenn. N' em eus ket stalet « infra-rouge » er-maez, met ar brezhoneg a ra tomm dezho ».

Pezh na laver ket an It. Kemere eo gant peseurt blizidigezh he deus gouezet kinklañ un diskouezadeg he dije gallet bezañ, dindan daouarn tud all, sec'h hag arabadus : ne c'helle ul labour aozet ganti nemet ober berzh, ha berzh a ra. Gwell a se evit ar brezhoneg. Hor gourc'hemennoù kalonekañ d' an Itron Kemere.

78

DIFENN A REONT AR YEZH VREZHONEK. -

Da geñver 500vet niverenn « La Bretagne à Paris » ez eus bet graet unan ispisial e daou liv. Ennañ ez eus pennadoù diwar-benn ar skrivagnerien vreizhat gant Toulemont ha pennadoù all diwar-benn ar arzourien a bep seurt. N' eus ger ebet avat diwar-benn ar skrivagnerien vrezhonek. Petra krediñ pa lavar an dud-se e tifennont ar yezh ?

JARL PRIEL HA... BIMBOCHET. -

Jarl Priel a gont deomp un darvoudig fentus degouezhet gantañ e Perros da vare Bleun-Brug Treger. « E-pad an abadenn goude kreisteiz e oan o komz gant Chauvel (boutaouer koat ha barzh eus Logivi) ha gant Evnig Penn ar C'hoad, e brezhoneg eveljust. A-benn ar fin e troas war hon tu ur Gall, ur Parizian bennak en e goazez dirazomp :

- Enfin, messieurs, emezañ, vous pourriez dire de temps à autre quelques mots en français !

Ha me da sellout pizh outañ ha da lavarout dezhañ :

- I am an Englishman, sir, and I dont understand anything, but I have three words to tell you : French go home.!

- Ah ? emezañ, souezhet-krenn.

Ha goude e kleven an Aotrou Bimbochet o lavarout d' e genseurted en-dro dezhañ :

- Merde alors ! un Anglais qui n'entrave que dalle en français et qui ne fait que baragouiner en breton ! »

FRESKOU LANGLEIZ. -

Savet ez eus bet ur film diwar-benn freskcù Langleiz e La Richardais. « La Renaissance de la fresque » a zo ur film e liv war vicher an doare-livañ-se. Savet eo bet gant de Beaumont ha Vallée war ur skrid gant Langleiz. Bet en deus ar priz kentañ ar C'hornog e Kenstrivadeg Laval ha dibabet eo bet evit Kenstrivadeg Nice.

En hañv-mañ e krogo Langleiz gant un oberenn heñvel e ti-pediñ an Eskopti e St-Brieg.

LIEN ? LEIEN (Sellout « Al Liamm » 51/58).

1° E geriadurig Ernault p. 346, e kaver : Leien, «toile grossière, serpillière D.

2° E « Glossaire moyen-breton », p. 367, dindan ar ger Lyen « une forme voisine, mais distincte est leyen, grosse toile ». Gr(égoire), leien (Gon(idec), f., Trd. (pét. tréc. lien-levien).

3° Da dostaat ouzh ar furm ziwezhañ setu ur bomm eus Ar marc'heger hag ar verjerenn, an Uhel, Gwerziou... , I, p. 195

« Un habit lienn-leoïenn 'zo mad d'in da gavet.

Un habit lienn-leoïenn na pa ve kannet gwenn,

A zo mat d'ur verjerenn 'wit mont d'an oferenn. »

An Uhel, p. 195, a dro : « grosse toile ».

LEVRIOU KERNEVEK. -

Cornish Simplified, Caradar ; The Story of the Cornish Language, Caradar ; Nebes Whethlow Ber, Caradar ; Whethlow An Seyth Den Fur a Rom, Caradar ; How to Learn Cornish, Caradar ; An Balores gans Mordon (pezh-c'hoari) ; Bewnans Alysaryn-gans Peggy Pollard (pezh-c'hoari) ; Cornish For All, Morton Nance ; A Guide to Cornish Place-Names, Nance ; One Thousand Place Names of Cornwall, Chirgwin ; Cornish-English Dictionary, Nance ; Cornish Song Book (Lyver Canow Kernewek) ; Bewnans Meriasek ; An Tyr Marya ; Sylvester han Dhragon ; Trystan & Ysolt, Caradar ; English-Cornish Dictionary ; An Awayl Herwyth Synt Mark (diviet). A. S. B. Davies (Celtic Books) 16, Old Highway, Mochdre, Colwyn Bay, W Wales.

79

LIHIRI. -

« Kas a ran deoc'h ma adkoumanant d'Al Liamm, gant ma gwellañ gourc'hemennoù evit al labour a rit war-dro ar gelaouenn-se. Daoust ha ne vefe ket tu da wellaat brezhoneg Al Liamm ? Mantrus ha dister e vez alies ar yezh implijet er gelaouenn. » Y. ar G.

« Na plijus eo bet niverenn diwezhañ Al Liamm ! N' eus nemet an diouer a amzer a vir ouzhin da reiñ va meno war bep niverenn. Gouzout a rit e lennan da gentañ holl ar barzhonegoù, daoust din bezañ diampart-tre d' o barn. Goude-se an Notennoù, ha setu m' am eus kavet un dra nevez ar wech-mañ : Pladennoù breizhat gant P. D. ha ma 'z on a du gantañ evit meur a dra all er pennad-se, ez on a-enep-krenn pa laver eo fall laz-kanañ Landi, ha pa laver ivez ez eo « Kendalc'homp » ur c'han kaer-tre.

Laz-kanañ Landi a zo mat-tre, ha gouez da P. ar Flemm ha da songarourien

ampart all, mat-kenañ zoken. Marteze ne dizh ket lazou-kanañ alaman pe rusian, met n' eo ket fall tamm ebet, er c'hontrol. Klevet am eus anezhañ meur a wech, bepred gant kalz a blijadur. Ar wirionez a zo koulskoude gant P. D. pa laver ez eo an ton beuzet en aozerezh, pezh a c'hoarvez re alies, siwazh, dre faot un aozer a volonteze vat, met hep « micher ».

« Kendalc'homp » d' am meno, a zo un ton, pezh a lavar ar C'hallaoued « pompier » ha netra ken ! »
V. B.

Bet hon eus ivez ul lizher digant an Ao. Abjean rener kanerien Bro-Leon. Evel ma 'z eo hir a-walc'h ha skrivet penn-da-benn e galleg ez eo diaes dimp e embann war e hed. Setu koulskoude dre vras ar pezh a zo e-barzh.

Kregiñ a ra an Ao. Abjean en ur lavarout ez eo bet displijet gant ar varnadenn douget gant P. D. war e ganerien hag a zo direizh. Koulskoude ez eo a du gant Per Denez pa lavar n' eo ket mat ar bladenn. Abegoù he sioù a vije re hir da zisplegañ. Ar ganerien avat n' int ket da damall.

A-du eo pa lavar ez eo kaer-tre ton « Pe drouz zo war an douar » met nann pa lavar ez eo fall ar gendonerezh. Homañ a zo bet savet gant G. Pondaven ha ret eo bezañ eus ar vicher evit barn. Ma n' eo ket ken kaer « Noz Nedeleg » e talvez koulskoude ar boan da vezañ enskrivet.

Arabat e vije keñveriañ Kanerieien Bro-Leon gant Kanerien a vicher a glevomp war an darn-vuiañ eus ar pladennoù estren.

Klemm a ra P. D. eus paourentez hon lazou-kanañ. Karout a rafe an Ao. Abjean e vefe barnet e ganerien war o labour a-bezh ha da zibab a zo : 3 bladenn ervennoù bras 78, hag unan ervennoù munut 45. Hepdale e vo enskrivet unan all ervennoù munut 45 (Les deux Bretagnes, Introun Santez Anna, Gwerzh war maro an Aotrou Perrot, kendoniet holl gant G. Pondaven). En hañv a zeu e vo graet daou all, gant skoazell Yvon Le Marc'hadour, unan anezho moarvat evit enoriñ St Erwan.

Kanerien Bro-Leon o deus bet priz kentañ ar Bleun-Brug en Alre e 1952, e Landreger e 1953, e Kastelin e 1954 hag e Landivizio e 1955. Pol ar Flemm eo a vez e penn ar varnerien hag en deus roet gourc'hemennoù d' ar Ganerien « Kendalc'hit da labourat evelse hag e viot barrek da vont dizaon da genstrivadeg vras al lazou-kanañ e Pariz. Sur on e rafec'h enor da Vreizh ».

Laz-kanañ Landivizio a zo aet eta da Bariz evit ar Genstrivadeg d'ar 6 a viz Mae er bloaz-mat. Kanet o deus e brezhoneg hag e galleg hag ar priz kentañ a zo aet ganto.

80

Evidomp-ni saludiñ a reomp e laz kanañ Landivizio al laz-kanañ nemeti, pe dost, a gemer warni brudañ ar c'han breizhek. N' eo ket diaes deomp ijinañ peseurt skoilhoù a gav war he hent, ha pa vije evit kavout tud barrek hag a volonteze vat en ur gêr 7.000 a dud.

ROMANTOU POLIS. -

Ur romant polis nevez e brezhoneg a zo war-nes dont er-maez. « Un ti a drizek simimrl » gant Roparz Hemon en do 160 pajenn, gant ur golo kaer-tre treset gant an oberour. Priz ar skouerennoù boutin a zo 495 lur. 800 lur e kousto, moarvat, an 20 skouerenn graet war Rives. E miz Gouere e teuio al levr er-maez. Embannet eo gant « Al Liamm », dont a raio eta d' ar c'houlz merket. Goulenn al levr digant Per Bodenan.

Resevet hon eus daou romant polis e galleg, sinet René Madec. Daou levr kentañ ar rummad nevez-se renet gant Michel de Saint-Pierre a dremen e Breizh ha R. Madec daoust ma n' e anavezomp ket a zo breizhat.

Pep istor a zo kaset mat war-raok hag o lenn a reer buan hag aes, an diskoulm a zo plijus bep gwech ha dic'hortoz a-walc'h. Peogwir ez eo ar brezhoneg hor c'hudenn e tennimp selloù an oberour war draouigoù 'zo : da gentañ, ur fazi eo, el levr-mañ, treiñ ar brezhoneg dre galleg fall, peogwir e komz ar plac'h kozh brezhoneg mat. Ar frazenn « Piou mañ aze ? » a zo da reizhañ « Piou zo aze ? » Ar frazenn « Aotrou Person, an itron » a zo « An Aotrou Person, Itron ». An Aotrou Garrec, person, eo Hercule Poirot pe Maigret ar strollad levrioù-polis-mañ. Hetañ a reomp dezhañ ar berzh o deus graet an daou all. « Les enquêtes du Recteur Garrec » a zo embannet gant Editions du Centurion.

AL LIAMM 57

AL LIAMM
Tir na n-òg

NIVERENN 57

Gouere - Eost 1956

TAOLENN

Diorbliñ, gant Abanna	3
Barzhonegoù Gouez	4
Kontadenn eus an Ugentved Kantved, gant Per Denez	6
Penaos e teuas ar C'habiten Torrbenn da vezañ ur c'hristen mat en dro, gant Rojer Brison	20
Eñvorennoù hanter-oad (kendalc'h), gant Taldir	28
Istor lennegezh vrezhonek an amzer-vremañ (kendalc'h), gant Abeozen	37
Kanaouenn an « Asamble Nasional »	45
Enbroadeg ar Vritoned en Armorika, tr. Gwengourien ha Maodez Glanndour	53
Al Levrioù, gant Per Denez	58
Notennoù	60

DIORBLIÑ

gant ABANNA

An traoù a zo aet miliadoù ha miliadoù bloavezhioù d' o ober
 a garan,
 an tamm tir-mañ harp ouzh mor an tan don,
 ar c'hoabr atlantel oc'h e gouzoumenniñ,
 ha te, an den, heñvel ouzh den, o sevel war an tamm tir-mañ
 a garan,
 pezh a vennes ober dek kant ha dek mil bloaz zo
 a vennis ober,
 ha me a-istribilh en houl an inorzennoù
 tra ma c'hwezh da c'hoarzh e puñs goullo va boud,
 emañ ken gwerch'h ha da zeiz va ganedigezh,
 emañ unan a-douez miliad da huñvreoù o tont da wir em buhez.

BARZHONEGOU GOUEZ

Ur raklavar.

« Yaouank e varv ar re 'vez karet gant an doueoù. » Krennlavar ar Roman a
 zo gwir e pep lec'h, e pep amzer. Gouez zo bet devet gant an tan a c'hwezhent
 ennañ. Bevet en deus kadarn. Ha deut an eur da vont en deus lavaret ya, darev.

Par d' ar bod avalenn diflosket da Genteven - a striv da vleuniañ daoust
 d' e zelioù gweñvet - e kinnig trec'hiñ war ar marv.

Gallet en deus goude ar stourm, rak dremm an Ankou, lakaat ar barzhonegoù-
 mañ da evodiñ. Kaer eo ar bleuñv, fonnus an had. Met 'pe stuz emañ an douar ?

* * *

D' ar gamaladed o deus dibabet an hent-se,
 D' ar re a zo kouezhet ennañ,
 D' ar re a gendalc'h gant an emgann,
 D' an drubarded ha d'ar renavied.

AR SOUDARDED

Poanius eo an hent ma stourmomp 'vit hor frankiz.
 Levenez an deroù zo steuziet er gwall varrad.
 Meur a baotr o deus roet dideuk o yaouankiz
 Tra ma klaske re all didamall dre varad.

Poanius eo an hent m' hon eus skuilhet hor gwad.
 Meur a hini o deus gwelet o c'hile o kouezhañ
 Hag a zo aet d' o zro a-greiz fulor ar gad
 Goude bezañ laosket o zennoù diwezhañ.

Poanius eo an hent, evelato ni a gerzh.
 Ha freget hor gouveneg, plegañ ne vennomp ket.
 Hep tamm keuz d'an aberzh, en despet d'an droukverzh
 E tassion hor c'hammedoù ingal war an hent ret.

Poanius eo an hent, met dilennet eo bet deomp.
 Ha soudarded ma 'z omp 'sevenomp an Uhelvenn.

Teñval-tre eo an hent bet dilennet ganeomp,
Koulskoude ni a gerzho tre betek an dibenn.

Meurzh 1946.

5
Ret Unik eo va anv
Ennon e timez an enebou
'Mañ unvan levenez ha poan
E kevred peoc'h ha brezel
Keneiled ennon buhez ha marv.

* * *

Me eo ar Vamm Seder
Ha va mab an hini
a gerzh a gammoù kompez
a-dreuz an enebou
hep mar diwar-benn e Hent,
o vouc'hoarzhin d'an Ankou
ha d' e donkadur.

V. Epos M.

* * *

Dalc'h da c'hoarzhin ha da ganañ
Daoust d'an enkrez ha d'ar melre,
Na vez prederiet gant dremmoù teñval
Na komzoù niñvus ar Fomore.
Dirak an dud, dirak an Ankou,
Dalc'h da c'hoarzhin ha da ganañ.

Un eurvad fonnus ha pouezek
A zougan em c'hreiz
Evel un dougerez he bugel
Evel ur gredenn start.

XV M Epos.

* * *

Kan an evned gentañ
A gemenno an eur
Ma sailh o c'halon d'ar re gadarnañ.
A-benn arc'hoazh, eeun va sell,
Ez in laouen, d' an eur
Ma kanit, evned abred !

16-7-1946.

JASSON, 17-7-1946.

KONTADENN EUS AN UGENTVET KANTVED

gant Per DENEZ

Deut e oa an nevez-hañv. E korf un nebeut devezhioù e oa bet kemmet penn-da-benn doare al liorz h vras : klouarijenn an avelig o tiskenn a-hed pleg ar grec'hienn a lakae lufr war ar geot ha krenerzh er brouskoadoù, hag ar gwez-kistin-Indez, sec'h ha treut o skourroù evel keuneudennoù eizhtez a-raok, a gemere bremañ o stumm gwez e gwirionez, ront, kofek, bev. Disoñjet ganto geizig klemmus ar mizioù goañv, e tremene ar golveni a nijadelloù trouzus, o ragachat eus an eil tachenn-emgann d'eben.

An denig kozh war ar bank koad a vlinke e zaoulagad ouzh ar wezenn-Judea dirazañ evel ur gaouenn ouzh an heol, e valvennoù disblevet ha pikous o tiglozañ a-hanter war ibilien displivet, enno ar sked ruz, spontidik ha ranell a vez gant al logod gwenn. Ur mousc'hoarzhig uvel ha diot, mousc'hoarzh ar re a vez kustum da lavarout trugarez evit an dismegañsoù hag an taolioù-treid, a skorne e vuzelloù moan hep gwad : c'hoant en dije bet unan da skeiñ ur mell dornad e-kreiz e zremm dristidik ha plijet, ken dre druez, evit gwelout enni un tammig erez pe gasoni, un tammig buhez. Hogen moarvat en dije mousc'hoarzh atav, gant roudenn ruz ar bizied a-dreuz e fas, e-giz ma rae bremañ, disoñj ha dilevenez, en ur wignal ouzh ar wezenn c'hlas-melion.

Treiñ a reas e sell ruz klañvidik war-du ar bugel a oa o lenn ul levr e penn all ar bank. Digeriñ ha serriñ a reas e vuzelloù treut, met ne zeuas trouz ebet diouto, ha ne fiñvas ket ar paotrig. Chom a rae paret e zaoulagad war ar jodoù kuilh, ar jodoù tener, ar jodoù blouc'h, ken e santas ar bugel pouez ar sell en diwezh : sevel a reas e benn, ha merzout ar fas gwenn gant ar malvennoù ruz pikouzek, ar mousc'hoarzh inosant, dizant ha divuhez. Fromet e voe, hag e serras e levr. Krenañ a reas ar muzelloù treut displiv adarre, hag a-benn ur pennadig e voe klevet ar c'homzoù :

« Ar re-se zo drouk, kia, va faotrig. Ar re-se zo drouk-meurbet. »

Skrijañ 'reas ar bugel. Ruz-tan e oa deut e jodoù kuilh da vezañ, hag an den kozh ne zispege ket diouto e sell ruz marnaoniet. E vouezh a oa askrenus, ha leun koulskoude, evel p'he dije dassonet a-dreuz kevioù bras ha bolzek a-raok tizhout divskouarn an dud.

7

« Ar re-se zo drouk, va faotrig. Ar re-se 'ray din mervel gant an naon.

Pegiñ a reas ar spont er bugel : trealañ a rae dindan teogerezh ar sell ruz rankles, ar mousc'hoarzh hir displiv, ar vouezh a hañvale sevel eus diabarzh an douar. Ha trumm, trec'het an droukhoal gant e vraouac'h, e tilammas, o stlepel e levr d' an traoñ, hag e tec'has kuit d' ar red. Ur pennadig e talc'has an den kozh da barañ e zaoulagad evel pa vije bet egile e penn all ar bank atav. Neuze, o c'horren al levr gant jestroù pizh, e tastumas anezhañ priminik war e varlenn, hag adarre e vlinkas e valvennoù ouzh an dachadenn limestra, trellus war skramm al letonennoù re sklaer, digemm war e ziweuz ar mousc'hoarzh-se hag a oa tristoc'h eget daeroù.

* * *

A gammedoù munut e tiskenne an denig kozh eus al liorz war-du kreiz kêr. Yen e oa an avel e disheol ar ruioù strizh, ken e kromme e gein en e levitenn deuc'h, o klask en em dommañ outañ e-unan. Pa droe korn ur straed e kase e zorn d' e dog-meloñs tuzum, dre voaz muioc'h eget dre ret, o pegiñ en erien anezhañ gant aon na nijfe kuit. Ne selle ket pelec'h e lakae e dreid. Gallet en dije ober an hent hep digeriñ e zaoulagad gwech ebet, boas ha ma oa outañ evel jav ar

marc'hadour-laezh ouzh e droiad eus pep mintin : gallet en dije kavout bouton an nor hep tastournat tamm, en em silañ a-hed ar speurennoù hep direnkañ tra, mont da azezañ war e gador gustum hep bale war troad nikun. Ha gant sioulded uvel ar re baour en dije gouezet gortoz, gortoz ha gortoz c'hoazh, hep kaout ezhomm ober sell ebet da c'houzout pe da vare e tiskouezfe ar perseptour dezhañ tostaat pa vije aet skuizh ouzh e welout aze o vousec'hoarzhin da netra.

En em ober a reas an treutañ hag ar c'hrommañ m'hellas pa antreas er burev. Kompren a rae e oa aner dezhañ mont. Ha, koulskoude, ne oa netra a sponte anezhañ muioc'h eget ar soñj e vije kaset kuit ac'hane evel ur c'hi laer eus ti ar boser. Pa zigore an nor e rae atav ur sellig prim, braouac'het, war-du prenestr bihan ar perseptour, aon gantañ gwelout an den o lammat war e elloù hag o tiskouez dezhañ skarzhañ kuit, ken didruez e zorn ha dorn an tonkadur. Biskoazh avat ne save ar perseptour e fri diwar e baperennoù : didrouz evel ul logodenn, munut evel ul logodenn, ez ae an den kozh da gaout e gador, ha diflach e chome eno, eurvezhioù-pad, e zorn gwenn, disec'het e-giz parch, o lufrañ goustadik foñs teuc'het e dog-meloñs war bennoù e zaoulin.

8

Bezañ er burev an hini eo a oa a-bouez. Rak bezañ o c'hortoz a oa bezañ en arvar. Hag an arvar, ma 'z eus aon ennañ, a zo ennañ goanag ivez. Pa veze galvet da gomz e oa echu pep tra. En a-raok e ouie an den kozh petra 'vefe lavaret dezhañ, gouzout a ouie na c'helle ar perseptour kemmañ netra, ha ne selaoue ket anezhañ zoken. Kentoc'h e lakae e veiz da studiañ un draig souezhus bennak : pegen brav e oa skoulmet kravatenn an den, da skouer, pe neuze pegen iskis e oa e sell a-dreñv al lunedoù tev. Keuz en devoa an denig kozh e vije bet rediet ur gwaz yaouank ken kran, gwisket atav ken figus, da zougen lunedoù a rae d' e zaoulagad hañvalout dispered ha sebezet evel re ul leue. Pa wele an daoulagad-polos o stouiñ en-dro war-du ar c'haieroù bras e kompren e oa deut an diviz d' e zibenn, ha kuit ez ae, goustadik, sioulik, gant e gein kromm hag e vousec'hoarzh damsot.

Frometoc'h e oa ar wech-mañ, avat, ha pa ziskouezas ar perseptour e benn e toull ar prenestrig, e vountas kerkent an denig kozh ur baperenn dindan e fri. Imoret-fall e oa egile, avat : chiket e gravatenn, e zaoulagad o ruilhad evel div got a-dreñv ar gwer fetis. Chalpat a reas :

« Ha neuze ya ! Lakaet e vo harz war ho pañsion ma ne baeit ket a-barzh tri miz ar pezh a vankit d' ar stad. Pell a-walc'h am eus gortozet. »

En un doare pennfollet e fiñvas ar muzelloù disliv ha klevet e voe an hini kozh o vesteodiñ :

« Mervel a rin avat gant an naon. »

Hep mar ebet en doa ar perseptour yaouank kalz trubuilh d'an ampoent gant unan bennak eus e c'hevrenned, rak gros e respontas :

« Ma varvit 'voc'h douaret, setu-holl. Kenavo ar bed all. »

Ha kounnaret e lakaas treid e gador da skeiñ ouzh ar plañchod pa azezas en-dro.

* * *

Birvilhet e oa maouez ar burev-tabok en noz-se, ken birvilhet m' he doa poan vras o c'hortoz ar mare dereat da silañ ar c'heloù bras e divskouarn paotr al lenndi. Gant ar pratikoù kozh, avat, e vez ret heuliañ pervez; lidek da lavarout reizh, ar boazioù, hag evel kustum e rankas-hi goulenn, goude lakaat ur werenn war ar c'hontouer :

« Ha petra 'po fenozh, Aotrou Pichavant ? »

9

Gouzout a ouie mat en defe ur Pikon, met bep taol e roe dezhañ amzer da

brederiañ en ur sellout ouzh skritelloù liesliv ar boutailhoù renket war o mester skedus, ha da ziskleriañ gant ur blijadur nevez atav :

« Me 'gred em bo ur Pikon, evit cheñch un tammig. »

Kargañ 'rae e werenn ha sellout a rae outañ o kemer ul lonkadig a-barzh lakaat ar voutailh en he flas en-dro. Neuze ez azeze war he skabell uhel, darev d' ober he fennadig flaperezh.

Ar pezh a oa plijus gant an Ao. Pichavant eo e ouie selaou. Ne oa ket eus ar seurt tud-se a droc'h ho komz ouzhoc'h bep eilvet munutenn, o kaoc'hiñ deoc'h evel-se an istor ar bravañ. Gant an Ao. Pichavant ne zeue morse tra nemet un « Hag a-nevez hiziv ? », da doullañ kaoz, ha neuze, e zoare parfet-bras d' ober un hejig prederiet d' e benn d' ar c'houlz dereat a rae dioutañ ar selaouer dudiusañ a oa tu da gavout.

« Hag a-nevez hiziv ? » a c'houlennas paotr al lenndi, goude ober un tañva d' e werennad.

Harpañ a reas ar vaouez he bruched fonnus war ar c'hontouer, ha stouiñ da ziskuliañ, kevrinus he mouezh :

« Gouzout a rit, an denig kozh a vez atav o terriñ divskouarn an holl gant e istorioù perseptour ? »

Skrijañ a reas an Ao. Pichavant, hag ur banneig all a evas diouzhtu da guzhat e strafuilh.

« M' en dare ha n'eo ket aet sot evit mat. »

« Ata gast ! » a c'hrozmolas paotr al lenndi.

Ken souezhet e voe maouez ar burev-tabok o klevout mouezh an Ao. Pichavant ma reas ur sell pishoc'h outañ : anat e oa, ur from kablus a grene en e zaoulagad.

« Ha klevet ho pefe un dra bennak ? » a silas, hegarat he gwidre.

Santout a rae paotr al lenndi e oa o vont da goll. Skarzhañ a reas e werenn, ha kavet gantañ un tammig nerzh en e vanne, e respontas.

« Nann, » emezañ.

Sell furch ar vaouez e lakae c'hoazh diaes, avat.

« Tra ebet ! » a stagas, o skeiñ e werenn war ar zink da reiñ un doare rustoc'h d' e gomzoù. « Ha roit din ur Pikon all ! »

Skodeoget e chomas an itron. Ur wech hepken en e vuhez en doa bet an Ao. Pichavant daou vanne lerc'h-ouzh-lerc'h, an noz ma oa deut Lomig Penn ar Pont da lavarout e oa bet lazhet e wreg o kouezhañ en dirioù, hag an holl dud o doa komprenet mat e oa ret dezhañ kemer kalon a-raok mont da zastum ar relegoù. Un darvoud iskis bennak a oa c'hoarvezet gantañ an taol-mañ c'hoazh, hep mar ebet. Met santout a rae ar vaouez na dalveze ket ar boan goulenn krenn-ha-krak : da fall ez a atav ar seurt doareoù dirukun gant ar baotred. Gwelloc'h gortoz ha mont ouzh an den dre finesa : a-raok na 'z afe an Ao. Pichavant kuit he defe klevet pezh a oa da glevout. Evit bremañ ne oa mann d'ober nemet derc'hel da gontañ.

10

« Sur eo sot. Soñjit eo deut amañ n' eus ket un eur zo da brenañ traoù, na zivinfec'h morse petra. »

Lakaat a reas an M. Pichavant e benn war ar c'hostez ha gwignal en doare souezhet, ha gouiziek war un dro, a vez gant al laboused.

« Kavet eo bet ganeoc'h ! » a estlammas maouez ar burev-tabok, evel p' he dije klevet ur respont bennak gant egile. « Ya, ur voestad sigarennoù en deus prenet. Piv 'n dije soñjet ? Unan na vez morse gantañ trawalc'h da zebriñ... Sot da stagañ, a lavar an deoc'h... Pe neuze, » a echuas en ur c'hoarzhin, « eo deut a-benn da gaout un distaol war e dailhoù hevlene ! »

Lakaat a reas ar c'hoarzhadenn un nebeut evourien da dostaat. Brav e veze kaout ur selaouer evezhiek evel paotr al lenndi, met pemp pe c'hwec'h, zoken disteroc'h pep unan anezho, a oa gwelloc'h c'hoazh. Evito e tisplegas ar vaouez :

« Ur paour-kaezh eo, en em c'houlenner penaos e teu a-benn da chom bev. Un ti en deus war e anv, hag en abeg da se ne roer ket dezhañ leve ar re gozh. Feurmet eo e di, met ken izel eo ar feurmou ma n' hell ket paeañ diouto an tailhoù hag an aozadurioù zoken. Ha n' en deus ket ar gwir da greskiñ anezho, evel ma ouzoc'h mat, na da lakaat ar feurmourien er-maez. Un druez, n' eo ket gwir ? Petra 'reoc'h avat, atav e vez al lezennoù a-enep d'ar re baour. Evel just e klask gwerzhañ. Rak hep an ti-se e c'hellfe bevañ-bevaik gant e dammig pañsion a netra. Met piv, lavarit din, piv nemet un sot a yafe da brenañ un ti n'hell ket lojañ e-barzh da baeañ tailhoù warnañ ? En deiz a hiziv n' eus ket ar gwir d' ober diotachoù, pe neuze oc'h lakaet prim en dienez. »

Diouzhtu he doe keuz an itron da vezañ komzet. Rak ur genou bras a stagas da gunujenniñ ar gouarnamant - ha n' en doa ket bet amzer d' ober kalz droug e gwirionez peogwir e oa anvet abaoe un devezh hanter hepken - ha gouzout a ouiehi pebezh doujañs en doa paotr al lenndi evit kement tra a denne d' ar stad. Gwashañ-holl, ne oa ket tu d' ober d' ar genaoueg tevel, zoken goude ma oa bet displeget dezhañ na chomfe ket ar Ministr nevez e penn an traoù ouzhpenn un hanter-devezh all. Kement a gomzoù vil a zislonkas an oristal ma kavas d' an Ao. Pichavant, hag eñ kargiad, e oa furoc'h mont kuit. Ha kuit ez eas, feuket ha meurdeuz, o kas gantañ e gevrin, dindan selloù mantret ar vaouez a-dreñv he c'hontouer.

* * *

11

Ne oa ket mat d' un den sammet gant prederioù ul lenndi bezañ luziet e darvoudoù ken iskis hag, e-lec'h distreiñ war-eeun d' ar gêr, en doe c'hoant an Ao. Pichavant, war zigarez lakaat un tammig urzh en e soñjoù, mont da aveliñ e benn a-hed ar stêr. Ur vouezh ennañ, mouezh arabadus ar furnez, a lavare e vije kalz poellekoc'h chom hep prederiañ ken war gement-se, mont da zebriñ ar soubenn ha da selaou ar skingomz. Met an implijad reizhet-mat a oa an Ao. Pichavant a anavez, evit ur wech, broud ar gwallyouloù a vez morgousket er furañ tud, hag a blegas da hoal ar skrij e-giz ma pleg ur c'hrennardig da hoal un divronn hilligus. Derc'hel a reas 'ta da ziskenn war-du ar stêr, birvidik ha spontet evel ur c'holejian a ya evit ar wech kentañ da gaout ur chevrenn.

Mat en doa graet o chom hep kontañ er burev-tabok ar pezh a oa c'hoarvezet el lenndi : abred a-walc'h e vije anat e follentez d' an holl. Ne blije ket d' an Ao. Pichavant lakaat brudoù da redek, zoken ma oa un dudi dezhañ, pa veze dirak e vanne Pikon, klevout anezho o redek. Ouzhpenn-se e kare an denig kozh, abaoe keit amzer e wele anezhañ o tont da dremen an endervezh er sal vras. N' eo ket en dije lennet kalz. Ne lenne tamm ebet zoken. E-pad ar goañv e teue d' en em dommañ, hag e-pad an hañv e teue peogwir en doa kemeret ar pleg da zont. Dleet en dije an Ao. Pichavant, e gwirionez, lakaat anezhañ er-maez, ha bezañ aet evel-se a-enep ar reolenn a nec'he un tamm mat e spered. Met ken sioul e oa bet an denig kozh betek-hen. Evel just, ma kendalc'hfe d' ober trouz evel hiziv ne vefe ket mui tu da chom hep teurel pled. Hag aon a oa da gaout e kendalc'hfe. Ur barrad kentañ en doa bet el lenndi, ha keleier ar burev-tabok a ziskoueze e oa peg-mat ar c'hleñved ennañ. Efed an dienez, moarvat : n' hell ket unan en em vagañ diwar un tammig soubenn-zour ha chom yac'h a spered daoust da se. Un dra trist. Trist-meurbet. Hogen, da bep hini e drubuילוù. Hag eñ, an Ao. Pichavant, a lakfe anezhañ er-maez hep termal ur vunutenn ma kasfe reuz ur wech all.

Goustad e oa deut ar c'hleñved warnañ, moarvat, rak a-raok hiziv n' en doa ket an Ao. Pichavant merzet tra. Koulskoude, bremañ ma prederie mat, e teue soñj dezhañ en doa an denig kozh en em renet en un doare iskis-bras e-doug an endervezh : n' en doa ket kinniget e di da zen ebet da bremañ, tennet en doa ul levr eus e chakod, ha chomet e oa da lenn tost betek an noz. An holl amzer-se e oa bet ar barrad o c'horiñ ha souezh ebet neuze ma oa bet ken grevus an traoù : berniet en doa an denig kozh un niver follennoù tailhoù war an daol, renket anezho hervez o liv, ar re c'hlas a-gevret, goude-se ar re wenn, ha goude ar re roz, e doare da stummañ ur mell banniel gall ; neuze e oa savet, freget en doa ar paperennoù, stlapet anezho d' al laez, chouket lod en e chakod, hag aet e oa kuit en ur leuskel chouadennoù hag en ur hejañ e levr er vann evel ur vouc'hal. Skrijañ a rae c'hoazh an Ao. Pichavant pa gleve ar chou dre e eñvor.

A-sav e chomas an implijad. Pelloc'h e oa aet eget na soñje dezhañ, dalc'het e spered gant kan ar stêr ha red e brederioù. Dianket en em gave ha krenañ a reas. E-kreiz an deñvalijenn e wele keinoù kromm o tremen hag en un takad duoc'h dindan ur wezenn e spurmantas, viñset warnañ, daou lagad ruz, lemm evel daoulagad ul logodenn wenn. Hejañ 'reas ar skourroù en avel ha gant o sarac'h e teuas betek ennañ c'hoarzhadennoù foll. Eno e oa an denig kozh o kantren. Un nebeut kammedoù a reas an Ao. Pichavant war e gil, didrouz-kaer, hep dibarañ e sell diwar an daoulagad ruz dindan ar wezenn, ha neuze, o treiñ trumm e gein, e tec'has d' ar red.

* * *

Moarvat e oa deut mezh d' an denig kozh gant e istrogelloù, rak e-pad ur sizhun n' en em ziskouezas e lec'h ebet, ket zoken e stal ar baraer. « Evel-se e sioulaio dezhañ, » a soñje an Ao. Pichavant seder-holl. Ha sioulaet e oa dezhañ e gwirionez pa tistroas d' al lenndi, o vlinkañ e zaoulagad hag o ruzañ e gorf a-hed ar speurennoù evel a-raok. Sioul ez azezas e-kichen ar fornigell klouar ha sioul e follennatas ar c'hazetennoù, evit brasañ plijadur an Ao. Pichavant, betek ar poent ma stagas da fic'hellat en un doare diot outañ e-unan. Aon en doe paotr al lenndi na begfe ur barrad all ennañ, ha buan ez eas en e vetek. Met ne oa ket troet an denig kozh d' ober cholori : brizhc'hoarzhin ne rae ken, kuzhet e vuzelloù moan gant un dorn, e-giz d' ur bugel bihan er skol, hag o tiskouez gant an dorn all ar pennadig a gemenne da lennerien **Le Cablogramme de l'Ouest** e oa marv ar perseptour en ur vourc'hig e-kichen. Ur c'hruz a reas an Ao. Pichavant d' e skoaz ha pa droe ul lenner e zaoulagad souezhet davetañ, e skoas tristidik un nebeut taolioù gant e viz war e dal. « Da nebeutañ, » a hiboudas, disammet, o vont en-dro da gaout e logellig, « bremañ ne ra ket mui kalz trouz. » Eizhtez goude, avat, e tiskorde an den da c'hoarzhin en un doare ken divalav dirak ur pennad o tisplegañ e oa aet d'an anaon ur perseptour all c'hoazh na n' hellas ket paotr al lenndi tremen pelloc'h hep lakaat ar reolenn da dalvezout : kregiñ a reas en denig kozh dre e vrec'h ha kas anezhañ, hejet e gorf treut gant ar c'hoarzhadennoù, war-du an nor. Mantret e oa an Ao. Pichavant met lakaat a reas e spered e plas peoc'h o soñjal e vije tommoc'h an devezhioù a-barzh nebeut amzer.

Pa oa marv an eil perseptour o doa lavaret an dud e oa reuziet-kenañ familh vras ar berseptourien. Pa varvas un trede hini, avat, e santas ar re a oa eus ar vicher ur gridienn o redek a-hed livenn o c'hein, hag e krogas ar re na oant ket d' ober farsadennoù divalav evel « Pe da vare de e vo diouennet ar re-se ? » pe c'hoazh « Da biv 'ta e vo paeet an tailhoù hiviziken ? » Hogen pa drementas ur pevare d' ar bed all e troas an aon da vraouac'h, ar godiserezh da gleñved-nervennoù, ha ne voe mui komzet a gement-se nemet a vouezh izel hag etre mignoned vat hepken. Dont a reas kazetennerien eus Pariz da luc'hskeudenniñ burevioù ar re varv ha da zivizout gant o gwragez ; embannet e voe o foltredoù en o dilhad komunion kentañ ha peogwir e oant bet kavet divuhez a-dreñv o zaol-gont e voent meulet evel kadourien kouezhet e servij ar vro ha goulennet zoken ma vefe roet dezho al *Legion d'honneur*.

Nikun, avat, ne oa frometoc'h gant an darvoudoù eget an denig kozh. Deut e oa dezhañ ur vuhez nevez gant al levnez goapaus a sile dre wask e valvennoù

ruz. Devezhiou a-bezh a dremene bremañ e burev an tailhoù, diflach war e gador, direspont pa veze galvet, oc'h ober tra nemet parañ ur sell leun a ouiziegezh war an den yaouank kran e lunedoù tev, evel o c'hortoz anezhañ da gouezhañ marv-mik e-giz d' e genseurtes, hag o c'hortoz kaout ar blijadur eus an arvest. Pa serred an ti e veze ret-mat dezhañ mont kuit. Keuz a veze gantañ neuze, hag un ehan a rae atav war an treuzoù, kerseet, da welout hag en e sav edo c'hoazh ar perseptour a-dreñv e brenestrig.

Merzet e oa bet doareoù an denig kozh, ha komprenet an abeg anezho. Klaoustreou a voe graet er burev-tabok, daoust ha padout a rafe pell a-walc'h an den, pe ne rafe ket, da welout e berseptour, e hini dezhañ, o vervel. An darn vrasañ a barie na badfe ket. Tanav evel ur spes e oa deut da vezañ gant an naon hag aspedus e trabidelle bremañ a stal da stal da ginnig e di. Penaos prenañ avat, zoken evit saveteiñ e vuhez dezhañ, p' edo ar gouarnamant o paouez lakaat tailhoù war ar boutonou-dor hag o vont da sevel ur c'hwec'hvet pedervedenn-da-c'hortoz ? Sed a lavare an holl gant un aer mantret. Sed a lavare maouez ar burev-tabok evel ar re all. Ha hi koulskoude, a brenas, an deiz ma fatas an denig kozh dirak toull he dor ha ma rankas sankañ pemp gwerennad rom etre e vuñsoù dizant a-barzh ober dezhañ distreiñ d' e veiz. Keuz he doe diouzhtu, gwir eo, d' hec'h oberenn vat, hag he soñj a reas goulenn groñs hec'h arc'hant en-dro ar wech kentañ ma teufe an denig kozh betek he stal. Pa zeuas, avat, e prenas div voutailh rom a baeas war an taol, ha hi ne gredas ket rannañ grik. C'hoarzhin leizh o c'halon a reas an daou bratik a oa eno : moarvat e felle d' an hini kozh, emezo, lidañ en un doare dereat marv ar perseptour a oa aet da anaon en derc'hent ur c'hant kilometr bennak ac'hane. Met kollet e voe ar farsadenn evit ar vaouez fur : bec'h a oa warni o jediñ pet boutailh rom plouz a vije ret gwerzhañ dezhañ a-benn adkavout priz an ti ; ha neuze, birvidik he c'halon, ez erbedas buhez an denig kozh da sant patron ar vezvierien.

14
* * *

Ur mare alaouret a voe hennezh evit maouez ar burev-tabok, dreist-holl adal an deiz ma teuas ensellerien eus ar polis da evañ eno banneou. Rankout a reas kemer ur plac'h da sikour hag ur sadorn d'abardaez, zoken, ne voent ket o-div evit herzel : ar baotred a oa bet tommet dezho muioc'h eget kustum gant keleier ar gazetenn, ha fonnus ez ae an evajoù d' an traoñ pa zispleged ha pa addispleged an afer dre ar munud. Ar perseptour marv da ziwedhañ a oa bet kavet en e lagad kleiz un tammig dir bihan-bihan, heñvel a-walc'h ouzh beg moan ur spilhenn, ha da heul e oa bet dizouaret an holl re all, hep frouezh ebet nemet lakaat unan eus an intañvezed da vervej diwar he from ha div all da gouezhañ gant ar glizi. Hag a-se e teue ar chou er burev-tabok, lod o lavarout e oa mezh bezañ aet da denañ korfoù marv eus an douar evit ober plijadur d' ur barner-enklask faoutet e glopenn, lod all o respont en doa graet an den e vicher - e oa kuzhet diskoulm ar gudenn el lagad toullet-se, en holl daoulagadoù ar berseptourien varv pe da vervel.

Re zalc'het e oa tud kêr gant tousmac'h an darvoudoù perseptourel, fromusoc'h-fromusañ pep sizhun, evit kemer preder gant boazioù nevez an denig kozh. A-boan ma veze meneget, diwar dremen, e oa bet gwelet an neizheur azezet war ziri al lenndi gant ur voutailh e pep chakod, pe kavet mezv-dall e-kreiz ar saoiñ dirak burev an tailhoù. En ur mare all e vefe bet fistilhet pezh a gar a-zivout un dibenn ken truezus d' ur vuhez ken dereat. Santout a raed, avat, e vije bet pec'hed teurel evezh ouzh tra estr eget ar marvoù iskis, dreist-holl pa bege ar vosenn gevrinus en hevelep rummad atav, o lezel gant ar re all plijadur digemmesk an arvesterezh.

15

Unan a oa e kêr, evelkent; ha na chome ket ken dichal-se eus an denig kozh, hag hennezh a oa an Ao. perseptour e-unan. Bremañ e c'hortoze anezhañ da zont gant ar mall spontet a vez en dud a rank tremen dre un abadenn diaes ha n'o deus ken c'hoant nemet tremen drezi ha bezañ echu ganti buan-ha-buan : didrouz evel un tasmant ez antree an denig kozh, e voutailh rom dindan e vrec'h, didrouz ec'h azeze war ar gador rag-enep d' ar prenestr bihan, ha didrouz e chome puchet eno, e-giz d' ur c'hazh dirak toull ur razhedenn. Ar mousc'hoarzh liv ar vered a

sonne e vuzelloù glas a rae d' ar perseptour kran santout ur c'hwezenn yen war e dal ha klozañ e zaoulagad a-dreñv e lunedoù tev.

Pa zeu ar marv deoc'h e welit atav un arouez bennak, a lavarar. Un deiz e welas ar perseptour an arouez-se e daoulagad an denig kozh : ur flammenn, flammenn ar gwad pe ar c'hoant, a rae d' e chink krenañ a varradoù betek skeiñ ouzh beg e fri, a rae zoken d' al liv sevel tenerik d' e zivjod. Meizañ a reas ar perseptour yaouank e oa deut ar c'houlz bras evitañ.

« Mat, mat, » a c'hrozmolaz, fougeus a-walc'h. « Prest on... Hogen ra baouezo hemañ kozh da sellout ouzhin e-giz-mañ ! Ra baouezo d' ober goap gant e zaoulagad ruz... » Astenn a reas e zorn da begiñ er pod-liv, d' ober d' an daoulagad boemet dibarañ diwar e fas, d' ar malvennoù diskenn war ar sell ruz kasaus, pa stagas a-greiz-holl da c'hoarzhin outañ e-unan. « Kompren a ran, » a soñjas, « peogwir n'am eus ket va lunedoù ken, » Ur seurt goaperezh kañv a grogas ennañ. « Ma, ne felle ket din mervel gant ar rikoù-se war va fri. Petra 'm bije graet ganto er bed all ? »

C'hoant a savas ennañ daeañ an tonkadur. Da nebeutañ, daeañ hennezh diot a zegase gantañ flaer skornet ar marv. Bountañ a reas e benn dre ar prenestrig:

« Petra 'c'h eus ezhom, ankou ? »

Ne c'hortoze ket an denig kozh da sevel. Sevel a reas koulskoude, ha tostaat en ur drabidellañ. Fiñval a reas e vuzelloù evel re ur wrac'h o vervel e korn an dar. Poan en doa o chom sonn war e zivesker met sachet, dedennet e oa gant ar perseptour, a vije bet lavaret, evel un touseg gant ar silienn-c'harzh. Ne denne ket e sell diwar daoulagad an den yaouank kran. Bruchediñ a reas ouzh plankennig ar prenestr ha tennañ ur sigarenn eus e chakod-diabarzh. Krenañ 'rae e zorn.

« Tan hoc'h eus ? » a vesteodas, o vont tostañ m' helle ouzh fas an den yaouank.

Ne gomprenas ket ar perseptour petra c'hoarveze. Santout a reas un taol en e lagad. Gwelout a reas genou an denig kozh o tisleviñ, e jav o tigeriñ gant ar sebez. Klevout a reas anezhañ o youc'hal a-daolioù, skiltr evel ul labous mor, a-raok kouezhañ. Ha pa zeuas un tammig meiz ennañ en-dro, e stouas dreist e daol d' ober ur sell sabatuet ouzh ar c'horf astennet war al leur.

16
* * *

Unan eus ar gazetennourien a voe ar chañs gantañ en deiz-se. Bez' edo el lenndi o tiskuizhañ hag o tañva plijadur ur sigaretenn butunet er sioulder pa oa deut unan bennak da reiñ keloù eus darvoud iskis ar burev-tailhoù. Ne oa ket chomet ar paotr da rañhouenniñ : tapet en doa peg en Ao. Pichavant hag hep lezel gantañ amzer da dennañ e vañchetennoù zoken en doa bountet en e raok an implijad krendigren, dezhañ da ziskouez ar berrañ hent betek ti ar perseptour.

Ne oa eno, pa errujont, nemet un nebeut arvestourien hag hep diskleriadur ebet e lakaas ar c'hazetennour anezho er-maez. Gouzout a ouie mat e veze atav ar boliserien ar re ziwezhañ o klevout ar c'heleier, hogen daoust da se ne oa ket amzer da goll. Dastum a reas ar sigarenn, dastum a reas tog-meloñs an denig kozh, luc'hskeudenniñ a reas ar c'horf marv, ar gador a oa e-kichen, goude-se ar c'horf war ar gador, goude ar prenestrig, ar c'haieroù bras, an arbell-houarn, ar pod-liv, pediñ a reas ar perseptour d' en em lakaat e-tal ar skritell a c'houlenne arc'hant evit kant pemzekvet amprest bras ar Republik ha tennañ a reas poltre an daou. Keuz en doe dre na c'helle ket sammañ ar c'horf marv gantañ : m' en dije bet e garr... Met n' en doa ket ; ha neuze, deut e vije ar polis a-benn da c'houzout un deiz bennak. Teurel a reas 'ta e godak a-dreuz e skoaz ha mont a-dizh, o sachañ an implijad hag o vountañ ar perseptour, d' al lastez kambrig m' en doa bevet an den kozh.

Enklaskerien a-berzh-stad a vije lammet da furchal e-touez ar paperennoù drailhet dindan ar gwele, o dije goullonderet ar fornigell, diswriet ar vatarasenn, disvontet pavioù an daol, studiet gant ur werenn-greskiñ rovijennoù ar plañchod. Ar c'hazetennour, avat, ne reas ken tra nemet mont da gaout an daol, tennañ an diretenn er-maez, diskargañ anezhi war ar gwele, ha dastum ar pezh a gave talvoudus, pe souezhus : da lavarout eo ur strobad paperennoù, ur voestig, hag ur fiolenn. Ar paperennoù - embannoù-kañv ar berseptourien, troc'het diwar kazetennoù ar c'horn-bro - a oa spilhennet ouzh pep hini anezho ur bilhed-karr evit al lec'h hag an deiz ma oa bet graet ar muntr : « Un den a urzh, » eme ar c'hazetennour, o sankañ ar strobad en e chakod. Ar voestig a oa enni begoù madozioù : « Un den iskis, » eme ar c'hazetennour, o kas ar voestig, dre voaz muioc'h eget dre c'hoant, da heul an troc'hadennoù paper. Ar fiolenn a oa skrivet warni ar ger Kurar : « Kurar, kurar... » eme ar c'hazetennour, e zorn o chom a-sav, gant ar souezh, hanter-hent d' e chakod ; « kurar... a ya ! soñj am eus. » Hag outañ e-unan e tribunas : « Kontamm diwar blant. A lazhañ an dud dre seizañ nervennoù ar galon hag ar skevent. » Echuiñ a reas e jestr ha kleñkañ ar fiolenn aketus-bras : « Un den a ouieziegezh », emezañ. Pezh a santas neuze dindan e vizied, avat, a reas d'ur menoz nevez tarzhañ en e spered, hag a-dost e sellas ouzh ar sigarenn a oa gantañ en e zorn : toullet e oa, eus an eil penn d' egile, gant ur gorzennig moan-moan. C'hoarzhin a reas : « Un den a ijin ! Implijout a rae an dra-se evel ur sifoc'hell evit teurel flemmoù ampoezonet ».

17

E c'hoarzhadenn he doa graet d' an Ao. Pichavant dilammat gant ar spont. Treiñ a reas ar c'hazetennour war-du ennañ, ha goude-se war-du ar perseptour, a oa chomet keit-all kollet en e souezh. Ur strilh a reas d' ar paotr yaouank kran evit e zihuniñ.

« C'hwi an hini eo a gase dezhañ kement-mañ ? » a c'houlennas, o tiskouez ar follennoù-tailhoù peget ouzh ar voger.. ken bras an niver anezho ma c'holoent ar speurenn penn-da-benn.

Un hikadenn a zeuas gant ar paotr yaouank, ha kompren a reas ar c'hazetennour en doa bet c'hoant da lavarout ya.

« Evidoc'h e oa bet renket pep tra, » a zisklerias, hegarat e vousc'hoarzh. « Ar re all, kompren a rit, ne oant nemet un digarez da gaout un tammig embregerezh. Met c'hwi, e berseptour, a oa dalc'het evel ul lip-e-bav evit an diwezh .» Huanadiñ a reas ar c'hazetennour. « N' eo ket souezh e vije bet seizet dezhañ e galon, ar paour-kaezh den kozh, o welout en doa c'hwitet. » Pegiñ a reas er paotr yaouank dre e zivskoaz, sellout outañ e-kreiz e zremm, hag ober dezhañ ur strilh adarre evit bezañ sur e klevfe mat e gomzoù : « Ur chañs : eo bet deoc'h kaout war ho taoulagad gwer kromm didorrus. Ur chañs... » Ken trumm e tiskrogas dioutañ ma voe darbet d' egile kouezhañ flak en e boull. « Diskouez a rafec'h din unan ? »

Daoust d' e grenezh e teuas ar perseptour a-benn da dennañ a-zindan e valvennoù ur gwer plasteg eus ar seurt a vez douget, e-lec'h lunedoù, gant an dud a gas an ton war-raok.

« Trugarez, » emezañ. E don ar chakod ez eas ar werenn da gaout ar sigarenn hag, hep teurel pled pelloc'h ouzh an daou all, e tigoras ar c'hazetennour e godak.

Bez' edo a-zevri o tennañ skeudennoù pa voe klevet boteier ponner o sevel goustadik gant an dirioù, ken goustadik ma oa anat o doa ar weladennerien aon bras da resev ur bolead tennoù fuzuilh bewech ma pignent gant ur bazenn nevez.

18

« Petra 'zo peg e revr ar re-se o tont amañ ken prim all ? » a c'hrozmolas ar c'hazetennour. « Setu ma rankin loc'hañ kuit pa n'eo ket hanter-c'hraet va labour, an amprevaned ! » Teurel a reas ur sell war e dro : ne oa mui tra ebet da skrapañ. Al levr war an daol, marteze ? Foei, nann, ne oa ket dedennus a-walc'h da welout : unan eus ar seurt levrioù a vez moulet gant ar Waskerell Vat evit ar grennarded fur. Koulskoude oa debron en e zorn da gemer un dra bennak ha, gant ar boliserien o tostaat, pazenn ha pazenn, e oa ret hastañ buan.

Pismigus e zoare e lennas an anv : un istor diot bennak diwar-benn an Indianed.
« Bo, bo ! » emezañ, ouzh e sammañ memes tra, « servij a ray atav da dremen an
amzer. Ha degas, a ray din soñj eus va yaouankiz. »

Poent e oa dilec'hiañ. Pignat a reas un estaj uheloc'h, lezel ar
boliserien da vont e-barzh ar gambr ha, p' en doe klevet anezho oc'h
alc'houeziañ an nor war o lerc'h, hag o verniañ an daol, ar gwele hag ar gador
a-dreñv dezhi, ez en em silas er-maez ken skañv hag ur gwiñver. Ne gouskas ket
kalz en nozvezh-se : en tren e oa, o lenn levr an denig kozh, ha ken dedennus e
kavas ar skrid ma 'z eas betek ar bajenn diwezhañ hep dispegañ. Ha, peogwir e
ouie tennañ e vad eus pep tra, en doa savet, a-raok bezañ erru e Pariz zoken, ur
pennad iskis-meurbet a-zivout. Implij ar sifoc'hell evel arm-brezel gant an
Indianed Bororo, e kompezennoù gouez an Amazonia. Ar pezh a dalvezas dezhañ
bezañ dibabet gant e renerien evit mont da welout war al lec'h perak ne oa bet
dispac'h ebet er bloavezh-se e bro ar Venezuela.

* * *

19

Ar burev-tabok a zeuas neuze dezhañ ur vrud hag a zigollas ar vaouez, kant
gwech evit unan, eus ar brenadenn diot he doa graet. Kavet e oa bet boutailhoù
rom eus he stal e kambr an denig kozh, ken e oa bet taolet disfiziañs warni gant
an enklaskerien : goulennataet e oa bet, en dihun ha dindan gousk, goulennataet
he matezh, ha lakaet ur poliser d' o evezhiañ ; hemañ, disheñvel e zilhad ha liv
e vourroù bep taol, a zeue n' ouied pet gwech bemdez da evañ banneoù ouzh korn
ar c'hontouer, e spi da glevout ur frazennig bennak hag a rofe diskoulm ar
gudenn ; desket en doa zoken un nebeut bommoù brezhoneg, pa veze komzet c'hoazh
ar yezh-se gant an dud kozh, ha koustiañsus-bras e talc'he da gemer notennoù :
anavezet-mat e oa, daoust ma ne ziskouezed ket ober van outañ, hag ar sul d'
endervezh e teue tud eus kêr, e-lec'h mont d' ar fiñvskeudenn, da welout anezhañ
oc'h evezhiañ. Ha banneoù ar poliser, koulz ha re ar weladennerien, ma ne zeuent
ket eus an hevelep boutailh, a zegase arc'hant d' an hevelep kef. Ouzhpenn e oa
ar gazetennerien, ar filmourien, ar skingomzourien, ar fistoulerien hag ar
frioù-furch a bep seurt. Ouzhpenn e oa, dreist-holl, an Ao. Pichavant, ha na
gonte ket mui e werennadoù Pikon abaoe m' en doa anezho evit netra, gant e
vodadegoù : an implijad paour, ha n' en doa ket gallet diskleriañ en un doare
komprenus perak ez en em gave e kambr an denig kozh pa oa erru an enklaskerien
war al lec'h, a oa bet tamallet outañ bezañ dedennet ar perseptour eno evit e
lazhañ ; taolet e oa bet en toull-bac'h, ha muioc'h eget daou viz e vije chomet
eno ma ne vije ket c'hoarvezet d' ar c'homiser lenn, en ur gelaouenn gozh, ur
pennad o tisplegañ kudenn ar muntroù penn-da-benn. Amzer en doa bet ar paotr,
evelkent, da anzav kement tra a oa bet goulennet gantañ anzav, ha da zont da
grediñ enno zoken : ken e kave dezhañ en doa kemeret perzh evit gwir e lazhadeg
ar berseptourien, hag e faltazi, dichadennet gant ar polis hag ar Pikon, a ijine
dibaouez munudoù nevez. E selaou a rae an dud e-giz ma selaouer war ar blasenn
ar fistilher a ginnig deoc'h, evit priz ur bara bihan, ul louzou da lakaat ho
plev da greskiñ ha, war ar marc'had, un dirouestlerez d' o c'hribañ Pa vint
kresket : gant plijadur, hep krediñ tamm. Ma ne gredent ket avat en doa lazhed
biskoazh perseptour ebet, ne oant ket sur na lazhfe biken hini ebet : pe ma n'
en defe tamm perseptour dindan e zorn d' an ampoent, unan bennak re fizius an
tamm anezhañ, pe anezhi. Pe anezhi, a lavarent, arouezius ton o mouezh, ouzh
maouez ar burev-tabok. Met an itron fur a chome diefed warni ar c'huzulioù mat :
respont a rae dezho gant he mousc'hoarzh ar muiañ ostizel, ha ne baouezze ket a
gargañ e werenn da baotr al lenndi bewech ma c'houlenne. Ha n' eo ket foeltriñ
hec'h arc'hant a rae e-giz-se, a c'hellit krediñ. Rak an hini gentañ e voe e kêr
o lakaat stankañ an daou brenestr bras a bep tu d' he dor pa savas ar
gouarnamant un tailh nevez war gwer ar stalioù. Ar pezh a ziskouez e oa stank a-
walc'h ar gwenneien en he yalc'h, neketa ?

(1951)

gant Rojer BRISON

Menzioù an Aotrou a vez alies kevrinus, hag ar re en deus dibabet evit seveniñ e lezenn a ya a-wechoù betek ennañ dre hentoù iskis meurbet. Da brouenn ne rin nemet displegañ amañ istor santel-tre ar c'habiten Torrbenn ha lavarout penaos e teuas en dro da vezañ ur c'hristen mat.

Ne gredan ket e talvez ar boan tresañ deoc'h skeudenn ar c'hozh korser-se, a oa garanet war e zremm roud an holl dechoù fall dre ma n' en doa ket gouezet en em reiñ dezho evel un den a zoareoù mat. Pezh hoc'h eus da c'houzout hepken eo en doa war dro hanter-kant vloaz, hag e oa gantañ ur revriad a chomas brudet pell an eñvor anezhañ, pa voe tizhet gant gras an Aotrou.

Neuze 'ta, en nozvezh-se, hag eñ war Kae ar Foz, deut da vezañ evitañ un hent Damas flaerius ha trabidellek, e troas da soñjal en e amzer-dremenet.

Merzout a reas gant heug n' en doa kollet betek-hen tro ebet da bec'hiñ a enep an dek gourc'hemenn. Al laer, ar gastaouer, ar mezhvier anezhañ, bez' en doa gwallet, skrapet, truchet er c'hoari, likaouet gwreg e nesañ, ha graet ur bern pec'hedoù bihan all hag a boueze ponner koulskoude, daoust pegen dister e oant, war e goustiañs.

Ha bremañ ma oa war e leve, petra rae ' ta ? Sioul-kenañ e spered e tenne plijadur eus ar madoù en doa labouret ken kalet da laerezh digant ar re all, hag e kastize dibaouez e gorf o vont da dremen e amzer e bistroioù lous gant gisti.

Betek-hen, ne oa ket dent ennañ an disterañ skeud eus ur morc'hed, rak, e-pad ma oa bet o kas da benn e droioù fall a bep seurt, n' en doa santet morse nemet plijadur digemmesk un artizan mat dirak al labour sevenet aketus.

Aet e oa zoken betek soñjal en dije gallet an Aotrou derc'hel kont, n' eo ket e oa bet dinoaz e venozioù, met n' en doa bet e gwirionez menoz ebet ; ar seurt poellatadenn douellus avat ne renas ket pell en e spered rak, e-tal ar Menozioù ez eus an Oberoù ha falloni re anat ar re-se a leunie e galon gant un aon bras rak poanioù an ifern ; hag ar seurt aon an hini eo a ouezas menegiñ e berr-gomzoù, pa hiketas, astennet a-hed e gorf er rigolenn : « Tri mil c'hast, ret din memes tra saveteiñ va ene divarvel ».

21

Saveteiñ e ene, sed aze ar gudenn vras. Ti an Tad, avat, en deus meur a zor, evel ma oar an holl. Bez ez eus lod hag a zibab ar yun hag an emgastiz, ar bedenn hag ar sae-reun, bez ez eus lod all hag a zibab chom da c'houzañv e-touez an dud, ha reiñ o holl vadoù d' ar re gamm, d' ar re dort, d' ar re dall, d' ar re naplezet, da gement kristen, a-dreuz e gorf pe e spered, hag a zo bet krouet gant an Aotrou, bez ez eus erfin lod ha na zibabont netra, hag a c'hortoz ar silvidigezh evel ur seurt priz kentañ el lotiri pe c'hoazh ur bilhed a vezo, forzh petra a c'hoarvez, paeet deoc'h en dro ar priz anezhañ. Tud mezh avat, ha bugale, a zibab atav an hent eeunañ, hag an hent-se an hini eo a voe kemeret gant ar c'habiten Torrbenn.

Saveteiñ e ene ? Ret e oa da gentañ soñjal saveteiñ ene krouadurien all Doue, ha gwall souezhus e vefe ma ne vefe ket saveteet e hini er memes taol.

Met peseurt krouadurien ? E sklerijenn e galon oc'h adgenel en Aotrou, e soñjas diouzhtu ar c'habiten er grouadurien ar pellañ dioutañ, ar muiañ dibourvez eus pep tra denel, er c'hrouadurien-se hag a chom, en abeg d' o doareoù loenel ken estren d' an Disklaeriadur, e morianed ar Senegal a anaveze ken mat.

Da lavarout ar wirionez, goulenn a reas da gentañ outañ e unan hag-eñ o

doa an dud-se un ene. Ur beleg eus e vignoned, hag a oa bet difennet outañ, a-hend-all, lavarout an oferenn, a suraas dezhañ o doa, hag evel se e c'hellas en em reiñ dizaon d' e vision a silvidigezh.

* * *

Da gentañ e fretas ur vag. N' eo ket unan eus ar boteier-koad didouillet, didammet ha takonet a vez gant ar besketourien baour, nag ivez unan eus ar batimanchoù otus a ra lorc'h ar c'hompagnunezhioù bras, met, skañv dindan he gouelioù gwenn, ur oueletenn vistr ha gwevn.

Gant karantez e lakaas fichañ ar vag, hag eñ e unan a evezhias ouzh pep tra. An daou gal bras a voe pontet, ha lodennet e voent e kambroù bihan. Evit un abeg na zisplegas da zen, e lakaas kinklañ an diabarzh anezho gant steudadoù gwalennoù houarn riñvedet ouzh ar speurennoù. Ne zisoñjas ket avat e oa ivez an Doue a Vadelezh an *Domitius Deus Sabaoth*, ha, d' e enoriñ, e lakaas fardañ war e vag daouzek pezh-kanol gant boledoù ha kargousennoù a bep seurt.

A-benn ar fin e teuas devezh bras an disparti. Kochet war ar follennoù-paramantiñ an diwezhañ chap, an diwezhañ dournad stoup, an diwezhañ podig godron, chouket e akipaj a daolioù-treid er-maez eus an tavarnioù e lec'h ma oant o vezviñ ur wech diwezhañ, e savas an eor, ha, dindan un avel vervent o c'hwezhañ plijus en e fok bras hag en o obañchoù, e kuitaas ar porzh.

22

An noz kentañ, pa oa bannoù sklas al loar o kantren en dro d' ar vag skedus, e helmoas war daol ar ged, leun barr e galon gant ur joa neñvel. Gouzout a rae en dije da c'houzañv o welout an dud chatalaet a oa o vont daveto, o welout an dud-se, bet stummet gant Doue diwar e batrom pa ne oa ket o teurel pled bras emichañs ouzh ar pezh a rae. Met daoust ha ne oa ket eñ al louzoù gortozet ken pell, an traet a yec'hed, an dour burzhudus war ar gouli brein ? War an taol e skarzhas kuit pep c'hwervder eus e ene, ha daeroù a levenez a gouezhas puilh en e volennad rom.

* * *

Gwarez Doue a vez atav gant e servijerien, ha didrubuilh e tiskennas ar c'habiten Torrbenn betek glannoù ar Capo-Verde, e-lec'h ma eorias er basoù, e-tal enez Gore, gwarezet mat ouzh an tonnoù.

Kerkent hag an deiz war lerc'h, e tivizas douarañ, gant an hanter eus e vartoloded, evit gweladenniñ ar vro un tammig.

War dro daou viltir eus Gore, e don bae bihan Han, e-kichen ur stivell vat, ez eus un draezhenn na vez ket tizhet gant tonnoù ar mor don. Eno, goude sachañ kalet war ar roeñvoù e tiskennas ar bagadig santel, ha diouzhtu e kemerjont penn o hent war du kêriadennoù an hanternoz, N'Gor ha Kamberen.

N' o doa ket lakaet mat o zreid war an douar avat ma savas son un tam-tam, da gentañ tost outo, ha goude-se larkoc'h, ken ne dregernas betek penn-pellañ an dremmwel o kas d' ar pevar avel e heklevioù kevrinus. Peseurt keleier a oa kaset evel-se eus eil penn ar vro d' egile ? A-raok pell e tleent gouzout.

Hir eo an hent da vont eus Han betek hanternoz al ledenez. Hir ha tenn dindan ar seurt heol na vez morse mouchet a-hed mizvezhioù gant an disterañ kourmoulenn, e-barzh an traezh loskus a beg ouzh an treid hag a sil e pep lec'h bountet gant an avelioù bloaziek, a-dreuz ar plant-dreinek a zirog an dilhad hag an daouarn ; dreist pep tra avat, e oa ar vro dibourvez a-grenn eus pep bistro, tavarn pe ostaliri e lec'h ma c'hellfe kristenien damantus da ezhommoù reizh o c'horf freskaat un tammig o zuellennoù diabarzh. An holl avat a c'houzañvas an trubuilhoù gant kalonegezh, o kanañ meuleudi d' an Aotrou, bep an amzer, gant un nebeut jarneoù dibabet e touez ar re wellañ. Kement-se na feukas ket Torrbenn. Gouzout a ouie mat tre e veul pep hini an Aotrou evel m' eo techet e spered, ha sur e oa, e oa ken plijus da zivskouarn an Hollc'halloudek ar sakreoù breugeudet

gant e baotred, garv a gorf met glan a spered, eget rouzmouzerez leanezed diazez.

23

Hag atav e tregerne an tam-tam, a-wechoù tost, a-wechoù pelloc'h, war ul lusk foll hag a yae buanoc'h-buanañ, seul displijusoc'h dezho ma ne oa bet gwelet betek-hen den ebet, ha ma oant sammet gant an enkrez o soñjal en engroez tud kuzhet e gwrimennoù al latar hag ar brouskoad. Ur wech treuzet ar geunioù, e voe ret pignat gant ar menezioù heñvel ouzh bronnoù, hag, e toull an ode a oa etrezo, e c'helljont spurmantiñ, lugernus, ar mor, gant, he zraezhenn bevennet a eon, hag, enket etre barrenn an tonnoù hag al lagounenn, en un dizurzh mentoniezhel a gelc'hioù louet, kêriadenn N'Gor a ziskennet bremañ daveti.

Siwazh bremañ e komprenent kevrin an tam-tam : ar gêriadenn a oa goullo, goullo a-grenn. E kelc'h al lochennoù, danvezioù kotoñs lous taolet e-kichen ar milinoù mil, koulourdrennoù eilpennet, skodoù tan o tivogediñ goustadik, pep tra a ziskoueze spont un dec'hadedic dic'hortoz.

Ur birogenn diwezhañ a dreuze genou al lagounenn. Torrbenn a astennas e zorn serret war du enni, hag, o sevel a daol-trumm e renk Profeted an Diouganou Meur, e taolas war an dec'hourien du un aridennad mallozhioù hag a zisplege gant kalz a vunudoù, peseurt perzhioù fall o doa bet o mammoù ha mammoù o mammoù, betek n' ouzon ket pet remziad.

Ur vunutenn e voe temptet da begañ an tan er gêriadenn ; met soñjal a reas e oufe an Hini en doa kastizet Sodom ha Gomor plediñ gant ar gêriadenn-se ma vefe ret, ha divizout a reas fiziout penn-da-benn Ennañ evit pezh a selle ouzh al labour-se. A-hend-all, en em gave gwall nec'het ha menozioù du o plavañ en e spered a atize anezhañ da hastañ buan. Goude bezañ chomet a sav ur pennadig amzer e-tal ar poull-dour chag, e kemeras ar bagadig penn e hent en-dro.

Heuliañ a rejont an draezhenn, poblet bremañ ma oa diskennet al lanv, gant ar milieroù kranked-douar a ya da zebriñ ar c'horfoù brein n'o deus ket ar guped ezhomm anezho. Ar fru, taolet fonnus gant ar varrenn-tonnoù a dorre un tammig war nerzh an heol, met an holen a zeve an holl c'hourlañchennoù, hag e-pad teir eurvezh o devoe soudarded Doue da c'houzañv ur wir verzherinti a-raok diverzout toennoù lemm ha linennoù lieslivek pirogennoù Kamberen.

Siwazh, Kamberen a oa ken goullo ha N'Gor. E unan penn, un azen divlev ha kintus a valee dre ar wenodennoù traezh. Re galet e voe an taol-se evit Torrbenn, hag a gollas ur pennadig amzer e nerzh kalon. Azezañ a reas war an draezhenn, hag, e benn dalc'het etre e zaouarn, e prederias.

24

Prederiañ a reas, un enkrez ponner o sammañ e ene. Ur vezh loskus a leunias anezhañ, mezh Adam hag Eva pa weljont ez oant noazh. An doare ma oa bet tec'het ar re zu, an aon a lakae da sevel enno, kement-se a oa merk e fallentez a wechall, rak ma anaveze-eñ anezho, int-i ivez a anaveze anezhañ, hag a vire dioutañ eñvorennoù fall-daonet. Ne c'hellent ket gouzout, an dud paour-se, e oa deut ar wech-mañ gant ar menoz deol ha santel nemetañ da saveteiñ o ene divarvel. Daoust hag e ouient zoken o doa un ene divarvel ?

Met re zalc'het e oa Torrbenn gant e uhelvennad evit en em reiñ pell d' an dic'hoanag. Peogwir e oa an traoù e-giz-se, e lakfe an nerzh e servij an Aotrou, ar gwidre e servij ar feiz, saveteiñ a rafe o eneoù daoust dezho o-unan.

* * *

Ober a reas van da vont en dro da gaout e vag, met, da noz, e tistroas war-du kêriadenn N'Gor, e lec'h ma oa deut en dro ar vorianed, hag e kelc'hias anezhi.

Gouel bras a oa gant an dud du, hag an heklev anezhañ a oa kaset pell gant an tam-tam. Ne oa ket mui taboulin skrijus ar gwallzarvoudoù, taboulin an

dec'hadeg hag an enkrez, hogen, skrijusoc'h c'hoazh, taboulin al levenez, ar peoc'h adkavet. Kuzhet e touez ar plant-dreinek hag an erinoù, e wele ar vartoloded ar merc'hed o c'horfoù skedus o tañsal en dro d'an tantadoù, aet diskiant gant ar c'horoll, o skeiñ mibin an douar kaledet gant o seulioù noazh, o brozhioù skañv kotoñs lieslivet o tarnijal en-dro dezho. En o c'hic'hen, ar wazed a vente al lusk o stlakañ o daouarn, hag en ur leuskel youc'hadennoù a ziskoueze regennadoù lufurus o dent gwenn.

Ha kement-se a badas betek ar mintin, war ul lusk o vont gwashoc'h-gwashañ. Ne oa ket bet avat argaset mat an noz gant heol an trovanoù ma skornas al levenez e pep re zaoulagad morvitellet an dañserien : Torrbenn a oa aze, en o c'hreiz, o tiskouez dezho en em strollañ en dro dezhañ, ha ne oa tu ebet da dec'hout.

Gronnet e oa ar vorianed gant kelc'h ar vartoloded. Pell e sellas Torrbenn ouzh an engroez flaerius a gouerien rust ha lezirek, a besketourien re anavezet ganto riskloù spontus ar mor, hag ez astennas e zivrec'h evel evit o bennigañ, evel m' en doa gwelet ar Pastor-Mat oc'h ober war gwerennoù livet chapel Sant-Konan e Kerbezelleg.

25

Siwazh, daoust d' e levenez, nag un taol poanius a santas en e galon pa welas e vije re vihan e lestr evit kemer an holl war vourzh. An hanter hepken eus an dud-se a vije bet ponner a-walc'h evit kas ar vag d' ar strad. Ha mouezh e goustiañs a gunujenne anezhañ, a stlape mallozhioù warnañ. Lavarout a rae, mouezh e goustiañs : « Perak 'ta n' ac'h eus ket prenet ul lestr brasoc'h ? Perak n' ac'h eus ket espernet muioc'h a arc'hant ? Perak ac'h eus dispignet e boeson muioc'h eget an hanter eus ar pezh az poa ? » Ha mouezh e goustiañs a damalle outañ ne oa nemet ur podad visoù fall, ur sac'had gwin, ur bailhad fallentez hag ur varrikennad alkool.

Doe Abraham, Isaak ha Yakob a deurvezas avat dont war e skoazell hag ober dezhañ ijinañ, evit ar gudenn-se, un diskoulm-dereat ouzh e Furnez Divent. Peogwir ne oa tu da saveteiñ nemet lod eus an eneoù, koulz e oa saveteiñ eneoù ar re greñv, yac'h ha kempouezet-mat, ar re a vefe gouest, hervez gourc'hemenn an Aviel, da greskiñ ha da zont niverusoc'h, da vrudañ e pep lec'h ar C'helou Mat, da vezañ d' o zro Ebestel ar Goulou. D' an diaoul neuze ar re gamm, ar re dort, ar re dreut, ar re nammet ! D' an diaoul ! En ur serr-lagad e voe graet an dibab hag argaset kuit, a daolioù botoù ha skourjez, ar re fall, gant un daerded na oa nemet arouez an Druéz-Meur. Gant daeroù en e zaoulagad e sellas Torrbenn outo o vont kuit, ouzh an eneoù-se a zeuas en un taol, tostoc'h ouzh e galon eget an holl re all. Hogen e gwirionez, daoust ha ne roe ket dezho al lodenn wellañ ? Daoust ha ne oant ket fiziet en Hini a bourchas boued d' al laboused vihan hag a oufe ober war o zro ma vefe ret ?

Marteze zoken en em ziskoueze aze madelezh Doue en e wellañ. Marteze zoken e varfe an dud paour en un doare skrijus gant an naon hag ar sec'hed, met, oc'h ober sakrifis o buhez evit saveteiñ ar re all, ha deut evel-se da vezañ testoù muiañ-karet an Hollc'halloudek, e talvezfe o merzherinti dezho da vadeziant hag e vefent galvet da azezañ er Baradoz en tu dehou d' an Aotrou, e-touez an aeled gloriüs, evel ma oa bet divizet gant Tadoù ur c'honsil a wechall. Torrbenn ne ouie netra eus ar c'honsil-se, met ar Beurfurnez an hini eo en em ziskoueze ennañ, ar Verb a gomze drezañ, ha menozioù a oa evelse, drezañ, kaset da benn.

Gesta Dei per Torrbenn.

Ur gudenn avat a oa c'hoazh, a lakaas anezhañ nec'het bras. An dud paour-se ne gomzent nemet ar Oualoff. Un tammig amzer a vefe ret da zeskiñ dezho ar geriennoù kentañ galleg ha brezhoneg a oa ezhomm da gas anezho war hent ar sevenadurezh ; ha penaos ac'han da neuze anavezout an eil diouzh egile ? peogwir n' eus tra heñvel oc'h ouzh ur mab ar c'hast a vorian eget ur mab ar c'hast a vorian all.

26

Ar brovidañs a zeuas adarre war sikour he servijer. Ar paour-kaezh bugalese, ha n' o doa ket klevet c'hoazh komzoù an Aviel a oa deñved kollet an Aotrou,

neketa ? ha penaos 'ta e vez anavezet, an deñved en ur tropell ? Dre verkañ anezho gant un houarn ruz.

Dija e save c'hwez ar c'hig du rostet, ha war fasoù chatalek an dud-se, boazet abaoe keit-all ouzh ar merzherintioù lidel, ne vije ket gwelet an disterañ merk a boan.

Pa voe echu pep tra en em renkas dre bevar kristenienn nevez Torrbenn ha, sentus-kenañ, e kemerjont penn o hent war-du ar c'hreisteiz, da vezañ kaset ac'hano da Gore.

* * *

Eno en doa aozet Torrbenn evit morianed e gatekiz ul lec'h brav da ziskuizhañ. Un ti bihan, dilorc'h e oa, skedus-tan gant e vogerioù ruz hag e doenn teol, ken flamm war skramm glas peurbadus an oabl hag ar mor. Ur wezenn poultrennek a daole ur skeud aner war ar porzhig dalc'hmat dizarempred.

Evit en em gastizañ muioc'h c'hoazh, e viras Torrbenn evitañ e unan, ti bihan-se, ar c'hambrou tomm-gor, hag e roas d' ar vorianed ar c'hav ken fresk ha ken sur en doa lakaet kleuzañ e-kreiz ar roc'h. Marteze e oa un tammig strizh dezho aze, met kement-se ne cheñch nemet lakaat da greskiñ enno ar santadur a gumuniezh. Ouzhpenn-se, n' o doa ket kalz tra da zebriñ, met, ma teue o c'horfoù da vezañ un disterig gwanoc'h, nag un nerzh a zeue avat d' o eneoù, oc'h ober anaouedegezh gant ar vuhez kristen dre ar yun hag an dienez. Diwall a reas mat ar c'habiten ne c'hellfe an dud fiziet ennañ mont er-maez, gant aon e kouezhfent e temptadurioù an enez, dreist-holl en temptadur da dec'hout war neuñv eus an enezenn.

Bep an amzer, e save, a dreuz barrinier ar prenistri, tonioù korzailhennek ur werz melkonius. Ne gomprens ket Torrbenn ar c'homzoù anezhi, met aes e oa dezhañ santout enni fromadennoù ar ganerien, ha dizoleiñ luskoù un himn a anaouedegezh-vat, ur c'hantik a garantez en enor d' o salver.

Evel-se e tremenas ar goañvezh penn-da-benn, ar vorianed o veuliñ Torrbenn, Torrbenn o veuliñ an Aotrou.

* * *

Un nor a oa er c'hav, a zigore war-eeun war ar mor, evit ma vefe aesoc'h lakaat an dud d' en em walc'hiñ, ha teurel er-maez ar c'horfoù-marv. Dre an nor-se, rakskeudenn eus an Nor Strizh, ma vez anv anezhi en Aviel, e voe kaset ar re zu da lestrañ, kerkent ha deut en dro an avelioù bloaziek.

27

Ha war ar vag e voe anat ur wech muioc'h, ijin e ragevezh deol. Ar vorianed paour se ne oant aet morse war vor, ha da ziwall na yafent da redek amañ hag ahont gant ar spont, da ziwall na gouezhfent er mor e touez ar morvleizi hag ar morgoun, e lakaas stagañ anezho, gant chadennoù berr-tre, ouzh ar gwalennoù riñvedet ken niverus a-hed ar bourzh.

Ar veaj ne voe ket ken sioul hag evit dont. Nerzhioù an Droug a glaskas perc'hennañ e vagad tud. Ar Spered Fall a yeas e-barzh eneoù un nebeut morianed a en em savas. Mantret e voe Torrbenn gant kement-se, kounnariñ, avat, ne reas ket. Ar blanedenn a oa e klaskfe an diaoul mirout outañ kas da benn e labour a silvidigezh. Met ne gollas ket e basianted evit ken nebeut a dra, ha daoust ma n' en doa ket studiet kalz an doueoniezh, e ouezas respont trumm, kalet ha didruez da dagadennoù an diaoul. Envel a reas daou eus e vartoloded kreñvañ da argaserien diaouloù, hag ar re-mañ ne voent ket pell o tieubiñ ar c'horfoù mestroniet, a daolioù skourjez roet gant ur gred hag ur galon a vezo kontet dezho e-touez o oberoù mat e traonienn Josafat.

* * *

Met da belec'h e kase anezho ?

Biz Doue en doa diskouezet dezhañ, ur wech evit mat, e hent.

Davet douar ar frankiz, pinvidik souezhus e ec'honderioù e kase e gargamant... davet ar vro prometet d' an holl nerzhioù nevez ha disimplij, davet Amerika.

Evit e labour a silvidigezh e oa deut a-benn da c'hounit skoazell un nebeut mignoned hag a felle dezho kemer perzh e meritoù e oberoù mat.

Ar vignoned-se a oa perc'henned parkoù kotoñs divent.

Dindan o renerezh, en urzh, el labour hag en dereadegezh edo ar vorianed o vont da adc'henel d'ur vuhez nevez. Ar vignoned-se a bae ivez o lod eus mizoù ar veaj. Hag ar veaj a gouste ker, ker ur spont.

EÑVORENNOU HANTER-0AD

(1900-1919)

gant TALDIR

(kendalc'h)

ROSTREN HA KENEC'H LAERON

Gouelioù broadel ar bloaz 1907 a voe renket e kêr Rostren, Kernev-Uhel. Trubuilh ar renkerezh a gouezhas warnon evit ar pep brasañ, dre ma oan o chom tost, hag am boa darempredoù hag arvalien en-dro.

Ar Maer a oa an Aotrou Henry e anv : brud da vezañ « radikal » en doa, ha ni brud da vezañ « liberal ». E brezhoneg : « ruz » ha « gwenn ». Na 'vit-se e kavjomp harp gantañ hag e goztezenn. An Aotrou Yonkour, perc'henn Hotel ar Goñvers, hag an Aotrou Boncors, ostiz all, a zougas dorn din. Ivez an Aotrou Bonneau, merser ha rener ar Muzik. En tu gwenn, e kavjont skoazell an Aotrou Péchoux, person, hag hini an Aotrou Hubert Bouché, noter.

Diouzh Karaez, am boe kenskoazell an Aotrou Loeiz an Troadeg, rener ar Muzik « Indépendante » a zegasas d' ar gouelioù e holl gompagnunezh, desket ganti c'hoari « Bro gozh ma Zadoù » ha « Sav Breizh-Izel ».

D' ar c'houlz-se (miz Gwengolo 1907) e oa promesa a briedelezh etrezon-me ha Janed an Touz, eus Karaez, ur plac'h 17 vloaz, ar yaouankañ eus eizh bugel Kaou an Touz ha Janed an Diner. Dont a reas-hi ganin da Rostren asambles gant he div c'hoar Fin ha Liz, hag ober a rejomp hon diskenn en ostaleri Boncors.

Nebeut a gendalc'herion a oa en-dro d' an Aotrou de l'Estourbeillcn, en diavaez da Varzhed ar « Gorsedd » a yae e niver war greskiñ bep bloaz. Programoù ar C'hendalc'hioù a veze atav memes tra. Beure hag enderv : seañsoù komz ha diviz en Ti-Kêr. Da sul, lidoù en Iliz, ha C'hoariva brezhonek war un dachenn bennak goude kreisteiz. An deiz diwezhañ, ur Gorsedd digor. Ha kent dispartiañ, ur valeadenn dre ar c'hontre.

29

An teatr brezhonek e Rostren, a voe prientet gant Fañch Caurel (barzh Evnig Arvor), rener Skol Gristen St-Nikolaz-ar-Pelem, stummet gantañ e vugale-skol en un doare broadel-kenañ. Ur gwall goll eo bet d' an Emsav diouerout Evnig Arvor nebeut amzer goude Kendalc'h Rostren. Fañch Caurel ha me a oa daou vignon mat abaoe 'oan e Karnoed o chom. Dougen a rae er gouelioù ur gwiskamant giz Skaer. Kelenn a rae ar brezhoneg en e skol. E Sant-Brieg er bloaz 1906, e oa gantañ « ur sae c'hlas a varzh ». Peadra da lakaat an teodoù lemm da vont en-dro, ha da ober dezhañ brud ur spered « dishual » er presbitalioù. Mar felle dezhañ gwiskañ ur sae, e vije dereatoc'h ur sae frêr (unan zu).

Ar paour-kaezh Evnig Arvor a oa gwir-tre e anv : un evnig kizidik e oa. An disterañ nec'hamant a roe terzhien dezhañ. En em chalañ a rae e oa pistiget gant ar re o dije dleet e goñfortiñ.

War gement-se, e krogas ar c'hoant dimeziñ ennañ (wardro 1909 pe 10). Mont a rae d' ober al lez d' ur plac'h yaouank e Blougernevel, an dimezell P. Ur Rener Skol Gristen euredet ha tad a familh ? Nann, se 'oa kontrol d' al Lezenn Gatolik a neuze. Evel ar Beleg, ar Frêr a dle chom dizimez (da vihanañ e Breizh). Cheñchamant a zo bet abaoe, e Lezennoù an Iliz 'vel er re all. Petra ne cheñch ket war an tamm douar patatez-mañ ?

Evel just, ar Veleien en em lakaas holl a-dreuz d' an eured hag evit

tennañ digant an Evnig paour ar c'hoant da barañ, e oa bet distroadet eus e Di-Skol, 'lec'h e oa Rener, ha kaset da Landivizio 'lec'h ne oa nemet kelenner. Chom a reas eno nebeut amzer, sioul ha didrouz. Goude ar Brezel Pevarzek, e voe divroet « un tu bennak e Bro-C'hall ». Keloù ebet outañ ken... War-dro mare an Dieubidigezh, unan bennak a gontas din e oa Fañch Caurel « porzhier » ur Manati en tu-all da Bariz.

Setu aze c'hoazh unan ouzhpenn hag eo bet BREIZH ur skoilh evitañ, kentoc'h evit ur sichenn.

* * *

Ar valeadenn-gendalc'h a voe treset he roudoù dezhi evel-hen : Gouareg, an Diskuizh Mat, menez Kenec'h-Laeron (taolioù-mein), Santez-Trifina, Sant-Nikolaz-ar-Pelem ha distro da Rostren.

An Diskuizh Mat a zo un Abati rivinet. Nepell ac'hano, war ar roz en tu an hanternoz, ez eus teir daol-vaen rez-ouzh-rez. Anv ar roz a zo Kenec'h-Laeron, da lavarout eo e brezhoneg bremañ Krec'h-Laeron.

30

Eno e voe lidet ar Gorsedd digor dirak ar gendalc'herion, hag ur bochadig tud diwar-dro, en o mesk beleien ar parrezioù nesañ, deut dre « guriozite » evit gouzout petra 'oa a wir e-barzh kaozioù ar re a lavare e oa ur relijion nevez o tiwan... Michañs ne gavjont mann da damall. Koulskoude, kontrol eus Bro-Gembre, biskoazh n' eo bet gwall-droet ar veleien gant ar Gorsedd. Degemeret eo ganto, n' eus ket a zisfiz outañ ken, met rouez-tre eo ar re anezho a zeu d' en em veskañ ganimp. Aes 'int da gontañ : bout 'zo bet pe bout 'zo en hon Skol-Veur c'hwec'h Beleg : an Abad Brelivet (+) a Lokronan, misioner : an Tad Job Duchauchix, a Urzh Sant Benead ; an Abad Yann-Per Cario (+) (Ab Tudal) aluzener er Faoued ; an Tad Aleksï Presse, priol Abati Bod-Gwenn ; an Abad Herri Poisson, rener Skol Gristen Santez-Anna, Roazhon, hag ar chaloni J. Mary, rener Misionoù Eskopti Gwened. An dalvoudegezh a zo gwell evit an niver.

E-touez an Izili nevez a voe degemeret e Kenec'h-Laeron, unan a oa deuet dimp « eus a bell », ha kazi dre ret : ar markiz Estourbeillon. Betek-hen en doa « en em servijet » eus ar Varzhed evit sevel e Gevredigezh. Met n' en doa ket pleget da « servijañ » anezho. Kompren a reas koulskoude n' helle ket se pad ; gwir eo e oa en-dro dezhañ un toullad tuchentil a c'hiz kozh hag a alie anezhañ da zisfiziout eus ar « penn losket » ma oa Berthou « Kaledvoulc'h ». Ne oa bet biskoazh karantez gwall-domm etrezo o-daou.

Ne vern. Pignat a reas ar Markiz war daol-vaen Kenec'h-Laeron evit degemerout digant an Drouiz Meur an anv-barzh a « Hoel Bro-Ereg », hag al lietenn c'hlas war e vrec'h. Touiñ a reas e brezhoneg war gleze Arzhur, astennet dirazañ gant ar barzh Kont de la Guichardière (Telenn-Aour) chom feal da Vreizh, d' ar Yezh ha d' ar Skol-Veur da viken. Ha chomet eo.

GORSEDD HOLLGELTIEK ABERTAWA (SWANSEA)

Lavaret em eus peseurt degemer bras a voe graet da Gembreiz e Gorsedd Sant-Brieg 1906, hag ar c'hoant o doa d' ober memes tra dimp. Ne zalejont ket. Degouezhout a reas ganin-me, an Arouezvarzh, ul lizher a-berzh Komite Eistezvod Abertawe (Swansea) evit pediñ Skol-Veur Barzhed Breizh Vihan da gas di ugent Kannad...

31

Ugent kannad a vije digollet eus o holl dispign, nemet o beaj. Met kaout ugent kannad hep mont en diavaez d' ar Vroadelerion, izili eus hon C'hostezenn, a oa diaes. Gervel bep seurt tud da unaniñ gant ar Gannadelezh ne oa ket hon fal. Bezañ « Kannad » a oa un enor da reiñ d' ar re hepken o doa labouret e sell eus ar vro, ha nann d' an Douristed pinvidik. Dre walleur, ar re o dije talvezet an enor-se a oa peus-holl tud o labourat war ur vicher, stag ouzh o ibil, evel ar c'havr 'lec'h e peur, ha re nebeut a arc'hant dezho da baeañ koust ar veaj hir eus a Vreizh da Vro-Saoz. Gant a-walc'h a boan, e tastumis ur Gannadelezh a zaouzek, emañ o anvioù amañ war-lerc'h :

Ar Markiz Estourbeillon, hag an div Dimezell Riou, a veze bepred gantañ e pep lec'h ;

An Aotrou hag an Itron de la Guichardière, a Gorseul ;
An Drouiz Fañch Vallée (Ab Herve), a Sant-Brieg ;
Ar Barzh Loeiz Herriou (Labourer), a Gaodan ;
An Oved Doktor Plateau, a Sant-Brieg ;
Ar Mestr-Skol breizhat Guillo, a Gamorzh ;
Ar broadeler Kont de Nettancourt, a Vontroulez ;
Ar Barzh Fañch Jaffrennou (Taldir), a Garaez.

Kalz a ziskrivas din o doa mil geuz da na c'hallout ket dilezel ti ha tiegezh, kenwerzh ha labour, da vont du-hont da bourmen...

Mar bije kinniget hiziv d' ar Strolladoù Broadel Breizhek kas ugentadoù paotred ha merc'hed d' an Eistezvodoù, e vije leun ar roll en un devezh. Met e Bro-Gembre emañ kont evel e Breizh-Izel. Dihanet emeur da ober brazentezoù. Arc'hant 'zo, met kernez an traoù a zebr anezhañ.

A du all, an darempredoù Kanfarded ha Kanfardezed o deus kemeret ul lec'h penn. Kampoù a vez graet e-pad an hañv e Bro-Gembre hag e Breizh-Izel, evit ar studierion a c'hoanta kreskiñ o anaoudegezh eus ar yezhoù keltiek, ha war un dro, en em zidual. A dra sur, kement-se a zo mat, met se n' eo ket padus. Deut un termen d' ar Yaouankiz, ar vuhez en em garg da lakaat pep hini en e doull.

Ar pezh en deus padet ar pellañ betek-hen, e-giz darempredoù Etrekeltiek, eo an Unvaniezh Varzhek Kembraek-Breizhek. Diazezet e 1899, emañ bev c'hoazh e 1950, hep arsav all nemet re an daou vrezel bedel. Amzer o deus bet kalz da c'henel ha kalz da vervel abaoe, hep cheñch netra er pezh a oa divizet. Ur skouer : peseurt kevredigezh he deus kemeret difenn ar Vretoned bet mac'homet gant ar Frañsizien e 1944-46 ? Hejet ar pennoù-bras evit kaout diskleriadurezh ? Gweladennet Breizh ? Skrivet ul levrig war an Enklask, hag a voe d' ar C'hallaoued un tamall kasaus ? Gorsedd Breizh-Veur.

32

Pa ne vije ken nemet ar servij-se rentet da Vreizhiz gant Kembreiz, e vije trawalc'h evit dedennañ hon anaoudegezh vat da viken en o c'heñver.

* * *

Distroomp bremañ da Abertawe er bloavezh 1907. Ar gêr-se a zo ur porzh-mor bras-diranj, e genou ar stêr Tawe. He foblañs a zo 150.000 den. Ar spered broadel a zo birvidik. Ar yezh kembraek a vez desket er skolioù. Breuriez ar « Cymrodorion » a zo galloudus. D' an ampoent a lavaran, e oa ar Barzh David Rhys Phillips, mirour Levraoueg Veur Kêr. Un den desket bras, ha troet-kenañ war ar Vretoned. Gouel an Eistezvod a oa dindan e zamani evit ul lod bras. Ar gannadelezh vreizhek a voe lojet en hotel brudetañ. E diwezh ar Gouel e voe kinniget dimp ur banniel kaer seiz ha voulouz, brodet gant neud-aour, ha staget warni trizek maen-kristal-roc'h gant fasetez, unan kreiz e-giz taol-vaen, ha daouzek tro-zro e-giz mein-hir (stumm ur c'hrommlec'h). Ar c'hrommlec'h a oa war ur c'hlazenn graet gant voulouz gwer. Tro-war-dro d' ar vevenn e oa merket : ROET GANT BARZHED CYMRU EN ABERTAW 1907 DA GANNADED BARZED BREIZ. DORN OUZ DORN. CALON OUZ CALON.

Ennon-me e voe fiziet ar Banniel da virout (1) ha da zispakañ e pep gouel keltiek evel un arouez peurbadel eus unvaniezh ar ouenn vreizhek. War al leurenn-deatr, dirak 10.000 a dud o youc'hal o levnez, e ris un tammig prezegenn gembraek.

Priedelezh ar C'hleze div laonenn a voe graet ivez, an Estourbeillon o terc'hel laonenn Vreizh hag Edward Thomas Cochvarv o terc'hel laonenn Bro-Gembre.

* * *

MA FRIEDELEZH GANT JANED AN TOUZ E KARAEZ

En ur gêr vihan evel Karaez, degouezh unan yaouank nevez a lak an teodoù gwrac'hed da vont en-dro.

(1)- Tremenet am eus anezhi d' an Arouevarzh Eostig Sarzhaw (Per Loazel) e miz Du 1948.

33

« Da biv e ra Jaffrennou lez ? Gant piv e timezo ? » Lod a lavare e vije laouen an Aotrou Z..., noter, ma karjen hentañ unan eus e verc'hed. An Itron Tanguy, lesanvet « Belle-en-Cuisse » ostizez war blasenn ar vered kozh, a voute warnon da ober lagad d'ur Rusianez, Olga X... a dremene he vakañsoù en he zi.

Met ar vrud he doa ar muiañ a gred, a oa an hini a ziougane din da bried Katrina Devedeg, an hini he doa c'hoariet roll « Lenora » en drajedienn « Pontkalleg » a oa bet displeget e sal an Ti-Kêr, e 1905-06. Bep nozvezh a-walc'h, ez aen da ober kaozeadenn da ostaleri he zad, Yann Devedeg, tost da blasenn ar Glaou.

Div c'hoar e oant : Mari, ar verc'h henañ, ha Katrin. Mari a oa kemenerez ; Katrin a dremene hec'h amzer o lenn, o skrivañ, oc'h huñvreal. Rak ur skrivagnerez e oa anezhi. Sevel a rae tammigoù mojennoù, tammigoù gwerzioù (galleg) a veze goulennet ma ali din diwar o fenn. Derc'hel a rejomp d' en em zaremprediñ evel-se e-pad ur bloaz, hep na voe biskoazh komz ebet etrezomp a zimeziñ, evel just. War se, e tegouezhas d' an Aotrou Person Q... dont da lakaat e fri e strollad Aktourion Brezhonek Karaez-Plouger. Ober a reas ur sarmon en Iliz da ziskuilhañ kablusted ar re a rae c'hoarioù teatr gant paotred ha merc'hed mesk-ha-mesk. Ne anvas den, met paz eas Katrina Devedeg da glask he fask, e voe nac'het an absolvenn outi, betek m' he dije dilezet he roll. Se a reas un todilhon spontus e kêr. He breur Lucien, hag a oa sakrist bihan, a roas e zilez. Katrin a voe ret-mat dezhi doujañ hag en em denn.

Paouez a ris neuze, evit nompas ober amploc'h gaou outi, da vont d' he zi. Ouzhpenn, ret e oa din klask un aktourez all, rak c'hoant hor boa da zisplegañ BUHEZ AN TOUR D'Auvergne, dindan ar « C'houbi », hag ar pezh-se e oa ur roll plac'h, unan hepken, Mestrez ar C'hentañ Grenadour. War-lerc'h an taol a-dreuz kaset dimp gant ar Person, diaes e vije.

Yann Solu hon tennas a nec'hamant.

Solu, perukenner, toneller, gwerzher journalioù, skrivagner poblek, dimezet da Fin an Touz, en doa div c'hoar-gaer dizimez, o chom e ti o zud war hent Kallag, Liz ha Janed. Unan anezho o-div, a asantfe marteze deskiñ ar roll, seul emsavoc'h ma oa breur-kaer Yann Solu, ezel eus ar strollad. Evel-se ne gavje ket pleg ar Person da c'hoari-vazh.

Mont a reas eta Yann Solu ha me da weladenniñ merc'hed an Touz. Ostaleri a oa gant o mamm ; o zad a oa mestr-kantonier. Hag an div verc'h a servije ouzh ar c'hontouer en ur c'hortoz kaout da fortunañ, evel o c'hoarezed all, Mari-Jan Guillou, Mari Thomas ha Fin Solu. Ur familh niverus hag enorapl-bras e oa hini Kaou an Touz. En tu-hont da bemp merc'h, en doa tri baotr : Per, ar mab henañ, pried Janed Parchemin ; Louis, an eil, pried da Estella N... ; hag Iwan, pried da Vari Conan a Lanwenneg. An tri gwaz-mañ a oa implijet war an Hent-Houarn.

34

Degemeret mat-tre e voemp gant Liz an Touz. Homañ, hep chipotal a lavarar ya dimp diouzhtu.

« Ober a rin ma fosubl, emezi, da zeskiñ ar roll. Ne ouzon ket gwall-reizh ar brezhoneg mat, just peadra da gomz, met gant pasianted, me 'gav din e teuin a-benn. »

Stad a oa ennon, a c'heller krediñ, o vezañ kavet ur wir Vretonez, ur plac'h a zoare, da zisplegañ ar roll er pezh. Ugent vloaz ne oa nemet a-boan.

Gwisket e oa e giz Karaez, korfet brav, ha dremm plijus-kenañ.

Hag he c'hoar yaouankañ, Janed ? Petra 'soñje-hi eus an afer ? Ne oa ket aes hen gouzout da gomañs. Kentañ gwech e oa en em gavet Solu ha me en ostaleri da ober hon c'hefridi, Janed a oa aet da guzhat. Un nebeut gwechoù e c'hoarias an dro-se a-benn ma oa gallet doñvaat an heiez-mañ.

Ur wech e oa tapet berr warni. Hi 'oa o servijiñ ouzh ar c'hontouer, pa zegouezhjomp en ti. Moien ebet da dec'hout kuit. Ret e oa dezhi ober war hon tro, ha lakaat dimp pep a vannac'h jistr. Evel-se e c'hallis sellout mat outi. Ur plac'h gwevn 17 vloaz, gran en he dilhad Kernev, un dremm livet sklaer, blev rodellet, ur sell uhel ha faeüs, evel pa vije bet mezhus oc'h ober micher da servijiñ arvalien : stumm ur briñsez kouezhet er baourentez, hag a rae deoc'h an enor da deurvezout plegañ da derriñ ho sec'hed ha da douch ho kwenneien. Raktal graet he servij, hi kuit, hep ober van ouzhoc'h. Honnezh a blijas din kalz he doare. Kement a stad ne vankas ket da bikat ma c'hoant d' ober hiroc'h anaoudegezh gant an « dimezell », met a-boan ma responte d' ar saludoù. Ha koulskoude, kement-se ne oa nemet un diavaez, rak un toullad devezhioù goude, ma oan antreet soubit en ti, e oa Janed azezet hec'h-unan ouzh un daol o skrivañ. Ha me war-eeun dezhi ha da guriuzat. Goleiñ a reas he faper gant he dorn, en ur ruziañ.

- « Petra oc'h o skrivañ aze, dimezell ? » emezon-me flour.

- « Se ne sell ket ouzhoc'h, » emezi groñs.

- « Ur c'haier ? N' eo ket ur c'haier-skol emac'h o skrivañ ? »

- « Fin 'zo d' am skol ! » - « Neuze ? Ha ! ha ! Koacherez... Ur c'haier sonioù ? »

- « Evel ma lavarit. », - « Droed 'zo da sellout ? » Hag a-raok m' he doa bet amzer da serriñ he c'haier, e welis e oa... oc'h adskrivañ dre eñvor ar « Bro gozh ma Zadoù » hag ar « Sav Breizh-Izel » graet gant Taldir.

Ar gurun o kouezhañ em c'hichen n' en dije ket graet muioc'h efed warnon : « Taol ar foeltr » na petra 'ta. Soñj ar plac'h yaouank-mañ, en desped ma kuzhe he santimant dindan un diavaez diseblant, a oa stag ouzhin, ne oa ket a vorc'hed.

35

Adalek an eur-se, evel ma tenn an emant an houarn, Janed an Touz a dennas dezhi kalon ar Barzh-Baleer. He c'halon am boa gonezet, ha komz a ris dezhi eus unaniñ hor buhezioù.

* * *

Ar c'hontrad-eured a voe sinet e Karnoed d' ar 24 a viz Kerzu 1907, hag an eured a voe d' ar 7 a viz Genver 1908, e Karaez.

Leusket e oan bet gant ma zud da ober d' am giz war renkadurezh ar gouel hag ar fest. Divizet em boa eta e vije un eured vreizhek penn-da-benn. Ar pedadennoù e brezhoneg ; sarmon ar beleg en Iliz e brezhoneg. Biniou ha bombard. Ma gwreg yaouank en he dilhad Kernevadez, gant koef hir. Me ma-unan gant dilhad giz Kernev, hag ur bragoù-bras.

An dud pedet, paotred ha merc'hed a oa ar peurvuiañ anezho eus ma c'herentiaj, hag eus hini an Touzien, nebeut e oa a-ziavaez nemet tri Barzh : Alfred Lajat, Herri de la Guichardièr ha Charlez Rolland. Ma daou baotr a enor a oa Aogust Roparz, a Volazeg, kenderv kompez, ha Frañsou Debordes, a Karnoed, niz pell ; (o-daou int bet lazhet er brezel pevarzek). Ar predoù hag ar balioù a voe graet en ostaleri Iwan ar Baron, ru ar Feunteun-Wenn ; ar fest a badas daou zevezh e-kreiz al laouenedigezh. Ne oa nemet ur vouezh da veuliñ koantiri ha grasiusted ar wreg nevez. Telenn-Aour ha Charlez Rolland, e galleg hag e brezhoneg, a savas gwerzioù kaer en hec'h enor. Eus Bro-Gembre, ar barzh Thomas

Gwynn-Jones a zegasas e-giz boked ur barzhoneg en anv e genvreudeur.

Met dindan an holl vokedoù-se, ne welen ket, pe ne c'houllen ket gwelout an naered a glaske flemmañ. Bourc'hizien Garaez a skrigne o dent e-kuzh hag a soñje : « Dont da c'hoapaat ac'hanomp evel-se ! Ober un eured « peizant ». Klask degas ar c'harr a-dreñv. Dañsoù d' ar binioù, foei! Pas zoken ur « bal chik » e sal an Ti-Kêr evit « an dud a feson ». Ur vandenn « Plouked » eo ar Varzhed, netra ken, ha gant o brezhoneg... Ur vezh... »

Setu eno pere 'oa kontoù kuzh bourc'hizien Garaez. N' eo ket ma eured a lakje ac'hanon da c'honit o grasoù mat. Se ha kalz a draoù all da heul, e-doug ar bloavezhioù, n' eo ket bet estren d' an taolioù treid azened am eus bet diganto, pa oan risket ha kouezhet war an douar da viz Eost 1944.

36

Met e dibenn ar bloavezh 1908, ne welen dirazon nemet an hent eeun ha plaen, un oabl digoumoul ; ne bresten ma skouarn nemet d' ar Mouezhioù a gane meuleudi ; c'hwez an ezañs a vouge c'hwez ar flaer, hag an traoù a oa mat e giz-se.

Goude fest an Eured, Janed ha me a reas ur veaj da Bariz, hag un dale e Roazhon en ur vont. Amañ, ar Studierion Vreton en em vodas un ugent bennak anezho da ginnig dimp ar champagn e Kafe Chateaugiron, straed ar Gar.

Hag ur vuhez nevez, e Karaez, a zigoras evidon e « Ti ar Bobl » ur vuhez a unvaniezh padus etre div galon ha ne vo torret nemet gant an Ankou, rak
Gwell eo karantez leizh an dorn
'Vit aour hag arc'hant leizh ar forn.

Istor lennegezh vrezhonek an amzer-vremañ

gant ABEOZEN
(Kendalc'h)

V. - GRAMADEGOURIEN HA GERIADUROURIEN

Ober war dro ar yezhadurezh pe an doare-skrivañ ne deo ket a-walc'h evit bezañ niveret e-touesk ar skrivagnerien, hogen peurliesañ eo dre ma savent skridoù eo o deus ar veleien graet war dro yezhadur pe c'heriadur.

139) Ne deo ket gwir koulskoude evit an Aotrou er BAYON, ganet en Alre e 1830, kelenner e Kloerdi Bihan Keranna ha da c'houde person er Gerveur, marvet e 1908.

Studiet en doa hen-yezhoù ar Reter hag e savas, e 1888, un dezenn, « Le Secret du Breton », evit diskouez o c'herentiezh ouzh ar brezhoneg. N' en doa disoñjet nemet un dra, studiañ furmoù kozh ar brezhoneg a-raok e lakaat keñver-ha-keñver gant an hen-yezhoù-se. An hevelep si fall a zo d' e labour all « Grammaire du Dialecte de Vannes », embannet e 1888. Dic'housvez-krenn ez eo eus istor ar brezhoneg.

Yezhadur gwirion rannyezh Gwened a zo bet savet gant an Aotrounez A. GWILHEVIG ha Pièr er GO.

140) An Aotrou GWILHEVIG, ganet e Gwened e 1861, a zo bet Vikel-Vras an eskopti. Eñ eo deus evezhiet war aozadur al **Livr Kañnenneu**, embannet e ti Galles, Gwened, 1923, hag al **Livr Pedenneu**, moulet war un dro gantañ.

Savet en deus e daou hanter gant an Aotrou Pièr er GO, ur « Grammaire Bretonne du Dialecte de Vannes », L'afoye, Gwened, 1902.

141) An Aotrou Pièr er GO, ganet e Baod d' ar 24 a viz Gouere 1860, a zo bet beleget e 1884. Kelenner e voe da gantañ e Kloerdi Bihan Keranna hag aluzenner e Pleuigner e 1894. Galvet eo bet da aluzenner e lise Pondivi e 1906. D' ar 6 a viz Gwengolo 1930 e roas e zilez evit dont da echuiñ e vuhez e Keranna. Eno ez eo marvet d' ar 17 a viz Kerzu 1941.

Ur mailh edo war ar yezhadur. Savet en deus ivez troidigezhioù evit DIHUNAMB. Gant skoazell an Aotrounez HENEU, HERRIEU, OLIEREU, PERRON, DANIGEU ha KALLOC'H, en deus aozet ar « Supplément au Dictionnaire de M. ERNAULT ». Savet en deus ivez un dastumad **Krenn-Lavarioù** a Wened-Uhel. Peurvuiañ ez eo skrivet e oberoù e galleg.

142) An Aotrou Yann HINGANT a voe ganet e Plouigneo d' an 20 a viz Ebrel 1834. Mont a reas d' e ugent vloaz d' ar skol e Plistin, d' ar skolaj e Landreger ha da Gloerdi Bras Sant-Brieg. Beleget e voe e 1867 hag anvet da gure e Priel e 1868. Person e voe e Magot e 1881, e Moustereu e 1885, e Sant-Ke-Perroz e 1890. Marvet eo d' an 12 a viz Eost 1898.

Savet en deus « Eléments de la Grammaire Bretonne », embannet e ti Le Flem, e Landreger, e 1868. Degemerout a rae doare-skrivañ ar GONIDEG ha deut mat e voe e labour gant an Aotrou'n Eskob DAVID.

N' en deus a-hend-all embannet nemet un dastumad « Proverbes Bretons » e « Mémoires de la Société d'Emulation des Côtes-du-Nord », 1898. Adembannet int bet gant Frañsez VALLEE, e 1899, e ti Guyon, Sant-Brieg, dindan an anv **Krenn-Lavarioù Bro-Dreger**.

143) An Aotrou Loeiz LE CLERC, Kloareg ar Wern, a zo ganet e Lanrodeg d'an 30 a viz Mezheven 1861. Beleget e voe e 1885. Kelenner eo bet e skolaj Gwengamp betek 1918. Digoret en doa eno ur skol vrezhonek. Embannet en deus e ti Prud'homme, Sanf-Brieg, e 1903, **Ma Beaj Jerusalem** ; e 1910, **Ma Beaj Londrez**. E yezhadur « Grammaire Bretonne du Dialecte de Tréguier » hag al levr **Poelladennoù** da vont gantañ a zo bet embannet e ti Prud'homme, e 1908. Abaoe 1918 ne wel mui sklaer hag ez eo deut da vevañ e Karmel Sant-Brieg.

Anvioù all a c'heller da lakaat e-kichen ar re-se.

144) An Aotrou Visant ROUDAUT, ganet e 1817, a voe person e Plouziri. Marvet eo e 1885. E anv-pluenn a oa *Par Oc'h Dec*. Embannet en deus, e 1872, e ti Desmoulins, Landerne, ur « Supplément aux Dictionnaires Bretons ».

E oberoù all a zo levrioù a zevosion : **An Ene Kristen e Bali an EE**, Desmoulins, Landerne, 6vet mouladur e 1872 ; **Sceul ar Baradoz**, e 1880, Lefournier, Brest ; **Ar C'henta Miz Mari, Buez ar Verc'hez**, troet diwar ur skrid latin eus 1724, Lefournier, Brest, e 1866.

39

145) An Tad J. BLEUZEN en doa ijinet un doare-skrivañ dezhañ e-unan da sevel evit ti Lefournier, Brest, **Buez an Tad Julian Maner**, e 1876, ha **Buez an Aotrou Mikel Nobletz**, e 1879. Ar skrid-mañ a zo da ziforc'h eus **Buez Dom Michel Nobletz** gant an Aotrou DREZEN, kure e Plozeved, embannet an hevelep bloavezh.

Diniver ha dibaouez eo bet an tabutoù diwar-benn ar skrivadur e brezhoneg.

146) An Aotrou Yann MOAL, ganet e Plouvorn e 1834, a voe beleget e 1858. Bet eo aluzenner prizonioù Brest ha marvet eo d' an 2 a viz Genver 1893. Savet en deus ur « Supplément Lexico-Grammatical au Dictionnaire Français-Breton de Troude » e ti Desmoulins, Landerne, 1890.

VI. - AR SKRITUR SAKR E BREZHONEG

N' eus ket ur vro gristenadet na dije ket lakaet en he yezh al levr n'eus nemetañ evit ar gristenien, **Ar Vibl**.

E Breizh ez eo bet graet evel e lec'h all, nemet e rankomp merkañ diouzhtu n'eur ket bet douget en hor bro d' an troigezhioù klok eus ar Skritur Sakr. Setu an abeg a zo da gement-se : ne deo ket troet an Iliz Katolik da lakaat ar Vibl en he fezh etre daouarn an holl. Krediñ a ra dezhi ez eus en Testamant Kozh dreist-holl meur a dra a c'hell feukañ speredoù, berr o anaoudegezh eus istor boazioù mab-den. Setu perak ivez e tisplij a-grenn dezhi an troidigezhioù eus ar Vibl, embannet hep notennoù diskleriañ diouzh giz ar brotestanted.

147) Er skridoù brezhonek-krenn deut betek ennomp n' eus nemet darnoù berr eus ar Vibl, lakaet e gwerzennoù peurvuiañ, evel e **Burzhud bras Jezuz**, e **Pemzec Leuenez Maria** hag e **Katekiz** Jili a GERAMPUIL. Amañ, da skouer, e kavomp ar Bater hag an Ave Maria.

Estreget se ez eus bet koulskoude, rak lenn a reomp e « Longueruana » (t. II, p. 70, Mouladur 1773), un dastumad skridoù savet gant an abad de LONGUERUE, al linennoù-mañ : « Anna a Vreizh a lakas treiñ an Testamant Nevez e brezhoneg. Dibaot-tre eo al levr-se ha gwelet em eus Saozon ouzh e glask gant ar brasañ aked ».

40

E dibenn ar XVIvet kantved Jili a GERAMPUIL a ra meneg eus un droidigezh vrezhonek all, a zo da ziforc'h diouzh hounnezh. E Kentskrid e **Gatekiz**, mouladur 1576, eo e komz eus an Testamant Nevez-se, a dlie bezañ ul labour graet gant an hugunoded. Ne gaver mui roud ebet anezhañ.

148) Gregor a ROSTREN, e « Dictionnaire Français-Celtique », Roazhon,

1732, p. 9, a lavar en deus bet, e-touesk al levrioù implijet gantañ da zanvez e c'heriadur, ur Vibl brezhonek klok. Hogen, dindan pluenn an Tad Gregor e talvez a-wechoù ar ger « breton » da verkañ kembraeg pe gerneveg kenkoulz ha brezhoneg. Marteze eta ez oa eus al levr-se ur Vibl gembraek, nemet bet en dije an Tad Gregor etre e zaouarn labour an Aotrou Yann HELUAN.

149 a) Ganet e voe Yann HELUAN, war-dro 1644, e Brieg. Bez' e voe martolod ha mousketaer, kent mont war-du ar velegiezh. Aotreeg oa war an doueoniezh. E 1730 edo person e Brieg abaoe hanter kant vloaz. Miret en doa temz-spered brezelgar e yaouankiz en e zarempredoù koulz ouzh e eskob hag ouzh e barrezioniz.

Un den desket-kaer oa anezhañ. Pa varvas, d' e 92 vloaz, e 1736, e voe kavet en e levraoueg 13 pikol Kaierad eus e skritur. N' ouzer tra ebet muioc'h diwar o fenn.

Lavarout a ra an Aotrou Chaloni PEYRON, e « Bull. Archéol. de l'Assoc. Bret. », 3e série, t. XIV, p. 81, ez eo asur en doa an Aotrou Yann HELUAN lakaet ar Vibl e brezhoneg. En ur skrid-difenn (Factum, 1730) e lavar en doa d' an ampoent kinniget ur skouerenn eus e labour da Aotrounez Breujoù Breizh.

149 b) Dom Glaoda MARIGO a zo da venegiñ amañ en abeg d' e **Abrégé eus an Aviel**, moulet evit ar wech kentañ e 1758, advoulet e 1832, 1866, 1873, 1884.

Bet eo Dom Glaoda person e Beuzeg-Konk eus 1722 da Vezheven 1743. Genidik oa, a gred an Ao. chaloni FAVE, eus Kerne-Uhel. E diegezh oa uhelouenn ha pinvidik.

Daou levr all savet gantañ a zo bet moulet meur a wech : **Imitasion hor Salver Jesus-Christ**, e ti Derrien, Kemper, 1754, 1783 ; ha dreist-holl **Bues ar Saent**, lañ mouladur, Kemper 1752. Niverus-tre eo ar mouladurioù bet graet eus al levr-se da c'houde e Kemper, e Sant-Brieg, e Brest betek dibenn an XIXvet kantved.

150) En XIXvet kantved e tegouezhomp gant troidigezhioù ar GONIDEG, m' hon eus endeo komzet diwar o fenn e pennad kentañ al labour-mañ : Testamant Nevez hon Aotrou Jesus-Krist, Angoulême, 1827, troet e brezhoneg diwar skrid « Vulgata » Lyon, moul. 1738.

41

Diwar skrid ar « Vulgata » ivez e voe troet gantañ an Testamant Kozh. E 1866, ur wech reizhet an amprouennoù gant TROUD ha MILIN, e voe moulet e ti Prud'homme, Sant-Brieg, **Bibl Santel** ar GONIDEG. Nemet, dre ziouer a notennoù-diskleriañ outi, n' he deus ket bet imprimatur an eskopti, hogen ne voe ket miret da gentañ ouzh he gwerzhañ. E 1890, avat, e voe nac'het ouzh ar mouler an aotre da genderc'hel gant ar werzh.

Meneget hon eus endeo en o lec'h an darnoù troet gant an Aotrou Yann-Wilhoù HERRI : **Genes pe Levr ar C'heneliez**, e 1849, **Levr an Exod**, e 1860, e ti Guffanti-Breton, Kemperle. Troet en deus ivez an hevelep skrivagner darnoù eus Pemp Levr Moizez.

151) Betek hen ne gavomp da brenañ evel troidigezh klok eus ar Vibl e brezhoneg nemet **Bibl Santel** ar pastor Gwilh ar C'HOAD. Diaes barn garvoc'h al labour-se eget ne deo bet graet gant Anatol ar BRAZ, en « Annales de Bretagne », Gouere 1891, p. 654-658, pa lavar « e tenn hepken en un doare arvarus yezh an droidigezh-se d' ar brezhoneg ».

152) E 1853, ez oa bet moulet e ti Anner, e Brest, war goust Kevredigezh Skridoù Relijiel Londrez, 2 vil skouerenn eus **Historiou eus ar Bibl Santel** tennet diwar an **Destamant koz, troet e brezonec eus a ul labour gret gant C. G. BARTH**.

An hini en doa savet an droidigezh-se a oa Gwilhom ar YANN, ganet e Plegad-Gweran d' an deiz kentañ a C'hwevrer 1826 ha marvet e Pariz e miz

C'hwevrer 1872.

Un den desket-bras a oa eus Gwilhom ar YANN. Brudet eo chomet evel ergerzhour. Redet en deus dre an darn vrasañ eus Broioù Asia hag Afrika.

Un nebeut pezhioù barzhoniezh gantañ a zo bet moulet war-dro 1840, er gazetenn « Echo de Morlaix ».

153) E 1858 ez embann an Aotrou Yann-Wilhoù HERRI e levr, **Buez hor Salver Jesus-Krist**, e ti Guffanti-Breton, Kemperle. Graet eo ar skrid gant komzoù a-unvan ar Pevar Aviel.

154) E rannyezh Gwened kentañ arroudennoù a gaver eus ar Skritur Sakr a zo er **Roll-lidoù Roman**, moulet e 1631, war c'hourc'hemenn an Aotrou'n eskob ROSMADEG.

Da c'houde e ranker dont betek Instructioneu Santell an Aotrou POURCHAS e 1767. Un adaozadur eo al levr-se diwar « Le Bouquet de la Mission » gant an Tad LEUDUGER.

42

155) Ganet e voe an Aotrou POURCHAS e Pleren, e 1720. Pell amzer e prezegas e kêr Wened. Un nebeut bloavezhioù kent an Dispac'h e teuas da rener Retred ar Merc'hed. Chom a reas kuzhet, gwisket evel ur c'houer, e tro-war-droioù Gwened, e-pad an Dispac'h. Mervel a eure e 1796, d' e 76 vloaz.

A-douesk e oberoù all e c'hellomp menegiñ **Buhé Sant Izidor**, e 1787, ha **Considerationeu Santel** e 1792.

Staget en doa an Aotrou POURCHAS gant un droiùgezh berraet eus Bibl Royaumeont, dindan an anv **Histoëriou ag en eu Testamant**. Kaset e voe al labour-se da benn gant an Aotrou Iehann MARION a droas ivez Salmoù evit al levr **Officeu eid er Sulieu**, embannet hepken e 1837.

Kavout a reer c'hoazh da venegiñ **Histoëriou tennet ag er Scritur Santel**, Vannes, Galles, 1792, hep anv oberour.

156) E-mesk an dornskridoù chomet a-ziwarlerc'h an Aotrou Pièr NOURI, ez eus daou anezho keinet, **An Testamant Kozh** hag **An Testamant Nevez**.

157) E 1818, e voe embannet en Oriant labour an Aotrou Jak JIKELLEU, **Histoér a vuhé Jésus-Chrouist**, savet gant skrid ar Pevar Aviel ha skrivet hervez distagadur Kervignag. Daoust d' al levr-se da vout hep notennoù, aotreet oa bet gant an Aotrou'n eskob AMELOT, nemet ne voe ket lakaet e gwerzh.

158) E 1857 e voe moulet, e Londrez, war goust hag evit ar priñs Lucien BONAPARTE, 150 skouerenn eus An Aviel hervez Sant Vazhe, lakaet e brezhoneg Gwened gant Kristof TERRIEN.

E 1858 e voe troet evit an hevelep hini gant Kristof TERRIEN bepred, **Kanenn ar C'hanennoù**. Kavout a reer ar skrid-se e **Celtic Hexapla**, levr enfolenn a 63 enebenn, ennañ keñver-ha-keñver c'hwec'h troidigezh eus an oberenn sakr : e gouerzeleg Iwerzhon, e gouezeleg Bro-Skos, e manaveg, e kembraeg, e galleg, e brezhoneg Leon, e brezhoneg Gwened.

Liheriou hag Avieleu a zo anv ul levr hep deiziad, bet moulet e Londrez e ti Trübner. Peder droidigezh a zo ennañ war bevar bann, unan e kembraeg, un all e brezhoneg Gwened gant Kristof TERRIEN moarvat, an trede, gant an hevelep hini marteze, en ur c'hemmesk a vrezhoneg Leon ha Kernev hag ar bedervet e gouezeleg Bro-Skos.

43

159) E 1861 e voe embannet e Gwened **Buhé hur Salver Jésus-Chrouist**, troet diwar c'halleg an Tad CROISET gant an Tad DANEU.

Ganet e voe an Tad DANEU e Sarzhav, d' an deiz kentañ a viz Genver 1821. E studi a reas e Skolaj Gwened. Beleget e 1845, e voe kure e Baod e-pad bloaz. Mont a reas da c'houde da di ar Jezuisted hag e kemeras lec'h an Tad ARBOULED evel misioner breton. Marvet eo e Gwened d' an 10 a viz Meurzh 1901.

Savet en deus ouzhpenn : **Buhé en eutru el LEU ; Exerciseu a zevotion** hag un nebeut kantikoù, en o zouesk **O Kalon Sacret me Jésus**, Nn 48 al **Livr Kañenneu**.

160) Un droidigezh eus Levr Ruth a zo bet lakaet gant GUYOT-JOMARD e « Manuel Français-Breton », embannet e 1867.

161) E 1868, ez embannas an Aotrou Goulven MORVAN, **Buez hor Saluer Jesus-Christ**, troet diwar c'halleg an Tad GIRY.

162) E miz Gwengolo 1899 e voe aotreet **Histoér Santél** an Aotrou Jerom BULEON gant an Aotrou JEGOUZEU. Embannet e voe al labour gant Lafolye, Gwened. An Aotrou Yann-Vari NIKOLAZ a stagas d' e lakaat e brezhoneg Leon ha peurc'hraet e voe al labour gant e genvroad, an Aotrou Alan an HABASK : **Histor Santel**, Kemper, Kerangal, 1900.

163) An Aotrou Yann-Vari NIKOLAZ a voe ganet e Plougernev d' an 12 a viz Genver 1848. Beleget e 1874, anvet e voe da gure e Kerfeunteun, e Sant-Kaourintin Kemper, e 1876. Chaloni e 1880, e voe anvet person e Lanrieg e 1888, e Plodiern e 1891. Marvet eo e 1899.

164) An Aotrou Alan an HABASK a voe ganet e Plougernev d' an 12 a viz Genver 1848. Beleget e 1872, e voe kelenner e Skolaj Pont-e-Kroaz ha, da c'houde, person e Kemeneven, e 1884, hag e Kloar-Karnoed e 1899. Marvet eo e 1906.

165) E 1904, e voe embannet gant Prud'homme, Sant-Brieg, **Histoar Zantel** an Aotrou Eujen HERI, lakaet e brezhoneg Treger gantañ diwar skrid gwenedek an Aotrou Jerom BULEON.

44

166) E 1904 ivez an Aotrou KAER, kure e Gwiglan, a embannas Ar Pevar Aviel lakeat en unan, Brest, Straed ar C'hastell.

167) E 1929, an Aotrou MADEG, aluzenner leanezed ar Spered Santel e Kerinou-Lambezelleg, a embann un **Histor Zantel**, e ti Derrien, Brest.

168) E 1930, an Aotrou Yann UGEN, gant skoazell an Tad EUJEN evit ar c'hentelioù, a embann **Buhez Hor Salver Jezus-Krist** hag, e 1937, **Aviel ar Zul**, Brest, Straed ar C'hastell.

169) Daoust d' al labourioù-se ken lies-doare ha da re all hon eus moarvat ankounac'haet, n' o deus ket kavet kenlabouërierien gredus ar gelaouenn STUDI hag OBER e ve bet graet war-dro ar Skritur Sakr e brezhoneg evel m' oa dleet. An darnvuiañ eus al labourioù-se a zo bet savet evit « an dud fidel ». Diouer a ra da veleien ha da gristenien desket Breizh un droidigezh klok eus ar Vibl, direbech koulz evit kement a sell ouzh ar yezh hag evit ar sentidigezh ouzh reolennoù an Iliz Katolik war an dachenn-se. N' heller nemet hetañ dezho dont a-benn da beurechuiñ al labour kaer o deus boulc'het.

(Da genderc'hel.)

KANAOUENN AM "ASAMBLE NASIOMAL"

E ti an Dielloù-Departamant e Sant-Brieg, ez eus dindan an arouez-mañ : Série F (ancien fonds), **Sermons en breton**, daou bakad sarmonioù eus dibenn an 18vet kantved, un tammig a-raok an Dispac'h bras. Sarmonioù e yezh Treger ez int evit al lodenn vrasañ anezho, talvoudus a-walc'h evit barn stad ar brezhoneg d' ar c'houlz-se. En o zouez eo hon eus kavet ar ganaouenn rimet-mañ, anezhi ur flemmgan a-enep an Asamble Nasional.

War bajenn gentañ ar ganaouenn e lenner ar gerioù galleg : *Chiffré par nous, maire de Lannion, le 25 mars 1792, Baudouin*. Hag evit gwir, war ar follennoù all e weler ivez berr-sinadur Baudouin o testenianñ petra ? n' ouzomp ket. Paperoù bet kemeret e ti ur beleg disuj evit bezañ lakaet etre daouarn ul lez-varn ? Marteze.

Ar ganaouenn en em ziskouez hep titl, hep anv oberour, ar reizhskrivadur a zo diasur, hag ur wech an amzer ez eus fazioù. N' em eus ket notet anezho holl : evit mont primoc'h em eus, d' am zro, diskrivet an destenn er reizhskrivadur hag hervez ar yezhadur a-vremañ.

Meur a dra a vije da deurel evezh warnañ e yezh ar ganaouenn. Fonetikel eo a-walc'h ar reizhskrivadur evit ma vefe anat yezh Bro-Dreger, ha kentoc'h an Treger bihan, Bro-Wengamp, eget an Treger bras, Landreger pe Lanuon. Lezel a ran d' hor yezhadurourien ar blijadur da studiañ ar pezh-mañ diouzh o skiant hag o micher. Notañ a ran hepken kement-mañ : implij e, en, dirak un anv-verb, kenkoulz hag o, ouzh, evit merkañ ar stumm-ober ; an implij-se, sur-mat, a vije da studiañ er yezh komzet n'eo ket hepken evit Bro-Dreger, met evit Breizh a-bezh. Sellit er poz kentañ : **Emaint e tourmantiñ o spered, o klask kompren an dekrejou...** Hag er poz 8-b : **Emañ noz-de en e devoriñ...** Kredet em eus e-pad pell ne veze ar rannig **e** dirak an anv-verb, nemet un distummadur eus **o**. Soñjal a ran hon eus moarvat d'ober aze gant ur rannig disheñvel, **e, en**, ken kozh an implij anezhi hag hini **o, ouzh**.

Evit ar pezh a sell tenor an destenn, e c'hellfe seurt pezhioù bezañ troidigezhioù diwar flemmganoù gallek a-enep an Dispac'h ez eus bet ur bern anezho hervez ar pezh a ziskouez an Dielloù.

46

N' eo ket koulskoude e vefe dianav ar werz-mañ : aes eo kavout anezhi er pajennoù 3-8 eus levr an Ao. beleg Durand, **Ar Feiz hag ar Vro, 1789-1814**, bet moulet e ti Lamarzelle, Gwened, 1847. Met gouzout mat a reomp peseurt kempenn en deus graet Durand d' ar c'hanaouennoù en deus dastumet : diskibl feal da Germarker en deus kribet, kribinet anezho da lemel diouto kement a sante ar galleg. Ha maz eus ur brezhoneg ha n' eo ket gwall-figus war ar galleg eo sur mat hini an 18vet kantved.

Tu a zo bet dija da geñveriañ Durand gant ar wirionez istorek. Embannet em eus e niverenn gentañ ar C'haieroù Kristen p. 60-64, Testamant an Aotrou Branelleg, dindan e stumm gwirion, ha sklaer eo peseurt labour en deus pourchaset an adaozer.

Amañ ne dalveze ket ar boan degas testenn Kanaouenn an Asamble Nasional evel m' emañ e levr Durand. Gant ar poz kentañ-mañ e vo a-walc'h, a gav din, da varn peseurt diforc'h a zo etre ar pezh a lennomp dindan skritur kozh, damziverket, an Dielloù, hag ar pezh a ginnig dimp a-hend-all, mouladur brav Lamarzelle.

Kalz a dud fur a gavann nec'het
Ha peurgedged ebarz em bro,
E maint o tournial ho spered
O klask klevet al lezenno :

Hogen bikenn na vezint klevet
Nag er vro-mañ nag e lec'h all
Anez gouveet penoz eo gret
Ann Aasamble Nasional.

Notomp da echuiñ ez eo hiroc'h, un tammig, testenn an aotrou Durand. 15
poz a zo ganti, 2 boz eta en tu-hont d' ar pezh a zegas hon hini, ha lec'hiet ez
int evel-hen : ur 5vet poz a zo etre pevare ha pempvet poz hon testenn-ni, ha da
echuiñ, ur 15vet poz a zeu war-lerc'h 13vet poz testenn an Dielloù.

M. G.

I. Cals a dut fur a (gavan) nehet
Ispial eus bro (1)
Eh maing hé tourmantin ô speret
O clasq compren an decrejou
Mais birvouicquen né vent intentet
Nac er vro man nac é lech al
A nez gout penos é heo composet
An Assamble National.
47

Kalz a dud fur a gavan nec'het
Ispial eus bro...
Emaint o tourmantiñ o spered
O klask kompren an dekredoù
Met birviken ne vint intentet
Nag er vro-mañ nag e lec'h all
Anez gout penaos ez eo kompozet
An Asamble Nasional.

2. Ne boain ny quet choaset da guentan
Voar ol dut ar rouantelez
Ar re a gufemb effrontetan
Deuz a quer a divoar ar mez
Eb lezen na raison na studi
Beté ma vouijent cozeal.
Ol e voaint mat da representin
En Asamble National.

N' hor boa-ni ket choazet da gentañ
War holl dud ar rouantelezh
Ar re a gavemp efrontetañ
Eus a gêr ha diwar ar maez
Hep lezen na rezon na studi
Bete ma ouijent kaozeal ?
Holl e oant mat da represantiñ
En Asamble Nasional.

3. Clevoet é heuz comz a harch noé
Da bini é voa digasset
An annêvalet dré eurs Doué
A guement corn é voa er bet
Né mert heis den né voé dastumet
En toez an ol loenet brutal :
Pet a jons dach é veo cahet
En Asamble National ?

Klevet hoc'h eus komz eus Arc'h Noe
Da b' hini e oa degaset
An anevaled dre urzh Doue
A gement korn a oa er bed,
Nemet eizh den ne voe dastumet
E-touez an holl loened brutal :
Pet a soñj deoc'h a vezo kavet

En Asamble Nasional ?

48

4.

Tud a hilis ac avocadet
Tud gentil ac labourerrien
Heretiquet ac quatoliquet
Filosphet ac cristennien
Ne hellai an neil hintent heguile
Pa harujont e bars er sal
Ac penoz hober gant assorcé
Un assemblé national ?

Tud a iliz hag advokaded,
Tudjantil ha labourerrien,
Heretiked ha katoliked,
Filosofed ha kristenien,
Ne c'helle an eil intent egile
Pa 'z errujont e-barzh ar sal :
Ha penaos ober gant ar seurt-se
Un Asamble Nasional ?

5.

An orgueil ac an avaristet
Ar lubricite an anvi
An dibin pe hefan direglet
Ar goler ac an diegui
A voe reprouvet er gristenes
Evel ceiz pehet capital
Emaing breman ô ceiz assemblez
En assemble national.

An orgouilh hag an avaristed,
Al lubrisite, an avi,
An debriñ pe evañ direglet,
Ar goler hag an diegi,
A oa reprouvet er Gristenezh (2)
Evel seizh pec'hed kapital :
Emaint bremañ o seizh assemblez
En Asamble Nasional.

49

6.

Dré orgueil ô deuz digasset
Eur paper da rein da intent
E rentont ar bet ol estonnet
En eur contemplin ho speret
Anzave nen deuz den fur nemertai
Hen amzer man nabet goejal
Cetu bombans ac superbité
An Assemblé national.

Dre orgouilh o deus degaset
Ur paper da reiñ da intent
E rentont ar bed holl estonet
En ur gontampliñ o spered,
Anzav nen eus den fur nemete (3)
En amzer-mañ, na bet gwechall,
Setu bombañs ha superbite
An Asamble Nasional.

7.

Ho bouclou arhant ô deuz roet
E vouit sicour paian ar glé

Mais ho pension ô deuz miret
Hac tazet da nao squet bemdé
Quemer a hellont pacientet
Nao squet bemdé nint quet fal
Profit zo demeus an avaristet
En assemblé national.

O boukloù arc'hant o deus roet
Evit sikour paeañ an dle
Met o fañsion o deus miret
Ha taozet da nav skoed bemdez : (4)
Kemer a c'hellont pasianted :
Nav skoed bemdez n' int ket fall,
Profit 'zo eus an avaristed
En Asamble Nasional.

8.

Henoret ho deuz evel daou sant
Hac laquet hober image
Da daou scrifannier impertinant
Goajal chacéoit deuz ho bro (5)
Ha balamour do lubricité
Hac cals ha insollancou al
Het neuzé da glach ar burété
En Assemblé national.

50

Enoret o deus evel daou sant
Ha laket ober imajoù (6)
Da zaou skrivagner impertinant
Gwechall chaseet eus o bro
Abalamour d' o lubrisite
Ha kalz a insolañsoù all :
It neuze da glask ar burentez
En Asamble Nasional.

9. Evell ma coms han den ha honor (7)

Un den honnest ac un den fur
E vé chaceet demeus ar gador
Groet dean mil displijadur
Biscoas nen dé manquet an envi
Hen toez an artisannet fal
Hé man noz dé en ho devorin
En assemblé national.

A-dal ma komz un den a enor
Un den onest hag un den fur
E vez chaseet eus e gador
Graet dezhañ mil displijadur :
Biskoazh n' end eo manket an avi
E-touez an artizaned fall ;
Emañ noz-deiz ouzh o devoriñ
En Asamble Nasional.

10. Clevoet he meuz ho defoa linnet

Pe dijeunet ha consequens
Han dé ma voe lancet an decret
Hoar caliteo an noblans
Mar ho blamer deuz ho decrejou
Ho deuz ho raisonnou brutal
Hé reir alliez re gorfadou
En Assemblé National.

Klevet em eus o devoa leinet
Pe dijunet a goñsekañs

An deiz ma voe lañset an dekred
War galiteoù an noblañs :
Mar o blamer eus o dekredoù
O deus o rezonoù brutal,
E reer alies re gorfadoù
En Asamble Nasional..

11. Nemert dré goler ac dré valis
Ne glevoer parlant er plas cé
Ne houfé den contempli pet sottis
Ha reproche an heil dé guilé
Ar blasfemmou ac han injuriou
Ar salmennou ac ar squandal
Ne glevoer quen sort litanniou
En assemblé national.

Nemet dre goler ha dre valis
Ne glever ken komz et lec'h-se ;
Ne c'houfe den kontampliñ pet sotis
Ha rebech an eil d' egile,
Ar blasfemoù hag an injuriou
Ar salmennoù hag ar skandal
Ne glever ken seurt litanioù
En Asamble Nasional.

12. Quent he vouit laquat voar ar paper
Ho lezen ac ho drecrejou
He clefoint implian ho hamzer
Da hober reflectionnou
Goel eo ganté mont da chervantal
Da Luzembourg pé dar voxal
Evouit nen deo chom da labourat
En assemblé national.

Kent eget lakat war ar paper
O lezenn hag o dekredoù
E tlefent implijout o amzer
Da ober refleksionoù :
Gwell eo gante mont da chervantal (8)
D' al Luzembourg pe d' ar Voks-hall
Eget n' end eo chom da labourat
En Asamble Nasional.

13. Rac zé voar lezen ar ceiz pehet
Hé rinqet chans a catechis
Han hesquib[en a zo chasheet
Har pab nest mui diouz an illis
Mal fel deoch gout piou hé gouvernot
Het da len an orriginal
Scrifet en paris voar caheroù
An Assemblé national.

Rak se war lezenn ar seizh pec'hed
E rankont cheñch a gatekis :
An eskibien a zo chasheet,
Ar Pab n' eo mui diouzh an Iliz ;
Mar fell deoc'h gout piv he gouarno,
It da lenn an orjinal
Skrivet e Paris war gaieroù
An Asamble Nasional.

(1) Gwerzenn diglok hep mar ebet.

- (2) Kristenezh = chrétienté, a zo disheñvel diouzh Kristeniezh
- (3) Nemete = nemeto.
- (4) Taozet = ar galleg taxé, sell. ouzh taos.
- (5) Chacéoit : distagit chaseoet ; er poz war-lerc'h e vo skrivet : chaceet.
- (6) Ret eo lakaat amañ al liester : imajo, en abeg d'ar rimañ gant ar ger : bro.
- (7) Evit ar poz-mañ niverenn ebet. Merket e vo 9 ar poz warlerc'h hemañ.
- (8) Chervantal : ger dianav din, marteze e vefe da gompren ober cher vat. Ar ger a dle bezañ : chervantat, pe chervatat, ma varnomp diouzh ar rim gant labourat. Voks-hall a vefe anv ul lec'h, pe un ostaleri e Pariz an amzer-se.

ENBROADEG AR VRITONED EN ARMORIKA

Troet, berraet un tammig, diwar levr Kenneth Jackson, *Language and history in Early Britain*, p. 12-18 (Edinburgh, University Press, 1953)

Petra ouzomp diwar-benn divroadeg ar Vritoned (1) war-du Armorika ? Daoust ha gallout a reomp resisaat ar bloaziadoù m'eo c'hoarvezet an darvoud-se ?

Sellomp da gentañ ouzh an testenioù istorek.

Kenstrollet eo bet gant Joseph Loth, en e levr **L'Emigration bretonne** en *Armorique du Ve au VIIe siècle de notre ère* (Paris, 1883), kement a zegas dimp an testennoù skrivet. Da sellout outo hervez o urzh kronologel eo e levr Gweltas, **De Excidio Britanniae**, savet war-dro 540, e kaver ar roud kentañ eus divroadeg ar Vritoned. Er pennad 25, en un arroud helavar hag uhel an ton anezhañ, e tanevell Gweltas penaos, gant stok kentañ aloubadeg ar Saozon, e voe lazhet ul lod eus ar Vritoned, ul lod all skrapet kuit evel sklaved, keit ma tec'he reoù all war-du ar menezioù pe ma klaskent ur repu en douaroù tramor. Ne ro Gweltas ano resis ebet evit ar vro ma lestras daveti ar repuidi-mañ, met ne c'hell bezañ nemet an Arvorig. Hervezañ, e vije c'hoarvezet kement-se a-raok trec'hadennoù ar penn-arme roman-briton Ambrosius Aurelianus war ar Saozon, trec'hadennoù a zo bet klasket o amzeriadañ resis a-walc'h etre ar bloavezhioù 470 ha 480. Marteze eo diwar al luskad-se a dud enbroet e welomp un eskob breton, Mansuetus, o kemer perzh e Sened-Iliz Tours e 461. Ret eo notañ e oa stag an Arvorig d' ar c'houlz-se ouzh Arc'heskopti Tours, met en abeg da se, ne oa marteze ar Mansuetus-se nemet un arvorikad, ha n' eo ket ur briton.

(1) Envel a reomp er pennad-mañ Britoned ar poblañsoù deuet eus Breizh Veur d' an Arvorig, o tilezel kement ger all, zoken Brezhoned, a vije bet amsklaer.
54

War an douar bras eo **Jordanes** an hini kentañ a zegas keloù eus un darvoud bennak a seblantfe bezañ un enbroadeg eus ar Vritoned. O skrivañ war-dro ar bloavezh 551 e lavar e c'houlennas an Impalaer Anthemius skoazell digant Britoned, a-enep ar Wisigoted, ha penaos o roue Riotimus deuet dre ar mor gant 12000 den, en em ziazezas e rannvro ar Berri, nemet e voe trec'het hag e rankas tec'hout e Bourgogn. War-dro ar bloavezh 470 eo e c'hoarveze an dra-se. Koulskoude n' eo ket peursklaer danevell Jordanes : ne weler ket mat hag-eñ eo en Enez Breizh-Veur e klaskas an impalaer Anthemius skoazell-soudarded, pe hag-eñ eo digant un drevadenn a Vritoned gwriziennet-start dija en Arvorig, e c'houlennas tud a brezel. An eil martezead-mañ eo an hini a oa Joseph Loth a-du gantañ, ha kompren a rae ar bagoù a ra Jordanes ano anezho, eus al listri m' en divije savet warno Riotimus evit kuitaat aodoù an Arvorig ha mont ganto a-benn red, en diabarzh al Loar. Met diaes eo soñjal he divije gallet un drevadenn yaouank c'hoazh, bodañ un arme a 12000 soudard d' he c'has da bell-vrezeliañ. En em zinerzhañ en un doare risklus meurbet a vije bet. Gwirheñveloc'h eo soñjal e oa ar bagad-se ul lod pe lod eus an engroezioù a Vritoned o tivroañ neuze, a glaske fred war an tu-all d' ar mor hag en em lake aes-a-walc'h da c'hopriddi e servij pennoù-arme an douar bras, kentoc'h eget gwelout enno soudarded bet savet e-touez. enbroidi diazezet e Breizh vihan. N' eus netra hon redife da lavarout eo diwar c'houlenn Anthemius e teuas an dud-se eus Enez Vreizh ; ne oant marteze nemet ur bagad o kantren hag o tegas gant se diaezamant ha soursi d' ar renerien roman e Galia ; tennañ a rejont implij diouto evel armead-skoazell. Sidonius Apollinaris, marv war dro 489, a ra meneg eus Britoned en em ziazezet war ribloù al Loar, ha reiñ a ra anv o fenn-rener : Riothamus. Sed un destenn a seblant menegiñ ar bagad a gomzomp diwar e benn, d'ar c'houlz ma tegouezhas er Berri.

Bez' hon eus eta testenioù sklaer o lavarout e oa krog luskad an divroadeg eus Enez Breizh war-du an Arvorig etre ar bloavezhioù 450-470. Ha reizh a-walc'h

eo krediñ e oa dija, e kerzh ar remziad war-lerc'h, an drevadenn en Arvorig un dra diazezet mat. Hervez skrivagner-dastumer buhez Sant Winnog, e teuas eus enez Breizh, nebeut goude marv Klovis (511), ur Riwall, e penn ur strollad bras a listri evit aloubiñ an Arvorig. Aze hon eus moarvat keloù eus savidigezh an Domnonea. Lizher eskibion Tours, Angers ha Roazhon, skrivet etre 509 ha 521, hag a c'hourdrouz eskumunugañ ar veleien briton Lovocatus ha Katihernus, a c'houlenn e vije bet a-benn neuze an Domnonea dindan dalc'h ur boblañs a Vritoned niverus a-walc'h evit diaezañ pennoù bras Ilizoù Galia gant he c'hustumoù liderezh.

55

Evel m' en deus hen notet J. Loth, eo e kerzh bloavezhioù kentañ ar 6vet kantved, o deus dilestret en Arvorig ar sent visionerien vrasañ deuet eus an enez : Samzun, Paol Aorelian, Tudual, Maglorius (Maeler) ha Brieg. O vezañ ma teuent da visionerien eo ret e vije bet tud da avielañ. Soñjal a ra Loth e oa diskennet dija a-dal kreiz ar 6vet kantved, ur bern Britoned war an douar bras. Hervez testeni Gregorius Tours hag a voe kempredad gant Warog, diazezeur Bro-Wereg, an trede stad vras briton en Arvorig, eo e-pad palefarzh diwezhañ ar 6vet kantved e welomp anezhañ o tiskouez oberiantiz. E eontr, Konomor; eo e 560 a genstrollas e dud gant soudarded Khramne, mab Klotaer, emzavet a-enep e dad, evit stourm ouzh hemañ. Gant diazezidigezh Bro-Wereg e seblant trevadennoù ar Vritoned bezañ tizhet o ledander brasañ. E Gregorius Tours ne vez ken anvet nag ar vro nag he zud, gant an anv kozh gall-roman : Armorika, Armoriki, met gant an anv nevez : Britannia, Britanni. Koulskoude, en eil sened-iliz Tours e 567, e reer c'hoazh un diforc'h etre Britoned ha gall-romaned an Arvorig.

War-dro pegoulz ec'h echuas an enbroadeg ? Ar sant diwezhañ o tont eus an enez da Vreizh vihan evel misioner a zo bet Ivi, e fin ar 7vet pe e penn kentañ an 8vet kantved.

E berr komzoù, an testenioù istorek a ziskouez e krogas divroadegoù ar Vritoned e-kreiz pe en trede palefarzh ar 5vet kantved, evit tizhout o ampled brasañ e-kreiz pe en eil hanterenn eus ar 6vet kantved, gant astennadurioù betek e penn kentañ ar 7vet kantved. Luskad an divroañ a c'hell bezañ sellet evel echu en hanterenn gentañ ar 7vet kantved.

* * *

Unan eus ar c'hudennoù diaesañ diwar-benn an divroadeg eo houmañ : perak o deus ar Vritoned kuitaet enez Breizh ?

Ma vijent deuet eus gevred an enezenn, e vefe sklaer ar perak eus an dec'hadeg, dre maz eo al lodenn-se an hini m' en em ziazezas enni ar Saozon, a vagadoù kreñv, e-pad eil hanterenn ar 5vet kantved ; hag en degouezh-se e klotfe mat an darvoudoù gant an daolenn a ra dimp Gweltas eus an ermaeziadeg. Met ar yezhoniezh hag arouezioù stank a-walc'h a ziskouez eo deuet an enbroidi eus an Devon hag eus Kerne-Veur, nemet marteze ivez eus ar pastelloù-bro a stok ouzh ar re-mañ war-du ar Sav-Heol. Ha neuze n' eo deuet ar Saozon da chom en Devon nemet e dibenn ar 7vet kantved, n' int deuet e Kerne-Veur nemet e penn kentañ an 9vet. Diaes eo eta gwelout en aloubadeg ar Saozon an abeg eus ermaeziadeg Britoned an Devon ha Kerne-Veur. Setu perak ez eus istorourien o deus laket an divroadeg-se war gont moustradur aloubadegoù Iwerzhoniz, ha n' eo ket war gont bountadeg ar Saozon. Met d' ar mare ma krog an divroadeg, eo echu taolioù-brezel an Iwerzhoniz a-enep enez Breizh.

56

Ret eo koulskoude kaout un abeg d' un divroadeg ken bras. Moarvat ne dleer ket barn an traoù gant menozioù re strizh, na soñjal ne c'hellfe un divroadeg bezañ nemet d' ar mare resis ma vez aloubet ur vro, pe m' emañ war-nes bezañ aloubet, hep na c'hellfe an dec'hadeg c'hoarvezout a-raok. Lavaroù Gweltas (mar geller da vihanañ kaout fiziañs enno) a ziskouez sklaer o deus tec'het an divroerien gentañ dirak ar Saozon ; taolennañ a ra dimp anezho evel un tan-gwall drastus, o tistrujañ pep tra, kêrioù ha maezioù, evit paouez hepken nemet goude bezañ dismantret an enezenn a-bezh betek aod ar c'huzh-heol. En ur seurt taolenn, roomp he lod d' ar Retorik ha da c'hwezh al lavar. Chom a ra evelkent e

c'hell an alouberien bezañ graet argadadennoù niverus lerc'h ouzh lerc'h, pell bras eus an dachenn ma oant dija gwriziennet enni. Gwirheñvel eo ez eus bet a-dal kreiz ar 5vet kantved, milieroù a Vritoned, a veze o chom en dachennad-vro a dlee hepdale dont da vezañ ar Wessex, a zo tec'het kuit hag o deus treuzet ar mor hep gortoz pelloc'h donedigezh ar Saozon, gant aon da gouezhañ dindan o dalc'h, ha n' eo ket dre ma oa dija tra c'hoarvezet. Ha ken gwirheñvel all eo e vije bet tud eus an Devon pe eus Kerne-Veur o rakwelout sklaer ar c'houlz ma teufe ar Saozon betek penn pellañ kornog an enezenn, o deus divizet divroañ keit ma c'hellent c'hoazh hen ober diriskl. Istor Riotimus a seblant bezañ un darvoud a-seurt-se. Etre fin ar 5vet ha kreiz ar 6vet kantved, ez eus bet, hervez ar pezh a seblant, un hanter-kantved a beoc'h e kreisteiz an enezenn, goude diazeidigezh rouantelezh kentañ ar Saozon er Wessex. Met goude ar spanaenn-se, ec'h adkemerar ar Saozon o c'herzhed war-du ar c'hornog, betek kanol Bristol. Ha da grediñ ez eus e vije bet savet, diwar ar vountadenn-se eus ar Saozon, gwagennoù nevez a zivroerien o kuitaat rannvroioù ar c'huzh-heol ; ha kement-se adalek emgann Old Sarum e 552 betek emgann Dyrham e 577, marevezh ma padas aloubidigezh kreisteiz ar Gloucestershire gant ar Saozon betek tizhout harzoù ar Somerset hag an Dorset.

Dre vras eta e c'hellomp taolennañ an divroadeg evel-hen :

- E kerzh trede palefarzh ar 5vet kantved, war un dachennad vras eus kreisteiz an enez, tec'hadeg en dizurzh eus ar boblañs dirak aloubadeg ar Saozon.

- Goude-se, e-pad daou pe dri remziad, e kemer an divroadeg stumm bagadoù divroerien o klask en em adstrollañ gant o c'henvroiz diskennet dija en drevadenn nevez : kuitadeg un niver bras eus an Dumnonii dindan renerezh Riwall, nebeut goude 511, pezh a ziskouez ar stad a nec'hamant a veze o ren e rannvroioù ar c'hornog, nebeut a-raok emgann Menez Badon.
57

- Goude-se, marevezh sioul a-walc'h e-pad un hanter-kant vloaz bennak.

- Hag adarre, spontadeg gwashoc'h c'hoazh, pa 'z adkrog ar Saozon gant o c'herzhed war-du ar c'hornog, etrezek Kanol Bristol, tec'hadeg buanaet gant faezhidigezh ar Vritoned e Dyrham.

- Erfin, war-dro dibenn ar 6vet kantved e tigresk luskad an divroadeg, evit mont da get en hanterenn gentañ ar 7vet kantved, pa chom a sav e-harz Forest Selwood, astennidigezh ar bagadoù saoz aet war-raok eus ar Wessex.

Troet gant GWENGOURIEN
ha GLANNDOUR.

AL LEVRIOU

THEATRE IN IRELAND, gant MICHEAL MAC LIAMMOIR
embannet gant The Cultural Relations Committee of Ireland
Priz, daou shilling

D' al lennegezh saoznek he deus roet Iwerzhon pezhioù-c'hoari dreist-holl. Gouzout a ran ez eus bet Swift ha Joyce ha George Moore. Met daoust dezho, daoust da ramzelezh Joyce zoken, ez eo war dachenn ar c'hoariva ez eo bet heverk lodenn Iwerzhon el lennegezh saoznek : gant Sheridan, Congreve, Goldsmith, Oscar Wilde, Bernard Shaw, ha re all c'hoazh.

Ur c'hoariva goapaus eo bet, a-hed ar wech, ar c'hoariva skrivet gant Iwerzhoniz, oc'h ober al lu eus ar renkadoù uhel saoz, pe eus Bro-Saoz hec'h-unan. Hent a zo bet graet, gwir eo, adalek **The Ways of the World** pe **The School for Scandal** betek John Bull's **other Island** : an hent, just, a oa etre un Iwerzhon o vont da get hag un Iwerzhon oc'h adsevel.

An dud veur-se, avat, Sheridan, Wilde ha Shaw, a oa evel ar **Wild Geese** eus al lennegezh iwerzhonat. Evit rein da Iwerzhon ul lennegezh dezhi hec'h-unan, ul lennegezh vroadel, eo e tivizas William Butler Yeats, Lady Gregory, ar vreudeur Fay hag Edward Martyn sevel, e 1904, **The Abbey Theatre**. Ganet ar c'hoariva, e teuas da heul ar c'hoarierien - evel Maire O'Neill ha Fred O'Donovan -, ar skrivagnerien . John Millington Synge, Lennox Robinson, Arthur Shields, Sean O'Casey - ha, na petra 'ta, ar selaouerien, daoust na voe morse ar vicher unan da zont pinvidik.

Souezhus pegen heñvel istor dasorc'hidigezh ar c'hoariva iwerzhonat ouzh istor dasorc'hidigezh al lennegezh vreizhat - pe forzh peseurt lennegezh vihan all. E-kichen studiañ ar vro, diazezañ ul lennegezh warni, e klasker - kuit a jubennouriezh estren - sellout ouzh ar bed bras : an daou du, ret o-daou, eus an dieubidigezh diouzh ar mac'homer ; hag e-kichen an **Abbey Theatre**, iwerzhonatrik, e sav Martyn ha George Moore (1914) an Irish Theatre e-lec'h ma vo c'hoariet evit Dubliniz Ibsen, Tchec'hov ha Maeterlinck.

58

Pa vez komzet eus pezhioù-c'hoari « evit ar bobl », an dud hag a vez atav o fougeal e komprenont ar bobl, a ginnig diouzhtu sorc'hennoù diot koulz ha distumm - ur «Mil Pok» dezhañ uhelder speredel an Almanak Vermot, pe ur « Goulenn-Dimeziñ » kaoc'het ha mastaret, peogwir e vije bet re ziaes da gompren, emichañs, er stumm kenedel ha seven roet dezhañ gant Tchec'hov ! Gwelout a reomp atav **Les Tournées Machin** o vrudañ e kêrioù bihan Breizh azenachoù sotañ Pariz, evel ma weled en Iwerzhon **Dobell's Company** o rein e Ballinasloe **The Bad Girl of the Family**. Da stourm ouzh an disevendet-se, ouzh ar seurt dizoujañs e-keñver ar bobl, eo e krogas Anew McMaster, e 1925, da c'hoari Shakespeare e bourc'hadennoù Iwerzhon - ugent vloaz a-raok na vije bet graet heñvel-tra e Bro-C'hall gant an T.N.P. ha Jean Vilar. Sebezus, ha kentelius-meurbet, eo ar berzh a reas Anew McMaster - ken tostoc'h e oa ene ha komzoù Shakespeare ouzh kalonoù kouerien Iwerzhon eget ouzh re mondianed London.

Diwar ar c'hoari-dic'hoari-se etre an nerzhioù lennegel broadel hag etrevroadel e voe ganet ur c'hoariva all c'hoazh, **The Gate Theatre** (1930) renet gant Micheal Mac Liammoir ha Hilton Edwards. Ledanoc'h e dachenn eget hini an Abbey en deus roet pezhioù gant Ibsen, Tolstoy, Kaiser, Martinez-Sierra, Cocteau, Strindberg, Gertrude Stern ha re all, koulz ha toullet e hent da veur a skrivagner yaouank evel Denis Johnston pe O'Neill. Klask a ra ivez kaout ur stumm-c'hoari natureloc'h eget ar stumm ledan ha barzhoniel roet gant W. B. Yeats da c'hoarierien an **Abbey**.

An **Abbey Theatre** eo a ra ar muiañ, dreist-holl a-drugarez da Ernest Blythe ha Roibeard O Farachain, war-dro ar pezhioù iwerzhonek, daoust m' o deus Micheal

Mac Liammoir ha Gearoid O Lochlainn, renerien ar **Gate**, skrivet ha c'hoariet en iwerzhoneg, ha iabouret kalz evit ar **Comhar Dramuiochta**. Hag ur wir dasorc'hidigezh a zo er c'hoariva iwerzhonek, evel ma 'z eus er c'hoariva iwerzhonat.

Yeats, Lady Gregory, Synge, Lennox Robinson, Sean O' Casey, T. C. Murray, Denis Johnston, setu aze lod eus ar skrivagnerien roet d'ar sevenadurezh gant ar c'hoariva iwerzhonat dasorc'het. Holl int ganet eus ar frankiz vroadel, pe eus ar stourm eviti. Daoust ha ne dalveze ket ar boan d' ar vroadelourien, neuze, ha pa ne ve bet nemet evit gounid ar spered hag ar sevenadurq stourm hag en em gannañ ?

P. D.

NOTENNOU

HOR MIGNONED. -

Yann Le Goas ha Mari-Loeiza Cornic a zo laouen o kemenn ez int bet euredet e Chapel Santez-Anna ar Palud, d' an 3 a viz Gouere.

Andrev Fleury ha Vetig Riou a zo laouen o kemenn deoc'h, ganedigezh o bugel kentañ Gwenola, Mari, Erwanaig, d' an 19 a viz Mezheven 1956, e Montroulez. Hor gourc'hemennou dezho holl.

KANV. -

Gant mantr hon eus klevet ar c'heloù eus marv an Ao. Bourdet, aet d'an anaon e Naoned, d' ar 5 a viz Mae, en e 82 vloaz. Kalz en deus labouret an Ao. Bourdet evit an emsav broadel hag evit dieubidigezh Breizh. Mar deo marv a-raok na vefe deut an trec'h gant ar vroadelourien, e vo dalc'het avat soñj eus ar stourmer kalonek ez eo bet. D' e diegezh, dreist-holl d' e verc'h Suzanna Bourdet, e kinnigomp hor gourc'hemennou a gengañv.

LIZHIRI. -

« Kerse am eus bet o lenn reolennoù nevez ar yezhadur « Skolveurel », ur rann brasoc'h en Emsav. Daoust ma n' on ket tomm eus ar **zh** spi am eus ne vo ket degemeret doare trefodet an **h**, ur giladenn veur e vefe d' am meno. »
Y. C.

GORSEDD SANT-BRIEG. -

Kemennet eo bet dimp e oa bet anvet Per Loisel Dreuz Meur goude marv Taldir. Er bloaz-mañ ez eo bet lidet ar gouelioù e Sant-Brieg ha Sant-Ke d' an 28 ha 29 a viz Gouere. Prizioù lennegel a zo bet roet evel bep bloaz da 2 ezel eus ar Gorsedd.

KAMP AR VREZHONEGERIEN. -

Kamp ar Vrezhonegerien, renet gant an Itron de Bellaing ha Ronan Huon, a zo bet dalc'het e Ploueg ar Mor etre ar 16 a viz Gouere hag an 30. War-dro 52 kamper a zo deut d'ar c'hamp, dreist-holl tud yaouank dindan 20 vloaz. Lod eus ar Gamperien o deus aozet arnodenn an Trec'h hag ar re vras o deus selaouet Jarl Priel o tisplegañ dezho e oberenn diwezhañ.

ARNODENN AN TREC'H. -

Arnodenn an Trec'h a zo bet dalc'het d' ar 26 a viz Gouere e Ploueg. Setu anv ar re a zo bet kavet barrek da c'hounit :

An Ao. Auffret, meneg mat.

Gwenola de Rohan-Chabot, meneg mat.

Yann-Loeiz Perrot, meneg mat.

Erwan Evenou, meneg mat.

Mona Maze, meneg mat.

Viviana de Rohant-Chabot, meneg mat a-walc'h.

Mari-Elen Maze, meneg mat a-walc'h.

Gwenaël Maze.

LEVRIOU DIWAR-BENN BREIZH. -

Embannet eo bet gant al levr di keltiek (108 bis, rue de Rennes, Paris, VI) roll al levrioù a zo da werzhañ : en o zouez niverennoù kozh Feiz ha Breizh, Ar an Deulin gant Kalloc'h, geriadurioù Le Gonideg ha Troude ha kalz a draoù all a dalvoudegezh, Al levrig a zo ennañ 52 pajenn.

CHRISTMAS HYMNS in the Vannes dialect of Breton gant Roparz Hemon a zo o paouez bezañ embannet gant Dublin institute for Advanced studies 64-65, Merrion Square, Dublin. Priz al levr a zo 12/6 (war-dro 650 lur gall). Gallout a reer hen goulenn digant P. Bodenan, 3, Chemin des Potiers, Ergué-Armel. -

Setu ar pezh a lavar R. Hemon eus an Nouelennoù-se e niv. 128 Ar Bed

Keltiek :

« O lakaat urzh er paperennoù chomet war-lerc'h Emil Ernault, an Ao. L. Ar Floc'h a gavas e 1948 un dornskrid nouelennoù gwenedek. An dornskrid-se ne oa ket dianav. Unan eus an nouelennoù zoken a oa bet embannet gant Ernault, etre 1905 ha 1908, war ar « Revue Morbihannaise ». Hogen ar peurrest a oa chomet diembann.

E-touez an dornskridoù kozh dastumet e ti Ernault, ez eus daou a dalvoudegezh kalz uheloc'h eget ar re all : « Trajedienn Jenovefa a Vrabant », e rannyezh Treger, savet hogos penn-da-benn gant klotennoù-diabarzh, hag an oberenn-mañ. E gwirionez, teñzorioù int, o teurel sklerijenn vras war istor hor yezh hag hol lennegezh.

Dornskrid an nouelennoù a zo bet kavet e Kolpoù war-dro 50 vloaz 'zo. Unan eus e berc'henned a oa Yves Le Quentrec, « jeun garçon et garçon bonn garçon » eus Begnen. Gant piv eo bet skrivet, ne ouzomp ket. Ha ne ouzomp ket pelec'h na pegoulz. Hervez an Ao. Merlet (Doue d' e bardono), mirour Dielloù Aodoù-an-Hanternoz, ar skritur a zo eus diwezh ar 17vet kantved. Hervez an danvez, ha muioc'h c'hoazh hervez ar yezh, e tle bezañ eus derou, pe da vihanañ eus kentañ hanterenn ar c'hantved-se.

Koshoc'h eo eta eget ar skridoù koshañ bet miret e gwenedeg, nemet an nebeut gwerzennoù bet embannet gant Loth e niv. 8 ar « Revue Celtique », e brezhoneg-krenn warnañ liv Bro-Wened.

Er c'hentskrid am eus savet e studian ken resis ha ma c'hallan ar yezh-se. N' eo ket gwall zisheñvel diouzh ar yezh komzet bremañ, hogen stummoù 'zo, er verboù dreist-holl, a zo aet da get hiziv. Rannyezh Wened en amzer-se, ha n' eo ket souezh, a oa tostoc'h ouzh ar rannyezhoù all eget bremañ. An diforc'h bras etre ar rannyezhoù a zo c'hoarvezet, a gredan hep bezañ sur, er 15-vet hag er 16-vet kantved. Er 17-vet kantved e oa graet.

Tud ha n' int ket diduet kalz gant kudennoù yezhoniezh a c'houlenn :
petra dalv ar skrid evel lennegezh ?

Ar 17 nouelenn a zo amañ (niverennet a 6 da 22, rak ar 5 kentañ a vank), 2.004 a werzennoù en holl, n' int ket taolioù-micher. N' int na gwelloc'h na gwashoc'h eget an darn vuiañ eus hor c'hantikoù hag hor c'hanaouennoù santel. Pezh a ra o zalvoudegezh eo o eeunded, o tont eus ur feiz virvidik hep an disterañ troidell. Lennegezh pobl eo. Ne gav ket din int bet savet gant tud desket-bras. Diskouez a reont eneoù fromet don gant istor Jezuz hag e Vamm, adal ar C'hinivelezh betek ar Basion. Kanennoù Nedeleg int, ha koulskoude n' int ket laouen. Aliesoc'h e venegont Menez Kalvar eget kraou Belem, aliesoc'h poanioù an dud eget o flijadur, aliesoc'h krizderioù ha gloazioù eget douster, aliesoc'h poanioù an Ifern eget joaioù ar Baradoz: Ur skeudenn int eus buhez reuzeudik ha trubuilhus ar werin en amzerioù brezel ha kerteri :

62

« Kanomp Nouel da Roue ar ster,
A c'houzañvas marv d' ar Gwener,
Evit hol lamet e hirder »,

F. 128

Setu an diskan.

Ur ganenn a-bezh (niv. 12) a zo gouestlet d' an uzurer, a wask ar bobl :
« Pa oa an termen erruet,
- Roit din argent, ret eo kavet,
Peotramant ar serjanted
A gerzho prezant d' ho kwelet
- Va den, gortoit bet ar foar,
Me 'm eus ur gwiad a zo kaer,
A-benn ma'm bo touchet argent,
M'ho kontanto inkontinant.

Un arall a lare dezhañ :

- N'em eus nemet daou ejon,
O diouer me ne c'hallan ket.
Pa deuy an eost, me roy deoc'h ed.
Me 'm eus pemp pe c'hwec'h inosant,
N' o deus na boued na gwiskamant.
Mar degasit serjanted din,

E echuhet hor ruiniñ. »

Hol lennegezh, betek an 19-vet kantved da vihanañ, a zo soubet en hengounioù o tont eus ar Grennamzer, hengounioù kristen a zo o orin en « Apocrypha », treuzfurmet dre faltazi ar bobl hag o kemer muioc'h-mui doare marvailhoù-gwerin. Talvezout ar boan a rafe studiañ a-zevri emled an hengounioù-se e Breizh, hag ar stummoù a wiskont er gwerzioù, er c'hantikoù, er misterioù, er c'hontadennoù. Aman (niv. 6) ez eus da skouer ar Pemzek Arouez kent ar Varn, ha na glotont ouzh hini eus ar rummadoù arouezioù meneget gant W. W. Heist en e levr gouiziek « The Fifteen Signs before Doomsday ». Taolennadur an Ifern, hag an nav foz a zo ennañ (niv. 16), nav foan ar re zaonet ha donedigezh an Antikrist, (niv. 20) a zo deuet, anat eo, eus lennegezh relijiel ar Grennamzer. Hogen ret e ve gouzout penaos.

Al levr-mañ, moulet-kaer, a zo embannet en Iwerzhon, gant arc'hant Iwerzhoniz. Ha n' eo ket melkonius soñjal ne deuomp ket a-benn e Breizh d' ober netra heñvel ? Da vihanañ, ha gouest e vo ar Vretoned da brenañ an dielloù-mañ ken prizius eus istor o yezh, ha n' int ket gouest da voulañ o-unan, - gwerzhet marc'hat-mat, dre vadelezh c'hoazh en o c'heñver ? Neb a breno ur skouerenn eus al levr a roio kalon da Iwerzhoniz d' ober muioc'h ma c'hellont evit Breizh. »

LA BRETAGNE REELLE. -

Krog eo ar gelaouenn-se da embann skridoù distag. Da heul ar « **Galerie Bretonne** », gant La Bénélais, hag a vez lennet gant dudi (300 lur) ez eus bet embannet, da skouer, **Fédéralisme Interne et Externe** gant R. Tugdual (200 lur), **Pour un Socialisme Breton** gant R. Glémarec (200 iur), **Les Celtes de France et de Gaule** barzhoneg gant Mamm Goz, troet diwar ar brezhoneg, hep priz merket. « La Bretagne Réelle », B. P. 128 Rennes. - C.C.P. 754-82 Rennes.

BARR-HEOL NEVEZ. -

Goude bezan bet difennet gant renerien ar Bleun-Brug, Barr-Heol a zo bet adsavet evel ur gazetenn dieub renet gant an Ao. Klerg. Se a zo lavarout na zoujo Barr-Heol nemet ar wirionez hag e varno pep tra en doare broadel. Ur bern pennadoù talvoudus a zo en niverenn gentañ-se, dreist-holl unan fromus ha dizaon diwar-benn Ar Yeodet, hag en deus roet e vuhez evit ar vro. Dlead pep brogarour a zo koumanantiñ d' ar gelaouenn galonek-se, a nac'h heuliañ an hentoù aonik ha mezhek a zo bet dibabet gant kemend-all a dud. Koumanant : 200 lur da nebeutañ da : M. Le Clerc, recteur, Buhulien près Lannion. - C.C.P. 917-64.

63

PRIZIOU BREZHONEK E LISE BREST. -

Setu aman al levrioù zo bet kinniget evit bugale lise Brest :

- « E Skeud Tour Bras Sant-Jermen », 3 skouerenn ;
- « Kanomp laouen », 3 sk. ;
- « Boñioù evit geriadurioù » (da vezañ embannet), 3 sk. ;
- « Breiz hor Bro », 4 sk. ;
- « Seiz Pennad Lenn », 12 sk. ;
- « Mil Pok », 12 sk. ;
- « Kartenn Breizh », 12 sk.

Ar vugale a oa da rein prizioù dezho a oa niverus a-walc'h. Dre-se, ur wech ma oa bet roet an tri levr gwirion d' an 3 gentañ, ar re-all o deus bet ur pakad treutik.

Spi hon eus e vo kinniget muioc'h a levrioù a dalvoudegezh en amzer da zont. Trawalc'h a levrioù brezhonek a vez embannet evit se ha gortoz a reont da vezañ prenet.

DISKOUEZADEG LEVRIOU. -

Da geñver devezh ar Brezhoneg he deus an Itron de Bellaing aozet un diskouezadeg en ur stal feurmiñ-levrioù eus Gwengamp. Diskouezet e oa 200 vloaz lennegezh vrezhonek : 1738-1750, levrioù kozh, geriadur Gregor Rostren ; 1850, Levr barzhonegoù kozh ; 1900, « Va beaj e Jerusalem » gant Leclerc ; 1910, ul levr gant Dir-na-Dor ; 1925, « Lizher an Hini Marv » gant Jakez Riou ; 1941, « Geotenn ar Werc'hez » ; 1950, « Labous ar Wirionez » ; 1952, « E skeud Tour Bras Sent Jermen » gant Yeun ar Gow ; 1955, « Evidon va Unan » gant Ronan Huon. Al

levrioù-mañ a oa war ar c'hentañ hed-gwel. Er foñs pe e-kreiz e oa : « La Langue bretonne et ses combats » gant Roparz Hemon, « La Langue bretonne » gant Guyiesse, poltred Kalloc'h hag e levr « Ar an deulin », poltred Priel hag e zaou levr ruz ha gwer hag erfin al levrioù bugale « Merc'hig ar Rozenn » hag ar « C'hemener bihan kalonek ». A-drek e oa bet lakaet kartenn ar Vro.

UR PRIZ LENNEGEL. -

An Emglev Sevenadurel Breizhat (Entente Culturelle Bretonne) a gemenn e vo roet e dibenn ar bloaz ur priz 50.000 lur - d' un oberenn embannet abaoe ar brezel, e brezhoneg pe e galleg, gant un oberour breizhat pe war danvez breizhek.

Gallout a reer kas ar skridoù betek an 31 a viz Eost 1956 da : L'Entente Culturelle Bretonne, 3, rue Francis-Garnier, Paris (18°).

Evit respont da dud 'zo e kemenn ivez ez eo an E.C.B. ur strollad Kevredigezhioù a-ziwar-dro Pariz hag a ra war-dro ar Sevenadurezh Breizhat.

Distag eo eus ar Fondation Culturelle Bretonne anavezet evit bezañ ar gevredigezh a zastum arc'hant bep bloaz evit ar yezh.

STUDIADENNOU. -

Resevet hon eus digant A.-J. Raude studiadennoù e galleg war ar yezh hag an doare-skrivañ : « L'Orthographe dite Universitaire », « La Langue et l'Histoire », « Langues déchues et orthographe classique » ha « La doctrine phonologique et l'orthographe ».

UL LEVRENN ALL EUS AR BIBL O TONT ER-MAEZ. -

Emañ e paouez dont er-maez ul lodenn all eus ar Bibl : Ar Brofeted vihan, Habakouk, Hobdia, Yoel ha Yona troet gant Marsel Klerg ha Maodez Glanndour. Setu adarre ul labour divent o vont war-raok gant nebeut a sikour hag a arc'hant, ne c'hellomp nemet rein hor gourc'hemennoù d' ar skrivagnerien galonek o deus kemeret war o chouk ar mell labour-se. Spi hon eus e roio skoazell an holl Vretoned dellezek eus an anv-se d' hor mignoned. Skrivañ d' an Dll St Gal de Pons, rue des Salles, Guingamp.

AL LIAMM 58

AL LIAMM
Tir na n-òg

NIVERENN 58

Gwengolo - Here 1956

TAOLENN

Kreisteiz, gant Youenn Olier	3	
Tonkadenn, gant Abanna	4	
Itron Varia ar Merzer, Dastumad Pennwern	5	
Dav d'an Ankou, gant Fañch Elies	7	
Miss Redfern, gant Jarl Priel	13	
Tour ar Bleiz, addipleget diwar P. Feval, gant P. Denez	23	
Poellad a-benn tizhout ar varzhoniezh, gant A. Loup, br. Abanna	39	
Krennlavarioù hor bro, gant Goarin	41	
Konterion Bro-Breger, gant M. Klerg	46	
Envorennoù hanter-oad (kendalc'h), gant Taldir	50	
Istor lennegezh vrezhonek an amzer-vremañ (kendalc'h), gant Abeozen	57	
Diwar-benn Bro-Lusad, gant A.-J. Raude	68	
Mojenn Lenn Tegid, br. Per Even	71	
Notennoù	73	

KREISTEIZ

gant Youenn OLIER

Kreisteiz a zeuas.
 dreist da voger frailhet an tornaod kozh
 glas ha melen, roufennet gell
 e paras ur menez all,
 euzhvil gourvezet sioul ha marv
 gant e gein hir ha moal astennet
 ha dreist dezhañ 'n em zastumas an arnev du,
 neved iskis o stagañ neñv ha douar
 gant pileroù melen o gouloù divedel.

Ha klasket em eus araok ar gurun ur goudor asur,
 ha kent ar barrad tost
 ur c'hledour start hag ar repu
 ha tec'hout a rankis e-kreiz an deiz
 diouzh estrenvan dic'hortoz
 am samm hep kemenn
 war hent ar vuhez ken na ouzon mui
 pe war du treiñ.

TONKADENN

gant ABANNA

Edo 'n he c'hluh war vord an hent
 gant ar pradeier o pouezañ war he daoulin
 ponneroc'h eget ur vaouez ac'hub
 hag he bleuñv da ganañ 'vit an dremenidi.
 An avel avat eus ar geot o tiguzhat
 a sarac'has, ha hi hen klevas,
 Petra ra gant honnezh hor bleunioù
 ha da ouelañ puilh er gwez, hi hen klevas fraez

Piv a droy ouzhin ma kanin
 marzhenn bleunigoù miz mae ?
 Daoust ha chom ouzh va bronn
 a ray ar bleuñv a gutuilhis ?
 Ur paotr o tremen a sellas outi
 « Petra din da selloù
 Gweñvet eo va bleunioù ».

ITRON VARIA AR MERZER

Itron varia ar merzer, me meus amzer kollet
 A derempred eur fumelen a ioa fur a parfet
 Na ma dije bed madou evel ma tevoa gened.
 Me a ia breman da embarki var ar mor a drigade
 Evid kerc'hed d'am mestrez eun habid satin gwen,
 Evid diskoez d'am brois e meus bed eur plac'h brao
 Ag eut plac'h ge a joius evid ma deus madaou.
 - Me ho suppli, va fried, nem deot ked var ar mor,
 Ho lestr a zo bihanig, ar mor a zo treitour.
 Ho lestr a zo bihanig ag ar mor a zo bras,
 Na ma na verc'h c'houi beuzet petra rafen sivoas !
 Me zo eur vinorez iaouank, na meus na mam na tad,
 Me zo eur vinorezik iaouank e komans dond er bed
 A zo digaset aman, ne anavezan den e bed.

Skrivet eo al lizeri partout dre ar c'heriou :
 Beuzet eo ar marc'hadour eun daou pe dri mis zo.
 Daoust petra lavaro n'intanves ar c'helou pa c'hlevo !
 Eun dervez goude koan, pa voa deuet an noz,
 Pa voan me ed em goele evid kemer va repos,
 Tri dollik var ar prenest a zo skoët en noz,
 Pa voan me ed em goële evid kemer va repos.
 - Piou zo aze breman d'ar poent man deus an noz ?
 - Savit, intanvez iaouank, da reço eur presant,
 Da reço kalon o pried en eur c'hassed arc'hant.
 A me sevel ac'hane a komans da voëlla.
 Otrou Doue, va fried pelec'h e moc'h breman ?
 Marteze c'houi zo maro pem kant leo deus va zi,
 Tolloed o c'heskernigou d'ar pesket da zrebi.
 - Tavid, intanvez iaouank, tavid, na voëlet ked ;
 Me a zo eur c'hloareg iaouank o pezo mar keret.
 - Birviken na zemez an na ne komeran par,
 Breman pa ze maro va vriedig irvoan.
 Neb a velche an intanvez o c'hantren en illis
 E kreis en tre daou kapuçin hag hi gwisket e gris,
 Neb a velche an intanvez o c'hantren en e c'hramb
 En kreis en tre daou kapuçin hag eur gloarek iaouank,
 Neb a velje an intanvez var paveo Rouan,
 En e zreid eur boutou lejer ag eur bazou stam gloan,
 En e zreid eur boutou lejer hag eur bazou stam du,
 An dælou deuz e daou lagad e c'harozi ar ru.

6

An intanvez man lavare, eun devez goude koan :
 Me garche beza er barados, en eur plassik bian,
 E kreiz etre va daou vugel a va vriet irvoan.
 Enon neuze me kanche, gant an ellez eürus,
 Gloria in excelsis te deum laudamus.

Jannton puil, 16 juin 1851.

Dastumad PENNWERN, lev. 90, p. 228-229

DAV D'AN ANKOU

gant Fañch ELIES

- Horrol eo ! eme Janed ar Go da Seza an Tourn, en ur lakaat ar c'houez da sec'hiñ ouzh an orjalenoù e balioù liorzher maner Pont-an-Traoñ. Un istor spontus a zo bet kontet deomp e Poull an Enez gant Marivon Gergoad er mintin-mañ. He c'hoar Filo a za bet taget gant an Ankou dec'h da noz, pa zistroe eus Trelez.

An Aotrou Kervareg, harpet war e ganenn vambouz, a gerzhe goustad gant ar vali daveto. E zaoulagad lemm a skedas enno ul luc'hedenn c'hoapaus pa glevas an div vaouez o stagañ gant istor an darvoud burzhodus, c'hoarvezet en derc'hent nepell ac'hano.

- Posubl eo sur-mat, Seza, eme Janed, peogwir he deus ranket Filo chom war he gwele er beure-mañ. N' he deus ket gallet sevel, ken klañv eo bet en noz-mañ diwar he c'horfad spont.

- Hag he deus gwelet an Ankou e gwir, Janed ? eme Seza, staget da istribilhañ rochedoù an Aotrou.

- An Ankou he deus gwelet ken fraez ha ma welomp, ni hon div, an Aotrou oc'h ober selloù goap ouzhomp gant hon istor sabatus, eme Janed un tamm imor enni.

- 'Dit ket da gounnariñ, Janed, eme Gervareg, abalamour ne gredan ket aes er mirakloù a gontit ken stank. Petra 'fell deoc'h ? Re bell amzer on bet o redek bro evit degemer evel gwirionezioù katekiz an holl varvailhoù gwrac'h kozh a glever dibunañ a gleiz hag a zehou.

- Ya, tud difeiz e teu re alies ar vartoloded da vezañ, eme Janed. Va hini kozh-me - Doue d' e bardono ! - a oa ken diskredik all, ha padal, warlene, un nebeut sizhunioù a-raok eo chomet da vat war e wele, en deus bet ur c'horfad spont, dre un nozvezh c'hoañv, p' edo war e zistro d' ar gêr eus Roc'hoù Bras. E-kichen Pont-an-Traoñ end-eeun eo e klevas karrigell an Ankou o wigourat hag an Anaon o klemm.

- Kaer en deus un den bezañ aheurtet, eme Seza, abred pe ziwezhat e rank plegañ... d' ar vazh pa ne ra ket d' ar wirionez.

- Da c'hortoz ma teuio va zro-me, eme Gervareg hegarat, kontit deomp 'ta dre ar munud spontadenn Filo Gergoad, Janed.

8

- Evel ma laren-me da Seza, bremaik, e oa Filo o tistreiñ a Drelez. Abred e teu an noz e miz Genver hag ouzhpenn se teñval e oa bet an amzer e-doug an deiz hag an avel o yudal er gwalarn. Filo a oa mall warni erruout er ger da bakout ur banne kafe tomm a-raok mont d' he gwele. Pa zeue e-biou da Bont-Krist e washaas d' an amzer. Abaoe ur pennadig e seblante da Filo, a lavare deomp Marivon, klevout estreget yudadenoù an avel er gwez dre ma tostae ouzh ar maner. Pa voe deut stok outañ, e klevas fraesoc'h ur vouezh truezus o klemm evel unan o c'houlenn an aluzon e toull an nor. Filo a wiskas sin ar groaz en he c'herc'hen hag a stagas gant un De profundis. Uheloc'hik er waremm, a-gleiz d' an hent, pa saver etrezek ar bourk, e wele Filo un dra bennak gwenn o fiñval en noz. Krediñ a reas dezhi da gentañ ez oa un tamm liñser bennak hej-dihejet gant an avel. Met a-benn ur pennad e welas e teue al liñser war-raok hag e tostae muioc'h-mui ouzh an hent. Mankout a reas he divesker dindani hag e kuzhas he fenn etre he daouarn en ur bediñ tre ma c'helle. Pa glevas ar vouezh klemmvanus o sevel stok outi, e kollas he fenn da vat hag e semplas. N' oar ket pegeit eo

chomet er foz gleb. Pa zistroas enni hec'h unan gant ar yenijenn o kregiñ en hec'h izili, n' oa mui trouz ebet war-dro. Torret e oa un tammig d' an avel hag ez en em ruzas Filo betek ar gêr da vont d' he gwele war-eeun, kroget an derzhienn enni. Mar ne da ket gwelloc'h dezhi fenozh e vo galvet an Aotrou Kromm da vont war he zro.

- Paour-kaezh Filo, eme Seza an Tounn, kentoc'h eget ar medisin gwell e vefe dezhi marteze gervel an Aotrou Person ha lakaat un oferenn evit an Anaon.

- Sed aze un Ankou divergont, avat, eme Gervareg, ken dic'hoarzh ha tra. E tlefe da nebeutañ lezel e peoc'h ar gristenien vat ha mont hepken da dourmantiñ ar chas du eus va seurt-me.

- E tlefe sur, eme Janed ar Go, ken dic'hoarzh all. Marteze, avat, e soñjo ennoc'h ken na vo pell.

Hag e tapas krog en he bouteg goullo evit mont d' an ti gant Seza, e-pad ma kendalc'he an Aotrou Kervareg gant e dro liorz.

* * *

9

Un den kozh iskis a-walc'h a oa eus Paol Kervareg. Bet e oa o vevañ er c'holonioù e-pad un tregont vloaz bennak. Setu perak e kemere Janed ar Go anezhañ evit ur martolod. Deut e oa en-dro da vevañ eus e leve e Maner Pont-an-Traoñ, tri bloaz a oa. Intañv e oa deut da vezañ er bloavezh kentañ hag, evel n' en doa ket bet a vugale, n' en doa mui na kar na par war e dro. Bevañ a rae gant e vatezh, Seza an Tounn. Ne dae ket nemeur war dro ar bourk ha nebeutoc'h c'hoazh war dro an iliz. Ar re gozh eus e oad, unan bennak anezho da nebeutañ, o doa dalc'het soñj eus Paol Kervareg, paotr yaouank. Tuet-kenañ e oa en amzer-se da c'hoari a bep seurt troioù kamm d' an dud ha da ober goap ouzh kredennoù an nesañ. Un dro, gant daou ganfard all eus e zoare, e oa bet o redek ar bourk, dre an noz gant ur veterabezenn zivouedet war e benn, ur c'houlouenn war elum enni, o skleuriñ dre doullou, heñvel a-walc'h ouzh poullou daoulagad goullo ur penn marv. Spontet en doa en noz-se ur guchennad merc'hed yaouank kozh o tont diouzh an iliz. Tost e oa bet, avat an abadenn da dreiñ da fall evitañ p' en doa klasket mont war o lerc'h betek ostaliri Laou Germoal. Daou pe dri Arvorad a oa eno o lipat ur banne rom kent distreiñ d' an aod. Pa ziboufas en ti bagad ar merc'hed yaouank kozh pennfollet, o doa tapet krog pep unan en un troad balaenn ha d' ar red war-lerc'h an hailhoned ken prim ma lezas Paol Kervareg ar veterabezenn da gouezhañ evit skampañ dillovsoc'h hag ez echuas ar spontadenn en ur c'horfad c'hoarzhin.

Meur a dro gamm all a seurt-se en doa c'hoariet dre ar vro, nemet pell a oa o doa ankounac'haet an holl e farsadennoù paotr yaouank, pa zistroas eus ar c'holonioù da ehanañ e Maner Pont-an-Traoñ. An holl, nemet marteze Laou Germoal. Rak chom a reas hemañ da lonkañ soñjoù kentañ tro ma savas meneg er vro eus an Ankou o c'hoari vazh en-dro da Bont-an-Traoñ. « Dres abaoe m' eo deut en-dro an istrogell-se a Baol Gervareg, » a soñje Laon outañ e-unan. « Iskis eo memes tra ! » Ya, abaoe an amzer-se eo e kleved a bep tu istorioù, anezho peadra da reudañ deoc'h ho plev war ho penn ha da lakaat ur gridienn a spont da redek penn-da-benn d' ho livenn gein.

Pa rankas Filo Gergoad chom war he gwele, Laou Germoal a grizas e dal hag a dufas stankoc'h eget boaz en tan en ur sachañ war e gorn butun hep rannañ ger.

* * *

- Da belec'h ez it, va zad, ken diwezhat-mañ ? eme Jani Germoal en ur welout an ozhac'h o wiskañ e galabousenn hag e vantell hag o tapout krog en e benn-bazh.

- Da ambroug da vreur ha da vamm, a dle bezañ d' an eur-mañ tost da erruout diouzh foar Lesneven. Diskenn a ran betek Pont-Krist nemetken hag e kasin ganen letern ar marchosi, rak du-spontus eo an noz adarre.

- Bezit war evezh, va zad, eme Jani. Brudet fall e teu ar c'harter-se da vezañ abaoe ur pennad.

- Setu perak end-eeun e tiskennan, va merc'h. Evit da vreur n' em eus ket aon. N' eo ket den da spontañ rak e skeud.. Da vamm, avat, a zo kizidikoc'h ha ne blij ket tamm ebet din eviti an istorioù karrigell an Ankou-se a glever kontañ re alies ur pennadig 'zo adarre !

- Adarre ?... eme Jani souezhet. Bet ez eus bet anezho dija 'ta?

- Ya, gwechall, pa oan nevez dimezet, nemet ne droent ket vil evel ma reont bremañ... Kenavo bremaik, Jani. Ne vin ket pell gant va zro, moarvat. Arabat dit bezañ nec'het e doare ebet.

Hag e sachas dor an ostaliri war e lerc'h evit pellaat en deñvalijenn, trouz e votoù prenn o tigreskiñ tamm-ha-tamm war an hent.

Hag e chomas Jani e-tal an oaled da ober stamm, en ur zerc'hel tan dindan koan o tommañ evit an dud o tistreiñ diouzh ar foar.

* * *

Un hanter eur goude e klevas Jani war ar straed trouz kammedoù anavezet mat. Klevout a rae ivez mouezh he zad ha c'hoarzh he breur Herve.

Hag e teuas an dud en ti. Laouen e oa an daou waz evel o tistreiñ diouzh ur friko. Mari Wegen, he mamm, avat, a c'hoarzhe gwenn evel unan he deus bet aon ha ne deo ket re asur e vije bet hep abeg.

- Mat em eus graet mont, Jani, eme Laou en ur ziskouez ur bakadenn wenn dindan kazel Herve. N' hon eus ket graet tro wenn. Diskouez deomp 'ta, Herve, ar pezh hon eus kavet e gwaremm Pont-an-Traoñ.

- Liñser an Ankou, Jani ger. eme Herve en ur c'hoarzhin. Hag e stlapas war an daol ul liñser kailharet, drein lann speget outañ e meur a lec'h.

- Va Doue binniget ! eme Jani en ur ober sin ar groaz.

- Tapet koan ganeoc'h ? eme Janed ar Go en ur zont tre en ti. Me 'zo deut berr gant va c'hafe. Jani, laka din un hanter kir hini malet 'ta, ma c'hellin ober ur greakad kafe fresk kent mont d' am gwele.

- Diouzhtu e vo lakaet deoc'h, Janed, eme Laou. Da gentañ, avat, c'hwi a zo o vont da laret deomp ha n' anavezit ket an tamm liñser-mañ.

Hag e tispakas ar pezh lienaj war an daol.

11

Janed ar Go a bakas krog el liñser hag en ur ziskouez an div lizherenn K. G. broudet ouzh krec'h dezhañ e tistagas :

- Hen anaout a ran sur mat. N' hell bezañ nemet unan eus liñserioù an Aotrou Kervareg. Gwivarc'h eo a oa anv e wreg, marvet tri bloaz 'zo, m' hoc'h eus soñj. Pelec'h hoc'h eus kavet al liñser-se 'ta, Laou ? Eizhtez 'zo m' on bet oc'h ober ar c'houez eno. Dastumet ha feret eo bet an traoù abaoe gant Seza, sur mat?

- Me 'soñj din, Janed, eme Laou. ken sioul ha tra, en ur azezañ e-tal an oaled da dommañ ouzh an tan e zaouarn kropet, e oa al liñser-se war gein e berc'henn, p' hon eus tapet krog ennañ e gwaremm Pont-an-Traoñ.

- War gein e berc'henn ? eme Janed estonet. Alato, Laou, N'emaoc'h ket mat !

- C'hwi ' c'houlenno gantañ kentañ tro ma 'z eot di, Janed.

- Hag ouzhpenn, mar ne ra ket re a boan dezhañ en zivskoaz an taolioù bazh hon eus-ni roet d' an Ankou bremaik e-kichen ar Maner, a gendalc'has Herve.

- C'hwi 'zo aet d' an Ankou a daolioù bazh ? eme Janed gant spouron.

- Ya, Janed, eme Vari Wegen, aet int dezhañ o-daou evel chas kounnaret. Kavet hon eus, Herve ha me, an ozhac'h ouzh hor gortoz, kluchet e gwasked ar roc'h e-kichen ar pont. Mall e oa ganeomp bezañ er gêr, ken yud e c'hwezhe an avel, keloù glav gantañ dizale. Deut e oamp betek ar pont e karr Jan-Mar Lapous, a droe eno etrezek ar Ru Segal.

« Dre ma tostaemp ouzh Maner Pont-an-Traoñ, e krede deomp klevout unan bennak o hirvoudiñ en un tu bennak dre eno.

- Arabat deoc'h folliñ, a laras Laou din neuze. Mar teu an Ankou war hon tro, ni 'zo barrek, Herve ha me, da c'houlenn digantañ e baperoù.

« Me a oa staget da grenañ memes tra, Janed, pa weljomp un dra bennak gwenn o piklammat etre ar bodoù lann er waremm, stok ouzh an hent. Krog edon e brec'h Herve hag e kendalc'hemp da zont war-du amañ. An tasmant, avat, pa welas e chomemp diseblant, a zeuas tostoc'h c'hoazh ouzhomp hag a hirvoudas truezusoc'h eget biskoazh. Diskregiñ am eus graet neuze diouzh brec'h Herve ha kouezhet on d' an daoulin em strafuilh. Neuze eo o deus an daou-mañ sailhet war an Ankou ha staget da zarc'haouiñ outañ taolioù bazh na stlakent ket war ur benn eskern. Hag an Ankou ha skampañ a-dreuz d' ar waremm. Redet o deus an daou-mañ war e lerc'h ha tapet krog en e liñser. Chomet eo ganto en o daouarn, ha setu eñ war an daol.

12

- Horrol eo ! eme Janed. Hag e kred deoc'h, Laou, eo istrogell kozh ar Maner a c'hoarie a-giz-se da spontañ an dud keizh tro-war-dro d' e di ?

- Ha piv e ve ken, Janed ? N' en deus ket diskouezet deomp e benn. Ar pezh a zo sur eo e oa kig war e eskern ha dilhad ur c'hristen war e gig. Me 'gred din en deus bet c'hoant an immobil-se da adstagañ gant troioù kamm e yaouankiz. Nemet ne deo ket ken divemor an holl ha ma kred dezhañ ha ne deo ket eñ kennebeut ken skañv e droad ha gwechall gozh. Ha setu penaos en deus bet an Ankou fenezh fest ar geuneudenn e gwaremm Pont-an-Traoñ. War a leverer, ur gwiskad bazhadoù a zo dispar ouzh ar remm. C'hwi 'c'houlenno gantañ, 'keta Janed ?

- Mat ! eme Janed, Seza an Tounn a lare dezhañ en deiz all e rankfe plegañ deiz pe zeiz. Hag e c'hoarzhe goap deomp, ar c'hozh pilpous. N' he do ket e blac'h kalz a druez outañ pa ouezo penaos e vo bet dizonet eus e c'hoari an Ankou.

Merc'her 24 Genver 1945.

MISS REDFERN

(1)

gant Jarl PRIEL

Daoust ha ne oa ket unan-bennak o c'houlenn digor ?... Geo 'ta, geo ! ha dao-dao a voe graet adarre gant ar biz ouzh dor va c'hambrig. En em strinkañ a ris em c'hoazez ken buan ha gant kement a herr ma voe darbet din difaragoellañ d' an traoñ. Divatorellet a-daol-trumm met da vat, e sellis en-dro din ; dre va lomber morailhet en em sile ur skleurig damruz ha gwell ziwezhat e ranke bezañ anezhi. Kousket am boa 'ta e-pad... ya, e-pad pegeit amzer en gwirionez ? Goude ma treluc'he e sifroù en deñvalijenn, tanfoeltr ampled ne ris gant va montr nevez ; ur wech ouzhpenn am boa ankounac'haet plediñ gant e rodig da sevel ar poeziou.

- Ha krediñ a rafen dont tre, kabiten ?

Gwisket ganin war ar prim ur bragoù ha gant ur re votoù em zreid, e tic'hourdis va divrec'h en ur varailhat e-leizh va c'horzailhenn. Evidon da vezañ chomet tri devezh ha div nozvezh diouzhtu war an dunetez o loeniñ dindan ur gorventenn - ha nepred em buhez ne zigouezhas din stourm ouzh gwashoc'h gourc'hast egeti - raktal en em gavis em bleud, kentrant ha Yann C'hogez war e c'holc'hedad blu. Torret e oa d' am foan-benn ; va muzelloù ha va zeod poazhet koulz gant an avel ha gant ar strinkadennoù-mor a devoa paouezet da leskiñ ; ken gwevn ha biskoazh e laboure va izili evel p' o divije adkavet o holl nerzh dre va c'houk. Siwazh, adal ma fellas din huchal war an torr-reor-se e oa dibrenn an nor, ne zifloupas diganin nemet blejadenn ur vouchig gaezh, krog enni ar red-korf. Kenavo d' am mouezh sakrist o kanañ er chantele ! hag aner e vefe bet din skarzhañ va gourlanhenn gant un drezenn, rak ken mut hag ur sant beuz e oan deut da vezañ.

Ne oa ket erru mat war doull an nor ma lakaas Darnley e bav war heñcher an tredan, ha pendallet gant sklerijenn ar pikol boulouenn wer a-us din, e rankis serriñ va daoulagad.

(1) Martolod em yaouankiz ha Tregeriad war ar marc'had, n' hellan ket, ha me kozh, tennañ va spered diwar an evned ma veze graet diouto al listri dre lien, ha buhez an dud kaezh ouzh o levial a-hed hag a-dreuz ar mor divent. Sed amañ 'ta un tañva eus va romant « War vourzh ar « Honeymoon », un oberenn na vo biken moulet - nemet hag er bed-hont e vefe. Na fentusat lamm a reas rener Al Liamm pa glevas n' en devoa ar romantik-se nemet... 450 pajenn ! ! !

14

- Dihun oc'h 'ta d' an diwezh ? emezañ. Deut on da c'houzout penaos emañ kont ganeoc'h o vezañ ne gleven amañ na trouz na fiñv. Pell 'zo he deus paouezet ar gazeg c'hlas da winal hag an eil-gabiten a zo er mare-mañ ouzh ar stur gant al levier Simpson.

Pa zeuas rener ar strollad d' intent a-drugarez d' am jestroù diouzh-se ne oan nag evit daou nag evit unan e-tailh da zic'houezhañ un hanter-c'her, e fellas dezhañ tec'hel.

- Ho tigarez, Aotrou Clark ; mont a rin 'ta d' am c'hilud, hag arc'hoazh ar beure, gant ma vo tremenet deoc'h, e vin abred a-walc'h da...

Diouzh an dailh anezhañ e verzen fraez ha splann e oa gwall nec'het va c'hanfard. Tapout a ris krog en e vrec'h ha kent ober dezhañ azezañ war ur skabell e lemis diwarni ur bechad kleiz hag un daolig vaen-sklent ankounac'haet eno gant paotr an T. S. F. Prim-ha-prim e skrivis kement-mañ :

- Gortozit ul lajad, tad-kozh ! rak liv ha struj ar grampoezenn gentañ a zo en ho kerc'henn. Met, evel ma teue gant va faeron, n' eo ket a-walc'h staotañ er piñsin ha redek er-maez da c'hoarzhin. Kuit a widre, peseurt neudenn vrein hoc'h eus kavet war hoc'h hent ?

Lenn a reas diwar nij va skrabadennoù-yaer hag ur pennadig e chomas dilavar hag e benn stouet gentañ en ur dennañ e alan stank-stank evel un den berr warnañ. Aet e oa Jonathan Darnley e tu-all d' e dri-ugent vloaz ha dre se ne gleve digant pep-hini war vourzh nemet tad-kozh ac'han ha tadig-kozh alesont. Bez' en devoa daoulagad dibikouz sanket don en e gokenn voal. E flip e skouarn gleiz e luc'he ur c'helc'hig aour, gwellañ diwall ouzh bezañ bouzar, gouez da vartoloded an amzer gent, hag evel ar re-mañ e c'houenne da bep eil deiz e dalfas ruspín gant un aotenn ar c'hiz kozh na laoske nemet ul lietenn reun da ziwan ha da loediñ dindan e c'hroñj. En ur ger, ur wech stipet va oristal gant un tog hag ur foeltrenn porpant eouliet, en divije gallet kemer skouer diwarnañ brudetañ c'hoarier Hollywood gopraet d' ober e vleiz-mor a-hed ur film peurc'hwitet.

Seul belloc'h ma tavemp, seul vui e kreske va nec'hamant ha va souezh o welout pegen enkrezet e seblante bezañ rener ar strollad, ur hirlancher anezhañ, troet ar peurliesañ d' en em ziskouez ken laouen hag an heol benniget. Stagañ a reas da furchal e vantell-c'hilav, hañv-goañv en-dro dezhañ evel kroc'hen ar c'hi, dalc'hmat an hevelep hini - nag en noz, eme godisaerien 'oa, ne leme an dra-se ken joget, ken mastaret ha levitenn Boudedeo - hag a-benn ar fin e tennas diouzh ur c'hodell ar pezh a vane eus ur bladenn sonskriverez, tri damm a vent disheñvel, daou vras hag unan bihan.

15

- Sed aman, emezañ, petra 'zo war va spered.

A-diz e skrivis adarre war va maenig-sklent :

- Dal 'ta !... pladenn Miss Redfern ?

- Ya, Aotrou, ha koulskoude, hervez ma krede din, klenket am boa gant mil evezh an teñzor-mañ kerkent ha ma krogas ar mor da bennfolliñ, ha sellit ouzh ar stad m' emañ ennañ hirie ! Diwar gement-se ne ran van ouzh netra all, evit va c'heloù foei war ar gwall-daolioù tremenet, a-vremañ, pe da zont ! ha pa 'z afe zoken hol lestr d' ar strad, beaj vat dezhañ ! Krag ha distag e tisklerian deoc'h : ne don ken nemet ur c'haezh Doue dizalbennet rik, ur preñv moustred dindan dreid ha graet e dro gentañ. Paket ha paket mat on ar wech-mañ; rak laeret eo bet diganin an tammig levenez ma chomen perc'henn dezhi. Met perak kenderc'hel da gomz ? na c'hwi, na den all ne vefe en tailh da veizañ ur rann-galon hag a zo pell-pell e tu all da gement tra a c'hellfen lavarout.

Lagad ebet ne denne diwar droad va gweleig, ha dibaouez - hep gouzout dezhañ moarvat - e tabouline goustadig gant e vizied war dammoù ar bladenn. Dre druez outañ e lakais va dorn war e skoaz, rak fellout a rae din diskouez dezhañ e kemeren perzh en e c'hilac'har. Allas, ankounac'haet am boa e oa bet lemet diganin ar gomz ; kerkent ha ma tigoris va genou, netra ne ris nemet feukañ ar c'hozhiad, rak va ger kentañ, ha ne zeuis a-benn da satouilhat nemet unan hepken, a reas trouz un hik pe ur vrizhc'hoarzhadenn.

- Aotrou Clark, eme egile, feuket gant gwir abeg, paouezit en anv Doue gant ho skriñ. N' ouzon ket petra ' vir ouzhin d' en em deurel er mor, kement ha tec'hel diouzh an enkadenn m' am eus rampet enni. Evit ar seurt c'hoariellajoù, emezoc'h, ur bladenn dorret ?... Ya, ar bladenn ma kane warni « maiañ-karet rener ar strollad », pe « Charlezenn tadig-kozh », diouzh ma klakenne hor martoloded, gastaouerien a zo anezho !

- Darnley ! emezon, ur wech ouzhpenn dre skrid, c'hoant ebet n' am eus d' ober al lu ganeoc'h ; hogen va digarezit d' ho tro, rak n' on ket evit intent abalamour da betra e teuit ken anwazet-se d' am bete. Piv eo Miss Redfern ?

- Va merc'h, kabiten, pe gentoc'h an nebeudig a dra a viren diouti : he

mouezh, dason ha trugar he mouezh-hi.

Bamet ken ma oan, e tremenis an dro-se hep eilgeriañ dizale gant va maen-skilenn :

- Hola 'vat ! ur ganerez a vicher a oa 'ta ho merc'h ? daoust ha gounit a rae he bara er c'hoariva pe er c'hafe kaner ?

- Hi ?... ne rae ket 'ta ; va merc'hig a veve... Hogen, re bell holl e padfe va danevell, ha diegi am eus evelkent o tont d'o trubuilhañ gant traoù na sellont ket ouzhoc'h.

16

Ar wech-mañ 'vat e rankis skrivañ war zaou du ar maen gant ar hir ma voe va respont :

- Na rit ket gwad fall diwar gement-se, tadig-kozh amzer sofkont am eus. Dre re c'houzañv, e tegouezh an termen ma tle ar stouv strakal kuit, kaer ho pefe e stardañ, hag adal neuze ret hag ouzhpenn ret eo diskargañ ul lodenn eus ar boan en ur skouarn bennak all, hini ur mignon pe un estren, ha zoken an diaoul na pa vefe !... N' oc'h ket diredet davedon da welout penaos e oa ar bed ganin ; ne badec'h ken, kwita, gant ar c'hoant disammañ ho pec'h dirazon ? Dao dezhi 'ta ! displegit evel ma karit ar pezh a fell deoc'h fiziout ennon, hag o selaou a rin keit ha ma karot. Mar don dalc'het gant va c'homz er mare-mañ, barrek on bepred da zivizout ganeoc'h dre skrid, ha kent mont pelloc'h, kredit start emañ ho kabiten a wir galon ganeoc'h.

Adkregiñ a reas 'ta ar gaoz toullet ganimp en un doare iskis, unan o tibunañ e gudenn war e blaen hag egile o poanial herr d' an Doue m' helle gant e dammig kleiz.

- Ur c'hozh paotr yaouank a oan nemetken pa blegas Sally gaezh da vont da lakaat hec'h anv gant mab va zad... ?

- Sally Redfern ?... nann da, Sally Horst a raent diouzh ar baborenn-se, ur gigenn vat a blac'h, na re ouesk, na re goant, ha krog dija da weñviñ. Matezh ' oa bet e ti dud a-beadra ha dastumet he devoa e-giz-se un toullad gwenneien. Ma ! emezon, ken mat pe gen fall ha n' eus forzh piv all e vo houmañ da sevel tiegezh, ur menoz fentus sanket ganin em c'helorn abaoe un tachadig amzer. Allas, ne ouie ket diouzh ar gegin, strabouilhat ne rae ken, ha goude ne oa ket gwell vrizh va sac'h e ranken ober kofig-moan re alies er gêr. Rust daonet ivez e oa ganti an troc'h ; loariadoù 'veze e tapen diganti un distro lous ha labezet e vezen neuze ar seurt n' hoch eus klevet biskoazh gant ar strakell-se. Met perak klemm ? pennasket da vat e oan bet ganti, ha c'hoazh da vihanañ brav-bravig e teue ganin peogwir hanter-amzer hag ouzhpenn e tigoueze din ober va faotr disourisi nouspet pegement a levioù-mor diouti. Anat deoc'h, klouarig a-walc'h e chomis en he c'heñver, ha zoken er sizhun gentañ goude ma voe bet lidet hon eured, ha n'eo ket bepred gant kerse d' am gwreg en em gaven daoubennet e-keit ma veze va lestr o skeiñ war du ur porzh estren bennak. Morse ne teue din da soñj diouti nemet an deiz ma tleen kas dezhi he lod eus va gopr gant ul lizherig evelhen :

Sally gaezh,

17

Derc'hel a ran va c'hrog betek-hen. Kollet hon eus ul levier skubet gant un tarz-mor a-wel da Vadagaskar. Ha n' ouzout ket gant piv am eus kejet e Sumatra ? Gant ur gwaz peur-grignet bloavezhioù 'oa gant ar pesked, hervez ma krede din. Na sebezusat pobl, tud Bro-Indez ! d' ar saout e toujont evel ma reomp ni da Zoue. E sell e oa hor c'habiten da sevel eor disul gentañ, met dalc'het eo hol lestr el lenn, war zigarez ar vosenn.

Da bried, DARNLEY JONATHAN.

Darvoudigoù c'hoarvezet e-pad an treuz, disterachoù klevet ganin war vourzh pe dre vale kêr, sed aze petra ' deveze da lonkañ em lizheroù na raent

nepred anv nag eus karantez nag eus pokoù. Gant se, ne doufen ket e tougis kañv bras dezhi pa voe kemennet din he devoa lavaret kenavo d' ar bed-mañ. Ur bugelig a laoske war he lerc'h, ur veleganez pevar bloaz ma veze graet Daphne diouti hag a gave bod e ti va c'hoar-gaer kel lies gwech ma pellaen diouzh ar vro. D' ar c'houlz-se ne oa va c'hrouadur nemet ur grennardenn he c'hrewichenn rodellek ha dezhi divjod lart mastaret dalc'hmat gant konfitur pe driakl, ur verc'hodennig hag a rae fent din, tra ken, gant he richan hag he fistilh e-dro din. Met kerkent ha paket ganti he femzek vloaz, e teuas va merc'h da vezañ un dimezell, ur fulenn ken mistr, ken koant ha ken glan ma skraben a-wechoù va c'hilpenn en ur c'hrozmolat etre va zog ha me : « Sed amañ 'vat un digouezh hag a denn d' ur bruzhud. Penaos an diaoul en deus gallet un ael evel hemañ dont er bed diwar Sally Horst, ur wizh gaezh anezhi, ha diwar ur furlukin evel don-me ? » - « Ya, kabiten, un ael !... rak e yezh ebet ne gavfec'h gwelloc'h ger da verkañ petra 'oa e gwirionez: Daphne... un ael ! »

Kouchet en devoa ur c'hornedad ur pennad 'oa, met ne oa ket tuet da vutuniñ gant ar beuzet ma 'z oa en e huñvre.

18

- Pebezh kalonad bep tro ma ranken lestrañ ur wech ouzhpenn ha skarañ war an tu ma plije da bennoù bras ne ouien ket anv diouto ! Skrivañ a rae din eveljust, tremen hag alies zoken ; aspedet e vezen ganti da baouez gant va micher, en doare ma chomjen en he c'hichen, rak en em dommañ a rae ivez muioc'h-mui ouzh he zad, ar c'hozh marmouz anezhañ. Allas, al lizheroù, forzh pegen niverus, pegen hir ha karantezus e vefent, a zo dister dra, ha nag a lestr-lizhiri a sac'he den ne ouie pelec'h, daoust ha ma verve va gwad ouzh o c'hortoz ! Pa grogas Daphne en he seitek vloaz e tanfoeltrisan trebe war-lerc'h ar billig ha goude treiñ kein d' ar mor e plegis da vont en gopr gant ur gwaz pellgar a-berzh va gwreg ha perc'henn ul labouradeg da sevel listri e San-Fransisko. Hogen, da neb a valeas kemend-all a vloavezhioù, dieub evel un evnig Doue, etre ar mor hag an oabl, ur verzherinti n' eo ken lugudenniñ e touez ur bagad louf-torchenoù e burev-mañ-burev. A-hed an deiz netra ne raen nemet barailhat ha sakreal en ur verad un troñsad paperenoù a bep seurt ment, liv ha talvoudegezh, met an eil dibitusoc'h eget eben. Va digoll 'vat a gaven bep noz kerkent ha digor dor hol lojeiz na bras na lorc'hus, met deut da vezañ ur baradoz, bennozh d' ar voudig aketus a rae war e dro. Va merc'h, Aotrou Clark, a oa ur plac'hig sioul ; ken didrouz hag ul logodennig pe ur skeud e plede gant labour an ti, ha nag a zudi em ene dre ma ouien e vevemp d' an diwezh hon daouig dindan an hevelep toenn, hag evelse da viken, pe da vihanañ keit ha ma vije youl Doue ! Gweañ a rae a bep tu d' he zal he blev plañsonnet, a liv gant aour an ed-Indez a zarev em bro Galifornia. Pa zichañse dezhi c'hoarzhin e steredenne en dour don he daoulagad glas elfennigoù heñvel ouzh ar mordan a vourbouilh nozvezhioù-hañv a zo, e roud ul lestr pa vez brav kenañ an amzer. Hag he daouarn 'ta, pa zeu din koun eus he daouarn...

Daskrenañ a rae e vouezh ha tevel a rankas ober evel un den o tifronkañ pe hanter-vouget dre darlonkañ, hag evidon d' ober an neuz da furchal e tiretenn va zaol-skrivañ, en ur sellout a-gorn e welen tadig-kozh Darnley o frikañ goustadig en e graban, a ledander gant ur c'holvazh, bihanañ tamm ar bladenn dorret.

- Petra 'zo c'hoariet ganti ? aet eo da anaon, beuzet en he bleuñv.

-

- Gout'ouzon a-walc'h, Aotrou ; ne ra van an Ankou nag eus stad, renk, oad pe gened ha kalz re alies e tegouezh d' an oan mont da get kentoc'h eget ar vaouted. Gouelañ druz a ris dezhi eveljust ha dre ober kofadoù leñvañ e tisec'his gwell abred nammenn an daeroù. N' eus forzh, pa varv ul liorzher e kenderc'h ar bleuñvioù da ziwan ha da skignañ c'hwezh vat, hogen adal ma weñv ha ma tizhilh e gaeran rozenn, setu nijet kuit holl levenez al liorzher.

-

19

- Penaos e c'hoarvezas ar gwalleur ?... Ur sulvezh-hañv beure mat e fellas d' am merc'h ha d' un nebeudig mignoned eus ar burev ma labore ennañ ober ur

valeadenn war vourzh ul lestrig feurmet ganto. P' edont o treuziñ an Nor-Aour, e savas ur vougasenn spontus hag a beurc'holoas primoc'h eget ul luc'hedenn oabl, listri, balizennoù ha kement tra all el lenn San-Fransisko. O vezañ m' en em gave end-eeun war hent un teir gwern o skarañ lark-kaer ha mall gantañ douariñ, setu o bagig daouhanteret krenn evel pa vije bet ur vlonegenn. N' am eus ket da zeskiñ deoc'h nag a herr a vez du-hont gant ret an dour, dreist-holl da vare an trec'h. Koll amzer ha poan a reas 'ta ar splujerien hag an dud diouzh-se rak korf marv ebet ne gavjont. Ruilhet-diruilhet gant ar gwagennoù, holl e oant bet stlabezet raktal ha kaset er-maez al lenn betek an donvor. Gout'oar pep minor e pe korn ar vered emañ bez ar re garet gantañ ; laeret e oa bet diganin ha zoken ar frealz disterig-se. Noz deiz ne raen 'ta nemet ruzañ va skasoù eus an eil kambr d' eben em lojeiz, un toull-ifern adal neuze, ha me o prederiañ a-hed an amzer dirak un netraig a zegase da gown va merc'hig gaezh : he zog plouz e-pign ouzh ur c'hrog, un delienn skav-gwrac'h (1) lakaet ganti da sec'hañ em levr Skritur Sakr, he c'hlaouier manet war gorn un arc'h... Da serr-noz e santen a-wechoù Daphne tostig-tost ouzhin, sioul evel boaz, met ken bev hag a-ziagent, kement ha ken bihan ma krede din e wigourje prestig dor ar rakkambr hag e teuje hi e-barzh gant he filtrotig didrouz, ha war var e vezen da grozal : « Arsa, va flac'hig, perak dont d' ar gêr ken diwezhat ? » Met bep tro e vane an nor war he frenn. A-bell-da-bell en em silen diouzh va ched, pa veze ret ha ret holl prenañ butun pe un draig bennak da vandrouilhat - rak n' hell kristen ebet bevañ diwar e c'hlaac'har - hag o vezañ ma ouie an holl amezeien pebezh gwalenn a oa kouezhet war va chouk, e tec'he pep-hini a-ziwar va hent, hervez ma krede din dre zoujañs d'ar skeud diwel ha mut a gerzhe troad ouzh troad ganin. Ha neb a zegouezhe dezhañ komz ouzhin, ha zoken jaloded hor straed, maltouterien ar porzh, gisti ha reputailhoù all, a rae gant evezh ur skoulm war e deod, dre aon moarvat rak feukañ an dimezellig goant na bellae morse diouzhin. Ken touellet e vezen gant ar sorc'henn-se ma tichañsas din un dro bennak souzañ ivez, kerkent ha dialc'houezet an nor : « Kaezhig, emezon an tenerañ m' hellen, kae da gentañ 'ta ! » Pebezh distokadenn pa welas an tad trelatet e oa e-unanig, e unan-penn war ar pondalez !... Nann, kabiten, nann, va lezit da vont mas plij, gwelloc'h eo din kenderc'hel gant va c'haoz... Pa ne voen ken evit gouzañv ar seurt kastiz - ra vezo va enebourien diwallet gant Doue diouzh an hevelep hini ! - e kemeris warnon skampañ kuit hep an disterañ dale, mont da vale bro keit ha ma padje va zreid ouzhin, pe lammat war vourzh n' eus forzh petore lestr, gant ma 'z afe pell-pell, betek penn pellañ ar bed...

-

- Penaos ha pegoulz am eus kavet ar bladenn-mañ ? Va feiz, dre un taol-degouezh, eürusañ hini em buhez drenk-put.

(1) skav-gwrac'h = érable.

20

A zo kaeroc'h, Daphne, am eus ar gredenn, Daphne ha den all nemeti, a lakaas dre druez outañ he zad paour war roudoù « Miss Redfern ». Er mare-se e raen me war-dro strollad ar « Minnesota », ur brig, pe gentoc'h ur penton hag a... met perzhioù mat pe sioù ar c'hozh vag-se ne sellont ket ouzh va danevell... Un nozvezh bennak, e korn ur vanell deñval er porzh Rangoon, e voe darbet din reiñ lamm d' un den o tont gant herr en arbenn din, hag eñ da vallozhiñ ha da zibunañ teodadoù euzhus diwar-benn va zad, va mamm, ha va holl gerent vev, aet da anaon pe da zont er bed. Diouzh e veogadennoù e teuis raktal a-benn d' anavezout ur c'henvroad, ur c'heneil gwechall n' am boa ket klevet doare dioutañ n' ouzon ket abaoe pegeit amzer. Kerzhout a rejomp kazel ha kazel war du al lestr-karg ma rae evel eil-gabiten warnañ, rak ur c'hanfard desket a oa anezhañ, pa lavararan. Bier, hini-kreñv, likur, sigarennoù, gwestell, madigoù ar vro, netra en e gambrig ne oa re vat pe re ger evit lidañ hor c'hejadenn, met a-barzh displegañ dirazon ar mat-divat c'hoarvezet gantañ e lakaas da vont en dro ur sonskriverez gant un drompilh ken ledan hag ur rod karrigell. Prenañ a raen va divskouarn ouzh ar sonerezh, ar c'hanaouennoù, ar garzhajoù e pep seurt yezh dislonket gant ar benveg daonet, hogen, petra ' fell deoc'h, ne oan ket evelato evit lavarout d' am mignon : « D' ober ac'h eus gant ur paour-kaezh en kañv bras, paouez 'ta, genaoueg, gant da dourni ! » Hag a-greiz pep kreiz e klevis a-dreñv va c'hein ur fri-mannous o tistagañ kement-mañ : PERAK

GOUELAÑ ?... maronad kanet gant Miss Redfern... ha pa davas ar gogez... kerkent ha ma krogas ar piano da seniñ... e stagas va merc'h Daphne da ganañ... ya, va merc'hig lemet diganin dek vloaz 'oa, a gane em c'hichen, war vourzh ul lestr eoriet e Rangoon, petra bennak ne vane moarvat netra diouti, du-hont er Mor-Habask nepell diouzh San-Fransisko. Leuskel a ris va gwerenn da verañ d' an traoñ, ha raktal em sav sonn e tapis krog e brec'h va c'henvroad en ur vlej al a-nerzh va fenn : « En anv Doue, gwerzh din ar bladenn-mañ. Forzh pegement a c'houlenni diganin az po... Alo 'ta, komz, ra vi dall ha daonet, pe daoust ha mut e vefes ? » Egile 'vat a bare warnon daoulagad dispourbellet, heñvel ouzh div vrinnigenn digoget, hag evit netra e kinnigas din e bladenn, rak mall 'oa gantañ en em zisober ar primañ gwellañ diouzh ur gwaz o paouez koll e dammig spered. C'hoant am boa evelato da ziskleriañ dezhañ penaos ha petra, d' e drugarekaat evit e brof dreist pep priz, met taget e oan gant ar souezh hag al levenez evel pa vije bet sachet war ur skoulm-red skoet em c'herc'hen hag allas din ne oa neuze na maen-skjent na kleiz dindan va fav... Diwar an noz-se e voe maronad Miss Redfern, **Perak gouelañ**, va skoazell, va silvidigezh, va holl vuhez, ar porzh benniget ma klasken repu ennañ. Bennozh d' ar plac'h yaouank dianav-se, da « Charlezenn rener ar strollad » eme an ofiserien hag ar vartoloded daoudortet gant ar fent, na drougverzh, na trubuilh, na barr kleñved, netra n' helle bezañ trec'h din. Ul labour start eo va hini ha dalc'het e vezen a-hed an amzer gant va c'harg, met kentiz ha ma tegouezhe din bezañ e-tailh d' ober e-giz ma troje em penn, e prennen warnon dor va siklud, ha diouzhtu e kroge Daphne da ganañ dindan anv Miss Redfern evit he zad adkavet gantañ d' ar peurziwezh un didorr d' e boan-spered. Perak gouelañ ? emezi, nag en noz nag en deiz ne skuizhen ouzh he selaou, ha gwazh a se d' ar re all hag a 'z ae en gouez, faezh gant stultenn ur c'hozh skider en e vugaleaj ! Ar re all ?... ha pere 'ta ? daoust hag-eñ ne vezen ket neuze pell-pell diouzh o lestr, a-us d' ar mor hag an douar, ganti du-hont er baradoz... gant va aelig o kanañ din ? Ha sellit bremañ, Aotrou, ouzh va fladenn... Perak gouelañ, en gwirionez ?

21

-

- Prenañ unan-all evelti ?... C'hwi 'vat a lavar traoù !... N' am eus gortozet nag hoc'h ali nag ar gorventenn a zo bet kiriek d' am gwalleur. A-vec'h ma krogas ar bladenn da rimiañ dre vezañ kaset re alies ha re bell amzer en dro, ha marteze dre ma raen gant ur benveg marc'had-mat ha direizhet, e klaskis tu da bourchas he far, ha zoken div pe deir. Met aner e voe din skrivañ da gement labouradeg ha stal diouzh-se, rak hogos pep ti-keñverzh a gemennas din an hevelep keloù mantrus :

... n' emañ ar maronad ma komzit dioutañ nag en gwerzh na war hor roll-pladennoù, zoken ar c'hoshañ hini. N' ouzomp ket piv eo Miss Redfern ha gwech ebet n' hon eus klevet ober anv diouti. Dimp da grediñ, n' eo ket an dimezell-se ur ganerez a-vicher, hag engravet eo bet he fladenn gant kerent pe vignoned hag a blije dezho he mouezh, hep bezañ kennebeut all tud a-vicher. Gant se 'ta, Aotrou ker, ho tigarez ni ho ped, o vezañ n' hellomp ket... hag all, hag all.

« Ac'han 'ta mat ! emezon, va c'heneil eil-gabiten a zisklerio din pelec'h emañ Miss Redfern o chom, ha mar deo bev ha barrek d'ober va c'hoant, ne baouezin ket diouti kent na deurvezo kanañ ur wech ouzhpenn he maronad evidon-me, rak n' eus sant ebet ha na glev neb a sach da vat war e grev... Ya, met a-benn neuze e oa tremenet meur a vloavezh, ha setu va c'henvroad aet d' ar goueled gant e lestr-karg, e veogadennoù hag e sonskriverez he fikol trompilh... Kit bremañ da glask ! »

-

- Gout ouzon e heller engraviñ ur bladenn, nevez diwar unan gozh. Dibabet am boa 'ta gwellañ ha brudetañ ti-keñverzh evit kas da benn al labour gourc'hemennet ganin.

22

-

- Biken ne gredfec'h !... Kerkent hag erru war vourzh, e lakais va fladenn

nevez da vont en dro war ur benveg ken nevez all. Hogen, pebezh kerseenn ! adal ar ger kentañ e stagis da bec'hiñ ha da douiñ Doue kement ha ma ouien, rak ur vouezh dizanvez a save diouzh an dra-se, mouezh ur vaouez estren, marteze hini Miss Redfern end-eeun hag en gwirionez, met paouezet krenn he devoa va merc'hig da ganañ. Ret mat eo bet din 'ta tremen gant pladenn Rangoon, petra bennak ma kenderc'he da rimiañ deiz-ha-deiz ha gwashoc'h-gwazh. Tamm ebet ne zrouksanten evelkent e vije fin dezhi ken abred.

-

- Frealz, emezoc'h ?... nerzh kalon, e lavarit'hu ?... Ha petra all ouzhpenn ? Tavit din gant ar seurt komzoù, rak ober goap n' eo ken. Daoust ha n' intentit ket kement-mañ, kabiten ? Aet eo va merc'h Daphne da anaon evit an eil gwech, div noz 'zo, amañ, war vourzh ho lestr « Honeymoon »... Gant se ne fell ket din, n' hellan ket, ne dlean ket bezañ kennerzhet gant den, na zoken ganeoc'h c'hwi !

Hag e-keit ma skare Darnley a gammedoù bras er-maez ar gambrig, e klevis tammou ar bladenn dorret, tanfoeltret gantañ war va zaol-skrivañ, oc'h ober un drouz iskis, an drouz o divije graet relegoù Daphne, paour-kaezh eskern peursulhiet ha kuzumet, en ur vrzuniñ an eil war-lerc'h egile.

Krec'h Eliez,
deiz gouel ar Werc'hez Hanter-Eost, 1956..

GERIOU TREGERIAD

BECHAD : un tammig bihan.

BOUCH : ur c'havr.

KREWICHENN : e galleg a crinière, tignasse ».

DIGOGET : tennet e-maez ar grogenn.

DIVATORELLET : deut en e veiz (e lavarer diwar-benn un den a tivorfilañ goude ur c'horfad, pe goude bezañ bet mezv-dall gant ar c'hoant kousket).

HERR D'AN DOUE : ar primañ m'helle.

HIRLANCHER : ur gwaz hir e deod (e lanchenn).

JALOD : un den hag a ren ur buhez diroller (« un débauché »).

SIKLUD : e galleg « un réduit ».

SOFKONT : forzh pegement, « en abondance ».

STRABOUILHAT : aozañ gwall geusturenn.

STRUJ : neuz fall (e galleg, « très mauvaise mine »).

TOUR AR BLEIZ

addispleget diwar PAOL FEVAL

gant PER DENEZ

I

Un tu bennak etre Karnag ha Plouharnel ez eus, hanter-guzhet e-touez ar gwez-kistin, un tour kozh-kozh dismantret-holl. Eno, pa vez noz anezhi, e teu daou dasmant da gantreal : tasmant ur paotr ha tasmant ur plac'h. Kement den a zo tremenet dre aze e-tro hanternoz en deus o gwelet ; ur plac'h korfet-kaer, a-fuilh he blev war he divskoaz, met hep dremm ebet ; ur paotr kreñv, sonn war e zivesker, met hep tamm divrec'h. Treiñ a reont, treiñ dibaouez en-dro d' an tour, hep lavarout morse ur ger. Ur wech ar bloaz, da Nedeleg, n'eo ket kerzhout a reont, met redek evel tud foll. Hag ar gristenien a ya d'an iliz evit oferenn ar Pellgent a glev ar chou a vez ganto : « Maria Kêr, bleiz ! Ro din en-dro va nerzh ! » a youc'h ar paotr yaouank. Hag ar plac'h yaouank : « Maria Kêr, bleiz ! Ro din en-dro va c'hened ! »

II

Hag adalek trizek kant vloaz emañ an traoù e-giz-se. C'hellit da grediñ, un istor a zo.

Bez e oa ur wech, pa oa Gweltaz ar Fur, eizhvet abad Ruiz, o ren war ar vro, ur paotr yaouank born eus e lagad dehou ha kamm eus e c'har kleiz. Maria Kêr oa e anv. Mab e oa da Josserand Kêr, intañvez Marzhin Kêr, bet gward armet e kouent Ruiz.

Marv an tad, e oa en em dennet ar vamm, Josserand hec'h anv, hag ar mab da vevañ en tour kozh. Bemdez avat ez ae Maria Kêr bihan d'ar gouent, rak eno e oa kelennerien gouiziek-bras oc'h ober skol d' an neb en devoa c'hoant deskiñ traoù.

Speredek e oa ar paotrig. Met, da lavarout ar wirionez, ne laboure mat nemet pa veze o studiañ gant ur manac'h kozh anvet Tael. Hemañ, war a lavare an dud, en doa kavet an tu da dreiñ plomm en aour. Met ne ziskulie e gevrin da zen ebet.

24

Ha mat e rae, rak, panevet-se e vije bet buan troet da aour kement tamm plomm a oa er vro.

Un den fur e oa Tael. Sentet en doa ouzh Gweltaz pa oa bet lavaret dezhañ gant ar Sant :

« Tael, Tael, ne fell ket d' an Aotrou Doue e vefe kemmet ar pezh en deus krouet. Ar plomm a zo plomm hag an aour a zo aour. Aour a-walc'h a zo. N' eus ket re a blomm. Lez an traoù evel m' emaint. Anez-se e kouezhi dindan galloud an droukspered. »

Ha pa varvas Tael, hag eñ kozh-kozh-kozh koulskoude, n' en doa ket troet da aour an disterañ tamm plomm.

Koulskoude n' eo ket a galon laouen en doa sentet Tael ouzh e vestr. Rak goude e varv e teuas en-dro d' ober war-dro e fornigelloù hag e listri-kornek. Se da nebeutañ a lavare ar besketaerien a yae da deurel o rouedoù er mor dirak

ar gouent. Rak meur a wech e oa bet gwelet gouloù ganto e kambr Tael gozh.

A-benn ar fin e fellas d' an Aotrou Gweltaz ar Fur gouzout petra oa gwir e kement-se hag un deiz e savas mintin-mat da vont da gambr Tael. C'hoant en doa tapout e vreur kozh war an tomm ha, marteze, goulenn gantañ penaos e oa kont gant an traoù er bed all. Marteze, a lavaran, rak ne fellfe ket din touiñ e oa seurt soñjoù e penn un den ken fur.

Pa erruas e-tal ar gambr e klevas Gweltaz ar meginoù o tianalat hag an tan o strakal. A-daol-trumm e tigoras an nor, ha piv a welas aze, nemet Maria Kêr bihan o c'hwezhañ tan par ma ouie er fornigelloù.

Ne oa ket Sant Gweltas un den kounnarus. Tapout a reas ar paotrig dre flip e skouarn ha kas anezhañ er maez en ur lavarout :

« Kêr, va faotr bihan, me oar mat petra emhout o klask. Met ne fell ket da Zoue, na din ivez, e vefe kavet an dra-se gant den ebet ! »

« Ken paour eo va mamm, » a respontas ar bugel.

« Da vamm he deus trawalc'h evel-se da vevañ. Ha neuze, ar plomm a zo plomm, hag an aour a zo aour. Arabat dit mont a-enep da youl Doue. Anez-se e kouezhi dindan galloud an droukspered. »

Izel e benn e tistroas Maria Kêr bihan d' ar gêr, ha biskoazh goude-se ne deas mui war-dro kambr Tael gozh. Tizhet gantañ e driwec'h vloaz, avat, ha gounezet gantañ un nebeut gwenneien, e prenas binvioù da deuziñ ar metaloù ha da strilhañ ar plant : deskiñ pareañ an dud a felle dezhañ ober, a lavare d' an holl. Ya, an dra-se ha meur a dra all c'hoazh.

25

Ur c'haer a baotr e oa Maria Kêr neuze, gant e zaoulagad sklaer ha dous. Rak ne oa na born na kamm. E-unan-penn e veve gant e vamm hag a gare anezhañ dreist pep tra. Ne zeue morse den d' o gwelout en tour kozh, nemet Matilina goant, pennehêrez Koad an Doc'h, filhorez Josserand, hag ivez Paol ar Bihan, mab an hini a oa aet da ward armet en abati goude marv Marzhin Kêr.

Alies e komze Paol ha Matilina an eil gant egile. Ha gouzout a rit eus petra, pe eus piv, e komzent ? Eus Maria Kêr e komzent atav. Kalz e karent anezhañ neuze ? O, nann ! Ar pezh a gare Matilina ar muiañ a oa he dremmig koant, hag evit Paol ar Bihan n' en doa ket brasoc'h mignon eget Paol ar Bihan e-unan. E-pad eurvezhioù e chome Matilina da sellout outi hec'h-unan en he meleourig dir, ha Paol ne baoueze ket da fougeal na oa stourmer ebet evitañ e bro Garnag a-bezh.

Pa gomzent eus Maria Kêr e lavarent atav :

« Ha ma teufe un deiz bennak da gavout ar maen-aour ? » Hag e soñjent, pep hini eus e du :

« Ret eo din bezañ mignon gantañ. Ma teu da vezañ pinvidik, e c'hellin kaout va lod eus an arc'hant. »

Josserand ivez a ouie mat petra oa he mab o klask, hag un deiz e oa aet da c'houlenn kuzul gant Gweltaz. Un hej en doa graet an den fur d' e benn.

« Hervez youl Doue e vo an traoù, » en doa lavaret. « Met taolit evezh bras ma vo atav mouchet daoulagad ho paotrig pa vo oc'h ober war-dro e listri-kornek. Rak anal an Diaoul an hini eo a sav diouto, ha dallet e vez an dud ganti. »

Mont a reas neuze Josserand da zaoulinañ dirak kroaz Sant Kado hag eno e lavaras :

« Aotrou Doue, ho pet truez eus ar mammoù e soñj eus ho mamm ar Werc'hez

Vari. Gwarezit va Maria bihan ha kasit ar soñjoù fall-se diouzh e spered.... Nemet e karfec'h lakaat anezhañ da vezañ un den pinvidik. Rak ur paotrig brav e vefe sur gant dilhad mezer flour hag ur c'habell feuret m' en defe arc'hant a-walc'h da brenañ anezho. »

III

O tapout bloaz bep daouzek miz, e teuas an holl yaouankizoù-se. Matilina, Paol ar Bihan ha Maria Kêr d' an oad ma soñjer en dimeziñ. Un noz e kemeras Josserand penn he hent etrezek mereuri Koad an Doc'h ha digant an ozhac'h e c'houlennas e verc'h da zimeziñ da Varia Kêr. Diwar an taol-se e tigoras ken bras Matilina he begig roz, ken na ziskouezas en don-donañ anezhañ, daou zant skedus evel perlez n' en doa den gwelet c'hoazh.

26

« Ya va zad, ya va maeronez, » emezi diouzhtu. « Gwreg Maria Kêr e vin gant ma paeo din ur vrozha mezer arc'hant seurt an hini a zo gant Itron Lanelan ha gant ma vo Paol ar Bihan paotr-enor d' hon eured. »

Eno e oa Paol ar Bihan.

« Laouen e vin paotr-enor en eured Maria Kêr, » emezañ en ur vousc'hoarzhin, « gant ma roio din ur vantell mezer alaouret seurt an hini a zo gant Aotrou ar Gerveur, ha n' eo ket gwelloc'h egedon da zougen dilhad brav. »

Pa voe distro d' an tour e lavaras Josserand d' he mabig :

« Maria va faotrig, kred ac'hanon, klask ur mignon all hag un danvez-pried all. Rak an daou-se, ar paotr koulz hag ar plac'h, n' eus ket ur galon vat enno. »

Setu an den yaouank avat da glemm ha da leñvañ :

« Mignon ebet n' em bo nemet Paol ar Bihan ha gwreg ebet nemet Matilina goant. »

Hag ar vamm baour o vezañ komzet eus an div berlezenn nevez setu ma 'z eas diouzhtu ar paotr da Goad an Doc'h d' o gwelout.

Etre an tour hag ar vereuri avat ez eus ur beg-douar anvet An Hinnig e-lec'h ma vez sall ar geot, pezh a lak ar saout hag an tirvi da vreskenn pa vezont eno gant o feuriñ. Eno e welas Maria Kêr ar paotr yaouank hag ar plac'h yaouank o vale, brec'h-ouzh-brec'h en ur c'hoarzhin. Hag eñ da soñjal :

« Ne vo ket ret din mont pell evit o gwelout. »

Hag e gwir, drant e save c'hoarzh Matilina, rak laouen e veze atav pa veze gant Paol ar Bihan.

Gouzout a reer avat pegen kounnarus e vez an tirvi ha pegement e tisplij dezho klevout tud o c'hoarzhin en o fark. Setu un tarv kozh neuze, graet gantañ re gofad diwar geot sall, o lammat war-du Matilina goant en ur deurel moked dre e fri. Buan e c'haloupe al loen, met buanoc'h egetañ ez ae Maria Kêr, rak eñ an hini eo a erruas da gantañ e-kichen Matilina hag a dapas an taol kerniel o klask gwareziñ anezhi. Ha setu neuze ar paotr yaouank toullet e lagad dehou.

Tarzhed e oa Paol ar Bihan da c'hoarzhin leizh e veg o welout e oa born Maria Kêr. Gwelloc'h e vije bet dezhañ tevel avat rak al loen a droas fuloret war-du ennañ hag a skoas ur seurt taol gantañ en e benn a-dreñv ken e voe taolet Paol ar Bihan er mor diwar lein an tevenn. Ha neuze, laouen-holl gant e daol kaer, ez eas kuit an tarv.

Unan na oa ket laouen avat a oa Matilina hag a stagas diouzhtu da huchal:

« Maria Kêr, va mignon Maria Kêr, kerzh buan da saveteiñ ar Bihan ha me vezo gwreg dit. »

Hag eus kreiz ar mor e youc'he Paol ar Bihan :

« Maria va mignon mat, deus buan da saveteiñ ac'hanon, rak me n' ouzon ket neuñv ha war var emañ da vervel hep kofes na nouenn. »
27

« Paotr-enor e vezi em eured ? » a c'houlennas Maria Kêr.

« Hag e vin, » a respontas ar Bihan, « ha kant skoed a roin dit war ar marc'had. Met deus buan d' am saveteiñ rak setu emañ o veuziñ. »

Maria Kêr a zivere ar gwad diouzh e lagad toullet. Kalonek e oa avat hag ul lamm a reas diwar lein an tevenn. Unan eus e zivesker a dorras o kouezhañ war ar c'herreg, met se ne viras ket outañ da saveteiñ egile.

Pa voe degaset ar Bihan war ar sec'h, setu Maria Kêr da c'houlenn gant Matilina :

« Pegoulz neuze e vimp dimezet ? »

Pa ne felle ket d' ar plac'hig lavarout nann krenn-ha-krak e teuas Paol ar Bihan war he sikour :

« Ret dit da nebeutañ gortoz ma vo pareet da c'har ha da lagad, Maria Kêr va mignon, rak en ur stad trist a-walc'h emañ bremañ. »

« Ha neuze, » a lavaras Matilina en ur c'hoarzhin kement ken e welas Maria Kêr an div berlezenn nevez e don ar begig roz, « ne blijfe ket re din kaout ur gwaz kamm ha born. »

« Met evidoc'h ho-taou eo on deut kamm ha born, » a youc'has Maria Kêr.

« Gwir eo, » a lavaras ar Bihan.

« Gwir eo, » a lavaras Matilina.

« Ma, Kêr va mignon, gortoz ken arc'hoazh, ha n' az po digarez ebet da glemm. »

Ha war-se ez ejont kuit o-daou, o lezel Maria Kêr da jilgammat betek ar gêr gwellañ ma c'helle.

Unan a voe droug enni avat a voe an Itron Josserand, pa welas o tont endro kamm ha born he mabig hag a oa aet kuit eus an ti gant daou lagad ha div c'har vat.

« Ha pelec'h hoc'h eus kollet ho kar hag ho lagad, va mab ? » a c'houlennas ar vamm enkrezet-holl.

« O gwelet em eus, mammig, » ne respontas ken Maria Kêr ; « na pegen koant ez int. »

« Ha war ar marc'had en deus va mab kollet e benn ivez ! » , a c'harmas Josserand. Ha diouzhtu ez eas da c'houlenn kuzul gant Sant Gweltaz.

« Arabat e oa komz eus an div berlezenn, » eme ar Sant p' en doe klevet an istor. « Bremañ avat eo graet an droug. Petra 'ma ho mab oc'h ober bremañ ? »

« Emañ o c'hwezhañ tan en e fornigelloù, ken e c'hell ober. »

28

« Evel just : gant arc'hant e c'hell ar re wan prenañ ar re greñv hag ar re walleurus prenañ an eürusted. Diwar vremañ e labouro ho mab evel ur c'hi da

gavout kevrin ar maen-aour. Ma, lavarit pedennoù evitañ. Grit dezhañ diwall mat diouzh ar moked a sav eus al listri-kornek, ha grit dezhañ mont bep bloaz, hep mank ebet, da oferenn ar Pellgent. »

E-tro mare Nedeleg e oa.

IV

Kerkent ha hi distro d' ar gêr, e lakaas Josserand he mabig da douiñ ez afe atav da oferenn ar Pellgent ha goude-se e prenas dezhañ dilhad houarn d' e wareziñ diouzh anal an diaoul pa vefe oc'h ober war-dro e listri-kornek.

Bep mintin ha bemnoz e teue bremañ Paol ha Matilina d' an tour rak brud a oa er vro e oa Maria Kêr war-nes dizoleiñ kevrin ar maen-aour. Ha n' eo ket mui div berlezenn hepken e tiskoueze Matilina, met ur chapeledad a-bezh, hag a skede, a lufre, drant ha kann, eus an eil korn d' egile eus he muzelloù. Rak Paol ar Bihan en doa lavaret dezhi :

« C'hoarzh kement ha ma c'helli. Gant mousc'hoarzhoù eo e vez tapet ar re sot. »

« Hag e rin, » he doa respontet ar plac'h yaouank. « Ha p' am bo bet kalz arc'hant gant ar genaoueg, e prenin an holl blijadurioù a zo da gaout war an douar. »

« Na pegen fur ez oc'h va merc'hig, » en doa garmet Paol ar Bihan. Met a vouezh izel en doa lavaret outañ e-unan : « Ha setu penaos e vo lodennet an traoù : an hanter evidon, an hanter-all evidon, hag ar peurrest evidoc'h, Matilina goant. »

Da Nedeleg e teuas ar paotr hag ar plac'h da dremen an noz en tour. Degaset o doa ganto sistr dous, a voe lakaet da dommañ e korn an oaled, ha kistin, a voe krazet dindan al ludu. Ha ken c'hwek e save c'hwez ar boeson ma fellas da Josserand zoken kaout un tañva dioutañ. Maria Kêr ,avat, ne zebre tamm na ne eve takenn : sellout ouzh Matilina o c'hoarzhin ne rae ken.

« Ha neuze, va danvez-pried born ha kamm, » a c'houlennas Matilina, « pe da vare 'ta e timezin gant ar pinvidikañ den a zo er bed?»

« Warc'hoazh e vijec'h bet ken pinvidik ha ma 'z oc'h koant ma n'em bije ket prometet d' am mamm mont ganti d' an oferenn. Da gentañ son ar c'hleier e vo ar mare mat... »

« Ha ne teuio ket ar mare mat en-dro ? »

« Eo. A-benn seizh vloaz... »

N' he doa klevet Josserand netra, rak ar Bihan a oa o komz kreñv outi aratozh-kaer. Disoñj-kaer e oa neuze ar vaouez kozh pa sonas kloc'h Plouharnel er pellder.

29

« Pec'hed e vefe, » emezi en ur sevel, « chom ur vunutenn pelloc'h da nezañ. It buan; va mab Maria, da wiskañ ho tilhad sul, ma 'z aimp prestik d' an oferenn. »

Karet en dije Maria Kêr sentiñ ouzh e vamm. Matilina, avat, a souchas outañ en un doare karantezus:

« Gortozit un tammig c'hoazh, va danvez-pried karet. » Diouzh e du e lavare Paol da Josserand :

« Kemerit ho pazh, moereb. Matilina a yelo ganeoc'h. Ha me a sikouro Maria Kêr da vale, gant aon n' en defe droug en abeg d' e c'har fall ha d' e lagad na

wel ket. »

Hag izel e silas e skouarn Matilina :

« Kont kaozioù d' an hini gozh. Me ' ray d' ar genaoueg chom amañ. »

War dreuzoù an nor e chomas Maria Kêr da sellout outo o pellaat : unan krommet ha trabadellus, eben mistr ha ker skañv ken e seblant ober ul lamm da bep kammed. Huanadiñ a reas ar paotr yaouank hag a-dreñv e skoaz e savas mouezh ar Bihan :

« Ret eo ober buan, Maria. Pell a-walc'h hoc'h eus gortozet evel-se. Ha mall zo ganti ivez bezañ dimezet ! »

« Ha gwir eo ? » a c'harmas Maria Kêr laouen-holl. « Karout a ra-hi ac'hanon ? »

Ne weled ket mui an div vaouez en deñvalijenn. C'hoarzh Matilina avat a save sklintin evel stirlink un dornad pezhioù arc'hant.

« En hoc'h eured ne soñj ken. Kred ac'hanon, Maria : pa vez ur plac'hig o c'hoarzhin re, ez eo evit chom hep leñvañ. »

V

Pa voe serret an nor e stagas Paol da glemm :

« Na pegen nec'hus eo, va Doue ! Na pegen nec'hus ! »

« Petra zo nec'hus ? » a c'houlennas Maria Kêr.

« Petra ? Met bezañ rediet da c'hortoz seizh vloaz ! »

« Penaos ! » a c'harmas Maria Kêr. « Te oa o selaou pezh a lavaren d' am danvez-pried ! »

« Maria va mignon, atav e vez digor va skouarn da selaou ar pezh a sell ouzh da vad, » a respontas ar Bihan. « Seizh vloaz ! N' az pefe nemet daouzek miz da c'hortoz da gaout un oferenn all. »

« Touet em eus d' am mamm. »

« Ma kar da vamm ac'hanout e ouezo pardonñ. »

« Ma kar va mamm ac'hanon ! O ya, honnezh a gar ac'hanon gant he holl galon. »

30

« Evel just. Met Matilina n' eo ket da vamm. Born out, kamm out, ha gwerzhet ac'h eus da holl vadoù da brenañ fornigelloù ha listri-kornek. Ha peseurt plac'hig a oufe gortoz seizh vloaz ? Ma vijen ez lec'h, na dafen ket da goll va buhez. Da hanternoz, pa sono ar c'hleier, e vefen o labourat da c'hounit va eürusted. »

Difiñv e chome Maria Kêr dirak an oaled, stouet e benn, krizet e dal.

« Ar wirionez ac'h eus lavaret, » emezañ en diwezh. « Va mamm a bardono din. Chom a rin da labourat. »

« Setu aze ur paotr fur ! » a c'harmas ar Bihan laouen-holl. « Arabat dit kaout aon. Me a chomo ganit. »

Ne fiñvas ket Maria Kêr. Paret e chome e zaoulagad war an douar.

« Ar wech kentañ e vo din disentiñ ouzh va mamm, » emezañ, evel o soñjal a vouezh uhel.

Neuze e tiskouezas d' ar Bihan mont kuit.

« Evidon e vo al labour hag ar riskl, » emezañ. « Evidoc'h e vo an aour. Kae d' an oferenn. Lavar da Vatilina e vo pinvidik ? Ha lavar d' am mamm e vo eürus peogwir e vezin-me eürus. »

VI

Ur c'hoad bras a oa neuze etre an aod ha peulvanoù Karnag. Er pellder e kleve Maria Kêr saflik ar mor war an traezh ha, tostoc'h, kan an avel o sourral er gwez-derv. Hag a-greiz-holl setu ma klevas ivez mouezhioù, evel pa vefe bet krog an tour da gomz, n' eo ket hepken dre skalfoù ar prenistri kozh e-lec'h ma hiboude an avel, met ivez dre zindan dor ar gambr, e-lec'h ma sile ur sklerijenn iskis. Prim e tigoras Maria Kêr an nor-se, gant aon na ve peg an tan en e levrioù. Ne oa tangwall ebet. Ar fornigell hepken a oa ruz-tan. Hag en aer e oa speredoù e-leizh o fistilhañ.

« An tri Roue a zo aet en hent, va mignon. »

« Va mignon, lintret he deus ar Steredenn er Sav-Heol. »

« Va mignon, va mignon, emañ ar Mabig Jezuz en e brezeb, noazh-bev war ar plouz. »

« Mont a raio Maria Kêr da heul ar vesaerien. »

« Nann, ne daio ket Maria Kêr. »

« Kristen mat e oa. »

« Kristen mat n' eo ket mui. »

« Ankounac'haet en deus anv Josef ar pried mat. »

« Hag anv Mari ar vamm atav gwerc'hez. »

« Nann, nann, nann ! »

« Eo, eo, eo ! »

31

« Mont a raio ! »

« Ne daio ket ! »

« Mont a raio, touet en deus d' e vamm. »

« Ne daio ket, Matilina he deus lavaret dezhañ chom. »

« Va mignon, va mignon, en noz-mañ e kavo Maria Kêr kevrin ar maen-aour. »

« En noz-mañ, va mignon, e c'hounezo kalon e vuiañ-karet. »

Hag ar speredoù diwelus, tabut ha trouz ganto, a nije hag a zinije, a droielle evel poultrennoù o tañsal en ur bann-heol.

« Er-maez, speredoù drouk ! » a c'harmas Maria Kêr, o kemer ur skubell gelenn. « Petra rit em zi ? Er-maez ! »

C'hoarzhadennoù a darzhas en holl gornioù ar gambr. Lavaret e vije bet e oa Matilina e pep lec'h.

Ha setu, degaset gant an avel-vor, eil son ar c'hleier.

« Va mignon, petra 'lavar ar c'hleier ? »

« Nedeleg, a lavaront, va mignon. Nedeleg, Nedeleg ! »

« Aour a lavaront, va mignon. Aour, aour ! »

« Gevier, va mignon ! »

« Va mignon, gevier ! »

Ha mouezhioù all da sevel eus diabarzh ar fornigell, hag an tan da dommañ, da dommañ, ken e teuas ruz mein an oaled. C'hellit da grediñ, ne rae ket Maria Kêr kalz tra gant e skubell gelenn. Dre douez an delioù e tremene dibistig ar speredoù, ar re vat gant o steredenn war o zal, ar re zrouk gant o c'herniel. Hini ebet ne veze tapet.

« Mouget 'vin gant ar wrez, » eme Varia Kêr outañ e-unan.

« Digeriñ a rin ar prenestr, da gas kuit an tommder hag ar speredoù drouk war un dro. »

Kerkent ha digoret ar prenestr avat, setu ar maezioù a-bezh o tiskordañ da c'hoarzhin dindan o mantell erc'h. Ar gwez-derv kozh o-unan a heje ar frimmoù diwar o fenn en ur lavarout:

« Mont a raio Maria Kêr ! »

« Maria Kêr ne daio ket ! »

Spered ebet ne ziniyas er-maez, met speredoù e-leizh a zeredas e-barzh.

« Eo, eo, eo ! »

« Nann, nann, nann ! »

Ha me 'gred din e savas kann etrezo, ar re vat diouzh un tu, ar re zrouk diouzh an tu all.

Serriñ e brenestr a reas Maria Kêr hag azezañ da soñjal. Trumm avat e c'harmas ur vouezh :

« Nedeleg ! »

Sevel a reas Maria Kêr e benn. Ruz-tan e oa ar fornigell hag el lestrig-kornek e oa un dra bennak o virviñ gant un trouz spontus evel ar gorventenn.

32

« Mamm, va mamm garet, mont a ran ! » a youc'has Maria Kêr.

Hag a viliadoù e respontas ar mouezhioù bihan :

« Re ziwezhat ! »

Hag, e gwir, gant an avel e teue bremañ an trede son.

« Re ziwezhat ! »

Re ziwezhat e oa. Goustadik e kreske skleur an deiz bras, skleur an deiz a welas kentañ mousc'hoarzh Jezuz.

Bugale, paotred, merc'hed, deuit ! Deuit holl ! Deuit da azeuliñ an Doue

ganet e prezeb Betleem !

Nedeleg ! Nedeleg ! Alleluia !

VII

Ne oa ket tavet mat an trede son ma tarzhas ar fornigell ha ma strinkas diouzh al lestrig ur flamm ken uhel hag an oabl. En em stlepel a reas Maria Kêr d' an douar ha setu ma klevas ur vouezh.

« Sav ! » eme ar vouezh, kreñvoc'h eget ar gurun. Sevel a reas.

Dirazañ e oa un den ramzel, pe kentoc'h - e anavezout a reas Maria Kêr - an Diaoul kemeret gantañ stumm un den.

Houarn e hañvale bezañ e gorf, houarn tomm-ruz ha treuzwelus ; aour war deuz a rede en e wazhied ha du evel un tamm glaou e oa e galon.

Astenn a reas e zorn war-du ar voger hag enni e tigoras ur skalf.

« Sell ! » eme an Droukspered.

Sentiñ a reas Maria Kêr. Dirazañ e oa diabarzh iliz Plouharnel. En ur c'horn e wele Josserand gozh : war he daoulin e oa ar vaouez paour, ha kalonek e pede, en ur ober bep ar mare ur sell war-du an nor da welout hag-eñ ne teufe ket he mab. Ûn tammig pelloc'h e oa Matilina, fichet-brav ha koant-meurbet, o tiskouez perlez he mousc'hoarzh da gement paotr a oa eno. Ha e-kichen Matilina e oa Paol ar Bihan, o komz sioulik ouzh skouarn ar plac'h.

Ha bremañ e c'helle Maria Kêr gwelout e-barzh kalonoù an dud. E kalon e vamm, eñ e-unan an hini eo a welas ; e kalon Paol ar Bihan, al lorc'h hag ar bizhoni ; hag e kalon Matilina e welas Matilina war he daoulin dirak Matilina.

« A-walc'h em eus gwelet, » eme Varia Kêr.

« Ma, bremañ, selaou ! » eme an Diaoul.

33

Hag ouzh e skouarn e tregernas diouzhtu ton ar c'hanaouennoù santel. An Itron Josserand a gane gant ar re all, met en he c'halon setu ar pezh a lavare :

« Grit, Aotrou Doue, ma vezo eürus. Diwallit anezhañ diouzh pep droug. N' em eus mui war an douar den nemetañ da garout. Aotrou, mirit evidon ar boan ha roit dezhañ an eürusted. »

Hag e kredfec'h ? Fellout a reas dezhañ ivez klevout ar pezh a lavare ken sioulik Paol ar Bihan ha Matilina an eil d' agile.

« Petra 'roio din ar genaoueg ? » a c'houlennas Matilina.

« E holl arc'hant a roio dit, » a responte Paol ar Bihan.

« Ha ret e vezo din, e gwirionez, gwilc'hat en e gichenn ha jilgammat d' e heul ? »

« Gallout a rez 'michañs gwilc'hat ha jilgammat un tammig evit gounit, holl aour ar bed. »

« Pegeit amzer avat ? »

Maria Kêr a zalc'has war e anal da glevout gwelloc'h.

« An amzer a blijo dit. Ket ur vunutenn ouzhpenn. »

Tevel a rejont.

Sevel a reas Maria Kêr e zaoulagad war-du an Diaoul.

« A-walc'h em eus klevet, » emezañ.

« E garout a rez c'hoazh, Paol ar Bihan ? »

« Nann, dispriz 'm eus evitañ. »

« Ha Mitilina, he c'harout a rez c'hoazh ? »

« Ya, met kasoni 'm eus eviti. »

« Te zo laosk ha kriz evel da holl vreudeur ! » eme Satanas. « Bremañ, sell e-harz da dreid, » emezañ c'hoazh goude ober d' ar voger serriñ.

En-dro dezhañ ne wele mui Maria Kêr nemet pezhioù aour ; sevel a rae dija ar bern anezho uheloc'h eget e vruched hag atav e pade glav ar bindidigezh da gouezhañ eus an oabl a-dreuz d' ar volz tarzhet.

« Mestr on war gement-mañ ? » a c'houlennas Maria Kêr.

« Ya, » eme Satanas. « Ret eo dit avat paeañ ar priz dereat. N' heller ket kaout Doue hag an aour war un dro. Dit da zibab. Kement-mañ pe da ene. »

« Dibab a ran va ene. »

« Graet da soñj ? »

« Graet va soñj. »

« Mat. »

En ur serr-lagad ez eas ar bern pezhioù aour da get. Du-pod e chomas ar gambr, suilhet he mogerioù gant an tangwall. Enni ne weled ken tra nemet ar skleur iskis a zeue eus korf houarn Satanas.

« Bremañ, kerzh kuit, Diaoul ! » eme Maria Kêr.

34
VIII

Ne fiñvas ket an Diaoul avat.

« Ha krediñ a ra dit on deut evit netra ? » a c'houlennas. « N' out ket kouezhet em galloud peogwir ac'h eus miret da ene. Met va galvet ac'h eus ; deut on : gwirioù em eus warnout. Bemnoz hiviziken, eus hanternoz betek teir eur, e vezi em servij e stumm un den-bleiz o redek, o lammat, o klemm hag o razailhat. Setu petra ac'h eus gounezet gant da vignon ken kreñv ha da vignonez ken koant. Bremañ, greomp buan hor marc'had a-raok n' az afen kuit. Peseurt loen a fell dit bezañ ? Karv, ejen, dañvad, kilhog ? Ma vefes ki, e c'hellfes gourvez e-harz treid Matilina hag ez afes da chaseal gant ar Bihan. »

« Bleiz e fell din bezañ, bleiz d' o debriñ o-daou. »

« Bleiz e vezi, » eme Satanas, « teir eurvezh bemnoz, keit ha ma vi bev. Lamm 'ta, den-bleiz ! »

Hag an den-bleiz Maria Kêr a lammas er-maez dre ar prenestr.

Evit Satanas, dre an nor eo ez eas kuit. Displegañ a reas e zivaskell bras-divent hag, ar beg diouto o skeiñ ouzh ar stered, e pellaas a-dizh evit

chom hep klevout kleier iliz Plouharnel.

IX

Plijus e vez atav gwelout an dud o tont er-maez eus an iliz goude oferenn ar Pellgent. Pa vez yen an noz, ne chomer ket da varvailhat e toull an nor. Met e-pad pell e vez klevet ar botoù-koad o sklokal war an hent ha mouezhioù laouen o teurel bommoù kanaouennoù eus an eil gwenodenn d' eben.

En noz-se avat ne oa ket laouen an holl e porzh ar vered : rak Josserand a soñje gant poan ne oa ket deut he mabig d' an oferenn. En tu dehou dezhi avat e valee Matilina hag en tu kleiz Paol ar Bihan : an daou-se a gave dezho e oa deut Maria Kêr, a-benn neuze, da vezañ mestr war holl aour ar bed, ha lavarout a raent dezho o-unan e oa ret bezañ mat gant ar vamm evit bezañ mat gant ar mab.

« Atav e chomin en ho kichen, va maeronez, » a hiboude Matilina. « Sikour ha frealz a roin deoc'h en ho kozhni. » Ha Paol ar Bihan eus e du a zisplege :

« Biken ne zimezin. Atav e chomin gant va mignon mat Maria Kêr. Mar deo gwan, me a zo kreñv. Hag evit daou e labourin. »

Met Josserand ne daole ket pled ouzh pezh a lavarent :

35

« Setu ar wech kentañ ma tisent ouzhin » a soñje. « Setu ar wech kentañ ma lavar din gevier. Perak klask kemend-all kaout aour ? Daoust ha ne dalvez ket daeroù ur vamm war holl binvidigezhioù ar bed ? »

A-daol-trumm avat e voudas ar c'hornioù en noz.

« Kornioù-boud ar gouent o lakaat an hu war ar bleiz ! » a lavaras Paol ar Bihan:

« Ha petra 'vern ar bleiz d' ar venec'h ? » eme Josserand. « Tud armet a-walc'h a zo ganto d' o difenn. »

Erru e oant neuze war lanneier Karnag, e-lec'h ma sav ar meinhir, hag aet e oa ar venec'h e-biou d' ar mell toull bras e stumm ur jidhouarn e-lec'h na gresk na brug, na balan, na geot. Ac'hane e oa tu da welout an tour kozh hag e-tal dezhañ ar peulvanoù livet e gwenn gant an erc'h o fenn hag o baliroù.

Un dra souezhus a oa o c'hoarvezout avat. Chomet e oa ar venec'h a-sav, ur mell bleiz spontus o tont d' ar red war-du enno, ha Gweltaz an abad fur a save e vouezh e sioulder an noz:

« Bleiz ! Bleiz fall ! Difenn a ran ouzhit ober droug da servijerien Doue... »

Gourvez a reas ar bleiz e-harz treid an tad-abad ha Gweltaz, goude bezañ sellet pizh outañ, a c'halvas an Itron Josserand da dostaat.

« Ne c'hoarvez netra a-enep da youl Doue, » emezañ.

« Kemerit ho pleiz, itron. Ni a ya d' ar manati da lavarout pedennoù evitoc'h hag evitañ. »

Daoulinañ a reas an Itron Josserand e-kichen ar bleiz, o tifenn anezhañ a-enep an dud a glaske skeiñ warnañ. Dont a reas Paol ha Matilina da deurel mein outañ en ur youc'hal :

« Dal 'ta, genaoueg ! »

Pell amzer goude e teuas daou glasker-bara da reiñ dorn da Josserand da gas ar bleiz betek he zi. Rak, d' ober an aluzon ha da reiñ sikour, n' eus ket par d' ar re baour.

X

An deiz a oa o tont. Maria Kêr an hini eo a gouske er gwele e-lec'h ma oa bet lakaet ar bleiz. Bronduet-holl e oa e zremm hag ouzh e dal e oa peget ar blev gant ar gwad kaouledet.

Alteriñ a rae gant an derzhienn ha dre e gousk e lavare ur bern traoù iskis. Anv Matilina avat a zeue atav war e vuzelloù.

E-tal ar gwele e oa ar vamm.

Pa zihunas Maria Kêr e krogas da leñvañ o soñjal er poanioù en defe hiviziken da c'houzañv. Goude e teuas skleur ar gasoni en e zaoulagad :

36

« Pa soñjan o deus taolet mein warnon ! »

E vamm a lakaas he dorn war e dal.

« Va mab karet, » emezi siout, « kontit din pep tra rak ne ouzon netra. »

Kontañ a reas, ha neuze ez eas ar vamm da c'houlenn kuzul gant Gweltaz ar Fur.

Bez e oa an tad-abad ouzh he gortoz, ur bern levrioù ha skridoù kozh digor dirazañ.

« Na gontit netra din, maouez paour, » eme Weltaz o troc'hañ dezhi he c'homz. « Gouzout a ran petra zo bet, hag ar peurrest eus an noz em eus tremenet o studiañ evit ho sikour. Rak abaoe m' emañ ar bed ar bed n' eo ket ar wech kentañ e c'hoarvez ar seurt traoù. »

« Ha kavet hoc'h eus un doare da saveteiñ va mab ? » a c'houlennas Josserand ankeniet-holl.

« Me ne c'hellan ober tra, » eme an tad-abad goustadik. « Met c'hwi, daoust ha kalonek a-walc'h e vefec'h da skeiñ gant ar bleiz-se, hag a zo ho mab, un taol bouc'hal ken kreñv ken e faouto e benn ? »

O klevout kement-se en em lezas ar vaouez paour da gouezhañ war an douar, met an nerzh he doe da respont :

« Ober a rafen ma vefe ret. »

« It 'ta neuze, » eme Weltaz, « ha lemmit ho pouc'hal. »

XI

En amzer-se ne oa ket kalz tud o chom e Breizh. Hag unan eus al lec'hioù ar muiañ digenvez a oa tachennad ar meinhir e-kichen Karnag. En noz-se avat, an noz goude Nedeleg, ma ne oa den da vezañ gwelet en-dro d' ar seurt jidhouarn e-lec'h ma veze kustum an dud-vleizi da zont da redek, e oa klevet komzoù o tont eus kreiz ar bodoù lann, eus dindan ar bodoù-kelell, eus a-dreñv ar meinhir. Rak brud a oa bet er vro eus ar pezh a oa c'hoarvezet, ha tud a oa deut eus Plouharnel, eus Lanelan, eus Kêrgado, ha zoken eus Krac'h, ar gêr kozh en tu all d' an Dreinded e-lec'h ma veve gwechall trizek barzh Bel.

Flaperezh a oa gant an holl da c'hortoz. Ha n' eo ket eus an den-bleiz e oa komzet hepken, met ivez eus an euredoù da zont. Ha den ne c'hoarzhe muioc'h eget Matilina pa veze komzet dezhi eus hec'h eured gant Paol ar Bihan.

War ar wenodenn o tont eus an tour e voe gwelet ur skeud o tiskenn. Ne oa

ket ar bleiz, met ur vaouez paour gwisket e dilhad kañv. Ganti en he dorn e oa un dra bennak a lufre ouzh skleur al loar.

« Josserand ! » eme an dud.

37

« Mamm ar bleiz ! »

« Met petra zo ganti en he dorn ? »

Matilina, hag he doa daoulagad lemm, a respontas diouzhtu :

« Ur vouc'hal a zo ganti en he dorn... Me an hini eo a zo laouen da gaout an dizober eus an dud-se. Ganto ne veze morse tu da c'hoarzhin. »

« Met d' ober petra eo ar vouc'hal ? »

« 'Michañs e fell dezhi difenn he bleiz ! »

Rak, disoñjet em eus lavarout deoc'h, ur benveg bennak a oa deut gant pep hini, pe ur vazh, pe ur forc'h, pe ur freilh. Ouzhpenn sellout, e oa ret ober e stal d' al loen.

A-greiz-holl e sonas hanternoz e chapel ar gouent. Ha diouzhtu e voe gwelet ar bleiz o tiskenn war-du ar jidhouarn, o tislonkañ moged dre e fronelloù hag e zaoulagad ken ruz ha div c'hlaouenn.

« Sellit 'ta vat, » eme Baol ar Bihan, « n' eo ket mui kamm. »

« Ha n'eo ket mui born ivez ! » a youc'has Matilina spontet gant skleur e zaoulagad.

Paol ar Bihan a hejas neuze ar mell penn-bazh a oa gantañ en e zorn.

« Ha neuze, paotred, deomp dezhi ! »

« Kerzh en a-raok te ! » eme an holl.

« Laouen e rafen, met peg eo ar remm ennon abaoe ar mintin-mañ, ken em eus poan o vale zoken. »

« Ma, me a yelo, » a youc'has Matilina, ha na oa ket aonik. Ha war-raok ez eas, he forc'h ganti en he dorn, da gaout al loen a oa o redek er jidhouarn.

Ul lamm a reas ar bleiz, hag a-greiz-holl ne voe ket mui gwelet.

« Ar bleiz ? Pelec'h emañ ar bleiz ? »

Buan e teuas ar respont.

Klevet e voe Paol ar Bihan o leuskel ur youc'hadenn skrijus hag un trouz iskis, evel pa vefe bet ur c'hi o trailhañ eskern, a lakaas an holl da spontañ. Hag ur vouezh a savas, goapaus ha drouk :

« Na pegen mat eo, nerzh un den da zebriñ ! Da nerzh a zebran, Paol ar Bihan ! »

En em ziskouez a reas ar bleiz en-dro er jidhouarn. Ul lamm a reas ouzh dremm Matilina hag adarre e voe klevet an hevelep youc'hadenn hag an hevelep trouz.

« Na pegen mat eo, kened ur plac'h yaouank da zebriñ ! Da gened a zebran, Matilina ! »

38

XII

Graet gantañ e daol ez eas ar bleiz da c'hourvez dirak treid Josserand.

« Hu war ar bleiz ! Hu war ar bleiz ! » a youc'he an holl. Met den ebet ne grede fiñval.

Sevel a reas Josserand he bouc'hal, ha lezel anezhi da gouezhañ, rak daeroù he doa gwelet e daoulagad ar bleiz. « Evidoc'h e ouelan, mamm, » a lavaras hemañ dezhi. Sevel a reas he bouc'hal en-dro ha skeiñ un taol ken kreñv, ken e voe faoutet penn al loen etre daou.

Kouezhet e vije Josserand, semplet, d' an douar, ma ne vije ket dilammet ur paotr yaouank da bakañ anezhi en e zivrec'h. Maria Kêr e oa ar paotr-se, sonn war e zivesker, ar garantez o skediñ e zaoulagad.

XIII

An istor-mañ em eus klevet gant Yann ar Marichal, en deus ur vereuri vihan e-kichen Koad an Doc'h. Dezhañ eo bremañ dismantrou an tour kozh, ha n' en deus ken anv er vro nemet TOUR AR BLEIZ.

Poellad a-benn tizhout ar varzhoniezh

gant Armande LOUP
br. ABANNA

Ar varzhoniezh a zo an tav etre ar gerioù, kan ar vein, koroll ar gwez, furm ar goullo, stêr an dezerzh. Hag an dezerzh eo, ar wezenn, ar maen, ar goullo, ar ger.

Ar varzhoniezh n' eo ket an huñvre, nag an unantec'h, nag an dic'hallus. Netra ne enaouer anez e vije anezhañ endev, netra ne huñvreer ha na vije furm dezhañ, netra ne empenter panave ar gallus, ne roer troidigezh nemet eus ar gwirvoud. Barzhoniezh zo gwirvoud, ar beurbadelezh eus pep koulz-amzer. Barzhoniezh eo Doue.

Bezañ barzh a zo asantiñ da zeskiñ pezh a ouvezed, da sellout ouzh ar pezh a weled ; kerzhout war an arbenn dezhor an-unan ; bezañ barzh eo dont da vout anezhor an-unan.

Ar barzhoneg n'eo nemet ar striv da verkañ splann ar c'herzhed diloc'h-se. Evit bezout eo ret dezhañ dereiñ an hanvoudel. An istor a garantez n'eo ket ar garantez.

Ar varzhoniezh ne vez ket doñvaet. Ha rak na vez ket doñvaet, ha hi enkorfet er skridoù, eo e « tegemer » ar re he lenn, zoken ma hañval ar stumm pe stroll ar gerioù bezañ estren dezho.

Micherour war ar gerioù-se eo ar barzh. Ne vez ket evit gouzout en a-raok hag e teuy e striv da vat, d' ur pennober pe d' ur c'hwitadenn, petore lañs bennak a glevfe oc'h e vountañ. Hogen diwar ar mare na c'hell ket padout hep bezañ hevelep micherour, e teu da vout an hini a zo kemennet kefridi dezhañ. Ha brasoc'h e gefridi egetañ. Dezhi e tle pep tra, ha da gentañ skrivañ nemet ar pezh a sant e tle skrivañ, hep ober eus an darvoud personel estreget ur sigur. Ne reer ket un oberenn, hi a en em ra. Kemer a ra buhez ha furm diouzh buhez ha furm an hini a ouestl e vezoud dezhi bemdez, asur maz eo bemdez e chom e oberenn da sevel.

Pep oberenn enta a vez engouestlet en amzervezh m' eo bet ganet. Penaos e vefe a-hend-all, en doare a zo dioutañ strollañ en a-raok, a-embed, an daou c'her barzhoniezh hag engouestlet ?
40

Ne c'hell ket danevell un arnod-bevañ personel bezañ ur barzhoneg, kennebeut all ne c'hell ket ar varzhoniezh bezañ termenet gant ar sevel enep ar gevredigezh, pegen glac'harus bennak e ve hevelep enepsav.

Ma c'heller rouesoc'h-rouez en em zigenvezañ er maez eus buhez ar bevañs, ma vez enket ar barzh da en em sevel a-enep stad ar gevredigezh, diouzh ma vez dinac'het muioc'h mui gant Ugentvediz an dibarelezhioù, an hiniennelezhioù, padal n' eo ket ar varzhoniezh a darzh eus an dispac'h, an dispac'h eo a darzh eus ar varzhoniezh an hini eo.

An dispac'h santel, ar gonnar santel, an hini a vountas Jezuz e-barzh an Templ d' argas ar varc'hadourion, re Yerosolim, re du-mañ ; ar re a glask an dro da chom dic'houzvez eus an diwelus, rak na werzher ket an diwelus ; ar re na garont ket, rak karout a zo dont da vout anezhor an-unan.

Anezhor an-unan groñs.

Dic'hallus, neuze, treiñ penn. Ret eo sellout, ha goullo eo an templ :

marc'hadour ebet, bleunienn ebet, sonerezh ebet, piled ebet.

Karantez hepken.

Ar varzhoniezh a zo an dispac'h a-berzh karantez. An dispac'h a-berzh ar spered a vugeliezh, a vez evitañ ar predig o terc'hel ar peurbad, n' eus evitañ paouez ebet d' ar burzhud, hag a yaouanka ar bed dizehan, a vir anezhañ a vout islonket edan e vein, pa ne chom nemet an diwelus ha ma c'heller derc'hel krog ennañ.

(Tennet eus « A Contre-Idéal »,
Subervie embanner, Rodez 1956.)

KRENNIAVARIOU HOR BRO

gant GOARIN

Niverus eo ar c'hrennlavarioù a glever c'hoazh e Breizh, daoust ma 'z eus bet ankouaet kalz anezho abaoe ugent pe dregont vloaz 'zo. Ar re yaouank bremañ, touellet gant an doareoù nevez deuet er vro da heul ar sevenadurezh gallek, ne selaouont mui ar re gozh evel ma raent kent ha ne glaskont ket deskiñ dindan eñvor ar sturiennoù a vez dalc'hmat o nijal diwar muzelloù ar re-mañ. Daoust da se e teu ganto, lies gwech hag hep gouzout dezho, lavarennoù saourus ha taolennus en em silet e yezh pemdeziek hor c'henvroiz. A-viskoazh on bet techet da bleustriñ war gredennoù ha doareoù-komz ar bobl ha dastumet em eus, e-touez kalz regennoù, rimadelloù ha traoù-all, un niver mat a grennlavarioù hag a dalvez bezañ miret.

Setu aman darn anezho o sellout ouzh al labour-douar hag an amzer :

Da ouel Nedeleg
E talv ur gelienenn ur c'hefeleg.

Asvent sec'h ha Pask gleborek
A lak' an arc'h da vezañ barrek.

Ragaen e miz genver
A vez kontet dre ziner.

C'hwevrerig, c'hwezh, c'hwezh,
Dre ma kemer a lez.

Pa varv ur gerc'henn gant ar riou,
An hini a chom a dalv diou.

Miz Meurzh,
Gant e reveurz,
A ra d'ar wrac'h kac'hat en ti
Ha d' he merc'h koulz hag hi.

Glav da gal Mae, glav antronoz,
E vez dastumet ar frouezh kloz.

42

Pa vez un aval da ouel Yann,
Da ouel Mikael e vez kant.

E miz Mae
Eo re glav bemde
Ha re-nebeut bep eil de.

Koumoul ruz diouzh an noz,
Glav pe avel antronoz.

Kelc'h loar diouzh an noz,
Glav pe avel antronoz.
Kelc'h a-bell, glav a-dost ;
Kelc'h a-dost, glav a-bell. (1)

Rev war ar c'hozh (an diskar-loar)

Glav a-barzh an noz.

Kanevedenn a-raok nav er (eur)
Sur da vezañ kaer.

Kanevedenn diouzh ar mintin,
Tout ar glav 'barzh un inkin.

Gwelout a ran ar C'harrig Kamm,
Ar Yar hag an Tri Roue,
Tomm ' vo an heol warc'hoazh, mar plij gant Doue.

Morlarje 'zo ur paotr gê,
Me 'garfe 'padfe bemde
Hag an eost div wech ar bloaz
Ha gouel Mikael bep seizh vloaz. (2)

Ur peul-kloued ha pa ve fall
A rank ober ur bloaz en e blas. (3)

Etre Pask hag ar Sizhun Wenn
Ez eus seizh sizhunvezh penn-da-benn ;
Etre Pask ha Pantekost
Ez eus seizh sizhunvezh penn ha lost.

Setu amañ un nebeud krennlavarioù-all diwar-benn sioù mat ha fall an dud:

Ar paour pa binvidika
Gant an diaoul a ya.

Pa vez roet un troatad d' ar c'hi
E kemer daou pe dri.
43

Ar gedon a-bell
A ya holl da lern.

Bleud an diaoul
A ya da vrenn.

Pig pe vran
A gan.

Karrig a dro
A wel bro ;
Karrig a red
Ne bed ket.

Un den savet uhel er c'hargoù
A c'hell kaout pri ouzh e votoù
Ha pa vez lous bragoù an den
E saluder ar garg hepken.

Techet eo da wall fin :
Heol a savo re-vintin,
Merc'h a ouezo al latin,
Gwreg a garo ar gwin.

N' eo ket gant an daboulin
E vez tapet ur marc'h spontet.

An nep a ya da gred
Ma c'hell mirout ouzh koll ne c'hounez ket.

Er barrez-me 'z eus kejer (kilheien)
Hag a oar bale lijer ;
Mont a reont a-dreuz, a-hed,
O klask deseo (touellañ) ar merc'hed.

D' ar re o devoa fiziañs e mein Koadri (mein bihan stumm ur groaz dezho
hag o deus ar vrud da zougen chañs) e veze lavaret :

Pignit er weenn (gwezenn), torrit ho koug (gouzoug)
Ha maen Koadri n' do ket a zroug.

Krennlavarioù-all, tennet eus LEVR AR BUGEL FUR, a vez klevet c'hoazh a-
wechoù, evel ar re-mañ :

Gwell eo a-bret dimeziñ merc'h
Eget ne deo kaout keuz war-lerc'h.

44

Tad a ra stad eus e vabig
Hen desk da vezañ mab prodig
Ha mamm a ra stad eus he merc'h
Peurliesañ ouel war-lerc'h.

Nep en deus arc'hant hag a ro
A gav mignoned e pep bro.

Kenderv gompes ' vi pa bresti
Ha den ingrat pa c'houlenni.

Ne deus den hag a c'hell ober
Ha droug ha mad gant an amzer.

Marc'h a eneb ouzh ar c'hentroù
A ra gaou bras ouzh e gostoù
Ha sot eo nep na fell plegañ
Da nep 'zo kreñvoc'h egetañ.

Digant ur mignon eo gwell kaout dour ,
Eget gwin digant un treitour.

Dibaot ar yar a goll he vi
O kanañ re goude dozviñ
Ha dibaot den en em bompat
Na goll e boan oc'h ober vad.

Gwell eo brud vat da bep hini
Eget kaout madou leizh an ti.

Dibaot siminal ' zivoged
Anez na vez tan en oaled.

Goude c'hoarzhin e teu gouelañ,
Goude c'hoarzhin huanadañ.

Kozh gwezenn 'zo drouk da blegañ,
Kent e torrfe eget eeunañ.
Un den yaouank da fall pa ya
Ne wella ket evit kosha,
Pe ma cheñch un draig bennak
Ne cheñcho ket a galon vat.

Gwechall ivez setu penaos e veze barnet ar gemenerien hag ar vilinerien :

Ar c'hemener n'eo ket un den
Nemet kemener ne deo ken.

45

Ar miliner a laer ar bleud
A zo daonet betek e veud
Hag e veud ' zo an daonetañ
Peogwir ' vez er sac'h da gentañ.

Klevet em eus bet bugale o taneal evel-hen mouezh ar c'hleier war-lerc'h
ur vadeziant :

Tad meo (mezo)
Mamm glañv.
Balign, baleo,
Ar c'hazh war an neo,
Mariig ' bareo.

Evit klozañ, ha daoust ma 'z eo an tammig regenn-mañ diheñvel diouzh ur
c'hrennlavar, setu amañ penaos e rae ar vugale al le da zerc'hel d' o ger p' o
deveze grataet pe divizet kenetrezo ober pe reiñ un dra bennak. O-daou e krogent
e biz bihan dorn dehou an eil hag egile en ur lavarout :

Bizig bihan, bizig moan,
An nep a lar gevier ' ya d'an tan ;
Bizig bihan, bizig spern,
An nep ' lar gevier ' ya d'an ifern.

Hag an hini na zalc'he ket d' e c'her a dremene evit un displeal hag a veze
diskouezet gant ar biz.

- (1) Pa vez ur c'helc'h en dro d'al loar.
- (2) Eus gouel Mikael e reer ivez gouel an dudjentil paour.
- (3) Kement-se a lavarer pa vez anv gant ur mevel da derrañ e goumanant e-kreiz
ar bloaz.

gant M. KLERG
(eñvorennoù diaoz)

E niverenn Gwengolo, Barr-Heol ez eus bet embannet ur pennad diwar-benn Konterion Bro-Dreger. Evel ma 'z eo bet moulet war Al Liamm lod eus ar marvailhoù-se hon eus soñjet e vefe dedennus evit hol lennerien gouzout penaos ez int bet dastumet.

Goude ma oan beleget, e oan aet, evel m' emañ ar c'hiz, da reiñ va bennozh a veleg yaouank d' am c'herent ha d' an amezeion. E-touez ar re-mañ e oa unan gozh, un tamm bihan kar din hag e tegasis da soñj dezhi eus an amzer ma oan bugel ha maz aen da vesañ e-kichen ar pradeier 'lec'h ma veze hi hec'h-unan alies o tiwall he saout. An hini gozh kaezh 'benn ma oan beleget, ne veze mui ganti ar vazh-se paket gloan en-dro dezhi ! he c'hegel nag he gwerzhid ; ne laboure mui, ne dae ket mui da vesa, ne dae mui da du ebet koulz lavarout, rak dall-moek e oa. Met 'dal ma komzis eus an amzer dremenet, pa veze-hi en ur nezañ gloan, o tisplegañ kontadennoù dimp-ni bugaligoù (o neuze, n' eo ket hi a rede da ziarbenn ar saout pa save warno c'hoant mont da laerezh, nemet e veze berzhet-mat da c'hortoz hon distro kent derc'hel gant he c'haoz !), hag an hini gozh o lavarout din « Soñj mat am eus. En ho kluch e vezec'h en-dro din, evel koloennoù-gwenan ! »

« Evel koloennoù-gwenan... » Abaoe pell 'zo em eus ankouaet kontadennoù ar vesaerez kozh, met da c'hras Doue, chomet on bugel war ur poent da vihanañ : bepred e plij din kontadennoù.

* * *

P' edon kure Ploubêr, e tegouezhe ganin tremen alies-alies dre an hent a ya eus ar bourk da Gerozern. Goude bezañ salutet ar Pemp Kroaz brudet ? daoust ma n' eus ket kalz a dud o anaout o istor gwirion, e tiskennen grav vihan ar Ruvignoded hag en em gaven war ar plaen en-dro da LannBloubêr. War ribl an hent, un den 60 vloaz bennak gant dilhad tomm war e dro, ur gasketenn war e benn, ul levr pe ur gazetenn etre e zaouarn ha lunedoù war e fri, a gaven meur a wech o vesa e vuoc'h. Dilezet en doa e venaj evit dont da vevañ en un ti bras e-tal govell al Lann. O vesa hag o lenn...

47

Eujen Brigant ne oa ket un den a iliz 'vit kement-se, met un teod mat en doa ha plijout a rae dezhañ farsal. Tamm-ha-tamm e tizolois e sekredoù.

Un devezh bennak e tispakas un toullad levrioù : Bibl ar Pastor Koad, Istor an Testamant Kozh hag an Testamant Nevez, Kentelioù hag Istorioù a Skouer Vat ha levrioù all, evel Buhez ar Sent :

- C'hwi 'zo barrek da lenn ar re-seoù ? Emezon

- Barrek ? Ya, laouen, emezañ koulz ha galleg bemdeiz !

- Ma ! degas a rin levrioù deoc'h da lenn. Kentañ levr a gasis dezhañ a voe « Fatima » gant an Tad Medarz. A-benn daou zevezh goude, e oa bet lennet al levr a-benn div wech ! Un toullad mat eus va levrioù a dremenas etre e zaouarn hag etre daouarn Mari F. ken akuit hag eñ war Yezh ar Vro. Lenn a raent ne vern pe levr a gasen dezho, nemet koulskoude e c'hwitjont war hini R. er Mason « Evit ket a Netra » a gavjont re ziaes.

* * *

N' ouzon ket penaos na pegoulz e teuis da glevout un dra all : gout a ouie Eujen kontadennoù : un drizek pe bevarzek bennak bet desket digant e vamm-gozh

pa oa bugel.

- Ma ! emezon dezhañ un deiz, c'hoant am eus da glevout ho kontadennoù.

- Traoù a c'hiz kozh ez int, ha bremañ ne blij ket ar seurt traoù-se d' ar re yaouank... Ha neuze darn anezho a zo hir, un eur hanter pe ziv eur-orolaj.

Met kement ha ken bihan a ris derc'hel warnañ, ken a-barzh ar fin ec'h asantas kontañ unan din da welout petra e oant : Kontadenn al Louarn Gwenn, ha setu Istor Jañ-Lui, Mab Roue Frañs o klask ar Voualc'h arc'hant en he c'haoued-aour, evel m' eo bet embannet war Al Liamm : « Mat-kaer ! emezon pa voe echu, honnezh a zo kaer ! Dont a rin d' he skrivañ ».

Hag ur yaouvezh bennak, goude bezañ bet oc'h ober katekiz da vugale Kerozern, ec'h antreis hag e stagis da skrivañ. Met n' eo ket c'hwi a lavar ! N' eo ket un ebat skrivañ kontadennoù pa n' ouzer ket ar ger kentañ eus ar « berrskrivañ » : ar sekretour a renk astenn e vizied gwech ha gwech all d' o dic'hourdañ, hag ar c'honter e-unan n' en em gav ket en e vleud, dre ma renk mont gorrek-a-walc'h, hep gallout reiñ ton d' e gaoz. Skuizhañ a reer buan evel-se, hag e renker paouez abred.

48

An eil tro moarvat maz is da di Eujen evit kenderc'hel gant va labour adskriver e c'hoarvezas un darvoudig bihan a netra. Edo Eujen o kontañ ha me o skrivañ : « gwelout a reas (Jañ-Lui) ar voualc'h-arc'hant a-us d' ar pondalez en he c'haoued-arc'hant, hag gaoued aour en he c'hichen ». « Ma ! eme Jañ-Lui, ne dalvez ket ar boan, eus na ra, degas an div gaoued. Al loen fall-se ne ray ket kement-se a drouz evit bezañ lakaet er gaoued all. Kerkent ha ma oa cheñchet kaoued d' ar voualc'h; ha homañ da gomañs kanañ... »

- Hola ! emezon. Amañ, 'm eus aon, e cheñchit ur ger. An dro gentañ m' ho poa kontet ar gaoz din, ho poa lavaret « Richanat » ha n' eo ket « Kanañ » ; me 'ya da skrivañ « richanat ». Un tamm disfiz avat, a savas em spered : un dra-bennak a c'hoarie gant ar c'honter. 'Pad an abardaez e oa bet Eujen o vesa e vuoc'h dindan ar glizhaj yen ha riv en doa d' e dreid, ruz e oa e benn, ha skuizh e oa e spered. Goulenn a reas ehanañ.

- Ya, ya ! N' houlan ket sachañ re warnoc'h, emezon-me : ur wech all pa viot en ho charreoù e vo adkroget.

Tammig ha tamm e voe skrivet ar gontadenn ha pa rois da Eujen Al Liamm (Niv. 28, Gwengolo-Here 51), e reas tro an tiez nesañ da lenn e gontadenn diwarnañ, lorc'h ennañ : « An Aotrou Kure, emezañ, en deus lakaet va c'hontadenn penn-da-benn. N' en deus ankouaet nemet un hanter-frazenn ! » Biskoazh n' em eus gouezet pehini 'oa an hanter-frazenn-se...

* * *

Trizek pe bevarzek kontadenn a ouie Eujen Brigant. Teir a zo bet embannet war « Al Liamm » : AL LOUARN GWENN, KAOZ AN TORT BIHAN (Niv. 34, Gwengolo-Here 52), AN TOULL, KURIUS (Niv. 47, Du-Kerzu 54). Div all a zo bet moulet war « L'Echo de Lannion » : MAB BIHAN AN INTANVEZ hag « AR BENEREZH SOT ». Disteroc'h ez eo ar re-mañ, nemet e plijent da lennerion an Echo, kement ma veze klemmet ouzh rener ar gazetenn pa vanke da voulañ ar pennadoùigoù. N' eo ket ar mouler a veze kaoz bep tro d' ar mank !

49

Evit ar c'hontadennoù all, n' hellan ket lavarout kalz a dra, rak div hepken anezho am eus bet klevet... E dibenn miz Ebrel 1953 e teuas Eujen du-mañ da Vulien, da labourat ar jardin ha da beurlakaat ar patatez. Seder e oa evel pemp gwenneg. Ur wech an amzer, ez ae e-tal ar vur izel a-us d' an hent da reiñ bronn d' e bal pe d' e drañch, ha da hegañ an dremenidi, hag e lakae an dud da c'hoarzhin gant e fentigelloù. Chom a reas da gousket er presbital abalamour da echuiñ e labour an deiz war-lerc'h, ha goude koan e kontas FILHOR E BAERON. Ar penn kentañ eus ar gaoz-mañ a oa bet kemeret war vagnetofon gant an Aotrou

Floc'h, e miz Kerzu 1952, pa oa deuet du-mañ da gemerout mouezh dispar Soaz Kawan eus Lokemo ha tonioù kaer an Aotrou Jul Groz ; met re verr e oa an amzer hag ar pezh a oa bet kemeret war vandenn ar magnetofon a oa bet disverket diwezhatoc'h... Me avat, an noz-se a viz Ebrel 1953 ne gemeris nemet un toulladig notennoù; gant ar soñj da adskrivañ FILHOR E BAERON war an tomm, an deizioù war-lerc'h. Re fall am boa kemeret va notennoù. Kollet eo ar gontadenn...

Kontadennoù all Eujen Brigant desket dezhañ gant e vamm-gozh e korn an oaled, en ti anvet ar Roudour, war hent Plouilio, ne vint skrivet gant den ebet. E-kerzh Kala-Goañv 1953 edo Eujen o tont d' ar gêr en e sav war ur c'harr-plat ur stroñsadenn hag Eujen skoet war an hent, torret ur mailh eus e c'houg, hag e benn paket dindan e skoaz. Un nebeudig deizioù goude e varve. Ur galonad e voe din, evel ma voe ivez marv Soaz Digerc'her, kavet beuzet en ur feunteun e-tal he zi, hi hag a gane din bep tro ar gwerzioù kozh a ouie... Doue d' o fardono dezho o daou! Joa am eus bet en o c'hompagnunezh.

EÑVORENNOU HANTER-OAD

(1900-1919)

gant TALDIR

(kendalc'h)

KENDALC'HIOU PLOUGASTELL HA BREST

E 1908 e voe un tammig disparti etre Kevredigezh Vreizh ha Skol-Veur ar Varzhed.

An Estourbeillon a reas e gendalc'h e Plougastell-Daoulas, hag ar Skol-Veur e Brest, raktal war-lerc'h, distag an eil diouzh egile.

Evidon ne ris nemet un tremen berr e Plougastell, en ur vont da Vrest. D'ar c'houlz-se, ne c'helled erruout e Plougastell diouzh tu Brest nemet en ur amprestiñ bag an Treizher er Releg-Kerhuon. Kendalc'h 1908 n' en deus lezet merk ebet en eñvor. N' em eus soñj nemet eus ar C'hoariva brezhonek war ar blasenn, dirak ur mor a dud a oa brav da welout : ar baotred gant o chupennoù glas hag ar merc'hed gant o c'hoefoù feret kalet hag o rokennoù violed, o zavañjeroù seiz a bep liv. Hast am boa da antreal en touch gant komite Gouel Hollgeltiek Brest, a oa er penn anezhañ an Doktor Piton, kuzulier jeneral ; an Aotrou Louis Coudurier, rener an Dépêche, an Aotrou Amiet, an Aotrou Boulevard.

An Aotrou Delobea, senedour-maer, a oa paeron a enor.

Kannaded Bro-Gembre, ugent bennak anezho, a oa deut war ul lestr a genwerzh (kargo) feurmet ganto e Swansea, hag a zegase marc'hadourezh war ar memes tro. An Arc'hdrouiz Dyved, Aotrou Maer Swansea, hag ur bern Kuzulierien Kêr a oa e-mesk ar Gannaded. Ar sekretour a oa Thomas Matthews a Landebie. War ar C'hour d'Ajot e oa bet savet un daol-vaen, en-dro dezhi daouzek maen hir bihan. Erwan Berthou (Kaledvoulc'h) a rene al lidoù e-kichen Dyved. Ar Varzhez Betsie Jones (Telennourez Galia) a c'hoarie an delenn vras. Daou vloaz goude, e teue da bried d' ar barzh breizhat Pol Diverres (Tangwall).

Pouez renkadurezh an darempredoù etre an daou rumm Varzhed a oa war chouk Kaledvoulc'h ha war chouk Thomas Matthews. An degemer graet gant Brest da Vreizh-Veuriz a voe dellidus eus he brud a gêrbenn Breizh-Izel.

51

Ne antrein ket er munudachoù, rak ne rafen nemet adlavaret ar pezh am eus graet dija ; bet int displeget en o amplder er c'hazetenn bemdeziek La Dépêche, hag er c'hazetenn eizh-deziek Ar Bobl.

Koulskoude an danevellig-mañ a dalvez bezañ kontet. Soñj 'zo marteze en doa touet Léon Durocher, ar c'haner parizian, en em venjiñ eus ar varzhed, o doa skubet anezhañ maez o Breuriezhoù. Diaes e kave chom er gêr, dreist-holl pa veze gouelioù seurt gant re Vrest, 'lec'h en dije bet digarez da c'hwezhañ e sac'h. Setu amañ an dro a reas dimp, ha ne oa tennet sklerijenn warni nemet diwezhatoc'h.

E-pad ar pred meur, un telegram degaset diouzh Vienna (Aostria) a voe roet d'an Aotrou Senedour-Maer Delobea. E galleg e oa skrivet. An Aotrou Maer a savas hag a lavaras d' ar brederien, Breizhiz, Gallaoued, Saozon, en doa da reiñ dezho « Saludoù karantezus Kelted Ribloù an Danub ». Lenn a reas gerioù al lizher-dre-orjal, a warante d' ar gendalc'herien o doa breudeur ha mignoned duhont, pere a zalc'he soñj e oant bet Kelted bremañ 'zo 2.000 vloaz. Ar gourc'hemenoù a oa sinet FOCUL, un anv hag a seblante drol a-walc'h evit bezañ hini ur Hongriad pe ur Chekad bennak, gouizie war an Hengoun. Youc'hadennoù hir

a saludas an telegram, na petra 'ta. An holl a fougee o soñjal e oa aet keit all bruderezh Brest hag he gorsedd hollgeltiek.

Pa oa gouezet ar wirionez, an Aotrou Delobeaou a oa viz bihan gantañ en e reor. N' en doa ket gwelet farserezh al lizher-se, sinet gant ur bourd divalav : Faux Cul... Piv a c'hoarzas ? Durocher, sur mat. Ne oa ket a lec'h da ouelañ, ar Varzhed o-unan a anzavas e oa speredet a-walc'h o enebour Kambr 'O'Nikor (Cambonne et Koc'h) al lesanv en doa bet an tal da zibab e gorsedd Kerdiz e 1899.

* * *

PONTREV - MENEZ-BRE (1909) KASTELLNEVEZ-AR-FAOU (1910)

52

Emsav Broadel Breizh penn kentañ ar c'hantved-mañ a zo boniet e hent gant kendalc'hoù ha gorseddoù bloaziek. N' eo ket ne oa ket a ouelioù breizhek all, evel c'hoarivaou poblus ar Bleun-Brug ha Santez-Anna Wened (Job er Glean), gouelioù ar Bleun-Lann (Botrel), savadurioù sichennoù da Vrizeug en Oriant ; da Alan Vras e Kisterberzh ; da Fañch an Uhel e Plouared ; met an holl dastumadennoù-se ne vodent nemet ur rumm, e lec'h K. V. B. hag ar Skol-Veur a c'halve d' o lidoù ar re o doa ar garg, - war o meno, - da vleinañ Breizh war-zu pal ar Frankiz. K. V. B. hag ar Skol Varzhiek hepken o doa gazetenoù ha kelaouenoù dezho o-unan, renet gant izili kalonek : **Kroaz ar Vretoned**, d' an drouiz gramadegour Vallée (Abhervé) ; Ar **Pays Breton** ha **Dihunamb**, d'ar Varzhed Herriou ha Mellag ; **Hekleo Penn ar bed**, d' ar barzh Mab an Argoat : **Kloc'hdi Breiz**, d' ar barzh Degoul (An Hader) ; **Le Pays d'Arvor**, d' ar barzh a enor Jakez Pohier ; **Ar Bobl hag Ar Vro**, din-me. Bezañ 'oa ouzhpenn ul levr bep bloaz **Bulletin de l'Union Régionaliste**, a veze kontet ennañ istor ar C'hendalc'hoù hag embannet an danevelloù gonezet prizioù ganto. Ar mouladennoù-se a antree e milieroù tier, hag a oa boued speredel un armead Breizhiz. Diouzh moulerezhoù **Kroaz ar Vretoned**, **Dihunamb**, **Ar Bobl**, eo dent ar pep brasañ eus al levrioù brezhonek etre 1900 ha 1914. Digarez am bo da envel ar re am eus-me embannet, pa gomzin eus Diskouezadeg Etrevroadel Brest, 'lec'h int bet lakaet a wel d' an holl (1911).

Kêr Bontrev a voe dibabet da ober Kendalc'h K. V. B. er bloavezh 1909. Netra ispisial da lavaret diwar e benn. Pa voe fin d' ar sizhunvezh kendalc'h, barzhed ar Skol-Veur a feurmas gweturioù d' o c'has da Venez-Bre, e parrez Pederneq. Ar Maer, an Aotrou ar Baodour, en doa asantet sevel ur strollad lec'hel da aozañ ur gouel bihan war lein ar Menez. Un nebeut staliou, un ostaleri bennak, o doa savet teltennoù, hag a rae un aer « pardon » d' ar vodadeg. Despet ma oa glizhenn, forzhig peizanted diwar-dro a oa deut da welout ar « jeu », a oa un nevezenti evito. Embannet e oa dañsiri ha kaniri... goude kreisteiz. Da veure, e voe graet lidoù ar gorsedd digor war blasenn chapel Sant-Herve. Pep hini en doa digaset e lein gantañ da zibriñ war ar c'hlazenn. An enderv a voe implijet penn-da-benn gant « Ti Kaniri Breiz » ha dañsoù poblus sonet gant bombard Bihan Leon ha biniou Fañch al Lay, hon sonerien boazet.

Ar poltrejoù tennet eno gant Hamonig a ziskouez pegen niverus a oa ar Varzhed gant o saelioù hag ar re o doa gwisket dilhad Kerne, Leon ha Gwened. Gorsedd Menez-Bre a zo bet unan eus ar re wirañ, en diavaez eus an Estrañjourien.

Kevredigezh Vroadel Breizh en em vodas e Kastell-Nevez ar Faou e 1910. Ar Maer a oa an Aotrou Bernard, e eilerien an Aotrounez Iwan ar C'hokil ha Job ar Gall, doktored-mezegiezh.

53

An Ao. ar C'hokil a oa ur brezhonegoùr ampart, gwerzaouer a-wechoù. Miret en doa diouzh e yaouankiz war ar maez e Plonevez-ar-Faou, ur stumm soñjal « mod kozh ». E geneil an Doktor ar Gall a oa a ouenn vourc'hiz pinvidik graet e oa gantañ e studi mezegiezh e Pariz, hag anavezet eno kalz a Emsaverien ; eñ e-unan a oa ezel eus K. V. B. ha harper d' **ar Bobl** ha d' **ar Vro**.

Nebeut a izili a zeuas da Gendalc'h Kastell-Nevez, unan eus ar re zisterañ am eus soñj anezho.

Ha koulskoude, ar C'hendalc'h-se a zo bet kiriek ma zo bet embannet ul levr tev, ur romant, savet gant an Itron de Pesquidoux de la Loyère, mamm-gaer ar barzh douger-kleze Herri de la Guichardièr (Telenn Aour) e anv **Le Menhir. Le Menhir** a gont istor an Emsav Breizhek mesk-ha-mesk gant istor dimeziñ Telenn Aour gant Pia de Pesquidoux. An dra-se a zo pentet ha livet dindan anioù faos, evel just. Met el levr-se e weler o tremen poltrejoù lodenn vuiañ ar pennoù bras a hente war-dro 1910 ar c'hendalc'hoù hag ar gorseddoù. Un nebeut pennadoù a ziskler doare kendalc'h Kastell-Nevez ha fesonioù al lez vihan a oa en-dro d' ar Markiz de l'Estourbeillon. Ar varzhed ivez a zo tennet brav o foltrejoù. Nebeut tre a dud o deus bet al levr-se etre o daouarn.

Petra 'oa an oberourez ? Eus ar Bourgogn e oa genidik. Gwreg d' ar C'hont de Pesquidoux, denjentil Gaskognad, o chom en e gastell ar Houga, rannvro ar Gers. Hi a oa troet da skrivañ kontadennoù ha rimadelloù dindan al lesanv Comtesse Olga. Hiniennoù a voe moulet war **Le Clocher Breton**, a oa mestr ennañ an Itron André Degoul, lesanvet Madeleine Desroseaux brudet en Oriant ha war dro evel ur vaouez ijinet bras. An Itron de Pesquidoux he doa ur mab henañ (en hini a zeuas diwezhatoc'h da vezañ ezel eus an Akademi) ha div verc'h, unan dimezet, hag unan yaouankoc'h, dizemez, anvet Pia (ar Pab Pi IX a oa bet he zadpaeron).

Dre an Itron Madeleine Desroseaux e voe lakaet familhoù de Pesquidoux ha de la Guichardièr en darempred. Hi a zo bet ar Vazhvalanez a doullas an hent d' an eured a voe graet etre Herri ha Pia, e nevez-amzer ar bloavezh 1907.

E maner ar Houga e voe lidet an eured, daou baotr a enor a zeuas eus Breizh-Izel da skoaziañ o c'henvreur Telenn Aour : Taldir hag Abalor. Chom a rejomp eno un toullad devezhioù. Diskouezet e voe dimp ar c'hontre, ar gizioù, ur « c'hourenadeg gwazed ha saout ».

Hon lojeiz a oa e maner amezek an Aotrou Lasies, depute ar Gers.

54

Evit echuiñ ma c'haoz a zivout an Itron de Pesquidoux, e lavaran n'em eus anavezet biskoazh un Itron oajet ken kaer ha hi. Gwenn-kann e oa he blev. Balc'h ha flour war un dro he bizaj. Seblantout a rae ur poltred bev dispeget eus ur stern eus ar seitekvet kantved.

An Itron de Pesquidoux a oa en em dommet ouzh Breizh dre he mab-kaer : Telenn Aour a oa un doue eviti. Kuitaet he doa he bugale all evit dont da vevañ gantañ e maner bihan al Lann-Kevert, tost da Zinam. Pa varvas-hi eno er bloaz 1918, e voe douaret e bered ar barrez. Ur poz brezhonek a zo bet garanet war he bez. Er memes foz, eo aet Pia ha Herri, hi ar gentañ, eñ an eil, da renoz e-pad an amzer a bado da viken.

* * *

GORSEDD HOLLGELTIEK NAONED

E 1910, e oa maer war gêr Naoned un den uhelijinet, an Aotrou Paul Bellamy, kannad e kambr an Deputeed.

En dro dezhañ e oa tud skiantek, dezho anaôudegezh eus an traoù a Vreizh, evel an Aotrou Caillaud, barzh ha sekretour an Ti-Kêr, an Aotrou Giraud-Mangin, levraoueger Kêr, an Aotrou Bernard Roy, mirour mirdi Salorges, an Aotrou Sarramea, ostiz, an Aotrou de Cornulier-Lucinière, h.a. Bez e oa en Naoned ur vreuriezh Studierien Vreton, renet gant an Aotrounez Coty ha Gwegen ; hag ur gevredigezh Vrezhonegerien, a oa Loeiz ar Bark, porteur ha barzh, ar sekretour anezhi.

Kuriosat den, ar Bark-se. Genidik a Sant-Urien, a verker Sant Thurien war ar c'hartennoù, ar Bark a oa deut ez yaouank da c'honit e vara da Naoned. Evel

kalz a Vreizhiz: pa zivroont, ar Bark a oa enrollet er gostezenn avansetañ : « Socialiste-libertaire ». Gwerzher e oa d' an holl c'hazetennoù ruz, ha p' en doa klevet lavaret e oa ganet ar **Bobl** en doa en em ginniget d' e werzhañ ivez. « Dépôt » Naoned a oa deut buan da vezañ ul leve d' ar c'hazetenn, gras da Loeiz ar Bark, a oa brudet e-mesk ar vicherourien. O chom e oa en ul lojeiz paour eus straed ar Marchix, div gambr deñval a bigned enno dre ur gozh skalier brallus ha preñvedet. Ur wreg en doa, ur strouilhon he doa roet dezhañ pevar bugel. E 1910 ar mab henañ, 12 vloaz bennak, a sikoure dija e dad da borteal. Loeiz ar Bark a oa anavezet 'mesk Naonediz war al lesanv « Le Breton » abalamour e veze atav ur jiletenn vrodet giz Kemperle gantañ.

Pa voen mobilizet e Naoned da viz Eost 1914, ec'h is d' ober ur gwel d' ar Bark. Klañv e oa. E-kerzh ar brezel, e varvas en un ospital ar gwir Vreizhad, ar gwir Varzh-se, a oa digemeret er Gorsedd e-pad ar gouel hollgeltiek a gomzan anezhañ.

55

Erwan Berthou (Kaledvoulc'h) evidomp-ni Breizhiz, ha Thomas Matthews a Landebie evit hon c'hendirvi tramor a gouezhas war o divskoaz holl labour-ingaliñ ar program Barzhek. Rak estreget ur gouel barzhek a oa e Naoned da viz Eost 1910. Ar gouel barzhek ne oa nemet ul lodenn eus an ingal. Bezañ oa un diskouezadeg veur ; ur varc'hekadenn ; ur c'hoariva ; prezegadeg, h.a. Ur sizhunvezh fest. Kuzul kêr, ar « Syndicat d'Initiative » hag ar Gambr a Genwerzh o doa divizet en em glevout ganimp-ni barzhed da zedennañ da Naoned ur vagad vras a Vreizh-Veuriz. Ouzhpenn kant lizher-pediñ a voe kaset da gevredigezhioù, da Guzulioù parrez, ha da dud vrudet dre o oberoù keltiek. Tost da hanter kant a respontas ya, en o zouez pennoù bras Gorsedd Bro-Gembre. O holl dispignoù e Naoned a oa da vezañ paeet e-pad tri devezh-leun.

Dre Sant Malo e teuas Kannaded Breizh-Veur. Lojet ha repuget e voent en ostalerioù kaerañ.

Kemend-all a voe graet e-keñver Barzhed Breizh-Vihan. Ar re a zeuas d' ar Gorsedd digor-se; n' o doa dispign ebet da gaout (nemet o beaj). Naoned a fellas dezhi ober an traoù war un ton gran. Klevet am eus lavaret goude-se e oa bet ar sizhunvezh ur c'holl arc'hant spontus, en desped d' an diskouezadeg kenwerzhel. Met pa gerzher gant arc'hant an holl, ne dalv ket ar boan sellet ouzh ar c'houst.

Unan eus arvestoù bravañ Gorsedd digor Naoned, war ar Champ de Mars, a voe ar Soniri Telennoù, hag ar Ganiri Penillion.

An Itron Augusta Herbert a Lanover he doa roet aotre d' he Laz-telennañ da zont asambles gant ar Gannadelezh. Al Laz-c'hoari a oa enni pevar telenour, ur gwaz, Peder James, ha teir maouez, an Itron Gruffydd, an dimezell Maggie Jones, hag an dimezell X... Bezañ oa kanerien ha kanerezed, a reas berzh en Teatr Bras un nozvezh. Eos Dâr a oa ur c'haner pennillion dispar.

Kannaded Bro-Gembre o doa lakaet moulañ ul levrig-eñvor eus Gorsedd Naoned. Brud hemañ a yeas pell, hag a greñvaas al liammoù etre an div bobl Vreizhek a bep tu d' ar mor. Sikour a reas ivez hon Skol-Veur da drec'hiñ war an teodoù bilimus, rak arabat e vije soñjal e oa tavet an drouk-prezeg en hon enep, war zigarez e raemp mui ouzh mui a vruderezh. Er c'hontrol. Bep ma kreske hon niver hag hon fouez, e kreske an Enebiezh.

56

An Enebiezh, hag a zeuas da gomañs eus perzh ar Veleien, ne oa ken eus an tu-se. Ar Veleien o doa komprenet e oamp oc'h esa dasorc'hiñ an Hengoun ha nann ober ur Relijion. An eneberien a oa un hanter-dousenn « journalisted » hag a gave speredel « c'hoarzin goap », treiñ e lent al lidoù « drouizek », ha kemer ar Varzhed evit komediancherien. Ar c'hwec'h journalist-se a rae ar vrud e-mesk ar « republikaned ».

Eneberien all hor boa e-mesk ar Skrivagnerien vreizhat a skrive en galleg, e-mesk ar Gelennerien hag ar ouizieien, a lavare ne oa ket ar gorsedd un dra treuzlavarel e Breizh-Izel, e oa un esa plantañ dre amañ un arvest estren ha ne

c'halle ket gwriennañ. Ouzhpenn, ober gant ar brezhoneg nemetken, a oa war o meno leskel a gostez un hanter a Vreizh, ar rann c'halleget.

Evit respont d' ar re a hete dimp droukchañs ha marv buan, n' hon doa nemet teir c'hazetenn vihan : **Ar Bobl, Le Pays Breton ha L'Echo du Finistère.**

Er Bobl, ar bluenn a bike an enep-vreizhidi betek ar gwad, a oa hini Leon ar Berr (Ab Alor) a rae bep sizhun ur rengennad pebret: **Carnet d'un Breton.**

Ma vez graet er bed-mañ un dra bennak a dalvoudegezh, e vezo graet gant huñvreerien, gant tud a wel an dazont, hag a ra an dazont peogwir e welont anezhañ.

KEIR HARDIE.

Istor lennegezh vrezhonek an amzer-vremañ

gant ABEOZEN

(Kendalc'h)

PEDERVET LODENN

ETRE AN DAOU VREZEL
(1919-1939)

N' eo ket e derou ar c'hantved m' emañ an trouc'h etre lennegezh an XIXvet kantved hag hini an XXvet. Gant brezel 1914-1918 eo ez eo bet graet an trouc'h-se.

Droug a zo bet graet d' ar vro estreget en he c'hig gant ar pevar bloaz-se. Aet tud ar vro da vevañ e-touesk ar galleg. Deut estrenien, repuidi a bep seurt, da vevañ e-touesk ar vrezhonegerien. Kemmet eo bet, alies, menozioù an dud deut er-maez eus al lazhadeg ha ne deo ket hepken re an dud voutin, hogen ivez a-wechoù re tud, gouestlet betek neuze o buhez d' an Emsav ha d' al lennegezh vrezhonek. Seblantout a raio ur pennad e vo bet skoet un taol grevus ouzh ar yezh evel ouzh ar boazioù chomet bev, ouzh ar gwiskamantoù, da skouer, a yeas er-maez a c'hiz e meur a gorn-bro, dreist-holl e-touesk ar wazed.

Kement-se holl ne oa, avat, nemet ur seblant, peadra ennañ da vroudañ evelato ar stourmerien a adkrogo gant an Emsav.

E Genver 1919 Markiz an ESTOURBEILLON a embann e c'houlennadeg ouzh Kuzuliadeg ar Peoc'h : Gwir ar Yezhoù ha Frankiz ar Pobloù, « Le Droit des Langues et la Liberté des Peuples ». En hevelep bloavezh e teu eus ar wask « Les Bardes et Poètes Nationaux de la Bretagne Armoricaïne », Bleunioù Barzhed Breizh an Amzer-Vremañ, en div yezh, gant Camille LE MERCIER d'ERM, Plihon et Hommay, Rennes, Edward Sansot, Paris, 1918. E Genver c'hoazh e sav Per MOKAER e Brest ar gelaouenn vizek BUHEZ BREIZ. E 1919 ivez e stag da vezañ moulet BREIZ ATAO, ur gelaouennig a zeu er-maez bep miz, pa c'hall. Ouzh he ren daou studier, Morvan MARCHAL hag Olier MORDREL. Menozioù dichipot ar re yaouank-se o deus feuket meur a hini. Hag, evit gwir, n' o deus ket graet nemeur a stad eus o diaraogerien. Tost da bemp bloaz oa m' en doa ar brezel skoet d' ar marv ti-moulerez Taldir hag e ziv gelaouenn, AR VRO hag AR BOBL. Mouget oa bet BRITTIA da vat. DIHUNAMB en doa ranket tevel e-pad m' edo Loeiz HERRIEU o tastum war an talbenn danvez **Kandro en Ankeu**. Setu ma tape krog hor paotred yaouank en ur banniel, lezet, a grede dezho, da gouezhañ d' an douar gant daouarn dinerzh. N' o deus ket ingalet kalz a bour etre o breudeur koshoc'h en Emsav ha kablus, d' o meno, dre ma n' o doa ket kavet an tu d' e gas da benn. Pa stagas ar c'hallegerien a oa anezho da studiañ ar brezhoneg e voent mantret o kavout ur bruzun lennegezh, e-leizh a c'herioù ha re nebeut en holl a zanvez, er skridoù, rouez ha diamzeret o doare peurvuiañ, a zeue dindan o selloù.

58

Pep tra a oa eta da grouiñ, koulz war dachenn al lennegezh hag hini ar politikerezh. Ha da skeiñ d' ar pal-se ez embannas BREIZ ATAO, e 1925, ur stagadenn lennegel trimiziek, GWALARN, a zeuio da vezañ, adal an niv. 9, Nevez-Amzer 1927, ur gelaouenn zistag dindan renadur Roparz Hemon.

Pal kentañ GWALARN a oa klask tennañ lennegezh Vreizh diouzh ar vouilhenn rannvroel m' edo sachet enni, bleniañ ar skrivagnerien yaouank war-du an hentoù, gwentet gant avelioù bividik hor bed a vremañ, ma kerzhe warno skrivagnerien

Vohemia, Bro-Flandrez, Katalonia hag all, diskabell ha dieub o spered. Digeriñ prenestroù ar brezhoneg d' ar seizh avel ma teuo da vezañ ur yezh a sevenadurezh par da yezhoù all, komzet a-wechoù gant nebeutoc'h a dud egeti. Arabat evit se krediñ ez aent da zisoñjal ez oant Kelted. Treiñ a raent ivez o selloù war-du teñzor lennegezh Kelted. Tramor a wechall hag a-vremañ.

I. - DIARAOGERIEN

E lennegezh Vreizh an amzer-vremañ e c'heller lavarout ne viro paotred GWALARN gant doujañs, da gentañ, nemet tri anv : Yann-Ber KALLOC'H, Tangi MALMANCHE ha Meven Mordiern.

59

O zri int da stagañ koulskoude e meur a feur ouzh ar rummadoù koshoc'h, en abeg pe d' o oad pe d' ar mare m' eo bet savet o skridoù. Nemet o levezon a zo bet kreñv war ar rummad yaouank o kregiñ gant an Emsav goude ar brezel. Setu perak eo amañ al lec'h da gomz diwar o fenn (1).

(1) Diouzh ar vent a zo deut d' hon labour tamm-ha-tamm ez oa re verr ar pennadoù 170, 171. Adskrivet int bet eta.

170) KALLOC'H

Yann-Ber KALLOC'H a voe ganet en Enez Groé d' an 21 a viz Gouhere 1888. Pesketaer oa e dad. E vamm, hi, a zeue eus Lokmikelig, ur geriadenn a besketaerien tost ouzh an Oriant. An trede eus pevar a vugale ez oa Yann-Ber. Goude bet e skol ar frered en enezenn, ez eas e miz Here 1900 da genderc'hel gant e studi da gloerdi bihan Santez Anna Wened. E soñj a oa mont da veleg. Kavout a reomp eta Yann-Ber e kloerdi bras Gwened e 1905. N' hellas ket, avat, kenderc'hel war an hent-se, daoust d' e c'hoant. Unan eus e c'hoarezed a oa klañv he nervennoù abaoe meur a vloavezh. E 1906 setu ma kredas hor c'hloareg yaouank ez oa war nes bezañ taget gant an hevelep kleñved. Kuitaat a reas eta ar c'hloerdi e 1907, rannet e galon (s. Mat, moult. 1935, p. 39). N' eus ket ezhomm da glask pelloc'h andon an dristidigezh a gavomp bepred en e oberoù.

Mestr-studi e voe e Pariz e 1907, e Reims e 1908. E miz Here 1909 emañ e Vitry gant e amzer-soudard. Ur wech disoudardet ez eas da vestr-studi e Mesnières (Bro-Normandi) e miz Here 1911, hag e Pariz adarre goude an Eost e 1912. E derou 1915 e voe galvet da soudard er 62vet Rejimant en Oriant. E miz Ebrel e voe kaset da skol an danvez-ofisourien e Saint-Maixent. E dibenn miz Eost 1915 e voe kaset d'an 318vet Rejimant troadeien (s. Ar Henteu er Brezel). E miz Gouhere 1916 emañ deut d' an 219vet Rejimant. An 10 a viz Ebrel 1917, da zeiz ar Meurzh-Fask, e voe lazhet an isletanant KALLOC'H gant un tarzh obuz war vevenn koad Urvilliers e-kichen Saint-Quentin. Douaret e voe e bered Cérisy (Aisne). E 1923, d' an 9 a viz Gouhere, e voe degaset e relegoù d' e enezenn c'henidik.

Adal amzer ar c'hloerdi bihan ez eo bet enaouet e Yann-Ber KALLOC'H ar spered breizhek. E niv. Mezheven 1905 ar VRO e voe moulet ur pezh barzhoniezh, **Dihunamb**, sinet **Bleimor**. Dibabet en doa an anv pluenn-se. Impli a raio anezhañ ken e galleg ken en brezhoneg.

Evel barzh dreist-holl ez eo anavezet. Embannet en deus avat pennadoù e komz-plaen e galleg en « Echo du Morbihan », « Le Pays Breton », « Le Fureteur Breton », « Annales de Bretagne », ar BOBL ; e brezhoneg e BRITTIA, « Le Pays Breton ». Savet en deus pezhioù-c'hoari patronaj : **Er Flamanked**, 1906 ; **En Neu Vèuer** (An Daou Vezvier), 1907. C'hoariet int bet en enez Groé. Ur pezh-c'hoari all, **Pardonnet d'emb hun offanseu**, un arvest e gwerzennoù, a zo bet embannet gant DIHUNAMB, Gwengolo-Kerzu 1925.

60

Brud Bleimor, avat, a zo diazezet war e varzhonegoù strollet en dastumad **Ar en deulin**. Fiziet en doa an dornskrid e Per MOKAER e miz Eost 1915, dezhañ da lakaat moulañ al levr mar chomfe hep dont en-dro. Lod eus ar pezhioù a oa bet

embannet endeo e DIHUNAMB, BRITTIA, KLOC'HDI BREIZ.

Ar mouladur kentañ a zeuas eus ar wask e 1921 : **A Genoux, lais bretons**, Plon, Paris. E 1935, avat, Loeiz HERRIEU a brientas ur advouladur kempennoc'h : **Ar en deulin, Molladenneu Dihunamb**, En Oriant. C'hwec'h lodenn a zo el levr : 1. **Ar en deulin, eit m'iné peur** ; 2. **Ar en deulin, eit mem bredér** ; 3. **Ar en deulin, avit mem bro** ; 4. **Ar en deulin, er brezel** ; 5. **Ar henteu er brezel** (komz-plaen) ; 6. **Kañnenneu ha guerzen**. Seizh luc'hskeudenn a gloz al levr.

Awenet uhel ez eo barzhoniezh Bleimor gant ar feiz hag ar garantez-vro. Liv ar c'hloareg a chom, avat, war e werzennoù. Lavaret hon eus an abegoù d' an dristidigezh a zo warno hogos bepred. Ne deo ket deut a-benn da ziboaniañ e galon a vezañ ranket kuitaat an hent da vont da veleg. Kement-se a zo a-walc'h da ziskleriañ ar pezh a gaver hag ivez ar pezh na gaver ket en e varzhonegoù. Tridal a ra enno ur feiz birvidik, maget diwar lenn dibaouez ar Vibl ha diouzh un tu all gant ur garantez-vro silet don en e wazhied. A-hend-all barr eo e galon gant ar garantez a zoug d'e dud m'eo bet ken ponner warno dorn an tonkadur, d' e vignoned m' en deus stourmet ganto evit e vro. Heson eo e werzennoù, pinvidik e vrezhoneg Gwened gant gerioù amprestet d' ar brezhoneg krenn pe d' ar c'hembraeg. HERRIEU a vefe douget da lakaat a-us dezhañ barzhed all chomet fealoc'h d' o rannyezh.

Un dra zo asur, Bleimor en deus bet ar brasañ doujañs evit e yezh. Evidomp ez eo bet kentañ mouladur **Ar en deulin** e 1921, e Dinan, dizoloadenn ur bed dianav. Ha panevet skoazell troidigezh Per MOKAER, daoust d' ar rebechoù a zo bet graet dezhi, ne vefemp ket deut a-benn da gompren ar barzhonegoù kaer-dreist m' eo **Tri Neved, têt beden ha Deit, Spered Santél**. Ne dint ket savet e gwerzennoù klasel gant klotennoù. Amañ e santer levezon ar Vibl (an **Diouganerien** hag ar **Salmoù**) hag ouzhpenn, moarvat, hini Paol CLAUDEL ha Léon BLOY evit an doare da steuiñ ar pennadoù ha da zisplegañ ar skeudennoù-lavar : **El penn er Peur én un taol doh fenestr er bediz, diroll geté er horolleu** a zo ur frazennad n' hell ket menel hep tennañ evezh nep piv bennak en deus lennet BLOY (1). Ne deo, avat, nemet an doare diavaez a zo levezonet gant al lennadurioù, rak an hevelep andon o deus an tri den : ar Skritur Sakr boued o spered hag o c'halon. Ha Bleimor en deus tennet eus ar boued-se un oberenn breizhek he doare hag a zo e dra dezhañ e-unan nemetken. N' oa ket anezhañ ur prederour avat. Marteze an deiz ma tiplege dimp Meven Mordiern, hag a zo bet eus mignoned Bleimor, ez oa ar barzh-mañ ur manac'h eus ar Grenn-Amzer ez eo degouezhet tost a-walc'h ouzh ar wirionez. Arabat disoñjal, avat, ez eo aet kuit diouzhimp krog en e 29 vloaz. N' en deus ket roet, pell a ze, ar frouez ez oa tonket da zougen.

(1) Ne deo ket hep abeg e venegomp Bloy. En « Union Agricole », war-dro 1923-24, hon eus lennet ur pennad ma komzed eus ur weladenn graet gant Bleimor da oberour Gwad ar Paour.

61

171) TANGI MALMANCHE

Tangi MALMANCHE a voe ganet e « Saint-Omer-en-Artois » d' ar 7 a viz Gwengolo 1875. Daoust d' e anv-familh a-berzh tad da vezañ gall, daou gantved a zo abaoe m' eo deut an tiegezh-se da chom e Brest. Bevet en deus Tangi, er gêr-se hag e maner ar Rest, e parrez Plabenneg, bloavezhioù e yaouankiz. Deut da vezañ mestr-gov e Kromhent (Courbevoie), e-kichen Pariz, ez eo chomet stag ouzh e vrezhoneg. Moarvat diwar studiañ misterioù ha gwerzioù Breizh miret e Levraoueg Broadel Bro-C'hall e savas dezhañ un deiz c'hoant pe, evel ma lavar e-unan e « prolog » Gurban, « ar froudenn da sevel ur pezh-skrid, eur seurt c'hoariadenn evit dizinoui spered e genvroiz ». An harluad-se, ne deo abaoe distroet nemet ur wechig ar mare da Vreizh, en deus savet ar c'hoariva sebezusañ ha dedennusañ hon eus en hol lennegezh: (Marvet eo e Clichy d' an 20vet a Veurz 1953 ha douaret eo bet e bered « Dives-sur-Mer » e Bro-Normandi.)

E gentañ skrid evit ar c'hoariva a voe **Marvailh an Ene Naonek** ma kaver ennañ evel un heklev eus gwerz Yannig Skolan. Embannet eo bet kentañ doare ar marvailh en « Hermine », e 1900, hag, e 1904, e mouladurioù SPERED ar VRO.

C'hoariet eo bet « ar marvailh dramatik e diou nozvez », evit ar wech kentañ, da zeiz gouel an Hollsent 1901, e maner ar Rest. Un eil pezh-c'hoari, **An Intañvez Arzur**, savet e 1906, ne deo bet biskoazh embannet betek-hen. Diwar ar soñj hon eus miret eus an eilskrid fiziet e renerien SAV gant an oberour, e vefe kar a-walc'h d' ar pezh-c'hoari **Gwreg an Toer**, drama en un arvest, skrivet war-dro 1900 hag embannet gant SAV, niv.24, Hañv 1942. Skignet eo bet ar pezh-c'hoari-mañ evit ar wech kentañ e Roazhon-Breizh gant Strollad Gwalarn, d' ar 25 a viz Gouhere 1942. **Buhez Salaün lesanvet ar Foll** a zo bet embannet ar skrid gallek anezhañ e ti Perrin, Paris, 1926, war un dro gant un eil doare eus **Marvailh an Ene Naonek**. An eil doare-se a zo bet skignet e brezhoneg gant Roazhon-Breizh d' ar 27 Meurzh ha d' ar 17 Ebrel 1943. **Ar Baganiz** a zo bet moulet ar skrid brezhoneg anezho e GWALARN, niv. 34-35, 1931. C'hoariet oa bet da goulz Gouel an Traezh Glas e Ploueskad er bloaz-se gant strollad c'hoarierien Plougerne. SAV, niv. 27, 1943, p. 52-57, a ro dibenn eil arvest **Salaun**. E 1950 eo bet embannet gant mouladurioù AL LIAMM tri arvest **An Antekrist**, pezh-c'hoari e komz-plaen tennet eus istor karantez **Fontanella** ha **Mari a Goadelan**. Abaoe n' eus bet tro da embann netra. Digarezioù doare-skrivañ war a seblant. Ur farsite pa soñjer pegen dister dra ez eo evit MALMANCHE kudennoù an doare-skrivañ.

62

Mestr-oberenn an dramaour a zo **Gurvan ar marc'hek estranjour, mister ennañ tri dervez hag ar beurbadelez**, embannet e 1923. Dudius ha doanuis war un dro ez eo istor an embannidigezh-se. Ar skouerenn hon eus bet an eurvad da rakprenañ d' ar c'houlz-se a zo merket warni, p. 5 « ar pezh-mañ a zo gantañ an n° 06. Gwarantet ganen skrivagner ha mouler : T... M... ». Dudius eo soñjal ez eo bet kaset da benn al labour gant an hevelep den. E dibenn al levr e lenner : « Great penn-da-benn ganen Tanguy Malemanche mestr-gof e Kromhent oadet a 47 vloaz. Komanset ober ar waskel d' ar 7 a viz Gwengolo 1922. Komanset moula d' an 3 a viz Here 1922. Peurvoulet d' ar 15 a viz Genveur 1923 gant gras Doue ». Dudius eo ha doanuis war un dro pa soñjer en nebeud a dud o deus lennet an hanter kant skouerenn moulet gant an oberour. Ha c'hoazh ne dint ket bet gwerzhet buan. Un eil mouladur a zo bet graet abaoe. Anv ar Goaziou a zo warno o-div. N' eus forzh penaos, ne deo ket bet niverus lennerien Gurvan. Petra a c'hell diskouez splannoc'h dienez hol lennegezh ?

Peadra a zo da brederiañ en hir diwar-benn pezhioù MALMANCHE. En un doare estlammus e oar gwiskañ ar gwirvoud hag ar burzhud an eil war an all. Peurvuiañ e-touesk tud ar c'hoari ez eus unan bennak o kemerout, evel ma lavarere, ar gwenn evit an du. Ar Vamm, da skouer, en eil doare **Marvailh an Ene Naonek**, a gred dezhi ez eo ar galeour tec'het diouzh Brest he mab Yann Varek aet da anaon da goulz Gouel an Hollsent er bloaz a-raok. An Itron gaer a zegouezh gant Salaün, e-tal feunteun ar Werc'hez, a zo evitañ ar Werc'hez Vari hec'h unan. Lan, ar peñsead, a zo evit Del, er Baganiz, mab ur roue, ha Fant a gred dezhi emañ e bili an aod eneoù an dud beuzet. Azilis ha Gurvan a gemer ar garantez o doug an eil d' eben evit ur garantez nevez pa ne deo nemet an hevelep hini. Moarvat e c'hellfer mont pelloc'h en hent-se.

63

Nemet re verr e vefe menel war an displegadenn-se hep muiken. Holl bezhioù-c'hoari MALMANCHE ne dint ket da renkañ en hevelep kased. Lod a zo e gwerzennoù dieub lod all all e komz-plaen. Ne rimp ket avat re a ziforc'h etrezo en abeg da se. Un dibab all, kinniget gant Roparz Hemon (LIAMM, 38/12), a denn hon evezh. Setu lec'hiadur an **Intañvez Arzur**, **Gwreg an Toer**, **Marvailh an Ene Naonek**, eil doare, treset didruez : « Uhelenn Bro-Leon, parkeier ha kleuzioù digened, hep mor, hep menez, hep koadeier... ; hag an hent bepred, hir-hir d' ar c'hariolennoù, tour iliz Plabenneg, tour iliz Gouenou, tour iliz Lambezelleg ha pelloc'h Brest gant savadurioù maen ar Verdeadurezh... » Ha setu ma varn an tri fezh-c'hoari-se da vezañ penn-oberoù MALMANCHE evel pezhioù-c'hoari, **Gwreg an Toer**, dreist-holl. « Eno ez eus paotred o toullañ douar, o charreat teil, o pikañ mein, o tevezhiata a vintin da noz ; ha merc'hed oc'h uzañ o c'horf oc'h ober labour an ti hag al liorz, hag a-wechou o chom azezet o sellout ouzh an hent... »

Nemet ne glot tamm ebet seurt evezhiadennoù ouzh **Gurvan** hag ouzh **Salaün**. Amañ e tenn an oberour e lennerien en e ved dezhañ e-unan, beuzet en ur vorenn

huñvre ha faltazi ma n'eus bet nemetañ betek-hen da wiskañ d' ar gwirvoud a stokomp outañ da bep kammed. Ar Baganiz hag An Antekrist a zo diaesoc'h da renkañ en un tu pe an all. Lod an huñvre ne deo ket bihan er Baganiz hag An Antekrist hon degas d' ur bed krenn-amzerel, gant ar Breur Yann, kar tost d'ar Gathared.

Lavaret hon eus endeo pegen tost eo doare kentañ **Marvailh an Ene Naonek**, savet « d' an oad wenvidik a bemp bloaz war-nugent », ouzh gwerzioù kozh a zo. Klevet hon eus a-hend-all ez oa bet feuket MALMANCHE gant evezhiadenn ur c'helenner o varn ez oa heñvel a-walc'h stad Andromaké ouzh hini Azilis. Sur eo ne deo ket ur seurt « komplimant » a c'hortoze MALMANCHE. Finoc'h e ve bet moarvat d' an divizer menegiñ ez oa, e **Gereint hag Enid**, un darvoud (s. GWALARN, 93/56 : **Ar C'hont Limouris**) a dle bezañ bet andon dazorc'hidigezh Gurvan da noz ar Sadorn Fask. Da lennerien aketus hor skridoù e brezhoneg da glask ha da gavout naouspet evezhiadenn par d' an hiniennoù a reomp amañ. MALMANCHE en deus bevet e mor hor c'hontadennoù, hor misterioù, e mor danevelloù Keltia. Ne lavaran ket en deus graet a-ratozh p' en deus amprestet tra pe dra amañ pe ahont. Nemet ez eo diaes chom hep merkañ ez eo **La Tour de Plomb**, « OEuvres Libres », n. 155, 1934, p. 189, awenet anat a-walc'h gant **an Tour Plomb**, Penwern, n. 48, 63, 115. Evit **Kou ar Vran**, embannet ivez en hevelep « OEuvres Libres », mar ne deo ket deuet eus ur werz ez eo deut moarvat eus unan eus ar marvailhoù kontet dezhañ gant Mari Rouz e milin ar Rest. Ne venegomp amañ peurvuiañ nemet an oberoù brezhonek. An daou romantig-se avat a dlefe bout bet embannet e brezhoneg panevet dallentez ha bouzarded kemprediz MALMANCHE. Peadra da vont en egar a vefe d' an hini a gemerfe ar boanda zastum ar sotonioù a zo bet distaget diwar-benn hor brasañ skrivagner eus derou an XXvet kantved.

64

Aesoc'h a se ne deo ken dimp menegiñ ar pezhioù barzhoniezh berr embannet en « Hermine » : 10-12, 1898 ; 7, 1901 ; 2, 1904 ; hag e SPERED ar VRO, Eost, Gwengolo, 1903. Ne deo ket ganto e vo kresket e vrud na kennebeut gant **Disfoeltradur Roazhon 7 a viz Eost 1932**, 24 poz a beder gwerzenn 13 silabenn, savet ha mouler gant Tanguy Malmanche, 4 bis, rue Adélaïde, Courbevoie (Ollivier, Catalogue..., n. 559), daoust ma c'hellont bout plijus. Nemet ez eo dereat anaout e holl skridoù evit tennañ anezho ur skeudenn gloc'h eus un den, spered don hag amjestr, lemm e deod, ha dizalc'h krenn. Ur pennad e komz-plaen evel **Bezomp « ni hon-unan »**, e SPERED ar VRO; n. 1, Eost 1903, a zo a-walc'h da lakaat anat ez oa MALMANCHE diaraoger wirion an Emsav yaouank. Graet en deus diouer dezhañ ar pevar c'hant lenner o deus dalc'het en o flomm GWALARN hag AL LIAMM. Ugent vloaz re abred ez eo deut hon dramaour meur. N' oa ket c'hoazh e lennerien en oad da lenn e oberoù. E gemprediz n' o deus komprenet peurvuiañ mann enno. Doue d' o fardono !

172) MEVEN MORDIERN

Hep mar ebet e vije savet klemm gant Meven Mordiern o welout e anv en un istor al lennegezh. Biskoazh n' en deus soñjet e teue seurt tra dindan e bluenn ha dedennet eo bet a-hed-ur-wech kalz muioc'h gant an danvez eget gant an doare d' e ginnig d' al lenner. Lavarout eeun ha spis traoù gwir ha talvoudus, n' en deus ket klasket skeiñ pelloc'h. Hogen n' ouzomp ket ha brasoc'h levezon egetañ en deus bet un den all war rummad ar skrivagnerien etre an daou vrezel 1914 ha 1939. Dreist-holl, pa zeu e penn un den ez eo Meven Mordiern a zo dalc'hmat a-dreñv Frañsez VALLEE o prientiñ dezhañ peadra da lakaat e brezhoneg adal an Notennoù betek Istor ar Bed, 1911-1938.

65

Renan ar ROUZ, evel ma lavar e-unan, ne deo na Breizh-Izelad na Breizh-Uhelad. Ganet eo bet e Bourdel d' an 29vet a viz Here 1878. E dad a oa medisin-arme. Dont a reas e retred e 1879, hag e teuas da chom e bro e gavell, e miz Meurzh 1882. Bevañ a reas Renan ar ROUZ gant e dud er Vertelotierenn, e Gwiler (Villiers), nepell diouzh kêr Gwengen (Vendôme), e departamant Loer-ha-Cher, betek miz Meurzh 1891. Mont a reas war e studi da Bariz er bloaz-se betek 1897, e lise Kondorset. Chom a reas da vevañ e Pariz betek Here 1920, nemet ur bloavezhig tremenet e London o teskiñ ar saozneg (Gouhere 1898 - Mezheven 1899).

A-hend-all, en diavaez eus ar bloavezhioù m' eo bet soudardelaet e kompezenn Sant-Denez, e-pad brezel 1914-1918, n' en deus graet nemet studiañ war ar skiantoù a blije dezhañ ar muiañ : keltiegouriezh hag holl skiantoù an Natur hag an Den. Biskoazh n' en deus klasket dont da vestr war nikun eus an tachennoù pleustret gantañ. Ne deo ket aet kennebeut d' ur beajour bras, d' un dizolôadenner-broioù, evel ma hete dezhañ e vamm. Staget gantañ da zeskiñ ar brezhoneg, n'en deus bet diwar neuze ken pal en e vuhez nemet labourat evit ur yezh a seblantas dezhañ bezañ ken gwerc'h ha ken difraost ha n' eus forzh pe vro nevez-dizolôet. Ober eus ur yezh-pobl o vont e bruzun rannyezhoù ur yezh a sevenadurezh, setu da betra e ouestlas e vuhez hag e strivadennoù. Setu perak ivez e teuas goude marv e vamm, e miz Eost 1920, da vevañ e Breizh, e Sant-Helori, e-kichen Pordig, nepell eus Sant-Brieg, evit kas da benn al labourioù en doa boulc'het gant Frañsez VALLEE. Eno e vevas abaoe miz Here 1920. E-pad bloavezhioù ha bloavezhioù eo deut da Sant-Brieg d' ar Sul beure gant an tren bihan da selaou an oferenn-bred en iliz-veur ha div-wech ar sizhun, d' ar merc'her ha d' ar gwener peurliesañ, goude kreisteiz, evit labourat war ar brezhoneg gant Abherve ha prenañ e zefotachoù, rak ober a rae e-unan-penn war-dro e di e Sant-Helori.

Graet en deus e lod labour war an **Notennoù diwar-benn ar Gelted koz**, anezho daouzek levrig, a bep ment, a zo bet embannet adal 1911 ha kaset da benn e 1924. Advoulet int bet en ul levr gant SKRIDOU BREIZH e 1944, ha lakaet e gwerzh hepken e 1946. Miret o deus o doare-skrivañ orin rak Meven Mordiern n' oa ket den da ziskregiñ diouzh ur benveg en doa kavet mat, evit abegoù n' o doa ket moarvat nemeur a bouez evitañ.

Ar **Sketla Segobrani** (Eñvorennoù Segobranos), e teir levrenn, a zo bet embannet etre 1923 ha 1925.

Evit an div oberenn gentañ-se, e save Meven Mordiern ur skrid gallek hag, a-gevret gant VALLEE, e lakae e labour e brezhoneg.

66

Ne deo ket bet heñvel-rik an traoù evit **Istor ar Bed**, c'hwec'h levrenn embannet, an hini gentañ e 1929, ar c'hwec'het e 1938, nag evit Prederiadennoù diwar-benn ar yezhoù hag ar brezoneg, c'hwec'h levrenn all e GWALARN, e 1935-1936. Amañ, soñj mat hon eus, e save Meven Mordiern e skrid war-eeun e brezhoneg ha VALLEE a reizhe er skrid-se kement a felle dezhañ kemañ.

Embannet en deus c'hoazh Meven Mordiern labourioù all pe a-gevret gant VALLEE pe e-unan : **Kembreiz gwechall ha bremañ**, GWALARN, Brest, 1932 ; **Ur Breizad er C'hanada F. Le Tonturier-Donroë**, ibid., 1933 ; **Gant Lueoz an Doueed**, ibid., 1938 ; **Logotigiakos, huñvre hollgeltiek**, ibid., 1938 ; Huñvreoù Sant-Helori, « Presses Bretonnes », Sant-Brieg, 1938 ; **Notennoù diwar-benn ur Pou eus ar Broioù-krec'h : Pou Gwengen (Pagus Vindocinensis)**, SAV, n. 27, 1943 ; **Bozadoù-deskadurez eus sac'had Sant Briz**, ibid., n. 30 ha 31, 1944 ; **Eñvorennoù diwar buhez va zad en armeoù**, Brest, 1944 (hogos holl eo bet distrujet ar mouladur-mañ gant ur vombezadeg).

Klemmoù a vez savet alies a-walc'h a-eneb skridoù Meven Mordiern. Moarvat e tisoñj ar glemmerien ne deo ket graet an danvezioù ma pleustras warno evit plijout d' an holl e n' eus forzh pe yezh. N'hell ket eta bezañ bras niver ar vrezhonegerien dedennet ganto. Siwazh ! ken bihan eo Breizh ha ken berr galloud ar moulerezh breizhek ma 'z eo bet ret moulañ an darn-vuiañ eus an oberoù-se e GWALARN end-eeun ha nann en un dastumadenn skiantoù, evel ma vije bet dereat ober, lakaomp ma vije bet eus Breizh ur vro par da Vro-Suomi, da skouer. Ar re a c'hortoze digant GWALARN lennegezh da ziduiñ o spered n' o deus ket bet o c'hoant e skridoù Meven Mordiern. Ne deo ket un abeg da damall d' e vrezhoneg ar pezh a zo da damall da empenn ar re na fell ket dezho dont da vezañ e lennerien. Yac'h ha glan eo brezhoneg Meven Mordiern ha ne deo diaes nemet dre m' eo glan ha ma komz ez resis eus traoù diaes.

N' eus forzh penaos e troio an abadenn, stad ar brezhoneg a zo bet kemmet gant Meven Mordiern. Eus ar yezh-pobl, chomet souchet war dachenn strizh ar vuhez voutin hag al lennegezh rannvroel, en deus graet, gant harp VALLEE ha

skoazell e ziskibien, ur yezh lorc'hus, yezh ur vroad digor da seizh avel ar ouiziegezh, ur yezh barrek da seveniñ kement labour a c'heller gortoz eus ur yezh a sevenadurezh, ha, lakaomp e ve tonket d' ar brezhoneg mervel, ar pezh n'eus abeg ebet da grediñ a c'hoarvezfe dizale, ne varvo ket da nebeutañ en e eil-bugaleaj, hep endevout anavezet nerzh leun an oad-gour.

86

Meven Mordiern, hag eñ chomet da vevañ en distro, en un ti sioul, kollet e glasvez ar gwez uhel, nepell diouzh linenn an hent houarn strizh a gas eus Sant-Brieg da Bempoull, e-touez e levrioù hag e gizhier, en deus bet ar brasañ levezon war an darn vrasañ eus paotred GWALARN, zoken war ar re n' en deus bet biskoazh tro da ginnig dezho un tasad te, pa zeuent d' e welout, ha n' en deus bet ganto nemet darempredoù dre lizher.

Marvet eo Meven Mordiern d' ar Gwener 4 a viz C'hwevrer 1949 en ospital Kintin. Pa oa deut da Vreizh e 1920, gant an tamm leve a zeue diwar-lerc'h e dud en doa a-walc'h da vegañ e gorf hag e spered en ur ren ur vuhez dilorc'h. N' omp ket mistri avat d' an darvoudoù. Gant an arc'hant gall o koll eus e dalvoudegezh, kernez ar bevañ war gresk bepred, un eil brezel-bed o tont da washaat c'hoazh stad an traoù, e kouezhas da baour. Hogen n'eo ket den da zegemer an aluzon. Ur wech aet VALLEE da vevañ e Sant-Lorañs Roazhon war-dro 1938 e voe klokoc'h digenvez Meven Mordiern. C'hwerv oa deut da vezañ ha ne deo ket ar c'hemmoù degaset en doare-skrivañ e 1941 o deus gallet habaskaat e c'hwervoni. Disouezhet eo bet gant e ziskibien ha padal e kendalc'hont da vegañ an hevelep doujañs evitañ hag evit e labour, daoust dezho da vezañ bet disant a-enep d' o c'hoant o-unan.

(Da genderc'hel.)

PRENIT DIOUZHTU

DEIZIADUR AL LIAMM 1957

200 lur an dek skouerenn franko

Ne vez ket gwerzhet a-unanoù

R. HUON, 132, rue de Verdun, Brest. C.C.P. 1629-14 Rennes ;

P. BODENAN, 3, Chemin des Potiers, Ergué-Armel, Quimper. C.C.P. 212-23 Rennes ;
hag e ti ar merour P. AR BIHAN.

DIWAR-BENN BRO-LUSAD

gant A-J. RAUDE

Talvoudus-bras eo ar pennad diwar-benn Sorabiz Bro-Lusad embannet e niverenn 55 « Al Liamm ». Anat eo, avat, e tispleg ar mennad komunek war an danvez, ha gwall untu eo er c'heñver-se. Un nebeut evezhiadennoù a garfen kinnig war boentoù 'zo.

AR VRO

Ne bouez ket an oberour war under douaroniel Bro-Lusad : kenstêriad ar Spree eo, adal ar Menezioù Lusad (Lausitzer Gebirge) a dalvez da harz etre ar stadoù alaman ha tchekat - betek geunioù ar « Spreewald », ma tistrann ar stêr, er oueledenn, en eilstêrioù diniver, en ur dreiñ eus tu ar Sterenn, evel ma rede betek-hen, da du ar Gornaoueg. Kêr Bautzen, penn Gorre Lusad, n' eo ket tremen pemp lev adal an harz tchekat. Kottbus, avat, kêrbenn Goueled-Lusad, a zo tri-ugent km pelloc'h en Hanternoz. Bro-Lusad, enta, a weled evel un dachenn douar kant km a hed, daou-ugent km a led, treset gant red ar stêrioù eus ar menezioù betek an diazenn.

Rannet e oa ar vro-se, evit ar vererezh hag ar bolitikerezh, etre Goueled-Silesia, Saksonia ha Brandenbourg, stadoù astennet eus ar Gornaoueg trema ar Reter. Gouzout a reer penaos traoniennoù ar stêrioù bras gant o adstêrioù a stumm doareoù ar bobl a chom er c'henstêrig-se. Bro-Lusad hag he zud, avat, a voe gwallgaset gant arvarioù an istor bolitik.

AN DUD

An Alamaned a ra peurvuiañ « Wenden » eus Sorabiz, dreist-holl eus re Goueled-Lusad. Talvezout a rae an anv « Wenden » evit ar Slavidi holl, gwechall ; kenderc'hel a ra an anv Ueneti, meneget gant Takitus en e « C'hermania ». Krediñ a reer ivez ez eo ar memes anv hag en deus roet hini kêr Venezia war ar mor Adria, hag hini ar Ueneti, tadoù hor Gwenedourion a-vremañ.

E-keñver ar ouenn, Lusadiz nen dint ket diforc'h eus tud Silesia, Polonia pe Tchekia. Un darn vras anezhe a zo berrbennek ha kementad an dud gwad B gante zo brasoc'h eget en Alamagn ar Gornaoueg. Met kement-se a dalvez ivez evit Saksonia ha Turingia.

69

AR YEZH

Ur rannyezh eus Slaveg ar Gornaoueg eo ar Sorabeg (ar rannyezhoù all o vezañ ar poleg hag ar masoureg, an tchekeg, ar sloveg hag ar ruteneg (pe oukraeneg). Dister a-walc'h eo an diforc'h etre poleg ha tchekeg, hag ar sorabeg a zo etreze o daou. Merket eo skritur ar poleg, dreist-holl, gant levezon an alamaneg (talvoudegezh **w**, **c**, ha da heul homañ, **cz**, **sz**, h.a.) tra maz eo ar skritur tchekek ur skouer eus an eeunder a c'hell tizhout yezhourion a volontez vat. Skriturioù ar sorabeg a zo ivez etre hini ar poleg hag hini an tchekeg. An hini diwezhañ a vije bet kenkoulz evit Sorabiz ivez, met seul vihanoc'h ur vroad, seul ziventoc'h emskiant an nebeut a dud a vez ouzh he difenn.

Ne veze ken komzet ar sorabeg, e 1945, nemet marteze gant 30.000 a dud. Dister e oa, enta, pa seller hepken ouzh niver an dud. A-bouez e chom er c'hontrol, ar sorabeg, ma soñjer ez eo yezh wirion, n' eo ket hepken Bro-Lusad a-bezh, met ivez an dud a zo anezhe darn vuiañ poblañs ar Brandenbourg, Saksonia-Uhel ha Silesia. Er c'hantved tremenet, pa oa en e vleuñv an emsav

hollslavat, e veze kontet Silesia ha Bro-Lusad e-touesk ar broioù slavek.

AN DARVOUDOU

Tud Bro-Lusad, e-harz menezioù Tchekia, a veze warne levezon emsav slavek ar vro-se : er « Sokol » e oa anat, dreist-holl, al levezon-se. Er bloaz 1945, pa voe dispennet an Trede Riez Alaman, ez eas Silesia gant Polonia, nemet an darnig anezhi a oa en-wir e Bro-Lusad. D' ar mare-se e venne ar vroadelourien lusadat sevel ur stad dizalc'h kevredet gant Tchekoslovakia. Harz Reter ar stad a vije bet ar stêr Neisse, a zo bremañ fin ar Silesia polonat, ken na vije bet adkavet gant ar Slavidi un darn ouzhpenn eus an dachenn kollet gante er Grennamzer.

Tchekoslovakia, avat, a oa dindan ur gouarnamant « bourc'hiz », gant Benesch ha Masaryk, tra ma oa Polonia ha Reter an Alamagn e dalc'h ar Sovieded hag edan gouarnamantoù komunek-rik. Ar Saozon a oa a-du gant mennad Lusadiz ha Tchekiz (her gouezet am eus d' ar mare en ur lenn ar c'heleier kuzh evit ofiserien « Intelligence » an arme predenek), met ar Rusianed a oa gwelloc'h gante lezel ar vro e dalc'h ar stad komunek alaman eget e lezel da vont gant ur stad na oa ket sur c'hoazh e c'hellfent klozañ warnañ al « lien houarn ».

70

Kement a c'hell bezañ lavaret diwar-benn ar peoc'h hag an emglev a ren edan beli madelezhuz ar strollad komunek nen deo nemet touell ha ne c'hell ket kuzhat ne vez graet nemet an nebeutañ-ar-gwellañ evit ar yezh (un tammig e Gorre-Lusad,.. a chom edan levezon Tchekia, aet da gomunek ivez, koulz ha netra e Goueled-Lusad), ez eo disrannet ar yezh (dres evel Bro-Wened ha K.L.T. du-mañ), ha tra ebet evit ar vro, a chom evel kent rannet etre Saksonia ha Brandenburg. E c'hoari ar « Machtpolitik » (politikerezh-galloud) ne c'hell ket ar pobloù bihan gortoz un digoll eus ar gaou a c'houzañvont.

MOJENNOU LENNOU KEMBRE

MOJENN LENN TEGID

(Tennet eus « Cymru'r Plant », Here 1954)

Brezhoneg gant Per EVEN

Gwechall-gozh, p' edo priñsed a douezh Kembreiz o-unan o ren war douar Kembre, e oa ur priñs o vevañ en draonienn lec'h m' en em led bremañ Lenn Tegid. Hag houmañ oa an draonienn vravañ, kranañ na pinvidikañ eus holl draoniennoù an Hanternoz.

N' eo ket, avat, en ur c'houarn dre gaer hag hegarat e teuas ar binvidigezh hag an douaroù da vezañ peadra ar priñs. Un den garv ha kriz oa dioutañ o vont d' e dud en un doare direizh. Setu perak e veze trubuilhet gant ur vouezh o hopal warnañ d' ober pinijenn ha da dreiñ diwar hent e fallagriezh. Pe da goulz bennak e tigore hemañ dorioù e balez, e klevet ur vouezh o tiskenn diwar ar menezioù gant an avel hag o c'harmiñ : « Ar binijenn o tont ! Ar binijenn o tont ! »

Ne felle ket d' ar priñs selaou ar vouezh a dregerne dre an avel, met ur wech e tistroas da c'houlenn en ur huchal : « Pegoulz e teuo ar binijenn ? »

Hag ar respont ha dont goustad dre an avel.

« Gant an trede remziad ! Gant an trede remziad ! » Raktal e voe drailhet ar sioulder gant ur pikol taol kurun, ma redas pell an heklev anezhañ, adalek rec'hell an Aran betek leinoù an Arenig.

Hogen damesaet ne voe ket ar priñs evit keloù-se.

Dirollañ da c'hoarzhin a reas laouen ha mont d' e balez da zebriñ ha da evañ, hep aon ebet rak Doue, na doujañs kennebeut ouzh den. Ne baouezas ket da waskañ e dud na da breizhañ e amezeion. Ha pe da vare bennak e teue ar vouezh souezhus gant an avel d' e genteliañ, ne rae henezh nemet c'hoarzhin leizh e c'henoù.

Un nozvezh e voe galvet un telenner kozh eus an uhelblaenenn diwar dro da c'hoari war e delenn evit ur gouel e-barzh ar palez. Ur gouel oa hemañ da lidañ ganedigezh ur mab da vab ar priñs.

Daoust d' ar c'haerder ha d' ar c'hinklerezhañ oa eno, daoust d'al levenez ha d' an digorou, evelkent an telenner ne save ennañ tamm drantizh ebet o seniñ gant e delenn.

Da hanternoz e paouezas an abadenn ur pennad, evit reiñ amzer d'ar gorollerion da ziskuizhañ. Lezet e voe an telenner kozh en e unanik en e gorn.

72
Sellout a reas en-dro dezhañ ha souezhet e voe o welout un evn bihan o nijal dreist d' e benn hag oc'h ober sin dezhañ da vont d' e heul.

Hag eñ buan ha sevel.

Dedennet oa gant ur c'halloud sebezhus ken na c'helle ket herzel da vont war-lerc'h an evn. Tremen a reas koc'hu ar c'horoll, pilerou mistr ar porchedou hag al letonennadoù kuñv, o kenderc'hel da vont da heul an evn estlammus e skleur al loar.

N' ehane ket an evn da c'harmiñ : « Pinijenn ! Pinijenn ! » An telenner,

avat, ne felle ket dezhañ bezañ diwezhat da zistreiñ.

Hag e heulias an evn dre ar gwenodennoù hag ar parkoù, dre ar c'hoadoù hag an izelennoù, ken na voe degouezhet en diwezh war an uhel.

Setu m'edont bremañ war gern ar menez ha skuizh-divi an den kozh. Tavet oa an evn bihan ha ne gleve ken an telenner netra nemet hiboud ur froud vihan ouzh e dreid ha titirin kleierigoù an deñved war al leinoù.

N' edo eno na gour na gwreg d' hen degemer, na ti na tan da reiñ bod dezhañ, hogen na doare riskl e neblec'h kennebeut. Ma krede d' ar paour-kaezh kozh e oa bet aner dezhañ kemer penn ur seurt hent. Faltazi oa bet pep tra evitañ ha netra ken.

Sevel a reas o soñjal e oa koulz dezhañ mont raktal war e c'hiz. Gant astenn e gammedoù e c'hallje marteze diraez ar palez e koulz da seniñ an delenn adarre, evit un abadenn-all.

Hogen, tra souezhus, ne wele mui ar palez dirazañ, na trouz koroll ebet ne gleve na kennebeut an disterañ kan na komz dre an avel.

Kement a wele dindanañ oa dremm divent ul lenn ma oa bet diagent en e lec'h pradeier, bleunioù, leton ha gwezh glas.

War c'horre al lenn, avat, e spurmante o neuñ, e delenn aour-eñ.

NOTENNOU

HOR MIGNONED. -

Skiold Basclat a zo laouen o kemenn deoc'h he deus bet ur c'hoarig anvet Solveig, d' ar 26 a viz Mezheven, e Pariz.

Arzela Prunenec a zo laouen bras o reiñ deoc'h da c'houzout he deus bet ur breurig anvet Herve-Tangi-Malo, d' ar 24 a viz Eost, e Pariz.

Tiegezhioù Jeusset hag Agnola a zo laouen da gemenn deoc'h eured an dimezell Renea Jeusset gant Michele Agnola, mab-bihan an aotrou Dominico Agnola, bet kannad katolik rannvro Udine e kambr-meur Italia.

ANVIDIGEZH. -

Laouen omp bet o klevout e oa bet anvet hor c'heneil ha kenlabourer Maodez Glanndour person Louaneg e Bro-Dreger.
Hor gwellañ gourc'hemenoù a gasomp dezhañ.

PROFOU. -

Degemeret hon eus ar profoù-mañ e korf an tri miz diwezhañ :

MEZHEVEN :

Y. Evenou, 1.000 lur ; G. Dubourg, 400 ; Brezhonegerien Keranna Yerres (devezh ar brezhoneg), 2.500.

War un dro, 4.900 lur.

EOST :

G. Etienne, 1.500 lur ; R. Tassel, 5.000.

War un dro, 6.500 lur.

GWENGOLO.

- A. Noury, 10.000 lur ; L. Bothorel, 1.000 ; T. Pabu, 300 ; It. a Sant-Per, 5.000 ; J. Auffret, 200 ; Dll Meliner, 1.000 ; P. Gwilherm, 1.000 ; F. Ters, 500.

War un dro, 19.000 lur.

Abaoe derou ar bloaz hon eus bet 93.700 lur a brofoù. Trugarez d' ar brofourien galonek.

LIZHIRI. -

Setu amañ lodenn ul lizher digant ur gwenedour :

« Lenn a ran gant evezh ho kelaouenn... daoust ma n' implijit ket ar brezhoneg am eus desket war barlenn va mamm. Gwir eo emañ ret dizonañ ar mabig ur poent bennak. Mes farsus e kavan, evelato, klevet komz eus traoù « ekonomikel » ha « psikolojikel »... »

« En desped da se, c'hwi eo a embann ar gelaouenn vrasañ e Breizh, hag un darn vras anezhi a c'heller lenn hep re a boan. »

J. A.

Setu bremañ lizher ul lenner oc'h ober e servij :

« Pedet hoc'h eus ac'hanon da zigas deoc'h priz va adkoumanant.

Malevrusamant n' on ket gouest da baeañ, ar bloaz-mañ, abalamour ma 'z on soudard bremañ.

« Diaes eo din reiñ 1.500 lur pa ne resevan digant Bro-C'hall nemet tregont lur bemdeiz.

« Trist eo din dija chom hep prenañ al levrioù embannet a-nevez gant Al Liamm « Va Buhez e Rusia », « An Ti a drizek siminal ».

« Bez e kasan deoc'h kouiskoude tri c'hant lur gant ar spi e kendalc'hin da resev « Al Liamm », ar pezh a viro ouzhin da gavout re hir an amzer er c'hozh skol-mañ ha re galet ar vuhez soudard ».

H. B.

ESKEMM LIZHIRI. - Neb a garfe eskemm lizhiri gant un Iwerzhonad yaouank en deus

c'hoant deskiñ brezhoneg a c'hell skrivañ da : Gearoid O Broin, « Naomh Eibhlis », Bothar na Manach, Corcaigh, Eire.
Un tu a vefe da zeskiñ Gouezeleg.

AL LATIN DASORC'HET ? -

En Avignon, e-pad sizhun gentañ miz Gwengolo e voe bodet ur c'hendalc'h evit al « Latin bev ». Kelennerion ha gouizieion a bep bro o deus kuzuliet diwar-benn implij al latin evel yezh etrevroadel.

Herveze e tleer adkregiñ gant boaz ar Grennamzer ha skrivañ e latin ar pezh en deus talvoudegezh evit meur a vroad, dreist-holl evit an danvezioù gouizieek. Evit-se e ranker kemmñ doareoù an deskadurezh a-vremañ a ra fae war gement a voe skrivet e latin goude fin ar maread roman (kalz muioc'h e voe skrivet e latin abaoe ar pempvet kantvloaz eget a-raok). E-lec'h dreveziñ yezh Kikero e vefe ret deskiñ skrivañ ul latin eeunoc'h e c'hramadeg, ha distagañ e pep bro evel ma rae ar Romaned gozh.

Divizet e voe prientiñ ur geriadur skeudennet e latin penn-da-benn, ennañ an danvezioù modernañ.

Ur C'hendalc'h nevez a vo bodet e 1958, sur-a-walc'h e Brussel.

En enep da se emañ mennad darn eus renerion ar « Fédération des Intellectuels latins » hag a bled da unvaniñ ar broioù latin en Europa hag en Amerika, hag an Okitaneg da vezañ kenyezh dezhe. An Okitaneg, emeze, a zo « latin ar re baour », tost-tre d' e vammenn, aes da gompren ha da zeskiñ gant an dud a gomz galleg, spagnoleg, portugese, italianeg. Ouzhpenn-se, peogwir n' eo ket yezh ur stad, met ur yezh komzet war un dro e tri stad (Piemont, Katalonia hag Aragon a vez kontet evel Okitanek) e c'hell bezañ degemeret gant an holl hep feukañ hini ebet.

Ul lennegezh dudius o deus Okitaniz, ur yezh unvan ivez, war-bouez nebeut. Gwelloc'h c'hoazh, ar yezh unvan-se zo bet degemeret gant holl Skolioù-Meur Okitania.

Nag an Esperanteg, ne blij ket d' an holl, war a seblant ?

AR BREIZHAD O TIFENN BIMBOCHET, -

Evit dudi hol lennerion ec'h embannomp ar pennad-skrid-mañ tennet eus « La Bretagne à Paris », goude reizhañ un tamm ar brezhoneg anezhañ :

« Ur pennadig 'zo e lennen en ur gelaouenn holl-vrezhonek, gouestlet da bevar-c'hant a lennerien (reizhomp 470), hag e soñj moarvat he zud emañ ganto - ha ganto hepken - ar wirionez war gement a sell ouzh spered Breizh hag ar yezh vrezhonek... e lennen eta un nebeut linennoù diwar-benn un draig c'hoarvezet e-kerz gouelioù Bleun-Brug Perros.

Unan eus harperien ar gelaouenn-se, an hini a gasas dezhi ar pennad-skrid, a dra sur, a oa e-mesk ar bobl (ma n' edo ket emesk an dud e karg) pa zegouezhas dezhañ klevout ar c'homzoù-mañ digant un arvester - ne gomprenne netra en displegadennoù graet e brezhoneg penn-da-benn (1).

- Daoust ha ne ve ket tro da lavaret e galleg ar pezh a dremen evit pephini da c'houzout ?

(1) Gant an amzer ez eo bet gwall listreset ar pennad e spered Abriwall. E notennoù Al Liamm Nnn 56 e c'heller gwelout ne oa tamm ebet war-lerc'h an displegadennoù e klemme an arvester doujet met, ar pezh a zo disheñvel, war-lerc'h tri Breizhad en e gichen hag a grede komz kenetrezo o yezh c'henidik ha kement-se en o bro hag en ur gouel graet evito.

Ar gall-se da vihanañ a ouie petra eo an dereadegezh !

75

Kerkent, ar paotr-se da stlapanñ ouzh penn an hini a gomze outañ ur frazenn e saozneg, e-lec'h e lavare e oa ur Saoz anezhañ ha ne gomprenne ger galleg. Hag evit echuiñ e tistagas ar gerioù-mañ e brezhoneg :

- Ar C'hallaoued er-maez !

Ha fouge ennañ gant e daol brav, moarvat e troas e gein hag e savas e zivskoaz.

- Ar C'hallaoued er-maez ! tre evel ma vije bet klevet ar seurt komzoù un nebeut bloavezhioù 'zo (?). E Pariz e oa se, e-kerz ur gouel renket gant Bretoned ar Gêr-Vras, e-lec'h m' en em gave un toullad tud a Bariz ha tro-war-dro, deut eno evel mignoned da Vreizh ha d' hon c'henvroiz.

Ur penn-brell bennak a oa eno hep urzh ebet, ne oa anezhañ nemet un test evel daou vil a dud all, a savas e vouez evit lavaret :

- Ar C'hallaoued er-maez ! tre evel ma vije bet ar C'hallaoued, en o c'hêrbenn o-unan, tud estren mall-o-c'has !

Tud savet fall a gaver en holl vroioù. Darn anezho a c'hall bezañ digarezet gant ne ouzont ket petra eo an dereadegezh. Met pe anv reiñ d' un den a c'honid e vuhez, pe, da vihanañ a vev en ur vro « estren » hag a zo mordok a-walc'h evit ankounac'haat an herberc'h roet dezhañ (!), hag evit kinnig kas kuit tud ar vro a ro dezhañ bod ha boued, ma n' em gavont gantañ en ur vodadenn bennak ?

Ma ne oa ket anezho o daou an hevelep den, savet ken fall ha Breizhad Pariz e oa Breizhad Perros.

Ma oa Gallaoued e gouelioù Bleun-Brug Bro-Dreger e mare Pask, ez eo abalamour ma oant bet sachet daveto dre vruderezh, ha ma o devoa paeet o flas. Gant se e oant kenkoulz, ha marteze muioc'h c'hoazh, er gêr war dachenn ar c'hoarioù ha ma oa er gêr e Pariz ar paotr divergont e komzen anezhañ bremaik.

Ma ne blije ket d'hemañ ar C'halloued, goulenn a ran perak ar foueltr e chome er poent-se da vevañ en o zouez ; ha mar ne blije ket d' egile gwelet Parizianed en ur gouel brezhonek n' edo ket dleet dezhañ mont d' o c'hask dre embannoù ha degemer o arc'hant.

Petra lavarfe an holl Vretoned a vev e-maez o bro, hag ez eus anezho teir gwech muioc'h eget a dud eus ar broioù all o vevañ e Breizh, ma vennfed o c'has kuit d' o c'hêr ?

Ha petra teufe da vezañ hon gouelioù bras evel Gouelioù Kerne, Gouelioù ar Bleun-Brug, Fest meur ar Biniouioù, ma ne vefe nemet Bretoned « emskiantek » evel daou istrogel Pariz ha Perroz oc'h heuliañ o lidoù ?

Moarvat an hini kentañ a gavfe c'houerv e voulig-dramm, ha teñzorerien ar gouelioù-se un tamm mat skañvoc'h o c'hef e penn an devez.

Abriwall. »

Setu aze hag a zo tremen lost al leue dre c'henoù lennerion « La Bretagne à Paris » ha war an tu-gin c'hoazh !

Daoust hag ez eo graet ar gouelioù-se evit ar Vretoned pe evit gonid arc'hant ? Evit A. ne seblant bezañ arvar ebet.

Paour-kaezh Gallaoued, evrusamant e kavont c'hoazh Bretoned feal evit o difenn ! Kinnig a reomp da Abriwall sevel ur studiadennig diwar-benn komzoù anavezet De Monzie en e bennad kentañ.

76

HOR YEZH. -

Niverenn 9 Hor Yezh a zo deut er-maez. Enni a c'heller lenn, ouzhpenn nctennoù berr, kendalc'h oberenn ouizieq Arzel Even : ISTAR AR YEZHOU KELTIEK. En niverenn-se ez eus 58 pajenn. Priz ar c'houmanant : 500 lur (4 niverenn) da gas da P. Denis, Le Ris, Ploaré, Douarnenez. C.C.P. 1499-51 Rennes.

OGAM,

an Hengoun Keltiek a embann e galleg studiadennoù diwar-benn ar Gelted. Dont a ra c'hwec'h skouerenn er-maez bep bloaz. Koumanant 1.000 lur. C.C.P. 293-68 Rennes. M. Pierre Leroux, 2, rue Léonard-de-Vinci, Rennes.

AL LEVRIOU EN ISRAHEL. -

An niver bras a levrioù a zo bet embannet e tiez-embann Israhel a ziskouez buhez ar Vro vihan-se. Setu amañ un nebeut anvioù eus al levrioù deuet er-maez nevez 'zo en hebreeg : ar « Bhagavad-Gita » indezat, prederouriezh Bro-Indez troet gant Emmanuel Olswanger a zo o paouez kaout medalenn aour Kevredigezh Dante Alighieri evit e droidigezh en Hebreeg eus La Divina Comedia ; oberennoù ar Barzh Gresian Hesiod, Istar ar Bobl Juzev ; evit kantved deiz-ha-bloaz Heine e oberenn « Gedanken und Einfaele », prederouriezh Maimonid ; « Levr ar Vertuzioù », « An Inosant » gant Dostoïevsky. Emeur ivez oc'h aozañ un dibab pennadoù klasel lennegezhioù ar Bed.

GALV D' AR YAOUANKIZ. -

« N'eus ket kalz a dud yaouank e Breizh evit kenderc'hel hent hon tadoù, ha ret eo d' an holl en em vodañ. Goulenn a ran eta digant ar re yaouank etre 10 hag 20 vloaz a gomz pe a zesk brezhoneg ober ur gevredigezh, dindan paeroniezh «

Al Liamm ». Al Liamm a liammo hag a harpo ac'hanomp. Embann a ray zoken hor skridoù. Ar re a fell dezho dont er gevredigezh a zo pedet da lavarout o oad. Tud yaouank a gar Breizh hag he sevenadur, skrivit, mar plij da : Erwan Evenou, 64, boulevard Saint-Saëns, Alger. Trugarez. »

KENDALC'H KELTIEK TRURU (Kernev-Veur)

Hañv 1956

Ar C'hendalc'h Keltiek, dalc'het warlene e Brest, a oa e Kernev-Veur ar bloaz-mañ, e Truru (Truro). Padout a reas adalek ar 27vet a viz Eost betek an trede a viz Gwengolo. Evel e 1950 e oa tro Kerneveuriz da aozañ pep tra. Kuzulren Kernev-Veur a oa evel-hen :

Pennrener : an Aotrou R. Morton Nance (Mordon).

Kadoriad : ar Reverand D. R. Evans, ur C'hembread o chom e Kernow.

Sekretourien : an Dimezell Audrey Humphris ha K. O. Chetwood-Aiken.

Teñzorier : an Aotrou R. C. Jennings.

D' al lun n' eus ket bet kalz tud da vont da glevout an degemer mat graet d' ar gendalc'hidi a-berzh Maer Truru.

Antronoz vintin avat e oa stankoc'h an dud en em zastumet e sal De Pass ar Mirdi e Truru. Roet e voe da bep den ur c'hartoñsig da lakaat ouzh korn e chupenn. Merkañ a rae warnañ e anv hag anv e vro. Aes-tre e oa evel-se da vont da gaout neb-mañ-neb da doullañ kaoz gantañ. Pep kannad a gomzas e anv e vro da saludiñ ar re all :

Euan MacLiarmid en anv Alba, Kerlann en anv Breizh, Retallack Hooper (Talek) en anv Kernev-Veur, an Aotrou Conor Maguire en anv Eire hag an Aotrou Craine en anv Enez Vanav. Ne oa deuet den ebet eus Bro-Gembre, siwazh.

77

Un diskouezadeg taolennoù livet a oa er sal, ouzh ar mogerioù hag oberoù all graet gant an dorn gant tud a Gernow : pladoù kouevr enbaset gant Francis Cargeeg, houarnoù goveliet gant Leslie Roskelly, hag all... Ouzhpenn-se e oa dornskridoù prizius e e kernewek », lod anezho deuet eus Londrez (British Museum).

Da greisteiz war menkti ar Mirdi, dirak an nor, e voe kemeret luc'hskeudennoù, poltredoù a-gevret ar gendalc'hidi, un ugent bennak anezho. Goude merenn e voe klevet div brezegenn e saozneg : « The Scottish Bardic Tradition » gant an dimezell Annie M. Mackenzie ha « Women in Manx Folklore and History » gant an Aotrou David Craine.

Da noz, da eizh eur betek unnek eur hanter, e voe un « Noswyth Lowen » (nozvezh laouen) en ur seurt sal patronaj, St Mary's Hall, gant tonioù biniou, kaniri, korolloù hag, evel just, un evadeg te.

Dimerc'her d' an 29vet a viz Eost. Setu bodet e sal ar Mirdi adarre, adalek dek eur ha kard, dileuridi ar c'hwec'h vro keltiek. Kaoz a voe dreist-holl eus ezvezañs Kembreiz, hag eus an doare da zirouestlañ ar gudenn-se. N' hell ket ar C'hendalc'h Keltiek mont war-raok hep ar Gembreiz. Ar C'hendalc'h kentañ, e 1957, a dleje bezañ dalc'het e Kembre, met n' eus deut pedadenn ebet. Setu ne vo kendalc'h ebet. Koulskoude, da Bask 1958, ec'h en em gavimp holl e hini Manav. Kannaded Manav a lavar eo diaes-meurbet aozañ ur c'hendalc'h en Enez e-pad an hañv, dre ma n' eo dieub den d' ar c'houlz-se da ober war-dro, gant an niver a zivroerien a zired eno. Ouzhpenn-se, ha kement-se a dalv ivez evit Bro-Skos, ar gelennerien o deus ehanoù da vareoù disheñvel. Skol a zo e dibenn Eost. Goulenn a reer abretaat deiz ar C'hendalc'h bloaziek en abeg da se.

E-keit ha ma veze an dileuridi o vreutaat evel-se a-zivout kudennoù diabarzh, an izili all a oa aet da weladenniñ ti priañ Lake, e Kenwyn, Truru. War ar poent-mañ ivez eo heñvel a-walc'h kêrbenn Kernev-Veur ouzh Kemper, kêrbenn Kernev du-mañ. E gwirionez, gwelet hon eus e tegase da soñj Truru kêr ar Roue Gradlon, e meur a geñver : iliz-veur, stêr, pont kozh... ha gwel diwar uhelenn Kenwyn.

En endervezh e voe graet ur brezegenn « Cornish Mines and Miners » gant an Aotrou A. K. Hamilton Jenkin, oberour al levr « Story of Cornwall » (Istor Kernev-Veur), unan e levrioù diwar-benn Kernow.

Da noz e voe diskouezet gant an Aotrou W. Tregoning Hooper ha gourenerien kernevat penaos e oa kaset endro ar gouren, peurheñvel ouzh hini Breizh. Tud yaouank Kamp Etrekeltiek Porthpean (Porthbyghan) a oa aze.

Diriaou 30 a viz Eost. Er Vodadenn Veur a gavas lec'h e Mirdi Kernevek

Truru e voe divizet mont, an niverusañ ar gwellañ d' an Eisteddfod (e Mon, Kembre, e derou miz Eost 1957).

Ali a-walc'h e vefen gant hor breudeur a Vro-Gembre. Tu a vije da ober labour mont war-raok er C'hendalc'h. Forzh pegen plijus eo ar prezegennoù graet, troet int war-du an tremened. Gwell e vije o lenn e levrioù.

Evit ur wech ar bloaz m' hon eus tro d' en em welout avat, ni tud eus ar c'hwec'h vro keltiek, e-leizh a draoù pouezusoc'h hon eus da blediñ ganto, da seveniñ hol labour adsevel. Hor mignoned a Gembre n' o deus ket amzer da goll, hervez, hag e kavont gwell oberiañ en, ha dre o c'hevredigezhioù. Koulskoude, int, ar re greñv, a zo o flas en hon mesk, o skoazell a zo ret-holl.

Da vihanañ e talvez ar C'hendalc'h d' un dra : liammañ an dud, er gengarantez, eskemm keleier. Gwelloc'h a zo d' ober c'hoazh. Kembreiz ha Breizhiz a oar petra. Moarvat e ouezo ar re all ivez, deiz pe zeiz.

78

Anvet eo bet adarre en o c'harg an Dimezell Eibhlin NiChathaibriabhaigh, teñzorier hag an Aotrou Richard Jenkin sekretour-meur. Ar pennrener avat, an Aotrou David Craine a rankas reiñ e lec'h, hervez reolenn ar C'hendalc'h - rener a chomer e-pad pemp bloaz hepken. Ar pennrener nevez eo bremañ an Aotrou Conor Maguire, penn-meur barnerien Iwerzhon.

Goude merenn un droiad a voe graet da Henlez (Helston), Carrek Lus yn Cos (Menez Sant Mikael), Ben Gurnard (Gurnard's Head) ha Zennor ha Pen an Wlas (Lands End). Dale a rejomp re ouzh taol e Gurnard's Head dirak an tasadoù te ! ha ne dizjomp ket mont da welout na Borth Ia (Saint Ives) na Pensans, siwazh. Pebezh bro dudius eo Kernow an Howlsedhas - Kornog Kernev ! Heñvel-mik ouzh lec'hioù digenveshañ Breizh-Izel.

Digwener 31 a viz Eost. Plijus-tre ha kentelius eo bet d' an holl klevout danevelloù - labour ha keleier - diwar-benn pep bro kelt. Lod ar yezhoù keltiek ? Un nebeut gerioù, pephini en e yezh, ha goude mont e saozneg da vezañ intentet gant an holl. War-dro kreisteiz, e-pad un hanter eurvezh, en em vodas izili ar broioù « briton » da gomz e brezhoneg, e kerneveg hag e kembraeg. Ar ouezelegerien, int, en em vodas e lec'h all da gomz gouezeleg Alba, Eire ha Manav kenetrezo.

Debret merenn en em gavjomp adarre da glevout prezegenn an Aotrou Conor Maguire, ar pennrener nevez : « The Controversy about » MacPherson. Pephini a lavaras e c'her, ha Kerlann a gomzas diwar-benn Hersart a Gervarker, hor Macpherson-ni. Ha klozet e voe ar C'hendalc'h.

Un eil nozvezh laouen a voe adarre diouzh an noz, heñvel ouzh an hini a oa bet d' ar meurzh.

Disadorn lañ a viz Gwengolo. Ar c'harr boutin Roseland , eus Veryan a gemeras ar gendalc'hidi e Truru d' o c'has da Borthbyhan. Eno, dindan teltennoù e weljomp ar gamperien, Kembreiz ha Breizhiz yaouank an niverusañ. Prezegennoù, kan, te, ha kuit da Charlestown (moarvat n' eus anv ebet e « Kernevek » d' ar gerig-mañ ?) ur porzhig-mor bihan etre reier. Eno hor boe lunch ha goude ez ejomp e-biou bernioù pri-gwenn Sant Austel betek Bodmin.

Gorseth Bodmin a oa, e Carn Canyke, ur menez e-lec'h ma c'hwezhe an avel - ha moarvat an Awen - en istor Kernev-Veur eo brudet al lec'h pa'z eo diouzh eno ez eas Kerneveuriz da vrezeliañ ouzh ar Saozon e 1483 ha 1497, ivez e 1549.

Ar « Gorseth » a zo un afer sirius e Kernev-Veur. Meurdezus eo al lidoù, holl e kerneveg gant kalzik a gan. Deuet e oa un daouzek banniel bennak en-dro dezho izili Cowethas Kernow Goth (Old Cornwall Societies) un daouzek parrez bennak. Ar bloaz-mañ avat, ar re anvet da varzhed ne oant ket kurunet dre m'o devoa graet labour evit ar yezh. Un abadenn, hini ar Gorseth a voe roet goude e sal parrez Bodmin.

Antronoz, d' ar sul eil a viz Gwengolo, e voe dalc'het e iliz Sant Petrok Tas Syns Kernow, Tad Sent Kernev-Veur, ur Gwesperow (Gousperoù) e kerneveg penn-da-benn. Tra souezhus ! An ilizad tud a voe eno, saoznegerien-holl, a heulias ar

gerioù kernevek war al levrig roet dezho e toull an nor, hep meizañ moarvat. Gwir eo, evit ar prezeg, o devoa an destenn e kerneveg, ha kichen-ha-kichen an droidigezh e saozneg. Fromet e oa kalz a dud o klevout o yezh kozh o tregerniñ, bev adarre, dindan bolzioù meurdeus brasañ iliz Kernow.

79

War-dro daou c'hant den, a leverer din, a zo dedennet e Kernev-Veur gant studi o yezh. Gwelloc'h eget se : klevet em eus komz ar yezh, pep hini o klask silañ frazenn pe c'her. Hag an dud-se, un ugent bennak marteze, re yaouank en o mesk, a zeue a-benn ervat. Ac'hanta n' eo ket marv ar c'herneveg, o tasorc'hiñ pe o klask ober, ne lavaran ket.

KERLANN.

Gouel Mikael 1956.

DEIZIADUR 1957. -

N' hor boa ket embannet e zeiziadur warlene dre ma oa re nebeut a brenerien evit al labour a roe dimp. Er bloaz-mañ e reomp adarre un taol-arnod. Ne vo ket gwerzhet an deiziadur-mañ a-unanoù met adalek dek (200 lur franco). Spi hon eus e raio hor mignoned ur striv evit o gwerzhañ en-dro dezho. E gwerzh emañ an deiziadur e ti ar rener, e ti P. Bodenan hag e ti P. ar Bihan.

SKRIDOU BREIZH. -

Al levrioù-mañ a zo e gwerzh e ti Skridoù-Breizh, Boîte 45, La Baule (L.-I.) :

	lur	
- Dictionnaire Breton-Français, gant Roparz Hemon	600	
- Dictionnaire Français-Breton, gant Roparz Hemon	600	
- Grammaire bretonne, gant Roparz Hemon	220	
- Yezhadur ar brezhoneg, gant Kervella	900	
- Yezhadur berr ar C'hembraeg, gant Abeozen	100	
- Levr an amprevaned, gant Kerverziou	50	
- Korf an den, gant Per Denez	60	
- Komzoù bev, gant Maodez Glanndour	1.100	
» » war baper kaer	1.400	
- An Aotrou Bimbochet e Breizh, gant Roparz Hemon	250	
» » » war Arches	400	
- Meier Eured, gant Roparz Hemon	250	
» » war Arches	400	
- Dremm an Ankou, gant Abeozen	250	
» » » war Arches	400	
= Hervalin a Geraouell, gant Abeozen	250	
» » war Arches	400	
- An ti satanazet, gant Jakez Riou	240	
- Labous ar wirionez, gant Troude ha Milin	280	
- Alanig an tri Roue, gant Roparz Hemon	280	
- En ur rambreal, gant Kerwerc'hez	300	
- Pemp pezh-c'hoari berr.	200	
- Telenn Arvor, gant Brizeug	60	
- Trema an heol o sevel, gant Kaba	150	
- Notennoù, gant Vallée ha Mordiern	750	
- Evit ket a netra, gant Abherri	360	
- Marvailhoù ar Vretoned	150	
- Marvailhoù al Loened, gant Abeozen	150	
- Buhez Lommig, gant X. Haas ha Drezen	300	

Ti-Moulerezh «AR SKREV»

Bali ar Marichal de-Lattre-de-Tassigny - AR BAOL

Diskleriet hervez lezenn : 4' trimiziad 1956 - Niverenn er voulerez : 14384

Ar merour : P. AR BIHAN

AL LIAMM 59

AL LIAMM

Tir na n-óg

NIVERENN 59

Du – Kerzu 1956

TAOLENN

Leur newe Crec'h Morvan, dastumad Pennwern	3	
Ar Bann-Heol, gant Ronan Huon	8	
Unanet er C'hoad Pin, gant Reun Menez-Keldreg	13	
Eñvorennoù Hanter-Oad (kendalc'h), gant Taldir	29	
Istor lennegezh vrezhonek an amzer-vremañ (kendalc'h), gant Abeozen		37
Diwar-benn ar Wended e Bro-Alamagn, gant W. B. Lockwood	59	
In Memoriam, gant Per Denez	63	
Al Levrioù, gant Per Denez	65	
Notennoù	69	
Roll ar Pennadoù (1956)	76	
Pajenn ar Re Yaouank	79	

LEUR NEWE CREC'H MORVAN

- Leret tu din, ma moëreb kos,
Pellec'h man an ebato fenos ?

- El leur newe e Crec'h morvan
Ha nosvez vo ive goude coan.

- Hastomp nin nean hon c'hudenno
Ma c'heffomp en ber dan ebatou.

- Ma merc'hek coant, nan na nefet ket
Dal leur newe se mar ma c'hredet.

Eno vo tud chentil yaouank
Deut evit iedall ar merc'het coant.

Otro Rosko, otro Mezobran
Hag an tri c'hadet a Crec'h Morvan.

- Bed drouk gant an neb a garo,
Fenos dal leur newe nin ielo.

Mar be sonerien, nin a danso
Ha ma ne ve ket nin a gano.

* * *

Otro Mezobran a levere
El leur newe an noz-se :

- Brawan plach laka troad war douar
E Janet Derrien a Grec'hglujar.

- A pa ve koantoc'h eun anter
Na ne ket dide c'hoar vager ?

- A pa ve c'hoar naturel dime
M'he c'harfe ganen en eur goële.

* * *

4

Janet Derrien a levere
De danzer yaouank an de se :

- Erwan Guillo, leres te din me
Mar me eom te am jichourje ?

- Ha pa glefen kol ma bue,
Janedik koant, m'ho chichourfe.

* * *

Danzomp, danzomp, greomp ar bal
Ha lesomp kos da c'hrignousal.

* * *

Erwan Guillo a levere
Me vreur c'henan war an heur se :

- Aman vo trous breman souden,
Breur out d' in me wit ma souten ?

- Me so breur did, m'es soutenno
A pa renkfen souf ar maro.

* * *

Danzomp, danzomp, greomp ar bal
Ha lezomp kos da c'hrignouzal.

* * *

Sevel ra brum, arri e tawal
Bremer c'her da danzal der zal.

Med an dud yaouank ne deuint ket
Abalamour dan dimesellet,

Abalamour d'han dimesellet
Na c'houllont ket ar baysantet.

Cadet Crec'h Morvan a lere
D'he soner dal er sal neuse :

- Sones te brao, ma soner dal.
Wit m'allo hon merc'het dansal.

5

Cadet Crec'h Morvan e lere
Dan dud gentil er sal neuse :

- Greomp hon choas gant er golo,
Pa vo krog an danç, m'ho lac'ho.

Pa vo krog an danç, m'ho lac'ho
Ha peb hini rei goassan m' allo.

* * *

- Otro Mezobran, ma breur mager.
List ac'hanon da vont der ger.

Gred ma c'hin me divlam der ger
Pe, war ma le, hen pefet ker.

Ha Mezobran a responte
Da Janedik vel m'he clewe :

- Merc'hek yaouank, me ho tisko
Da dont an nos dan ebato,

Da dont an nos da Grec'h Morvan
Da dansal er sal goude coan.

- Ma breur mager, les anon me
Pe e kousto dide da vue.

- Na gousto ket din ma bue,
Na dide ne rei ket ive,

Ha pa spe eur bastardek bian
Wit caout sonj deus a Greic'h Morvan.

Wa ket er gir perlavaret,
Janet eur c'huistel neus tennet,

Neus tennet eun oliphant gwen :
Ha da c'huistellad a boeç he fen.

Vel ma neus ar c'huistel clewet,

Erwan Guillo so dilampet,

Erwan Guillo hag e vreur bras
Bars er sal vras gant peb a vas.

6

- Forç ma enor ! 'me ar merc'hed ;
Tan ha kurun ! 'me ar botred.

Ma na neus ket aman c'holo,
Breman souden m'he allumo.

Wa ket he c'hir perachuet
En tan er c'hastel so kroget.

Kri vije ar galon na voelfe
En tal Crec'h Morvan an nos-se.

O welet an tables o ruyan
Gant goad an noblanç o scuillan,

Gant goad an noblanç o scuillan.
Erwanek Guillo eus ho lac'han.

Erwanek hag e vreur c'henan,
Gant peb a vas, eus ho lac'han.

*

**

Erwanek Guillo a lere
En Kerglujar pa narie :

- Bonjour a joa bars an ti man,
Chetu ari ho taer merch aman.

Chetu aman ho merc'hed yaouank,
Mes aoun e kollet ho squiant.

Chetu int aman en toul ho tor,
Na neus kollet hini e c'henor.

He c'henor hini na neus kollet,
He squiant vad ne laran ket.

*

**

Potret Guillo a levere
En ger p' arient en noz-se :

- Dipet dimp peb a chancane,
Na c'heffomp hon daou da vale.

7

Dek den gentil e meump lac'het,
Chom er vro man na nellomp ket.

Nin a ia vremen da Baris
Da gat ar roue da c'houl justiç.

*

**

- Bonjour a joa er pales man,
Er roue Louis, pellach eman ?

Roue Louis, deud homp do kat
Abalamour meump skuillet goad,

Goad tud gentil en newa c'hoant
Da violin merchet yaouank.

Laket neump an tan n'ho zi bras
Ha lac'het ane a dolio bas.

Ar roue kos dindan he sao
A c'hoarse clewet potred Guillo.

- Daou den kaer oc'h ha ma c'heret
En toës ma goerdo a chomfet.

Sort doch hu a vank din tri mil
D'ober bresel dan dud gentil.

Me skrivo dach gant cachet guen
M'ellfet bale en peb tachen.

Me skrivo dach gant cachet glaz,
M'ellfet bale gant ho pen bas

Ha mar fell da den ho c'haretin
Goude se nevo affer ouzin.

Dastumad PENNWERN,
lev. 91, p. 100-106.

AR BANN-HEOL

gant Ronan HUON

An Aotrou Person a rufas an aer. C'hwezh soavon ha paper kemmesket a oa er gambr. Manet e oa war an daol-emwalc'hiñ an eon soavon war-lerc'h troc'hañ e varv er beure-mañ. N' en doa ket bet kalon da naetaat, na d' ar c'houlz-se na diwezhatoc'h.

Furchal a reas e-touez ar follennoù paper a oa dirazañ, war an dao], darn anezho hanter leuniet gant ur skritur moan ha lemm. Ar prenestr a storlokas gant ur bannac'h avel, sellout a reas dre ar gwerennoù bihan. Al liorz, tour an iliz, lein kroaz ar vered a-us da doenn ar skol hag en tu all d' ar voger al laneg sioul ha goullo a rae dezhañ en em santout muioc'h e unan.

Stouiñ a reas e benn war e baperioù, skrivañ a reas un nebeut menozioù a oa deut d' e spered p' edo o lenn e vreviel a-raok lein. Sevel a reas ha mont da dapout diwar e daol-noz ar c'harnedig a servije da verkañ soñjoù a zeue dezhañ alies pa n'helle ket kousket. A-hed ar sizhun a-bezh ec'h aoze e sarmonioù.

Klevout a reas a-greiz-holl kloc'hig an nor. Ma savas e benn diwar e labour ha selaou gant aked ha plijadur, ken na sante e galon en e vruched : unan bennak o tont d' e gerc'hat pe d' e welout, pe da c'houlenn ur c'huzul bennak digantañ ?

An nor a drouzas en ur zigeriñ, ret e vije he sevel un deiz, ruzañ a rae betek re ouzh daroù digompez al leur. Bep gwech m' he c'hleve e salie kement-se. Bemdeiz avat e talee d' he dresañ. Heñvel e oa evit ar c'hud-ye, he doa Mari lavaret dezhañ kempenn da greisteiz adarre.

« Alê, Mari, » eme ur vouez rust, « mañ ket an Aotrou Person er gêr ? »

« Geo ! geo ! » a respontas Mari en ur zont gant he bazh eus ar gegin en trepas, « c'hwi eo Jañ ? »

« Deut on evit reiñ un tologad da Bark al Logell. Marteze ne dalv ket ar boan direnkañ neañ 'n e labour. 'Vit laret deañ 'oa. En em glevet e oamp. »

« Mat eo, » eme ar vatezh, « pa vo echu e teufet da evañ ur bannac'h sistr asamblez gantañ. »

« Ac'hanta, ya, ken bremazon ! »

9

An nor a serras. Trouz botoù-koad ar menajer a voe klevet war an treuzoù, ha war-lerc'h, re Vari o vont en-dro d' azezañ e-tal prenestr ar jardin.

Ar person a selle ouzh ar gwez-per. Ret e vije o c'hrennañ a-raok ar goañv hag an ti-gwer e vefe mat ivez gwelout ha ne oa ket gwerennoù da cheñch warnañ a-raok ar yenijenn vras. An douar-eñ a oa distuz. Mont da blommañ ? Da betra ? Re c'hleb e oa n' eus forzh penaos.

Ne labour e ket mui. N' helle ket labourat. Ar menozioù evit e sarmon ne zeuent ket dezhañ. Re all avat... Pet badeziant en doa graet abaoe ur bloaz ma oa bet degaset d' ar barrez gant e eskob ? Div. Eured ebet, interamant ebet, mousc'hoarzhin a reas gant ar soñj-se, ne hete ket eveljust kaout interamantoù, met e labour e oa. E labour pe e gefridi kentoc'h a oa ivez kemer perzh e poan an dud, o c'halonekaat, o frealziñ...

Ne zeue kammed den da c'houlenn tra pe dra digantañ. Da betra e servije amañ ? Mont a rafe da gaout an eskob ? Goulenn mont e lec'h all ? Koulskoude e

oa krog da garout an ti kozh gant e gambrou niverus hanter c'houllo, an tourigged, hag ar c'houldri e foñs ar park e-mesk ar gwez-kistin, an diri bras e koad dero evit mont da grec'h.

Nag e iliz ! Un deiz bennak goude bennozh ar Sakramant e oa chomet war-lerc'h an div blac'h o doa heuliet an ofis. Ne chome war enaou nemet al lampig er c'heur, soñj en doa, hag en devoa dastornet, flouret gant e vizied ar peulioù greunvaen, ar mogerioù kozh, ar piñsin; a-raok dont er-maez.

Daoust ha ne oa ket pec'hed karout ar mein evelse ? ha ma vije bet gwelet ? An dud o dije lavaret e oa trelatet o ferson. Aon en doa ne vije pec'hed. N' eus forzh penaos, ne oa ket trawalc'h kaout mogerioù da garout.

Kregiñ a reas da huñvreal : edo er gador-brezeg o komz dirak un engroez tud, e barrezianiz, hag helavar e oa, ha niverus e oant, bez e oa ar maer, ar skolaer Per ar Rouz, Chann an Dizez an teod fall, ar guzulieren, betek e barrezianiz pellañ, re ar Runfao, kollet du-hont er c'hoadoù hag a wele div wech ar bloaz, da vare Pask ha da geñver Gouel an Hollsent. Hag e oant holl tud vat, leun a evezh o selaou outañ. Sant Erwan, nevez livet a vousc'hoarzhe diouzh an tu kleiz, Sant Yann ivez eus an tu all hag er foñs zoken e-kichen ar maen-badez, en deñvalijenn e verze daoulagad lufre Sant Rok evel re ur c'hazh.. Stered bolz glas an iliz a splanne muioc'h eget boaz.

Troc'het e voe e huñvre gant son horolaj ar gegin o tregerniñ en ti bras. C'hwec'h eur e oa. Tremen poent mont da son an Anjelus. Kampañ a reas e veg en ur sevel, remm e zaoulin a zegasas da soñj dezhañ etostae d' e hanter-kant vloaz. Koad an diri a chourikas dindan e gammedoù ponner. Treuziñ a reas al liorzho goloet a louzoù. Tremen a reas dirak ti Per Lukaz, ne oa den en ti, an nor a oa serret, aet e oant da di o mab e Lestrezeg en tu all d' ar ster.

10

Gaoliata a reas ode ar vered ha mont e foñs an iliz da son an Anjelus. En deñvalijenn e kavas diouzhtu e balvoù kaledet ar gordenn diwelus. Setu, a soñjas, en ur lakaat ar c'hleier da vrallañ, unan eus e labourioù pouezusañ. Daoust ha ne lavare ket, diouzh ar beure, d' ar falc'her er prad, e oa poent mont da zijuniñ da seizh eur, goude bezañ sammet ar c'harrad melchon e gliz an noz, evel m' en devoa graet meur a wech en e yaouankiz e feurm e dad er Poull Fank.

Daoust ha ne oa ket pouezus da vesaerien ar C'haon, en draonienn, gouzout e oa c'hwec'h eur hag e oa ret diwall en ur dremen al linenn houarn gant o saout.

Evit kalz a dud e oa sur honnezh an oberenn dalvoudusañ a rae er barrez !

O tont en-dro, pa dremenas dirak ti Per Lukaz e kavas an hini kozh e toull an nor :

« Pemp munud dale ho poa gant an Anjelus, Aotrou Person ! » emezañ.

« O n' eo ket ken tener-se, Per, war ar maez n' omp ket war-bouez pemp munud, n' eus tren ebet da gemer. »

« Gwir a-walc'h eo, » eme an hini kozh en ur vont etrezek ar porrastell stok ouzh an ti hag a gase d' al liorzho.

« Deuit dre amañ, Aotrou Person, me zo sur n' hoc'h eus ket bleunioù an Hollsent par d' ar re-mañ. »

An Aotrou Person e heulias el liorzho. Un tammig tachenn e oa, met leun a vleunioù rodellek a bep seurt liv.

« Avañset int, Per, pempzek deiz a zo c'hoazh a-raok Gouel an Anaon hag ar re-mañ a vo tremenet a-benn neuze, » hag e tiskoueze pezhioù boutonoù damzigor o c'halon.

« 'Vint ket 'ta, ez an d' o lakaat e podoù fenozh ha kement-se a zaleo anezho. Hag ho re c'hwi Aotrou Person ? »

« O va re, kaer am eus bet o lakaat en ti-gwer ne gredan ket e vefe bleunienn digor ebet a-benn kala-goañv. »

A-raok mont kuit ez eas en ti da saludiñ Maivon he doa dispaket he marc'hadourezhioù war an daol e-kichen ur voutailhad sistr ruz.

« Ar sistr nevez, Aotrou Person, ret eo deoc'h tanvañ anezhañ, kit n' ho koazez 'ta, Aotrou Person, » eme Ber.

Met edo dija war dreuzoù an nor.

11

« Bennozh Doue, » emezañ, « ur wech all e vo. Labour am eus d' ober bremañ, n' am eus ket tapet c'hoazh echuiñ sermon an oferenn-bred. »

Amzer a-walc'h en devoa, avat, ha marteze en dije ranket lavarout ya ha mont di. Azezañ war ar bank e gein ouzh ar prenestr er sal gwennrazet, dirak an daol goad ma chome ervennoù enni el lec'hioù blotoc'h, dre forzh bezañ gwalc'het. Ha Per en dije marteze kontet dezhañ ur vojenn bennak mat da zastum. Met goude n' en dije ket gellet nac'hañ mont en un ti all, ret e vije bet dezhañ plegañ mont da evañ e pep ti er barrez ha ne vije mui fin ebet. Tapet e oa bet dija. Ar wreg a servije dezhañ ur bannac'h sistr, ha neuze ur bannac'h kafe, ha daoust d' e zigarezioù e veze degaset war an daol ar bara, an amann, ar c'hig moc'h, marteze un tamm andouilh abaoe ar sul hag evit klozañ ur bannac'h lambig e foñs e volenn.

Treuziñ a reas an hent bras hag e pignas en e gambr. Marteze ne ouie ket an tu gant an dud. Mat e vije dezhañ toullañ kaoz gant an holl muioc'h eget na rae. Eveljust e veze dalc'hmat komzet eus ar memes traoù, ar glav, an eost da zastum, ar sec'hor, al loened, aester ar vuhez e kêr. Zoken gant ar skolaer ne gomze ket eus traoù all dre ma ne soñjent ket tamm ebet heñvel.

A damm da dammig en doa gouezet ar pezh a lavare an dud diwar e benn, « An Aotrou Person-mañ n' eo ket gwall gaozeüs, n' eo ket evel an Aotrou Gall, Doue d' e bardono ». « An Aotrou Person ne fell ket dezhañ dont da dañva hor sistr, daoust hag aon en dije e vije materiet e voeson dezhañ ? » An Aotrou Person ac'han, an Aotrou Person ac'halese, an dud a gav atav da abegiñ ouzh unan.

Da zisammañ e galon e tivizas skrivañ d' e gamrad-kloerdi Yann Menezgwenn. Meur a wech o doa bet tro d' en em galonekaat an eil egile hag e krogas : « Mignon ker, Gortozet am eus da weladenn e-pad ar sizhun. Moarvat n' ac'h eus ket bet amzer. Deus da zebriñ du-mañ pa vo tremenet Gouel an Hollsent, hep mank, ezhomam am eus ac'hanout. Anna ez eo bepred heñvel, da lavarout eo ne dremen netra ha n' ouzon ket mat petra 'ran amañ. Gortoz a ran. Karout a rafen e teufe an dud da gomz ganin eus o foanioù, o diaesterioù, da c'houlenn va ali evel den lakaomp, ma ne fell ket dezho dont da gaout ar beleg.

« N' am eus ket klasket ur sakrist all. Da betra ? Me a son va unan an Anjelus. Evit traoù all n' eus ket da son, nemet evit an tangwall e vije (Doue ra viro) ha neuze an dud o unan hen gra, a gemer ar boan... »

12

Klevout a reas adarre dor an traoñ o ruzañ war al leur, ne oa ket bet sonet ar wech-mañ. Chom a reas ar person a-sav e bluenn gantañ en aer. Unan bennak o tont davetañ. Sevel a reas e zaoulagad etrezek ar Galon Sakr dindan wer a-us d' e wele hag e juntras e zaouarn. Marteze e oa evit lakaat an embannoù pe evit ur badeziant, pe ur vaouez kozh o tont da c'houlenn ober war-dro he follennoù asurañsoù, pe unan o tont da gofez. N' eo ket alies e tegouezhe ha laouen e veze bepred.

Met nann ! n' eo ket se e oa. Unan bennak a bigne wareeun gant an diri.

« Tre ! » emezañ pa voe skoet ouzh an nor un taolig abaf. Hag e teuas tre ur bugel. Ar bugel. Ur paotrig war-dro daouzek vloaz. Ankounac'haet en doa ar bugel.

Ar paotrig diwar ar maez a chome war doull an nor, liboudennek un tamm anezhañ, gant e levrioù en e zorn.

« Deus e-barzh 'ta, Loui, » eme an Aotrou Person, « degaset ac'h eus da levr latin ? »

Ar paotr a ziskouezas e levr hep rannañ grik.

« Mat, mat, kae 'n ez koazez 'ta neuze, ma faotr. »

Ar c'hanfard a zeue da gemer e gentel, ne oa ket o klask bezañ frealzet. Ruz e zivjod, tomm dezhañ o redek dre ar parkeier, edo o chom tri gilometr eus ar vourc'h, e oa moarvat mall gantañ bezañ echu.

Ne c'houlenne ket boued-ene kennebeut, na kuzulioù evit ren e vuhez. Met memestra, en tu-hont d' ar gelennadurezh a c'houlenne e gerent e c'hellfe mont, mont donoc'h. Hag an deskadurezh a roe dezhañ he doa marteze un dalvoudegezh bennak hag a servijfe un deiz. Un ene o deus ivez ar vugale, ha daoust ha n' en doa ket Hor Salver lavaret « lezit ar vugale-se ha na virit ket outo da zont davedon, rak Rouantelezh an neñvoù a zo d' ar re a zo heñvel outo » ?

Ac'hanta, ur frealz e vije evitañ, un ene yaouank ha glan.

Azezañ a rejont an eil e keñver d' egile. Ar bugel a zigoras e levr hag a glaskas e-pad ur pennad ar bajenn gant bizied bouc'h, kignet-digignet o tistroellañ ar girzhier pa veze o vesa. Ha tra ma selaoue ar Person, gant e zaoulagad damserret e krogas ar paotrig da vañousat : « Rex quidam simium habebat, quem sua amicitia dignissimum putabat ».

Brest. Gwengolo 1956.

UNANET ER C'HOAD PIN

gant Reun MENEZ-KELDREG

Pa oan o tiskenn eus an tren, an devezh-se, ne soñje ket din e oa an traoù en ur stad ken fall gant va mignon Herri.

Ar c'harr a oa dirak ar gar. A-boan amzer din da gemer va bilhed, ha mont e-barzh, ma oamp aet kuit. Laouen e oan, rak, abaoe tost da dri bloaz, n' am boa ket gwelet va zad, ha mall a oa warnon degouezhout er gêr.

Da c'hortoz am boa bet koulskoude. Un devezh fall am boa dibabet, pe gentoc'h e oan degouezhet : un devezh sadorn, devezh foar Gemper. Kalz a dud a vez da skuilhañ an devezh-se a-hed an hent. Ouzhpenn, e Pont-'n Abad, war zigarez gwelout hag ur pakad bennak en doa da gemer evit ar Pont, e tiskennas ar blenier en ostaleri ar Meur, e traoñ ar C'hastell. Ur bannac'h gwin ruz da lonkañ, sur-a-walc'h.

Erfin, degouezhet en Ti-Lonk, ha sammet ganin va sac'h, me d' ar gêr. Na dalvez ket ar boan displegañ al levenez a baras e daoulagad va zad, p' am gwelas. Intañ abaoe bloavezhioù, e veve e-unan-penn koulz lavarout, abaoe va disparti, rak va breur henañ, dimezet en Naoned, ne zeue d' e welout nemet ur wech ar bloaz - ha c'hoazh - evit pemzek devezh, pa ne dae ket d'ober e c'hlazard, un tu bennak e kreisteiz Bro-C'hall. Ne damallan ket anezhañ. Deuet e vije aliesoc'h, ma vije bet un disterañ, hegaratoc'h va c'hoar-gaer ouzh va zad. Met un tamm gallez otus ne oa ken anezhi, bet dastumet n'ouzon mui e pe saloñs eus ar Roc'hell gant va faour-kaezh breur, d' an amzer m' edo e merdeadurezh Bro-C'hall. Evel-se n' en doa va zad, nemet ul lizher bennak a vare-da-vare diganimp hon-daou evit berraat e amzer. Me 'ta o tont d' ar gêr evit va fermision pevar miz, mar plij, a lakae e galon da dridal.

* * *

Ouzh taol e oamp chomet an nozvezh-se da vutuniñ. Ur gwall-vutuner e oa va zad. Ur renkennad pibennoù a zo atav, a-zioc'h e benn, war ur plankennig, e penn-laez an daol. A-viskoazh am eus soñj bezañ bet gwelet warnañ ur bern brav a « venvijiri ». N' hellen ket disoñjal an dra-se 'vel just. Butun estren, dibabet ganin gant evezh bras, am boa degaset dezhañ, ha n'eo ket dre bakadoù 40 gram evel re ar « Régie Française », met dre gilioù, kement hag ober.

14

Fellout a ra deoc'h marteze, gouzout penaos e oan deuet a-benn da gas ar butun, hep bezañ bet devet gant paotred-gward ar porzhioù ? Ne oa ket bet diaes. Ur vatimant-kenwerzh am boa kemeret e Dakar evit Naoned. Gouzout a raen e kavjen er gêr-se ur maltouter bennak eus ar Vro... Un dro war ar c'hae, amzer toullañ kaoz gant paotred o frioù-furch, ha kavet am boa bravik an hini a felle din : Alan Penwenn, genidik eus Pouldreuzig hag a veze atav en Naoned. Komprenet hoc'h eus. P' en em gavas gant e dro gward, va sac'h... ha va butun a gemeras hep din da soursial eus netra, hent ti va breur. Ha setu.

Koll d' ar gouarnamant ? Mar kerez, met un digoll brav d' Alan, trawalc'h da vogediñ kaer e-pad c'hwec'h miz.

* * *

Lambig kozh a oa dirazomp, en hon tasennoù, e-pad ma tivogede hor pibennoù. Tañvaet hoc'h eus anezhañ meur a wech, ha gouzout a rit : ur bannac'h lambig bet « devet » gant evezh war bord an hent, e-touez frondoù ar bleunioù, o tommañ en un dasennig pri Kemper, setu un dra hag a blij d' ar figusañ.

Goubet e oa va zad da c'houzout dre verr, kement tra am boa graet ha kement bro am boa gwelet. Kounioù e yaouankiz a nije en e zaoulagad, dre ma komzen, ha n' on ket sur ne zeue ket ganto un tammig keuz dezhañ da vezañ deuet re vuan ul labourer-douar, e-lec'h bezañ kendalc'het gant e vicber a voraer. Kaoz fonnus a oa ganeomp eta, rak ar peurvuiañ eus al lec'hioù darempredet ganin a oa bet bizitet ivez gant va zad. Hag ouzhpenn, va micher (kentañ letanant e oan d' an amzer-se war ur vatimant a verdee, gant Dakar ha porzhioù Amerika ar C'hreisteiz, 'vel pennoù-linenn), ne oa ket dianavez evitañ. Meur a dra hor boa eta da ledañ ha da verniañ a-raok mont da gousket.

* * *

Tost da hanternoz e oa pa skoas Herri war an nor. En em zigareziñ a reas abalamour d' an eur. Chichant-tre e oa ouzh va gwelout. Gouzout a rae e oan da zont d' ar gêr en devezh-se, ha ne felle ket dezhañ gortoz antronoz vintin evit va saludiñ.

15

Chichant e oa ar paotr, am eus lavaret ; ha chichantoc'h c'hoazh pa welas ar souezh o pare em daoulagad o sellout outañ. N' on na bihan na treut, hep din bezañ koulskoude ur chilopenn. Tenn eo alies va micher, ha sportoù am eus graet hag a ran c'hoazh e-leizh. Soñjal a raen eta e oa deuet da vezañ un den a-blomm a-walc'h war e gilhoù. Herri ne oa mui ur c'hrennard pa oan aet kuit, tri bloaz a-raok, nann, met bremañ e oa ret din sevel va fri evit sellout outañ.

Souezhet out, Reun, a lavaras din va zad.

Souezhet ? tad. Ne oa ket Herri ur babig d' e ugent vloaz, met bremañ n' on mui nemet ur bidoc'hig en e gichen.

* * *

An eur n' he doa netra da welout amañ, rak amezeien a-viskoazh e oamp Herri ha me ; ha va zad a gare anezhañ kement hag e vugale koulz lavarout. Chomet difamilh d' e bemp bloaz, Herri a veve e ti e eontr. Ne seblante ket bezañ re eürus, rak skrañgn e oa an eontr, ha 'm eus aon, skrañgnoc'h c'hoazh ar voereb : rust e oant o-daou evitañ, hep bezañ fall pe digalonek koulskoude. Ur garg e oa bet ar paotr evito, gwir eo, met servijoù dispar a rente dezho bremañ. Marteze ne oa o ruster nemet un tammig avi, ouzh hen gwelout ken sonn ha ken yac'h e-keñver o merc'h, ur bikouzenn a blac'h atav o pasaat, treut evel ur geuneudenn ha ken hegarat evel ur bod-linad, hag ouzhpenn tagnous evel ur wrac'h.

Dedennet e vez atav ar vugale vihan gant ar grennarded. Dek vloaz am boa, da vare marv tud Herri, bet lazhet o-daou e barr o yaouankiz, en ur zont d' ar gêr eus Kemper, un nozvezh, gant o c'harrad-legumaj ez aent da werzhañ bep sadorn. Spontet e oa bet o marc'h o tont d' an traoñ gant diskenn an Pont-Ebeul. Un tizh-dall en doa kemeret. Dres e traoñ-tre an diskenn, pa c'hellent soñjal e oant saveteet, - rak ul laezenn denn a zeu diouzhtu goude treuziñ ar ganol, - e stokas rod dehou ar c'harr ouzh an tamm moger fall eus ar pontig. An daou baour-kaezh a oa bet stlapet gant an tizh ruz war an douar, ha brevet war an taol. O mab ha n' anavezen ket betek neuze, a zeuas da chom da di e eontr, dres e-kichen ti va zad. Daou pe dri devezh goude, e oamp mignoned vras.

Me eo c'hoazh hen kasas d' ar skol d' e seizh vloaz, hag hen difennas ouzh ar frioù lor all. Atav e veze ganimp, pe en hon ti, pe war hent ar skol. Ganimp ivez e rae e lampon d' ar yaou pe d' ar sul a-dreuz ar parkeier pe al liorzhoù. Kemeret gantañ ar boaz, en-paotrig, e kendalc'he bremañ ma oa deuet da zen, da zont d' hon ti. Ouzhpenn, karout a rae kalz, hen lavaret en doa din meur a wech, temz-spered va zad, abalamour, a gredan, d' an enebiezh a gave etre an temz-spered-se hag hini e eontr.

16

Plijadur vras am boa eta ouzh hen gwelout en nozvezh-se...

* * *

War ar maez, a-hed ar sizhun, e vez stag ar re yaouank ouzh o sparl, ha da sul e kemer pep hini e blijadur hervez e c'houst : lod en ostalerioù, lod er salioù-dañs, lod all siouloc'h o pourmen tro-war-dro.

Plijus eo ar c'hoadoù-pin hag an hentoù don. Gallout a rafen, m' am bije c'hoant, kavout gerioù flour evit komz deoc'h anezho, rak o anavezout mat a ran ; muioc'h : o c'harout a ran. Ha leun eo bet alies va c'halon ha va spered gant koun douter maezioù va Bro, e-pad va eurvezhioù-gward, war vourzh va batimant, etre an dour hag an neñv. Met n' eo ket aze ar pezh am eus dibabet ar wech-mañ.

Plijus eo eta ar c'hoadoù-pin hag an hentoù don. Plijusoc'h c'hoazh mont drezo, pa vez spi da gaout enno merc'hed yaouank, merc'hedigoù deuet aze d' ho kortoz, hag a ra ken brav van da gejañ ganeoc'h hep gouzout dezho na petailh na penaos, goude bezañ tremenet o sizhun a-bezh, anat eo, o klask gouzout da belec'h ez ay hemañ pe henhont. N'eus forzh.

Sulvezh war-lerc'h sulvezh, hag a-hed bloavezhioù a-wechoù, ez en em gav an hevelep re asamblez, ha bep a dammig e vez graet an dibab. Er memes amzer, e ra ar garantez he hent, betek deiz ar pok kentañ, kentañ mell eus ur chadenn : chadenn-ar-bed.

Graet en doa Herri e bok kentañ.

Marivon a oa hec'h anv.

* * *

Merc'h d' ur miliner.

Milin ar Stank-Vras a zo du-se en un draonienn ; kluchet etre daoù verez goloet a bin. Troet eo an ti ouzh ar c'hreisteiz. War-du ar reter, ul lenn hir ha strizh, leun a lastez, delioù kouezhet eus ar gwez tro-war-dro, brankoù torret, korz e-leizh, hag en o zouez, raniged a-viliadoù ; d' ar goañv, paradoz an houldi hag ar yer-dour.

Etre ar chaoser hag ar run, ar ganol a gas dour al lenn d' ar vilin, a zo skoachet gant aozilh kemmesket a raden ; du-mañ du-hont avalenned ha pupli.

17

War-du ar c'huzh-heol hent-bras Pont'n Abad d' ar C'hab a dremen tost-tost d' an ti. Ur blijadur d' ar miliner, tra ma val e vilin, dont war dreuzoù e zor da gemerout an aer, en ur sellout ouzh an dremenidi ken stank d' an nevez-amzer ha d' an hañv.

Ha plaset eus ar gwellañ etre milinoù ar Vro ; he dour a rann div barrez : Plozeved ha Pouldreuzig.

Mestr ar « vag » eo Per Baloenn. Bihan ha reut ; ledan evel unan eus e sac'hadoù-bleud: Sellit outañ gant e dog bigoudenn, teir boulouzenn stlapet war e doull-kil : en e aez an den.

* * *

Gopr ar vilin, arboellet gant an tad-kozh, ha goude, gant an tad, ha bremañ - bezit dinec'h - gant Per, a ra ur bernig brav a aour.

Mibin eo e lagad, marteze skleur an aour o lintrañ ennañ ! Ur verc'h ha daou vab. Honnezh ugent vloaz, da zimeziñ. Dres evel ur marc'hadour-kezeg, en deus klasket Per Baloenn un danvez-pried eviti.

Ed an holl tro-war-dro a zeu d' ar vilin. Gouzout a ra damdost pinvidigezh pep hini, en div barrez.

Mab Laouig ar C'here a oa bet dibabet d'ar fin. Pevar benn-kezeg, tregont buoc'h, teir matezh en ti, netra d' ober evit e Varivonig, nemet bugale ha... kafetañ. Dispar.

Ya ! dispar evitañ.

Sañset ne oa c'hoazh netra c'hraet, met an holl en div barrez a ouie. Deiz en eured memes ne oa mui kuzh : goude eost an avaloù-douar e vije lidet.

Ha va mignon Herri a ouie ivez.

Ur sulvezh d'abardaez. Sulvezhioù-hañv, p'emañ ken sioul ar maezioù, damgousket dindan an oabl berv. Azv pep greun ; eus pep tra e tired meuleudioù d' ar vuhez leun. Ar bed a zo evel un dougerez, troet he daoulagad war he diabarzh, o parañ war draoù diwelus.

E peoc'h morgousket ar bed-se, daou zen yaouank a vale e disheol glaster ar c'hoad-pin, o stlejal o c'harantez hag o anken.

Ken eürus pa 'n em gavont d' an abardaez, ha ken ankeniet da serr-noz pa 'n em zispartiont. Bezañ eurioù hag eurioù, ken daou er bed, o neuñ el levenez : gopr o c'harantez evit ur sizhunvezh, ha sammañ goude-se ar memes bec'h rann-galonek evit ur sizhunvezh all. Gweledigezh pellder miz Gwengolo, peurzorn eost an avaloù-douar a verko evito marteze fin o eürusted... fin ar bed.

18

Petra ober ? Bevañ en ur lakaat o fiziañs en o c'harantez hag en o yaouankiz.

Er stad-se edont d' an amzer ma tegouezhis er gêr...

* * *

...A-raok mont kuit, e c'houlennas Herri diganin :

« Ha warc'hoazh, petra 'rez ?

- Gourvezañ. En em astenn n' eus forzh pelec'h. Gwellañ diskuizh am eus bet biskoazh a zo atav ar c'hoadoù-pin, war ur gwele barlaskoù, gant kan an avel er brankoù, va daoulagad o parañ war an oabl, o sellout ouzh ar c'houmoul o tremen, o tremen. Neuze n' eus mui nag eur nag amzer : ar bremañ a zo dres evel ar peurbad. Mall am eus gourvez er c'hoad-pin. An devezh-warc'hoazh a zo din. Ar vignoned a vo gwelet goude.

- Ya ! Se 'zo plijus. Hag ouzhpenn, ezhomm ac'h eus da gaout un tammig repoz goude da veaj.

- Ha te ?

- Ur goulenn am boa d' ober dit, met n' em eus mui c'hoant.

- Lavar atav.

- Dont ganin warc'hoazh.

- Da belec'h ?

- Da Veg-ar-Raz.

- Da Veg-ar-Raz ? Ken ? Perak ket da Vontroulez ?

- 'Rez ket goap Reun. Sirius 'on.

- Añ?

- Ya. Te 'oar... Marivonig.

- Añ ya! Ne da ket?

- An tad.

- N' on ket souezhet. Kontet en deus din va zad e nebeut a gomzoù, dre lizher. Arc'hant a fell dezhañ ?

- Ya. Ha me n' am eus nemet va c'hroc'hen ha va roched.

- Ba ! Ken warc'hoazh neuze. Plijadur am bo oc'h ober un droig war velo. Digarez kemerout an aer ha gwelout penaos emañ ar Vretoned kaezh en o bro.

- Bennozh Doue. Nozvezh vat. »

Laouenaet ar paotr.

19

« Sot-pitilh e teufen o chom amañ hiziv, a lavaras din, pa oamp hon-daou, antronoz vintin, o sankañ tizh en hor mirc'hi-houarn war-du Gwaien. Ezhomm am eus da gavout tud ha traoù dianavez dirak va daoulagad. Hiziv, evidomp hon-daou (gouzout a raen ne oa ket diouzhin ha dioutañ e komze) a zo un devezh kalet. He zud o deus pedet re Lavreg. 'Blijet eo da chom, kea.

- Ya. Klevet a meus. Mab Laouig Kere eo an hini a zo bet dibabet gant Per Baloenn. Danvez 'zo, sur.

- Ya. Danvez. Hag eñ ar cheulkañ den 'tre Penn-Marc'h ha Beg-ar-Raz. Ur C'haper n' eo netra 'n e gichen.

- Ha petra ' raio da zousig e-pad ar c'heit-se ?

- Lavarout nann.

- 0!

- Hag a raio. C'hoarvezo pezh a c'hoarvezo. Ar vuhez a zo deomp. Marivonig ne vo mui minorez 'benn bloaz. Ar gwashañ, eo gouest he mul-benneg a dad d' he lazhañ en e fulor.

- Gouzout a ra petra 'zo etrezoc'h ho-taou ?

- Re vat.

- Ha petra en deus lavaret ?

- Diouzhin : ur stalon kaer eo, met n' eo ket evit va marchosi.

- An houc'h ! »

* * *

Abaoe ar mintin n' hor boa graet nemet ruilhal pe valeañ, koulz lavarout. Eus Beg-ar-Raz 'oamp aet da Zouarnenez hag eus Douarnenez da Lokorn. Goude, da Venez-C'hom, ha war-lerc'h da Gemper.

Daoust da enkreiz va mignon, plijus-kenañ am boa kavet hor redadenn. Estrenien 'oa e-leizh d' ar mare-se er Vro. Met hor pobl am boa kavet ken disoursi ha tra e-keñver ar ruilherien-se. Adkavet am boa ivez gant kalz a levenez, hor yezh kozh war vuzelloù va c'henvroiz : ur vlaz kevrinus a gaven warni, goude bezañ tremenet tri bloaz o selaou gerioù spagnolek ha saoznek war vorioù ar C'hreisteiz bras hag en e borzhioù.

Naoniet e oamp evel loened gouez ; ha war-eeun ez ejomp d' an Ti-Kozh, e traoñ Ru Picheri, ur wech degouezhet e Kemper d' ober ur c'hofad krampouezh.

Alese e tilojemp war-du Plozeved.

20

Nebeut a gaoz a oa bet etrezomp, e-pad an devezh. Ne glaske va c'hamalad nemet va c'hompagnunezh ; ur wech ar mare e toulle kaoz, met ne zeue gantañ nemet diotachou. E gorf nerzhus a oa war varc'h em c'hichen, hogen e spered a nije du-se, a-us da vilin ar Stank-Vras. En em glevet hor boa koulskoude war ar pezh a oa d' ober : din-me da dagañ ar miliner.

N' hellen ket refuziñ. E-pad re hir amzer en doa va mignon va gortozet, hag ouzhpenn, ar fiziañs a lakae ennon, a rae d' am mignoniezh un dever dont d' e sikour.

Ur fazi e vije bet koulskoude mont da welout ar miliner diouzhtu. Rak goude taol-kurun an devezh-mañ, e chomfe ruz e fulor n' ouzon ket pegeit. Amzer am boa ivez ; a-vec'h ma oa boulc'het va fermision.

Perak eta en doa graet Herri e venoz goulenn ganin-me mont da gaout Per Baloenn evit ober evitañ e c'houlenn ? Dereat e vije bet d' e eontr hen ober, sur-mat. Met ne oa ket hemañ re domm ouzh ar menoz-se. (Mont da ruziñ va fas « 'vel ma lavare »). Gouzout mat a rae peseurt respont en dije da gaout. Ha p' en doa gwelet Herri an dra-se, warnon en doa taolet e soñj.

Anavezet-mat e oan gant ar miliner. Iskisoc'h : pedet e oan bet alies da vont d' e di. Hen lavarout a c'hellan bremañ, klasket en doa teurel e grabanoù warnon. Laouen e vije bet ar « sapre sac'h-bleud » o kaout ac'hanon da vab-kaer. Muioc'h a lorc'h en dije bet o welout Marivonig o tont da vezañ gwreg ur « c'habiten-lonkour », eget ouzh he gwelout zoken e ti Gereed Lezavreg. Met aze, ne oamp ket hon-daou a-du. Rak gouzout a raen da gentañ peseurt neudenn 'oa skoulmet etre Herri hag e verc'h ; ha d' an eil, va Doue, e oa dalc'het dija va zammig kalon en un tu all. Daoust d' am refuz morse lavaret, - rak ger naet ne oa bet etrezomp war gement-se, - e oamp chomet mignonned, Per ha me. Gwir eo, dizemez e oan c'hoazh, hag e Varivonig ivez.

D' ar sul war-lerc'h Gouel Maria Hanter-Eost, e oan aet d' ar vilin. Gouzout a raen e kavjen an ozhac'h en ti. Marivonig gwelet diouzh ar mintin er vourc'h, goude an oferenn, he doa lavaret din n' en doa ket lakaet e fri er-maez abaoe ar sulvezh all.

Me 'oa diaes em dilhad, a c'hellit krediñ.

En ti-milin, harpet ouzh ur bern sac'hadoù-bleud, e oa beuzet ar mestr en e soñjoù. E dog bleudek tennet war e dal, a lakae ur skeud teñval da barañ war e zremm. Mut ar vilin, ha ken mut all an den soubet en ur mor a eñvorennoù. Ne fiñvas ket pa zegouezhis e-toull an nor. Keuz am boa war an taol da vezañ deuet. Gouezet am boa diouzhtu, e oa gwintet va c'hannadiezh, met diwezhat e oa din kilañ. Hopal a ris dezhañ gant ur vouezh a felle din disourisi:

21

- Ac'hanta ! Per. Penaos emañ ar bed ?

Treiñ e benn a reas davedon hep fiñval e gorf : « Fall, » emezañ.

- Hola ! Daoust ha faoutet eo da vaen-milin ?

- Ar maen ? Penn an dud kentoc'h.

Derou fall d' hor c'haozeadenn. Penaos ha gant pe abeg kenderc'hel ? Eürusamant, dres d' an ampoent, e treuzas Marivonig an trepaz.

- Hopala ! Marivonig, a huchis warni, deus amañ 'ta da vouchañ din.

Hag eñ taer : - Bouchañ dit, honnezh ?

- Ma ! a respontis, ha ne vije ket evit ar wech kentañ, memes !

- Poan 'm eus o krediñ. Te 'zo un den hag honnezh ne vouch nemet d' ar c'haoc'h...

- Lavar 'ta, Per, n' emhout ket mat ?

- Re vat. Evit lod, kaer 'zo gortoz ac'hanon da greviñ, pe da vont da Gemper, tra d' ober. N' on ket c'hoazh na brein na diot.

- Tagnous eo an tad, Marivonig. Lezomp anezhañ da furaat, ha deomp da welout ar vamm. Dereatoc'h e teuio da vezañ, sur.

* * *

Deuet e oa an noz ; atav edon er vilin. Pedet e oan bet gant ar vestrez da goaniañ. Asantet am boa, rak en diwezh e felle din gwelout penaos ez afe an traoù etre ar miliner ha me. Ha d' am soñj, ouzh taol, ne c'hellfe ket ober re a reuz, rak an holl a oar ar resped a zouger, er vro-mañ, d' un den kouviet ouzh taol, daoust dezhañ da vezañ yaouank evel don.

- Ganit e vo un tammig siouloc'h he doa lavaret din ar vamm. Evidomp hondiv, n' eo ket mui ur vuhez hon eus amañ.

Pa zeuas er sal-debriñ, ken penn-moñset e oa atav. War-bouezig e oa ret din kregiñ gantañ.

* * *

Kontet he doa din ar vamm penaos e oa c'hoarvezet.

22

Da verennañ e oa bet pedet Laouig Kere hag e wreg. Per en doa kemeret anezho er vourc'h goude an oferenn-bred. Fier-droch an den o rentañ dezho enor e lojeiz. Er sal-debriñ e oant bet degemeret. Marivonig ne oa ket aze. Ar vamm a yeas d' he c'herc'hat en he c'hambr. Pa oa hi degouezhet er sal, e tagas trumm.

- « Gouzout a rit, tad, ne blij tamm ebet din ar pezh hoc'h eus renket gant an dud-mañ. Lavaret am eus deoc'h e timezin gant Herri Gloagen, gant hoc'h asant, ma plij deoc'h hen ober din, pe a-enep d' hoc'h asant, ma ne fell ket deoc'h. 'Benn bloaz, am bo va bloaz warn-ugent... Gwelloc'h e kavan lavarout deoc'h diouzhtu, a gendalc'has-hi o treiñ war-du an estrenien, reiñ deoc'h da c'houzout sklaer hag eeun, ar pezh a fell din, evit na gollfec'h ket hoc'h amzer. »

Treiñ a reas kein hep ger ouzhpenn, hag hi kuit en ur stlepel an nor war he seuliou.

- « A zo mat, » eme Laouig Kere. « Arabat koll amzer. Va mevel n'emañ ket er gêr, ha labour a zo d' ober. Dont a rez Gaid ? » Hag int o-daou da Lezavreg. War o zreid.

Mut e chomas Per. Sabatuet, brevet, digor e veg.

Goude avat, he doa paeet ar verc'h. Mastaret en doa seizh kador ha daoust dezhañ da vezañ tev, en doa redet war he lerc'h. Flac'hadoù, taolioù-dorn ha taolioù-botoù he doa resevet muioc'h eget he gwalc'h, hag ar vamm o tifenn anezhi he doa lodennet kaer ganti...

Hiziv e poueze c'hoazh ar vezhekadenn re bonner-se war e galon. Ne oa netra d' ober dioutañ, n' eus forzh penaos. Displeget am boa dezhañ peseurt den e oa Herri, ha pegen eürus e vije bet e verc'h gantañ. Lavaret am boa dezhañ ez eus, estreget an aour hag an danvez, traoù a dalvoudegezh er bed-mañ : ar garantez, diazez an eürusted. Mut e chome. Aheurtet. Ur peoc'h ponner a rene

etrezomp.

A vouezh izel e lavare ar vamm dezhañ : « Ki ! hoc'h-gouez ! N' out mui na tad na den. Dimeziñ a rafen, ma ven e plas hor merc'h, me hen tou dirazout ha dirak Reun, hor mignon ha brasañ mignon Herri. N' ac'h eus netra da rebech d' an den yaouank-se, nemet e baourentez. 'Rez ket bil ! Homañ he devo he bloavezh warn-ugent, ha te 'welo pe ez on ur vaouez, pa ne don ket.

- He bloaz warn-ugent ? emezañ rok. Pell emaint c'hoazh.

- Dont a raint dre c'hras Doue.

- « Marteze ! » Ne ouie ket e oa kenkoulz diouganer...

* * *

23

Fellout a rae din implijañ evit ar gwellañ va devezhioù koñje. Bizitañ va Bro, dreist-holl ar Menezioù hag Aodoù an Hanternoz ha n' anavezen ket c'hoazh, a oa va menoz. Divizet am boa mont da Gemper d' al lun goude ar sulvezh-se da brenañ ur c'harr-dre-dan. Graet e oa bet an afer a-raok va distro etre va zad hag ur micherour bet en e amzer, mekanisian war ar batimantoù-brezel. Dalc'het am boa darempredoù mat gant an den-se a oa bremañ marc'hadour kirri-dre-dan e Kemper. Mall e oa warnon kaout ar c'harr-se, rak ezhomm bras am boa da aveliñ va fenn goude an devezh-sul tremenet hag a oa bet evidon ur ranngalon. Siwazh ! Berr ez on chomet gant va c'hoantoù, rak d' al lun vintin-se, dres, e tegasas paotr-al-lizheri din ur baperenn am galve da vont dillo da Vrest. Trouz brezel a oa. Spi am boa na dafe ket an traoù da fall evit an taol-mañ c'hoazh... Eizh deiz goude, am boa taolet va sac'h war ur reder-mor. Ha da fin gwengolo ar reuz milliget.

* * *

Echuet ar brezel, e tistroas Herri d' ar gêr. Evel en diagent, en em gaout a rae an daou vignon. Un tammig spi a oa deuet dezho, p' o doa gouezet e oa deuet Mab Laouig Kere d' ar gêr da vervel... Paket e oa bet gant e rejimant, ha kaset goude da n'ouzon ket pelec'h du-se, en Alamagn, a-raok bezañ distroet d'e vro, brein e skevent, da c'hortoz ar marv.

Met ar miliner ne gemmas ket e venozioù evit-se. N' eo ket da eured e verc'h ha mab Laouig Kere e oa dalc'het ; danvez-priedoù en doa da zibab tro-war-dro, evel ma karje. Ne oa nemet un dra sklaer en e benn : evit netra ne felle dezhañ kaout Herri da vab-kaer. Hag o welout anezhañ o tont d' ar gêr dic'hloaz ha dibistik, ez eas e gonnar war greskiñ en e geñver.

En e vagad-stourm en doa Herri kavet ur paotr eus ar Pont. Gouzout a rit, etre Plozeved hag ar Pont n' eus nemet div lev. Kamaladed e oant deuet da vezañ diouzhtu.

Etre daou gamalad-brezel e ren ul liamm dispar ha nerzhus. Pep hini a oar emañ e vuhez en arvar. Ur c'hamalad-brezel a zo muioc'h eget ur breur. Poanioù gouzañvet a-gevret, nozvezhioù dihun, troioù-gward, hag a-us pep tra, ar marv o plavañ, an Ankou kriz o tiskouez gant e viz yen an hini en deus dibabet, se 'zo ur vuhez kalet ; hag eus ar vuhez e tired ur gamaladegezh kreñv-meurbet.

* * *

24

An emrenerion a rae dija o reuz e Breizh a-raok ar brezel, hag emrener e oa paotr ar Pont. Pep hini e venoz. An holl a zo dieub. Da nebeutañ, kement-se a vez lavaret. Evel just, kenteliet en doa paotr ar Pont e vignon, e-pad an hir-amzer o doa tremenet a-gevret, ha klasket e zedennañ a-du gant e venozioù.

Breizhad e oa Herri. En em santout a rae koulz breizhad ha nikun, tamm mezhebet war e zremm dirak e amezeien-vrezel, hag eus e ouenn nag eus e Vro. Met pell-kaer e oa an den diouzhtu bezañ azv d' en em daol er politik.

E zeskadurezh war ar poent-se ne oa mann. Hag ouzhpenn, ne oa ket troet e venozioù d' ar mare-se, ouzh seurt traoù. Ar brezel ne oa evitañ nemet un dra garv. Ha c'hoant ebet dezhañ cheñchañ e damm buhez ouzh an ifern ruz-se. Lezel a rae eta e vignon da gomz ; eñ a dave ; ha komzoù e vignon diwar-benn e Vro a lakae da sevel en e empenn, n' eo ket skeudenn ur vro wasket, pe bannieloù an dieubidigezh o strakal en avel, met skeudenn ur plac'h yaouank.

Echu ar brezel, e teujont o-daou d' ar gêr. Gonezet evel ma oa d' e venozioù breizhat, e oa bet fiziet e Paotr-ar-Pont gant renerien an Emsav, e ganton, evit ar bruderezh. Ha demdost bep sul vintin, e teue an den da werzhañ e gelaouennoù ha da gaozeal gant gwazed yaouank Plozeved. En em welout a rae an daou gamalad gant ar memes plijadur. Pep hini e doulle e erv : hemañ en ur ober e bolitikerezh, hag egile o turiañ douar war ar maez. Buan a teuas Paotr-ar-Pont da vezañ brudet er vro, ha ken buan all e voe anavezet e oa Herri e vrasañ mignon-brezel.

Ha Per Baloenn hen gouie evel an holl. Hag e teuas ur soñj en e benn.

N' eo ket en un taol e oa bet savet ar soñj-se en e spered. Bizitoù ar rederion-noz o doa graet dezhañ pleustriñ war ar soñj-se. Koun hoc'h eus eus ar re-se a c'haloupe dre ar Vro da vare ar brezel. Pistolennoù pe vintrailherezigoù ganto, e kerzhent en noz dre vandenn. Meur a di o doa bet o bizit, dindan liñsel an noz. Hini pe hini a oa bet zoken diwadet ganto, hep mui a druez eget ouzh moc'h. Tailhoù mod nevez savet ganto : argant, pe voued, 'pad ma valeent hep ober van bezañ nec'het, o doa graet o brud. Ar binvidikañ kouerion a grene da serr-noz. Ne gouske mui den, hep anken ha strafuilh.

Per Baloenn a oa pinvidik 'tre ar pinvidikañ. Abred e oant aet d' e di. O demegerout a reas gant ur minc'hoarzh glas, met tamm-ha-tamm, dre ret da gentañ, ha goude dre voazamant, e teuas da vezañ seven outo. Hag a-barzh ar fin e oa deuet ar vilin da vezañ unan eus o lec'hioù-repu. Ar c'hoadoù-pin tro-war-dro, ha traonienn al lenn a roe dezho o goudor.

25

Diwezhatoc'h e oa bet toullet kaoz, ha bep a dammig e teuas ur fiziañs kuzh da ren etre an istrogelled hag ar miliner. Gant bleud ar vilin ne oa ket diaes ober bara ; ha sistr an ti a zo bet atav brudet evit bezañ dispar. War bouez kement-se e tizhe an den bezañ lezet e peoc'h...

Kaoz an emrenerion, boulc'het gant Per, - hag a ouie re vat pezh a rae, - a savas un deiz bennak etrezo. Hag e-touez anvioù ar pennoù-karg, e taolas Per ur wech, anv Paotr-ar-Pont hag hini Herri kemmesket.

Gouzout a ouie an holl koulskoude, hag eñ kenkoulz hag ar re all, peseurt darempredoù a oa etre an daou zen yaouank. Met ar miliner en doa graet mat e soñj. Fellout a rae dezhañ e vije gwintet diwar e hent an den en doa kemeret evit e enebour daonet. Un tu kaer en doa kavet. Digablus e chomfe-eñ dirak an holl, rak piv, ha da be vare, a c'houlennfe digant ar baotred all rentañ kont ? Den n' o anaveze, hag an holl a grene dirak skeud o bagad, pe drouz o botoù en noz. Ur gavadenn fin, a soñje Per.

Merket e oa bet ar paotr, ha d' ar fin kondaonet...

Ne oan ket er vro d' ar mare-se. Va dever rik am boa graet evel meur a hini all, e-pad ar brezel. Petra ober ken ? Paket al lamm gant ar C'hallaoued, urzh en doa resevet hor C'homandant, da vont da n' ouzon ket pelec'h ; dihentet n'ouzon mui pet gwech war ar Mor Atlantel, e oamp degouezhet un deiz bennak diouzh ar mintin, e Dakar. Bezañ dilestret da vat a oa bet evidon un taol-c'hoari, ha diouzhtu am boa adkavet va batimant-a-genwerzh. Ur c'hoant n' am boa ken : disoñjal ar bloavezh brezel rangalonus a oa bet ret din ober, sañset evit difenn « Frankizioù ar Gristenion ». Marteze. Met n' em eus ket kavet em boa e-pad an amzer-se, ur galon a « C'hedour-Meur ». Gwelloc'h 'ta teurel va sac'h a-nevez war va bag kozh, ha lien dezhi. Evel ma lavare Laouig Kere, arabat koll amzer... Dre lizher e oa bet displeget din gant va zad roll an traoù ez an da

ziskleriañ...

* * *

Ar sulvezh-se, e oa deuet Herri da welout va zad ha da lavarout dezhañ : « Dont a ra aon din. Er fin e c'hoarvezo un dra bennak fall ganimp : n' ouzon ket petra, met poent-bras eo din mont ac'halenn. Labour a gavin en Naoned. Re am eus gortozet ; gwelloc'h e vije bet din mont kuit diouzhtu goude va distro d' ar Vro, war-lerc'h ar brezel. Re baket e oan gant va c'harantez eviti ; diaesoc'h e vo bremañ an disparti, ha koulskoude, ret eo. Dav eo dimp teurel evezh. N' hell an traoù padout evel-se ».

26

Deuet e oa an noz. D' ar memes mare, e kuitae Marivonig ar vilin. An hent bras he doa kemeret evit dont da gejañ ouzh an den yaouank. War vevenn ar c'hoad e oant bet gwelet d' an diwezhañ, gant paotred o tont eus ar vourc'h.

Dre spered am eus graet an hent ganto... Sellit ! Baleañ a reont dre gaerik, brec'h kleiz ar paotr o kelc'hiañ dargreiz ar plac'h yaouank. Beuzet en o soñjoù, rak lavaret en deus Herri sur-mat da Varivonig, e venoz evit an amzer-da-zont : o disparti hep mui dale, dindan daou zevezh d' an hirañ. Dre ar c'hoad ez eont bremañ. Pet gwech o doa kemeret o daou an hent-se ? Pet gwech en doa gortozet ar paotr e vuiañ-karet, er gwenodennoù-se ? Pet eurvezh en doa tremenet aze ganti, hi azezet war an delioù-pin, eñ astennet a-hed e gorf war an douar klouar, d' an nevez-amzer pe d' an hañv ? Pet pok o doa graet aze an eil d' egile ha gant pe goanag o doa sellet o-daou ouzh ar vuhez o tigeriñ dirazo ? Bloavezhioù tremenet, leun a zouster hag a garantez evito.

Ar c'hoad a oa o c'hoad, anat d' an holl. Ha da Ber ivez. Gouzout a rae hemañ e tremene dre aze an daou zen yaouank pa zeuent d' ar gêr.

E don ar c'hoad emaint bremañ. Dre gaerik e valeont atav. A izel-vouezh e komzont. Lavarout a ra-eñ e tisplego warc'hoazh an traoù d' e eontr. Hep dale e c'halvo anezhi da zont d' e gaout. Kriz e vo an disparti, met ar vamm a zo a-du. Ret eo ober er c'hiz-se, rak n' eus tu all ebet pelloc'h da ziskoulmañ an neudenn... Atav emaint start an eil ouzh egile. Ur mousavel a ra d' an delioù krenañ. C'hwez ar bleunioù hag ar rousin a leugn o fronelloù. Douster Mezheven a gloz dindan e vantell eürusted ar bed. E sioulder an noz, e kousk an douar e peoc'h. Al loar a bar, tost ouzh begoù ar gwez, a lavarfed ; ur sell leun a druez a seblant teurel etre ar brankoù war an daou zen yaouank a dremen unanet o skeud evel m' eo unanet o c'halonoù, ha stardet o c'horfoù. Un den hepken o tremen a vije lavaret. Hag an den-se eo an hini emeur o c'hortoz. Rak e eur a oa bet merket ha deuet e oa an eur-se.

* * *

27

En un taol eo brevet peoc'h an noz. Un trouz spontus, trouz ur vindrailherezig o harzhal yud e-kreiz an noz, o regiñ peoc'h meur an douar hag an neñv, en o c'houk difiñv. Hag er memes amzer ur youc'hadenn griz, hirclemmus ; youc'hadenn leun a gasoni hag a zizesper un den tizhet d' ar marv ; ur youc'hadenn a gonnar, a druez hag a boan. Pell amzer e oa bet klevet ar c'harm o pellaat douget war ziwaskell an heklev : ar spont o nijal war anal an avel. Ha goude netra...

Netra nemet klemmoù div mouezh raouliet o c'hervel sikour. An daou zen yaouank a oa kouezhet er memes bern, hag o gwad en em gemmeske en ur ruziañ an douar. Ar plac'hig a vousklemme goustadik, he dornig gwenn o waskañ he bruched, beuzet er boan, o tifenn he buhez a rede kuit dre ar goulioù. En em astennet he doa war he c'hein. He selloù a bare bremañ war an oabl divent. Uhel-uhel e kave begoù ar pin ; fiñvadennoù ar brankoù a oa eviti evel luskellerezh he c'havell, soñj he doa, d' ar poent-kousked. Un dra bonner a oa aze war he barlenn. Astenn a ra he dorn gant kalz a boan. Ar penn-se gant e vlev troc'het berr evel geot al leton ? Ya sur. Kant gwech dija he deus graet-hi ar jestr-se : « Herri a c'halv-hi, Herri. He klevout a rez, va mignon ? O Herri, unanet oamp da vezañ, hag unanet ez omp bremañ hon-daou. Euredet omp en hor c'hoad-pin ».

An tan a zev he skevent : blaz ar gwad a sav war he muzelloù ; hag evel ul luc'hadenn o tarzhañ en neñv, e par ur sklerijenn griz en he spered : ar Marv. He dornig a gouezh war an douar, hag ur c'hlemmig truezus a sil dre he muzelloù « Mamm ! o Mammig paour ! »

* * *

Er vilin edo Per gant e genseurted. O c'hortoz edont : gwin war an daol, dirazo butun ha kartoù. Displeget e oa bet dezho : atav e kemere ar wenodenn o kas d' ar chaoser, pa zeue da heuliañ e verc'h d' ar gêr. Ur gedour a oa bet lakaet 'ta war vord ar wenodenn, kuzhet etre ar c'harzh. Kenteliet-mat e oa bet : gortoz ar paotr da vezañ war e zistro, ha neuze.

Met ar gedour, damgousket sur a-walc'h, hanter-vezv ouzhpenn, en doa lammet war e dreid, p' en doa klevet trouz. Dres dirazañ, o tiboufañ eus un toullad gwez-pin, ment vras un den, sklerijennet gant al loar, dirak beg e vindrailherezig. Ne oa ket da dortal : ar biz a vac'has war ar c'hi. Klevet e oa bet an tennoù hag ar youc'hadenn garmet d' an ampoent.

Per a skrijas. Un anken yen a dreuzas e spered, hag ur grenijenn a skrijas war livenn e gein. Mut ha difiñv e chomas. E galon a lammas pennfollet en e greiz. Ar re-all boazet ouzh seurt darvoudoù a redas er-maez, ha d' an daoulamm ez ejont war-du ar c'hoad. Ar miliner a yeas war o lerc'h.

28

Dre maz ae, ur spont du a starde dezhañ e c'houzoug ; n' helle ken tennañ e anal. Ar re-all a oa ouzh hen gortoz dirak un dra bennak. Diwezhat e oa. Aze e wele dirak e zaoulagad dispourbellet, e verc'h lazhet gantañ. Ha war he c'halon, penn an den yaouank ; o-daou unanet a-enep e youl ha dre e youl koulskoude.

Re ziwezhat ? Den na netra, na galv na pedenn ne dalv d' ar re a zo bet falc'het gant an ankou.

En oabl, al loar ken seder ha diagent a sklerijenne. Ar c'houmoul a gerzhe, hag er gwez, goustadik an avel a richane.

Evito, ne oa mui nag eur nag amzer. E don o feurbad e oant o-daou unanet da viken er c'hoad-pin.

Abaoe emañ an tad e ti ar re sot e Kemper.

EÑVORENNOU HANTER-0AD

(1900-1919)

gant TALDIR
(kendalc'h)

DISKOUFEZADEG ETREVROADEL BREST

Kêr Vrest a aozas e 1911 un Diskouezadeg Etrevroadei, war ar Vali d'Ajot.

En diavaez d' ar Stalioù ardivinkoù, marc'hadourezh, bouetaj hag evaj a bep seurt, e voe gwelet eno evit an dro gentañ ur stand kensakret da Vreizh hepken, da Vreizh nevez.

Lakaet am boa em fenn astenn dirak daoulagad an engroezioù skouerennoù eus oberoù ar Varzhed abaoe dek vloaz. Evit se, am boa kemeret kalz a zispign. Lakaet am boa ober ur stal goad livet ha bleuniet, gant ut prenestr gwerennet 'drek pehini e voe renket ur skouerenn eus an holl levrioù brezhonek a voe bet moulet abaoe 1900, hag eus ar c'helc'hkelaouennoù pennañ embannet e Breizh mar pleent gant an Emsav. E-touez ar skouerennoù-se, e oa na petra 'ta **Ar Bobl** hag **Ar Vro**, hag al levrioù, levriegoù, feilhennoù poblus, a oa deut maez Moulerezh Keraez abaoe he c'hrouidigezh e 1904, ur vrac'hell anezho, m' ho ped da grediñ : AR GWENAN, gant K. L. Henry, maer Lennon ; KANAOUENNOU BREIZ VIHAN, gant an tonioù, gant Laterre (Bodlann) ha Gourvil (Barrilio) ; BREIZ DIVARVEL, gant Ar Rumeur (Mathaliz) ; KONTADENNOU, gant Glaoda ar Prat (Pluen-zir) ; KENTELIOU LABOUR DOUAR, gant Gwillerm (alias Taldir) ; TEATR BREZONEK POBLUS, gant Taldir ; LA GENESE D'UN MOUVEMENT, gant Taldir ; GERIADUR GODELL GALLEK-BREZONEK, gant Taldir ; BARZAZ, eil levr gant Taldir ; FABLENNOU, tri levr gant Ricou ; AR REVOLUTION EN HOR BRO, gant Jezegou ; KANAOUENNOU, gant Prosper Proux ; (eil mouladenn) GWERZIOU HA SONIOU, gant ar C'houteller ; GWERZIOU, gant Julian Godest ; REIZADUR DIABARZ HA DIAVAEZ, Gorsedd ar Varzed ; BREIZIZ EUS 1810 DA 1910 ; un dastumadenn SONIOU POBLUS savet gant kanerien baour ar pardonioù hag ar foarioù, ha moulet e Keraez, h.a.

30

Gwerzhañ o vezañ aotreet e-pad an Diskouezadeg, a bade ur miz, e vije bet ret din chom da vevañ e Brest panevet am boe ar chañs da gaout e kêr ur mignon hag ul lenner feal, ezel eus ar Gorsedd, an Oved Iwan Tillenon, komis apotiker, en doa dibabet da lesanv : « Louzaouer ». Iwan Tillenon a oa ma yaouer a bemp bloaz. Ganet e oa er vro Bagan, e Kerlouan, eus ur wrizien gozh Nordek, a gred din, chomet eno da vevañ da heul rederien-vor. Kinnig a reas din derc'hel ma « stand » ha pleal ouzh gwerzh al levrioù brezhonek. Chomet omp da c'houde mignoned start, en desped m' eo bet hej-dihej hor bagoù war vor ar vuhez. Al Louzaouer a voe dibabet da zougen Kleze Arzhur er Gorsedd war-lerc'h marv Telenn Aour e 1935. Un den mentet uhel e oa (1 m. 85) hag ur gwaz terrupl 'vel ma leverer e Kernev-Uhel. Efed bras a rae dirak ar bobl. An herkul-se a zo bet falc'het koulskoude gant an Ankou er bloavezh 1943, da 58 bloaz, o lezel un intanvez ha daou vab. Skrivet en deus e brezhoneg ur bern oberoù bihan, sonioù ha mojennoù, hag e galleg « Histoire du Pays Pagan ».

Pa varvas e Pariz, e oa skrivagner e Minister ar Brezel. Daou vignon all am boa d' an ampoent-se e Brest : an Aotrou Ange Boulevard, eus Sant-Brieg, bizaouer e straed Siam, hag an Aotrou Borvo, Leoniad, kelenner el Lise Paotred.

Izili e oant eus Komite ar Foar, ha kinniget o doa da henezh digas ur strollad aktourien da Vrest da c'hoari ur pezh brezhonek e-pad ar gouel. Diganin-me e voe goulennet klask dezho ur Strollad bennak, unan gwir, ennañ tud yaouank diwar-ar-maez nemetken. Em boa unan just a-walc'h dindan ma dorn, unan nevez savet e Kalanner, e-kichen Kallag, gant ur c'henderv din, an Ao. Teurnier,

a oa rener Skol Boblek ar Barrez.

An Ao. Borvo a zeuas da Garaez, ha kas a ris anezhan em gwetur-dre-dan (un oto am boa bet azalek 1909), da welout mestr-skol Kalanner. Asantiñ a reas digas e baotred yaouank da Vrest da c'hoari **Buhez ar C'henta Grenadant a Frans**, unan eus ma fezhioù-teatr.

Ul leurenn bleñch a voe savet hag aktourien Kalanner a zispakas mat-tre o zrajedienn dirak ur bobl tud.

Kog ar vandenn a veze graet Loeiz ar C'hamm anezhañ, ul labourer douar 17 vloaz, a c'hoarie roll an Tour d'Auvergne. Mont a reas d' ar brezel Pevarzek, lec'h e kollas ur c'har. Goude ar brezel, e tapas ur garg e Pariz...

Komite Foar Etrevroadel Brest a brizas moarvat ma zammig Stal Levrioù ha Mouladennoù, rak ar « Palmarès » a verkas din ur Vedalenn « vermeil » evel gopr.

31

* * *

Un avañtur drol a zigouezhas ganin e-kerzh ar Foar. Ur wech ma oan oc'h antreal e kêr Vrest en oto, dre hent-bras Pariz, e tremenis dirak burev ar C'hustum hep chom a-sav, ha respont d' ar maltoutier mar 'm boa tra pe dra da ziskleriañ. (N' eus ken ti-kustum 'bet pell zo.)

Ar maltoutier a remerkas niverenn ha liv ma gwetur, hag a-boan ma oa klenket houmañ ganin e karrdi an Hotel Modern, ma oa war ma seulioù kerkent ha me, hag e c'houlennas diganin ma anv ha ma chomlec'h, evit ober prosez-verbal din.

Hep soñjal droug, e tapis ma yalc'h-voneiz, hag e tennis er-maez ur pezh ugent real.

- « Dal 't, emon-me, kemerit an dra-ma, hag achuomp an traoù... »

Mes e lec'h kemerout ar werzh-butun, ar maltoutier a reas ur beg faeüs, hag o sellout ouzhin gant kounnar :

- « Petra ? emezañ, aesa prenañ ur c'hargiad onest ? »

Ober a ran deoc'h ur prosez-verbal ouzhpenn, evit « tentative de corruption de fonctionnaire ».

- « Diaoul, emon-me, n' it ket dre bevar hent dezhi. »

- « Evelse 'mañ kont, » hag heñ kuit o skrignal e zent.

Chomet ma-unan, e soñjis e peseurt sac'h e oan paket. Daou brosez-verbal. An eil gwashoc'h evit ar c'hentañ. Tremenn dirak al lez-varn koreksionel. Div amand vras. Ur miz prizon marteze. Ma anv embannet e pevar c'horn ar vro. Ar goaperezh warnon ha war ar Varzhed. Ur vezh... Penaos ober evit pellaat diouzhin ar riskloù-se ?

Mont a ris ken buan ha tra da gontañ ma c'hont d' an Ao. Boulevard.

Tremen a reas e zorn war e varv-kabusin, ha goude ur pennad meizadurezh, e lavaras din.

- « Deut ganin d' an Ti-Kêr da welout ar Maer, an Ao. Hippolyte Masson. Konsailher on ma-unan, ha ne nac'ho ket moarvat diluziañ ar gudenn... »

- « Ne soñjit ket, mignon ker ! Me mont da welout an Ao. Masson ? N' omp ket eus ar memes tu politik. Masson eo rener bras ar Gostezenn Socialist e Penn ar bed, ha n' emañ ket hep gouzout e oa ma c'hazetenn **Ar Bobl** enep d' e gandidad

Emil Nicol arlene, pa oa o c'houlenn mouezhioù rann-vro Karaez da vont da zepute... »

32

- « An Aotrou Masson n' eo ket un den imoret fall, eme an Ao. Boulevard. Sur-a-walc'h hon resevo mat... »

- « Deomp 'ta neuze. »

Anv an Aotrou Boulevard a zigoras an holl dorojoù dirakañ. E berr amzer, e voemp intruduet e burev an Aotrou Maer.

Gwelet am oa Masson e Karaez, ha bet ouzh e selaou o prezegenniñ e sal an Ti-Kêr. Met n' eo ket ar memes den a oa dirak ma daoulagad. E Karaez, war al leurenn-bleñch, Masson a oa un « ouvrier » evel ar re all. E zilhad ordinal gantañ. A-wechoù e tenne e chupenn, e tiskoulme e gravatenn, hag e tivotone e jiletenn, evel unan o vont da c'houren... E zaoulagad a flammine, e vouezh a dregerne evel ar gurun. Met e Brest, 'drek e vurev Maer, an Aotrou Masson a oa savet mat. Gwisket e oa gant ul livitenn zu, war e vruched e skede ur roched feret kalet gwenn-kann, hag ur skoulm seiz du a oa en dro d' e golier. E varv hir ha tailhet karrez a rae gantañ prim-patrom Sadi Carnot, ar prezidant Republik lazhet e Lyon e 1894.

- « Azezit, eme an Aotrou Maer. Petra ra din kaout an enor d' ho kwelout ? »

- « Setu amañ, eme Boulevard, ur mignon bras din an Ao. Jaffrennou (Taldir) eus Karaez, hag a zo e Brest evit renkañ ur « stand » en Diskouezadeg. »

- « Ya, eme ar Maer, ar barzh, neketa ? »

- « Ar barzh, just-a-walc'h. Ac'hanta, ar barzh-mañ a oa moarvat o huñvreal d' ur barzhoneg bennak en ur antreal e kêr (an Ao. Boulevard a rae van da c'hoarzhin) ha tremenet en deus dirak ti ar C'hustum hep chom a-sav. Sur-a-walc'h n' en deus ket graet espres-kaer. N' eo ket ur gwall bec'hed, met... ma mignon a zo bet dievezh a-walc'h evit kinnig ugent real d' ar c'homis maltoutier, kompren a rit ? « Corruption de fonctionnaire ». Eno 'mañ an dalc'h. Ha ne vije ket moien da renkañ se hep mont dirak ar Varnerien ? »

- « Geo, geo, eme an Aotrou Masson en ur c'hoarzhin a-gorn. Gwel 't a rit, ar vicherourien o deus o enor ; hiviziken e ouiot n' emañ ket ar Sozialisted da werzhañ. Bremañ, peogwir oc'h un den a feiz vat, me a bedo kargiad an Tailh da fregañ e brosez-verbal : nemet e reot din hanter-kant lur evit peorien Burev ar Madoberoù. »

Evelse voe graet.

Abaoe neuze, am eus bet klevet kalz a zrouk-komzoù diwarbenn an Aotrou Masson. Evidon-me, eo chomet un « denjantil » (gentleman).

* * *

33

DISPARTI ETRE AR BREUDEUR E LOKRONAN-LEON

Da viz Gwengolo 1911, e oa trizek vloaz abaoe ma pourmene ar rannvroelieren hag ar varzhed o bannieloù unanet dre Vreizh. Hini Kevredigezh Vreizh gwer gant ur groaz St-Andrev, hini ar Gorsedd, gwer-gwenn-glas, o doa dastumet dindan o flegioù peuz tost an holl vrogarourien bev.

Keit hag emañ bihan daou vugel, e kerzhont skoaz-ouzh-skoaz er vuhez ; p' emaint major, e fell dezho mont pephini gant e hent, ober pephini d' e benn.

Evit gwir, ur pennad oa, ne dae ket mat an traoù etre an div vreuriezh.

Ar stroñs kentañ a oa deut diwar-benn al laonenn gleze rannet. Kontet am eus e oa bet impentet e 1899, da vare Eistezvod Kerdiz, ur c'hleze berr, hag heñ

rannet e daou damm 'hed an neudenn, eus an dornell d' ar beg. Gant sikour daou ibil a gloke ouzh daou goch, an daou damm a vije staget ha ne raent neuze nemet unan. Rannvro Gembre a oa gronnet e Mirdi Kerdiz : rannvro Vreizh a oa chomet etre daouarn ar Markiz Estourbeillon abaoe bodadeg Kerdiz, lec'h en doa he douget. Met an Estourbeillon ne ouie ket komz brezhoneg, ha Kaledvoulc'h a oa paotr krak-ha-krenn war ar poent-se. Ar rann-gleze breizhat a dlee, gouez dezhañ, bout e ti an Drouiz-Meur, a anvfe e-unan an douger, pa vije dastumet Breizhiz an daou du d' ar mor en ur gorsedd boutin. Pedet d' en em disammañ eus ar benveg, Hoel Bro-Wereg a zinac'has groñs dilezel e garg.

Neuze Kaledvoulc'h a lakaas a-du gantañ Thomas Matthews a Landebie, sekretour Skol Varzhed Bro-Gembre, hag a c'houlennas digantañ un testeni, gwarantet gwirion gant an Arc'h-Drouiz Dyved, da lavaret e oa ar c'hleze daourann perc'heniezh Breuriezh ar Varzhed, ha nann hini ur « partikulier ». An testeni etre e zaouarn, Berthou ne varc'hatas ket da gas an hucher d' an Estourbeillon evit kaout dre heg ar pezh ne roed ket dezhañ dre vrav.

Dirak ur seurt taol a-dreuz, ar Markiz a blegas, nann hep eskemmañ gant an Drouiz-Meur un nebeut lizheroù flemmus.

Kaledvoulc'h a zivizas neuze ne vije mui graet ar Gorsedd Digor da goulz kendalc'h Kevredigezh Vreizh, met en e bart e-unan, hag en ul lec'h all. Reiñ a reas e zilez a ezel eus K. V. B. ha lakaat a reas dindan ar wask danvez ul levr e anv **Des vessies pour des lanternes** da ober goap eus ar Markiz « ravoder », hag eus ar « Fals-Vretoned » a heulie e roudoù.

34

Pluenn Kaledvoulc'h a oa e gwirionez ur c'hleze : kalet-e-voulc'h 'lec'h e skoe.

A-du gant Kaledvoulc'h evit sevel banniel ar Reveulzi enep d' ar Markiz hag e lez, e oa ar Varzhed oberiant o doa sturioù K. V. B. etre o daouarn, o vezañ ma oant holl tra pe dra er c'hevrennoù, hemañ rener, henezh sekretour, henhont teñzorer. Leon ar Berr, Loeiz Herrieu, Andreu Mellag, Jos Parker, Yann Choleau, Herri de la Guichardiére, Yann Morvran-Goblet, Alfred Lajat, ar re goshañ en ur ger, a reas komplidi evit distroadañ an Estourbeillon, ha lakaat Jos Parker (Kloareg Kerne), en e blas evel Pennrener.

War zigarez kendalc'h Lokronan-Leon en em rojont holl rendez-vous evit « adneveziñ » spered K. V. B. a riskle, gouez dezho, e bugaleajoù hag e babicherezh.

Just a-walc'h ar bloaz-se e oa ur votadeg da vezañ evit dilenn izili ar burevioù bras ha bihan. Un digarez brav da skubañ ar Markiz hag an Doktor René Le Fur, mezeg brudet e Pariz, en doa krouet ur c'hazetenn anvet **Le Breton de Paris**, ha ne vanke ket da c'hoapaat al « lidoù drouizek » seul gwech ma kave tu.

Ar Varzhed o doa graet ar gont eus ar voterien a oa er C'hendalc'h : an eil da gas egile, o dije, gouez dezho, an darn-vuiañ.

Mes kontet o doa hep o mestr. An Estourbeillon a oa ur gourener : gonezet en doa meur a viktor war e adversourien bolitik. Depute oa pemzek vloaz oa, ne oa ket un diskard. E skouarn a oa tanav : klevet en doa dre e spierien e oad o prientiñ un taol divalav en e enep, ha fellout a reas dezhañ en em zifenn, ha kousted a goustfe gonid ar barti.

Derc'hent ar votadeg, e feurmas div pe deir gwetur-dre-dan e Sant-Renan, hag e kasas un nebeut mignoned feal dezhañ da ober tro ar c'hanton da welout an denjentil en o manerioù. O c'hefridi a oa lavaret dezho :

- « Tud disakr, difeiz, gwarizius, a c'hoanta diskar al labour vat graet gant ar Markiz, ha gwerzhañ Kevredigezh Vreizh d' ar Republik. Tud a netra a fell dezho kemerout lec'h difennourien an Urzh vat, ar Relijion gristen, hag ar Frankizoù Kozh. Lakait eta hoc'h anv er Gevredigezh, ha deuit da votiñ arc'hoazh

a-du gant an Estourbeillon... »

D' abardaez-noz, ar Gabalerien a zistroas da Lokronan-Leon gant div zousenn bennak a « izili nevez », gonezet ganto. An div zousenn-se a zeuas da votiñ hag a lakaas biz ar valañs da vrallañ a-du gant an Estourbeillon hag e holl geneiled. E-lec'h gonit, ar Varzhed a oa trec'het war bep tachenn. O c'handided a chomas o revr war ar plankou, evel ma leverer e Kallag.

35

Gant ar vezh, n' o doa nemet mont kuit.

Ar pezh a rejont.

Reiñ a rejont o dilez, hag a-barzh kimiadiñ digant Sant-Renan, e tivizjont en em vodañ da sevel ur Gevredigezh nevez.

Yann Choleau a ginnigas dezho dont da Roazhon.

E Roazhon eta en em gavjont dizale, evit sevel Unvaniezh Arvor (Fédération Régionaliste de Bretagne).

* * *

GORSEDD SANT-WELTAZ KARNOET

Hemañ 'voe ar c'hentañ gorsedd digor da vout graet war ar maez dirak kouerien nemetken, en ur vro diaes en em gaout enni, nemet war droad pe gant kirri.

Tosenn Sant-Weltaz a zo ur sav-douar ront a 5 metrad uhelder hag a 15 metrad led, savet gant Argoadiz Kozh war lein roz Kenec'h-Kilheg, e parrez Karnoed. Ur c'hreñvlec'h hag ur gedlec'h war un dro. Diwar e c'horre, e weler « pemzek tour » hag un dremmwel hir-hir, dreist-holl war-zu ar C'huzh-Heol hag ar C'hreisteiz.

War ziribañs ar roz, tu Kreisteiz, an Tad Renan Jouan, oberour un Istor parrez Karnoed en deus dizoloet ur c'hamp Roman pevarc'horniek ; e vogerioù douar a zo gwelapl c'hoazh.

Pa oan krennard e Karnoed, ma brasañ levnez a oa mont da bourmen da Sant-Weltaz, da bignat war an dosenn, hag eno huñvreal ha barzhata. (Gwelit ma Barzas, levr I.)

Chapel ar Sant, savet en ur wantenn vodennek, e traoñ ar roz, a zo miret mat : bras eo evel un iliz : he zour betek a zo mistr ha dantelezh.

El lec'h peoc'hus-se e vez ur pardon bras, da sul diwezhañ miz Gwengolo, hag ur pardon bihan, da sul diwezhañ miz Genver.

Ober ur Gorsedd Digor dindan paeroniezh Gweltaz ar Fur, barzh, skrivagner, prezeger hollgeltiek, a oa pell a oa ma soñj. Met ret e oa kaout koñje ar Maer hag ar Person...

Ar Person, an Aotrou Olichon, a roas e asantamant raktal.

Diaesoc'h e vije din dont a-benn eus an Ao. Gwilhom Couillec, ar Maer, rak ne oamp ket eus ar memes kostezenn; gwashoc'h 'zo : e gazetenn Ar Bobl e oa bet moulet pennadoù flemmus en e enep, evel **Lizer digor d'ar c'homper Gwillaouik, marc'hadour mil-draik, ha mer war barroz Kerneud.**

36

Met Gwilhom (evelse veze anvet) ne oa ket un den da zerc'hel kas na da ziskouez vis-fall ; a-hend-all, ne zivezve na noz na deiz. Holl aferioù ar barrez a veze diluziet dirak ur voutailhad, ar gwer en dorn. Alies, e rae tro ar bourk, evel ma levered, gant un dihan dirak pep bod uhel varr ; an holl evelse a

veze lakaet « au courant » eus ar pezh a dremene, ha pep ostiz 'drek e gontouer, a roe e ali da Wilhom war ar pezh a gave mat e vije graet.

Dre ma anavezen ar jeu, ec'h is da weladenniñ « Gwilhom » hag e kontis dezhañ ma menoz ober ur « gouel poblus » e Sant-Weltaz ur gouel hag a zedennfe ur bern tud, hag a zegasfe arc'hant e godelloù ar varc'hadourien boeson.

War blasenn ar chapel, e vije graet ur sort « pardon » gant teltennoù e kavjed da zebriñ ha da evañ, ennañ stalioù bitrakoù, stalioù frouezh, gwastell, hag all.

Dont a raje binioùioù ganimp hag ar Yaouankizoù a zañsfe.

« Gwilhom » a vije anvet « Rener a Enor ».

Ar Maer ne chomas ket da varc'hata. Ar menoz a blije dezhañ. Gallout a raen fiziout warnañ.

Un nebeut troiadoù en ostalerioù a siellas an emglev.

(Envorennoù Taldir a zo chomet diechu.)

DIBENN

Istor lennegezh vrezhonek an amzer-vremañ

gant ABEOZEN

(Kendalc'h)

II. - GWALARN - AR STROLLAD KENTAÑ

Pa zeuas eus ar wask niverenn gentañ GWALARN, e miz Meurzh 1925, n' oa anezhi nemet ur stagadenn drimiziek d' ar gelaouenn BREIZ ATAO. N' oa ket niverus strollad kentañ he skrivagnerien. Pa vo bet meneget Roparz Hemon, Youenn DREZEN, Olier Ap Suliau, Abeozen, Frañsez VALLEE, Jakez KERRIEN, Yann-Eozen JARL, ha diwezhatoc'hik Jakez RIOU ha Kerverziou e vezo klok ar roll pe dost.

Ur pennad embannet e GWALARN, Nevez-Amzer 1930, Nn 21, dindan an talbenn Pemp Bloavezh e Lennegezh Vreizh (1925-1929) a varn en un doare resis-kenañ labour ar strollad kentañ.

Krouet oa bet GWALARN e sell al lennegezh. An diouer a amzer vak a strisa an dachenn ma pleustr warni ar strollad kentañ. Dalc'het gant o micher e-doug an deiz, ne skriv ar baotred yaouank-se nemet goude o devezhiad labour. Setu perak e vo brasoc'h lodenn an troidigezhioù. « Da unan n' en defe tra all da ober e vefe aesoc'h marteze sevel oberoù dioutañ e-unan. D' ar re o deus ur vicher eo aesoc'h treiñ. Bihanoc'h ar skuizhder, bihanoc'h an dispign a nerzh-empenn, peogwir n' en deus an troer preder ebet nemet gant ar yezh. »

Buan eo bet, skoilhet labour skrivagnerien WALARN. Bihan niver al lennerien. Bihan an arc'hant e kef ar rener. Ret oa eta klask kreskiñ niver al lennerien ha, da gentañ-penn. chom hep feukañ ar re a oa deut d' ar gelaouenn, da virout na dafent kuit. Setu perak ez eo deut GWALARN da vezañ dizale sellusoc'h e-keñver an oberoù moulet ganti. Ur pal lennegel dieub a oa dientent da lod bras eus ar goumananterien. « Alies eo c'hoarvezet (ganto) droukkemer ar goaperezh evit gwirionez an Aviel - un Aviel iskis a-walc'h. En doare m' en deus bet an oberour, war a lavar, lizhiri spontet - ha spontus. Kollet en deus GWALARN nospet koumananter netra nemet en abeg da zanevelloù (e rener). Petra a zisplegont ? Nebeut a dra. Tarzhet int peurliesañ diouzh ur menoz trumm. Dibreder int. An danvez a zo enno n'eo nemet danvez un huñvre. Danevelloù int, ma karer, ha, ma karer, barzhonegoù. »

38

Ar pezh a zo c'hoarvezet gant ar rener en deus pouezet ivez war e genlabourerien.

Edont stag ouzh ar rod. Gounit lennerien, da lavarout eo stourm evit ar yezh ha neket hepken, evel ma soñje dezho da gentañ, aozañ ul lennegezh a-vremañ. Kemmet he deus eta ar gelaouenn he liv a-hed an hent. Stagget he doa gant embannadurioù er-maez eus ar gelaouenn. Distag, da skouer, eo bet embannet **Roc'h Toull** gant Jakez KERRIEN, **Mentoniez** gant Kerjean, levrennoù kentañ **Istor ar Bed** gant Meven Mordiern; **Prometheus Ereet** hag **Ar Bersed** gant Youenn DREZEN, hag all. An diouer a arc'hant a redio, a-raok pell, ar rener da reiñ bod er gelaouenn d' an holl labourioù a vije bet mat o embann en diavaez, dre n' oant ket graet evit al lennerien o klask didu d' o spered kentoc'h eget studi. Fetisoc'h, dic'hoarzh zoken ez eo deut GWALARN da vezañ gant an amzer ha setu ma teue da blijout nebeutoc'h d' ar rumm-mañ-rumm. Ne deo ket aes ar vuhez d' ur gelaouenn he deus ranket skeiñ war un dro da balioù re zisheñvel en holl ha bepred o koll diouzh un tu an dachenn a c'hounez diouzh un tu all. Kenderc'hel a raio koulskoude gant an hent digoret, en desped d' an eurioù arvarus ma vo dare ar rener da gouezhañ dindan ar samm re bonner. Ur burzhud e gwirionez eo bet buhez GWALARN, ur

burzхуд, miret buhez ennañ gant bolontez didrec'hus un den e-unan-penn. Rak, mar deo chomet feal dezhañ e genlabourerien, war ar rener eo o deus pouezet an holl brederioù stag ouzh buhez ur gelaouenn.

173) Roparz Hemon. - Ne deo ket hepken dre m' eo ar rener, avat, e tleer stagañ gant Roparz Henan pa studier oberoù Strollad GWALARN. Eñ eo ivez, hep mar ebet, hor skrivagner puilhañ en amzer vremañ hag an hini m' eo ar muiañ liesdoare e oberoù.

Loeiz-Paol NEMO a zo ganet e Brest d' an 18 a viz Du 1900. Kaset en deus da benn e studi e Lise Brest da gentañ, e Skol-Veur Leeds, Bro-Saoz, hag er « Sorbonne » ha Kelenner eo bet war ar saozneg e lise Brest abaoe 1925, lakaomp betek 1939, p' eo aet d' ar brezel.

E dad a oa anezhañ un ijinour eus Savadurioù ar Verdeadurezh Brezel. Setu perak e veze an tiegezh o chom gwech e Toulon, gwech e Brest.

39

Hep bezañ dic'houzvez krenn eus ar brezhoneg ez vihanik, ur wech krennard eo e stagas Roparz Hemon da vat gant studi e yezh vroadel hag abaoe e c'heller lavarout en deus gouestlet dezhi an holl amzer lezet vak gant e labour kelenner.

Kentañ gwech m' hon eus lennet e anv-pluenn e voe e 1923, er gelaouenn BREIZ ATAO, e traoñ un doare kontadennig, **An Dasprener**. A-c'houdevezh hon eus bet ar blijadur da lenn, en ur zivankañ an amprouennoù evit ar gelaouenn, lod kaer eus ar pennadoù a zo bet dastumet, e 1931, el levr, **Ur Breizhad oc'h adkavout Breizh**.

Dibar eo talvoudegezh an dastumad-se en Emsav yaouank. Lakaet o deus ar pennadoù-se meur a hini da adkavout hent kollet e ouenn, gant skoazell ar menozioù spis, didouellus, ken ez int didruez a-wechoù, displeget penn-da-benn d' al levr diwar-benn kudennoù adsavidigezh Vreizh.

Evit jutent e oberoù ret derc'hel soñj ez eo Roparz Hemon da gentañ penn ur galon gizidik, reizhet, avat, gant un empenn sklaer hag ur youl didrec'hus..

E bennadoù skridvarnouriezh, dizamant marteze, bepred poellek avat, skignet a-hed naontek vloaz buhez e gelaouenn, a zo a bouez bras drezo o-unan, dre ma 'z int moarvat derou gwirion ar skridvarnouriezh e brezhoneg, hag ouzhpenn dre ma roont deomp an diskleriadurioù retañ da gompren oberoù Roparz Hemon e-unan.

« N' omp ket eus ar re a gred e tleer sevel pep labour lennegezh er-maez a bep kredenn bolitikel hag a bep feiz. Tevel war se eo peurliesañ daskoriñ d' an netra un darn eus ar Me ; troc'hañ ha mac'hagnañ an ene n' eo ken. Hogen lavarout e tle bezañ ar feiz-mañ-feiz pe ar gredenn-mañ-kredenn ar Feiz hag ar Gredenn n' eus nemeto, setu un dra na raimp biken. Gant ma sello skridoù hor c'henlabourerien ouzh al lennegezh ne c'houlennimp netra muioc'h diganto. »

Setu ar pezh a lavare e derou niverenn gentañ GWALARN, e miz Meurzh 1925. Ne gredomp ket en defe kemmet e venozioù abaoe. Mar deo deut da vezañ sellusoc'h dizale ouzh e oberoù e-unan hag ouzh oberoù ar re all, eo hepken dre m' eo bet harzet gant lod eus e lennerien da genderc'hel gant an hent en doa dibabet evel an hini gwellañ war dachenn al lennegezh, nemet fellet en deus dezhañ a-raok pep tra derc'hel e gelaouenn e buhez, en ur aberziñ kement a c'helle talvezout dezhi ar marv, hogen ne deo ket a galon laouen en deus graet kement-se.

40

Ouzhpenn ugent kontadenn pe gentoc'h danevell en deus embannet Roparz Hemon. Lavaret hon eus uheloc'hik peceurt abegoù a zo bet kavet enno. Dipitus eo, pa eo bet moarvat harzet an oberour gant spered re strizh lod-kaer eus e lennerien da reiñ dimp muioc'h anezho. Mat e ve bet soñjal koulskoude ne oant ket un aviel e doare ebet, hogen frouezh ur spered den o verat danvezioù liesdoare ar vuhez hag o kavout an tu da vezañ fromet ganto ha da fromañ ar re all, hag ivez o kavout abeg da vouc'hoarzhin, kriz a-walc'h a-wechoù, a-zivout trubuilhoù mab-den. D' hor meno ar maout a zo chomet e-touez e gontadennoù gant

Traonienn Skeud ar Marv ha **Santez Dahud**. Nemet evit bezañ plijet gant seurt danevelloù ez eo ret na ve ket ar goaperezh hag ar fent emzalc'hus gerioù goullo evit al lenner.

Liv kêr Vrest a zo d' an dastumad strollet dindan an anv **Kleier Eured**, GWALARN, Nn 72, Du 1934, adembannet gant pemp kontadenn all e Mezheven 1943. Gant al levr-mal setu kêr vras Breizh-Izel degemeret el lennegezh vrezhonek. Kavout a reomp amañ Brest, gwelet gant un den ne deo ket deut diwar ar maez da c'hounit eno e voued, pa n' helle ober a-hend-all, hogen gant ur Brestad.

« Skrivañ ur romant a zo hir. Mar deo da vihanañ ur gwir romant, evel ne weler mui nemeur anezho e nep yezh, » a lennomp e GWALARN, Nn 21, p. 4. Roparz Hemon a oa den da sevel deomp romantoù. Mar n' en deus ket graet, ez eo dre ziouer amzer, sur a-walc'h. Roet en deus deomp koulskoude **An Aotrou Bimbochet e Breizh** hag ul lodenn eus **Ar Vugale Fall**, manet diechu. **An Aotrou Bimbochet** a zo bet « an oberenn gentañ o sunañ he sapr rag-eeun diouzh an Emsav Breizhek, kentañ adskeud an dihun broadel e meleour al lennegezh. **Ar Vugale Fall** a zo muioc'h c'hoazh stag ouzh kig ha gwad an Emsav, o vezañ n' eo nemet istor romantet ar rummad tud yaouank a grouas hag a heulias er bloavezhioù kentañ strollad an Emrenerien ».

Pleustret en deus ivez Roparz Hemon tachenn ar c'hoariva. Studiet en deus pizh oberoù YEATS, SYNGE ha Lady GREGORY, ha fellet en deus dezhañ reiñ dimp pezhioù kar d' ar re o deus graet berzh e teatr an Abati e Dulenn, da lavarout eo pezhioù berr, enno nebeut a dud hag aes da c'hoari war n' eus forzh pe leur.

« N' hor bezo biken, » a lavare-eñ en ur rentañ-kont eus **ar Chiminaou** gant Dir-na-dor, e GWALARN, Nn 4, Goañv 1925, « pezhioù mat en Breizh, mar n' omp ket evit meizañ ar pezh o deus meizet SYNGE ha YEATS en Iwerzhon : e tle bepred en ur pezh berr e komz-plaen ar fetised bezañ en he brasañ. Da lavarout eo : ne dle bezañ nag un den, nag ur gevrenn, nag ur ger ouzhpenn an dud, ar c'hevrennoù hag ar gerioù rekis. Da lavarout eo e ranker benañ ha diskourrañ ur pezh-c'hoari e pep giz, ken na chom ennañ nemet ar pep reañ, ma c'hell ar sapr redek drezañ fonnus ha kreñv. »

41

Setu war peseurt patrom ez eo bet steuet pezhioù-c'hoari Roparz Hemon : **Lina**, GWALARN, Nn 5, 1925 ; **Un Den a Netra**, Nn 9, 1927 ; **An Tan e Ti Kernaspreden**, Nn 37, Kerzu 1931 ; **Dour ar C'halvar**, Nn 103, Mezheven 1937 ; **Meurlarjez** ha **Fest al Leue Lart**, Nn 114, Mae 1938 ; **Ur Bugel a zo ganet**, Nn 145-146, Genver-C'hwevrer 1942.

Bepred e tegas Roparz Hemon e danvez e bezhioù-c'hoari un elfenn espar a zeu da gemmañ red an darvoudoù. E c'hell bezañ an elfenn-se unan eus rolloù ar c'hoari : Jelvestr e **Lina** ; Anna en **Tan e Ti Kernaspreden** ; ar Micherour en **Den a Netra** ; ar Voereb el **Leue Lart** ; Meurlarjez er pezh-c'hoari a zoug e anv ; Lola en **Ur Bugel a zo ganet** ; pe ar Feunteun Vurzhudus e **Dour ar C'halvar**. N' eus nemet ar pezh-c'hoari-mañ a zo savet e gwerzennoù, anezhañ ur mister war batrom ar pezhioù a zo manet eus c'hoariva hon amzer gozh, nemet ez eo berroc'h eveljust ha disheñvel ivez dre ar spered. **Ur Bugel a zo ganet**, ha dezhañ bezañ e komz-plaen, a zo kar-nes d' ar pezh-c'hoari uheloc'h, paneve nemet en abeg da dro-spered Lola.

Ur pezh-c'hoari-skingomz e teir zaolenn, **Roperzh Emmet**, a zo bet embannet e Nn 165 GWALARN, Mae 1944. Displeget eo bet evit ar wech kentañ e Roazhon-Breizh, d' an 22 a viz Ebrel 1944. An danvez a zo tennet en dro-mañ eus istor Iwerzhon (s. n. 265).

C'hoarierien eo o deus graet diouer betek hen da c'hoariva Roparz Hemon. N' eo ket e bezhioù-c'hoari diouzh doare ar patronajoù. Ranket en deus an oberour gortoz e ve digoret frank d' ar brezhoneg tachenn ar skingomz. Abaoe Genver 1941, avat, int bet skignet holl gant Roazhon-Breizh. Deut int d' ar vuhez a-benn ar fin. Rak pezhioù-c'hoari int da vezañ diskleriet ha nann hepken da vezañ lennet. N' eus nemet war al leurenn ma c'hell ur pezh-c'hoari bezañ

barnet reizh. Seul vui ma vezo displeget pezhioù-c'hoari Roparz Hemon, seul vuioc'h e vezo merzet o zalvoudegezh don. Mar ne c'heller ket lavarout diwar o fenn « Diwar c'hoari kelenn », evel ma reer a-zivout pezhioù-c'hoari ar veleien, ne dint ket koulskoude c'hoarielloù dibreder. Ur ster a zo dezho ha, mar ne dint ket sujet-strizh d' ur gredenn, e komprenomp diaes a-walc'h e ve santet enno, evel ma kred da lod, un enebiezh bennak ouzh ar feiz-mañ-feiz. Kened a zo enno da nebeutañ ha gwazh a se da neb a zo dall a-walc'h da chom hep merzout ar gened-se.

Evel barzh e talc'h Roparz Hemon ul lec'h dezhañ e-unan en Emsav. Lod ne reont ket nemeur a stad eus e varzhoniezh. Ne gomprenont ket e varzhonegoù, hag, e gwirionez, ne dint ket peurvuiañ aes-aes. « Didener int, pell diouzh ar romantelezh, re empennel hervez barn meur a unan... Klask a ra peurliesañ (ar barzh) ur stumm resis, ur frammadur start diazezet war fetisted ar pouez-mouezh hag ar glotenn... »

42

Sed amañ roll e varzhonegoù : 1) Kanenn Vrezel, BREIZ ATAO, 1925 ; 2) Kanenn Veur ar Poblou Gwasket, BREIZ ATAO, 1925 ; 3) Div Ganenn Kañv, GW., 3, 1925 ; 4) Barzhoneg evit Kreiz ar Bloaz, GW., 4, 1925 ; GW., 53, 1935 ; 5) Listri Noz, GW., 6, 1926 ; GW., 53, 1935 ; 6) Mintin, GW., 7, 1926 ; 53, 1935 ; 7) Kimiad, GW., 7, 1926 ; 53, 1935 ; 8) Kanaouenn, GW., 8, 1926 ; 9) Buhez, GW., 11, 1927 ; 10) Skeudenn, GW., 11, 1927 ; 11) Kimiad, GW., 17, 1929 ; 12) D'ur Plac'h Yaouank o Kutuilh Bleunioù da Serr-Notz, GW., 22, 1930 ; 13) Maronad, GW., 31, 1931 ; 14) Pirc'hirin ar Mor, GW., 53, 1935 ; 15) An Huñvre Gozh, GW., 53, 1935 ; 16) Kasadenn, GW., 66, 1934 ; 17) Al Lestr, GW., 66, 1934 ; 18) Al Liorzh Espar, GW., 123, 1939 ; 19) Ar Rozenn Du, GW., 127, 1939 ; 20) Peredur (darnig), GW., 128-9, 1939 ; 21) Lazhadenn Unvab Aife, GW., 150-1, 1942.

An holl bezhioù-se, nemet an n. 2, unan eus 3, an n. 7, an n. 8 hag an n. 20, gant daou bezh all diembann, Ar C'helou Mat, Gwarizi Vras Emer a zo aet da sevel an dastumad kaer, **Barzhonegoù**, Brest, SKRIDOU BREIZH, 1943 (peurvoulet Ebrel 1944), ha distrujet gant dismantr Brest an darn vrasañ eus ar mouladur en hañv-se.

Kel lies-doare hag e oberoù diwar e zanvez e-unan ez eo troidigezhioù Roparz Hemon. Lakaet en deus e brezhoneg un dibab eus henzanevelloù Iwerzhon : **Diarmuid ha Grainne**, GWALARN, Nnoù 1 da 5 ; **Tonkadur Bugale Usnac'h**, n. 11, 1927 ; **Tonkadur Bugale Tuireann**, Nnoù 6 ha 7, 1926 ; **Tonkadur Bugale Lir**, n. 10, 1927. An teir danevell-se a zo bet adembannet dindan an anv, **Tri Glac'har an Danevellañ**, e STERENN, n. 12, Kerzu 1941. **Skrapadeg Saout Koualnge** a zo bet moulet e GWALARN, Nnoù 13 da 27, 1928-31 ; **Gweledigezh Mab Konglin**, en n. 47, 1932 ; **Konlla Blev Melen hag ar Gorriganes**, n. 132, 1941 ; **Karantez Fraec'h ha Findabair**, n. 148-9, 1942 ; **Liadain ha Cuirithir**, n. 140-3, 1941. Embannet en deus skrid ar mister kernevek **Seth hag Adam** gant un droidigezh e brezhoneg en n. 119, 1938.

Lakaet en deus ivez Roparz Hemon da dalvezout e anaoudegezh eus ar saozneg evit reiñ deomp e brezhoneg **Fostus an Doktor Daonet** gant Kristofer MARLOWE, en n. 67 ; adembannet e **C'hoariva Brezhonek**, Brest, SKRIDOU BREIZH, 1944 ; **Makbez** gant SHAKESPEARE, e STERENN, n. 3, Meurzh 1941 ; **Nevez Amzer** gant MURRAY, e GWALARN, n. 11, 1927 ; **Ar C'houmoul a Dec'h** gant A. O. ROBERTS, n. 2, 1925 ; advoulet en n. 136, 1941. Troet en deus ivez barzhonegoù gant W. BLAKE, en n. 12, 1927 ; gant Richard CRASHAW, en n. 114, 1938 ; gant Francis THOMPSON, en n. 150, 1942.

43

Dibabet en deus ouzhpenn oberoù e meur a lennegezh all : eus hini Rusia, **Ar Plac'h Dianav** gant A. BLOK, n. 18, 1929 ; **Kontadennoù** gant POUCHKIN, en Nnoù 16 ha 85, 1928-1935 ; **En Tu-hont da Gêr**, gant A. NOVIKOV-PRIBOI, n. 17, 1929 ; **Hailhevod an Aotrou Doue** gant CERVANTES (Bro-Spagn), n. 148-9, 1942 ; **Notennoù ar Goubenner** gant SEI CHONAGON, n. 36, 1941 ; kontadennoù gant ANDERSEN, n. 106, 1937 : **Plac'hig Vihan ar Mor**, embannadurioù GWALARN 1928 ; kontadennoù gant ar breudeur GRIMM, **Marvailhoù an Oaled**, n. 61, 1933 ; **An Den a gollas e Skeud** gant Adalbert von CHAMISSO, n. 73, 1934. Displeget en deus e brezhoneg ar **Pesk Aour**

gant Paol FEVAL, en ARVOR. Nnoù 1 da 51, embannet da c'houde, e 1942, en ul levr skeudennaouet gant MICHEAU-VERNEZ, Roazhon, Ti-Moulerezh-Kreiz.

Ne vezo ket klok ar roll-mañ zoken p' hon devezo meneget ar c'hontadennoù embannet gant Roparz Hemon en ARVOR, eus 1941 da 1943 hag e GWALARN en hevelep bloavezhioù. Unan anezho dreist-holl a zo kaer-dreist, **Beajour ar Goañv**, GW., 159, Du 1943.

N' hellomp ket kennebeut tremen hep lavarout ur ger eus ar yezhoniour. Ne deo ket lennegezh ar yezhoniezh, gwir eo, hogen n' en dije ket savet Roparz Hemon an oberoù en deus savet na skrivet ar brezhoneg a zeu dindan e bluenn, ma ne vije ket bet ur yezhoniour. Aozet en deus yezhadurioù, e galleg hag e brezhoneg, levrioù-dorn da zeskiñ hor yezh, geriadurioù, hag all. Bet eo bet hag e kendalc'h da vezañ an hini a zo sterniet diwar ret ouzh daou labour a zeu d' en em harpañ : krouiñ ul lennegezh a vremañ ha pourchas d' e genvroiz war un dro binvioù evit gallout tañva al lennegezh-se.

174) Abeozen. - Yann-Frañsez-Mari ELIES a zo ganet d'an 22 a viz C'hwevrer 1896, en Dre-Nevez, tost da Wimilio. Bevet en deus e vloavezhioù bugel e Landivizio. E skol ar frered en deus bet da vestr ha diwezhatoc'h, e 1914, da genvreur, Klaoda 'r PRAD, ha diarvar ez eo evitañ levezon ar brezhoneger kalonek-se war hentadur e vuhez. Mont a reas ELIES war e studi da Gloerdi Bihan Eskopti Kemper, a oa deut d' an ampcent da chom el Likez e Kerfeunteun, stok ouzh Kemper, etre 1907 ha 1914. E soñj a oa neuze mont da veleg. Galvet d' an arme, e miz Ebrel 1915, e renas ar vuhez soudard war an talbenn er 411vet Rejimant Troadeien, etre Meurzh 1916 hag an 11 a viz Du 1918. Disoudardet e Gwengolo 1919, kemmet gantañ e soñj kentañ e-pad ar brezel, ez eas da Bariz da genderc'hel gant e studi. Mestr-studi e voe e-pad bloaz er Skol Gerson, Straed ar Bloumenn. Aotreeg e 1920, e teuas da is-kelenner e skolaj Dinan hag e 1922 e lise Sant-Brieg. Eno eo e reas anaoudegezh gant Frañsez VALLEE ha Meven Mordiern. Anvet e lise Roazhon e Meurzh 1923 evit gallout resev kentelioù ar Skol-Veur, e stagas da zaremprediñ paotred BREIZ ATAO. Skrivañ a reas en o c'helaouenn e brezhoneg hag e galleg. Aliet gant Jorj DOTTIN, e kasas en-dro e studioù keltiek war un dro gant e studioù klasel. Desket en deus kembraeg ha brezhoneg-krenn gant Per ar ROUZ. E 1927, e voe anvet da gelenner e lise Sant-Brieg hag eno en deus bevet betek miz Du 1940.

44

Abeozen en doa kemeret da anv-pluenn evit sinañ e bennadoù e BREIZ ATAO. Pa voe krouet GWALARN e miz Meurzh 1925, e stagas da lakaat e brezhoneg ar **Mabinogion**. Boulc'het e niverenn gentañ GWALARN, ne deo bet kaset al labour hir-se da benn gantañ nemet en n. 123, e miz C'hwevrer 1939, gant troidigezh **Peredur Mab Evrog**. A bouez ez eo bet al labour-se evit an troer e-unan kenkoulz hag evit ar re o deus e lennet.

« Troidigezhioù Abeozen diwar ar c'hembraeg kozh a zaskor d' ar brezhoneg kaleted, berded hag eeunded kollet abaoe pell 'zo, » a lavarer e GWALARN, n. 21, p. 7.

Troet en deus a-hend-all diwar ar c'hembraeg-bremañ **Envorennoù Twm o'r Nant**, GWALARN, Nnoù 10, 11, 12 ; **Tir-na-N-Og** gant GWYNN JONES, en n. 138, 1941 ; ur studiaden diwar-benn Dik Trevan gant an hevelep skrivagner hag ur gontadenn gant Dik Trevan : **Mont d' ar Gêr**, en n. 144.

Savet en deus ur **Yezhadur Berr ar C'hembraeg**, n. 51, C'hwevrer 1933, advoulet gant SKRIDOU BREIZH e 1942. Da vont da heul al levr-se en doa kempennet un dastumad Lennadurioù Kembraek, GWALARN, n. 108, Du 1937. Dornskrid an eil lodenn eus al labour-mañ a zo bet pulluc'het p' eo bet distrujet ti Roparz Hemon gant bombezadeg Brest d' ar 15 a viz Ebrel 1941.

STERENN he deus embannet en n. 7 **Yezhadur ar Brezhoneg-Krenn** ; en n. 9, **Skridoù Brezhonek-Krenn** ; en n. 10-11, **Geriadurig Brezhonek-Krenn**.

E GWALARN n. 15, Diskar-Amzer 1928, en deus staget Abeozen da embann ar c'hontadennoù-brezel a zo bet strollet, e 1942, gant SKRIDOU BREIZH, dindan an anv **Dremm an Ankou**.

45

« Ne lennan ket gant plijadur kontadennoù Abeozen, a lavarer e GWALARN, n. 21. Re a wirionez a zo enno. Evel meur a zen, gwelloc'h ganin bezañ fromet gant darvoudoù ijinet eget gant darvoudoù gwirion. Hogen e-keñver al lennegezh e rankan barn, ha n' eo ket em c'heñver-me. Pa vo kenstrollet en ul levr **Marvailhoù an Drailh** (setu an anv a dlie bezañ roet dezho da gentañ), ul levr brezel hor bezo e brezhoneg da lakaat - r' am digarezo neb a skrijo ! - e-kichen levr Bleimor. »

Ne deo ket gwir eñvorennoù ar c'hontadennoù-se. Ar faltazi he deus he lod en unan bennak anezho, en div ziwezhañ da skouer.

E 1943, SKRIDOU BREIZH o deus embannet **Hervelina Geraouell**, romant gant Abeozen. « Un istorig a garantez, » ne deo ken, hervez Roparz Hemon, en ARVOR, n. 129, « re verr marteze da vezañ anvet ur romant, daoust d' ar pennadoù kaer ha fonnus a zo ennañ, hag a c'hallje bezañ bet darn eus ur romant. »

Petra bennak a zo da soñjal a-hend-all diwar o fenn, an daou levr-se a zo enno war un dro garvder ha dousder ur galon re gizidik moarvat da dizhout ur c'hempouez da badout. Hevelep tra a c'hellfer lavarout diwar-benn **Kondle ar Flamm**, GWALARN, n. 9, hag **Eros hag an Ankou**, GALV, n. 5-7, 1941, hag an heuliadoù barzhonegoù **Hekleviou**, GALV, n. 8-9, 1942 ; **Kanaouennoù da Vivien**, **Finvez Osian**, GWALARN, Nnoù 160 ha 162. Danvez sonerezh, setu ar pezh a zo, a-raok pep tra eus barzhonegoù Abeozen. Graet int bet « un tammig prim » marteze, evel ma lavar Roparz Hemon, evit tonioù savet gant Jef PENVEN pe donioù keltiek kempennet gant Andreu VALLEE.

Ar skingomz eo c'hoazh he deus broudet Abeozen da gempenn e doare ur pezh-c'hoari **Seizenn Eured** ar **Barzaz-Breiz**, GALV, n. 10-11, 1942 ; **Janedig ar Rouz**, GWALARN, n. 150-151, 1942, hag ar c'hoariganig **Marivonig**, aozet sonerezh evitañ gant Andreu VALLEE. Ar pezhioù-se a zo « enno barzhoniezh dreist-holl » da veno Roparz Hemon, ARVOR, n. 129.

Evit ar vugale en deus Abeozen kenlabouret gant Yann SOHIER da sevel skridoù **Me a Lenno**. Evito ivez an istorioù berr a zo anezho ar **Marvailhoù Loened**, GWALARN, n. 69. adembannet, kresket o niver ha skeudennaouet gant Fañch ELIES, mab henañ an oberour, e 1943, gant SKRIDOU BREIZH.

Savet en deus Abeozen pennadoù evit BREIZ ATAO betek 1928 ; evit **War Zao**, kelaouenn ar Vretoned Dieub, etre 1937 ha 1939 ; evit an HEURE BRETONNE, 1940 (s. n. 255).

46

175) Youenn DREZEN. - Ganet e voe Youenn DREZEN e Pont 'n Abad d' ar 14 a viz Gwengolo 1899. Deskiñ a reas lenn ha skrivañ, ar galleg eveljust, e skol Sant-Gabriel. D'ar 14 a Vezheven 1911 ez eas da Vro-Spagn gant ur strollad paotredigoù all, bet dibabet e skolioù kristen Bro-Gerne gant an Tad Eujen SAMBILLE, a genvreuriezh Kalonoù-Sakr Picpus.

C'hwec'h vloaz e chomas pell eus e vro. Tremet a reas lod eus an amzer-se en Ondarribia (Fontarabie ar C'hallaoued) hag, adal 1916, e Miranda-de-Ebro, e Kastilha Gozh. Dont a reas d' ar gêr d' an 19 a viz Meurzh 1917.

« N' en em gaven, » emezañ en e studiaden, **E Koun Jakez Riou**, GWALARN, n. 110-111, 1938, « douget na galvet, e doare ebet, d' ar velegiezh. Ha taget e oan, a-benn neuze, gant preñv ar brezhoneg. Dezhañ e felle din gouestlañ va buhez. »

Ne deo ket diwar ar brezhoneg, avat, e c'helled bevañ e 1917. Ret-mat oa ober un dra bennak all da c'hounit ar bara hag ez eas Youenn da labourat e ti ur marc'hadour gwin er Gelveneg.

E 1920, e teuas da dremen e amzer soudard e Roazhon er 505vet Rejimant Kirri-Emgann. Anaoudegezh en doa graet a-benn neuze gant paotred BREIZ ATAO, e Pont 'n Abad end-eeun ha ne zeuas nemet stankoc'h an darempredoù-se e-pad ma chomas e Roazhon. Sebezet-krenn eo bet Youenn kentañ gwech ma tegouezhas gant Morvan MARCHAL, Olier MORDREL, Frañsez DEBEAUVAIS hag all. E lec'h an dud en o oad-gour a grede dezhañ gwelout, n' edont dres nemet yaouankizoù eveltañ.

E 1924, d' an 18 a viz C'hwevrer, graet gantañ etretant meur a vicher all, luc'hskeudenner da skouer, e teuas da implijad er « Courrier du Finistère ». Setu a oa tostoc'h ouzh preder e vuhez. Eno da nebeutañ e rae war dro ar brezhoneg. E Meurzh 1925 e teuas er-maez kentañ niverenn WALARN hag enni e teraou an droidigezh savet gant Youenn DREZEN eus **Ar Skarbouklenn Vras**, un danevell eus ar skrivagner saoz amerikant Nathaniel HAWTHORNE.

Mennadoù niverus ha dreist e nerzh, evel ma lavar e-unan, a vage d' an ampoent-se. Troidigezhioù e-leizh a veze boulc'het gantañ hag a vane skoilhet kent bezañ kaset da benn. Tamm-ha-tamm, avat, e teue poell d' ar skrivagner gant un anaoudegezh reishoc'h eus ar pezh a c'helle sevel.

Lakaat a raio e brezhoneg levrioù evit ar vugale : **Priñsezig an Dour** gant G. Th. ROTMAN, e 1927. **Per ar C'honikl** gant Beatris POTTER, war c'houlenn Yann SOHIER, e 1928. **Nijadenn an Aotrou Skañvig** gant G. Th. ROTMAN adarre, e 1929. **Lomig**, savet ar skrid gallek anezhañ hag ar skeudennoù gant Zavier HAAS, embannet gant SKRIDOU BREIZH e 1942.

47

E vestr-oberenn evel troer, avat, a zo bet **Prometheus Ereet** hag **Ar Bersed** gant an trajediennour-meur AESC'HULOS. Engravadurioù war goad ar pezh-c'hoari kentañ a zo diwar zorn Jorj ROBIN, marvet d' ar c'houlz ma teuas al levr er-maez eus ar wask, e 1928, ha re an eil pezh-c'hoari diwar zorn KRESTON.

Dedennet eo bet ivez, da heul e dro e Bro-Iwerzhon, da Gendalc'h Dulenn, e 1926, gant c'hoariva John-Millington SYNGE. Roet en deus deomp e GWALARN, n. 7, 1926, **War Varc'h d' ar Mor**, hag **An Draonienn Hep Heol**, e WAR-DU AR PAL, n. 2.

Desket gantañ ar spagnoleg, tra ma veve e Bro-Spagn, n'helle nemet lakaat da dalvezout an anaoudegezh-se. Un darn eus pezh-c'hoari CALDERON, **Ar Vuhez a zo un Huñvre**, a zo bet moulet e n. 18 GWALARN ; XVIIIvet arvest **La Célestina** gant Fernando de ROJAS, en n. 156- 157, 1943 ; **Aotrou Maer Zalamea** gant CALDERON a zo bet troet en e bezh evit GWALARN, n. 152-153, 1942. **Iru Gudari** (Tri Brezelour) a oa bet lakaet e brezhoneg evit BREIZ ATAO diwar spagnoleg Manuel de la SOTA, e 1938.

Goude treiñ kement a bezhioù-c'hoari, n' eo ket eston e ve savet da Youenn DREZEN ar c'hoant da ober un taol-esa ouzh an tu-se, dreist-holl bremañ pa ro ar skingomz un dachenn nevez d' ar c'hoariva brezhonek. Savet en deus, war zanvez ur gontadenn c'hallek gant Job ar BAYON, **En Douceur**, ur pezh-c'hoari en un arvest, **Nouenn ar Gurun Kozh**. Skignet eo bet ar pezh farsus-se e 1943 gant Roazhon-Breizh, e 1943, ha moulet eo bet war WALARN, n. 156, 1943. Ur pezh-c'hoari farsus all, **Karr-Kañv an Aotrou Maer**, en deus savet evit ar skinva ha moarvat e kendalc'ho gant an hent-se.

Pinvidik e vrezhoneg ha dedennet gant ar gerioù livus hag heson, Youenn DREZEN a oa tonket da skeiñ ouzh tu ar varzhoniezh. Embannet en deus e GWALARN, e-kichen pezhioù berr ha mistr evel **Mintin war an Erin** ha **Bremaik e Nozo**, n. 66, barzhonegoù hiroc'h ha nerzhus evel **Kan Da Gornog**, n. 19 ; **Amzer Fall**, n. 66 ; **Nozvezh Arkuz e Beg an Enezenn**, n. 121.

Talvezet en deus **Kan Da Gornog** evel da stern d' un doare danevell vojennel diwar-benn « aloubidigezh ar C'huzh-Heol gant Kelted Gomer », un dilerc'h eus huñvreoù e yaouankiz, pa oa e soñj gant danevelloù-meur. Kinklet eo ar mouladur kaer-se a dresadennoù lies-liv gant KRESTON. Bez' ez eo kentañ embannadur SKRID-HA-SKEUDENN, e 1932. Ken ha ken lorc'hus ez eo kinkladur ha skrid an oberenn-se

a zo war un dro enor an arzour, ar skrivagner hag ar mouler.

48

Abaoe 1928 ez oa deut e vignon bras Jakez RIOU da labourat gant Youenn er «C'hourrier ». Pa voe kaset Youenn kuit e Genver 1931, Jakez ne chomas ket pelloc'h en ti kennebeut. En hevelep bloavezh end-eeun, e voent degemeret o-daou en « Ouest-Journal ». Jakez a chomas e Brest ha Youenn a voe kaset da Wened.

Donoc'h moarvat eget gant n' eus forzh pe zoare lennegezh all ez eo Youenn DREZEN dedennet gant an danevell hag ar romant. Erru ar c'houlz ma c'hell kas da benn e vennadoù a bell 'zo war an dachenn-mañ. Embannet en doa danevelloù, amañ hag ahont war gelaouennoù evel « La Bretagne Fédérale », BREIZ ATAO ha SAV abaoe. Lod anezho a zo troidigezhioù. Danevelloù fromus en deus lakaet e brezhoneg diwar skrivagnerien-vremañ Slaved ar C'hreisteiz. Diembann int c'hoazh evit an darnvuiañ. Hogen Arvor Bro-Wened a ro dezhañ leurenn e zanevell gentañ a bouez diwar e zanvez e-unan. **An Dour en dro d' an Inizi** a zo bet moulet gant GWALARN, n. 42, e 1932.

Froud ar vuhez klok, drant hag hiraezhus tro ha tro, a red en danevell-se gant nerzh bepred yaouank lanv ha dichal ar mor en dro d' an inizi e pleg-mor Bro-Wened. Ur bromesa hoalus ez oa evit an dazont ha sevenet eo bet ar bromesa-se gant ar romant **Itron Varia Garmez**, embannet e 1940 gant SKRID-HA-SKEUDENN. Kinklet eo ar romant gant engravadurioù war brenn kaer-dreist a zo anezho unan eus gwellañ pezhioù-labour KRESTON.

Un darnig eus ar romant a oa bet embannet e GWALARN, n. 92, 1936. Prest oa an oberenn da vout moulet en he fezh, e 1937. Ar skeudennoù, avat, n' oant ket hag, eus un dale d' un all, ez oa deut ar brezel da skoilhañ al labour. Gortozet eo bet pell amzer romant bras Youenn DREZEN. Bremañ, p' eo deut er-maez ha bet lennet, e c'heller barn al labour. Ur romant bev-buhezek eo **Itron Varia Garmez**, anezhañ un daolenn virvidik ha livus eus an dud hag eus al lec'hioù e bro c'henidik an oberour, Pont 'n Abad. Meulet eo bet an oberenn, a-wechoù gant ur bete-gwelout. Pismiget eo bet didruez-kaer, avat, ken evit an danvez ken evit ar yezh. N' eus nemet an eil dachenn a sell war eeun ouzh al lennegezh. Brezhoneg bev en deus skrivet Youenn DREZEN, hag ar brezhoneg bev, pep unan her goar, ne deo ket direbech e-keñver ar yezhadur. Ouzhpenn ne deo bet morse gwall-chalet Youenn DREZEN gant ar yezhadur, nemet an nebeutañ m' en deus gallet. Ur fazi ez eo marteze eus e berzh, hogen ar c'hontrol-bev eo eus ur skrivagner laosk pe zigempenn. Azaouez en deus evit e yezh ha, daoust d' ar fazioù a c'hell ober, evel pep unan ac'hanomp kalz pe nebeutoc'h, yac'h eo e vrezhoneg, puilh ennañ ar sev sunet diouzh kalon e gorn-bro, livus ha gwevn e frazenn, saourek e c'herioù, evel frouezh darevet dindan un oabl kemmus, ha ganto frond an avel-vor.

Ar re, avat, a gav abeg e danvez hag e tud ar romant, ha peadra o deus moarvat da bismigat, ne dlefant ket disoñjal evelato ne deo ar bed a gavomp taolennet e buhez ar Sent nemet un dachenn strizh a-walc'h - ra 'm digarezint ! - e park ec'hon ar vuhez.

Evel da ziskuizhañ diouzh e oberenn vras, ez eo distroet abaoe d' ar bloavezhioù-se ken hoalus, bevet e Bro-Spagn gantañ hag e vignon Jakez RIOU. Kavet en deus enno danvez un danevell, **Sizhun ar Breur Arturo**, ganti war un dro frond ar brezhoneg hag ar spagnoleg. Ne seblant tamm ebet ar skrivagner bezañ bet divarc'het gant ar rebechoù graet dezhañ hag e kendalc'h gant an hent a zere ouzh e ijin hag e spered. Ne ra nemet mat (s. n. 264).

176) Jakez RIOU. - D'ar bevarzek a viz Genver 1937, e varve Jakez RIOU e Kastell-Brient, Breizh-Uhel, d' an oad a eizh vloaz ha tregont.

Piv oa an den evit an darnvuiañ eus an dud ma keje ganto eus ur penn d' ar sizhun d' an all ? Ur c'helaouenner, dalc'hmat en hent, a gleiz hag a zehou, da glask en darvoudoù danvez evit ar gelaouenn a roe dezhañ an tu da c'hounit e damm kreun. Un den laouen ouzhpenn, goapaus ha skiltr e c'hoarzh.

Evit tud an Emsav Breizhek, avat, evit ar re dreist-holl a oa boas da lenn

brezhoneg, ez oa Jakez RIOU unan eus hor skrivagnerien ar gwellañ donezonet, unan a rofe d' ar brezhoneg oberoù dispar, ken e komz-plaen ken e gwerzennoù, dre ma teufe ar bloavezhioù da zareviñ e skiant-natur hag e labour pennek d' ober anezhañ ur mailh war e vicher a skrivagner.

...Hag ez oa aet kuit diouzhimp e barr e oad.

Ganet e voe Jakez RIOU da Gala-Mae 1899, e Lotei, Bro-Gerne. Kernevad en deus kendalc'het da vezañ e-doug e vuhez, n' eus forzh pe da lec'h en deus ranket mont da c'hounit e vara.

Evel ma lavar deomp Youenn DREZEN, en danevell en deus savet evit GWALARN, n. 110-111, 1938, diwar-benn buhez e geneil, tomm oa chomet bepred kalon Jakez RIOU ouzh broig e gavell.

50

Adkavout a reomp, en e gontadennoù, taolenn ar vro ma tremenas enni Jakez RIOU e zaouzek vloaz kentañ : « torgennoù serz gant mengleuzioù mein glas, kribennoù moal ar menez, ar gwez pin pe ivin, an दौरioù-red en o strizh a naozioù meinek ha radenek ar foenneier, ar c'hêrioù gwaskedet hag en traoñ, o troidellat divall pe o voudal er skluzioù, ar stêr Aon... »

E 1911, ez eas Jakez RIOU da Vro-Spagn, d'ur skol veleien, gant paotredigoù all, dibabet e skolioù kristen Bro-Gerne, evit dont da vezañ misionerien. E-touesk ar baotredigoù-se ez oa daou all a zeufe da vezañ ivez anavezet evel skrivagnerien vrezhonek, Jakez KERRIEN ha Youenn DREZEN.

E danevell Youenn DREZEN e kaver un daolenn bev-buhezek ha spis eus ar vuhez renet gant hor paotred en Ondarribia hag e Miranda-de-Ebro, e-pad c'hwec'h pe seizh vloaz, pell diouzh o bro.

Penaos ez int deut da vezañ skrivagnerien vrezhonek ? Ne oar ket re Youenn DREZEN peseurt respont ober d' ar goulenn-se nag evitañ nag evit e geneiled. Abegoù dister a-wechoù, kuzh alies, a zo da C'halv ar Ouenn. Ha ma kaver levezon **Barzaz Breiz**, deiz pe zeiz, e buhez pep unan eus paotred an Emsav, levrioù kalz disteroc'h pe dud, dic'houzvez alies, a c'hell bezañ digoret d' un den an hent en deus heuliet da c'houde dreist-holl moarvat dre m' oa tonket da vont war an tu-se.

Jakez RIOU a zeuas en dro a Vro-Spagn d' an 29 a viz Ebrel 1918. Kavet oa bet mat da vont da soudard. Kaset e voe da Bondi er 42vet Rejimant Kanolierien. Ur pezh korf kristen a oa eus Jakez RIOU d' an ampoent. Pouezañ a rae 160 lur. N' oa tamm ebet ouzh e zere mont war varc'h hag e voe kaset d' ar c'hirri-nij. Mont a reas, evel holl soudarded an amzer-se, a gêr da gêr. Koll a reas siouazh yec'hed e gorf. « Daou gleñved a bakas : ur red-korf gwadek hag ur pistig terzhiennus en e skevent. »

Ouzhpenn ma n' oa tamm ebet plijet gant ar vuhez-soudard, Jakez RIOU a oa, er bloavezhioù-se, « stourm garv en e galon, kent ober e zibab etre ar velegiezh hag en em ouestlañ klok d'ar brezhoneg ».

Chomet pell e klañvdi « Le Val-de-Grâce » e Pariz, Jakez RIOU a voe kaset, e miz Meurzh 1921, da echuiñ parañ e ti e c'hoar e Lokmaria-Berrien.

« Da neuze, e oa bet graet mat e soñj gantañ chom hep distreiñ da skol al leaned ha stagañ a-zevri gant e oberenn vrezhonek... »

51

« Hogen, ret e oa, da gentañ, gounit bara ar genou. Tennañ a rae Jakez RIOU muioc'h d' ar valafenn eget d' ar wenanenn. N'ouie micher vat ebet. » Setu perak a reas meur a hini lerc'h ouzh lerc'h ha ne bade ket pell en hevelep hini. E 1920, e labour e stal ur skeudenner-lien e Roazhon. Anaoudegezh a reas neuze gant paotred BREIZ ATAO. E 1921 ez oa gwerzher skriverezed e Breizh-Izel. E 1922 edo mestr-skol kristen e Moelan. Sevel a rae barzhonegoù ha meur a hini a zo bet moulet war an « Union Agricole », kelaouenn Leon ar BERR. Meur a vloavezh e voe, da c'houde, diwaller skolidi e skol vras Santez-Jenovefa, e Versailhez. E 1926

emañ, evit ur pennad, e stal ur mouler skeudennoù war baper. Dilabour adarre, e kavas bod e ti KRESTON. E Gwengolo 1927, e teu da vestr-studi e skolaj Sant-Loeiz, e Brest. E 1928 e teu da labourat er « C'hourrier » gant e vignon DREZEN. Mont a reont kuit asamblez e Genver 1931 hag e stagjont da labourat en « Ouest-Journal » an deiz kentañ a Veurzh 1931. Koll a reas, avat Jakez RIOU e yec'hed ouzh ar stern. Dont a reas e labour kelaouenner dre bluenn ha dre luc'hskeudenn, bepred en hent da bep eur ha dindan bep amzer, a-benn eus e nerzh, manet bresk abaoe e vloavezhioù-soudard. Ehanañ a rankas e miz C'hwevrer 1936 hag en dro-mañ ne bareas ket.

Paper e-leizh en deus duet abred Jakez RIOU gant e vrezhoneg. « Skrivañ a rae kement tra a droe en e benn. Hep nemeur a breder, avat, nag a urzh... Rouestlet e oa, en e yezhadur ha, dreist-holl, en e venozioù-ober. Edo o klask e hent, a-dreuz diank, tro-wenn, pe a-wechoù berzh-mat... » Ur fazi, avat, a vije krediñ, dre ma n' en deus ket embannet ur bern skridoù, ez oa anezhañ ur skrivagner difonn e bluenn ha lezirek. Nemet sellusoc'h-sellus e teuas da vezañ e-keñver e oberoù dre ma studie ha ma prederie.

Diembann eo manet e varzhonegoù hir, zoken echu, evel **Dahud**. N' oa ket mat, « lipet ha kempenn », evel ma venne e vije bet. Gortoz a rae da adteuziñ an oberoù-se en ur furm nevez. Er stad m' edont, n' oant evitañ nemet diankadennoù war hent ar varzhoniezh.

Ur barzhonegig bennak diwar e zorn a oa bet moulet war an « Union Agricole », evel m' hon eus lavaret uheloc'h, p' edo Jakez RIOU oc'h ober skol e Moelan. Ne gred ket deomp e rae nemeur a stad eus an oberennoùigoù-se na kennebeut eus e gontadennoù kentañ, **Ar Manac'h Mogn** hag **ar Morskouled**, embannet e BUHEZ-BREIZ, n. 27, 28, Meurzh, Ebrel 1923 n. 40, 41, Ebrel, Mae 1924.

52

Lizher an Hini Marv, Troioù Kamm Alanig Al Louarn, An Ti Satanazet a zo bet savet evit ar « C'hourrier ». An oberenn gentañ a zo bet embannet en ul levrig gant Emglev Sant Iltud, e 1925. Ne deo ket warni e chomo diazezet brud Jakez RIOU. **Troioù Kamm Alanig Al Louarn**, un adaozadur diwar Reineke Fuchs ar skrivagner meur alaman GOETHE, a zo bet adembannet gant GWALARN, Nnoù 89 ha 97, kinklet gant skeudennoù diwar zorn P. PERON. Plijus-kenañ eo an oberenn-mañ da lenn, ken c'hwek evel m' eo he blaz kernevek. Rak, bep gwech ma c'helle, e klaske un diazez d' e oberoù, zoken d' un damdroidigezh evel houmañ, en e Vro-Gerne ha ne zeuent eveljust nemet da vezañ buhezec'h a se. Sunañ a raent un nerzh yaouank ha prim diouzh an douar ma oa Jakez RIOU ur blantenn anezhañ. Diaes eo d'ul lenner mont da glask **An Ti Satanazet** en un dastumadenn bennak eus ar « C'hourrier ». Mat e ra eta SKRIDOU BREIZH ober anezhañ ul levr distag ma c'hellimp aesoc'h kemer hor plijadur gant an darvoudoù, mantrus ha farsus war un dro, a c'hoarvez e tro-war-droioù ur skluz e Bro-Kastellin. Lakaet en deus ivez Jakez RIOU, d' an hevelep koulz, e brezhoneg diwar c'halleg Henri GHEON, ur pezh-c'hoari, kemmesket ennañ ar fent hag ar poell, peadra dres da blijout d' e zoare-spered, **Torfed ar Breur Juniper**.

Hogen, gant amzer WALARN eo e teu Jakez RIOU da dizhout e ampartiz wirion, ken er varzhoniezh ken e komz-plaen : c'hoariva ha kontadennoù.

Ne deo ket ponner hordenn e varzhonegoù. Seizh pezh a zo bet embannet gant GWALARN : **Ar Balafenned Gwenn, An Tousegi**, n. 15 ; **Introibo**, n. 16 ; **Balafenn**, n. 19 ; **Serr-noz**, n. 29 ; **Ar Feunteun Zu**, n. 66 ; **Arne**, n. 110. Pezhioù berr int holl nemet an trede. N' eus ket un unan, avat, na ve ur berlezenn ha dres eus ar re a blij d' ar sonerezhourien a-vremañ evit sevel tonioù evito. Setu a zo bet graet gant Jef PENVEN evit an **Tousegi** ha **Serr-noz**, e 1941-42. Ur pezh all, chomet diembann a gred deomp, **Heol**, deziadet eus Brest lañ a viz Du 1927, a c'hellfe dont da greskiñ ar boket-se hag e vefe anezho e holl Varzhaz a dalvoudegezh, nemet a-walc'h eo an dornadig-se da reiñ renk da Jakez RIOU e-touesk hon gwellañ barzhed.

En diavaez eus an droidigezh hon eus meneget uheloc'h, savet en deus Jakez RIOU tri fezh-c'hoari : **Gorsedd Digor**, Brest, 1928 ; **Nomenoe-oe !** SKRID-HA-SKEUDENN, 1941 ; **Dogan**, SKRID-HA-SKEUDENN, 1943. Ne gred ket deomp, avat, en

dije ar skrivagner, pa gemere an doare-se da zisplegañ e venozioù, soñjet el leurenn-c'hoari end-eeun, pe da nebeutañ el leurenn-c'hoari voutin, rak ar skingomz hepken a c'hell ober he mad aes a-walc'h eus e bezhioù-c'hoari, evel m'en deus diskouezet Roazhon-Breizh en ur skignañ un darn zus Nomenoe-oe ! d' ar 24 a viz Gwengolo 1941. Ouzh an oberenn-mañ e tere ar gwellañ komzoù Youenn DREZEN. en e brezegenn e Roazhon-Breizh, pa geñverie, d'ar 17/9/1943, c'hoariva Jakez RIOU ouzh hini an Iwerzhonad John-Millington SYNGE :

53

« An eil hag egile a oa enno skiant ar farserezh reut, a laka ar c'hoarzh da zirollañ, hep gallout mirout. Ha bleuniañ a rae war un dro en o ene kizidik ha blizidik huñvreoù flour ha sin hag un tenerded hep he far. O daou e karent natur Doue, hag o doa d' he livañ gerioù ha frazennoù skedus ha barr gant ar varzhoniezh. O daou o deus gouezet kemmeskañ en hevelep oberoù, - tra diaes-kenañ d' ober, - binim ar goaperezh didruez ha mel milzin ar garantez, ar faltazi an digabestrañ hag ar wirionez an tostañ ouzh ar vuhez. Ha kement-se, evit unan, en ur brezhoneg diveret war eeun diouzh muzelloù pobl Vreizh-Izel, evit egile, e yezh saourus troc'herien buzhug ha tud vunut an Enez-C'hlas. »

E Gorsedd-Digor e ro Jakez RIOU tro d' e fent a Gernevad bet war ar studi, en un doare puilh a zeufe moarvat da vezañ hir ha lugudus war ul leurenn-c'hoari, nemet d' al lenner, avat, pa ne deo ket da nebeutañ eus ar re a dap o sac'h er farsadenn, ez eo plijus-tre ar pezh-c'hoari-se « dic'hoarzh, belimus ha dibaeron, en un arvest ; diazezet war ar wirionez - darn a gredo war ar gaou - savet gant Jakez RIOU, hep goulenn aotre digant den... Kinniget, hep doujañs d' an diskibien, kozh ha yaouank, a bigno war daol-vaen al lid er Gorsedd-digor a zeu ».

E **Dogan**, kalz aesoc'h da c'hoari gant ma ne vo ket polised er sal, e talvez Jakez RIOU d' ar polis an tregas degaset en e vuhez hag en hini lod-kaer eus e vignoned gant ar furchadennoù kasaus da heul dismantr ar monumant ouzh Ti-Kêr Roazhon e miz Eost 1932.

Hogen taol-micher disi Jakez RIOU a zo e gontadennoù. Embannet int bet e GWALARN, Nnoù 13, 14, 15, 17, 18, 20, 70, 110. Strollet en deus da c'houde an oberour seizh anezho en un dastumad dindan anv an hini gentañ, **Geotenn ar Werc'hez**, embannet e SKRID-HA-SKEUDENN, e 1934. Setu i amañ : **Geotenn ar Werc'hez, Ur Barr-Avel, Yun, Mena, Gouel ar Sakramant, Ar Run-Heol, Anna Tregidi, Ar Goulenn**. Pa vo staget outo **Lan Embanner al Ludu**, GWALARN, n: 110-111, ha **Prometheus Ereet**, n. 15, houmañ savet en eñvor eus e vignon Jorj ROBIN, an arzour yaouank marvet d' e 24 vloaz, e vo klok an hordennad a zo anezhi mestr-oberenn Jakez RIOU, d' hor meno ha zoken mestr-oberenn ar c'homz-plaen brezhonek en amzer-vremañ. Glan ha c'hwek e vrezhoneg, ur marzh ! ken pell diouzh bodoc'h ar skrivagnerien digempenn a gasae ha diouzh houarn-gwenn divuhez ar yezh ijinnet gant lod all. Diaes, a gredomp, d' ur skrivagner tizhout ur gened dreist d' an hini a wisk « eeunded dilorc'h, avielel » e gontadenn ziwezhañ, **Lan, Embanner al Ludu**.

54

Eus al labourioù all, lakaet gantañ war ar stern, ne vo ket gallet embann kalz a dra. Troidigezh « sart ha gwevn » **Lazarillo de Tormes** a zo gant Youenn DREZEN. **Pec'hed Marvel Gregor Kogan**, avat, ma tlie diskouez ennañ e gasoni ouzh ar brezel ha **Torfed e Keravel**, m' en dije livet ennañ krizder lezioù-barn ar vartoloded, a anaveze re vat dre vicher, ne vezint morse nemet steuennoù peogwir eo aet da anaon ken abred an hini nemetañ a oa gouest da wiskañ d' an eskern-se kig hag ene ar gened.

177) An Tad Jakez KERRIEN. - Ne deo ket bet pell amzer eus kenlabourerien GWALARN. E romantig **Roc'h Toull**, avat, a zo bet ar skrid kentañ moulet gant Levraoueg GWALARN e 1926.

Ganet eo Jakez KERRIEN e Sant-Tegoneg, d' an 23 a viz Meurzh 1903. Tremena e eure e vloavezhioù krennard en Ondarribia hag e Miranda-de-Ebro, e skolajoù Tadoù Kalonoù-Sakr Picpus, etre 1911 ha 1919, d' an hevelep mare gant Jakez RIOU

ha Youenn DREZEN, nemet e kendalc'has-efñ gant e roud betek ar velegiezh. Mont a reas da Vasnuy, e Bro-Beljik, ha da Roma da genderc'hel gant studi ar brederouriezh hag an doueoniezh. Graet en deus e amzer soudard er 35vet Rejimant Kirri-Arsailh e Gwened ha neuze eo, a gredomp, en deus graet anaoudegezh gant Roparz Hemon. Deut eo bremañ da gelenner war ar brederouriezh hag an doueoniezh.

Skignet eo e oberoù brezhonek war un nebeut bloavezhioù hepken. E miz Eost 1922, e kaver war FEIZ ha BREIZ ur barzhoneg gantañ. **Ma ouijen-me skrivañ !** roet dezhañ an eil priz e kenstrivadeg ar Bleun-Brug e 1921. En hevelep bloavezh ez embann er « C'hourrier », ur gontadenn, **Ar Guziadenn Aour**, hag er bloaz war-lerc'h un eil gontadenn, **Ar Wazh Dour**. D' ar mare-se ivez ez embann BREIZ ATAO, dre zarnoù, ur pezh-c'hoari e tri arvest, e gwerzennoù, **Dao Dezho**, diwar-benn amzer an Dispac'h Bras. Da gentañ anv e tlie kaout an oberenn-mañ, **Dindan ar Yev**, nemet e klemmas ar barzh **Mathaliz**, dre m' en doa, emezañ, dilennet an anv-se, en a-raok, evit un oberenn ne deo bet morse embannet abaoe. E 1926, e teu er-maez **Ar Roch Toull**, ur romantig pe gentoc'h un danevell varzhus, skrivet en ur brezhoneg start ha c'hwek, un dudi d' al lenner, glan evel m' eo hep bezañ diaes tamm ebet. Ur skrivagner studiet pizh gantañ e vrezhoneg ez eo an Tad Jakez KERRIEN ha kerse eo ganeomp bezañ chomet hep lenn netra diwar e bluenn abaoe ar barzhoneg **Penn er C'hreisteiz**, moulet war bedervet niverenn GWALARN. Menegiñ a rankomp, avat, en deus ouzhpenn embannet e FEIZ ha BREIZ pennadoù diwar-benn ar werzaouriezh.

55

178) Yann-Eozen JARL. - E niverenn gantañ GWALARN, e miz Meurzh 1925, e voe tennet evezh al lennerien gant ur barzhoneg espar, **Ur wreg er skeud e traoñ an ti**, sinet Yann-Eozen JARL. Dibaot ar barzhonegoù brezhonek a zoug un den d' an huñvre, a zigor d' ur spered bed ar c'hevrin. Ez oamp eta, en dro-mañ, degouezhet gant ur gwir varzh. Embannet e voe daou varzhoneg all, **Tarzh an Noz**, en n. 3, ha **Frankiz**, en n. 4. Diwar neuze, avat, ne voe mui er gelaouenn keloù eus ar barzh yaouank Yann-Eozen JARL.

Ganet eo e Sant-Nouga, d' an eil a viz Ebrel 1902. E 1914, echuet gantañ e skol vihan ez eas da labourat en ur vereuri. Nebeut goude, avat, ez eas da di ur voereb e Cherbourg hag ez adstag gant ur studi a gaso da vat e skolaj Sant-Loeiz Brest. Ur wech bachelour ez a da vestr-studi e lise Orléans ha, da c'houde, e skolaj Santez-Mari-Monceau e Pariz. Heuliañ a ra kentelioù er Sorbonne ha daremprediñ Kelc'h Keltiek Eujen REGNIER. Ur barzhoneg gantañ a c'hounezas ar priz kentañ e kenstrivadeg ar Bleun-Brug e 1921. Moulet eo bet an oberenn-se, **Va Mamm** dezhi da anv, war FEIZ ha BREIZ, miz Eost 1922. Degemeret e voe Yann-Eozen JARL e « Centrale » ha « Polytechnique ». E-pad tri bloaz e chomas er 6vet Rejimant Ijinerien en Angers. E 1932 ez eo kabiten. E 1933 emañ e skol ar Mererezh Arme. Eno e chomo betek 1940. Deut neuze da Rener ar Bitailherezh en Il-ha-Gwilun, setu eñ rener Bitailherezh ar Rannvro, abaoe ar 24 a viz Here 1942.

Ha setu m' hon eus adkavet e anv war niverenn 150-151 GWALARN, 1942, e traoñ ur **Barzhoneg** hiroc'hik eget ar re embannet kent, hag e c'hellomp moarvat magañ ar spi da glevout adarre ar vouezh fromus a oa chomet dilavar ken pell amzer.

(Tavet eo adarre ar barzh. An den e karg a zo bet heskinet gant an Alamaned hag, ur wech ar re-mañ aet kuit, gant paotred an dieubidigezh. Ur wech digraouiet, en deus kavet furoc'h pellaat diouzh ar vro.)

56

179) G. B. Kerverziou. - Gwilhom BERTHOU a zo ganet d' an 10 a Vae 1908 e Pempoull, Bro-Welo. Achuet gantañ e amzer e skol vihan Pempoull, e teuas da lise Sant-Brieg betek ma voe bachelour war ar skiantoù hag al lizheroù e 1925-26. Mont a reas neuze da studiañ ar strilhouriezh e Skol-Veur Roazhon. E 1929 e voe degemeret da ijinour-strilhour. Tizhet, avat, en e yec'hed, e rank dizale kuitaat govel « Basse-Indre », m' en doa staget da labourat enni. E 1930, emañ strilhour e poudrierenn Sant-Chamas, e Bro-Provañs, e 1931, er Vilin Wenn, e-kichen Brest. Ur wech dimezet, e teu gant e wreg da Wipavaz. Stagañ a ra-hi eno

da zerc'hel ur stal apotikerezh, nemet mervel a ra, a-vec'h ganet he merc'hig, e miz Mae 1932. War-lerc'h tarzhadenn Roazhon e miz Eost 1932, e voe heskinet Gwilhom BERTHOU gant ar polis. Mont a ra da Varsilho, e Kerzu 1932, da labourat en « Eolioù Vermink ». Addimeziñ a ra e 1933. E 1934, emañ dilabour evel kalz a dud d' an ampoent. E 1935, setu eñ rener ti « Caiffa » e Landreger. E 1936 e teu da Sant-Brieg da ober war-dro an artizaned. E 1939 ez a da gelenner war ar strilhouriezh hag an naturouriezh e skolaj Itron Varia ar Wir Sikour, e Brest. Abaoe 1940, ez eo sekretour GWALARN hag Ensavadur Breizh ha merour ARVOR.

Na trubuilhoù ar c'horf na re ar spered n' o deus graet diouer da Wilhom BERTHOU. N' o deus ket miret outañ koulskoude da vezañ ur skrivagner ha ne deo ket hepken war ar skiantoù, evel ma vefed en gortoz diwar welout war beseurt studioù en deus pleustret. E c'heller lavarout zoken ez eo bet betek hen ur barzh dreist-holl. Un ugent barzhoneg bennak en deus embannet e GWALARN : **Lizheroùigoù ; Eeuded Wenvidik**, n. 19 ; **Skrivsonerezh ; Al Leñverez ; Emañ ar Plac'h Yaouank...** ; **Fedelm**, n. 22 ; **An Diri-Servij**, n. 33 ; **Goursav ; Triadennoù ; Mouezh Dizremm ; da W. B.**, n. 66 ; **Barr-Avel ; Loariad ; Kened**, n. 136 ; **Preder Anhun ; D'am C'henyoul Dianav**, n. 148. **Dlead ; Kan an Noz** e SAV, n. 14, 1939. **Epona**, GWALARN, n. 158, 1943.

E komz-plaen en deus embannet en OALÉD, n. 56, **Kentel an Harlu**, prederiadennoù hag eñvorennoù. **Levr an Amprevaned**, skeudennaouet gant e vreur Yann BERTHOU, a zo bet embannet gant SKRIDOU BREIZH, e 1943.

Berr peurvuiañ barzhonegoù Kerverziou. An diwezhañ embannet, **Epona**, a zo an hirañ, ennañ 119 gwerzenn. Dedennet eo hor barzhgant ar gerioù hag ar menozioù dibaot, ar pezh ne denn ket da aesaat e varzhoniezh d' al lenner divoas. Barnadenn ur gwir varzh evel ar C'hembread T. GWYNN-JONES, bet ken plijet gant **An Diri-Servij**, hon redia da grediñ ez eus barzhoniezh don e gwerzennoù Kerverziou, daoust pegen diaes e c'hell bezañ da dañva zoken da lennerien GWALARN. Divoutin ar menoz, divoutin ar gerioù, ha ni boas betek hen ouzh barzhoniezh a zo anezhi kentoc'h komz-plaen gant klotennoù paour pe binvidik. Setu ar gwashañ skoilh evit ma teufe da vezañ meizet ha brudet barzhed evel Roparz Hemon, Yann-Eozen JARL ha Kerverziou. Rouez c'hoazh al lennerien barrek da vont d' o heul.

57

En ARVOR en deus Kerverziou embannet un dek kontadenn bennak : ar re wellañ, d' hor meno, a zo ar re ziwedhañ addispleget diwar gontadennoù-pobl iwerzhonat : **Penaos e tapas Diarmuid e blustrenn**, 26 Meurzh 1944 ; **Goll hag ar Vaouez Vras**, 2 Ebrel 1944 ; **Kentañ brezel a c'hoarvezas en Iwerzhon**, 9 Ebrel 1944 ; **Finn hag ar Vaouez Ruz**, 4 Mezheven 1944. Kavet e vez ivez er gazetenn-se unan bennak eus ar prezegennoù savet gantañ diwar-benn « Lec'hioù Breizh » ha moulet goude bezañ bet distaget er skinva : **Landreger**, 6 Kerzu 1942.

Ur pennad bennak en deus ivez roet da STUDI hag OBER : **A-us d' ar broioù : an Iliz karantezus**, n. 12, 1940 ; ha da C'HALV : **Arvar bemdez**, n. 1, Meurzh 1941.

Ur romant, **Ar Vag Jupiter**, a zo gantañ war ar stern (s. n. 260).

180) En niverenn 5, e 1926, e stage GWALARN da embann **Marc'hadour Venezia**, pezh-c'hoari SHAKESPEARE, lakaet e brezhoneg gant Y. L. EMILI. Genidik oa ar skrivagner-mañ a Gleder. Ganet e voe war-dro 1887 peogwir ez oa daou-ugent vloaz p' eo marvet d' ar 27 a viz Here 1923.

Skrivet en deus kalz er « C'hourrier ». Plijus-tre eo da lenn troidigezh **Marc'hadour Venezia**. Ur pezh-c'hoari all gant SHAKESPEARE, **Keben Doñvaet** a zo bet lakaet e brezhoneg gant EMILI hag un darn anezhi a zo bet moulet e GWALARN, n. 12, e 1927. War a lavar, en doa ivez lakaet e brezhoneg pezh-c'hoari CORNEILLE, **Polyeucte**, nemet ez eo chomet diembann an dornskrid-se. E FEIZ ha BREIZ ivez e c'heller kavout eus e skridoù. Menegomp, da skouer, **Kased an Diaoul**, ur rimadell farsus gantañ, en Nnoù C'hwevrer ha Meurzh 1921.

En niverenn 18, Hañv 1929, e kroge GWALARN da voulañ **Danevell Varzhus Sant Brendan ar Merdead**, dastumet gant Ronan Kermene ha lakaet e brezhoneg gant an Tad Yann WILHOU.

58

180 b) Ronan Kermene a zo anv-pluenn Jozeb DUCHAUCHIX, ganet e Laurenan d' ar 24vet a viz Here 1882. Bet eo eus ar re a grouas e Roazhon Unvaniez Arvor d' an 29 a viz Here 1911. E miz Gouere 1912, gant Kamilh Le MERCIER d'ERM, e savas ar gelaouenn vizek BREIZ DISHUAL. Skrivet en deus pennadoù er gelaouenn-se, e KROAZ ar VRETONED, er BOBL, e DIHUNAMB. Desket en deus mat a-walc'h ar brezhoneg evit bezañ degemeret e renk ar Varzhed e Kerroh, tost da Henbont, dindan an anv **Ar Meneziad**.

Aet eo abaoe da vanac'h en Urzh Sant-Benead. N' en deus ket evit se disoñjet nag e vro nag e yezh ha setu perak en deus dastumet evit Nnoù 18 da 22 GWALARN, **Danevell Varzhus Sant Brendan**, lakaet e brezhoneg gant an Tad Yann WILHOU, brezhoneger eus an dibab, a oa neuze o chom e tro-war-droioù Pariz. Talvoudus eo ar skrid-se ken evit an doare gouiziek hag aketus m' eo bet savet gant an Tad DUCHAUCHIX ha lakaet e brezhoneg gant e genlabourer.

(Da genderc'hel.)

DIWAR-BENN AR WENDED E BRO-ALAMAGN

gant W. B. LOCKWOOD

*Gant plijadur em eus lennet an daou bennad a zo bet embannet nevez zo en Al Liamm diwar-benn ar gudenn-se : diskouez a reont, da nebeutañ, e servij ar brezhoneg d' un dra bennak hag e c'heller, dre Al Liamm deskiñ traoù nevez. Marteze e vo laouen lennerien Al Liamm o kaout un testeni all c'hoazh diwar-benn an hevelep kudenn. Gant ar soñj-se eo em eus troet evito ar pennad a zo bet savet gant an Ao. Lockwood, kelenner war ar germaneg e Skol-Veur Birmingham, evit kazetenn ar vroadelourien gembreat **Welsh Nation**. Ret eo din lavarout avat e oa an Ao. Lockwood « guest writer », da lavarout eo e skrive war e giriegezh e-unan er bannoù « digor d' an holl » eus ar gazetenn. Marteze eo bet troet an Ao. Lockwood da sellout re ouzh tu mat an traoù. Forzh penaos, e-touez ar Wended eo bet o chom, ha talvezout a ra e skrid ar boan bezañ lennet gant evezh. Per DENEZ.*

An emsav broadelour e-touez ar pobloù bihan a zo unan eus nerzhioù bras ar politikerezh a-vremañ. Ha forzh pelec'h en em gann ar vroadelourien e kemer o stourm an hevelep doareoù. Klask a ra ar broadoù bihan en em dieubiñ diouzh mestroni o amezeien greñvoc'h, hag evel ur bazenn gentañ war-du ar pal-se e c'houlennont gwirioù evit o yezh. En inizi-mañ eo bet diaes-bras ar stourm evit ar yezhoù bihan. Diaes-bras eo bet ivez evit ar broadoù bihan a zo en Alamagn, betek nevez zo pa 'z eo bet kemmet penn-da-benn en Alamagn ar Reter politikerezh kozh ar mac'homerezh.

Hanter-kant miltir er gevred da Verlin emeur e kreiz un tolead annezet gant ar Wended, ur bobl a-ouenn gant Tchec'hiz ha Poliz. Bet e-pad pell amzer amezeien d' ar Slaved all, emañ Wendiz, abaoe kantvedoù, gronnet a-grenn gant ar c'hermanegerien : priñsed alaman o deus kabestret anezho er Grennamzer, hag abred eo bet kroget d' o germanekaat. Hervez an niveradeg kentañ graet biskoazh, ne chome diouto e 1832 nemet un 130.000 den bennak o vevañ e-kreiz ar germanegva.

60

Goap a zo bet graet eus ar Wended e-pad pell amzer. C'hoarzhin a rae ar C'hermaned war o boazioù kozh ha difenn a raent na vefe implijet o yezh. Dindan samm ur seurt politikerezh e oa kalz Wended o tinac'hañ o broadelezh, daoust ma oa, a-benn 1860, kresket o niver betek 170.000. Adalek ar mare-se avat ez eas buan pobl ar Wended war hent an diskar. Holl Wendiz a oa deut da vezañ divyezhek, hag hiziv an deiz n' eus ket muioc'h eget 100.000 den gouest da lavarout ur gomz bennak e wendeg.

Goude ar brezel-bed kentañ e voe cheñchet doare ar gouarnamant alaman da stourm ouzh ar Wended : e-lec'h kaout kunujennoù ha kastizoù e voe « anzavet ar wendeg hep bezañ aotreet » - un doare ober n' eo ket dianav e Kembre. Komzet e voe neuze eus emrenerezh sevenadurel, met hep sikour danvezel ne oa kement-se nemet kaozioù gollo, hag e kendalc'has ar wendeg da zisleberañ. Neuze, gant Hitler o tont e penn ar vro, e kemeras ar germanekaat doareoù fervoc'h, dreist-holl goude 1937, pa voe lakaet berz war an holl strolladoù wendek, lik koulz ha relijiel. Dont a reas ar spont da vezañ un arm evit tud ar germanekaat ha dirak ur seurt bec'h e plegas an darn vrasañ eus ar bobl wendek. Paouez a reas an dud yaouank d' ober gant ar yezh hag a chomas hiviziken dianav a-grenn d' ar vugale. Neuze, da fin an eil brezel bed, e savas un dañjer all : ouzhpenn pevar milion a harluidi a zeuas da ziazezañ e reter Germania, ha ret e voe d' ar c'hêriadennoù wendek degemer o lodenn anezho. E pep borc'hadennig ez eus bremañ un niver mat a dud hag a zo Germaned unyezhek. Ken e seblante stad ar vro bezañ dic'hoanag.

Met traoù all a oa o c'hoarvezout war un dro. An Domowina, kevredigezh vras ar Wended, a voe adsavet, hag a grogas da stourm evit ma vefe anavezet ar wendeg gant ar stad. A-benn ar fin e c'hounezas skoazell ar gouarnamant, *hag a asantas paeañ, diwar gefioù ar stad, un digoll sevenadurel d' ar Wended.* (Ganin eo islinennet ar gerioù-mañ, hag a zo enno ur menoz nevez, a-bouez tre evit ar pobloù mac'homet, e-keñver lezennadur etrevroadel. P. D.) E 1948 e voe roet stumm d' ar reoliadur nevez hag embannet al Lezenn evit Gwarez Gwirioù ar Bobl Wendek. Anavezet e voe ar wendeg evel yezh-stad evit pep tra. Kregiñ a reas ar gouarnamant da sikour ar sevenadurezh wendek ha divizet e voe sevel skolioù wendek. Ur Burev Wendek a voe savet da ober war-dro an arc'hant roet gant ar gouarnamant.

Kement-se avat ne c'helle ket bezañ kaset da benn en un taol. Al lodenn gwanañ eus Bro-Alamagn e-keñver arboellerezh, eo ar Reter anezhi, ha goude distrujoù bras ar brezel e oa ar verrentez o c'horrekaat an adsavidigezh war veur a dachenn. E 1945 ne oa nemet 7 skolaer gouest da gelenn e wendeg. Met e 1952 e oa digoret ar skolioù kentañ oc'h ober gant ar wendeg. Mont a ra an niver anezho war greskiñ dibaouez, ha bremañ ez eus, ivez, teir skol eil derez.

Plijet on bet pa 'z on aet da welout ar skolioù eil derez. Ober a reont war-dro 500 bugel, lojerien dreist-holl hag a vez paeet gant ar stad holl vizoù o c'helennadur. Evit pezh a sell ouzh al levrioù, trawalc'h eo lavarout em eus gwelet levrioù kaer, e wendeg, diwar-benn ar jedoniezh, ar vevoniezh, ar strilhouriezh, an istor hag al lennegezh wendek, an holl anezho levrioù graet da vezañ implijet e klasoù uhelañ an teir skol-se a zo enno, em eus lavaret, 500 diskibl.

Muioc'h eget e forzh peseurt lec'h all ez eo ar vugale, aze, goanag an dazont. Betek-hen eo bet ar skolioù benveg bras ar germanekaat, diwar vremañ e servijont da wareziñ broadelezh ar Wended ha da adsevel o sevenadur hanter-ziskaret. Strivoù bras a zo graet evit lakaat ar gerent alaman da gas o bugale d' ar skol wendek, ha lod anezho a ra, o kompren e vezo gwelloc'h d' ar bugel, er c'horn-se eus an Alamagn, bezañ divyezhek. En doare-se ez eus spi da adwendekaat ar c'hêriadennoù hag a zo hanter-c'hermanekaat. Hag anat eo, adalek bremañ, ez eus tu d' hen ober.

Da skouer, e-touez ar 6 diskibl kentañ o deus bet ar vachelouriezh wendek e skol wendek eil derez Cottbus ne oa nemet unan hag a zeue eus un tiegezh wendek-rik. N' emañ ket evel-se e pep lec'h nag evit pep tra, met pa c'hell seurt traoù c'hoarvezout e kompren e ra ar wendeg muioc'h eget derc'hel ar pezh a zo dezhañ.

An darn vrasañ eus ar Wended en o oad-gour a zo dizesk e wendeg. Daoust da se ez eus ur gazetenn bemdeziek e wendeg, hag a ya atav niver he lennerien war greskiñ ma n' eus ket kalz anezho c'hoazh. Fromus eo klevout ez eus kerent hag a zo o teskiñ lenn gant o bugale. Bez ez eus kelaouennoù relijiel (luterat ha katolik). Embann a reer muioc'h-mui a levrioù, dreist-holl evit ar vugale, hag a zo al lennerien niverusañ. Gwerzhet e vez an holl embannadurioù-se kalz marc'hadmatoc'h eget an hevelep embannadurioù e germaneg. P' emaomp war ar poent-se e c'hellan menegiñ o deus ar vugale ar gwir da virout o levrioù, goude mont kuit eus ar skol, ar pezh na vez ket aotreet gant al levrioù germanek. An darn vrasañ eus ar skritelloù er ruioù, hag eus an embannoù ofisiel, a vez en div yezh. Implijet eo bet ar wendeg el lez-varn (warlene evit ar wech kentañ). Skinva Gorlitz a ra abadennoù wendek un nebeut eurvezhioù pep sizhun. Bez ez eus e pep lec'h strolladoù kanerien ha dañsourien ha bez ez eus ivez ul laz-kanañ ennañ ouzhpenn kant den. Evel Kembreiz e kar ar Wended kanañ hag o laz-kanañ a zo aet betek bro-Mandchouria.

Evel-just an hent n' eo ket kompes hag aes dirak ar Wended. N' eo ket an holl Alamanted hag a zo prest da sellout ouzh ar Wended evel ouzh tud ken uhel hag int, goude m' o deus o dalc'het en o beli keit all amzer. Kalz Wended a c'houzañv c'hoazh eus un emskoulm a izelded hag o deus mez gant o broadelezh. Re all c'hoazh a soñj, gant aon e teufe kemm e mererezh ar vro, ez eo gweiloc'h

chom hep kaout tra d' ober gant « politikerezh nevez ar Gomunisted ». Hogen dre ma teuo ar vuhez da vezañ aesoc'h e kouezho kalz eus an enebiezh-se. Kouezhañ a ra dija.

Anat eo en deus ar politikerezh-se gounezet da c'houarnamant Reter Germania mignoniezh ha skoazell un niver bras a vroadelourien wendat, hag a wel a-benn ar fin o c'hoantoù broadel o tont da wir hag hentoù nevez o tigeriñ dirazo.

IN MEMORIAM

Er sulvezh-se, e-kreiz miz Here, e oan o treuziñ bourk bihan Plonevez-Porze. An noz a oa o tont. Ha, daoust n' am boa abeg ebet da gaout menozioù du, e santis a-greiz-holl an dristidigezh o leuniañ va c'halon, hag e stagis da soñjal em c'heneil kozh an Dr D. J. Davies, hag en devezhioù heoliet hor boa tremenet er vorc'hadennig-se un nebeut bloavezhioù a-raok. An deiz war-lerc'h e komprenis abeg ar velkoni a oa kouezhet warnon, gant ul lizher eus Kembre o kemenn din e oa marv « D. J. ».

Anavezet e oa D. J. Davies evel un arboellour eus ar gwellañ hag ur prederour politikel eus ar galloudusañ. E oberenn **Economic History of South Wales** - a dalvezas dezhañ an doktorelezh - a oa prizet kalz e Skolioù-Meur Kembre, hag e levrioù all, embannet an darn vrasañ anezho gant strollad broadel Kembre, en o zouez **The Economics of Welsh Self-Government, Can Wales afford self-government, Towards an economic democracy**, a zo dastumet enno ar pep pouezusañ eus ar menoz arboellerezhel broadel kembreat : rak gant D. J. Davies ha gant e wreg, an Dr. Noelle Davies, eo bet diazezet ha raktreset politikerezh arboellerezhel Strollad Kembre.

Muioc'h eget un arboellour e oa D. J. avat. Ur politiker awenet-dreist, em eus lavaret. Kalz a elevez koulz hag un doare re reut a-wechoù da lavarout e soñj, o deus miret outañ da gemer penn an emsav e Kembre : daoust da se eo gantañ ha gant Saunders Lewis - a zo o paouez anavezout e zle e-keñver D. J. a-hend-all - eo bet stummet, evit ul lodenn vras, Strollad Kembre hag ar menoz broadel a-vremañ. Beajet en doa D. J. kalz, kenteliet e oa bet e meur a lec'h, gant ar vuhez ha gant skolioù stag-tre ouzh ar vuhez, evel Skol-Uhel ar Bobl en Elsinor renet ken brav gant Per Mannichie, hag eus e veajoù en doa degaset ur ouiziegezh vras, bras-souezhus, a roe tu dezhañ da varn difazi tud ha darvoudoù. Gouzout a ran pegen alies ez ae Kembreiz d' e di, da c'houlenn kuzul, pa oant nec'het gant ur gudenn bennak, pe pa oa ret kemer un diviz a bouez evit dazont emsav Kembre : atav e ouie D. J. reiñ un ali sklaer ha poellek, ha gantañ evel-se, daoust na oa ket rener, eo bet alies leviet ar strollad a-douez ar skoselloù.

64

Daoust d' ar brud ha d' ar binvidigezh e oa chomet D. J. Un den eeun. Morse n' en doa disoñjet e oa bet mengleuzier, hag en doa graet nouspet micher, evel bokser, pe cow-boy, pe martolod, e nouspet bro, a-raok bezañ enoret gant Skol-Veur Aberystwyth. E-touez an dud eeun en em blije ha d' an dud eeun, da dud e bobl, en doa gouestlet e vuhez : rak, ma oa broadelour evit saveteiñ talvoudegezhioù speredel Kembre, e oa broadelour dreist-holl evit mirout na vefe mengleuzerien all o vervel, evel e vignon Johny Morgan, evit gounit arc'hant d' ar gapitalourien estren.

Dudius e oa D. J. da zaremprediñ : kement a draoù a ouie, ha ken buhezek e ouie o displegañ. Soñj am eus eus ar pourmenadennoù-se, en e ser, a-dreuz menezioù kontelezh Menoe - ar gontelezh en deus stourmet kement d' he lakaat stagañ ouzh Kembre en-dro pa oa ar Saizon o klask ober anezhi un Ulster kembreat ; soñj am eus eus an endervezhioù sioul e ti kaer Pantybeiliau, ha poan am eus o krediñ ez eo tremenet kement-se da viken. Salo ma teuio ar vroadelourien, da nebeutañ, da gas da vat ar pezh a oa bet unan eus menozioù bras D. J. Davies : ober eus Pantybeiliau ur greizenn a zeskadurezh vroadel.

Anaout a rae D. J. kudenn Vreizh mat-tre : eno c'hoazh e ouie barn difazi. Hag un deiz e vo gouezet nag ur sikour en deus roet d' hor bro ha d' he mibien o c'houzañv. Ennañ he deus Breizh, se a c'hellomp lavarout, kollet unan eus he gwellañ mignoned.

D' e wreg, an Dr. Noelle Davies, d' o c'heneilez feal an Dr. Ceinwen Thomas, e karfen lavarout ar perzh a gemer en o glac'har ar Vretoned o deus,

evel don, anavezet ha karet D. J. : ra vezint sur na vezo disoñjet, en tu-mañ eus
Mor Breizh, nag e vignoniezh, nag e gelennadurezh, nag e skouer.

Per DENEZ.

AL LEVRIOU

TWENTLETH CENTURY SOCIALISM, gant SOCIALIST UNION, Penguin Books, 1956, 2/6.

Savet eo bet al levr-mañ gant ur strolladig krouet e diabarzh al Labour Party hag a zo **Socialist Union** e anv. Embannet gant Penguin Books e vezo lennet kalz. Deomp-ni atav, Bretoned, hag a vez re alies prizoniet gant ar virouriezh hag he stummoù-soñjal, ne raio droug ebet studfañ anezhañ.

Poent eo adprederiañ diwar-benn lod eus ar gelennadurezh socialist : bez ez eus traoù - evel ar gredenn e tle ar gapitalouriezh en em zistrujan hec'h-unan da reiñ lec'h, deiz pe zeiz, d' ar socialistiezh - ha na c'hellont ket derc'hel dirak an darvoudoù : n' hon eus gwelet ar varksouriezh oc'h en em ziazezañ, hep skoazell a ziavaez, nemet e broioù hag a oa c'hoazh er stad a feodalerezh, hag er stourm evit an douar eo o deus ar varksourien kavet an nerzh en deus graet dezho trec'hiñ. Ar fazi a zo bet krediñ na c'helle ket ar gapitalouriezh emdreiñ ha kemmañ : dindan levezon an emsav micherel eo bet krouet, e broioù zo, ar **Welfare State**, ha n' eo ket mui kapitalist hep bezañ c'hoazh socialist, met a c'hell lakaat ar micherour da vevan evurus a-walc'h ma n' eus en evurusted nemet kudennoù danvezel.

Setu aze avat pelec'h emañ ar gudenn, pelec'h emañ an diforc'h etre doare ar gapitalouriezh da sellout ouzh an traoù, hag hini ar socialistiezh : evit ar c'hapitalist, an talvoudegezhioù danvezel eo a glasker enno arouez an araokaat ; evit ar socialist en enep ez eo an den hag a zo muzul ur gevredigezh renket-mat. Pezh a fell d' ar gapitalourien eo kaout gounidoù brasoc'h bemdez - zoken o reiñ evit-se bruzunachoù d' ar micherour ; pezh a fell d' ar socialist eo lakaat da dalvezout en arboellerezh an uhelvennadoù a ingalder, a frankiz hag a genvreudeuriezh hag a zo diazez e feiz. E gwirionez, stourmet eo bet gant ar socialisted evit abegoù a gredenn arboellerezhel, evit abegoù a deknelezh arboellerezhel ma karit : met ar pezh en deus roet d' ar socialisted kentañ dreist-holl an nerzh hag ar galon da ren ur stourm ken diaes ha ken kalet eo ar garantez evit ar micherour gwasket ha mestroniet, ar gounnar dirak ar poanioù euzhus hag aner sammet warnañ gant ur gapitalouriezh hep denelezh. Ha ma c'houlenner dibaouez berroc'h eurvezhioù labour ha gwelloc'h paeamant, ma 'z eus, d' ar stourm un tu danvezel hag a zo pouezus-meurbet, arabat e vefe, disoñjal emañ lusk bras ar socialistiezh er c'hoant da welout pep den enoret ha doujet evel un den.

Meneget hon eus uheloc'h tri menoz diazez ar socialistiezh : ingalder, frankiz ha kenvreudeuriezh. Ingalder : n' eo ket heñvel, anat eo, an eil den ouzh egile, met ingal ez int dre an hevelep denelezh a zo enno, ha da bep hini e rank bezañ roet ur chañs ingal da gavout al labour a roio tu dezhañ da ren ur vuhez dereat. Frankiz : da lavarout eo frankiz da zibab e vuhez hag e vicher, frankiz da gaout peadra da vegañ ar c'horf hag ar spered, frankiz da labourat ha frankiz el labour. Kenvreudeuriezh : da lavarout eo labour diazezet war santadur dieub ar gwirioù hag an dleadoù, ha n' eo ket war galloud ur c'hlas o vestroniañ ur c'hlas all.

66

Da dizhout ar gevredigezh socialist e ranker kaout ar surentez arboellerezhel (labour atav, hag ivez gwarez a-enep d' ar c'hleñved, d' ar gozhni, ha.), an ingalder er binvidigezh (na vezo ket a dud re binvidik ha re all re baour), un arboellerezh o kreskiñ hag erfin un arboellerezh a ren enni an demokratelezh. An tailhoù, etre daouarn ur gouarnamant socialist, a c'hell bezañ ur benveg ingalat ar binvidigezh, gant ma vezo lakaet e servij an holl an arc'hant dastumet, ha n' eo ket foranet oc'h ober brezelioù pe oc'h ober netra.

Evit ar stadelaat, arabat e vefe gwelout ennañ al louzaouenn vurzhus a c'hellfe pareañ pep droug kevredigezhel : lod eus an ijinerezh a rank chom perc'hennet gant tud prevez, dre ma 'z eo ar frankiz hiniennel unan eus menozioù

diabez ar socialistiezh ; ivez dre ma vefe ken fall all eskemm ur gapitalouriezh-stad evit ar gapitalouriezh prevez ; hag erfin dre n' eo ket atav er perc'hennañ emañ ar galloud. An arboellerezh evel m' emañ a c'hell bezañ troet tammig-dre-dammig d' un arboellerezh socialist dre c'halloud ar brenerien hag ar vicherourien, dre levezon al labouradegoù perc'hennet e kumun ha renet en un doare socialist, dre ar budjet hag al lezennoù, erfin dre ar « social accountability », da lavarout eo dre zigeriñ da enselladeg ar vicherourien pe an izili kontoù-renerzh al labouradegoù pe ar c'hevredigezhioù.

Ma 'z eus tu da dabutal diwar-benn tra pe dra displeget el levr, e talvez koulskoude mil gwech ar boan e lenn - ha pa ne vefe nemet evit kompren, pe lakaat ar re all da gompren, pegen disheñvel eo ar socialistiezh diouzh ar pezh a zo o ren bremañ e Pariz hag o sachañ yaouankiz Vreizh e lec'hidoù gwadek Aljeria.

PSYCHANALYSE DE PARIS, gant Frederic HOFFET, Bernard Grasset 1953, 540 lur.

Daoust d' e ano rukunus d' an hini na gar ket an eneveizoneizh, setu aze ul levr hag a raio plijadur da forzh peseurt broadelour breizhat : rak n' eo ket alies e veler ledet ken brav all war baper pec'hedoù, sioù fall ha gwanderioù Pariz. Ouzhpenn plijadur a zegaso avat : a-bouez eo evit an neb a stourm da zifenn buhez Vreizh a-enep da Vro-C'hall, da lavarout eo a-enep da Bariz, anavezout doareoù-soñjal an enebour ha rakwelout ar pezh a c'hell ober ; levr Frededic Hoffet a zo war an dachenn-se un oberenn na c'heller ket tremen hep he studiañ.

Pariz, daoust ma n' eus ket mui a Roue o ren ennañ, a zo ouzh e benn ul lez, ul lez tud hag o deus dindan o dorn kement tra a bouez : politikerezh, arboellerezh hag arz. Ne c'heller kaout netra e Pariz ma n' eur ket eus el lez-se, pe gwarezet gant un den eus al lez-se. Dre vignoniezh, « dre berzh an darempredoù » e-giz ma lavarar, eo a klasker atav tizhout ar pezh a venner kaout, pa 'z eo pouezusoc'h an darempredoù-se eget ho talvoudegezh personel.

Ur gevredigezh, hag a c'hoari ar galon enni ur roll ken pouezus, a zo ur gevredigezh gwregel. Gwregel eo Pariz : n' eo bet souezh eta m' he deus Bro-C'hall dibabet da batronez Janed Ark (ar broioù all o deus ur sent patron) ha da skeudenn-arouez Marianna ; n' eo ket souezh ivez m' en em ren Bro-C'hall, er politikerezh estren, evel ur vaouez, ha n' eo ket unan a vuhez vat war ar marc'had.

67

Met disoc'hoù pouezusoc'h a zo c'hoazh d' ar wregelezh-se : levezon ar bederasted e Pariz. Anavezet ez eo an orged heñvelreizh er bed a-bezh, a lavarar ; met, mar deo kastizet e Moskva hag e New-York, ma vez kuzhet e London, e vez brudet ha, na petra 'ta, enoret a lavar F. Hoffet, e Pariz. Niver an dud kammet evel-se o luskoù natur a zo bras-spontus er politikerezh ha dreist-holl en arzoù-kaer, o vont eus Gide da Cocteau, en ur dremen dre Serge Lifar ha Charles Trenet : « Bez' ez int, ma c'heller lavarout kement-se, Pariz en e gwirionez an donañ... Ne c'hellfe ket Pariz bezañ hepto ».

En doujañs roet d' an orged heñvelreizh eo emañ unan eus abegoù diskar Bro-C'hall : rak an den a zo kammet e luskoù-natur e seurt doare ne c'hell ket bezañ dieub e spered ; e soñjoù hag e oberoù n' int nemet un adskeudenn eus e fromadennoù diabarzh nammet gant ur c'hleñved-ene.

Lennegezh an direizh a zo unan eus frouezhioù all an doareoù-se : ul lennegezh dinerzh, iskis, kamm-digamm, a 'n em goll e frazennoù klañvidik Proust pe e studiadennoù euzhus Jean Genêt, ha na glask repu nemet en empennelezh ar skolveuriekidi dre ziouer a garantez evit ar vuhez eeun hag evit ar yec'hed.

Gwregel, Pariz en deus emskoulm a izelder : anat eo er politikerezh gall, dreist-holl adalek fin ar brezel, pa ne c'hell morse ar gouarnamant ober e soñj

da vat diwar-benn tra ebet nag ar Parlamant ober e soñj da vat diwar-benn gouarnamant ebet. Gwregel, Paris a gar en em reiñ d' an estrenien : er mojennoù, daoust ha n' eo ket atav a vaez vro e teu ar gour, ar priñs a gemero ar plac'h ? Evel-se e c'hell ur Bessarabiad bennak dont da vezañ den galloudusañ Pariz hag ur Poloniad distudi a-grenn dont da vezañ medisin ar Parlamant. Gwregel, Pariz en deus c'hoazh un emskoulm a c'halloudegezh. Hag hennezh eo ar stumm kasausañ evidomp eus ar barizianelevh. « Gwir reoliadur politikel Bro-C'hall, abaoe tri c'hantved n' eo nag ar rouantelevh, nag ar Republik, met ur stumm sui generis a ziktatorelevh na c'hell bezañ keñveriet nemet gant hini Roma gozh : diktatorelevh an **urbs**, diktatorelevh Pariz. Ha ne seblant ket e c'hellfe kement-se bezañ kemmet biken. Stummoù politikel an dazont, pe e vefent boutinel pe frankizel, a c'hell hep mar degas e Bro-C'hall kemmoù mererezh ha kevredigezh. Met da grediñ a zo na c'hellint ket digreizennañ ur stad a zo bet he frammadur kreñvoc'h eget an holl zispac'hoù. »

Emskoulm a izelder, o tegas aon, emskoulm a c'halloudegezh, kement-se a zo stag-ha-stag e gwregelevh Pariz. « Pariz en em ren evel ur plac'h yaouank kozh hag a gav dezhi e ra he matezh ur pec'hed marvel a zizoujañs pa gemm lec'h d' ur podad bleunioù hep goulenn an aotre. Dirak stummoù diot an diktatorelevh parizian, ne c'heller ket mui krediñ ez eus aze oberioù politikel : n' int nemet arouezioù diarvar eus ar c'hleñved-nervennoù anvet usteria. »

En-dro da Bariz ne chom mui nemet, hervez ar frazenn vrudet, an dezerzh gall. « N' eo ket bet a-walc'h da Bariz kreskiñ ha ren. En ur izelaat ar proviñsoù betek distrujañ anezho, e-keñver politikerezh koulz ha sevenadurezh, e bal ne oa ket mui ar vestroni, met ur seurt lonkerezh ramzel. Evel holl diranted an istor, n' eo ket mui Pariz evit gouzañv tra war e dro ha na c'hellfe ket kemer pe lakaat da blegañ. Evit an eneveizoniour, kement-se zo un arouez eus an emskoulm a c'halloudegezh, a ra kempouez d' an emskoulm a izelder er boudoù gwan o klask kuzhat o masoc'helevh dre oberoù sadek. »

Aner eo, a-hend-all, gortoz un adsav eus ar broviñselevh, daoust « d' ar strivoù graet evit adveañ ar folklor bezañ sikouret a-wechoù gant kelc'hlizheroù teneraus o tont eus burevioù Paris. » Rak « Paris a zo gantañ ur galloud diharz, hag e ziktatorelevh speredel, daoust ma ne ziskouez ket dirak an holl ober gant an nerzh, a zo ken gwazh ha hini ar stadoù totaliterek, na baouez ket a dabutal ganto en anv frankiz ar spered. »

68

Meur a bajenn a vefe mat adembann, evit ar Vretoned, eus levr Frederic Hoffet. Setu amañ, evit klozañ, unan c'hoazh : « An emskoulm a c'halloudegezh en em zispleg en un doare arouezius-meurbet e menoz ar Republik un ha dizisrannus. Fentus eo merzout ez eo ar reolenn-se, evit an darn vrasañ eus ar C'hallaoued, stag ouzh meizad an demokratelevh, tra ma 'z a a-enep da bep gwir frankiz. Menoz ar Republik un ha dizisrannus, evit displegañ an traoù evel m' emaint, n' eo ken un andorenn da guzhat youl-ren Pariz. N' eo ken un doare da brouiñ, a posteriori, reizhder an diktatorelevh parizian war Vro-C'hall. Difenn a ra Pariz a-enep pep c'hoant a c'hellfe sevel en dud da vihanaat e c'halloud pe da derriñ e unelevh ».

Evit ar Parizian, n' eus ken Pariz a gont. Aon en deus, er-maez eus Pariz. Aon rak diventelezh ar bed, a lavar Frederic Hoffet, hag a wel en dra-se un disoc'h eus an emskoulm a Oedipeous. Rak kement nerzh disuj hag a c'hell lakaat en arvar mestroni e gêr, a c'heller lavarout ivez. Hag en aon-se ez eo ret klask an abeg eus an diktatorelevh dibleg hag a fell dezhi barn hor yezh d' ar marv hag hor pobl d' ur sujidigezh peurbadel.

Per DENEZ.

NOTENNOU

KAÑV. -

D' an 12 a viz Kerzu ez eo aet da anaon, e Douarnenez, an Ao. Gourlaouen, tad Marcharid Gourlaouen, renerez « Skol Ober ». An holl re a anavez an Dimezell Gourlaouen, an holl re o deus desket brezhoneg ganti, a gemero perzh en he glac'har.

Kenlabourerien Al Liamm, hag a zo bet e-touez he skolidi, a gas dezhi o gourc'hemennoù mantret.

Gant kerse hon eus klevet ivez ar c'heloù eus marv an Ao. Per Galbrun, anavezet mat en emsav. Daoust na oa ket breizhat, e oa deut an Ao. Galbrun da garout Breizh, ha da labourat eviti, en un doare en dije graet-enor da veur a Vreizhad. War dachenn e labour, al luc'hskeudennañ hag ar filmañ, en doa graet kalz labour e karantez Vreizh. Un den mat hag ur stourmer kalonek an hini eo a zo aet da anaon. D' an Itron Galbrun ken garv gant an tonkadur, e kinnigomp hor gourc'hemennoù glac'haret.

Gant poan hon eus klevet e oa marv, en e 67 vloaz, an Ao. Nouel Stefan, tad hor c'heneiled vat Mona ha Ropaerzh Steven. Loman e oa bet, hed e vuhez, war ganol Suez. E Douarnenez eo aet da anaon, goude ur c'hleñved hir. D' hor c'heneiled ha d' o ziegezh e kinnigomp hor gourc'hemennoù a gengañv.

D' an 23 a viz Here eo bet douaret, e bered Carmel, nepell diouzh Llandeilio, relegoù an Dr. D. J. Davies, aet da anaon daou zevezh a-raok, d' an oad a 63 bloaz, en e di Pantybeiliau. Graet e voe al lidoù relijiel e-tal e vez gant ar Rev. Islwyn Beynon, Ernest Pugh ha Brynmor Thomas. Ur c'henavo diwezhañ a voe lavaret, en anv broadelourien Gembre, gant an Ao. Gwynfor Evans, rener ar Strollad Broadel, hag abaoe ez eus bet tud evel Saunders Lewis, D. J. Williams, Abergwaun ha Wynne Samuel o lavarout nag ur c'holl e oa evit Kembre marv an Dr. D. J. Davies. Emeur bremañ o prientiñ un embannadur klok eus skridoù D. J. Davies, hag a zo bet diazez menoz broadel Kembre war an tachennoù politikel hag arboellerezhel. Dedennet e oa kalz an Dr. D. J. Davies gant menoz an etrekeltelezh ha bez e oa unan eus ar re a felle dezho kas ar stourm, er c'heñver-se ivez, war dachenn ar politikerezh. Anavezout a rae Breizh ha deut e oa da dremen pemzektez e Kamp ar Vrezhonegerien e Plonevez-Porze. Ennañ e koll Breizh unan eus he fealañ mignoned. - D' e intañvez, an Dr. Noelle Davies, e kas Al Liamm e c'hourc'hemennoù mantret a gengañv.

BODADEG VEUR SKOURR BREIZH AR C'HENDALC'H. -

Dalc'het eo bet d' ar gwener 2 a viz Du e Gwengamp. Digoret eo bet ar vodadeg da 10 eur 30. An Ao. Klerg a zo bet lakaet da Gadoriad hag Alan al Louarn da sekretour.

Danevellskrid Bodadeg Veur 1955, bet savet gant an Ao. Bourdelles a zo bet lennet gantañ ha degemeret gant an holl. War-lerc'h ez eo bet lennet danevellskrid kadoriad ar Skourr Roparz Hemon hag hini an Teñzorer. Daoust d' an dispignoù bras graet warlene evit aozañ Kendalc'h Brest e chom 26.450 lur e-barzh ar c'hef. An Teñzorer Per Lemoine a c'houlenn bezañ disammet diouzh e garg hag an Ao. Dubourg a zo anvet en e lec'h.

70

Kadoriad ar Skourr, a c'houlenn en e zanevellskrid ober emvodoù e-pad ar bloavezh 1956-57. Goulenn a ra an izili (1) ma vije lezet dieub an danvez da vezañ displeget pe studiet a-hed ar bloaz en emvodoù (2) klask ober bodadegoù plijus ha dedennañ tud ha n' int ket izili eus ar Skourr. Komz diwar-benn ne vern peseurt kudenn da ziskouez d' ar vrezhonegerien talvoudegezh hor yezh er vuhez a-vremañ - (3) dastum e pep emvod izili nevez - (4) kas keloù d' ar Bed Keltiek (5) klask ober un emvod da vihanañ e pep rannvro.

En endervezh e vez e voe komzet eus diskleriañ Ar Bed Keltiek evel kelaouenn war c'houlenn Roparz Hemon. Koulskoude tud a soñj e vije gwell mirout Ar Bed Keltiek evel kannad diabarzh. Kinnig Roparz Hemon diwar-benn sevel ur «

C'helc'h levrioù » a zo diarbennet dre ma soñjer n' eus ket a-walc'h a vugale hag e vez prenet al levrioù dezho gant o c'herent kerkent hag embannet. Ronan Huon a ginnig d' ar skrivagnerien a zo enno sevel ur Gevredigezh ar Skrivagnerien Vreizhad. An holl a zo a du. Jarl Priel a zo anvet da rener ha Ronan Huon da sekretour. - Alan al Louarn a gomz neuze eus talvoudegezh ar vruderezh ha penaos he implij evit ar brezhoneg.

Da echuiñ e komz an Ao. Kalvez eus ar gelaouenn Skol.

Ar re a fell dezho dont da vezañ ezel ar Skourr ha lenn ar C'hannadig n' o deus nemet ober ur goulenn dre skrid da unan eus izili ar Skourr.

KEVREDIGEZH AR SKRIVAGNERIEN VREIZHAT. -

War ginnig Ronan Huon ez eo bet savet ar Gevredigezh nevez dindan paeroniezh Al Liamm ha Skourr Breizh ar C'hendalc'h. Pal ar Gevredigezh a zo bodañ ar skrivagnerien brogar, difenn o gwirioù, ha studial an holl gudennoù a sell ouzh o labour. Kudennoù danvezel ar vruderezh, ar werzh hag an embann hag ivez ar c'hudennoù speredel er Gevredigezh hag er Vro.

An izili a 'n em vodo ur wech ar bloaz e-pad an hañv evit studial an holl gudennoù-se, ur gudenn lennegel a vo ivez studiet e pep bodadeg.

Jarl Priel a zo bet anvet prezidant ar Gevredigezh ha Ronan Huon sekretour. Setu amañ anv ar skrivagnerien o deus roet o anv evit bezañ izili ar Gevredigezh : Abanna, Abeozen, Benead, Per Bourdelles, Rojer Brisson, Roperzh Broudig, Klerk, Armans ar C'halvez, Kervella-Kongar, Jakez Konan, Per Denez, Per Even, Andreu Gilcher, Maodez Glanndour, Yeun ar Gow, Andreu Heussaf, Roparz Hemon, Ronan Huon, Langleiz, F. R. Meaven, Youenn Olier, Evnig Penn ar C'hoad, Jarl Priel.

Ar c'heleier diwar-benn ar Gevredigezh ha mare ar vodadeg bras a vo roet e-barzh « Al Liamm ».

KEVREDIGEZH AR RADIO. -

Lennet hon eus war « Ar Vro » ha war a Zouar Breizh » ez eus bet krouet e Bariz Kevredigezh selaouerien ar radio gant hor mignon Kerlann.

71

AR 25 SKRIVAGNER A VEZ GRAET AR MUIAÑ A DROIDIGEZHIOU DIWARNO ER BED. -

Setu ar 25 skrivagner a vez graet ar muiañ a droidigezhioù diwarno er bed a-bezh : Stalin (92 troidigezh) ; Dickens (75) ; Lenin (72) ; Gorki (69) ; Jules Verne (68) ; Tolstoi (66) ; Friedrich Engels (61) ; Pearl Buck (57) ; Georges Simenon (54) ; Balzac ha Tchekhov (53) ; Dostoiewski (52) ; Dumas tad, ar breudeur Grimm ha Somerset Maugham (51) ; Jack London, Shakespeare ha Mark Twain (49) ; Cronin ha Stevenson (45) ; E. S. Gardner (43) ; Edgard Wallace (41).

AN IWERZHONEG EVEL YEZH KOMZET. -

War ar Bed Keltiek e lennomp kement-mañ : « Hervez ur brezegenn graet gant Donal O Morain e-pad gouelioù an « Oireachtas », ez eus 588.725 a dud en Iwerzhon a oar iwerzhoneg. (E Dulenn hepken ez eus 92.381 - hag e 1891 ne oa nemet 3.472.) Koulskoude, n' eus nemet etre 40.000 hag 50.000 a ra gant an iwerzhoneg bemdez. Ar vugale a zesk iwerzhoneg er skol, hogen saoznegerien e chomont a-hed o buhez ».

BARZHONEGOU GOUEZ. -

Moulet eo bet en niverenn 57 barzhonegoù Gouez. Gouez a oa lesanv Jasson. Ar barzhonegoù a zo bet troet diwar ar galleg. Jasson n' en doa ket bet amzer a-walc'h da zeskiñ trawalc'h a vrezhoneg evit skrivañ er yezh-mañ. Met fellout a rae dezhañ ha Jasson a oa un den youlek - bevañ evel ur C'helt penn-kil-ha-troad - pezh a empleg evit an Uhel-vreizhat a oa anezhañ deskiñ brezhoneg. Marvet eo bet d' ar 17 a viz Gwengolo 1946.

RIVAROL HA NI. -

Ar gelaouenn « Rivarol » he deus meur a wech komzet eus ar Vretoned bac'het. Ret eo he zrugarekaat evit se met arabat eo ankounac'hat ez eo daoust da se unan eus ar c'helaouennoù ar muiañ gall ha kolonialist a zo. Setu amañ ur pennad, en diskouez sppard, tennet eo eus an niverenn 300(?), Here 1956 : « De M. P. H... (Clermont-Ferrand) ces considérations d'une irréprochable logique :

Au moment où les Defferre, les Savary, les Mendès poursuivent leur oeuvre de liquidation de ce qui fut l'Empire de la France, au moment où, sans répit, ils suscitent des « faits nationaux » et distribuent des autonomies, ne pensez-vous pas que le moment soit venu de poser publiquement, et même solennellement, aux pouvoirs publics, la question suivante :

Que ferez-vous, quelle position prendrez-vous si, demain, se manifestent, dans la France continentale, des mouvements de sécession ? S'il vient à naître ou à naître un séparatisme alsacien, breton ou basque, quelle sera votre réaction ? Lui opposerez-vous l'unicité et l'indivisibilité de la patrie française, ou bien commencerez-vous par reconnaître un « fait national » alsacien, breton ou basque ? Refuserez-vous de reconnaître aux Français de France ce que vous accordez ou offrez aux nègres du Togo ? »

Ac'hanta ya a-du omp penn-da-benn gant Savary ha Mendes war ar poent-se ha spi hon eus e vint ivez a-du penn-da-benn ganeomp. Kas a reomp da soñj ivez en deus Rivarol e unan lavaret kement-mañ : « Va Broad eo ar yezh a gomzan ».

MARV THEOPHILE BRIANT. -

Théophile Briant ne oa ket anavezet emic'hañs gant an darn vuiañ eus lennerion a Al Liamm ». Ur gwir Vreizhad, pen-kil-ha-troad, e oa koulskoude, ha ur brogarour oberiant, ouzhpenn-se.

E Pariz e vevas e-pad ul loden gaer eus e vuhez. Pa zistroas da Vreizh, avat, heuet gant an aer mougus a anale e Pariz, ne guitaas ket nemeur e vro c'henidik, St-Malo, hag e krogas, koulz lavarout, gant ur vuhez nevez : ur vuhez a abostolerezh lennegel.

72

E 1936 e kroue ur gelaouennig a zlee koustañ mil drubuilh ha mil boan dezhañ, « Ar Goeland » hec'h anv... ur gelaouennig gouestlet hepken d' ar varzhoniezh hag a zeuas, tammig ha tammig, da vezañ prizet gant ar skrivagnerion hag an embannerion-levrioù e Bro-C'hall a-bezh.

Rak ur barzh gwirion e oa Théophile Briant, hag ur barzh meur zoken, hag a ouie broudañ hag harpañ e genlabourerion, en un doare dispar.

Ar prizioù lennegel, krouet gant Ar Goeland a roas al lañs da veur a varzh a voe brudet goude-se, evel Patrice de la Tour du Pin, Alain Messiaen, Angèle Vannier, ar varzhez dall, Anne de Tourville (Breizhadezed an eil hag eben), Louis Le Cunff, René-Guy Cadou, Charles Le Quintrec, hag all...

Ne oa ket dedennet Théophile Briant gant ar varzhoniezh hepken, na zoken, gant kudennoù ar Bed-all pe, kentoc'h, gant an darempredoù etre ar Bed-mañ hag ar Bed-all (na zoken gant al lezennoù a ren planedenn Mab-den) dedennet e oa ivez ha dreist-holl marteze, gant « danvez Breizh ».

Embann a reas war ar gelaouenn « La Bretagne » e-pad ar brezel, ur romant istorel marzhus (hag a zo, d' am soñj, ur benn-oberenn hag a reas kalz a verzh er mare-se « Les Amazones de la Chouannerie ». Er romant-se e tiskulie roll markiz La Rouerie e penn ar Chouanted, hag e poueze war an diforc'h a zo d' ober etre emsav ar Chouanted ha brezelioù Bro-Vande.

Studiadennoù diwar-benn Georges Kadoudal en deus embannet ivez, hep kontañ levrioù savet da vrudañ bravantezioù hor bro « Ar skridoù bravañ diwar-benn ar mor », « Kastelloù kozh Bro Sant Malo », « Ar mein a gomz ouzhoc'h », hag all.

Ne c'hellan ket ankounac'haat, ouzhpenn-se, en deus skrivet ur rak skrid fromus-tre, e penn al levr tresadennoù am eus embannet, me va unan, kerkent goude ar brezel : « Sant Malo drastet ». Kalonek e oa, er mare-se, skrivañ ur seurt rak-skrid !... Ne oa ket souezhus eus e berzh avat, rak un den gwirion e oa, ur gwaz, ur gour zoken, e pep keñver, gouest da dreuziñ ar Rance war neuñ (en e vloavezhioù diwezhañ zoken), etre Sezambre ha Rochebonne. Ne c'helle bezañ flastret gant morzhol an Ankou nemet en un doare dic'hortozet. Gloazet en ur stokadenn kirri-tan, e-kichen Verneuil-sur-Eure, d' ar c'hentañ a viz Eost, e varve tri devezh goude e Sant-Malo. Pemp bloaz ha tri-ugent e oa.

Fromet gant niver ar gwall-zarvoudoù a c'hoarvez bemdeiz war an hentoù, en doa distaget dirazon, un nebeut zizhunioù a-raok, ur werzenn savet gant e vignon Guillaume Apollinaire hag a droan amañ e brezhoneg : « Emañ an Ankou dall - o c'hedal war an hent ».

Ne soñje ket neuze e teufe diougan Apollinaire da vezañ gwir ken abred-all evitañ e-unan. Ra gavo er Bed-all ar sklerijenn en doa bet hiraezh dezhi er Bed-mañ gant holl nerzh e galon leal, brokus ha birvidik.

LANGLEIZ.

PRIZ AN EMGLEV SEVENADUREL (40.000 lur DA VAODEZ GLANNDOUR). -

Emañ an Emglev Sevenadurel o paouez reiñ e briz lennegel a zaou-ugent mil lur d' hor mignon Maodez Glanndour evit e levr « Komzoù bev » hag e droidigezh eus ar Bibl.

Gant plijadur e kasomp da v-Maodez Glanndour hor gourc'hemenoù.

73

YAOUANKIZ LENNEK BREIZH. -

E diabarzh ar Gevredigezh Yaouankiz Lennegel Gall ez eus bet krouet ur gevrenn evit Breizh gant hor c'houmananter Meriadeg de Matignon. Ar pal a zo bodañ, e Breizh, e Bro-C'hall hag zoken er broioù estren an dud yaouank dedennet gant lennegezh Breizh, evit skrivañ, lenn, ha studiañ al lennegezhioù, dreist-holl hini hon amzer. Sekretouriezh : J. E. B., Maison de la Bretagne, 3, rue du Départ, Paris (14').

MIREIO... PE AR RE NE REONT NETRA. -

Lenn a reomp e-barzh « Ar Falz », renet gant an Ao. Keravel : « Mireio », pennadoù-lenn-ha-studi dibabet evit ar Skolioù en oberenn veur Mistral, embannet gant Lou Provençau a l'escolo gant Charles Rostaing, ur Raklavar gant Charles Mauron hag ur studiadenig gant René Jouveau.

Ul levr eus ar seurt hon eus ezhomm e Breizh evit studiañ oberoù - hor skrivagnerien vrezhonek. Ret e vije deomp advoulañ ar c'hentañ ar gwellañ oberoù Malmanche, Riou, Kalloc'h, Luzel, Kermarker hag un toullad skrivagnerien a-vremañ. Siwazh, re a vec'h a vez lezet war ar memes tud, kement tra a dleont ober war un dro, brevañ o zammig yec'hed evit mont d' ar bobl, heñchañ ar re yaouank, tennañ tamm-ha-tamm gonidigezhioù bihan pe vrasoc'h digant hor renerien, dastum un nebeut arc'hant... hag hen dispign e levrioùigoù dister « evit diverr-amzer an tiegezhioù... » E-keit-se, e chom mouzet en o c'hornig, o c'hein ouzh ar voger (pe ouzh an islonk), un toullad tud all, barrek ha gouiziek, o c'hortoz piv oar peseurt deiz da zont, peseurt burzhud... ma teuio Pobl Breizh daveto, evelse, pe ma lakaio paotred ar gouarnamant pe an O. N. U. ar brezhoneg « zh » dre-holl er skolioù, netra ken nemet evit ober plijadur dezho emichañs...

EMBANNADURIOU NEVEZ AL LIAMM. -

Emañ o paouez dont er-maez ul levrig « Tour ar Bleiz », ar gontadenn bet moulet en niverenn diwezhañ Al Liamm, troet eo bet gant Per Denez diwar oberenn Paol Feval.

Dindan ar wask emañ trede levr eñvorennoù Jarl Priel « Amañ hag a-hont ». Al levr en devo war-dro 230 pajenn. Ennañ e kont Jarl Priel e vuhez er Pologn er Marok hag e Pariz gant Dullin, Jouvét, Baty ha Copeau.

Emaomp ivez o kempenn embannidigezh Lennegezh Vrezhonek Abeozen. Al levr en devo 200 pajenn bras hag e vo ennañ luc'hskeudennoù ar skrivagnerien.

An deiziadur-godell o vezañ bet gwerzhet mat-tre hon eus ranket moulañ 500 ouzhpenn. Ra hasto ar re n' o deus ket o frenet c'hoazh. Ne vezont ket gwerzhet a-unanoù. 200 lur e koust an dek skouerenn franco.

UL LEVR N' EN DEUS KET BET A CHANS ENEZ AR ROD, gant LANGLEIZ. -

E-pad ar brezel e tlee bezañ embannet ENEZ AR ROD, hogen kaset e oa bet da ludu gant ur vombezenn, e ti ar Mouler, e Roazhon, an darn vuiañ eus ar folennoù bet moulet dija.

Setu ma klevomp bremañ ur c'heloù all, displijusoc'h c'hoazh : distrujet e vije bet e ti ar mouler a beurechuas al labour an holl skouerennoù a oa chomet gantañ.

Langleiz e-unan a skriv dimp n' eo nemet re wir ar c'heloù mantrus-se. Hanter-kant skouerenn hepken a zo bet saveteet, koulz lavarout dre vurzhud; hag a c'hell bezañ prenet e ti KERVELLA, 9, rue du Thabor, Rennes. - C.C.P. 506-78 Rennes.

Priz pep skouerenn : 500 lur, 1.000 lur pe 1.500 lur hervez ar paper. Mizoù-kas ouzhpenn : 100 lur.

A-benn nebeut a amzer e vo klask war al levr-se hag, a chomo, emichams, ar romant souezhusañ bet embannet e brezhoneg ! Prenit, eta ENEZ AR ROD a-raok na

vo re ziwezhat.

74

AR SONER. - Trugarekaat a reomp ar Soner (34, rue Carnot, Lorient) eus ar vruderezh, evit Al Liamm hag an Embannadurioù, a zo bet lakaet war an niverenn 98.

AN AOTROU PERROT BARNET GANT FRANSEZ FALC'HUN. -

Tennañ a reomp an arroudennoù-mañ eus ul lizher hon eus resevet digant ur c'houmananter : « ...goude bezañ bet anvet da aluzener meur ar Bleun-Brug en deus fellet d' an Ao. Falc'hun diskleriañ penaos ne oa ket a-du gant menozioù politikel an Ao. Perrot. Evidomp, gwir eo, n' eus ket kalz a dra nevez aze. Kondaoniñ a ra ivez ar Chaloni lod eus ar vrogarourien a ya da bediñ war e vez. An dra a zo bet embannet e lizher-diabarzh ar Bleun-Brug e Korn-Boud » (e galleg).

Setu amañ al lodenn a sell ouzh ar ar vrogarourien : « *Il en reste pour l'opinion publique quelque chose de trouble dans le culte que vouent aujourd'hui à l'abbé Perrot les différents groupements qui se réclament de lui et qui se rencontrent. à Scrignac le jour anniversaire de sa mort. Car la tombe de l'abbé Perrot, ce porte-étendard (= étendard) du mouvement breton abattu en haine de son idéal - ou de l'idéal que certains lui prêtaient, saura-t-on jamais ? est devenue et demeurera un des hauts-lieux de la Bretagne* ».

Ha setu evit an Ao. Perrot : « *Qu'il ait mis au service de son idéal breton plus d'ardente passion que de sérénité persuasive, aucun de ceux qui l'ont bien connu ne le contestera. Coeur sensible et généreux, il ne discernait (= discernait) pas toujours les faiblesses d'une idéologie qui s'appuyait autant sur le sentiment que sur une connaissance exacte du passé, et certaines de ses exagérations déconcertaient ses meilleurs amis* ».

Hag evit echuiñ : « *Quelles qu'aient pu être les imprudence auxquelles l'abbé Perrot s'est laissé entraîner par son amour pour la Bretagne, il se trouvera toujours des Bretons pour lui envier la chance d'avoir, par un froid dimanche matin de décembre, en revenant de célébrer la messe à la chapelle de Saint-Corentin, le jour de sa fête, racheté ces imprudences par cette mort au champ d'honneur qui le couronne comme d'une auréole* ».

Ha setu penaos ez bet ur chans hag ur mat evit an Ao. Perrot bezañ muntret. N' eus bremañ nemet enoriñ ar muntrer evit bezañ roet da dad ar Bleun-Brug an tu da zasprenañ e fazioù... »

J. P. R.

75

HOR YEZH

kelaouenn a studi hag a labour evit ur brezhoneg a vo gouest da zisplegañ pep tra eus ar vuhez a-vremañ
renet gant Arzel EVEN

E-touez ar pennadoù embannet betek-hen :

Dastumadenn an enskrivadurioù brezhonek a c'hell bezañ gwelet e Breizh. - Stad ha kelennadurezh ar c'hembraeg. - Studi ar ger hevelep. - Datives evit ur geriadur a strilhouriezh : « valence » hag « isométrie ». - Skridoù Clet Tevenn (dornskridoù kozh eus Bro ar C'hab). - Traoù ha gerioù :-an avaloù-douar. - Disluallet, asaoued hag un nebeut gerioù all. - Ar yezh feroek. - Ar sukrennoù, pe glukidoù. - Notennoù war ar c'hembraeg komzet. - « Moizez », embannadur ur mister brezhonek kozh a zo diwallet e zornskrid e Lenndi Aberystwyth. - Dre, selaou, klevout : studi un nebeut gerioù. - Kudenn as gerioù a-vremañ. - Elfennoù a soniadouriezh. - Gerioù dastumet e Sant Ivi. - Treluskerioù kemeged (catalyseurs chimiques). - Dastumad Pennwern. Gerioù nevez : au salon de beauté. - Elfennoù an Heroniezh. - Istor ar Yezhoù Keltiek, oberenn vras Arzel Even, a zo bet gouestlet dezhi div niverenn dija. - Notennoù a levrlennadurezh ha notennoù all a bep seurt...

HOR YEZH a zo liesskrivet en un doare kempenn-meurbet. Plijus eo da lenn.

Koumanant (evit 4 niverenn) : 500 lur. Da gas da : P. DENIS, Le Ris, Ploare, Douarnenez. - C.C.P. 1499-51 Rennes.

Embannet eo Hor Yezh gant AL LIAMM.

Roll ar Pennadoù

embannet war « Al Liamm » Bloavezh 1956 (niv. 54-59)

Anvioù an oberourien renket hervez urzh al lizherenneg

ABANNA		
D' am barzhonegoù		6/54
Trec'h ar barzh		4/55
Diorbliñ		3/57
Tonkadenn		4/58
Poellad a-benn tizhout ar varzhoniezh (tr.)		39/58
ABEOZEN		
Istor lennegezh vrezhonek an amzer-vremañ		53/54
»	»	58/55
»	»	53/56
»	»	37/57
»	»	57/58
»	»	37/59
AR GOW (Yeun)		
Martoloded ar Roue Melkior (tr.)		38/54
BENEAD		
Gouelec'h		3/56
BRISSON (Rojer)		
Penaos e teuas ar C'habiten Torrbenn da vezañ ur c'hristen mat en dro		20/57
KLERG		
Ar breur hag ar c'hoar		22/55
An degouezh mat (tr.)		14/56
Konterion Bro-Dreger		46/58
DENEZ (Per)		
Strollad Broadel Kembre (tr.)		44/54
Al levrioù		71/54
Al levrioù		65/55
Al levrioù		68/56
Kontadenn eus an Ugentved Kantved		6/57
Al levrioù		58/57
Tour ar Bleiz (tr.)		23/58
Diwar-benn ar Wended e Bro-Alamagn (tr.)		59/59
In Memoriam		63/59
Al levrioù		65/59
ELIES (Fañch)		
Ar Gousper		7/54
Ar breur bihan		5/56
Dav d' an Ankou		7/58
EVEN (Per)		
Yezh ar C'hendalc'h Etrekeltiek		64/54
Mojenn Lenn Tegid (tr.)		71/58
FEVAL		
Tour ar Bleiz		23/58
GAWAIN		
Ar Jonkenn Borselen		5/55
GLANNDOUR (Maodez)		
Korrig ar Menez		3/55
Kanaouenn an « Asamble Nasional »		45/57
Enbroadeg ar Vritoned en Armorika (tr.)		53/57
GOARIN		
Krennlavarioù hor bro		41/58
GOUEZ		
Barzhonegoù		4/57
GWENGOURIEN		
Enbroadeg ar Vritoned en Armorika		53/57

HEMON (Roparz)		
Spered o tont da Jaketa	15/54	
Yezhoù al lennegezhioù	62/56	
HEUSSAF (A.)		
Gweladennourien e Corca Duibhne	39/55	
Iwerzhon hiziv an deiz	65/56	
HUON (Ronan)		
Diwar-benn ar Referendum	3/54	
Al levrioù	70/54	
Ar Bann-Heol	8/59	
LOUP		
Poellad evit tizhout ar varzhoniezh	39/58	
MENEZ-KELDREG (Reun)		
Unanet ar C'hoad Pin	13/59	
MINARECH, tr. Y. Thomas		
Serbiz Bro-Luzasia	33/56	
OLIER (Youenn)		
Klod ar Bed-mañ	34/54	
Prederiadennoù	46/55	
Menec'h	10/56	
Kreisteiz	3/58	
PENNWERN		
Itron Varia ar Merzer	5/58	
Leur Newe Crec'h Morvan	3/59	
PIEMONTE (Vecchio), tr. Klerg		
An degouezh. mat	14/56	
PRIEL (Jarl)		
Miss Redfern	13/58	
RAUDE (A. J.)		
Diwar-benn Bro-Lusad	68/58	
TALDIR		
Eñvorennoù Hanter-Oad	9/54	
Eñvorennoù Hanter-Oad	9/55	
Eñvorennoù Hanter-Oad	23/56	
Eñvorennoù Hanter-Oad	28/57	
Eñvorennoù Hanter-Oad	50/58	
Eñvorennoù Hanter-Oad	29/59	
TANGI (F. R.)		
Peder Amzer Vreizh	4/54	
'Vel ma plij dit	4/56	
THOMAS (Y.)		
Serbiz Bro-Luzasia (tr.)	33/56	

Pajenn ar re Youank

Un nebeut mizioù 'zo e kemennas din unan eus koumananterien yaouankañ A. L. (o paouez tremen e vachelouriezh e oa) sevel ur Gevredigezh ar re Yaouank. Kavet am eus mat ar soñj ha lavaret dezhañ e oan prest d' e sikour. Goulenn a ran eta digant pephini eus ar goumananterien skoazellañ ivez hor mignon en ur gemenn d'o bugale krouidigezh ar bajenn-se. Amañ e vezo embannet o menozioù hag o lizhiri ha spi am eus e vo a-du al lennerien evit reiñ betek gwelout, ur bajennig ar re a vo Breizh Nevez. Lezel a ran eta ar re yaouank da gomz d' ar re yaouank.

Ronan HUON.

Brezhonegerien yaouank, kenvroiz ker,

Ret eo d' ar re yaouank en em vodañ evit kenderc'hel gant hent ar wir Vretoned ha mirout Sevenadurezh Breizh en arvar. Setu perak am eus soñjet sevel Kevredigezh Ar Vrezhonegerien Yaouank. Ne c'houlenner netra nemet dont e-barzh evit brudañ hor Bro.

Gervel a reomp eta an holl vrezhonegerien o deus etre 10 hag 21 vloaz (e 1957) hag a gar hor mammvro, ar re a gomz ar yezh koulz hag ar re a zo o teskiñ. Ar vrezhonegerien yaouank n' int ket niverus. Ma ne zeuont ket holl en hon touez, n' eus ket ezhomm mont pelloc'h. D' an holl e komzomp hag digant an holl e c'hortozomp ur respont.

Marteze c'hwi a glevo hor mouezh war-dro gant mouezh ar Vro. Brezhonegerien Yaouank en em vodomp evit Breizh. Bremañ eo poent dimp-ni ivez aozañ an dazont.

Sur omp, mignoned ker, e heuliot ar banniel a ziskouezomp deoc'h hag ho trugarekaat a reomp a-greiz kalon.

Bevet Breizh.

Kevredigezh ar Vrezhonegerion Yaouank.

PAJENN AR RE YAOUANK. -

« Al Liamm » a embanno e brezhoneg eeun ar pajennoù-se. Kasit deomp ho menozioù, hoc'h alioù ho koulennoù hag all. Gant plijadur ez embannimp anezho.

Ar re n' int ket koumanantet d'Al Liamm a c'hellou goulenn pajennoù ar re yaouank hepken, evit 300 lur bep bloaz. Kasit an arc'hant kerkent ha ma c'hellout da Y. L. Perot, Ecole des Cordeliers, Dinan. Trugarez.

AR C'HAIER. -

Kaier bras ar gevredigezh a veaj e-touez an izili. Pep hini a skriv warnañ ar pezh a fell dezhañ, hag a laka e sinadur.

AN ESKEMM-LIZHIRI. -

Goulenn a reomp digant an holl kenskrivañ etrezo e brezhoneg, zoken ma n' eo ket brezhoneg mat. Unanetoc'h e vimp evelse. Gallout a reomp rein deoc'h chomlec'hioù.

FOLLENNOU BRUDEREZH. -

Follennoù bruderezh a zo roneoskrivet evit ar Gevredigezh. Gallout a reomp kas deoc'h un toullad.

LEVRIOU. -

« Al Liamm » he deus embannet levrioù evit ar re yaouank. Darn a zo e brezhoneg eeun evel ar romant polis « Ar c'horf dindan dreid va zad kozh » (50 lur) ; « Gaovan an den gwer » (50 lur) ; « An ti a drizek Siminal » (495 lur). Lakaet eo bet e brezhoneg evito « Tour ar Bleiz », Paol Feval (120 lur). « Bisousig kazh an Tevenn » a zo bet skrivet evit ar re yaouank ivez (120 lur). An daou levr diwezhañ avat n' int ket e brezhoneg eeun. Goulenn digant P. Bodenan, 3, Chemin des Potiers, Ergué-Armel, Quimper. - C.C.P. 212-23 Rennes.

CHOMLEC'H AR GEVREDIGEZH :

Y. L. Perot, Ecole des Cordeliers, Dinan, pe E. Evenou, 64 boulevard Saint-Saëns, Alger.